


Respont da zivnadennou miz Here

I — En hóstaliri a lavar lod — E ti a-mañ...



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz

Kanpad Misiak ar Vretouned

DIVAR BENN AR SKOLIOU

Lizer eur c'hristen kalonek

En deiz hirio ne gredan ket e ve eun tad pe eur vamm a famill ha ne anavezze ket difazi-kaer e zever e kenver ar skól da zibab evit e vugale — hag e vir kouls hag e zever adarre da evesât var al levriou a vez lakeat etre o daouarn he var ar c'henteliou a vez roet dezo er c'hlas. — Ar re ne fell ket dezo senti ous gour'hemen an Eskibien displeget dezó gant o beleien a oar ervad e verzont o bugale, e reont eur pec'het marvel eus ar re c'hrevusa, rag da unan eus deveriou strisa e vankont.

Rag-se ne c'hellont sakramanti na da Bask na na vare all ebet eus ar bloas keit ha n'o dezo ket sevenet o dever.

Her gouzout a ran, kals a gil dre n'o deus ket an hardi-zegez da avertisa ar mestr-skól. Mes ive, perag n'en em glevont-hi ket, an oll dadou a famill, evit mont oll a-unan da ziskleria d'ar mestr-skol o bolontez e ve tennet eus ar skol al levriou kondaonet gant lizer an eskibien hag e ve respetet e peb giz relijion o bugale. — Sevel emglevióu e peb kanton, setu mennoz an aotrou 'n Eskob, e c'hourc'hemen eo soken.

Ma ouichent an tadou a famill kristen eus Breiz-Izel ar pez o deus great evit-se an tadou a famill eus broiou kals digristenoc'h eget o hini, ó deffe mez. Ruzia a raffent da veza ken dibreder ha ken digalon e kenver o bugale. Mad e ve dezo lenn al lizer zo aman varlerc'h. Eun tad, eunneg krouadur dezan, eur c'hristen dispount ha skiantet mad eo her skriv da inspecteur ar skoliou en e zepartamant :

Aotrou 'n Inspecteur,

An honor am eus da rei deoc'h da anaout eo digouezet ganen al lizer oc'h eus skrivet din evit rei da anaout eo kaset kuit, evit mad, eus ar skôl va pevar grouadur : Marie, Albert, Thérèse ha Rose. An abeg a gemerit evit eur bunion ket kalet eo : « *ne fell ket dezo, a espres-kaer, senti ous reolen ar skôl,* » netra ken. An den dievez a lenno ar gerioù trubard se; a ve goest da gemeret va bugale evit pannoù fall, bugale dizuj, dispac'herrien e tro da hada an disurz etouez o c'hamaradet hag o c'hamaradezet.

Ne fell ket din, aot. 'n Inspecteur, e ve kemeret va bugale evit ar pezh n'int ket; hag aotre a c'houlennan diganeoc'h da lakat peb tra en e blas, rag ar virionez ne man ket ganeoc'h.

Kalz traou oc'h eus miret dija er skôl : miret oc'h eus e ve lavaret ar beden, miret oc'h eus e ve desket katekiz; tennet oc'h eus ar grusifi. Mes ne ouffen ket e vec'h goest da derri ive ar pevare gourc'hemen a Zoue : « Da dud, da vamm 'a henori. » — Va bugale n'o deus great nemet senti ouzin-me; — n'eus leac'h ebet eta d'en em gemeret outo; mar deus unan benag kablus, *Me eo.* — Ne denan ket goulskoude da ober deoc'h va meâ culpâ. — Me zo kristen katolik ha va foan a lakan da reizha va buez diou va c'hreansou. Goude beza lennet lizer Eskibien Frans ez oun eat da vit ar mestr-skôl evit pedi anezan sevel (poli) da denna eus a dre daouarn va bugale eul levr kondaonet ha da gemeret eun all en e leac'h. Ne falvezas ket gantan hen ober. Anzao a ran he kavjon divalo e zinae'h. Etouez kement all a levriou aotreet gant komision vras an Akademi perag en doa, hen, lakeat en e benn derc'hel just an hini a zo a enep koustians ar gristenien ?

O veza ne c'hellan ket lakat chench al levr kondaonet, he c'houlenjon ma vije da vihana dispanset va bugale da zeski. Histor ar Frans er c'hlas. Va zonzj oa rei dezo va-unan, epad nozveziou hir ar goanv an diverra eus an deskadurez se, a zo mad da anaout, mes n'eo ket ken red ha traou all. Kaout a rea din n'oa tu ebet da zinae'h ouzin an nebeudig-se a c'houlennen; rag aotreet oa bet dija eun hevelep dispans evit departamant ar Meuse gant o kenvreuer an Inspecteur Akademi o chom e Bar-le-Duc. — Mes da betra mont da glask skuerioù e leac'h all? — Oc'h unan, aotrou Lloubes oc'h eus roet eun hevelep aotreadur da vugale ar franmasounet a zo e skolajou hag e

lyseou an departamant : pa vez deuet mare ar gentel katekiz en tiez bras-se, dre vertus ar reolennoù great ganeoc'h ha gant ma vezo great ar goulenn gant ar gerent, ar baotret yaouank o deuz liberte da vont er meaz eus ar c'hlas evit ma vo ket red dezo klevet eur gelennadurez kontrol d'an hini o deus bet en o famil.

Va goulenn d'in-me, aotrou 'n Inspecteur a oa eta just, evel a velit. Daoust da ze, epad teir zizun va bugale a zo bet gwall-gaset er skôl abalamour d'al levr milliget-se. Lavaret e vije bet ne oa mui ken tra da zeski nemet an dra-ze : *histoire* dious ar mintin, *histoire* dious an noz, *histoire* epad an deiz. Evit va bugale ne oa mui nag arithmetik, na geographi, nag ortograf, an *histoire* hebken, pe *pinijen* : ar piquet epad ar c'hlas, ha chom e pinijen goude ar c'hlas.

M'hor dije bet eur skol libr aman pe demdost, va bugale n'o dije morse darempredet ar skôl neutr, ha ne vijen ket deuet d'hoc'h heskinat gant va c'hlemmou. N'em eus ket a beadra ken nebeut da baea pansion evito e skolioù kear, rag eunneg krouadur am eus da veva, ar yaouanka daou vloas dezan, ha me ne doun nemet eur micherour o veva dious va labour hag hini va map hena 'zo ous va zikour.

Piou eta, Aotrou, hen deus roet deoc'h gwir da zont da vour-revi en doare-ze ho da vresa koustians artizanet kristen. Ia ! pe seurt gwir oc'h eus c'hui da gondaoni va bugale da jom dizesk en eur-zont da lakat er meaz eus eun ti-skôl savet evito gant arc'hant an oll? — Perag erit-c'hui dishenvel deomp : prest da dremen atao dious bugale ar skolajou ha garo ha yud evit bugale ar paour. Hag a lavarer c'hoas eo hennez gouarnamant ar bobl !

Ne c'hedan, eus o pers, respont ebet d'ar goulennoù-ze. C'hoant em eus hebken lavarar ar pezh oa var va c'halon en eur zigas da zonzj n'eo sevenet, e doare ebet ar bromesa e vefe neutr, e gwirionez, ar skôl. Ar bromesa-ze n'eo bet great nemet evit lakat voti oesoc'h al lezen.

C'hoanteat em eus diskuez splann eo bet lakeat va bugaligoù er meaz eus ar skôl a-enep peb gwir. C'hoanteat em eus o difen a enep eun tamall faos.

Achui a ran en eua ziskleria uhel : Mar bez votet varc'hoas lezen an hugnot Doumergue, an hini a lavar n'o deus an tadou netra da velet var an doare ma vezo kelet o bugale, he rin evel pa ne vije ket; rag al lezen-ze a zo a enep an natur. Lezen

ebet great an dud ne c'hello lamet o bugale digant o zad hag o mamm. C'hui, aotrou, divar oc'h asez en ho puro, a c'hounid eun dek mil lur benag o kas liziri d'ar re a zo dindanoc'h evit ma vezo breset ar vugaligou katolik. Epad an amzer-ze e va zi-kalvez, me a dorro va c'horf evit gounid bara va eunneg krouadur hag hini o mamm.

Mes dalc'hit sonj mad, n'euz fors petra vo great, va bugale a jomo *va bugale din-me*. Re a boan am eus kemeret evito abaoue ugent vloas 'zo, ha re a garantez am euz evito evit o dilezel hirio gant eun all. *Hi a zo ar goad eus va goad* ha *Me* o miro a enep ar franmasonet; *Me* a roio dezo deskadurez avoalc'h evit ober o zreuz hag o savo e doujans hag e karantez Doue evel ma 'z oun bet savet va-unan gant va c'herent.

Digemerit, mar plij, aotrou 'n Inspecteur Akademi, ar zalud a roan deoc'h.

Clément LEFÈVRE,
Karrer e Franceville.

Ac'hanta! Tadou a famill Breiz-Izel! setu aze petra zinifi komz freaz ha komz skiantek. Peur e tihunoc'h c'hui?
F. C.

HISTOR BREIZ

Arvoris Guechall-Goz

Breman ez eus pemzek kant vloaz hag araok, ar c'horn douar-man, m'emomp ennan o chom, n'oa ket evel hirio e hano Breiz-Izel; galvet oa an *Arvor*, hag an dud her poble a veze great Arvoriz anezo. Ar Vreiziz na deujont er gourenez-man nemet vardro pevar c'hant vloaz benak goude donedigez Hor Zalver. Divezatoc'h em bezo tro da lavaret eus a beleac'h ha var beseurt digarez ez int deut da glask repu er vro-man. Da c'hortoz, greomp eun daou pe dri frapad marvailhad divar-benn ar vouenn dud a veve aman en o raok.

En amzer goz, al lec'hed douar galvet hirio ar Franz, hag eun neubendig ouspenn, a oa hanvet Bro-C'hall. Arvor n'oa eta nemet eul loden eus Bro-C'hall, hag an

hano-ze a veze roet d'ezi abalamour ma 'z oa kelc'het eur c'halz anezi gant ar mor bras.

Arvoriz oa ive demdost an hevelep doare tud eget ar C'hallaoued all: pôtred start, diazezet mat var o c'hillaou-rou, gwenn o c'hroc'hen evel domp-ni hag uhel o ment e giz peulvaned; o bleo, dem-fao evel reun al leoned, a ziskenne a dorchadou var o chouk e giz moueou kezeg! en o fenn e lugerne, evel daou gef-tan, o daoulagad glas, digoc'hen evel an oabl-hanv; eur skrij gwelet anezo o tiskorbella hag o strinka varnoc'h sellou bleiz. Nerz d'ezo leiz o izili, goad ruz o redek puilh en o goazied, kalon vero o lammat en o c'hreiz; kalet ouz ar boan hag ar skuisder; mat e kenver o mignoned, hag ive e kenver an divroidi, a ziabennent d'o c'huriuzennat ha da baka diganto keleier ar broiou all (d'ar c'houlz-ze n'oa ket deut c'hoaz ar c'hiz eus ar c'hazetennou), — An Arvoriz, evel ar C'hallaoued all, a oa kriz ha dizamant ouz an enebourien trec'het ganto er vrezel.

Ar seurt pilkosou-ze n'oant ket troet kenan gant al labour aketus. An doarou, pa vezent labouret, a veze great gant ar merc'hed; ar goazed a gave kalz ebatoc'h mont d'en em ganna pe d'ober an hu var ar chatal gouez e donder ar c'hoajou bras... Diouz klevet ar varzed koz (1), var douar Arvor e veze kavet gwechall paleziou kaer, enno kambrjou a ziere, hag a veze implijet evit bodadeg ar bobl, evel tiez lez-varn hag evit ar festou bras. Mes ne gaver roud ebet anezo e neb leac'h. Buhannoc'h e kredjen n'o doa nemet tiez dister, lochennou kentoc'h eget paleziou. Var eun tamm mogeriach mein e veze berniet taouarc'h; eun doen zoul evit kloza, hag en he c'hreiz eur mellad toull evit rei distank d'ar moged hag ear d'an ti; speurennoù koat en diabars evit ober an dispartiou, ha setu fardet al lojeiz.

En toull-ti-ze arrebeuri groz-groz, great peurliesia gant mein digorniet ha gant kefiennou kleuz; ha gant an dra-ze bevanz dizaour, bara eiz pe zegal ha kig diamboaz al loened gouez: ar pez na vire ket ouz ar vugaligou da veza ruz o c'hlopennoù.

(1) Ar pep brasa eus ar pez a skrivin aman varlerc'h am eus pennaouet e pennadoù-skrid, gouzlek ha kaer meurbet, great gant ao aotr. Cardinal eun tachad 'zo, ha bet moulet e *Feiz ha Breiz*; 1907.

O *gwiskamant* n'oa ket mizus dreist. Ar re binvidik a zouge eur bragou ledan, eur zaë hir ha netra ken ; ouz an dilhajou-ze e stagent eur guchennad fanfarluchou ha sklinkachou a bep seurt liou. Ar beorien a gave gras kaout eur pallen gloan pe eur c'hein-maout bennak da joucha o c'hroc'hen. — O *armou-brezel* oa ar vouc'hel-vean, ar birou (flêche) hag ar goaf (lance) great gânt eskern anevaled beget lemm.

Ar *yez* (langue) a gomzent oa ar brezoneg ; n'ë ket mar-teze eur brezoneg henvel-poch ouz an hini a gomzomp-ni hirio, mes unan kar-tost d'ezan. Ar mellou bras eus er geriou a zo chomet ; ar voueden eus ar yez n'en deus bet droug ebet o tremen ar c'hanvejou ; n'eus chenchet nemet ar c'higadur hag an dilerc'hou dre hir amzer, dre ma teu da jench gourlanchen an dud, diouz n'emaïnt o chom e broiou tomm pe zen pe vogidellus, ha dre forz abegou all. — Gwelet a rit 'ta neuze, kenvroiz karet, peger koz eo ar brezoneg, pegement a rummadou tud o deus e gomzet abaoue ma 'z eus anezan. Hag hirio zoken, n'eo ket hebken e Breiz-Izel e rer implij anezan ; komzet eo ouspenn e meur a gorn eus Bro-Zaoz (hanvet gwechall Enez Vreiz), evel e bro Geumri (Pays de Galles), var eur riblennad douar eus ar skop, en ezezen ar Man hag e bro Iverzon (Irlande). Dalc'homp eta bepred gant garantez d'eun herez hag a zeu d'eomp a geit all, d'eun tenzor hag a zo bet doujet ha miret gant hon tadou.

Mes daoust ha *religion* o doa ive an Arvoriz, evel m'o deus breman ar Vreiziz ? Siouaz ! tudou keiz, stad ar bed a oa d'ar mare-ze meurbet truezus da velet hag ar vuez yen-sklaz da yeva. Ar guir Doue a oa dianavezet, hag evel ma rank an den plega d'eur mestr bennak uhelloc'h evitan, an Arvoriz o doa great o Doue eus kement tra 'zo mat ha brao, nerzus ha souezus, koulz eus traou ar c'horf ha traou ar spered. Ar gurun, an avelou, ar mor ; ar menezioù uhel o c'hriben, ar gwez bras sounn o fenn o doa o doueou ; skianchou an ene ar re ijinusa, ioulou ar c'horf ar re froudennusa o doa ive anezo ; evit trouc'ha krenn, e c'heller lavaret « e oa pep tra Doue evito nemet Doue e-unan. » Azeuli a reant dreist-holl : Teutates, doue an heol ; Belen, doue an ijin ; Ezuz, doue ar yrezel ; Taraniz, doue ar gurun ; Belisama, doueez ar furnez, hag eun

niver bras a re all c'hoaz. — Ar briz-doueou-ze o doa o beleien, da lavaret eo tnd dibabet da gannaded etre ar bobl hag i. An doue Bel eo en devoa ar muia anezo ; ac'hano eo deut ar c'hiz gant an Arvoriz da henvel ive kannaded an doueou all *beleien*, da lavaret eo serviche-rien Bel ; hag an hano-ze a zo bet dalc'het goude-ze var gannaded ar C'hrist, ar gwir Doue.

Evelato peurliesia lidou ar relijion a veze sevenet gant eur rumm dud all hag o deus bet kalzik brud en amzer goz. Ar re-man eo an *Drouized*. An Drouized a oa tud eus an dibab, a vouenn uhel an darnvuia anezo, desketoc'h eget ar re all var ar skianchou kuzet, var lezennou ar bed ha lezennou ar vro. Unan eus lidou bras o relijion oa ar c'hutuilh uhelvar (le gui), louzaouen vurzudus a ganed korvigellet en dro d'an dero koz. « Eun drouiz gwisket e gwenn — emc Blin Vihan, eur skrivagner aour e trouc'he an uhelvar sakr ha var eul linser venn hen lakea gant doujanz... »

Eun tammig oa uhelloc'h kelennadurez an drouized eget hini ar bayaned all, rak eur greden o devoa, eur greden start hag a zeskent d'ar yaouankizou a heuilhe o c'henteliou : *en deus an den eun ene peurdadus, ne varvo nepred, mes a bado da viken evit kaout digoll pe gastiz goude maro ar c'horf*.

Dre ma 'z oant tud a lignez huel ha m'edo ganto ar furnez hag an deskadurez, an drouized ne zalejont ket da veza pennou bras ar vro. Ne oant evelato na rouaned nag impalaered ; mar doant doujet, oa kalz muioch abalamour d'o gouisiegez eget abalamour d'o galloud gwirion. Ha c'hoaz e c'heller lavaret n'oa dindan o beli (dépendance) nemed tud o zi, er penn kenta da vihana.

An Arvoriz n'o doa zoken reiz all ebet nemet hini ar famill. Ar penn-tiegez oa ar mestr, ar beleg hag ar barner bras evit holl dud e lignez. Ar machtiern pe an ozac'hmeur a reant anezan. A neubeudou goulskoude ar familhou, o veza deut da greski, a reas emgleo etrezo evit en em voda e rummadou brasoc'h, betek zoken ober pobladou hag a veve dindan ar memes reiz, gant an henvelep lezennou. Da ren pep poblad e veze lakeat eur roue, pe eur brenn, dibabet gant pennou bras ar vro.

En amzeriou kenta ez oa o chom e bro Arvor pemp

pobladig tud, skignet peb hini anezo en unan pe unan eus ar pemp departamant a ra hirio Breiz-Izel, pe var dost :

1° Pobl an Naoned, o chom er vro hanvet breman *Loire-Inférieure*.

2° Pobl Gwened, er *Morbihan*;

3° Poblad Oksismor, er *Finistère*;

4° Poblad Korseult, er *C'hôtes-du-Nord*;

5° Poblad Roazon, en *Ille-et-Vilaine*.

Ar hobladou-ze n'oa doa ket a geriou bras, mogeriet ledan evit en em ziuall ouz an enebour, mes eur geriadennig bennak ebken bintet tu-man tu-hont dre ar vro. Dre ma save freuz etrezo, o doa leac'hioù all evit en em denna pa zave beac'h varno, gwech var lein eur menez gouez bennok, gwech e dounder ar c'hoajou, ha peurliesia var eur beg-douar hanter gelc'het gant ar mor ha gwaskedet gant reier torgouzouk, sounn ha lenn o c'hriben. Eno neuze e c'hellent fringal dienkreuz. Paour-keiz Arvoriz ! dizale e vezoc'h difouchet eus hoc'h aodjou didrouz hag ho koajou tenval, hag e teskoc'h divar ho koust peger garo eo beza breset dindan seul an estren...

IOEN AN TOUR-GUEN.

STEPHAN LASKI

Ar polonad bihan kalonek

Eun histor evit ar bloaz nevez kinniget d'ar Vretoned ha d'ar Vretonezed bihan a dle chom stard en o feiz er skolioù dizoue, ha derc'hel mad d'o yez koz en despet d'an dismegans a daoler varni.

En eur bourkik divar ar meaz, vardro teir leo eus Posen, en deiz araog ar bloaz nevez, daou baotr bihan : Stephan Laski hag Henryk Librowicz a oa sioul o kaozeal e kichen an oaled :

— Ha te eun dra benag az pezo digant da dad evit ar bloaz nevez ? a c'houlenne Stephan digant Henryk.

— Penaos he raffe, va Doue ! a respountas Henryk, ken paour a ma 'z eo ! — Ha da vamm-te petra roio d'id ?

— Siouas ! Te oar ervad, va mamm n'eo ket pinvidi-koc'h eget da dad, ar gwiader Librowicz.

— Neuse-ta, epad m'o dezo ar vugale all kement a vraoigou hag a vadigou, ni n'hor bezo netra, netra, eme Henryk doaniet oll.

— Oh, eo ! eun dra benag a vo evidomp : goudrouzou ha taolioù digant ar skolaer prusian a fell dezan miret ouzomp da jom katoliket.

— Henez, var e veno, n'hen deus aoun 'rag den ebet ; perag neuze kaout kement a nec'h gant bugale abalamour ma lavaront o fedennou e yez o zadou koz ?

— Abalamour m'hen deus aoun na zelaoufe an aotrou Doue hor mouezioù ha na deuffe da rei e skoazél d'hor bro.

— Ah ! an den fall-ze, Sigismund Wolf ! daoust ha ne vo ket kastizet gant Doue ?

— Arabet eo kaout c'hoant da velet drouk oc'h erruont gantan, eme Stephan. An Aot. Doue a oar ar gwella petra 'zo mad evidomp ; marteze ni a vo sikouret gantan buhanoc'h eget ne gav d'id. »

Henryk ne respountas grik ; eun huanaden douñ hebken a dennas eus goeled e galon. Hag hi adarre ho staga o daou da c'hoari bilibann. Mes anat oa, o c'halon n'oa ket gant ar c'hoari ; ne lavarent ger, doaniet e chome o dremm. — Seiz heur oue klevet o skei en ilis, ha kerkent Henryk a savas trumm. Mall oa dezan mont d'ar gear evit aoza koan. Goude eun deveziad labour tenn, ar gwiader paour a gavje c'bat kaout prest eur banne soubenn domm great gant dour, avalou-douar ha betterabez. D'ar vugale beza dizeblant eus poan ar re-all, Henryk hen doa santet pegen doaniet oa kalon Stephan, hag anezan e-unan, araog mont kuit, e vriatas e gamalad bihan. E di a oa demdost da hini e vignon ; en eur redadenn e oa er gear.

Chomet e-unanik, Stephan a vernias eun nebeudig keuneud munut var an oaled, hag an tân ne zaleas ket da gregi, da vervi ha da bignat laouen, en eur strakal seder ha strinka eul fennou rus varzu mantel ar siminal. An ti bremaik tenval a zo breman sederreat oll. Ha goulskoude

ne veler ennan nemet merk ar baourentez : diou skabellik koat, eur briz-taol, daou gos-gwele enno kolo goloet gant pallennoù mil gwech penseliet. Var mantel ar siminal eur grusifi askorn duet gant an amzer hag ar voget ; e riboul an daol, en eun toullig er voger skeuden Gwerc'hez dū Varsovie, en dro dezi daou veket bleün e paper marellet.

Stephan a ziskargas dour en eur pot houarn hag hen lakeas var an tân da c'hortos diströ e vamm a veze bemdez o labourat en eun ti demdost d'he c'hear.

Deuet oa pell a ioa an noz, eun nosvez sioul ; yenskourn oa an amzer ; an oabl oa digoc'hen, ar stered a bare hag a lugerne ennan evel tachou dir, ha goulskoude o sklerijen n'oa ket goest da drec'hi an denvaligou. — Azezet var e skaon a dri-droad, e kichen an tân, ar paotrik a lezas kabestr ganl e spered da vont da vro ar zonzou. Siouas ! ne ieas ket pell ; trubuilhou e vro baour, enkrezhou e genvroiz keaz gwall gaset gant an dud kris, e enkrezhou e unan er skol a brederias anezan a grenn. — En em roet evelse da huvreal, ar paotrik en em lakeas a greis oll da grena eus e oll izili. Kaout a rea dezan gwelet skeuden garo Sigismund e kreiz ar glaou rüs. — « Petra rea d'an den fall-ze miret ous ar vugale da bedi en o yez ? Perag ec'h en em gemere outan muioc'h eget ous ar re all ? Perag an taoliou pounnerra atao evitan ? Perag kement a gounnar outan ? perag... perag ? » Hag ar Polonad bihan a zelle truezus ous e zaouarn blonset, ha ne finve tamm var e skaon gant aoun da nevezi ar boan hen devoa en e ziou groazel.

« Perag ? — Abalamour en deiz araok ne fellas ket dezan senti da lavaret en alamanek » *Hon Tad pehini zo en nenv* : « *Vater unser der du list in Himmel...* » Kendalc'het hen doa da respont stard e yez e Dadou koz : « *Ojeze nasz Ktorys iest ne niebiesiech...* » Red oa bet dezan astenn hir e zaouarn hag e vreaç'h dirag e vourreo evit beza skourjezet gant eur gorden lër lemm evel eun teod aer-yiber.

Falloc'h c'hoas oa eat an traou d'ar mintin eus an dervez-ze. A veac'h ar skolaer asezet en e gador ma stagas ar baotret da richana eur ganaouen goz e yez polonad. Eur ormid divalo a reas Sigismund ous o c'hlevet, ha Stephanig ne oue ket evit miret da c'hoarzin ous e

velet oc'h ober e neuziou fall. Kercent e oue bet galvet dirag e vestr. Heman a stagas dioc'htu gant ar *Bater*, hag a fellas dezan lakat ar paotr bihan da lavaret e yez alamanek, dirag an oll ar c'homzou-man : « *Nud vergieb uns uJserer Schuldern...* » pardonit deomp hon offansou... »

Stephanig, soublet e benn gantan, e c'hinou sarret kloz a jomas heb lavaret grik. Sigismund e zaoulagat difoupet gant ar gounnar a zavas ar skourjez en e zorn, prest da lopa. Dezan da veza spountet oll, ar paour-keaz Stephanig a jomas stard hag a gendalc'has mad. Neuze Sigismund a zaillas varnezan evel eur bleiz hag en em lakeas da dare'haoui varnan a daoliou dorn, a daoliou boutou, a gleiz, a zeot heb sellet e pelec'h skei. Ar paour-keaz bihan a oa koezet etre e dreid ma kendalc'he da skei c'hoas gantan. Ar re all evit diskues ne blegfent ket a gane breman a bouez-penn kanaouen goz Bro Pologn.

Skuis o skei, mezus eun tamig eus e frouden direiz, ar mestr-skol a laoskas Stephen, a zigoras rust an nor d'ar vugale da vont d'ar gear. Ar re-man a nijas kuit, laouen evel eur vanden labouset, joa vras ganto da veza lezet abretoc'h gant o frankis da genver an deiz diveza ar bloas.

— Henryk hebken a oa chomet gant Stephan evit sec'ha e zaelou ; rei a reas dezan ar vreaç'h evit bale beteg e doullig-ti, rag blonset doun oa e c'har, poan a zante en e groz-leac'h ha roget oa e zillad. Henryk glac'haret oll n'oa ket evit miret da c'hrosmol ha da lavaret a bep seurt geriou trenk var al lampoun didruez hen doa great ar mez-taol-ze. Pa oa eun nebeut distanet e boan, Henry a ginnigas d'he vignoun, evit e ziduella, oben eur barti c'hoari bilibann ; ha setu an daou grouadur ankounac'heat ganto o zrubiellou evit eur pennadig.

Stephanig a droe hag a zistroe an oll sonjou-ze breman. Ne oa tamm ebet e spered gant koan pa gomansas an dour da gana var an tân. Sevel a reas divar e skaon evit gwlet a bervi a rea evit mad. Dioc'htu eur flemmaden en e c'har a reas dezan kement a boan ma kouezas, a stok e gorf var al leur-zi gant eur glemmaden truezus. — D'an ampoent an nor a oa o tigeri, hag e vamm Aloysa o tont en ti. O klevet klemm truezus he c'hrouadur ar vamm baour a daolas trumm ar baner bounner a oa ous

e dorn hag a redas varzu ar paotrig. Her sevel etre he divreac'h ha goulenñ digantan gant ha mouez dous petra c'hoarveze gantan a reas buhanoc'h eget eul luc'heden.

— Petra a c'heuz ta, va oanig paour? Lavar din dioc'htu!

— Netra, mamm, n'em eus netra.

— E pelec'h e peus poan?

— Em gar; aze. Na gemerit ket re a nec'h; n'eo ket kals a dra.

— Diskuez petra eo.

Hag ar vatez paour, goude beza lakeat Stephan goustadik var e skabel a daolas an tan eun dornadig keuneud seac'h hag a enaotias eur c'houlouen soa.

— Va Doue, va c'elik keaz, eur gouli e peus en da c'har, emezi, spontet oll. Blonset eo tu ha tu, ha da zillad zo freuzet. Daoust ha te a zo koezet eus eur vezen benag.

Hag ar vamm en eur gemeret dour tomm evit goalc'hi ar gouli a c'houlenne atao:

— Eur gwall baotr benag hen deus great poan did? Marteze unan eus da gamaladet? Daoust hag Henryk e vije?

— Nan, Nan, va mamm, na damallit ket anezan. Hennez a zo ken chentil!

— Piou-ta neuse? Adalbert? Yann? Adolph?

— Nan, mamm hini ebet eus ar re-ze, hini ebet eus va c'hamaladet.

— Ha petra! ar skolaer e vefe?

Ar paotrik a zirollas da vouela.

— Ah! Hen eo! Ar bleiz kriz-se? Perag hen deuz skoet ganez ken didruez?

— Abalamour n'eo ket falvezet ganen lavaret va fedennou er yez alamanek.

— Marteze az pefe gallet, gant aoun rag e gounnar lavaret eur gerig benag.

— Nan, mamm, nan! n'eo ket an dra-ze oc'h eus aliet ac'hanoun da ober. Gwelloc'h eo mervel eget ankounac'hat hor relijion zantel dismeganset gant an divroidi? N'oc'h eus ket lavaret din gant hor barz brudet Sienkiewickz: Galloud ebet var an douar ne c'hello diskar hor yez hag hor feiz? ha pec'hed e vefe lezel ar g'wez kaer

ha koz a zo en hor bro Pologn da zont da veza eur genkizen evit ar Brusianet. — N'oc'h eus ket lavaret d'in divar benn ar vaouez kalonek-se he deuz kavet gwelloc'h mont d'ar prizoun eget deski d'he bugale pedi en alamanek? N'oc'h eus ket lavaret hag aslavaret varlerc'h Hon aotrou 'n Eskob santel Stablewski: « Kals gwelloc'h e vefe mervel eget koll ar feiz hag al liberte. » — Pa oa ar skolaer o skei varnoun, ar sonjou-ze a oa em spered; ha bet em eus nerz-kalon avoalc'h evit gouzanv an taoliou yud hen deus roet d'in. Beteg mervel ma bez red o gouzanvin c'hoas.

— Mervel! va Stephanig keaz! mervel! na lavar mui an dra-ze.... Biken!... va mabik. Hag ar vamm baour a stagas da hirvoudi ha da boket d'ar merzer bian, an daelou o koeza puill ha tomm var divoc'h he c'hrouadur.

Epad m'edo evelse o kunudi e teuas ar sonj dezi e tlie ar c'hrouadur beza dare gant an naon.

— Divezad eo, emezi, ha te ne peus drebet tamm abaoe ar mintin-man. Te a dle beza du gant an naon. Gortoz eun tamig, gortos, me ia da rei did eur pred-bouet evel n'e peus ket bet morse marteze. Sell-ta, va mab, pegement a draou mad am eus bet evidot digant an Itroun Kantoziwikz!

Hag hi ha digeri buhan he faner evit diskues petra oa ebars; eun dudi oue eviti lakat dirag he mabig: eun tamm kig moc'h brao ruz-roz; viou poas-kalet livet glaz; eur voutailad gwin melen-aour hag evit achui, eur gouign vras-vras, leun a rezin seac'h hag alamandez, var e gorre ekreis ar sukr gwenn evel eun oelik bihan astennet e ziouskell o sevel en e zorn drapo karet bro Pologn.

E galon o tridal gant ar joa, Stephanik a strakas e zaouarn hag a ankounac'heas e boan evit eur pennad.

Epad m'edo e vamm oc'h aoz a eur zouben vad gant ar bouillonz deuet ive ganti, ar paotrik a droc'he ar bara, a lakea an diou skudell var an daol gant al loayou hag ar gwin melen. Morse Stephanik n'hen doa tanvet eun hevelep pred, ken mad. Meulet oue dreist-oll ar gouign; an c'elik gant e ziouskell rus-tan a oue lakeat ehars treid ar Verc'hez evel eur merk a levenez hag eun arwez a esperans dre ma touge paniel ar vro.

Goude ar pred, eun tamm tân a oue great en oalet, hag eun dudi oa breman evito beza o daouig en eur gichen, sioul, tomm dezo en despet d'ar yenien.

— Mar plij, va mamm, eme Stephan, mar plij, lennit din eur verz eus hor barz karet Michiewichz evel m'ho peus great meur a veach.

— Te a zo re skuiz, va mab paour.

— Nan, nan! Lennit, mar plij, eun dra benag. Neuse Aloysa a gemeras e kichen Buez ar Zent eul levrig bet gwechall d'e goaz ; hag o veza digoret anezan heb sellet e peleac'h, hi a lennas ar c'homzou-man :

« Ar bloaz koz a zo vont da vervel, petra zavo eus e » ludu?... Dre an nor alouret e tu ar Sav-Heol, eur skle- » rijen a bâr var ar bed oll a drid gant levenez hag » esperanz. Petra a fell did goulenn evit ar bloaz nevez ? »

— Eul levr historiou brao, a respontas ar bugel, didroidell.

— Mar bez em galloud : c'hoant ar peus, evel a velan da gaout eun tamig laouenidigez.

Hag an intañvez, gant eur vouez klemmus a gendalc'has da lenn :

« Al luc'heden-ze a anavezan siouas ! a zigor evidomp » ar baradoz, rag skuill a ra sklerigen var an douar da » ziskues an hent da vont beteg an oelez... Hag, en eun » taol kont, eun denvalijen teoc'h eget an noz a goezo » adarre var hon daoulagat. »

Eun huanaden a lakeas Aloysa da zavel he fenn. Sellet a reas var ar bugel. Heman a oa breman kousket mik var e skabel. Ar vamm her c'hemeras goustadik etre he divreac'h hag her c'hasas var ar bernik kolo hen doa evit gouele. Goude beza hen goloet mad gant eul lostenn domm ha lakeat eur pok karantezus var e dâl, he teuas en dro da gichen an tân. Al levr a oa chomet digor var an oalet. Daoulagat Aloysa a goezas neuse var ar c'homzou 'zo aman varlerc'h a lakeas he c'halon da strafilla :

« O mamm eus bro Pologn ! pa velit ho mab stouet e » henn o selaou eveziant histor hon tadou koz ken kalo- » nek, it buhan da zaouina dirag skeuden ar Verc'hez » Glac'haret ; sellit ous ar c'hleze hen deus toullet he » c'halon ; rag c'hui ive a vezo skoet en eun doare skri- » jus. Ia ! daoust evitan da veza dister, ho mab 'zo galvet

» da stourm ive ha marteze da vervel evel eur merzer. » Hor Zalver Jesus etouez bugale Nazareth a zouge dija » ar goaz a dlîe savetei ar bed. O mamm ! Me gafje » gwelloc'h gwelet o mab o c'hoari gant ar benveziou a » foio ar maro dezan... »

Aloysa a zerras al levr hag o koeza var he daoulin dirag skeuden an Itron Varia : « O gwerc'hez made- » lezus, emezi en eur grenn, gwelit va anken ! Pellañt ar » ar c'houmoul dû... Evel ar stereden var ar mor koun- » naret, lezit ho taoulagat da bara varnomp. O pet truez » ouzin, o va mamm ! O pet truez outan ! »

Goulou-deiz a zo deuet ; yen ha sklear eo an amzer ; moueziou skiltrus ar c'hleier a gân evit saludi ar bloaz nevez evel eur vamm o luskellat he c'hrouadur. Ha setu trous rodou eur c'harros o tostât hag o chom a sav dirag tiik soul an intañvez Laski. Eun aotrou gwisket pinvidik, eur yantell blevek var e gein, eun tok kern-uhel e giz ar vro var e benn, a zisken anezan, a zigor dor al lochen, a laka e daouarn Aloysa sebezet oll eur voest vras hag a ia var eun varzu ar c'hos gouele m'oa kousket ennan Stephanik. Sevel a ra ar c'hrouadur kousket mik c'hoas, etre e ziyreac'h, sellet a ra outan gant teneridigez, hag e soubli e benn evit lakat var e dâl eur pok hir, hir. — Goustadik, goustadik he laka anezan adarre var e vele plouz hag heb lavaret ger e distro d'e garros.

Aloysa ken sebezet oa n'he doa ken nebeut lavaret grik.

Ar c'hrouadur a oa dihonet epad m'edo an aotrou ous hen lakat en e vele. Mes souezet e-unan, digor frank e zaoulagat n'hen doa ket trinket eur ger ken nebeut.

— Piu eo hennez an aotrou-ze hen deus poket din, emezan d'e vamm ?

— N'ouzon ket... ne ouzon ket muioc'h egedout, a respontas Aloysa, mall ganti distaga al lasou alaouret a liamme ar west vras.

Enni ez oa eul levr eus ar re gaerra, alaouret tu ha tu ha var ar golo : « Histor bro Pologn. » Var ar feillen genta oa skriyet ar c'homzou gloriôs-man : « Da Stephan » Laski, ar hero bihan Luchowa. — Gant anaoudegez » vraz e genvroiz. »

Eur yalc'h a oa ive e goeled ar west.

— An aotrou Doue, eme an intañvez paour hen deus

bet truez ouzomp. Hag an daelou en he daoulagat e tro varzu he mah :

— Sell-ta petra zo eman !

— Peziou aour, eno Stephan raktal. Red e vo rei unan benag anezo d'am mignon Henryk, n'eo ket-ta, mamm !

— Ia, ia Stephanik, mes, da genta red eo lavaret mil bennoz d'an Introun Varia hor mamm madelezus.

Ha goude beza lavaret : Me ho Salud, Mari !! ar paotr a c'houlennas :

— Ha breman ! petra a vezo lavaret evit ar re a c'hoanta ober kement a zrong deomp ? Aloysa a respountas :

— Ar beden-ze a fellas da Sigismud lakat ac'hanout da lavaret en e c'hiz deac'h vintin.

Neuze mouez ar bûgel mesket gant hini e vamm a zavas nerzus ha freaz evit lavaret e yez kaër o bro ar « Bater ». Chom a rejont eur pennadig da boeza var ar c'homzou diveza a ziniti kement a draou evito : « *Evel ma pardonomp d'ar re o deus hon offanset.* »

Troet eus ar gallek e brezonek gant

FRANCEZA.

Le petit Stéphan Laski, par Henri Welschinger, Journal des Débats, 1^{er} janvier 1907.



Kloerdi-bras Lambezelleg

AOTRONED KER,

Setu aman ar pez a lennan e lizer-marc'had Kenvreurez ar Brezoneg :

Art. XII. a) Les membres de l'Académie bretonne titulaires pendant la durée de leur séminaire, deviennent à leur sortie honoraires s'ils restent dans le clergé diocésain, correspondants dans le cas contraire et doivent verser à M le Trésorier au commencement de chaque année scolaire la valeur de 2 fr. en argent ou en livres.

b) A la fin de chaque trimestre, M. le Sociétaire aura soin d'adresser à tous les confrères non résidents un compte rendu détaillé, autant que possible lithographié, des travaux de l'année, des progrès et de la marche de l'œuvre.

c) Il est à souhaiter que les membres non résidents conservent avec leurs confrères du séminaire une correspondance et une collaboration suivies... »

Hogen kenvreurez ar Brezoneg a zo o ren he c'houezek vloaz... Guelet a rit dre eno pegen niverus oc'h en devez hirio, strevet aman-ahont e pevar c'horn an eskopti : pemp ha triugent eün hag eün ; er bloaz a zeu e vezimp trivarc'h ha triugent ; hag evelse a vloaz da vloaz hon niver na raio nemet kreski.

Kement-se, a dra-zur, a zo evidomp oll eur frealzidigez : evidoc'h-c'hui dre ma velit ar greun hadet ganeoc'h o ouenna ken founnus, evidomp-ni dre ma velomp digor dirazomp eun hent diskouezet ken eün.

Kement-se c'hoaz a ziskouez n'hon deus ket mez, abaded yaouank ma zomp, o vale var ho roudou. Pell ac'hano ! Kenvreurez goz Kerfoenneg a zo ken buezek ha hiskoaz !...

Mes ar vuez he deus he lezennou ; — al lapouz er vi na vev ket evel al lapouz dispaket gantan e askili. — Ni gred d'eomp eo deuet ar mare da brederia ar mennoz a gavomp e divez al lizer-marc'had : « Cet art. XII demandera plus tard certains changements, si les événements permettent un jour aux membres non résidents de se constituer en une nouvelle et plus importante « Breurez-Vreiz » intimement unie à l'Académie bretonne actuelle dont elle serait le prolongement et le développement naturels. Celle-ci lui servirait alors de préparation et en quelque sorte de noviciat ; celle-là de son côté viendrait en aide à sa jeune sœur par ses conseils et son assistance matérielle (finances et bibliothèque). »

Mes ar « Vreurez-Vreiz » se na ielo ket en dro heb eur gelaouen-gelc'h pe eur gazeten da liamma en eil ouz egile he oll izili, hag hep mar ebet ar gelaouen gelc'h pe ar gazeten-ze a vezo digor d'ho labouriou, pe hi a vezo koz pe hi a vezo nevez, pe hi a vezo bras pe hi a vezo

bihan. Setu perak, mall ganeomp mont var araok ni hon deus goulennet ha bet aotre digant renerien ar *Feiz ha Breiz*, da lakat er gelaouen-ma ar pez a zigoueze ganeoc'h bete vremen bep tri-miz var dammou paper mastarennet. Trugarekait ganeomp ar guir Vreiziz-se ! Mil bennoz Doue ha bloavez mat d'ezo !...

Bloavez mat d'eoc'h-c'hui ivez, aotoned enorus : ra vennigo an aotrou Doue al labour a rit en unan eus e vella parkeier ; setu ar pez a ginnig d'eoc'h, egiz kalanna, gant eun diverra eus o labouriou, ho kenvreudeur yaouank eus ar C'hloerdi.

E leac'h hag e hano ar Genvreuriezh a bez.

F. GUÉGUEN, *Rener.*

Diverra eus labouriou daou viz (*Du ha kerzu*)

Evit kaout muioc'h a urz en hon diverra e lezomp a gostez — gant konferansou an aot. Bot var *Histor Breiz* a vezo roet oll en eun dro da fin ar bloaz — eur gonferans great gant an aot. Guellec var ar « Peziou c'hoari » da c'hortoz m'en devezo aozet c'hoaz diou all var amez pilig... En doare-ze ne jom ganeomp en taol-man nemet prezegen an aot. Rener, konferans an aot. Masson va ar « Gelennadurezh daouzek » hag hini an aotr. Dilasser var an « Armel. »

D'ar bevar a viz du an aot. Rener eta a zigoras kenvreuriezh ar Brezoneg evit ar bloavez 1909-1910. Lavaret a reas — evit an abaded nevez erruet en hon souez emichanz — da genta : petra eo kenvreuriezh ar Brezoneg : d'an eil : perak ema-hi er c'hloerdi bras ; d'an trede : penaos en em gemer-hi evit seveni he mennoziou.

I. — Petra eo kenvreuriezh ar brezoneg ? Eur strollad kloer bleinet gant eur c'honsaill a c'houec'h kuzulier hag en em vod bep yaou el leac'h ma kavont repu evit deski vez hon tadou abalamour da dalvoudegez an deskadurezh-ze evidomp pa vezimp eat eus ar C'hloerdi evit klask an doare da genderc'hel gizioù Breiz e kement ma zint evel girsier ar *Feiz*, evit anavezout histor bro ha buezekât he spered.

II. — Perak kenvreuriezh ar brezoneg er c'hloerdi-bras ? — N'ouzomp ket pe n'ouzomp ket mat awalc'h hor yez... Red eo d'eomp her gouzout rak en Eskopti-ma n'eus mui parrez ebet hag a c'hellfe diweret eur beleg breizad a deod ; red eo d'eomp eta hen deski... setu perak ar genvreuriezh.

III. — Doare labourat ar Genvreuriezh. Enni e kaver, lakeat e boutin, deskadurezh ha diwiziegezh an oll ; setu perak peb hini a ra eun dever da zizun evit beza reizet d'ar yaou gant ha dirak an oll ; setu perak c'hoaz unan bennak a zav bep tro da lenn eun tamm labour savet gantan var draou hag a zell ouz Breiz ; setu perak erfin barzed ha kanerien a lenn pe a gan bep ar mare, « sôniou guenn pe guerzeou du. »

Goudeze ar rener a beurglosas en eur lavaret ez oa dleet da lod ha mat d'an oll dont er Genvreuriezh hag en eur roi d'eomp da skouer hon aotrou'n Eskob muia-karet...

Araog en em guitât hon deus kaset c'hoaz etrezek an nenv gant eur galon leun a fizianz eun « De profundis » evit hor c'henvreudeur eat d'an anaon, hag eur beden c'houek da c'houlenn evit ar genvreuriezh skoazel sent koz Breiz-Izel ha Breiz-Veur.

D'an unnek an aot. Rener a lenn lizer-marc'had (règlement) ar genvreuriezh... araok roi ar gomz d'an aot. Masson a gemer anezi e galleg :

La Méthode bilingue à l'école primaire

Dans une causerie pleine d'idées et de faits, Monsieur le Rapporteur nous communique sur cette question pédagogique — brûlante d'actualité — les lumières de son savoir professionnel.

Il pose en thèse : *Chez nous l'enseignement du français doit se faire par le breton.* — C'était déjà, en 1896, le vœu du Congrès de Saint-Brieuc : « Que l'enseignement à l'école primaire se fasse non plus par la proscription brutale du breton, mais à l'aide d'une méthode rationnelle qui conduise progressivement les enfants par des

exercices raisonnés de la connaissance du breton à celle du français. « C'est le procédé de l'étude de l'inconnu par le connu. C'était une innovation alors. » Rappelez-vous, disait à ses instituteurs l'inspecteur d'académie du Morbihan, rappelez-vous que vous n'êtes établi que pour tuer la langue bretonne. » Et ces messieurs s'y employaient sérieusement : en classe, tout se fait en français ; en récréation, en promenade seuls peuvent parler ceux qui connaissent le français ; et de cette condamnation au mutisme résulte pour l'enfant l'horreur instinctive de l'école. Quelques instituteurs vont plus loin : ils tâchent de déshonorer le breton et n'y réussissent malheureusement que trop, car souvent l'enfant aura honte de parler le breton comme son père, sa mère et son recteur...

Au lieu de s'adresser à l'enfant comme s'il ne connaissait pas le breton ; au lieu de faire devant lui des mimiques comme s'il ne connaissait aucun mot capable de traduire ce qu'on veut lui dire, il y aurait quelque chose de mieux à faire : ce serait semble-t-il, de procéder de la manière suivante :

Supposons une école régulièrement constituée comprenant les trois cours préparatoires élémentaire, moyen. Les élèves du cours préparatoire ne savent pas un mot de français, et il s'agit de leur apprendre à lire en français, à écrire en français et à compter en français.

Pour réussir, parlez leur en breton mais en ayant soin de leur donner la traduction française et acte des mots que vous employez. Autour du tableau n° 1, par exemple. Il s'agit de leur faire prononcer exactement les voyelles de notre alphabet ce qui exige différentes positions ou modifications des organes de la parole ; tout cela demande à être expliqué avec précision et l'enfant ignore le sens des mots gosier, langue, palais, dents, lèvres... Allez-y d'un laïus breton, répétant votre idée sous diverses formes, et estimez-vous heureux si quelques mots bien compris se gravent dans leur fraîche mémoire ; cet exemple devient encore plus probant appliqué aux leçons de choses... Donc, au cours préparatoire, parlez presque exclusivement le breton, et si en récréation vous pouvez isoler ce cours laissez le « gazouiller en cette langue. »

Passons au cours élémentaire. Ici la difficulté est plus grande : il faut y apprendre à composer une phrase française et même à grouper plusieurs phrases en un petit récit. Pour cela deux moyens sont en présence : la leçon des choses où le breton ne devra être employé que pour les mots vraiment difficiles et qu'aucun enfant de la classe ne pourrait trouver ; les exercices d'invention où le breton redevient nécessaire... Au tableau noir un enfant tient la craie pour y transcrire les trouvailles de toute la classe ; le maître par ses questions amène les réponses voulues. Ce travail doit se faire en breton parce que, autrement, les enfants encore trop peu familiarisés avec le français hésiteraient ou se refuseraient même à exprimer leurs idées souvent très justes ; cette besogne finie, chacune des réponses est confiée à un enfant qui doit la mettre en bon français... Il y aurait profit à faire d'une façon analogue les exercices de lecture et d'orthographe. Maintenant, faudrait-il interdire à ce cours l'usage du breton en récréation ? Oui, mais sans tyrannie.

Que dire du cours moyen ? C'est la préparation au certificat d'études. Les élèves ont acquis une habitude suffisante de la parole française, donc en règle générale pas de breton ici ni en classe ni en récréation ; on pourrait faire une exception toutefois en faveur de la deuxième section — si le cours avait deux sections — à laquelle, pendant les derniers mois de l'année scolaire, le manuel du frère Constansius « Kenteliou brezonek » pourrait rendre de réels services.

Voilà le résumé trop succinct — et à cause de cela trop peu fidèle peut-être — de l'instructive causerie qui nous tint une demi heure — et cela en plein air — suspendus aux lèvres de M. Masson.

Varlerc'h eur ger a drugarez evit ar prezeger, savet eus an oll galonou ha lavaret gant ar rener, kan « Bro goz va Zadou » en em ledas var ar meoziou...

D'an 18, an aot. Rener a goumans reizha an deveriou tennet eus lizer an abostol Sant Jakez, en eur zisplega d'o mare reolennou ar reizadur re wall-gaset enno. Evelse e raio bep tro ma vezo eun tamm latin da droi e brezoneg.

A boan m'eo echuet gant an aot. Gueguen ma lamm an

aot. Bot var leuren ar c'hardi evit dibuna d'eomp kuden Histor Breiz... Var elerc'h an aot. Grall a gan « kanaouen eured » Paot Tréouré, gant eur vouez hag a lak ar maner da dregerni...

D'ar 25, an aot. Bot a gendalc'h gant Histor Breiz... hag an aot. Neildé hon luskel gant son « Marzin en e gavel ». « Kane ken dous, kane ken flour », ma hurree mibien ar Furnez ouz e glevet...

D'an 2 a viz kerzu an aot. Guellec a grog en e labour var ar « peziou c'hoari brezonek... » hag an aot. Breneol, eun eostig a Gerne, a zutel d'eomp « Stourmad killog Kerne ha killog Leon » aozet eun elven ganus gant unan eus ar renerien goz.

D'an 9, ez eomp da c'heul an aot. Dilasser da zastum ormel da enezen Kallot...

An ormel a zo kregin ledan stag ouz ar rec'hier evel ar brinnig, mes kalz brassoc'h. En dianveaz o deus liou ha doare ar c'herreg, mes en diabarz ez int flour ha marrellet; en eur c'hostez ez eus etre pemp ha seiz toull a zervich d'al loanig keaz da staga e di alaouret ouz e gein. N'o c'haver dizolo nemet pa vez reverzi. Neuze eo ema ar mare d'o fesketa.

Eiz heur eo... setu eur vanden dud o vont etrezek Kallot: goazed, merc'hed, moused, bep a falz pe bep a gountel a zale'h ganto gant eur mell moused bara-aman ebarz.

Da zek heur ar mor a zo diskennet ha var bouez teuler evet ouz an dillad e c'heller treuzi an dour a jom, evit mont betek ar « Mean ». — Eno e koumans ar blijadur... Setu ahont eur vaouez oc'h ober sin ar groaz! Kavet he deus an ormelen genta, ormelen ar chans... Hep roi d'an ormelen amzer d'en em starda gant he c'hrabanou ouz ar mean, ar vaouez a ra eur frap varni hag a zestag anezi ken trum hag all. Mes ma ne vije ket bet lijer awalc'h daouarn ar besketerez he dije ranket kemer he falz evit diframma an orinez-se dious ar garreg, ken doun ma sank houman he ivinou dindan he zi! Arabat eta lakat ar biz etre ar mean hag hi... Seul-vui eo bras ar mean seul-vui a dud a zo dindouman; evit chanj tu d'ezan an eil a ro d'egile hag ar gonidegez a vez rannet... Skaff ar rec'hier a zo eul leac'h bleudek evit an ormel, mes evit o c'haout ac'hano eo red manea ar c'hrog...

Da ziv-heur ar mor a zo tiz varnan o tistroi da c'holo an ormel n'int ket bet laeret divarnan... Poent eo guelelet ha n'eo ket merglet an dent gant ear ar mor ha serr lounka meren e kounter ar pez a zo paket; ar re a zo aroutet ens ar vicher o deus vardro c'houec'h pe zeiz tousen... eur paneradig d'eur vaouez da zougen var he feun betek Kastel pe Vontroulez, pa vent kaset di da verza.

... An aot. Dilasser a zo bet selaouet piz gant an oil; paotred an Argoad koulskoude a zeblante digeri frankoc'h eget ar re all o diousskouarn, rak morse n'o doa klevet kement all...

D'ar c'houezek edomp er retred... D'an 23 an aot. Bot a gendalc'h gant buez an Dukez Anna e Histor Breiz... Var e lerc'h an aot. Rener a lenn eun dever, eur werz savet gant unan eus ar Geuvreuriez: « Eun dro chasse. » E gaout a rafet tro pe dro moull e *Feiz ha Breiz*... D'an dregont erfin, ar yaouvez diveza eus ar bloaz, an aot. Gall a ziverra d'eomp al labour great ganeomp, hed daou viz. Ennan e unan al labour ze a zo marteze neubeut a dra: mes pa zonjer eo bet great epad eun amzer roet d'eomp da c'hoari, pa zonjer dreist-oll eo bet great evit gallout tizout eassoc'h an eneo a vezo fiziet ennomp divezetoc'h, e teuer da gompren ez eo eul labour talvoudek hag a dle beza benniget gant an aotrou Doue eus bar an Nenv... Er Geuvreuriez na c'houlennomp ket muioe'h...

An diverrer: F. LE GALL.

Ar Sekretour: J. DILASSER.

Ar rener: F. GUÉGUEN.



KOUSK BREIZ-IZEL

An heol a zo ku - zet, se - tu e - chu an
 de Me glev ar c'hloc'h o tin - tal an A - ve.
 Kousk, kousk, Breiz - I - zel bro dis - par, se -
ritardando *a tempo*
 tu an noz o tont var an dou-ar Kousk, Breiz I-zel bro ker
 mad Trouz ar mor braz a zav d'az lus - kel - lat.

C'houez-vad an ed e bleun, hag al lan alaouret
 Var ar mesiou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gan o testum o loened
 Gwersiou Breiz-Izel, n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz me glev kan an eostik.
 Telenner-noz, sonit flour ha dousik.

Uz da Vreiz o skedi an nenv steredennet
 A lâz 'z euz eun Doue ouz hor c'haret.

An neb a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,
 D'an dud vad Doue en deuz great an noz.

Arvor ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
 Bro all ker kaer n'euz ket var an douar.

J. MARÉCHAL.



EUN DRO CHASSE

E amzer « Lafontaine », ar barz gall ker brudet,
 E komze, red e oa, kalz a anevaled :
 En e gonchennou kaer em eus lennet guechall
 Komzou rust al leon d'an anevaled all,
 Komzou flour al louarn evit pakat ar vran,
 Digareziou ar blei prest da zibri an oan.

En hon amzeriou-ni an traou n'int ket chenchet,
 Mar d'eo guir, diana, ar pezh am eus klevet
 O konta goude koan, nav pe zek vloaz a zo,
 Va zad koz e unan, Doue ra bardouno !

— « Bugale, emezan, pa oan yaouank guechall,
 Me oa troet kenan da vont da chasseall.
 Ampart oan da denna, mat da glask ar sipier,
 Ha plijadur am oa o furcha lanneier.
 Bep sul ' vezen guelet, heb aoun ' rak daouarn Krib,
 O treuzi ar parkou c'heuilhet gant va c'hi Chip ;
 Bep noz, pa veze skler, ez ean goude kôn,
 Betek ar c'hroaz henchou da c'headal ar gedon ;
 D'ar pleg fall-ze, hep mar, em bije pell dalc'het
 Anez eun distro lous ganin en em gavet...

Eun abardaez goanv, var dro hanter-gerzu
 (D'ar mare-ze, paotred, 'm oa ugent vloaz echu ;
 Skler braz ez oa al loar, ha d'an oad m'oa deut,
 E c'hellit em c'hredi ; m'oa ket aoun 'rok va skeud) ;
 Edan e kroaz ar Born o c'hortoz an eur-vad
 Da c'hallout diskarga va fuzuilh var eur c'had.
 Var dro eun hanter-heur goude m'oa 'n em gavet,
 Pedon ket var ziuall, setu ha me guelet/
 Eur mell gad o tremen ; allaz, re zivezad !
 Eur vech all ' tigorin guelloc'h va daoulagad !

Neubent amzer goude 'velis e penn an hent,
 Eur c'had all o redek etrezek ar c'hroaz hent,
 'Vit doare prez varni... Pell 'oa c'hoaz diouzin...
 « Te, avad, va c'hommer, ne di ket ebioù d'in ! »

Va fuzuilh ouz va skoaz, va biz var ar bluenn,
 Edan, ' c'hortoz ar poent da ziskarga va zenn...
 Mes, o tra souezus ! o burzud ar brassa !
 Digouezet em c'hichen, ar c'had a jom a za !
 — « Pell 'man eben araok ? » C'houlennas-hi ganin...
 O klevet kement all n'em oa ket c'hoant c'hoarzin !...

Nan, va goad a droas ebarz va goazied,
 Hag hep gortoz pelloc'h, evel eun den spountet,
 Hep boutou na fuzuilh, e tiredis d'ar ger,
 E lammis em guele hep Pater na noster. »

N'oun ket dreizon va un' 'vit assuri da zen
 Eo bet en em gavet an dra ze penn da benn ;
 Mes ar pezh a zo sur eo en deuz va zad-koz
 Touet ez oa re vir ar pezh a lare d'eomp
 Hag en deus evelse distroet ac'hanomp
 Da vont da « glask ar c'had » eur vech kouezet an noz...



Gwragez keiz !

Ar Sued a zo eur vro hag a'ioa o vont var he fenn d'an
 traon ha ne ioa ken kaoz nemed ar vezventi.

Lezennou a zo bet great ha striz an traou ganto kenan
 hag abaoue m'int bet lakeat da dalvezout euz c'hweac'h
 litrad ha daou ugen a alkool er bloaz a eye peb den an
 eil dre egile breman ez euz pewar ugent vloaz ne ever
 mui nemed tri litrad.

N'eo ket brao d'ar vezvierien mont da jom d'ar vro-ze ;
 dont a rear abenn anezo, ne vezer ket pell, dre gaer pe
 heg !

Er wech kenta ma vezoc'h tapet mezo, ne vezo ket
 great kalz a dra deoc'h ; en eil gwech avat e vezoc'h
 kraouiet e ti Jakou ha gwin ardant a vezo taolet ennoc'h
 ken a c'houlennoc'h dour da eva.

En doare-ze e teuer dille da zizon kement Yan Lounk
 a zo.

* * *

Gragez keiz hag a zo reuzeudik evel ar vein gant ho
 koazed lounkerien, kasit anezo d'ar Sued da dremen eun
 nebeud sizuniou ; eno e vezo ententet outo a zoare.

P'o devezo bet epad eur miz
 Soubenn ar gwin ardant da lein
 Kig poazet er gwin ardant da vern
 Yod dre ar gwin ardant
 Ha gwin ardant d'e zouba da goan

e vezint don.

Ha ma n'ho peuz ket e korn hoc'h armel a youniz
 awal'h da baea an hent houarn dezo da vont keit-ze,
 aozit dezo hoc'h unan gwellaika ma c'helloc'h al louzou o
 divije bet er Sued ; para raint ivez marteze gantan er
 gear ha divisoc'h e vezo bet d'eoc'h eun tamm mat.

Esait atao da welet !

P.

KELEIER AR MIZ

Eur zell var daou vloaz ! — Ma c'houzanvit ganen,
 lennerien ger, Keleier ar Miz a zigoro hirio ledan o
 giouaskell, hag a blanvo er memez amzer var ar bloaz
 nevez. Evelse e teuint da veza keleier an daou vloaz.

Bloaz koz. — Ar bloaz 1909 zo o paouez tec'het diganeomp.
 Nag e kaver eo tremenet buan, eur vech m'eo
 achu ! Araog ma vezo kuzet euz hon daoulagad gant
 plegou hent an amzer, greomp c'hoaz eur zell varnan.
 Meur a dra zo c'hoarvezet dre au bed etre daou benn ar
 bloaz-se. Evit ar Frans ebken, gwelit nag a geleier,
 grevuz meur a vech, oc'h euz klevet hano anezo er c'ha-
 zetennou. Pehini anezo a gav d'eoc'h eo an hini brasa ?
 Pehini a jomo ar zonz anezan ar pella etouez an dud ?

Grèv paotred ar post e miz mae ? Eun dra grevuz
 meurbed eo gwelet ar C'houarnamant enebet outan gant
 e vevelien. Ze zo sin fall, ha ma kendal'he an avel da
 c'houeza euz an tu-ze, den ne oar penaoz e troio an
 traou. Mez ne gavit ket edoug ar bloaz kelou all ebed hag

hen deffe muioc'h a bouez ? — D'an 18 a viz Ebrel Hon Tad Santel ar Pab e Rom a ziskleriaz d'an oll gristenien ema Jeann d'Arc e renk an dud euruz er Baradoz. En oll geriou, en oll barrezioù ez euz bet great gouelioù en he enor. Jeann d'Arc a zaveteaz gwechall Bro-Frans. N'edo neuze nemed eur plac'hig trivac'h vloaz. Hirio eo kurunet en nenvou. Daoust ha disterreat eo he galloud ? Var bouez en em erbedi kaloneg outhi, ha kredi a rit-c'hui ne roffe ket d'eomp an dorn evit hor sikour da denna hor bro euz ar fank m'eo stlejet ennan gant enebourien Doue ? Eun dra talvouduz eo eta e ve bet lakeat Jeann d'Arc e renk an Dud Euruz.

Lizer Hon Eskibien. — Mez, me gav din, ha ne gredan ket e ve kavet gwir gristen ebed d'am dislavaret, kaeroc'h eged an dra-ze zo bet great c'hoaz edoug ar bloaz. Petra 'ta ? Al lizer skrivet gant Hon Eskibien divar benn deveriou ha gwirioù ar gerent e kenver ar skol. En daou viz diveza-ma, hor mignon Yvon hen d'euz displeget e *Feiz ha Breiz* ar pouezusa euz ar gwirioneziou embannet gant Hon Eskibien en o lizer. Setu pevar miz so abaoue m'eo skrivet. Trouz hen d'euz great dre ar vro. An drouz-se ne ket prest da fila. Ar gristenien vad zo bet mall ganto senti ouz kelemmadurez ar bastored karget d'o bleina var Hent ar Baradoz. Enebourien Doue o d'euz great van da c'hoarzin goap. Ar gristenien laosk o d'euz kavet abek.

Ia, Enebourien Doue a ra van da c'hoarzin goap. Eun taol baz en dour, emezo ha netra ken. Bemdez, en o c'hazetennou, e klaskent trei ha distrei ar grampoezen evit rei da gredi ne zelaou den mouez Hon Eskibien. Mez, kaer ho deuz, ne c'hellont miret da ziskuez e c'hoarzon melen ! Anaout a reont re vad e teu ar gristenien, an eil goude egile, da gompren o dever.

Evelato, ez euz kristenien laosk hag a gav abek. Lavaret a reont : « Me' zo libr da zevel va bugale evel ma karan. » Yvon hen d'euz diskuezet splamm d'ezo ne ket gwir, rag Doue a fell d'ezan e ve kristenien ar vugale. — Lavaret a reant c'hoas : « An dra ze ne zell ket euz an Eskibien nag euz ar veleien. »

Neuze e ve farsuz avad ! E peleac'h ema eta amzer ho katekiz, pa zeskae'h eo karget ar veleien da zeski d'eoc'h

a berz Doue petra zo mad, petra zo fall ? Int-hi eo ar bastored karget d'oc'h entcha varzu ar Baradoz, ha d'o tiouall euz ar bleiz. E peleac'h e kavot gwasoc'h bleiz eged ar skol dizoue hag a ziframm diganeoc'h eneou ho pugale ? Hag ar pastor ne ket e zever youal : « Harz ar bleiz ! » pa vez danjer evit e zenved ? Eo, a dra zur, hag an neb a gav abeg a ziskouez ne fell ket d'ezan senti.

Varlerc'h al lizer-ze, An Eskibien ho d'euz roët o c'helennadurez, pep hini evit e Eskopti. Merket o d'euz d'ar veleien, d'ar confessorret petra d'ober : 1° e kenver ar gerent a gas o bugalè d'ar skolioù hag a zo enno leoriou difennet, pe a vez great enno kentelioù eneb Doue ; 2° ar vistri-skol a zalc'h al leoriou pe a ro ar c'hentelioù-ze ar vugale, a rank-heuil ar seurt skolioù. Bezit sur, aze Doue eo a gomz dre c'hinou e vinistred ha gantan e chomo ar ger diveza, abred pe zivezad. Abalamour da-ze e lavaren eo Lizer Hon Eskibien talvoudusa tra zo bet great edoug ar bloaz tremenet.

Ar bloaz nevez. — Hag ar bloaz nevez, petra' c'hoarvezo etre ma pado ? Den n'her goar. An dud desket a lavar e vezo gwelet e miz meurz pe vardro eur stereden lostek vraz-vraz. Kredi' ran eo gwir. Arabad sponta abalamour da-ze. Ar steredenn-ze a deuaz ive da velet hon tadou koz er bloaz 1835, hag a deu evelse hep 75 vloaz d'ober eun dro e kostez an douar goude beza great eun tam beach dre an oabl etouez ar stered.

Votadeg. — Grevusoc'h tra eged an dra-ze. Er bloaz-ma e vezo votadeg, da viz mae me zonzj. Red e vezo adarre henvel deputeed evit pevar bloaz. Bezit sur ar re goz n'o deuz ket gortozet hirio da glask ar gwella tu da veza hanvet en dro. An tam zo mad, arabad diskregi dioutan.

Evelato, en amzerioù diveza-ma, kalz tud o d'euz komprenet n'edo ket mad an doare ma vez hanvet pell zo an deputeed. Bez' e tle beza ken aliez a zepute hag a gant mil den pe a lodenn kant mil den zo e peb arrondissement, hag an hini hen devo ar muia mouezioù zo d'ezan ar maout... hag ar 15.000 bep bloaz. Petra c'hoarvez ? Abaoue 1876 euz bet votadeg meur a vech. Mad, eur vech ebken, ar re a yeaz d'ar Gramp o d'euz bet etrezo oll muioc'h a vouezioù eged ar re a jomaz er meaz. Gwelit kentoc'h.

Er bloaz	Ar re a yeaz ebarz o d'euz bet	Hag ar re a jomaz er meaz
1876	4.458.514	5.422.283
1877	5.059.106	5.048.551
1881	4.567.052	5.600.000
1885	4.042.964	6.000.000
1889	4.526.086	5.800.000
1893	4.513.511	5.930.000
1898	4.906.000	5.633.000
1902	5.199.000	5.818.000
1906	5.209.606	6.383.852

Dre-ze, ouspenn an anter euz an dud a ya da voti ne da ket d'ar Gampr an den ma votant evitan. Ha just eo ? Ne ket. Abalamour da-ze e ve mad chench, hag ober ar pez a hanver ar Représentation Proportionnelle. Setu ama penaoz e ve neuze. Peb kostezenn a raffe e peb departamant eul listen hag a ve varn'hi d'an hirra kement a hanoioù hag a zeputeed zo da henvel en departamant. Lakeomp-mar kirit, 10 evit ar Finister. Peb elektour euz an departamant en deffe urz da lakat er pod hano an deg a blijfe d'ezan ar muia. Da fin an devez vot, e veffe great ar zomm euz an oll mouezioù o deffe bet dre an departamant a bez an oll dud zo var bep hini euz al listennou. D'ar fin, peb listen, ervez an niver mouezioù e deffe bet, a ve hanvet da zeputeed eun niver bianoc'h pe brasoc'h euz he zud. Justoc'h e ve evelse an traou.

An deputeed a zonzaz eun tamig ober eul lezenn evelse. Edo zoken anter votet ganto d'an devezioù kenta a viz du, pa zavaz ar Briand en e za. « Diouallomp, emezan, taolomp evez, voti al lezenn-ze a c'hellfe koust-tout ker d'eomp. » Kalz deputeed a deuaz sonj d'ezo... euz a veur a dra, ha meur a hini anezo en em zislavaraz. Da c'hwec'h heur d'euz an noz ez oa 281 a du gant al lezenn, ha 235 a eneb. Araog eiz heur, 225 a du ha 291 a eneb.

E kichen ti va zad, p'edon bian, ezoa var eun chiminal, eun dra hag a droe gant an avel. Ni, etrezomp bugale, a gave d'eomp gouzout ; brezonneg mad, hag a hanver an dra-ze eur « chilouet ». Daoust ped « chilouet » zo er Grampr e Paris ?

KERGADORET.

Respont da zivinadennou miz Kerzu

- I. — Eur ganaben, pe mar kirit eul liorzat kanab.
- II. — Foen.
- III. — 19 loën. — 1 vioc'h. — 80 penn-danvad.
- IV. — 11 renkat a 5 ha 4 ouspen, pe $11 \times 5 + 4 = 59$.
 16 — a 4 ha 3 ouspen, pe $16 \times 5 + 3 = 59$.
 19 — a 3 ha 2 ouspen, pe $19 \times 3 + 2 = 59$.
 29 — a 2 ha 1 ouspen, pe $29 \times 2 + 1 = 59$.

O deus kavet, da nebeuta, teir eus an divinadennou :

Vincent Hémon, Guengat. — François Bescond, bourg Tréglonou. — Jean-Marie Normand, Guiclan. — Yves Dantec, skolaj Lesneven. — Jean-Louis Cadiou, Sibiril. — Françoise Charles, Sant-Nouga. — François Picot, Plouvorn. — Pierre L'Helgoualc'h, Kerginou, Plomelin, 3. — Nicolas Le Guen, Touldrézen, Ploudaniel, 3. — Nicolas Gourvenec, bourg Kersaint-Plabennec. — Francine Mao, Ssnt-Divy. — Jean-Louis Guenneguez, Kerherhal, Maria Le Denn, Sizun.

Trugarez a lavaran d'ar re a zigas din divinadennou. Plijadur a reont din hag ive da lennerien *Feiz ha Breiz*. Ne c'hellan ket o lakat oll er miz varlerc'h ; mes kaout a raint o zro eur mare pe vare, da vihana ma n'int ket re anavezet gant an oll. Siouas ! Digaset e vez din re bet lakeat dija.

Divinadennou miz Kerzu

- I. — Seul mac'h izella,
 Me a gresk
 Seul mac'h uhella
 Me a zigresk.
- II. — Me a zo bet gwelet
 El leac'h morse n'oun bet
 Hag a vezo gwelet c'hoas
 El leac'h na zin biskoas.

III. — Gwenn evel ar sin.
Glâz evel al lin
Rus evel an tan
Ha dû evel ar vran.

IV. — Me 'm eus daou-ugent vloas. Gounid a ran brao va buez o servicha va nesa. Yec'het em eus, dre c'hras Doue; mes, dre n'em eus den ha ne zonzan ket diaseza eur famill, em eus c'hoant da espern eun dra benag evit va c'hozni, evit na vo ket dà din neuze mont da astenn va dorn dor ha dor. Kant lurig ar bloas a c'hellen, heb diosamant ebet, da espern var va goprou.

Petra livirit din da ober ? Kinnig a rer din :

1° Rei va 100 lur espern bep bloaz, epad 20 vloas, à *fonds perdus*, ha neuze d'am 60 vloaz e vezo servichet din bete va maro eul leve a 431 fr. 80. Eur yalc'hadig vrao, bep bloas, evel a velit, peadra din da veva heb rankout astenn va dorn da zen. Ma zan beteg va 70 vloas, ar gompagnunez a ranko paea din ouspenn diou vech ar pez am bezo roet dezi. Mes... ma varvan araog va 60 vloas e kollan tout; eno eman al dalc'h;

2° Kinnig a rer din c'hoas evit va 100 lur, roet bep bloas (epad 20 vloas atao) eul leve a 249 fr. 60. Nebeutoc'h eo kals, mes ma varven araog va 60 vloas, kement am bezo roet d'ar gompagnunez a vezo restaolet d'am heritourien hag a dalvezo da lakat pedi evidon.

3° Ha ma talc'hfen va gounidegez em yalc'h ? An dra-ze a reio d'in 2.000 lurig d'am 60 vloas. Mes an interest a 2.000 var bevarzek real dre gant (3,50 %) ne ra nemet 70 lur, ne vezo ket druz ar souben gant an dra-ze. Hag ouspenn ma talc'han anezo, oun sûr d'o dispign.

Gwelit va nec'hamant ! C'hui lennerien F. H. B. ha zo tud poellet mad, roit din eun ali, mar plij. Ar c'hompagnunezou a ginnig din kemeret var arc'hant eo : *La caisse nationale de retraite pour la vieillesse*, ha *La Nationale*, an eil hag eben a zo krenv o c'hein. Fiziants, a gav din a c'heller da gaout enno.

F. C.

Feiz ha Breiz

Kannad Misiiek ar Vretouped

Difennour bihan ar Relijion

PERAK AL LEVR NEVEZ-MA ?

Nag a c'hevier a vez klevet dizae'ha bemdez war gein an Iliz !... Meur a wech eo bet digouezet ganeoc'h beza gant tud hag o doa plijadur o tispenn hon relijion zantel ; meur a wech hoc'h eus klevet ober gwap eus hon c'hredennou ar muia sakr. Hag e gwirionez, an dud dizoue a zo anezo pell zo ; biskoaz avat, war va meno, n'ez int en em ziskouezet ken hardis hag en hon amzer.

Al lavarou divergont-se a vez kavet dreist-oll gant an azenned ha gant tud hag a oar mat tre eo gaou ar pez a leveront.

Evit ar re genta, va Doue ! petra fell d'eoc'h ? Kalz a zo hizio ha n'o deus bet morse an heur-vat da gaout deskadurez kristen ; savet int bet er meaz a bep relijion, pe marteze mar o deus klevet hano eus Iliz Jezus-Krist n'oa nemet evit glaouri warni. N'eo ket souezus eta e teufent ive d'o zro da skuilha war ar re-all eus ar péz a zo enno, evel ma klask ar chas klanv taga loened-all. Eur wezenig roz gouez ne roio nemet roz gouez keit na vezo ket emboudet roz liorz warni.

Eun dever eo evidomp, kristenien, rei sklerijen d'an dud paour-ze, dleet eo d'eomp lakaat ar goulen da bara ken founnus dirak o daoulagad, ma teuo d'o dalla ; roomp d'o c'halon ha d'o spered eur vagadurez ker yac'h ma vezo red mat d'ezo lavaret : « Sell 'ta ! me a zoa en denvalijen, ha ne ouien ket ! O-na kaer eo ar wirionez ! »

Bez' ez eus re-all hag a zo dall dre na fell ket d'ezo gwelet sklear. Huchal a reont war an Iliz, war ar veleien, war ar breurieziou kristen, n'eo ket avat ma kav d'ezo

ober labour vat; nan, nan, plijadur eo o deus oc'h ober an droug. Ar re-ma a zo fallakr, hag eo kalz diesoc'h kaout da ober ganto. Penaos ec'h en em gemerimp 'ta neuze? Daoust ha lavaret a raimp n'ez euz netra da ober ganto? Doue ra viro!

D'ar re a skuilh binim war ar relijion dre oazamant e tleer diskleria ar wirionez krak hag eun, hep tamm troidel. Gant ar re-ma n'heller goulenn nemet ma raint an nebeuta droug d'ar re-all; fazia ha fazia kalz a rafed o klask lakaat war an hent mat tud hag a fell d'ezo chom dianket, o klask rei da glevet da dud hag a fell d'ezo chom bouzar.

An darn vuia eus ar ganfarted-ma n'ouzont ket zoken pe ez eo gwir a leveront pe ne deo ket. Ar pezh a youc'hont gant kement a nerz a zo eun diskan eneb ar relijion, eneb ar veleien, eneb pep tra zantel, desket ganto er c'hafeou, en davarnioù, pe er stalioù-labour; n'o deus nemet er memes kuden da zibuna, hag atao ar memes hini, rak pa wel ar prezeger giz nevez e selaouer anezan gant plijadur, e sav lorc'h ennan, hag e tro ar gram-poezen war an tu-all; hogen, ar gram-poezen n'eo ket chenchet evit an dra-ze.

Hag ar falz-doktored-ma a zo stankoc'h evit na greder peurvuia. Siouaz! o c'haout a reer e peb leac'h hag e pep stum hirio: e kear, war ar meaz, er foarioù, er marc'hajou, ha betek zoken er pardonioù; dre o skridoù dreist-oll eo e kaver anezo, er c'hazetennou hag en almanagoù gallek ha brezonek.

E diou zoare e c'heller enebi ouz an eil rummad falz-doktored-ma:

1^a O tispenn dirazo ar gevier a-lavaront, ha kement-se e berr gomzou, barrek evelato da ziskouez splam ar wirionez.

2^a Oc'h ingala etouez an dud « araok » ha « goude » ar brezegen levrigoù pe baperennou savet a-ratoz evit kas da netra lavarou treus an dud fallakr.

Eul levrig egiz-se eo am eus c'hoant da zevel e « brezoneg » evit va c'henvroiz chomet feal d'o yez. Traou awalc'h a zo diouto e galleg, el leac'h e brezoneg n'avezan nemet hini an A.-Morvan: « Ar falz-doktored hag o lavarou. »

Hogen, eun dra bennak a-nevez eo a fell d'in ober, eul labour ledannoc'h hag a vezo muioc'h dioc'h hon amzer. C'hoant am eus da rei da welet d'an holl penaos eo deuet an Iliz santel, evel gwechall Hor Zalver Jezus-Krist, da asten an dourn d'ar paour keaz evit e zevel, ken en e spered e-unan, ken dirak mistri ar bed ha dirak ar pennoù bras ha pinvidik m'eo red d'ezan goulenn labour diganto evit beva.

Diskouez a rin an Iliz o poania da zigeri spered an dud, o sevel skolioù e pep leac'h, o tastum ar beorien pe o rei peadra d'ezo da veva, o soursial oc'h ar re glanv. Ya, diskouez a rin ar Venec'h, ar Breudeur, al Leanezed, o tilezel pep tra; kerent, madou ha plijadurioù, evit ser-yicha ar bobl, an dud dister, an dud ezommek.

Ni, Bretoned, a zo bepred start en hor feiz, gwir eo; red e vije evelato beza dall, evit na weljemp ket meur a hini en hon touez o laoskaat bemdez, o yenaat, hag o tilezel a nebeudou ar c'hustumou santel desket ganto war barlen o mamm.

Petra zo kirriek da gement-se? Setu ama: ar skolioù kristen a zo eat war rouesaat epad 27 vloaz, hag eo bet red d'eun niver bras a vugale tremen dre ar skolioù dibater, el leac'h na glevent morse hano nag a Zoue nag a Iliz, nag a Varados nag a Ifern; hag o welet e tesket d'ezo « pep tra nemet heulia ar relijion, » kalz a zo deuet da zonjal hag o deus lavaret zoken: « Ar relijion a dle beza gwall nebeut a dra p'eo gwir ar mestr-skol na lavare morse netra d'eomp diwar he fenn... Ha da ober petra neuze mont wardro an Iliz hag ar veleien? »

Goude, pa deu an oad d'ezo, e rankont mont da zoudarded. Nag a draou fall a glevont! nag a skouerioù milliget a welont eno! Ha mar fell d'ezo heulia eun tamm bennak o relijion, nag a wap a vezo great d'ezo! A! ma n'o deus ket an dud yaouank-se eur feiz krenv meurbed diazezet start en o spered, penaos e fell d'oc'h e chom-fent kristenien vat?

Roomp eta deskadurez kristen d'hor bugale ha d'hon tud yaouank. Petra vir ouzomp da ober bemdez, goude koan, dirak holl dud an ti, eur pennad lenn en eul levr a gelennadurez kristen? Ma karfe an tadou hag ar mam-

mou, ar vistri hag ar vestrezed, nag a vad a rafent en doare-ze !

Evit rei dourn d'ezo eo e savan « Difennour bihan ar relijion. »

Va c'henvroiz ker, grit digemer vat d'ezan, ha kredit bepred e karantez ho servicher.

KLAODA 'R PRAT.

DIFENNOUR BIHAN AR RELIJION

LODEN GENTA

Doùe hag e brovidanz

Ar falz-doktor. — N'eus Doue ebet !!!

An difennour bihan. — Piou 'ta neuze, Aotrou, eo a laka ar bed-ma da vont ker kaer en dro ?

Ar « marc'h-du » a vez staget oc'h an tren ne gers ket anezan e-unan ; red eo e ve ennan eun den a vicher evit hen ren, unan-all da ober tan, da brederia gant an dour, an eol, ha kalz a draou-all. — Va horolaj, ken nebeut, p'eo gwir e rankan, eur wech an amzer, sevel d'ezi he foueziou. — Hag an hini a deufe da lavaret d'in eo bet great va horolaj anezi he-unan, hep micherour, eo bet kavet ar marc'h-du peurc'hreat, hep m'en divije bet ezom a labourer ebet, hennez, hag hennez epken a c'hello lavaret d'in eo bet « en em c'hreat ar bed anezan e-unan ! »

Anezan e-unan ? — N'em beus morse gwelet netra hag a viche bet en em c'hreat e-unan ; ha c'houi ? — Gwelloc'h c'hoaz, n'em beus biskoaz gwelet den hag en diviche roet d'unan-all ar pezh n'en doa ket e-unan. An den ijinus a zo atao parfetoc'h eget e oberou, n'eus fors peger kaer ec'h oufent beza. Hogen, pa zellan ouz an heol, al loar, ar stered, an douar, an dud, al loened, an disterra fubuen, an delien eus ar wezen, me a lavar eo kaer meurbed an holl draou-ze, ha daoust d'in da veza mar-teze speredet kaer eo red mat d'in anzavout n'hellan ket ober anezo ker kaer, n'hellan ket zoken ober an disterra anezo. « Ha c'houi, Aotrou ? »

Lavaret a ran ouspenn : An traou-ze ker kaer n'int ket eat evel-se anezo o-unan d'al leac'h a zere outo ker mat ; kouls hag evit ar marc'h-du hag an horolaj eo bet red d'eur micherour meurbed gwiziek lakaat e zourn da labourat. « N'hellit ket lavaret nan » kredabl ? Hag ar micherour-ze a dle beza krenv eun tammig evit kas ha digas ar stered hag an douar, « ha ne gav ket d'eoc'h, Aotrou ? »

Evit beza gellet rei lezennou d'an holl draou-ze ha da bep hini anezo da ober o labour gant urz, ar micherour-ze hep mar ebet a dle kaout eur volontez dishenvel diouz hini pep den-all. E wiziegez a rank beza dispar, p'eo gwir ec'h anavez anezo keit-all a zo, el leac'h ni ne deuomp a-benn d'o anaout nemet a-hiniennou, ha c'hoaz penaos o anavezomp ? ha gant pegement a boan e teuomp da zeski eun dra bennak diwar o fenn !

Bras divent e rank beza ive, p'eo gwir ez eus stered e pep leac'h dre an oabl, millionou ha millionou a leoiou ac'haleu. E spered a dle beza gwall digor, p'eo gwir me, kaer am eus, n'hellan ket dont a benn da c'houzout da vat perak eo bet great hini eus an traou a zo en dro d'in ; o sellet a dost, me a wel koulskoude en holl draou krouet hag e pep hini anezo, — er c'hreumen ed, ha pa na ve ken, — labour eur spered kaer dispar, labour eur micherour dournet evel n'ez eus ket o vale war an douar.

Ha c'houi, Aotrou, daoust ha gwelet a rid ar *perak* hag penaos eus an holl draou-ze ? Ha koumpren a rit-hu pep tra ?

Ha gallout a rafec'h hepken lavaret d'in perak ema ho taoulagad dirak el leac'h beza en ho kein ? Pe ho tad pe ho mamm eo o deus-i lakeat dress al leac'h ma tlehont beza ? — Brao ! anzav a rit n'o deus nag ho tad nag ho mamm great netra an holl ebet evit kement-se, na c'houi ken nebeut. Livirit d'in 'ta ha labourer mat a reas an hini en deus o lakeat el leac'h m'emaint evit ma welot sklear hep beza diezet an disterra.

Pa evesaan mat e lavaran ive : Ar micherour-ze a dle beza *madelezes*, p'eo gwir n'ez eus ket unan eus e vadoberou a gement a vije noazus dreizi he-unan ; nan, n'ez eus ket unan. A pa zellan tost oc'h ar fubuen, pa welan

he deus treid ha daoulagad, hag hi koulskoude ken disterik m'am beus mil boan oc'h anaout he lodennoù, me a lavar adarre e sell tost ar micherour bras oc'h ar peza ra, oc'h an traou disterra zoken; e lagad e wel sklearoc'h eget va hini. Petra livirit a gement-se Aotrou?

Lavaret a ran ouspenn e tle beza e pep leac'h, p'eo gwir e kavan e pep leac'h an hevelep lezennou, — ar pouez (le poids), ha pa na ve ken, — kouls e diabars an douar evel war c'horre, er stered hag en heol.

Kaout a ran al lezennou-ze e pep leac'h, hag e welan ec'h heuilh au traou hep buez an hevelep lezennou (ar mean a ziskan dalc'hmat pa ne gav ket a grog); pep tra veo a rank ive evit miret ar vuez heuilha an hevelep lezennou (en em vaga, kemeret ar boued a zere ouz pep hini); pep spered a rank ive heuilha lezennou a zo, evel niveri (compter) hep fazia.

N'eus ket a lezennou hep lezenn, rak al lezennou n'en em c'hreont ket ho-unan. N'hoc'h eus ket gwelet, Aotrou, lezennou savet anezo ho-unan? Nan, n'es ket 'ta? Na me ken nebeut. Ac'hanta!

Ouspen-ze, me lavar e rank beza holl c'halloudek an hini en deus great sklerijen an heol, erc'h ar goañv, ar gwad a red em gwazied. Ha c'houi, Aotrou, ha kaout a ra d'eoc'h ez eo dic'halloud.

Evel-se 'ta ez eus eur spered bras e teuler evez hag o viret pep tra en urz; eun nerz dreist muzul a zo dindan galloud ar spered-se; eur volonteza ha n'hell netra stourm outi a zo o reiza pep tra. Ar spered holl-c'halloudus-se eo Doue, eur spered pur, red eo ma ve, p'eo gwir ec'h ouzomp ema e pep leac'h, hep ma c'hallfemp koulskoude e welet gant daoulagad ar c'horf. N'ez eus ket a voged hep ma ve ive eun tamm tan; pep den a skiant pa wel moged a lavar dioc'htu ez euz ive tan. — Bezomp, ni ive, tud a skiant, hag hep gwelet an tan, da lavaret eo hep gwelet Doue gant daoulagad hon c'horf, anzavomp dioc'h ar moged, da lavaret eo dioc'h an traou kaer reizet mat a zo en dro d'eomp ha dioc'h ar vuez a ren e pep leac'h, anzavomp int bet great gant eur micherour evel m'eo great ar moged gant an tan.

A! c'houi a lavar n'ez eus Doue ebet! Mat, me a yafe e klaoustre ganeoc'h n'och ket evit diskouez d'in n'ez eus

Doue ebet. Nan, Aotrou, ne deuot morse a-benn da ober d'in lavaret goude beza klevet ho prezegeñ: « E gwirionez, ar skiant vat eo a goms dre ho kinou; anat awalc'h eo d'in brema n'ez eus Doue ebet!!!

Mont a rafen e klaoustre ouzoc'h ne zeuot morse abenn da ziskouez d'in n'eo ket Doue e gwirionez henvel ouz ar peza zesk d'eomp an Iliz katolik diwar e benn, da lavaret eo eur spered pur ha parfet, bet a holl viskoaz, en deus a netra great an nenv hag an douar hag a c'houarn pep tra dre e holl c'halloudegez.

Marteze n'ouiech ket?... Eur gonchen gwah goz eo hoc'h eus servichet d'in aze o lavaret n'ez eus Doue ebet. Ar roue David a skrive, brema ez eus tri mill bloaz: « An den pec'her en deuz lavaret en e galon: N'ez euz Doue ebet! » Eun tammig eo koz ho tiskan, evel a welit Hag ar roue santel a lavar d'eomp perak e koms ar pec'her en doare-ze: evit mouga broudou e goustians eo, hag evit esa lakaat en e benn e c'hell pec'hi hep aon.

Taolit, Aotrou, eur zell piz war ho toareou, war hoc'h oberou, hag e welot eo bepred gwir an dra-ze.

Ar fals doktor. — Den n'en deus morse gwelet Doue!

An difennour bihan. — N'eo ket dies gouzout perak: « Doue a zo eur spered, hag eur spered ne c'hell ket beza gwelet. — Ha gwelet hoc'h eus-hu morse ho spered, Aotrou?

Ha koulskoude, Aotrou, hoc'h eus spered da sonjal, da evesaat, da varn, da c'hoantaat. Ha gwelet hoc'h eus-hu an holl draou-ze?

Nan, n'eo gwir? Ac'hanta, kredi a rit evelato, hag en despet da ze, hoc'h eus eur spered da zonjal, da evesaat, e c'hellit koumpren meur a dra, hag hoc'h eus eur volonteza; santout a rit ema an holl draou-ze ennoc'h; ia, anzavout a rit ez int ar peza c'halvit hoc'h unan ar spered; en em rei a ra da anaout dre an oberou, hep ma c'hellfac'h e welet gant daoulagad. Evel-se a ra an Aotrou Doue. Pep tra a goms anezan, pep tra a veul uhel e hano:

Bez'es eus kalz a draou-all ha ne c'hellomp ket gwelet, hag eo red mat d'eomp koulskoude kredi enno. ha gwelet hoc'h eus-hu ar boan, ho poan d'eoc'h hoc'h unan zoken? Nan, n'eo gwir? Gwelet hoc'h eus tud o tiwaska poaniou bras; hoc'h unan, marteze hoc'h bet astennet

war eur gwele a boan, hag hoc'h eus diskouezet d'ar re a yoa en dro d'eoc'h ho poa kalz da c'houzanv ; hogen, nag hint-i, na c'houi, na den, n'en deus morse gwelet ar boan a c'houzanvec'h. (N'heller ket eta gwelet kement tra a zo.)

Ha neuze, penaos e kav d'eoc'h, Aotrou, e c'hellfemp gwelet Doue war an douar-ma gant daoulagad ha n'hellont ket zoken chom an disterra pennad amzer da bara war an heol ? Doue a zo ker bras m'ema er memes amzer en holl leac'hiou eus dounder an douar hag e kement hed a zo e ledander an nenvou. Bez' ema er memez amzer, ha kenkouls, war an douar hag en niver bras a stered a zo e bolz an nenvou hag e kement leac'h a zo. Anzavit eta, Aotrou, penaos mar gallechomp gwelet Doue gant daoulagad ar c'horf ne welomp nemet... eul lodennig vihan anezan..., hag o welet anezan evel-se e komprenfemp nebeutoc'h c'hoaz eget gant hor spered great hervez skeuden pe henvelidigez Doue, spered evel dan, ha gouest da dizout eun niver bras a draou ha na gouezint morse na dindan hon daoulagad na dindan hon daouarn. Pa velit eur c'har dre dan pe eur « marc'hdu » o vont gant an hent e livirit eo bet red d'an traou-ze -kaout eun den speredet da groui anezo. N'hoc'h eus douetans ebet e ven bet great gant eun den, hag en doa an den-ze kalz skiant hag ijin. Ha koulskoude, daoust ha gwelet hoc'h eus e spered ? e ijin ? Nan, n'eo gwir ? n'hoc'h eus ezom ebet da welet an traou-ze evit kredi enno.

An diviz-man etre an fals doktor ha difennour bihan ar relijion a zo tennet eus eul levr galleg : « Réponse aux objections contre la Religion. »

UNAN A ZAOU

Kristen katolik ez-hoc'h pe ne 'z-hoc'h ket ?

Hor Zalver Jezuz-Krist, Mab Doue en em c'hreat den, o rei dezho ho c'harg, a lavare d'an Ebestel :

« It dre bevar c'horn ar bed da gelen an holl dud, des- » kit dezho miret va gourc'hemennou. No ped aoun » ebed ; me 'zo hag a yezo ganeoc'h keit 'ma zai ar bed

» en dro. — Nep piou benag ho sellao-c'hui a zellao
» ac'hanoun-me : ober faë var-n-hoc'hui, ve ober faë var-
» noun-me va-unan. Aoun ebed, eur veach c'hoaz, me zo
» bed treac'h d'ar bed. »

Var a velit, Bugale an Iliz 'zo, a bers Doue, diou loden anez-ho : eur rumm 'zo en ho c'harg kelen ha gouarn ; d'ar rumm all eo sellao ha senti.

Sant Per, Mestr an Ebestel hag ar Pabet en he c'houde ; an Ebestel ha, var ho lerc'h an iskibien, d'ar re-ze vo kelen ; ar re all holl vo ho dever goulen ha kaout skol digantho.

Ar gwir gristen katolik eo an hini a gred kement 'zo skrivet en Aviel, a zellao mouez ar Pab, a zouj da gomz an iskibien. Neb ne ro van deuz kelennadurez, deuz gourc'hemennou Hon T. S. ar Pab, deuz re an A. n'Eskop n'eo kristen ebed.

Mad, an iskibien ho deuz difennet, a grenn, mired, ha lenn al leoriou diskleriet, hanvet, hini hag hini, en ho Lizer. Perag eo bet douget an difenn-ze ? Abalamour al leoriou man, vel ken aliez a venvek-ifern, zo bet sternet, teurniet, lemmet gant hor gwassa enebourien evit flemma ha, margaljet, mouga ar Feiz er c'halonou. E darn anezho n'e gaver nemet rebechou gaouiad, dissakred ha dismegansus divar benn an Iliz ; darn all jentilloc'h, a ve lavaret, evit eur guel, 'zo koulskoude mui a ezom c'hoaz da zioual outho ; rag, deuz ho c'homzou flour, e tiver binim an aër-viber ; birvi ra enno, iud ha gouez ; ar gassoni hag ar gounar.

Brema p'int bet kondaonet gant an iskibien, pehini ac'hanomp-ni, nemet trenket 've en he voazied goad he radiant, ia, pehini ac'hanomp-ni ne rofe ket he valloz d'ar seurt leoriou ?

Evit ac'hane, distag vel m'eo hirrio ar gouarnamant deuz an Iliz e vezo eassoc'h eget diagent, anaout ar gristenien iac'h ha gwirion deuz ar re ne chomm gantho, a zianveaz nemet liou ha skeud ar feiz. Ar re ac'hanomp 'zo great da vad ho sonj da gerzed var roudou Hor Zalver, da c'hounid kousto pe gousto ar Baradoz, a zalc'h kalonek da bignat gant ar **venojen stris ha rust**, m'eo darempredet nemet gant ar re vella, e keit 'ma veler an dud kizidik hag aounik damantus d'ho foan, o skei

a-dreuz gant an **hent kompez ha ledan** a gass var eun d'an ifern.

A beza zeus, er barres, pennou leusk ha diboel deuz vouenn ar re-ma ? N'ouzoun dare. Va c'harg, koulskoude, zo rei sklérigen, deoc'h holl, var gement ho c'heuz izom da c'houzout pe zo red deoc'h ober ; lakaat ha dero'hel ac'hanoc'h var evez, vit ma c'helfot dioual ha tec'hed, abred, deuz kement 've guest d'ho klaza, da noazout deoc'h. Eur veach c'hoarvezet an drouk oar divezat da zioual.

Ne gavit-hu ket da lavaret er pez ho deuz great an iskibien ? Ewelt-ho ha var ho c'homs, rei a rit-hu d'ho tro, ho malloz d'al leoriou kondaonet ? Ia. Mad eo neuze. Nac'h ho feiz, avad, a rafec'h ma rebelfec'h senti var ar poent-se.

Tadou ha Mammou kristen, c'hui ha ne maoc'h, e giz ebed, na dindan dalc'h, na dindan gward, c'hui 'zo eun dever stris evidoc'h kass ho pugale d'ar skol gristen hag e ve pelloc'hik deuz o ti, hag e koustfe d'eoc'h zoken eur guennegik bennag ; ia red eo deoc'h ober stad outhi ha diskuez e talv deoc'h kalz hirroc'h eget ar skol difeiz ha dizoue ne lesfot biken ho pugale enn-hi hag e ve dorador ganeoc'h, ha ne c'houlense diganeoc'h liard ebed. Lakaad houma dreist he-ben a ve bressa ho feiz dindan ho treid, hag, a ratos vad, lavaret kenavo d'ar zakramanchou.

C'hui 'vad, Tadou ha Mammou, zo evel red deoc'h, dindan boan da goll ho para, lezel ho pugale da vont d'ar skoliou dizoue, lakit evez, gant a reot, petra vo desket ha great eno. Taolit spled rag aoun ne ve, dirag ho pugale, dispennet, goapeat pe dislavaret gwirioneziou ar feiz. Anez beza soursius var gement-se ne dalvesfe ket deoc'hui ken-neubeut, beza e zell da dostad deuz ar zakramanchou, n'int ket great, anat eo, evit an neb a rafe en doare-ze foar var ar strissa euz he zeveriou. Tadou ha Mammou, ne lezit ket etre daouarn ho pugale al leoriou kondaonet.

Ententit mad, c'hui ho peuz da genta, ha dreist an holl, da velet var an dra-man, ha gwir da ober ho mistri

Hoc'h enebourien hen anzae ho-unan. Sellaouit petra lavar *Inspecteur d'Académie Lons-le-Saulnier* : « Ma

n'em glefe etrezho pennou tiegez eur barrez abez da zifen krenn d'ho bugale ober implij deuz leoriou kondaonet gant an iskibien ; ar vistri skol n'ho defe gwir ebed da boueza var ar vugale evit ober dezho mired al levriou-ze en despet dezho, na zoken galloud ebed d'ho c'hass kuit deuz ar skol var zigare ne zigassont ket gantho al leoriou-ze. »

Rag-se, Tadou ha Mammou, o tiframe al leoriou-ze digant ho pugale e tizammit hoc'h ene hoc'h-unan hag e tiouallit, e tifennit hini ho pugaligou. Beza e zell da gaout ho sakramanchou, ha c'hui chomet eb ober ho tever vel m'eo gourc'hemennet deoc'h, a vefe ober goap, var eun dro, diouzoc'h hoc'h-unan ha diouz an tad kovesour a c'houlenc'h diganthen ho c'habsolvi, ha c'hui er stad-ze, ha c'hui o rei dorn da vuntrerien ene ho pugale. Doue ra viro, kerent kristen, ne rofec'h skouarn d'ar re 'ro harp d'ar skoliou dissakret ha ne c'houlenc'fent nemet rei lamm d'ar skoliou kristen. Tamal ar re-ma, ober gaou outho, en doare pe zoare, stoui ha liva gevier, lakaat ijin fall da douelli ar gerent, ober aoun dezho vit ho diarbenn da gas ho bugale d'ar skoliou-man, ve ober labour an diaoul ha sklear eo ne oar ket evit hada gant hema, en he bark draok ha louzeier binimus ; ha medi, gant an dorn all, e liors an A. Doue, guiniz binniget a ro d'an ene yec'hed ha nerz.

Nan, keit ma chomfot da vevel gant an diaoul ne dal ket deoc'h dont da glask pardoun d'ar gador-govez, na da c'houlenc' er zakramanchou, meulet ra vezo, ho lod euz Bara an Elez. Evel ne zalc'hit ken ho reng e touez ar gristenien ne c'hellit ken kaout perz er zakramanchou. — Neuze-ta, eme c'houi, eo fall tre ar skoliou ne vez hano na menek ebed enn-ho divar benn Doue, divar benn ar relijion ? Ia fall int ; kalz drouk a reont ; ha n'eo ket ar feiz ebken, ar skiant vad ive, hel lavar deomp. — O sevel ar skoliou divergont-se petra zo great ? digeri dor d'an dizursiou a veler abaoue, vel ar mor d'al lano, o ruillal, o sevel, var ar Vro, da labea, da veuzi kement zo kaer ha santel. Er gouzout mad a ran, tamallet e vezin, dont a rafer din, ma n'eo ket a dolliou-pao, da vihana, a dolliou teod.

— O klevet petra livirit, eme lod, o velet petra rid, ped

a chommo eb ober ho fask eb mont var dro an Iliz? —
Ma ne c'hellont kaout digemer mad er gador-govez, na
daoulina dioc'h an daol zantel, piou da damal nemet hint
ho-unan?

N'eo ket varnoun-me, emichans, eo teli ar beac'h?

— *D'ar bed*, eme lod all, ne viot ket kirriek da goueza
var ho fenn en ifern?

— Petra livirit? Ar c'hontrol beo eo a zo gwir. Ne
velit-hu ket e ran, a ners kalon, kement zo em gallout,
evit ne vezo ket taget ho pugale gant leoriou milliget
guest, gant ar binim silet enno, da zinerza, da drenka
ar feiz ha da vouga er c'halonou karante Doue.

— *Ne vezo ket sentet ouzoc'h!* Goaz a ze siouaz!

— Trouz a freuzha zavo divar benn an difenn-ze douget
gant an iskibien!

— Mad hag e teuffe da wir ar pezh a livirit n'eo ket
guelloc'h kalz kaout trouz ha trubuil oc'h enebi oc'h ar
gaou, o c'houlenn, a ners korf, da rei harp ha skoazel da
gement zo mad, fur ha santel, eget lezel an trec'h da
vond gant an drouk var zigare beva sioul ha didrabas?
Ar peoc'h, prenet divar goust an dever, ne dal netra, ha
ker, ker e koust; rag, oc'h-penn ma tenn varnomp
mez ha morc'hed, e vez pennkozh da veur a hini da
ruillal var ho fenn en ifern.

— N'o pezo hoc'h-unan, nemet poan ha displijadur!

— Eur pezh kaër! guelloc'h eo uza hon ners o labourat,
o kemer poan, eget hel lezel da vergla ha da voenvi var
zigare trei divar ar beac'h ha kula dirag ar boan.

— Ne viot ket trec'h!

— Petra ra-ze? Gant ma lakin va foan, Doue ne c'houl-
len ken; ne c'hourc'hemenn ket e teufe ganen ar gounid.

Va faressioniz ker, ober vad deoc'h ne glaskan ken.
Hag eved red, evit kement-se, gouzanv kant ha kant
guech muioc'h eget nemeuz great beteg hen, nemet ho
kounezin holl da Zoue, e talc'hin da ober va dever, kousto
pe gousto, hag en eur dridal.

Er bed paour-ma, petra gafemp-ni nemet enkreuz hag
anken? Ar guir eurusted zo er Baradoz. Gounid ar guru-
nen zo du-hont ouz hor gedal, eno-ma an dalc'h!

Eur brezegen a zoare, gant ma vo berr ha, var ar marc'had,

sklear ha beo evel dour-sao, a gav dor-zigor, e spered hag e
kaloun potred-Breiz. Setu perag o veza lennet ar pennadik
skrid-ma, en eur gazeten c'hallek, eo bet mall ganen, o c'houzout
e vije selaouet mad, hag heuillet a zevri, gant va c'henvroiz,
hen trei hag hen guiska, guellika ma c'hellen e Brezonek.

L.

AR SKOL

Evit Doue pe a enep Doue

Goude lizer an Eskibien, goude kement 'zo bet lavaret e
Kambr ar Gannadet er miz tremenet, breman p'eo great
ar sklerijen var ar pezh a zo e kals eus al levriou lakeat
etre daouarn ar vugale, ha sklerijen ive var ar gelenna-
durez a vez roet gant mistri-skôl ar gouarnamant, eun
dra zo deuet da veza anat d'an oll: — *Ar skôl ne c'hell
ket beza neutr e gwirionez, red eo e ve evit Doue pe a
enep Doue.* — N'emaoump mui breman en entremar. Ar
gatoliket o doa goulennet ma vije miret, da vihana, ar
pezh a c'halvet an *neutralité*. An nebeut bihan-ze a c'houl-
lennemp a zo nac'het grons ouzomp; nag ar gouarnamant
nag ar re a zo e penn ar skoliou hag a zo a dû gantan ne
fell dezo rei deomp ar c'hriziennik a c'houlennemp.

N'eo ket falloc'h evit se. Mad eo soken e ve deuet an
dud-se da ziskuez o fri. Rag breman dall eo an hini ne
vel ket pegen lous eo. Beteg-hen an neutralite a zo bet
eur golo-pot evit skoliou ar gouarnamant; ar golo bre-
man 'zo torret hag an oll a c'hell gwelet petra zo ebars:

« Doue 'zo nac'het. — E c'hourc'hemennou eta 'zo da
» veza bresset. — peb hini a c'hell beva en e roll heb ma
» ve lezen ebet da ziarbenn anezan. Na Doue na mestr! »

Berroc'h eo ar gomp. — N'ez eus mui breman nemet
diou skôl: ar skôl gatolik, hag ar skôl enep Doue. Da
c'houlenn hor beus eta, ni kristenien, ma vezo lezet al
liberte gant an Iliz da sevel skoliou evit he bugale, ha ma
vezo lezet frankis ganti da reizha he skoliou dious he
c'hreansou. — Hag o veza ma ranko c'hoas darn eus ar

gristenien, evit miret o zamm bara, lezel o bugale da zarempredi ar skoliou dizoue, hor beuz da c'houlenn stard ma vezo respetet enno lezennou ha kreansou an Ilis-se. — Mar deus er skoliou-ze, bugale hag a zo bet desket dezó, gant o zud, traou dishenvel ; heb mar ebet e vezo respetet ar gelennadurez o deus bet en o famil : perag e vije great dishenvel da vugale ar gatoliket ? Daoust ha ne baeomp ket ar c'hontributionou evel ar re all ? Ar memez gwiriou hor beus eta hag ar re all.

Digant ar gannadet a vézo hanvet breman da viz mæ, e vezo red goulenn stard ar bromesa da lezel frankiz gant an Ilis da zeski lezen Doue d'ar vugale kouls ha d'ar re vras.

F. C.

An dud o vont eus ar mœziou e kear

Lizer an aotrou 'n Eskob var an dra-ze. — Ar c'herriou 'zo dreberezet tud. — Kemm etre ar mervent var ar mœziou hag e kear. — Daoust da ze, ar c'herriou a leuna atao, hag an dud var ar mœziou a ia var goâza. — Stad truezus ar c'herriadet nevez : dilabour alies, paour atao ; ne zalc'ont ket da zont da veza paotred ar freuz. — Klemmou ar c'herriou, klemmou ar mœziou. — Klemmou ar gouarnamant. Perag e tilezer ar mœziou : 1° Dre c'hoant beva æsoc'h ; Fazi aliès. — 2° Dre... (da genderc'hel).

Breman ez eus eun tri miz benag (d'an 23 a viz Here), an aot. 'n Eskob hen deus digaset d'e veleien eul lizer d'o fedu da ober o galloud evit miret ous o farisioniz da vont e kear. « An darn vuia, emezan, eus ar re a ia evelse » ha n'eo ket heb abeg eo hen lavar) a goll o buez kristen, » heb beza, e nep doare, deuet da veza nag evurusoc'h » na pinvidikoc'h eget diagent. Peurvuia zoken e teuont » e berr amzer da veza ker paouret en o arc'hant ha ma » 'z int paouret en o feiz. Redet a reont a gammejou » bras var hent an dienez hag ar pec'het marvel. Kals a » goes er stad izela, dreist oll ar merc'het yaouank a

» gimiad eus hor bro da vont da Baris ; kals a ruill er » vouillen ; dibaot eo e chomfe unan benag digatar. Gant » ar vez o deus, ar familhou a gustum kuzat an dar- » voudou mantrus-se ; mes ar c'hazetennou pemdeziek en » em garg da gonta o historiou hudur ha da rei hanoiou » heman pe hounnont dastumet gant ar polis. »

Hag an aot. 'n Eskob a gendalc'h en eur gemen d'e veleien ober o galloud evit miret, ous ar re 'zo c'hoas en èntremar, d'en'em harlui e kear, ha da gemeret preder gant ar re 'zo eat dija en eur gas kelou anezo da aumô- nier ar Vretoned er broiou estren ; da ober, en eur ger, o galloud evit derc'hel eul liammig, n'eus fors pegen dister etre hi ha tud o bro.

Den na c'hell hen nac'h, ha den gwiziek ebet na glasko hen nac'h : eun droug hag eun droug bras eo e teuffe al labourerien douar da lezel o mœziou evit mont e kear. Eun droug eo evit ar ouenn ; eun droug eo evit an urs vad ; eun droug eo evit pinvidigez ar vro.

Evit ar ouenn

a) Pell a zo, eun den dizakr, mar deuz bet unan, J.-J. Rousseau hen deuz lavaret :

« Ar c'herriou eo a goll ar ouenn. A benn eun nebeut » rummou, ouenn an dud divar ar meaz eat da jom e » kear a deu da deuzi ha da bezelia. Red vezo nevez ar » goad, hag ar mœziou hebken a zigas goad yac'h ; ar » c'herriou bras a zo dreberezet tud. » Distruja a reont bueziou ar vicherourien dre o ziez-labour a ear fall, gant o lojeiz klanvus, gant o odevi brein, gant o c'hlenvejou spegus atao krog en tu pe du eus karter an artizanet, gant o c'hlenvejou skeven dreist-holl a laz kement a vugale hag a dud yaouank er c'herriou, gant o siou hudur, gant an oberou mezusoc'h c'hoas a laz ar vugale araog zoken m'int ganet.

E Bro Frans, e Breiz-Izel kouls hag el leac'h all e varv, var ar mœziou, vardro 20 den dre 1000, bep bloas. Er c'herriou bras e varv en tu all da 27 ; — hag e Paris, en tu all da 28, ar pez a ra 26.000 a dud o vervel e Frans bep

bloas en tu all d'ar peñ a dlefe c'hoarvezout ma ve reizet mad an traou.

Droug 'so evit an urz vad

b) Evit herzel ous an diouer-ze, ar c'herriou a zo dic'halloud. Red eo bet hed ar veach, ha red e vezo atao d'ar mœziou digoll ar c'herriou. Hen ober a reont, mes kals re, siouas ! En eur ober eun nebeut bloaveziou, ar mœziou a zo paoureat e tud a 550.000, hag ar c'herriou a zo eat var gresk, ha var gresk atao. Tiez neves a zaver bemdez ; ar penn a deu da veza re vras evit ar c'horf. Pa sav re ar goad d'ar penn ez eus da ziuall eus eun taol goad. — Eus an dud eat e kear, kals ne gavont ket a labour, pe da vihana, a vez pell araog kaout eul labour assur ha setu an dienez. Er bloas 1906, var 57.991 paour bet sikouret gant ar bureau de bienfaisance, 42.622, da lavaret eo an diou drederen oa tud nevez deuet divar ar mœziou. Paourentez, dienez a bep tra, kalonou yen, setu petra gav ar c'houerriad keaz pa deu da harlui e kear !

Oc'h heuill an dienez eman ar warizi. An dud-ze a vo kavet atao prest da selaou kement lakipot fall a brezego a enep an urz vad. N'o deus netra da goll, hag esperans o deuz da gaout eun dra benag pa zavo dispac'h ; ha setu savet eun arme prest da ober freuz ha dismantr, prest da laza, da zevi, da zistruja, prest da bep torfet. Arme an dispac'h eo hanvet hag ar *revolution* a c'halvont eus a greiz o c'halon. — E kement kear zo e Frans an arme-ze a deu bemdez da veza niverusoc'h-niverusa, ha bemdez ive e hardizegez a gresk. Kerkent a ma sav kabal en eun tu benag, an archerien hag ar polis en em gav re zister evit enebi outi. Red 'vez atao breman gervel hor soudardet evit miret an urz. Siouas ! an arme e-unan, arme bugale Frans a zo kontamet gant ar baotret dizakr a vez digemeret enni.

Pinvidigez ar vro ne gresk ket evel ma dlije ober

c) Ar mœziou a glemm. An dud a vank vardro an douar. Er Finister ne zanter nemeur an dra-ze c'hoas ; mes, dre ma 'z er larkoc'h er vro, varzu an Normandi e

kaver douar bras-bras o letoni. E Frans, en ugentvet kantved ez eus c'hoas e douar leton daouzek million a zeveriou arad (6 millions d'hectares en friche), al loden vrasa anezo dre ne z'eus ket a dud d'o labourat. — Breman ez eus eun nebeut bloaveziou an deir bevaren (75 %) eus pobl Frans a oa var ar mœziou. Breman ne 'z eus mui nemet an teir bempet (60 %). Setu eta vardro 7 million a dud eat eus ar mœziou er c'herriou. Ha c'hoas ne gompter evel kear nemet eun dastumaden a 2.000 er me-vez bagad tiez. Meur a vourk bras a c'hoanta beza lakeat e renk ar c'herriou ha ne dint e gwirionez nemet bourkou. E renk mœziou e rankont chom, rag n'o deus ket a 2.000 den.

Ar c'herriou a glemm ive. Ar c'hemverziou bihan enno a zo hanter-lazet gant ar gonkurans great dezo gant ar gouerriadet a deu da jom e kear. « N'eus netra evel ar c'hemverz evit pinvidikat, emezo » ; ha gant ar gwenneien deuet ganto ec'h en em lakeont marc'hadourien izpisiri (tempzti), frouez hag aliesoc'h c'hoas marc'hadourien gwin. Evit derc'hel hostaliri, n'euz ezom ebet a zeskadurez. Ha setu diou ha teir hostaliri, daou ha tri gemwerz sukr, kafe, goulou ha traou all evelse, el leac'h m'hen devoa unan beac'h o veva. Niver an hostaliriou a gresk ker buhan, ker buhan, ma vezo red mad eun deiz pe zeiz d'ar gouarnamant lakat eun harz benag. Eun danger e teuont da veza evit iec'hed ar vro. En deiz hirio ez eus e Frans eun hostaliri dre 96 den, merc'hed ha bugale lakeat e kompt. Evit gellout gounid eur gwenneg benag, pe seurt boesson a c'hell beza gwerzet en tiez-ze ? Klemmou a sav eta a bep tu hag ar c'halonou zo leun a warizi.

Ar gouarnamant a glemm ive, rag al labour douar hen deus great hag a reio atao pinvidigez gwirion eur vro ; pinvidigez en arc'hant, pinvidigez en urs vad ha pinvidigez a c'hoad. Aoun a gemer, ha n'eo ket heb abeg, eus an dud dilabour, eus paotret ar freuz ; mez muioc'h a aoun a dlefe da gemeret c'hoas na deuffe ar zoudardet da vankout dezan. Ar c'herriou ha dreist oll ar c'herriou bras n'o deus mui kouls lavaret a dud yaouank goest da veza soudardet. D'ar c'habiten a deu bep bloas da ober an dibab evit an arme, n'o deus mui da ginnig nemet

paotret gwân, stummet fall, skoulmet hir, dislivet ha dis-tronket o dremm ; mies an dud krenv, stard var o izili, goad rus en o goaziet n'o c'haver nemet etouez tud ar mœziou. Leac'h hen deus eta ar gouarnamant da gemeret aoun, rag arme ar Prus ne ia tamm ebet var digreski.

Petra 'ra da dud ar mœziou mont e kaer ?

d) Daoust hag ar vuez a ia var ziasat gant al labourer-rien douar ? Lavaret a vefe, pa veler an dud o tec'het eus o farkeier gant kement a diz. Goulskoude n'eman ket eno ar virionez.

Ar beva var ar mœziou a zo eat var vellât abaoe daou ugent vloaz, en eun doare souezus. An eostou a zo puilloc'h eget n'int bet morse. Nebeutoc'h a zouar, gwir eo a vez laket dindan eost, mes kals muioc'h a c'hreun a zougont. E leac'h 83.239.920 quintaux (ar c'hintal métrique a dâl 200 lur) eostet breman ez eus 20 vloas, ec'h eoster breman, an eil bloavez dre egile, 88.817.331. Dre tempzi gwelloc'h, dre zibaba gwelloc'h greun da hada, an daou zevez arad a ro 350 lur muioc'h a c'hreun eget diagent. E kals lec'hiou e c'helfet doubla ar chifr-ze (350 lur) eus an hanter hag ouspenn. — Al loenet a zo kresket ive an niver anezo en tiegeziou ; ar ouenn a zo gwelleat hag ar pris a zo eat var araog eus tost an hanter. El leac'h ma oa gwechall tri pe pevar loen, 7 pe 8 bioc'h leaz ez eus hirio 7 hag 8 loen, pevarzek, pemzek bioc'h.

Evel just eo bet red lakat en douarou muioc'h a voued chatal ; mes el leac'h ma 'z eus loened ez eus tremp ; hag el leac'h ma 'z eus tremp e vezo eost. Ar frouez eus ar jardinou a zo eat ive var gresk eus eur million da nebeuta. — Ouspen-ze ar syndikajou evit ar prena hag ar gwerza, ar c'heffiou da bresta, ar c'heffiou evit digoll ar c'hollou loenet hag ar c'hollou dre an tan-gwall, ar benveachou a c'hiz nevez o deuz great ar beva œsoc'h hag al labour frouezusoc'h. — Ar bevans ive a zo gwelleat en ti. N'eus mui hano a vara du e nep leac'h ; an oll a zreb bara gwinis c'huek ha founnus, kig a vez bemdez var an daol ; ar c'hafe, an the a zo kavet ker stank e ti ar paour hag e ti ar pinvidig. Var ar mœziou ar baizantet a

zo kals gwelloc'h bevet eget na deo ar micherour e kear ; na ev ket kement a vin hag a vin-ardant marteze, mes gwelloc'h a ze e vir e yec'het.

Daoust da ze tud ar mœziou en em denn e kear. E pe-leac'h eman ar penn-abeg eus an dra-ze ? Sur avoalc'h, e c'hoantaont gwellaat o c'hondision ; ha rœson o deus o klask mont var vell. Mes aoun am eus ne fazifent o kredi e zaint var eürusat o kimiada dious o farkeier. Lavaret avoalc'h a reont : « Kearis a zo ebat o doare. » A bell e c'heller kredi an dra-ze, mes a dost n'eo mui ar memes tra.

Greomp, mar kirit ar gomp evit ar micherour a deü e kear gant familh.

Gwreg ha bugale hen deus, ha netra evit beva nemet poan e zivreac'h.

Lakomp e kavo labour raktal. Er c'herriou bihan, an oll eo mar bez paet dek real pe eur skoed bemdez divar e zispign ; ha c'hoas e vezo brao dezan ma kav goprou evelse da gomans. Er c'herriou bras e kavo marteze gwelloc'h pae, mes e zispignou a gresko a gement all ; kavatal int eta ar c'herriou bras ha bihan. Greomp ar gomp eta evit eur gear vihan.

Eur skoet bemdez evit 300 devez labour a ra 900 lur. Ne gavo ket a lojeiz evit pevar pe pemp den, n'eus fors pegen dister e koezo, a vihanoc'h eget daou-ugent skoed. Eur boulc'h brao dija en e c'hounidegez.

Bevans an ti bemdez :

1° Bara evit pemp den : 5 lur a eil kalite.....	0 l. 75
2° Eul lur-hanter gig eus an tammou dister...	0 90
Leaz : eul litrad	0 15
3° Eun tamig amann pe gonfiteur evit bara ar vugale hag eun tamm lard evit ar gegin.	0 30
4° Kafe ha sukr.....	0 25
5° Diou hordennadig keuneud evit ar gegin...	0 25
6° Avalou-douar, ougnoun, kaol, pe eul legu- mach benag evit ar zouben.....	0 15
	<hr/>
	2 l. 75

Eunneg real bemdez evit bevans an ti. Eunneg real epad 365 devez a ra 1.003 fr. 75. Gant al lojamant ouспен a zo 1.003 fr. 75 + 120 = 1.123 fr. 75.

Ma tennit ar c'hig er meaz, ha ma lakit amann en e leac'h e vezo espernet eur gwenneg benag, ha goulskoude an amann a zo er meaz a briz.

Er gomp-ze :

- 1° Hano ebet eus an dillad ;
- 2° Hano ebet eus an arrebeuri, eus ar priach nag eus mil diankachou an ti ;
- 3° Hano ebet nag eus gwin na butun, nag eus dispign all ebet ha ne ket red ;
- 4° Hano ebet nag eus klenved na medisin ;
- 5° Hano ebet eus an deveziou dilabour ;
- 6° Hano ebet eus an dispignou a ve great evit digemer kâr pe vignon.

Mar teu ar micherour-ze e kear gant eur gwenneg benag en e yalc'h ne zaleo ket da velet ar fonz anezi. Mar gell ar c'hwreg tec'het eus an ti hag eus e bugale evit mont da c'hounid eun dra benag e vo gelllet marteze goalc'hi eun dorn gant egile. Mes sur e vezo red diouer kalz traou, gouzany naon ha paourentez soken pe e vezo red kas ar vugale da astenn an dorn. An dra-ze eo a glas-kit ? Nag a vichourerien a anavezant en doare-ze eus an ispill.

(Da ganderc'hel)

F. C.

D'al Labourerien

Labourerien,

Al lezen war ar gwall darvoudou (loi sur les accidents) a zo gret evidoc'h 'vel 'vit micherourien kêr.

Mar tigouefe d'ho mevel, d'ho mitez 'n em c'hlaza en ho ser-vij, e hallfec'h bean kondaonet da rei d'e tammou mat a arc'hant. Meur a benn-tiegezh a zo bet glac'haret, rivinet evelse.

'Vit bean dinec'h, 'n em asurit, c'houi, ho kwreg, ho pugale, ho mitizien, ho tevejerien, holl dud ho ti.

Ne laret ket eo re ger.

Bean zo eun assurans gret ispisial evit al labourerien. Elec'h paeant dre benn, 5 skoed, 20 lur, 25 lur, eo an tiad tud a-bez a bae kement-se.

Priz an assurans a ve kemeret diwar ar pezh a zouar a zalc'her :
8 gwenneg 'vit pep devez arat douar labour ;

3 gwenneg 'vit pep devez arat prad ;

10 gwenneg 'vit pep devez arat koat-med ;

Etre 4 real hag 20 real ar bla 'vit pep riskl-all, an divarran, an dornan, ar pilat-lann, an dastum avalo, kas al loened d'ar park, d'ar foar, hag all.

N'eus forz na pa vefe ugent a dud en ti, holl int asuret evelse, adalek an oad a 12 vla betek an oad a 65 vla. Pa vint bet tapet, war o labour, poac'het, kroget, glazet 'n eur stum bennak, gant eur paper abeurz ar midesin, e halfont kaout :

Ar vugale, 12 gwenneg bemde epad ma vint klanv, betek kant devez.

An dud vras, ar bôtred, 6 real ; ar merc'hed, 4 real ; 400 skoed, 'vitheritourien an nep e vefe lazet dre wall-chans, war al labour ; 500 skoed d'an hini a chomfe gwall-vac'hagnet war-lerc'h eun dapaden.

Evel a welit, n'eus ket gwelloc'h assurans evit al labourerien, a zo bemde en riskl ; marc'had mat eo ha talvoudus.

Aon ebet da gat. An assurans-man a zo gret, 'boue pell 'zo, gant tud euz ar vro, en hano kompagnunezh ar *Savoyarde*, eus Pariz hag o deus dija rentet kalz zervij da veur a labourer.

'Vit ober assurans, skrivant da E. Ar Moal, rener *Kroaz ar Vretoned*, Coadout, dre Wengamp.

Evesaet mat. — Ar *Savoyarde* a ra ive an holl assuransou-all : tân, loened ha tud, en pep doare.

Tennet eus « *Kroaz ar Vretoned.* »

HISTOR BREIZ

Eur gwall grogad !...

D'ar c'henta ma c'hellomp gullet eur bann skleur bennak e histor Bro Arvor, ez oa var dachen ar bed eur rouantelezh vras ha galloudus kenan ; morse pobl all ebet n'en doa gelllet herzel outi da vad ; abred pe zivezad e rankent holl soubla d'he galloud, dre gaer pe dre

nerz ; hag ar re-anezho a glaske enebi betek ar maro a veze flastret hep truez, o douarou dismantret hag o c'heariou pulluc'het. Hounez eo rouantelez Rom. Ar peb brasa eus ar bed anavezet d'an ampoent a oa dindan he beli.

Tud ar vro-man, boaz bete neuze da veva en o roll, ne zalejont ket da veza ive d'o-zro, en despet d'an donjer o devoa vit ar sklavaj, treac'het ha pennasket gant ar Romaned breac'hioù-dir. Danevell ar stourmad garo-ze etre an danvad oc'h en em zifreta, evit kaout e dammig buez, dindan ivinou ar bleiz du, a zo meurbet doanius da glevet.

Aman e kavan furroc'h en em jacha ha losker ar gaoz gant eun all, gwelloc'h rimadeller egedon.

« Er bloavez 59 araog donidigez Hor Zalver, Jul Sezar oa bet lakeat gant Senat Rom da evesât var loden ar c'hreizdeiz eus ar Franz, hanvet neuze Bro-C'hall. Mes ar vro-man, douarou enni eus an dibab, a rea avi d'an holl boblou tro-var-dro. Bep ar mare zoken e sailhent varni da c'hortoz chom evit mad. Er mare m'edo ar stur gant Jul Sezar, setu ma tirollas er vro eur boblad tud gouez, hanvet *Helvetes*, goazed, merc'hed ha bugale, tri c'hant eiz mil ha tri-ugent anezo. Ar C'hallaoued a c'halvas Sezar d'o skoazella, hag ar gouezidi a oe bannet er meaz.

Mes del adarre eur c'hoari all. Sezar, o veza treac'h, a zavas evel just uhel ar c'herc'h da doull e c'houzoug, ha, fidamdoustik, eur vech deut er vro, an aotrou ne c'houlenne mui mont kuit. Diouallit ! bremaik e vezo drailh.

Eun deiz e krogas naon du e Sezar. « It, emezan d'e ofiserien da c'houlenn ed e bro Arvor ; vardro eno eoleun an irc'hier ! » Ha dont a reas an divroidi. An dud-man a gomze rok ; hag an Arvoriz a gavas bras e vije great pôtrez vras anezo en doare-ze. Diouz an daou du oa uhel ar moueziou. Ar vrezel ne c'helle ket dale pell. Sezar, droug ennan, a gemennas digas d'ezan bagou ha tud da roenvat. E-unan e teuas da lakât loc'h en traou. Ouz Gwenediz eo ec'h en em gemeras. Poblad Gwened oa er mare-ze ar c'halloudusa hag ar binvidika e gourenez Arvor ; hi he doa ar bagou brasa hag an niverusa ; hi eo

a rea ar c'hemwerz gant Breiz-Veur ; hi eo he doa ar gwella porziou-mor. Gounezet Gwenediz, Sezar a ouie e viche Bro-Arvor d'ezan. Ar seiz poblad tosta tro-var-dro a oa en em lakeat a-unan evit harpa o c'henvroiz.

Epâd bloaz dioc'htu, Sezar a glaskas an tu da skei var e enebourien. Mes ar re-man, o c'houzout ne vijent morse evitan var eun dachen dizolo, en em denne el leac'hioù gouesa eus o aochou ; ha pa ne c'hellent mui miret eul leac'h e tec'hent en eun all. En doare-ze, epâd eur bloaz, Sezar a skuizas e zoudarded var o lerc'h heb gellout morse tizout betek enno. Nec'het maro oa.

« Er bloaz varlerc'h, e 55 araog Hor Zalver, Sezar, en aon na vije deut e zoudarded da goll kalon, a jomas habask ken a en em gavas e vagou gantan, darn anezo great nevez epâd ar goanv tremenet, darn all digaset d'ezan eus ar mor Mediterranee.

» Kerkent ha digouezet listri ar Romaned, Gwenediz oa mall ganto digas o re d'o diarben. Sezar e-unan eo a gont an emgann, ha dre ma oe treac'h e kavas mat, evit e vrasa lorc'h hag evit meuli nerz-kalon e zoudarded, lavaret peger krenv oa bagou e enebourien. « Holl e dero, emezan, e dero kalet ha teo, rivet gant tachou bras, eur meutad teoder d'ezo ; o fonsou platoc'h eget re ar Romaned o leze da vont en dour izel ; an diaraog great evit herzel ouz an tarziou ; an adrenv uhel-uhel evit miret na c'hellfet pignat enno ; an heor stag gant eur jaden houarn ; ar gweliou great gant krec'hin gouez kivizet mat...

» Ma ve red kredi Sezar, ar Romaned n'o doa nemet glosou kraon evit taga pikoliou listri Gwenediz.

» Ah siouaz ! ar bouez divent eus o bagou eo a gollas Gwenediz. Epâd ma padas an avel, Brutus, mestr bras al listri romen na gredas ket tostât : brevet e vije bet d'ezan en eun netra e vagouigoù skanv. Soken e sonje dija klask an tu da zisken en douar, ha da zilezel e vagou evit tenna Gwenediz d'en em ganna var an aod. Mes setu en eun taol an avel o koueza, ar mor o chom kompez evel eul lenn ha bagou Gwenediz o chom heb finval, re vras ma 'z oant evit beza loc'het gant roenvou. Amarret oa d'ezo o zreid, hag en o daouarn n'o doa nemet armou dister evit stourm ouz re ar Romaned.

Brutus a vel eo ouspenn kompezet an traou ; ar gounid zo gantan ma kar lakât da dalvezout an eur vat zo roet d'ezan. Kerzet a ra raktal gant e vagou bihan varzu al listri bras. Pemp ha c'houec'h e stagent gant ar memes hini ; p'en em gavent krenv aoualc'h e pignent var al lestr bras, e troc'hent ar c'herdin gant falc'hou treid hir, e lazent an dud hag e lakent an tan, p'en em gavent re zister, e kemerent an teac'h, hag ez eant da eun all. Gwenediz a ranke o lezel da ober ; ne c'hellent ket loc'h. Eus adalek dek eur diouz ar mintin beteg an noz e padas al lazerez. Er mare-ze al listri braz oa goullonderet eus o difennourien, rak Gwenediz en o dizesper, en em laze o-unan darn anezo, kentoc'h eget beza prisoniet ; darn all en em daole er mor, pe a zailhe var ar Romaned evit en em zifenn gant o dâouarn ; mes petra o diche great evit tec'het diouz birou ha goaregou ar Romaned ? N'eus fors d'ezo e pe du trei, ne velent nemet ar maro. O listri oa goueledet pe zevet, pe gemeret gant o enebourien....

» Pebez taol mantruz eo an distruj-ze eus eur hoblad a-bez, tud leun a nerz hag a vaillantiz ! »

Ha goulskoude larkoc'h ez eas c'hoaz krisder kige-rien Rom. Goude o reuz, Gwenediz ne glaskchont mui stourm ouz Sezar. N'eus forz ; ober a reas laza an holl bennou bras eus ar vro. An nemorant, gragez ha bugale oë gwerzet var ar marc'had evit beza sklavourien. (1)

Petra zonjit, tudou ? Ne gavit ket Sezar dem-henvel ouz eur bleiz kounaret, a en em blij o sanka e skilfou, an dounna ma c'hell, e bruched an danvadig en deus paket evit sunat gant dudi goad dinam al loanig paour ?...

Divar an deiz reuzeudik, Bro-Arvor a jomas dindan galloud ar Romaned keit ha ma chomas Rom goz en he zav.

Ioan an Tour-Guen.

(1) Tennet eus ar pennad en doa skrivet an aotr. Cardinal e Feiz ha Breiz miz gwengolo 1907.

Katou Fri-Kam

Katou Mescam oa he hano ; mes an oll a rea Katou Fri-Kam anezi ; rag abaoe m'he doa kollet an diou renkat golvezioù a oa eu he ginou, he fri-hag he gronch o doa great eun dimezi eus ar re vella ; ne veze disparti etrezo nemet epad ma veze oc'h ougnat eun tamm kreun benag. He zal hag he diyoc'h oa roufennet doun ; mes eur vastaren a veze varno, peurvuia teo avoalc'h evit karga an aroudennou. N'he doa nemet tri-ugent vloaz ; mes ker krommet oa, ha ker sounnet e izili paour gant al labour ma vije roet dezi pevar-ugent.

Seiz vloas oa abaoe ma oa intanvez. N'he doa bet morse a vugale. He goas hag hi, ho daou mevel ha plac'h hed o yaoukis, n'o doa var o hano pa oant dimezet nemet ar gwennien o doa dastumet abaoe m'edont o servicha. Gant ar gwenneien-ze, vardro 900 lur, ec'h en em lakjont en eur gomanant vihan. A fors da veza kempen ha da espern gwennek ha gwennek divar goust o dent o doa prenet o zammig tiegez. Katou oa en he zra. Abaoe maro he goaz he doa fermet al loden vrasa eus he douar d'he amezok Jakez al Louarn evit pevar c'hant lur ar bloaz. N'he doa dalc'het eviti nemet eun toul-ti, eur c'hraou evit loja eur vioc'h hag eur pennoc'hik hag eul liorz. Edoug an deiz e veze o vessa he bioc'h hed an hentchou.

Jakez al Louarn a verve gant ar c'hoant da berc'henna douarou an intanvez koz. Jakez oa brao ar stal gantan. N'oa nemet merour, mes gant e vicher a varc'hadour saout e chache forzig gwenneien d'ar gear. Epad ma veze o redet ar foariou, Jeannett e hanter-tiegez a lakea tro er gomanant. Abred he veze var sav dious ar mintin ha ne c'houzanve ket e vije bet he mevel nag he matez feneantoc'h egeti. Dizamant he laboura ha dre labourat ar gwenneien a vernie en he yalc'h.

Da vare ar bloaz nevez e teuas Jakez da baea e c'houel-Mikeal da Gatou. Renka a reaz var an daol dirazi, en arc'hant gwen hag en aour melen, ar pevar c'hant lur. Daoulagat ar c'hez-koz a verve var ar peziou aour ha var

an arc'hant gwenn. Ne garie tamm ebet an arc'hant paer ha divizet he doa var al lizer beza paet evelse.

— Arc'hant brao, Katou, a lavaras Jakez.

— Ia, Jakez, mes berr o lostou ; ne badint ket pell em yalc'h.

— Ne zadint ket pell ! neuse-ta ! Ar re-ze a vezo klozet mad en ho prez ha ne deuint mui ac'hano.

— A gav did, Jakez, n'ec'h eus, te hag ar re all, ken rimadell da zoroc'hat din. A benn m'am bezo paet va diankachou ne jomo ket ganen eul liard toull. Oh ! na ker eo ar beva breman !

— Greomp kaeroc'h neuse, eme Jakez. Gwerzit din an douar a zo ganen ha me 'roio deoc'h doc'tu, en eun dournad, 1000 lur en arc'hant hag ouспен e roin deoc'h 500 lur bep bloaz beteg ho maro.

— Ta, ta, ta, Jakez ! emaut adarre gant da zorc'hennou diboell. An douar-ze a zo din-me hag a jomo ganen-me. Va hini-koz, Doue er pardono, ha me hor beus paet an douar-ze daouzek mil lur... Ia ! pevar mil skoed, paotr ! ne fell ket din en em zizoler anezan.

— Mad, mad... pa ma ho sonj evelse, dalc'hit ho touar ganeoc'h. Me n'em eus ket ezom anezan. Ne ginnigen an dra-ze deoc'h nemet evit o pras a mad. Eur mil lurig en ho yalc'h a rontaffe anezi brao-bras ; haker brao all e raffac'h ho treus, bep bloas, gant ar pemp kant lur a ginnigan deoc'h.

Katou a davas eur pennadik ; anat oa he kave tentus an c'hinnig a reat dezi. Daoust da ze he lavaras :

— Nan, Jakez, va ger diveza am eus lavaret.

Mes Jakez a velas ervad en doa skoet er beo hag ez oa Katou varnez selaou anezan.

— Oh, Katou, emezan, p'e gwir ne fell ket d'eoc'h, me ne fell ket din ken nebeut. Goude tout, ar pez a ginnigen a vije bet re vras samm evidon, ha va hini-goz he dije miret ouzin, douetus, da ober eun taol ker zot. Mes, mignonet e chomomp daoust da ze ; ha p'e gwir eman ar bloaz nevez e ve a zoare deomp kemeret eur banne assamblez.

— Ia, banneou eo sur ! Me n'em eus ket eaz da zerc'hel boesson em zi.

— Oh ! n'eo ket eno oa va zonz ken nebeut. P'e gwir e

komzen a vanneou, eo me a felle din kinnig deoc'h. Deac'h diveza oa deuet din eus a bers unan eus va marc'hadourien saout a gostez Bourdel, eur veltadik odevi, eus an hini mad, eus an hini a laka an askorn torret en e blas, eus an hini a laka tomder en izili ar re goz evel dompni. N'eo ket lakeat an duellen enni c'hoas, mes mall em eus da danva eul louzou c'hoek evel hennez. Ne gavin morse gwelloc'h tro. Dont a rit ganen ma vezo gwelet pe seurt dour a vez ous staon paotret Bourdel ?

— Ia, mes petra lavaro Jeannett ?

Jeannett ha Katou n'en em c'hreant tamm dre ma veze bioc'h Katou aliès var melchen ar vereuri ha yer Jeannet o pigellat liorz Katou.

— Jeannett, eme Jakez, a vezo joa ganti ho tigemeret. En eur zont aman he deus kemennet din stard pedi ac'hanoc'h da zont da gemeret eur banne kafe. Deomp doc'htu.

— Mad, eme Gatou, deomp-ta neuse, p'e gwir e fell deoc'h.

Jeannett n'he doa kemennet netra. Er c'hontrol eo. Lavaret he doa da Jakez derc'hel eur pez ugent lur outi evit ar gaou great d'an douarou gant he bioc'h hag he fennoc'h.

Hag e zechont o daou en eur varvaillad. N'oa ket hir ar veac'h. N'oa nemet treuz al leur etre an daou di.

En eur en em gaout en e di, Jakez a reaz eul luchaden d'e hini-goz. Houman ne oa ket pout he spered nag he daoulagad en he godellou, a zivinas doc'htu ez oa eun dra benag a nevez.

Digemer a oue great da Gatou. Ar c'hig hag ar bara a oue digaset var an daol ; ar grek a oue dispaket hag an dour ne zaleas ket da gana var an tan.

Debri hag eva a reas Katou ; mad he kavas ar gwin, mad he kavas ar c'hafe ha gwelloc'h c'hoas ar c'hognac a oue digaset evit er c'hoeffa.

— Re, re a draou mad a zo ganez, Jakez ! eur banne bihan hebken ebars em c'hafe. Me n'oun ket boas eus an traou krenv.

— Oh ! n'o pezet ket aoun, ne lakin nemet eul loiad deoc'h.

Ha Jakez kemeret he loa, trei anezi var an tu gin, ha teuler eur skloturiad mad dezi.

— Eun draik, eo krenv, eme Gatou, lemm breman he lagad, mes tomma a ra va izili. An dra-man n'eo ket moc'hach eo avad, evel an hini a gaver en hostaliriu.

Hag ar c'hafe a oue evet gant Katou hag eur banne dreizan e-unan a zavas c'hoas brao-bras. En em gavet oa breman, da zonz al Louarn, en doare ma ranker beza evit ober afferou... fall. Hag hen a staga gant an affer a oa en e benn :

— Me, avad, eme Jakez d'e c'hwreg, a zo bet varnez ober eun taol zot bremaik. Eürus ouñ bet da gaout Katou aman furoc'h egedon.

— Petra-ta, eme Jeannett ?

— Petra ! kinniget em eus dezi rei mil lur doc'htu dezi en eun dournad evit an douarou a zo ganeomp ha pemp kant lur ar bloas ousspenn beteg he maro, evit ma vezo an douarou deomp goude neuze.

— Eun taol diskiant eo sur, eme Jeannett. C'hoant ec'h euz da lakat da c'hwreg ha da vugale var an teil. Ma ne peus ket roet da c'her, da vihana ?

— Va ger..., va ger am eus roet. Marteze Katou aman ne zigemero ket anezan. Ne garan ket mont enep va ger.

— Nan-da, Jakez, eme Gatou, n'em eus ket asantet ganez. Kement-se, p'e gwir oc'h bet o taou tud a zoare em c'henver, ne lavaran ket nan did.

— Me vel avoalc'h, eme Jeannett, eo eun dra klevet etrezoc'h. Kement-ze, Jakez, n'eo ket brao ober traou evelse e kus dious da c'hwreg. Sell ! n'out nemet eur frip-tout. Te gaso ac'hanomp da glask hor boued.

— Mad, eme Jakez ; eur ger roet 'zo eur ger roet. Ma kar Katou lezel an douar ganen evit 900 lur da rei doc'htu ha 500 lur ar bloas, evel ma lavaren, e ve great ar stâl. Eur veltadik odevi evel houman a rofen c'hoas deoc'h bep bloaz var ar marc'had.

— Nan, nan, eme Gatou ; 1000 lur e peus lavaret ha 500 ar bloas. Ar veltadig odevi a ranko c'hoas beza var ar marc'had. Me 'zo *chismatik* (astmatique) hag a rank kemer eun draig benag evelse bemdez evit dousât va gouzoug ha tomma va izili. Alo ! Great eo pe ne ket ?

— Digernez oc'h ouzin, kement-ze, Katou, mes ne

garan ket chom keit-ze da jipotal. Mar d'oc'h kountant, Jeannet, e vezo lavaret ia.

Jeannett, epad an amzer a dride he c'halon gant ar joa, ar pez ne vire ket outi da lenva fors epad ma distalie an daol.

— Petra dâl din-me, emezi, klask enebi ouzoc'h. Gwellet a ran oa great an taol araog m'oac'h deuet ama.

— Peur neuse e raimp ar paper, a c'houlennas Katou ?

— Peur ? Morse n'oun bet dibrederoc'h eget hirio. Mar kirit e zaimp doc'htu da di an noter.

Hag e zechont o daou ; hag ar paper a oue great heb dale. Eur miz goude oa kontrerollet.

Katou a zavas keuz-ganti antronoz. Mes pa deuas da glemm d'an ti-all, Jakez al Louarn n'oa mui er gear, ha Jeannett a glemmas kement hag hi, mes lavaret a reas ne c'helle mui netra, eo Jakez a gommande tout. Ha pa gavas Jakez, heman a c'houlennas diganti 500 lur evit terri ar paper, hag ar mizou all dezi ousspenn. Morse Katou ne asantas diskregi eus eun hevelep dornad arc'hant. En em gonsoli a reas gant ar veltad kognac a oue digaset dezi.

Ar veltad kenta ue badas ket pell. Mont a reas da glemm oa re vihan an hini digaset dezi. Al Louarn a zigasas eun all. Katou geaz a dremene breman he amzer oc'h ober grog. Seul vui mac'h eve, seul sec'h a deui dezi, ha krenvoc'h-krenva a rea anezan. Ar vioc'h hag ar pen-noc'h a oue gwerset ; den mui na roe tamm dezo da zrebi. A veac'h ma veze goulaouet an deiz ma veze dija rond he zreid da Gatou Fri-Kam. Ne c'helle mui bale dre an ti nemet harped ous an arrebeuri. Araog ar c'huec'h miz kenta, ar vaouez kaez a oue er bez.

Ne oue ket koustet ker da Jakez al Louarn e brenaden. Evit mil lur hen doa bet talvoudegez trizek pe bevarzek mil lur. Mes ne gredan ket e ve bennoz Doue var eun taol truarderez evel henez.

F. KERGOAT.



Divinadennou miz C'huevrer

- I. — Eun dra uhel krouget
A laka ar goazed da redet
Hag ar merc'hed pa vez ret.
- II. — Pe seurt kem a zo etre eur barner
Hag an dereziou (l'escalier) ?
- III. — Bonjour deoc'h, tregont penn-goazi !
— Salokras, emezo ! Hor c'hement, hon
hanter-kement ha ni ne reomp nemet
tregont penn-goazi. — Pet oant ?
(Eus Guikar).

IV. — Dies eo va fenn ; ha pa glevoc'h va histor ne vezoc'h ket souezet. Savet eus trouz etre Jeannet, va hini goz, ha me, ha ne ouzon penaos kompeza an traou. Setu ama perak :

11 vloaz so eo bet savet en hor parrez, gant skoazel hor beleien eun assurans evit en em zigoll etrezomp eus ar c'hollou chatal. Hor c'hure yaouank, am eus sonj mad a oa bet oc'h ober ar brezegen ; komzet hen doa ken brao, diskuezet hen doa deomp ker splann e tliemp beza var zikour an eil egile, ma oan bet desevet hag em boa roet va hano evit mont en emglev.

8 loen-gezek a assuren evit 4.400 lur, pevar real dre gant da baea evito bep bloas ha 10 aneval-gorn, o fris dezo oll 2.600 lur (saout mat em boa), dek gwennek dre gant da baea evito bep bloas. 57 lur eta oa va c'hompt evit asuri saout ha kezek. Klevet e oue etrezomp, pa c'hoarveze eur c'holl, e vije paet evit ar c'hezek an hanter hebken eus ar priz m'oa estimet al loen ; hag evit ar saout an diou drederen eus pris an estimation, ha c'hoas, e vije tennet er meas pris ar c'hroc'hen hag ar c'hig ma roffe ar veterinaire aotre da implija anezan.

Jeannett, va hanter-tiegez a oue feuket net pa oue hano da baea ar 57 lur. N'o roas din nemet goude beza va galvet den digalon, penn-avel, etc...

En eil bloavez e kolljon eur vioc'h estimet 260 lur. Torret he devoa he gar o koeza en eur sangleuz. Ar c'higer a oue galvet hag a gemeras anezi diganen evit hanter-bris : 130 lur. — An dra-ze ne rea ket va c'hompt penn-da-benn. Gwir em boa var an diou drederen ha setu me da gaout ar re a zo e penn an assurans. Ar re-man a baeas din heb argila ar pez a vanke evit ober an diou drederen.

Pevar bloas goude e kolljon eur gazek keneb estimet 850 lur. An hanter eus e fris a oue paet din nemet e lezen 12 lur evit ar c'hroc'hen.

Er bloas varlerc'h eun ebeul 2 vloas estimet 600 lur a varvas gant ar goent, ha paet e ouen adarre var ar pris estimation. Evel just, an 12 lur evit ar c'hroc'hen a oe distaolet din adarre.

Abaoue ez eus pemp bloas, ha n'eus c'hoarvezet droug ebet gant va chatal. Abalamour da ze Jeannett ne vank morse da rebech din, ken alies gweach ha ma zan da c'houlenn va 57 lur evit paea va bloaveziad, emacoun o rivina va bugale.

Me garje klevet gant lennerien *Feiz ha Breiz* pegement am eus roet d'ar c'hef-assurans epad 11 vloas, ha pegement am beus bet digantan. Marteze Jeannett a gredo ac'hanoc'h muioc'h eged na gred ac'hanon-me.

(Digas ar respontchou d'an aot. Cardinal e Kastel.)

Respont da zivinadennou mis genver

« Divar al lizer deuet din eus Plouvian eo e kemeran » ar respontchou. »

- I. — Skeud an den a gresk pe a zigresk dre mac'h izella an heol.
- II. — En eur mellezour.
- III. — Eur voaren, — ar c'hassis, pe c'hoas meur a frouezen all.
- IV. — Ni a zo evit an eil kinnig, — hag a sonj evelhen : eun den ha ne zelle nemet ous e vad eunan ha ne raffe fors ebet evit koll tout, p'e gwir e vo maro, hennez en deffe da c'hounid o kemer ar c'hinnig kenta. Mes hennez, an den-ze, a zo eun digalon.

Dre an eil kinnig, e vezo restaolet d'am heritourien kement am bezo roet d'ar gompagnunez, ha dre ze e kemeran interest va ene, interest va c'herent, interest ar beorien, interest an oberou mad.

O deus kavet da nebeuta teir euz divinadennou miz Genver :

Yvon Lhostis, Bourg Plouvian	} 4
Isabelle Milin	
Etienne Rest	
Jean-Louis Cadiou, Sibiril, 3	
Emmanuel Bothorel, Bourg Loc-Mélar.	
Catherine Inizan,	
François-Marie Pouliquen	

Joseph Bothorel, Skolaj Lesneven.
Catherine Perros, Botskornou.
Nicolas Le Guen.
Jean-Louis Guenneuguès, Plouguin.

Une Histoire de Bretagne en breton

Le *Pays Breton*, de Lorient, vient de publier en feuilleton une histoire de Bretagne en dialecte de Vannes. Vers février cet ouvrage, *Istoér Breih*, paraîtra en un volume d'environ 400 pages, et illustré.

Le but de l'entreprise est en effet de rendre au peuple, et par le moyen d'une langue qui lui est chère, la conscience du glorieux passé qui est celui de notre race. Car tant d'efforts hostiles avaient fait si bien que la majorité des Bretons était devenue comme étrangère à son propre pays ; les régionalistes veulent que le peuple connaisse son histoire.

De cet ouvrage, très sérieusement fait, donnant seul l'exact pour vrai, et pour légendaire ce qui est tel, nullement séparatiste (n'en déplaît à M. Doumergue), mais régionaliste, est effectué un tirage à part sur bon papier, et ce tirage spécial est mis en souscription au prix de 3 fr. 50, qui sera augmenté aussitôt après parution. Par le fond comme par la forme, le choix du vocabulaire et le souci des celticisms, *Istoér Breih* se classe parmi les meilleurs livres, non seulement en dialecte de Vannes, mais encore en langue bretonne.

Il nous suffira sans doute de l'indiquer, pour que tous tiennent à enrichir leur bibliothèque d'un travail de valeur en même temps qu'à encourager une très heureuse initiative. Souhaitons aussi que devant cet effort, le premier qui soit sérieusement fait en Bretagne en ce sens, les autres Bretons et même nombre de Vannetais perdront les regrettables préjugés qu'ils gardent encore contre le Morbihan et son très pur dialecte. Il faudrait qu'en Vannes chacun eût à cœur d'apprendre son histoire de Bretagne dans *Istoér Breih*, pour bien montrer que le breton ne doit pas être la langue du pauvre, mais une langue qui doit avoir place à la ville comme dans les châteaux et les manoirs.

N. B. — Adresser les souscriptions au *Pays Breton*, 71, rue du Morbihan, Lorient. Nous rappelons que le prix est de 3 fr. 50.

Un lecteur.

Feiz ha Breiz

Kappad Misiek ar Vretoued

LIZER AN AOT 'N ESKOP KEMPER

Divar benn Sant Yan diarc'hen

Ganet e Sant-Vouga (1280) ha marvet e Kemper (1349)

Aotronez beleien hon c'henlabourerien karet,

Dont a ran da rei d'eoc'h anaoudegez eus eun dra hag a zell ous hon Eskopti.

Gouzout a rit em er oc'h ober e Rom, ervez lezennou an ilis, eun enklask var buez Sant Yan Diarc'hen, galvet ar *Zantik Dû euz Ilis-veur Kemper*. — Abaoue pemp kant vloas, ar sant-ze a zo henoret gant an dud fidel, ha c'hoant or beus da lida e c'houel en ilis.

A vreman, daoust ma c'helfe c'hoas an enklask padout eur bloas, emaoump varnez gellout lavaret ez ai an traou da benn.

An tad Paolini, unan eus pennou bras menac'h Sant Frañsez, hen deus kavet, divar benn ar zant-man, ha lakeat moulla eur skrid koz great gant eun test eus e vuez. Ar skrid-ze a ro sklear da anaout eo bet, raktal goude e varo, muioc'h c'hoas eget hirio, henoret, pedet ha lidet bras ar zant gant an oll, kouls e Kerne hag e Leon. Rag-se Hon Tad Santel ar Pab a deuo, heb mar ebet, da ziskleria hen deus gwir var honoriou an ilis, heb ma ve red heuill, evit se, an oll reolennoù merket gant ar Pab Urban VIII evit ober sent nevez.

Ar skrid koz-se n'oa ket c'hoas anavezet d'ar mare ma fellas gant an aot. Valleau, eskop Kemper, var goulenn an aot. Potron, eskob Jericho, e teuje lezvarn beleien Kemper da ober eun enklask var an devosion bet a bep amzer evit ar *zantik-dû*. Beleien al lez-varn n'o doa ket etre o daouarn ar skrid ma komzomp aneza, ha daoust da ze, var lavar skridou all sklear ha sûr ivez e c'heljont

diskleria difazi ez oa koz-koz an devosion evit ar zant. Mes hini eus ar skridou a harpe o barnedigez ne oue kavet koz avoalc'h gant kongregasion bras al Lidou eus Rom, evit ma vije aotreet ofis ar zant en ilis ; red oa kaout skridou kosoc'h eget ar bloas 1534.

Ar skrid-se ken talvoudus ha ken klasket a zo erfin havet, gant eun tad a urz sant Fransez, e Bruxelles etouez skridou-dorn ar Bollandistet. (1) Ar re-man o doa bet anezan digant unan eus pennou bras an urz er bloaz 1642. Ne dlient kaout tro da lakat anezan da dalvezout nemet p'o dije great Buez ar Zant eus miz kerzu, pe gwir gouel hor Zant a zo merkèt evit ar 14 eus miz-se. Riskl e vije bet dezan chom c'hoas sebeliet pell-amzer etouez ar boultrenn panefe an Tad Paolini a lakas ober klask anezan.

N'hor beus ket, siouas, ar skrid kenta great gant an hini 'zo bet test eus buez ar Zant ; n'hor beus nemet eur c'hopi great er bloas 1613. Mes ar c'hopi-ze a zo henvel-mad ous ar skrid koz great var groc'hen-leue. Sûr omp eus an dra-ze ha setu aman perak : an Tad Albert Le Grand aozer bras « buez Sent Breiz » hen doa bet, etre e zaouarn, evit ober hini Sant Yan Diarc'hen ar skrid kenta var groc'hen-leue (sur vélin) ; hen merkèt hen deus da fin buez ar Sant-man (2). Hogen ar pezh a lennomp e skrid an Tad Albert Le Grand a zo dem-henvel ous ar c'hopi ma komzomp anezi ; alies soken Albert Le Grand n'hen deus great nemet lakât e gallek ger evit ger ar pezh a ioa e latin. — Ouspen-ze ar c'hopi a zoug an oll merkou eus ar skridou great d'ar pevarzekved kantvet ; — ouspen c'hoas : kavet eo bet etouez skridou koz Urz S. Fransez, roet ma 'z oa bet gant unan eus pennou bras an urz-se evel eus testeni a bouez da dalvezout evit ar Zant. Rag-se

(1) An hano-ze a zo roet d'eur rummad menac'h ha beleien, al loden vrasa anezo Jesuistet, a labour abaoue ar seitekved kantved var buez ar Zant.

(2) Cette vie a esté par nous recueillie d'un ancien rollet manuscrit sur vellin, en cinq fragments, gardé au dit couvent de Saint-François de Kemper-Corent n. à moi communiqué par le Révérend Père Maistre Bréard, Docteur en théologie du dit ordre le 7 juin de l'année 1636. (La vie du Bienheureux Jean surnommé Dis-calécât par Albert le Grand.)

ar Bollandistet n'o doa ket argilet evit anzav ez oa ar skrid eus ar pevarzekved kantvet.

Ar pezh a lennomp er skrid-ze a ziskuez ive splann eo bet great gant eun test hag hen deus gwelet ar Zant, hen deus bevet ouspen ugent vloas en e gichen, hen deus interrojet an dud a veze o kovet gantan, hen deus anavezet e viraklou hag an dud pareet gantan, hen deus klevet ober e veuleudi epad e vuez ; ha, var e varo, pa deuas noblanz ar vro da c'houlen dougen e gorf var o diouskoaz, hen deus gwelet ar bobl oc'h en em zisput e zillad ha kement hen doa bet en dro dezan evit ober anezo relegou.

Ne ra eta nemet lavaret ar pezh a lavar an oll o c'hervel anezan eur Zant ; ha d'ar fin, pa gonto ar miraklou c'hoarvezet goude e varo n'her grao nemet evit chaacha an dud muioc'h-mui varzu e vez evit kreski o fizianz e galloud ar Zant hag o c'harantez evitan.

Ar skrid presius-ze, daoust hag hen a vezo galloudus avoalc'h evit kaout digant Rom eur varnedigez vad ? Her c'hredi a ran stard ; kement-ze ne c'hellan ket hen diskleria sûr. An Ilis a varno, hag a vremen e tisklerian suja a vir galon d'he barnedigez. Mes esperans vad hor beus e vezo ervez hor c'hoant. Dre hor pedennou e c'houlennimp ma c'hoarvezo hep dale.

An diverra ber-ze eus buez hor Zant karèt, ar c'hosa a ouffemp da lenn, a gresko c'hoas hon devosion evitan. Skrivet eo bet evit ober meuleudi ar Zant ; mes meuleudion gwirion int, rag an hini o ro a zo bet test gant e zaoulagat e-unan eus ar pezh a lavar : Lakeat e vezo e gallek gant an Tad Norbert Monjaux ha neuse an oll a c'hello hen lenn. Plijadur a reio kouls da Leoniz, rag e Bro-Leon eo ganet hor Zant, e parrez Sant-Nouga ha da Gerneviz, rag e Bro-Gerne eo maro. Lennet e vezo ive en eskopti Roazon, rag trizek vloas eo bet eno person araog mont en urz S. Fransez.

Astenn a rin divezatoc'h va c'homzou var ar vuez hen deus renet ar Zant e kear Gemper, p'am bezo an eur-vad da gas ar c'helou, goude gounezet ar prosez e Rom, eus ar goueliou a zavimp e Kemper evit lida eun dra ken eürus. Mes, c'hoanteat hor beus ober deoc'h kemeret pers en hon esperans, evit ma teuoc'h d'ho tro d'hen rei da

anaout d'ar bobl fidel ; rag, oll a-unan e tleomp kas pe-dennou d'an aot. Doue evit-se. Da c'hounid hor beus evit hon eneo hag evit mad ar bed-man zoken.

Ar bobl, hed ar c'hantvetchou hen deus bet atao ar greden stard ez oa galloudus he zant karet evit para an boan-benn. Pedi a rea c'hoas anezan evit askavout an traou kollet. Ra zeuio var hor zikour en eur rei ar yec'hed da gement a sperejou hirio klanv-bras, ha da renta d'hor bro e spered kristen ken dies da askavout etouez ar geier hag ar faziou a skigner hirio.

Ar skrid m'hor beuz komzet anezan a lavar, en eur achui, an esper en deus e kendalc'ho gant kear Gemper ar c'hoez-vad eus ar vertuziou hen deus hadet ar zant enni. — Ra zeuio an oll dud kalonek ha dreist-oll Breudeur an Trede-Urz da labourat evit ma vleunio adarre etouez tud ar bed, kouls e Kemper hag en eskopti a bez, vertuziou Sant Fransez. Setu an doare gwella hag ar barreka da vont betek kalon an aot. Doue ha da henori hor Zant.

Ra blijo ganeoc'h, aotronez beleien, digemer hor gwella mennoziou a garantez en hor Zalver Jezuz-Krist.

† ADOLPH,

Eskop Kemper ha Leon.

Kemper, 17 a viz c'huevrer 1910.

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

Teir loden a oa er studi a dliemp da ober er F. H. B. var ar relijion :

1^o Doue, hag an ene.

2^o Jezus-Krist.

3^o An Ilis.

An aot. Caër hen deus great al loden genta hag eul labour peure'hreat eo, an oll her goar.

Breman an aot. Mazéas a gendalc'h an eil loden : *Jezus-Krist*, setu aman ar plan eus ar studiou a dle da ober :

1^o An Aviel 'zo gwirion. Skrivet eo bet gant pevar den hag a zo bet test gant o daoulagat o-unan eus e vuez, pe da vihana, bevet o deus gant an testou-ze.

2^o Jezuz 'zo Doue : (a) Hen eo ar Messias bet diouganet gant ar brofetet. (b) Hen, e-unan hen deus diskleriet eo Doue. (c) Dre e viraklou hen deus diskuezet oa galloud Doue gantan. (d) — Eur ger var ar miraklou.

Iaouank oan c'hoaz pa gleviz ar gomz-ma euz ginou eun den dibater « Jezuz a zo bet ar furra euz an dud ; eun deskadurez dispar en doa ha dre-ze en deuz gellet en em zével dreist ar re all ha rei da gredi oa eun doue : an dud, souezed braz o velet ar burzudou a rea, a gredaz oa eun doue, ha goulskoude n'oa nemet eun den henvel ouz ar re all. » Ar c'homzou-ze a zo choumet doun em spered ha dre ma kresken en oad, dre ma kreske ive va zamik skiant-vad ha va deskadurez, meur a veach am euz ruillet ha diruillet ar c'homzou-ze em spered hag enn-oun va-unan e lavaren. « An aotrou-ze a zo gwiziek diouz an doare ; va mam, va beleien, a lavar d'in eo Jezuz eun Doue e gwirionez ; va c'henvroiz hen c'hred ive : pe ar re-ma holl en em fazi, pe an aotrou en em fazi he-unan, daoust d'he zeskadurez. Gwelloc'h eo gan-en kredi va mam ha va belein. » Ha mad em euz great : abaoe em euz desket n'oa an aotrou-ze nemet eur gaouiad.

Jezus-Krist ! Setu, e gwirionez, brassa hano a zo bet a viskoaz douget er bed-ma. Hanoioù all a zo brudet braz : hag evit-o zo bet skuillet kalz goad ; evelse, hano Napoleon kenta a reas d'hon tud koz stourm ha mervel var an dachen : hag a hed ar c'hantvloaziou nag a hanoioù euz ar seurt-ze ! Goulskoude, hano Jezuz ebken a zo adoret gant an holl poblou, hed-a-hed an holl amzer. An hini a zoug an hano-ze a zo anavezet dre ar bed holl : an dud gouez zoken, an dud-ze eat ker fall ma ne zere ket dezo an hano a zen, o deuz klevet hag a glev he hano, rag ebetel, ar vissionerien, a ia d'hen deski dezo ; hag an dud-ze, ne d'int nemet stlabez ar bed holl, o deuz fizians da veza salvet-dreiz-han. An dud dizoue, re niverus siouas hirio, a zo red dezo anzae n'euz ket bet var an douar gwelloc'h madoberour evit ar beorien hag an dud gwall-gasset.

An dud ar galloudusa, a zo bet var an douar, a viche bet ankounac'heat a bell-ze, ma ne viche ket bet savet dezo beziou kaër, ken kaër ha paleziou, ma ne viche ket bet skrivet divar o fen var baper, var mein, var meda-

lennou. Jezuz, hen, a zo bepred leun a vuez e kaloun he ziskibien. An Iliz, savet ganthan, a garg, koulz lavaret, euz He hano ar c'hantvejou hag an holl broiou. Hen anaout a ra, her c'haret a ra hag hen adori ; beva a ra enhi hag hi a vev enhan. Hen a zo heh oll c'helennadurez, reolen he buez, he relijion a bez. An Iliz a zesk d'an holl gwitibunan eo Jezuz Mab unik da Zoue an Tad, eo en em c'hreat den dre c'halloud ar Spered-Santel, eo ganet euz ar Verc'hez gloriuz Vari : eo deuet er bed-ma evit gouzanv ha mervel evit hor silvidigez, trec'hi ar maro dre he resureksion ; eo pignet a nevez varzu he Dad, evit pourchas deomp eul leac'h en he gichen ; e teuio eun deiz da varn an holl dud, evit rei d'ar re vad ar vuez a bado da viken ha teuler ar re fall er maro a bado da viken en ifern.

Ar « C'hredo-ze » a zo eun diverra euz kelennadurez ha buez Jezuz. Ar c'hristen mad a c'hell ganthan reiza mad he vuez rag dreizhan e tesk eo ginivelez Jezuz ar brassa burzud en em gavet var an douar ; eo an den karet gant Doue en deuz c'hoant d'hen diarbenn diouz an drouk ha d'en em rei dezan ; deski a ra eo ar garantez an dever braz ; eo red dezan beza var evez evit ober ar mad ; n'en deuz ket da grena dirak ar maro rag he Vestr en deuz trec'het anezhan. Ia, an den a gred ar gelennadurez-ze, a gred e Jezuz, a hell kerzet dre hent ar vuez : peadra hen deuz d'en em zifen a eneb ar bleizi iud a glask bepred hen taga.

En amzer-ma, an den en deuz muioc'h-mui a c'hoant da gaout deskadurez divar hen pep tra : hag an niver euz ar falz doctoret a zo eat var gresk bemdez. Var zigarez o deuz eur spered lem, ma kav dezo o deuz hi, hag hi ebken, lounket an holl skiant-vad hag an holl deskadurez, e teuont en o leoriou, en o frezegennou, en o c'henteliou er skoliou, da glask disc'hrizienna ar feiz kristen katolik.

Lavaret a reont. « Ar Jezuz-ze a zo prezeget divar he ben hirio, ar Jezuz prezeget gant an Ebestel, ar Jezuz a lennomp he vuez en Aviel n'eo ket ha n'hell ket beza ar C'hris gwirion ; ar Jezuz-ze Doue ha den assamblez, Doue en em c'hreat den, konsevet dre eur burzud dispar, a en em ro evel Doue gwirion, a had koulz lavaret, ar

burzudou en dro dezan, a gomz evel ma ra dezan komz ar pevare Aviel (aviel sant Ian), a zav a varo da veo d'an trede deiz, a bign d'an Nenv dirak an Ebestel goude daou-ugent dervez, ar Jezuz-ze n'eo ket eun den henvel ouz ar re all... Ar Jezuz gwirion, an hini a gomz anezan an istor, a zo ganet evel an dud all ; evel-d-o en deuz bevet ; n'en deuz ket great muioc'h a vurzudou eget ar re all ; prezeget en deuz eul lezen a vuez gwelloc'h, savet en deuz eur religion gwelloc'h eget ar re all, ha tanvet en deuz an dismegans a gouez peur aliessa var ar re a fell dezo sevel giziou nevez ha gwelloc'h ; evel an dud all eo maro ha n'eo ket ressuscited. »

Setu kelennadurez ar fals doctored. Red eo hen anzaou, adalek donedigez Hor Zalver ar sperejou kaera n'emaint ket a unan divar ben Jezuz : ne vezint ket a unan zoken ; hag daoust ha n'eo ket souezus bras n'euz bet nemet Jezuz o lakat, ne lavaran ket ar freuz ebken, mes ar c'hem-ze etre an dud ? Daoust hag Hor Zalver n'en doa ket lavaret e viche kalz enebourien dezhan var an douar ? Hag an dra-ze a bado keit ha ma-pado ar bed he-unan. Ar gristenien vad o deuz ran-galoun o velet ar brezel-ze great d'o Mestr, ne grenont ket evit kement-ze. Epad ma vevas, Jezuz a anavezas ar brezel-ze. He ziskibien a lavare : « C'hui eo ar C'hris, mab da Zoue leun a vuez » ; ar Iuzevien a lavare euz ho zu : « Eur profet eo » ; lod all, dalloc'h eget ar c'henseurtes, a iouc'he : « N'eo nemet eun touer-Doue, en em zével a ra ouz Doue, ouz al lezen ! » Goude m'en devoa pignet en Nenv, an diskibien a brezegas d'ar Iuzevien ar Messias den ha Doue ; ar fals doctored kenta ne plijas ket gant-o lavaret oa Doue. Hag evelse epad meur a gant vloas e kendalc'has ar brezel : goulskoude Jezuz en deuz distrujet ar bed paian, an dud desket en deuz lakeat da zoubla d'he lezen, gounezet hen deuz ar bed holl, hag eur bed nevez en deuz ganet.

Piou eta a oa ar virionez ganto ? Pe ar Iuzevien kriz, pe ar bañaned leun a zismegans evit ar gristenien, pe an dud desket a c'hoars goap dezo, pe an Ebestel daoulinet dirag Jezuz hag a lavar gant sant Thomas : « C'hui eo va mestr ha va Doue. »

Ma ne deo Jezuz nemet an den-se gwalgasset gant ar Iuzevien, penaoz en deuz-hen gellet sevel eur relijion hag

a ren ar bed hirio ? Ma n'eo ket Jezuz Den ha Doue, den ebet ne hello morse lavaret penaoz eo en em c'hreat ar bed kristen : hen displega deomp en eur c'hiz deread, setu a-ze, me gav d'in, eur gwal guden da zibuna d'ar fals doktoret :

Evit lennerien « Feiz ha Breiz » eo e klaskin, gant sikour an Aotrou Doue, dislavaret a-gren ar fals doktored, em euz displeget o marvailloù bilimus : n'eo ket an Aviel troët e brezouneg eo a c'hoantean ober : pell ac'hano zoken ha kement-se a zo great pell-zo ; n'eo ket kennebeut sermoniou a skrivin evidhoc'h, va c'henvroiz ; eur gelennaduréz eo goulskoude divar ben hor Zalver, ha va list d'ober deoc'h eur reket, lennit aliez « ar pevar Aviel en unan » al levr kaer-se a dlefe beza e peb tiegez kristen ; enhan e kafot displeget freas buez hor Zalver var an douar, ha seul vui a sklerijen o pézo evit entent mad ar pezh em euz c'hoant da lavaret.

Ho pedi a ran eta, lennerien va mignounet, da sonjal ervad er pezh a vo skrivet evidoc'h : n'em euz ken ioul nemet da hada en ho spered hag en ho kalon eun had gwirion a wirionez hag a zilvidigez. Sant Iann, ar brassa euz an Avielerien a lavar : « An traou-ma zo bet skrivet evit ma kredfoc'h eo Jezuz Mab da Zoue, hag en eur gredi evit ma helfoc'h kaout ar vuez a bado da viken en he hano. » (S. Iann, ch. xx, 31). Setu ive ar c'homzou a garfen kemeret evidoun va-unan, evit o lavaret deoc'h. Hag, a greiz kalon, e tisklerian ne livirin, ne skrivin ger ebet hag a helfe beza eneb ar pezh a zesk deomp hor mam zantel an Iliz katolik, apostolik ha romen, rag hi he deuz komzou Jezuz. « Ar re ho selaou am zelaou-me, ar re a ro dehoc'h dismegans, er gra d'in va unan. »

F. MAZÉAS.



Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Sellit, grit ar memes tra evit Doue, krouer kirri dre dan ha « kezegdu » eun tamm brao brasoc'h eget ar reze, me fell d'in lavaret an douar, an heol hag ar stered.

Daou baotr a yoa o tont eus ar c'hatekiz. — « Eun dra iskiz eo evelato, eme unan, an Ao. Person a lavar ema Doue e pep leac'h, ha koulskoude, kaer am eus sellet, n'her gwelan e nep leac'h. » — « Te zo sot, eme egile, pa 'z peus lakeat eun tamm sukr en eur werennad-zour, ha pa 'z eo teuzet, daoust ha gwelet a rez anezan atao ? » — « N' ran ket. » — « Bez' ema koulskoude ? » — « Ya sur ! » — « Ac'hanta, henvel eo evit an Ao. Doue ; aze, ama-ema, daoust n'her gwelomp ket. »

Ar falz-doktor. — Me a gred eo Doue eun hano roet d'eun dra ha n'eus ket anezi, d'eun dra diwanet e spered eun huvreer bennak...

An difennour bihan. — C'hoant eo hoc'h eus da lavaret n'ez eus Doue ebet !

Evesait piz, Aotrou, pep tra a lavar deomp ez eus eun Doue ; ha netra, klevit mat, netra, nag hor spered, kaer hon deus lakaat anezan da labourat, na netra c'hreat, netra, netra an holl ebet, na ziskouez d'eomp difazi n'ez eus hini ebet. — Pep tra, en eneb, a lavar d'eomp ez eo Doue eun dra veo hag a labour. Pep tra a lavar d'eomp ez eo speredet kaer, ha n'eus netra hag a ziskouesfe d'eomp n'en deuz ket a spered. — Pep tra a goms d'eomp eus e holl-c'halloudegez, ha na welan netra o koms d'in eneb an dra-ze. — Pep tra a embann al lezennou en deus douget ; ha ne welan netra er grouidigez ha n'en defe e re. — Pep tra en dro d'eomp a zav he mouez evit prezeg d'an den eun « perfectionou » Doue, hag evit her gwelet sklear, n'en deuz nemet chom eur pennad a-zav da zellet ouz pep tra ; hini ebet, netra a gement na vije bet krouet evit eur mennoz bennak.

Mar na vije Doue nemet ken eur ger, al lezennou a zo o c'houarn ar bed ne vije ket anezo ; ha neuze pep tra er

bed-ma a vije en dizurz, netra na vije el leac'h ma tle beza. Hag evit gwir, piou a raje d'an heol rei e sklerijen hag e domder ? Piou a virfe he gouenn da bep tra veo. — Piou a c'houarnfe koustians an den ? — Piou a rafe d'an douar rei magadurez da gement a vev ? Piou — Piou ? — Livirit d'in 'ta ? — An « Natur » ? a livirit ? — Livirit d'in neuze piou en deus roet lezennou d'an natur ? Piou en deus roet da bep tra ar stum, ar plegou a zere outo, hag outo hepken ?

Ha neuze, an natur, pe mar kirit an Natur, gant eul lizeren vras, an dra-ze n'eo nemet eur ger, eun hano, ha nan eun dra veo da c'hellout rei urziou. An dra-ze a zo eur ger savet gant an dud evit koms eus an holl lezennou douget gant Doue war bep tra ha war an holl draou en ho fez ; an natur eta n'eo ket eun dra speredet, doare an traou eo hepken.

Kalz a dud a zo hag a gav mat lavaret an diskianterez-se, evit kaout abeg da veva en o roll : « Doue, emezo, eo ar pezh a zo mat, ha Satan, pe an Diaoul, eo ar pezh a zo fall. » Hag e leveront kredi e Doue hag e Diaoul en doare-ze. Koms a reont evel-se evit n'o devezo ket da anzav eo Doue eun dra veo hag a zo anezi e gwirionez. Sotoni ha berboellerez, pe.... touellerez gant komzou goulo.

Ya, an doue a zavont evel-se n'eo nemet eur gomz, eun hano, eun dra ha n'eus ket anezi ; lezomp-hen gant ; an doue-ze n'eo ket hon hini. Morse an doue-ze na lakeas eur wezen da zevel ; kaer en devezo, n'hell biken rei d'al loar ar c'halloud da zibrada ar mor.

A-walc'h eo d'an den, pa n'eo ket re bennek, evesaat eur pennadig evit gwelet dreizan e-unan petra eo ar mad, an droug, an natur, hag evit n'o lakao ket kenver-hakenver gant eun dra veo, speredet, madelezus ha galloudek, a hanvomp, ni, kristenien, an Aotrou Doue.

Ar falz-doktor. — Ar bed a zo a-viskoaz ; n'eo ket bet eta krouet a-bez, evel ma leverer.

An difennour bihan. — C'houi eo a lavar an dra-ze, hag eas eo lavaret. Diesoc'h e vije d'eoc'h, Doktor, diskouez ez eo gwir ho lavar. An dra-ze, Doktor, ez afen e klaoustre ouzoc'h n'hellfac'h ket ober.

Gwelet a ran brema an troidellou a gemerit. N'int ket

nevez ; Voltaire hag e ziskibien eo ar re o deus digaset ar c'hiz da goms evel a rit. N'edont ket e poan da anzav ar wirionez, hag o deus great evel ar vugale a c'hoanta kuzet eun dro fall, hag a lavar gevier, o kredi e vezint lezet da vale, abalamour ne wel ket ar gerent ar wirionez hed-a-hed.

Ha me a lavar, a-unan gant ar Wirionez hag ar Skiant vat : Doue en deus great a netra an nenv hag an douar, ha kement a zo enno. — An Iliz eo a zesk d'eomp an dra-ze : ar wirionez eo eta.

Anaout mat a ran istor an tammouigou traou munut hanvet e galleg « atomes » ; traou ker munut ma n'heller ket o gwelet hep lunedou great evit an dra-ze. Dioc'h ho klevet, Aotrou, ar re-ma a deuas eun dervez da steki ha d'en em staga an eil ouz egile ; ha setu aze, eme c'houi penaos eo bet great an douar, al loar, ar stered, an heol. P'eo gwir e chach ar c'horfou an eil d'egile, livirit d'in 'ta, Aotrou, perak n'int ket bet en em staget an eil ouz egile en eul leac'h hepken, ha nan e meur a hini, hag o divije great neuze eun tamm bras, *unan hepken*. Kement se a dlie c'hoarvezout, sklear eo, dioc'h ar pezh a livirit c'houi hoc'h unan.

Livirit d'in ive 'ta, p'emaomp ganti, perak n'eo deuet grouan al loar da gregi e grouan an douar, ha pe seurt frouden a zo deuet d'ezo da vont evel-se da ober *eul loar* ? Ha livirit d'in ive penaos ez int en em gemeret evit lakaat al loar da drei en dro d'an douar, hep harp ebet, hep m'en divije askel ebet ken nebeut ? Livirit d'in c'hoaz, mar gellit, penaos ec'h en em gemeras grouan an douar evit hen lakaat da ober eun dro warnan e-unan, just a just e peder heur war 'n ugent ? — Ne livirit netra ? O ya, me a gred a-walc'h ive n'hellfac'h ket rei eur respont a-zoare da nikun eus ar goulenno-ze.

Ma vije bet ar bed a holl-viskoaz, Doue, spered, ha tamm ebet krouer, me laka, n'en divije bet ken gallout warnan nemet an hini en divije bet digant *unan-all* ; hag an hini-all-ze eo a vije Doue, an Doue krouer.

Ar bed a zo atao henvel, ne goll na ne c'hounit netra, ar pezh a ziskouez sklear a-walc'h ez eo *unan*, krouet a-bez, *d'ar poent merket gant Doue*.

Penaos a reas Doue evit kroui ar bed ? E pelec'h e

kemeras danvez d'en ober ? N'eo ket dieas gouzout, n'eus nemet digeri ar Skritur Zakr ; komz a eure, hag an nenv hag an douar a oe anezo.

Penaos eo bet furmet an douar ? Klask a ra an dud wizieki ; an dour hag an tan o doe a dra zur kals perz e kement-se ; hogen, kaer o deus klask, n'int ket eat beteg-en ouspenn dounoc'h evit eur c'hart leo e kalon an douar hag e vije ret mont 6.400 gwech dounoc'h evit tizout ar c'hreiz. Doue e ra an dra-ze evel en eur o'hoari ; an dud avad n'hellint morse mont beteg eno, rak, eme an dud wizieki, kalon an douar a zo leun a dan evel m'oa gwechall ar gorre.

Gellet en deus Doue kroui an douar hag ar stered en *eun taol*, evel m'emaint ; gellet en deus lakaat milionou a vloavezion da ober anezo : petra ra ze d'ezan ? p'eo gwir an amzer dremenet kouls hag an amzer da zont a zo evitan evel an amzer a zo o tremen d'ar poent ma komsomp. Gwelet a reer roudou e zourn war bep mean eus an douar war bannou al loar kouls ha war bannou bero an heol, hag holl, mein, loar hag heol, holl e plegont d'al lezennou en deus douget. E pep tra e kavomp arweziou eus ar Spered kaer a yoa o roi e ursiou p'edont o tont da veza eun dra bennak.

N'eus den hag a c'hellfe diskouez splam ema gantan ar wirionez pa lavar eo bet krouet an traou a holl viskoaz. Daoust hag ar grouidigez en doa ennan e-unan eun abeg bennak da veza ? Krouet int bet eta ; hag an Hini o c'hrouas eo an Hini a zo dreist pep tra, an Hini a zo dioc'h red evit krouidigez an traou, da lavaret eo Doue.

Selaouomp eta gant eur galon izel hag eur spered a zentidigez ar pez a lavar ar Skritur d'omp wargement-se, sklearroc'h eo kalz, eun tamm mat, eget an holl lavarou all a glever e kichen.

KLAODA.



HISTOR BREIZ

Goude an Emgann !...

Gouzout a rit breman, lennerien garet, penaos e kouezas Arvor dindan krabanou dir rouantelez Rom, goude beza stourmet beteg ar maro evit he frankiz. Kalz tud gouiziek a zo hag a lavar var o meno e lakeas an Arvoriz, goude an emgann, ar brasa pled da zalc'her e goueled o c'halon eun imor direiz ouz ar Romaned, da vaga gant aked e diabars enno kasoni ar maro a-enep o enebourien. Ne gredent ket c'hoaz guikal re grenv, gant aoun da veza friket dindan ar wask, mes ar c'hlaouen — hini an digoll — a c'hore sioulik dindan al ludu ; ha, pa zonzjed an neubenta, e vije gwelet adarre dre Arvor a-bez tan ar vrezel, eun tan ifern, boueteat gant eskern an divroidi, o leda etrezek koabrennou an nenv e sklerijen ruz-c'hoad... Ne c'hellont ket c'hoaz ober kalz a finv, rak strapennet int ha strapennet berr. Mes deportit : dizale e velfot bugale Arvor o sevel o c'hriben, o terri mell-hâ-mell ar chadennou pounner a zervich d'o fenaska, hag o vruzuna an hualou mezus-ze var bennou o gwaskerien ; ha bezit sur, ar c'hastiz a vezo dizamant.

Gwelet a rit dre 'n hent-se peger stegn oa, hervez an darnvuia eus historianed hor bro, ar zugel etre ar Romaned hag an Arvoriz trec'het ganto. Gwasa pez 'zo, an histor vrao-ze n'eo nemet eur rimadell doull diazezet var an treaz. Etre ar virionez hag hi ez eus kement a gemm eget etre an deiz hag an noz ! Rak an Arvoriz eur vech kabestret n'o deus bet morse ioul ebet da c'hellout divezatoc'h flastra o enebourien ; ne zalc'hjont ket zoken eur begad kounnar ouz o mistri nevez. Pell a ac'hano !

Ha n'eus ket izom da jom re zouezet an holl gant eun hevelep tra. Rom m'hen tou, bleizez aoualc'h pa gare, a ouezas brao c'hoari al louarn. Evit dont easoc'h a ze a-benn da beure'hounid an Arvoriz, e lakeas he holl ijin da heuilh penn-da-benn o c'hoantegeziou — nemet unan evel just : hini ar frankiz —, da skigna en o zouez ar binvidigez, al lealded, ar peoc'h hag an eürusted. Ha tud Arvor,

boaz bete neuze da dremen o amzer vella oc'h en em hegal hag oc'h en em daga, a en em c'hreas buhan en o stad nevez, hag a zoublas ken dic'hin ha tra d'eur vestrez hag a skuilhe varno kement a vadoberou.

Ar c'heariou eo a oue gounezet an dilloua hag an diboanusa; tud ar meziou avad a enebas muioc'hik er penn kenta, mes ne zalejont ket ken neubeut da gemeret skouer divar geariz, evel ma c'hoarvez atao. Hag etre daou-benn an amzer ez oant divouennet kement ha ker-koulz ma ne c'houient mui yez o zadou pa ziskennas ar Vreiziz en o bro er pempet kanved. Ne gomzent hivi-ziken nemet al latin, ha c'hoaz, ma Doue, pebez briz-latin divalo! Demdost hini ken hudur hag an drailhaj diskempen a glever hirio o koueza divar muzellou an darn Vretouned diboell, a fell d'ezo a briz-buez trei kein d'o yez kaer, evit gellout chokat torchadou gallek-saout a-leiz o ginou.

Evelato m'o deus great ar Romaned droug ha kalz droug d'ar vro e kenver meur a boent, e meur a c'hiz all o deus ive — leal eo hen anzae — digaset enni kalz a vad. Setu ar peza a c'hoarvez peurliesia.

Er pennad-skrid-man e plij ganen kaozeal eus ar vad hebken. Greomp 'ta eun destumadennig adrezuz-vichanz eus ar brasa madoberou a fouilhezaz ar Romaned dre c'hourenez Arvor goude ar vrezel.

Da genta ec'h en em lakejont da greski pe da gaerât ar c'heariou.

Condevincum, pe an Naoned, oa ar vrudeta eus a geariou Arvor d'ar mare-ze; ar Romaned a roas d'ezi muioc'h c'hoaz a lufz hag a binvidigez en eur vrasât he forz mor hag en eur astenn he c'hemwerz.

Ar c'heariou, ar porziou-mor pe ar c'hreou all kempenet ganto vardro an Naoned oa *Briva*, demdost d'al leac'h m'ema hirio Sant-Nazer; *Grannonna*, savet var ribl ar mor demdost de Wenn-Rann, ha bet abaoue disman-tret den ne c'hoar e pe da vare; *Blain*, larkoc'h en douarou var an hent a ya eus an Naoned da Wened; *Malo*, bro ar maneriou hag ar genkiziou (villes de plaisance), gwintet var beg ar reier, en tu deou da stêr al Loâr: eno ec'h en em jache ar vondianed eus an Naoned da dremen ar miziou hanv.

E *Bro-Wened*, teir gear a zo hano anezo var ar skridou koz: *Dariorit*, savet gant ar Romaned el leac'h m'ema breman Gwened ha lakeat ganto da gear-benn ar vro-ze. Kearbenn ar Wenediz oa *Lokmariaker*: ac'hano oa an daou c'hant lestr a vennas bruzuna ha goueledi listri Sezar; ac'hano oa an darnvuia eus an dudou keiz a oe krouget pe verzet gant ar Romaned goude ar vrezel; ac'hano oa en eur ger al loden franka eus ar vartoloded kadarn (vaillants) a zalc'has penn keit all da vrezellourien Rom. Hag ar re-man dre venjanz ha dre gasoni, a felle d'ezo a-grenn mouga brud-vat eur gear hag en devoa roet d'ezo kement a veac'h. Setu perak, evit ober d'ezi kendamouez (concurrence), e savjont en he c'henver kear *Dariorit*. — Tro-var-dro da Wened e c'heller c'hoaz henvel *Blabia*, *Lost-Stank*, *Pluherlin*, *Sulim* ha *Koz-Iliz*, an diou ziveza-man diazezet var veven hent an Naoned da Benn-ar-Bed.

E *Bro ar Guriosolited*, ar gear vrudeta en amzer goz oa *Fanum-Martis*, a dlie marvad beza kear-veur d'ar mare-ze; var he dismantrou e konter eo bet savet Kor-seul, hirio eun tamm bourc'haden vihan; muioc'h d'an hanter-noz, e kreiz reier aochou mor Breiz, e kavet *Regina* hag ar *Yeodet*, heb ober hano ebet eus eun niver bras a geriadennou all var an tuzeou-ze, a veler enno a vil vern a hep seurt traou chomet a zilerc'h ar Romaned.

E *Bro Roazon*, da lavaret eo hed-a-hed harzou Arvor en tu diouz ar zao-heol, n'eus nemet diou pe deir gear eus amzer ar Gallo-Romaned hag a ve deut hano anezo betek ennomp: *Aleth* e aber ster ar Ranz, var unan eus ar c'hoanta plegou a ra mor Breiz (la Manche) o krignat hor gourenez, e leac'h ma sav breman porz Sant-Servan; ha dounnoc'h e kreiz an douarou, *Kondat*, kear-benn ar Redoniz, ha deuet da veza divezatoc'h ar gear vrudet a hanver Roazon.

Ma tostaomp breman ouz beg ar gourenez, ouz Penn-ar-Bed, e kavomp eno peder gear hag eun neubeut enezennou hag a zo meneg anezo var ar skridou koz. Ar genta eo *Vorganium* kear-veur an Oksismianed, a zo bet c'hoant da lakât el leac'h m'ema hirio Plougerne, tostiktost da ziskarg an Aber-Vrac'h er mor-bras. Heb nac'h tamm ebet e c'helje beza bet guechall er c'horn-douar-ze

eur c'hastell-krenv, savet da rei repu da zoudardet Rom, ha bet hanvet abaoe *Koz-Kastell-Ac'h*, an dud gouziek a anzae goulskoude. — ha n'eo ket heb guir evit doare — e ranker kas Vorganium kalz pelloc'h diouz Penn-ar-Bed, er c'horn all da Gerne, du-hont beteg Kerahez : eno n'er ket evit ober eur gammed heb steki an treid ouz roudou ar Romaned, eno e veler henchou bras oc'h en em skigna e pep tu : testeni sklear eo doareet kalz muioc'h da gear-veur eget na 'z eo Plougerne.

Goude Vorganium eo red henvel *Vindana*, a dlie beza marvad vardro porz Goayen, ha *Porliogan*, demdost da Lok-Maze-Pennarbed, etre daou veg-douar sanket o friou ganto er mor evel gennou houarn. — Eun tammig izelloc'h ez oa eur gear all, tost ker brudet ha Vorganium abalamour ma 'z oa talbenn an darnvuia eus kenchou Arvor, hag he devoa dre ze kalz darempred ; *Jezokribat* a read anezi, hag an holl dud gouziek a lavar e ranke ar gear-ze beza el leac'h m'ema breman Brest ; hag evit guir, Kastell Brest a zeblant heza diazezet var eur c'hrenv eus amzer ar gallo-Romaned.

Ouspenn ar beder gear-ze, a gaver meneg anezo var an teuliou koz, ez eus bet dizoloet c'hoaz n'ouzon e pet leac'h merkou a-leiz eus tremenadur ar Romaned en hor bro. N'int ket rouez ar pennadou-moger, ar beziou, ar c'hirinou, an teol, ar patroniou-tud, a zo chomet a zilerc'h ar Romaned dre hor gourenez, ha dreist-holl e kosteziou Lanneiron (Lokmaria-Kemper, Ploneour-Lanvern, Kombrit, Pont-n-Abad ha tro var dro ; e Ploare, Poullan, Pouldergat ha vardro Douarnenez ; — e Kerrian hag e Lostmarc'h, diou gerriaden eus parrez Kraon, ez eus bet diskoachet n'eus ket gwall bellou eun toullad bras a beziou arc'hant kizellet varno skeudennou impared Rom, mogeriou kuzet dindan an douar, ha zoken eur vered guirion a wechall-goz, eskern, ouspenn kant korf maro ebars.

Na ve fin ebet d'in ma rankfen lavaret eur ger hebken divar an holl dismantrou koz a veler c'hoaz du-man ha du-hont dre ar vro, evel e Kerilien (e kichen Guineventer), Keradenek (e Sant-Fregant), koulz hag e kosteziou Rosko ; pe diwar-benn enezennou Baz, Eusa ha Sizun, a gonter divar o c'houst kement a draou estlammus !

Aoualc'h eo evit gouzout pegement e poanias gouniderien Arvor da zigas vad en tamm douar-leve kaer, pe mar kirit en tamm douar laeret a yoa nevez-digouezet etre o daouarn...

Au henchou. — Mes n'eo ket aoualc'h sevel keariou, red eo ive digeri henchou da vont d'o c'haout. Ar Romaned a oa eur vouenn-dud kalz re avizet evit chom heb guelet dioustu pebez talvoudegez a c'helljent da denna eus hevelep labour evit kemesk hag unani etrezo pobladou Arvor. Digoret a oe eta dre hor gourenez eur rouejad henchou bras, eun daou-ugent pe hanter-kant diouz ma leverer. Ne ouezer ket mat aoualc'h pere eo an henchou 'zo bet great d'ar mare-ze. Var dri anezo evelato ne jom mui arvar ebet. Unan anezo, an hini muia darempred, a oa ar penn kenta anezan e kear Tour, hag a dremene dre an Naoned, Reuz, Dariorit (Gwened), Sulim (Castennec), Vorganium (Kerahez), evit echui e Jezokribat (Brest) ; eun all a zifouche eus Juliomagus (Angers) evit eilbenna e Reginea (Erqui), goude tremen dre Gondat ha Fanum Martis (Corseul) ; eun all, berroc'hik, a yea eus Roazon betek Alauna (Valogne).

An henchou-ze great gant tri wiskad mein, a skoe var eun-tenn eus an eil kear d'eben, hep gouzanv na korn-tro na kammigel ebet : an dudou guechall na blije ket d'ezo nemeur mont da c'hoari an dro hir evit paka penn o beach. Evit guelet hag eo guir ar pez a lavaran, n'ho peus ken nemet taoler eur zell var an henchou koz a zo dre ho pro...

Ar pez ho peus lennet betek-hen a ziskouez sklear aoualc'h pegement dic'houezet oa dija an Arvoriz breman ez euz seitik pe drivac'h kant vloaz. Ha c'hoaz n'am eus great nemet renkenna dirazoc'h eun aridennad hanoiou keariou hag henchou bras, heb ober meneg eus an holl draou a veled a-stre ama hag ahont : tibediu, leziou barn, guerejou, kibellou (lieux de bains).

Dre ar meaziou e kaved kement all a aroueziou a binvidigez hag a eürusted. D'an amzer-ze ez oa var ar meaz tiegeziou bras ha n'oa ket eur vez o c'haout, fidam-doustik.

Peurvuia an tiegez a veze rannet etre teir loden disparti : an *ti-bras*, el leac'h ma rea ar mestr e geusteuren

gant e c'hreg hag e vugale ; pelloc'hik ar *vereuri*, el leac'h ma loje al labourerien, al loened hag ar benviachou ; larkoc'h c'hoaz, an *ti-lap*, el leac'h ma veze gorroet ar greun hag ar boued-chatal epad ar bloaz.

Anat eo dre 'n hent-se, perc'hen eun tiegez evelse n'oa ket eur skraber-laou anezan, na pell ac'hano.

Ha petra da lavaret 'ta eus an holl c'hounidegez a denne an dud a vicher eus a gant ha kant labour all e pep korn eus ar vro : aman oa eur farsite gullet melladou poullou-c'hoalen o venna dindan an heol evel linseriou ; ahont, pelloc'h en douarou, e save millinou-govel, hag eno ec'h en em zestume micherourien a vilherou da aoza benviachou houarn ha da floura podou pri...

E daou c'herig e c'heller kloza.

Epadau an daou pe dri c'hant vloaz kenta goude an emgann vras, an traou a ya barrek en dro gant an Arvoriz : 1° Ar peoc'h-vat hag an eazamant a gemer plas an drailh hag an dienez ; 2° An eürusted-ze a zo digaset er vro dreist-holl gant skoazel ar Romaned.

Hag evelse 'ta Arvor a zo kabestret mar kirit, mes gant eur c'habestr alaouret, goloet gant forz a stoup evit miret outan da waska re an holl var beg ar fri...

IOEN AN TOUR-GUEN.

AR GER " BELEG "

Mar peüs sonj, lennerien garet, var *Feiz ha Breiz* miz genver diveza (pajen 7), goude beza roet hanoiou an doueou faoz azeulet guechall-goz gant an Arvoriz, e skriven kement-man : « Ar briz-doueou-ze o doa o beleien, da lavaret eo tud dibabet da gannaded etre ar bobl hag i. An doue Bel eo en devoa ar muia anezo ; ac'hano eo deut ar c'hiz gant an Arvoriz da henvel ive kanned an doueou all *beleien*, da lavaret eo servicherien Bel ; hag an hano-ze a zo bet dalc'het goude-ze var gannaded ar Christ, ar gwir Doue. »

Beza 'zo tud all — eur punsad gouiziegez en o fenn — ha n'emaint ket tre eus va ali divar goust orin ar ger beleg. Set' aze en deiz all eur barz breizad brudet-bras a skriva da Renner ar gelaouen-man.

« En eur pennad c'houek, *Ioan an Tour-Guen* a zispleg mad tre petra oa Arvoriz gwechall goz.

» Eur frazen koulskoude a zo eur mank enni. Arabad e ve lezel ar bobl ha dreist-holl ar veleien gristen eus hor bro da gredi e teu an hano a *veleg* diouz an doue *Bell* ! Kement-se a zo eur mank braz, eun errol vras mar kavet gwell.

» N'eo ket d'in kaout an disterra c'hoant da dremenn evid eun-doktor na da zond da ober skol da varrekoc'h evidon, mez koulskoude neb piou bennag a neuz studiet ar yezadur hag ar gwriziennou, a lavaro d'eooc'h, *da genta* : biskoaz n'euze bet klevet kont, en Bro-C'hall goz, eus eun doue hag a rached *Bel* anezan. Ar Galdeaned o doa eun Doue faoz hanvet *Baal*, mez an doue-ze na oa ket mennek anezan dre aman.

» *D'an eil*, ar gir Beleg n'eo ket ken misterius na ken koz-ze e wrizien. Ar gir *beleg* na zeuaz en Arvor nemed da heul ar gristeniez. Disken a ra eta, hervez kelennerien ar ouiziegez keltiek, diouz ar wrizien *Bael*, gir koz kelt, hevelep lavar d'ezan evel d'al latin *Baculus* (petit bâton). Henvel a reet Belegien, pe Beleien, an oferennerien a zouge eur *vaz*, evel ma oa ar c'hiz gant ar venec'h hag al leaned kenta.

» Beleg (gwechall e skrived baglog) a ziniñ eta : *porte-crosse*.

TALDIR. »

Trugarez da Daldir : n'eus ket par d'ar stokadou da lakât ar virionez da vinta knit eus ar sperejou. Evelato mar plij d'ezan, e selaouo ganen :

Da genta e laka ac'hano souezet-mar-o lavaret d'in n'eus bet morse klevet kont er vro-man eus eun doue hag a rached *Bel* anezan. Che ! Ha gwir ? Ha me gave d'in beza lennet an hano 'ze n'ouzon ket e pet leor (evel ebars e *Sezar*, *De bello gallico*, tec'het ar bajen eus va spered ; e *Ausone*, *Commemoratio professorum burdigalensium*, navet gwerz eus ar pevare barzoniach kaset da Attius Patera :

Beleni sacratum ducis templo genus ; e *Laborderie*, Histoire de Bretagne, pajennoù 62, 174, 186, etc. ; e *Geriadur bras Larousse*, rann kenta, pajen 820, eil renkennad, hag e meur a leac'h all.

D'an eil, e pe leac'h eta en deus gullet Taldir diskouezet *splann* ha *difazi* e teu ar ger *beleg* diouz ar c'hrizien *bael*, hag ar ger keltiek-man diouz al latin *baculus* ? Marteze aoualc'h ez eo gwir ar peza lavar ; mes lavaret a zo eaz, rei-testeniou asur avad a zo eur gont all.

Me, gwir eo, n'am eus ket roet tamm muioc'h a skor d'am lavariou pa lakean ar ger *beleg* da zont eus an doue Bel.-Kement 'zo ne forsan den d'am c'hredi. Goulskoude n'em eus ket ivantet ar pezh a skrivan var gement-se : hen lennet e skridou tud gouziek avad ne lavaran ket. Selaouit unan anezo : « Ar re a yoa stag ouz servich *Bel* a reat *beleien* anezo, pe veleg pa ne veze nemet unan. Beleg a ziniñ eta an hini 'zo da Vel, an hini 'zo karget da enori Bel. » (*Kerne, Sakramant an Urs*, p. 366).

Setu aze eta diou c'hrizien eus ar ger « *beleg* ». Setu aman c'hoaz eun all.

« Belec, Belhec ou Bel'hec est formé de *belc'h*, dont il est possessif, signifiant « qui a du lin », tels que l'on représente les Druides dans leurs cérémonies et tels que sont nos prêtres avec leur aube. Les prêtres de l'Ancienne Loi avaient leurs habillement de lin, selon ce qui est ordonné au Lévitique, ch. XVI, v. 14. -- Le P. Grégoire écrit *polc'h* ou *bolc'h* (cosse de lin). Cette différence montre que P et B se mettent souvent en mutation et que la voyelle O se change souvent en E. Le mot *Belga* ne viendrait-il de *Belc'h* qui peut s'écrire Beleg ? Le lin est très commun dans le pays habité par les Belges. » (*Dictionnaire Le Pelletier*, religieux bénédictin de la Congrégation Saint-Maur, 1752, p. 50).

Hervez Pelletier eta, « *beleg* » a ziniñ « den al lin », pe an den guisket gant lin. Hirio ar ger *bolc'h*, gwir eo, ne ziniñ mui nemet sklonsen al lin, ar pezh a zo o c'holo an hadn ; mes netra ne vir en defe merket guechall-ar blanden a-bez. Ar skoueriou a zo stank eus hano al loden o tont dre hir amzer da veza hano an-dra a-bez, pe an enep. E fablennoù Yann ar Feunteun e kaver anezo ousspenn mil.

Ha neuze — eun tremen-mall eo echui — evit ar griziennou, da dreist-holl ar griziennou brezonek, sanket den ne oar pegen Doue e tenvalijen ar c'hanvejou tremenet, eo diez bras skei eun var arroud ar goridik. Evelato, bennoz Doue da gement hini a deu, evel Taldir, da leda bannou sklerijen en dro d'ezo, rak evel ma lavare kerkoulz Platon ar speredek gwechall :

Red eo 'trezek ar virionez
Monet gant an ene a-bez.

An Tour-Guen.

EMGANN BRIEC

(1815)

PE MEULEUDI EUR C'HEMENER

Kerzit dre bevar c'horn ar vro, e peb leac'h e klefot soniou pe rimadelloù eneb ar c'hemener. Ar paour keaz den-ze, goude beza great broz pe vragou, a vez douget gant kement a lorc'h,

Ne dilefe ket beza enterret
Nag er porched nag er vered...
Nemed e korn eur parkad kerc'h
Oll chas ar barrez var e lerc'h.

Aliez marteze e deod a vez ken lem ha beg e nadoz ha divar e dorchon e c'hoar c'hoari kalz troiou kam. Goulskoude e blijadur n'e ket ato kuzat ar zac'had farz ouz Katel : hirio ni 'velo unan oc'h ober eun dro louarn d'ar re a ioa evitan enebourien e vro muia karet. Lennit piz, me ho ped, ha goudeze, mar kredit, lavarit n'euz neuden vad ebed oc'h ober ar c'hemener.

Piou n'en deuz ket klevet hano deuz Napoleon koz ? E oll zoudarded a ioa eun dudi evito ober e veuleudi : ne c'hellent ket komz anezan heb skuill daelou ; daoust d'o c'hosni, ar zonz hebken anezan a lakea o goad da virvi en o goazied.

Goude beza great kalz freuz gant e zoudarded, gounezet kalz rouantelesiou, Napoleon a voue eun devez trea-c'het. Marteze Doue a deue d'e gastiza abalamour m'ei doa kredet laerez madou an Iliz ha taoler ar Pab er prizoun. Er bloavezh 1814, Napoleon a zo kaset da enezen Elb. Kalz mignouned a zalc'haz mad d'ezan ha dizrei a reaz neubeud goude e Frans evit klask ober adarre e vestr var oll rouantelesiou an Europ. Deuet braoik oa a benn deuz e daol : ar Frans a ioa varnez beza d'ezan : ar roue, Louis 18, en doa kemeret an teac'h.

En hor bro, ar c'homt a Gerne (le comte de Cornouaille), o choum e maner Kerlez-Vian, e Briec, a zalc'he mad d'ar roue ha ne rea ket kement a c'houlenne an impalaer digantan.

Eun devez ar c'homt a ioa pell deuz Kerne ; soudarded

ar C'hastellin o devoue urz d'ober eur c'hrogad ouz e vignoned ha d'ober d'ezo plega. Abred kaer o doa kuiteat ar C'hastellin ha goude beza great vardro teir leo, e tiskuzent e kichen chapel Sant-Venek : Briez n'edo mui nemed eul leo hanter vale. Siouaz évito ! hini anezo ne anaveze an hent ; kaout a reont eur c'hemener var e dorchén hag ober a reont d'ezan mont ganto. Ar paour keaz den a velaz founnuz ne dale ket ar boan gina na marc'hata ; dilezel a ra eta e dorchén hag e nadoz. Bet e zoa eul louarn a zen, karet a rea ive kalz e vro hag, evel m'her guelimp dioc'htu, soudarded an impalaer ne vezint mui touellét da c'houlén o hent digant eur c'hemener.

« Alo, mignoned, emezan, na gollomp ket hon amzer : rak n'oc'h ket c'hoaz digouezet e Briez. Araok an abardaez, avad, difennourien ar C'hornouail n'o devezo mui a zrebon. »

Ar zoudarded a zonje beza kavet o den : oll fisianz o doa ennan ; bale a reant var e lerc'h evel n'o devije great netra abaoe pemzek devez hag evel pa vijent bet o vont d'eur friko benag. Ouspen, ar c'hemener, m'qar vad, n'oa bet morse ken lampr e deod ha Doue hebken a c'hoar an traoù farsuz a zibunaz d'ezo.

Peder heur pe bemp heur a zo abaoe ma vale ar zoudarded hag ar c'hemener : an eol a zo eat da guzat, an noz a zo tenval pa zigouezont en eur geraden hanvet Ti-Ru, a zo eul leo deuz Briez, var an hent a ia deuz Briez da Gemper.

El leac'h trouc'ha berr a mont da Vriez dre Lanvarzec, en eur dremen e kichen maner Kerlez-Vihan, ar c'hemener a reaz ober an dro hurr. « En doare-ze, emezan, ar c'helou a zigouezo abred awalc'h, ha va mignoned ne vezint ket tapet er gripet, hag ar baotred-man a vezo great digemer vad d'ezo ! tom a vezo d'o ler ma c'hellont chacha o skasou ganto. »

Guir awalc'h en doa sonjet ar c'hemener : ar brud e teue soudarded ar C'hastellin en em gavaz e Briez ker buhan hag an avel. Heb koll amzer, mignoned ar C'hornouail en em lakeaz e tro d'ober digemer vad d'ezo. An oll gezek a voue dastumet en eur park, demdost d'al leur-vraz ; peulliou a voue savet var mogeriou ar vered

hag ouz peb hini anezo staget tammou goulou bihan : paotred Briez a ioa gourvezet adrenv ar voger ; guelet a c'helchent heb beza guelet ; o fuzuillou a ioa karget ha bantet. An enebour a c'helle dont, an oll a ioa var c'hed anezan ha peb hini a c'hoarze laouen o sonjal en taol kaer a ioa o vont da veza c'hoariet.

Soudarded ar C'hastellin gant ar c'hemener ato en o fenn, a zo digouezet var al leur-vraz. Trouz ebed e neb leac'h. « Alo, emezo, emaint d'comp paotred ar C'homt, heb na ve ezoum da zivergla hor fuzuillou. Kalet eo bet an devez, guir eo ; ker eo koustet d'hon divèsker ; neuz forz, ni c'hello diskuiza en eur eva chopinadoù. Penaoz e c'hellimp-ni trugarekaat avoalc'h an den mad ma 'z eo ar c'hemener ? »

Ar sonjou-ze n'oant ket c'hoaz tremenet dre o spèred, ma voue klevet eur vouez o rei an urz-ma : « Dao d'ezo, ha dizamant. » Kerkent e voue eun trouz spoutuz ; an oll o doa sentet. Soudarded Napoleon a gemeraz ive o fuzuillou hag a dennaz varzu beg ar peulliou : re huel kalz e tennent ha dre-ze ne c'hellent ober drouk ebed. Paotred Briez a skoe goasoc'h-goasa, hag evel ma 'z oant boaz mad, taol guen ebed ne reant. An abaden ne badaz ket pell : rag ar zoudarded a zavaz aoun ganto o velet o mignoned o koueza dioc'h an druil ha marteze ive o klevet an trouz a rea ar c'hezec dastumet en eur park e kichen, evel m'am meuz lavaret : rag ar c'hezec o klevet an tennou fuzuil, en em lakeaz da c'haloupat euz an eil penn d'egile ha spoutuz oa o c'hlevet o c'hourrichal.

Ar zoudarded a gollaz ho fenn hag a deac'haz kuit, peb hini guella ma c'hellaz : ouспен an hanter a joume astennet maro-mik var al leur-gear.

Kerkent ha ma savaz beac'h, ar c'hemener a ieaz da guzat en eur geraden e kichen ar vorc'h, hanvet Guirvale. Tremén a reaz an noz er siminal, etouez an anduilennou. Aliez e vez drouk-komzet deuz ar c'hemener, hirio ni 'lavaro :

« Honor d'ar c'hemener
En deuz great ker mad he zever. »

GLOAR DA GASTEL

War dôn : *An daou ejen.*

Moderato

E Kas-tel-Paol me a zo ga-net O « kear zan-
tel » a vro Le-on. O par-rez va c'hen-ta-dou
ka-ret, Te zo rou-a-nez va c'ha-lon! An neb a
ga-ro'z ai da Vour-del, Da Vrest, da Ba-riz, da Gem-
per; E-vi-don-me a fell d'in mer-vel. E skeud tour
braz chapel Kreisker. O va far-rez ben-ni-get Kas-
tel ra ve-zi meu-let! Me a za-vo bemdez va
mouez E-vit ka-na ken a zou-no Gloar da Gastel va bro!

2

Eur gouriz mor a deu da voalc'hi
Ha da drempa hon douarou,
Pa vez er gourlenn pebeuz dudi
Taoler eur zell var hon aochou,
Guelet Pempoul ha Santez-Anna,
Ha Kernevez ho zreid en dour!
Pa deu an eol varnho da bara,
Oh! na skedussa mellezour!

3

Douarou iac'h, dalc'had labouret
Ha karget a zavez bara,
En dro dezho kleuziou alaouret
Ha koajou dez ar re gaerra!
Tourion huel ha dantelezet
A bar laouen an deiz dreizho,
Eun Iliz vraz, ken brao kizellet:
Na te zo koant, Kastel, va bro!

4

En va guered me gar daoulina
Etouez ar guez hag ar bleuniou.
En Hiz Paol, da zul o kana,
Me gar klevet mouez an Ogrou.
Var dour Greisker guinted en uhel
Me zonz d'in klevet aliez
Ar c'hillek o kana en avel:
« Kastelliz, karit ho parrez. »

P. TRÉOURÉ.



KILLEK TOUR KREIZKEAR

A ZO NEC'HET

Var eun ton tregeriad

Allegretto Solo *Chœur 3*

En-deiz all kil-lek tour Kreiz kear Digo do deï la ri
de-no A za-vaz sounn he lost en ear. Di go do deï tan
la la ri da Di go do deï la ri de no.

Tôn koz, kaerroc'h, mez eun tam dishenvel, hag
eun tam diessoc'h

Solo Chœur

En deiz all killek tour kreizkear Di go do deï la ri de no

Solo Chœur

A za - vaz soun he lost en ear. Di go do deï tan

la la ri da di go do deï la ri de no.

2

Ha gwinted var he vaz ouarn,
E kanaz d'in en va diskouarn :

3

Oh ! emezhan, divar va glud
Na me gav drol hirio an dud !

4

Kaer emeuz trei a ziou, a gleiz,
Ne anavezan mui va Breiz.

5

Ne velan mui eun den, eur goaz
Gwest da zongen ar « Bragou-braz. »

6

Yan vraz e leac'h he jiletan
A zoug breman eul leviten !

7

Marvad eo gant aoun na deufe
He vragou moan da zisken re !

8

Janedik koant gant he c'herniel
He 'n deuz c'hoant tourtal an avel.

9

Gant he gwakoliou difæson
E rafe mez d'ar marc'h-limon.

10

Emaï atao gant ar c'hafe
Al likeuriou, an hini krenv !

11

Emaï o klask kaout manegou
Eur parasol hag..... eun aotrou !

12

'Vit he c'hompren eo red anaout
Brezonek fall ha gallek saout !

13

Pa deu ken drôl ar Vretouned,
Marvad oump tost da fin ar hed !

14

Me zo nec'het ! eme 'r c'hillok,
Echu va sôn ha..... Kotogogok !

P. TRÉOURÉ.

Kren-Lavarou hon Tud koz var Miz Meurs

Miz Meurs gant e vorzoliou (grêlê)
O skei var an doriou.

Ber-ber miz c'huevreur, karg an hant hag ar foz
Me o dizec'ho gant eun deiz hag eun noz.

Meurz gant eur c'hoezaden
A zizec'h ar foz pen da ben.

Da c'houel Paol
Laka mern vihan var an daol.

Pa glevet an draskl o kana
N'ho peus ken ezom tan da dôma.

D'ar Zul Bleuniou
E lamm ar zaout dreist ar c'hleuziou.

Da c'houel Sant Joseph pe Sant Beneat
Eo gounid ar panez hag al lin mad.

Pa zav al loar abars an noz
Had ar panez antronoz.

Park gleborek
Eost baraek.

Dont Pask ken abred ha ma karo
Mouile'hi bihan a gavo.

Epad ar zizun zantel
Amzer goloet, avel.

Da zul Bleuniou kompta 'r viou
Da zul Fask terri o fennou
D'ar C'hazimodo frika 'r c'hos podou.

Etre Pask ha meurlarjez
Seiz sizun nemet daou zervez
Etre Pask ha Pantekost
Seiz sizun penn ha lost.



Respont da zivinadennoù miz C'huevrer

- I. — Kloc'h an tan-gwall, a respont darn ; — Oh ! n'eo ket red e ve tan-gwall ; kloc'h an oferen vintin kouls hag hini an oferen-bred a laka ivez finv e Yan Divarlerc'h.
- II. — Dirag ar barner e vez savet an dorn,
Dirag an derezou e vez savet an troad.
- III. — 12 penn-goazi. ($12 + 12 + 6 = 30$).
- IV. — 627 lur hen deus roet Yan d'ar c'hef-assurans.
744,33 hen deus bet digantan.
117 lur hag eur gwenneg benag ho peus a vuioch,
Jeannet, evit argoulaoui ho merc'h. (Plouvian).

Ho problem, a respont eun all, hen deus roet tro din da gomz eus ar gounid a veffe e peb parrez o sevel assuransou. — Mad oc'h eus great, Jean-Louis ! Evit an dra-ze hebken eo bet lakeat ar problem.

O deus kavet, da nebeuta, teir respont :

4. — Jean-Louis Cadiou, Sibiril. — Mathurin Apamon, Yvon Lhostis, Isabelle Milin, Etienne Rest, Plouvien. — Emmanuel Bothorel, François Pouliquen, Anne-Marie Cornec, Catherine Inizan, Marie-Anne Nédélec, Marie-Anne Pouliquen, Loc-Mélard. — Jean-Yves Le Guen, Plouvorn. — Jean-Louis Guennegues, Plouguin. — Job Lazennec, Plouzeniel. — Anne-Louise Pouliquen, Plouzeniel. — Saik Croguennec, Loc-Eguiner. — François Talec, Plougerne. — Jean Bilhant, Sant-Neven.

3. — Louise Guillou, Marie Salaün, Marie-Anne Cueff, Sant-Nouga. — Jean-Louis Néa, Plouéan. — Anne-Marie Habasque, Kernilis. — Jean Mingan, Sant-Thonan. — F.-M Picot, Plouvorn.

Divinadennoù miz Meurz

- I. — Gant e oll c'halloud, an aotrou Doue
Ne c'hell ket ober ar pez a ran-me.
Petra eo ?
- II. — Me anaves eur marc'h glas,
Goest da zougen kant karrad dir
Ha n'eo ket goest da zougen eur spillen.
- III. — Rond evel boul, ha n'e ket boul e
Great gant koat ha n'e ket koat e.
- IV. — Pet krampoezen a zaou liard
A yaffe da baea eur gomanant a vil lur ?



Saint-Brieuc, imprimerie Saint-Guillaume

Vient de paraître :

LE BRETON EN 40 LEÇONS

par F. VALLÉE

2^e édition améliorée et augmentée. PRIX : franco 3 fr. 25

Au récent congrès de l'Union Régionaliste à Vitré, M. le Marquis de l'Estourbeillon a présenté la seconde édition du Breton en 40 leçons de notre ami M. Vallée.

Cet excellent livre sera enlevé rapidement, comme le fut la première édition qui fut entièrement épuisée dès son apparition.

La nouvelle édition est soigneusement révisée et augmentée de *Notes sur la prononciation* et de *Corrigés d'exercices*. Ainsi amélioré ce petit livre permet réellement d'apprendre vite et sans maître la langue bretonne en quelques semaines.

Nous le recommandons vivement à tous nos amis ; il deviendra bientôt indispensable à quiconque est appelé à vivre en Bretagne.

An aot. Vallée a zo o paouez moulla evit an eil gweach e levr « *Le Breton en 40 leçons* ». Eun eil moulladur a zo bet red, gwerzet m'eo bet an hini genta en eun nebeut miziou ; ar pez a ziskues splann pe seurt stad a rer breman eus ar studiou brezoneg hag eus gouiziegezh an oberour.

E zoare-skriva eo hini an darn-vuia eus skrivanerien *Feiz ha Breiz*, ha, kredi a ran, ne zaleo ket da veza hini an oll er Finister dre ma 'z eo ar reisa hag ar gwella diazezet var eun anaoudegezh vras eus yez koz ar yro-man hag hini Bro-Gemru (pays de Galles). — Ouspen-ze, ar reolennoù merket en e levr gant an aot. Vallée a zo demhenvel ous ar re a zo bet desket deomp-ni Leoniz gant Le Gonidec « *reizer bras ar brezonek* ». — Kement-ze a vezo displeget aman a benn nebeut.

Concours 1910 de l'Union Régionaliste Bretonne

1^{er} CONCOURS RÉGLEMENTAIRES

Concours de gwerzes : 100 fr. de prix aux meilleures gwerzes composées dans l'année et envoyées au concours.

PROSE BRETONNE

100 fr. de prix aux meilleurs travaux rédigés en prose (langue bretonne), sur le sujet suivant : Pourquoi tant de Bretons et de Bretonnes ne songent-ils qu'à émigrer dans les villes et à quitter la campagne ? Quels sont les remèdes nécessaires pour enrayer ou empêcher ou canaliser utilement cette émigration ?

COMÉDIES ET PIÈCES BRETONNES

100 fr. de prix aux meilleures pièces ou comédies bretonnes, en vers ou en prose, de préférence en prose pour Congrès ou Patronage.

2^e CONCOURS LIBRES

Prix Guenc'hlan ou de la Jeunesse

60 fr. de prix offerts par M. de l'Estourbeillon, aux meilleures lettres en breton écrites par des jeunes gens ou des jeunes filles de moins de 25 ans, sur le sujet suivant : Des meilleurs moyens de sauvegarder et d'encourager la conservation des costumes nationaux et d'empêcher les couturières, tailleuses et repasseuses de les défigurer, et surtout de rapetisser et déformer constamment les coiffes d'une façon grotesque.

Prix Hervé de Kerouartz

Prix unique de 100 fr. et diplômes aux meilleures vies populaires de saint Tugdual, évêque de Tréguier, rédigées en français (Maximum : 20 pages in-4^o).

Prix Théodore Botrel

Prix unique de 25 francs à la meilleure chanson antialcoolique en breton.

Prix unique de 25 francs à la meilleure chanson antialcoolique en français.

SECTION DES BEAUX-ARTS

Prix Escot

Quatre prix de 75, 50, 30 et 20 fr., aux meilleurs recueils de chansons populaires bretonnes (en breton), notées. Ces prix sont, avant tout, des prix de notation de musique bretonne.

Le premier de ces prix est généreusement offert par M. Escot (Mab Ronan).

N. B. — En dehors de ces prix, les prix de la Section des Beaux-Arts (exposition non comprise) et ceux des concours éventuels de costumes, seront, autant que possible, des objets d'art ou des bijoux bretons.

SECTION ÉCONOMIQUE

100 fr. à répartir en prix aux meilleurs mémoires sur l'un des quatre sujets suivants :

1° Etude sur les canaux bretons. — Leur amélioration et leur jonction avec les canaux français.

2° Les voies ferrées de Bretagne. — Amélioration et développement. Nécessité de voies directes reliant les côtes sud aux côtes nord de la Bretagne. Quelles seraient les conséquences des projets de loi déposés en 1909-1910 par les députés Cachet, Lefas, Sénac, de Levis-Mirepoix.

3° Les petites industries de Cornouailles. — Leur passé, leur état présent, leur avenir.

4° Les exportations agricoles, maraîchères et poissonnières bretonnes à l'étranger.

SECTION D'HISTOIRE

Un prix de 25 fr., offert par M. de l'Estourbeillon, directeur de l'U. R. B., au meilleur mémoire sur le sujet suivant : Des moyens pratiques de procéder à la réorganisation efficace des clans bretons, votée et décidée par l'U. R. B. en vue de l'action bretonne et régionaliste.

Un prix de 25 fr. au meilleur mémoire sur le sujet suivant : Etat du mouvement breton au 1^{er} janvier 1910. Influence exercée par l'U. R. B. depuis 10 ans au point de vue de la rénovation bretonne.

Avis important

Pour tous ces divers concours, les manuscrits devront être envoyés à M. de l'Estourbeillon, directeur de l'U. R. B., place de l'Evêché à Vannes, avant le 1^{er} juillet, dernier délai.

Les concurrents sont instamment priés d'écrire leurs manuscrits aussi lisiblement que possible et d'un seul côté de la page.

Dans le concours de *gwerzes*, on ne devra envoyer qu'une seule *gwerzes* pour le concours.

Les manuscrits concernant la section économique devront être adressés directement à M. Jean Choleau, secrétaire de la section, rue Poterie, à Vitré.

Le Bureau de l'U. R. B.

Feiz ha Breiz

Kappad Misiak ar Vretouped

Buez ar Zent

M. Perrot, vicaire à Saint-Vougay, va être obligé de cesser momentanément sa collaboration au *Feiz ha Breiz*, le travail auquel il se livre, en ce moment, je veux dire la rédaction d'une nouvelle *Vie des Saints* en breton, ne lui laissant aucun loisir.

Ce travail n'est pas la refonte de l'un de nos *Buez ar Zent* anciens. Sans doute le fond reste le même, mais la rédaction est toute nouvelle. A des besoins nouveaux, à des attaques incessantes et de jour en jour plus insidieuses contre la religion, il faut de nouveaux moyens de défense plus méthodiques, plus rationnels, plus appuyés sur l'histoire de l'Eglise et l'état actuel de nos connaissances. Il faudra donc faire de l'*apologétique* à l'occasion de la *Vie des Saints*.

Mais impossible de faire de l'*apologétique* sans une connaissance assez approfondie du dogme chrétien et de la morale chrétienne, sans une connaissance au moins élémentaire de l'histoire de l'église. D'où la nécessité pour M. Perrot de faire pour chaque jour de l'année, un choix judicieux de saints qui lui permettra de mettre en valeur les vérités et les préceptes évangéliques, soit dans le cours du récit même soit dans les réflexions qui le suivront. En outre, ce choix devra se porter de préférence sur des saints ayant eu, grâce à leurs enseignements et à leurs œuvres, une notable influence sur leur époque, afin de mieux faire ressortir les notes qui caractérisent l'église ainsi que sa vitalité bienfaisante. — En un mot, la *Vie des Saints* devant être le livre de chevet chaque famille, il importe qu'il soit une sorte d'encyclopédie catholique destinée à nourrir à la fois l'esprit, le cœur et la piété de nos Bretons.

Or, ni la vie des saints de M. Morvan même revue par M. Nicolas, ni encore moins la vie des saints de Marigo ne réalise ce *desideratum*. Ce sont des livres édifiants sans doute, mais incapables d'enseigner les nouveaux devoirs qui incombent à tout catholique obligé aujourd'hui de défendre pied à pied sa religion. C'est ce que M. Perrot, c'est ce que tous les esprits avertis ont compris ; aussi tous, ils sont unanimes à réclamer un livre qui soit à la fois un aliment pour la piété et une arme pour les luttes prochaines.

Il faut donc un nouveau *Buez ar Zent*. Pour le faire, il faut le temps et de longues études préliminaires. M. Perrot s'y prépare depuis plusieurs années. Il y a tout lieu d'espérer que l'ouvrage qu'il fera bientôt sortir des presses satisfera tout le monde.

F. C.

An Aviel

I. — Ar fals doktor a lavar « Jezuz n'eo ket eun den henvel ouz an dud all ?

Setu va respount : Kement a zo bet skrivet divar benn Hor Zalver hag e vuez evel den a zo en Aviel : ha daoust ma zeo bet ganet dre eur burzud, pe eur mirakl souezus, Jezuz, ervez m'hen diskuez deomp an Aviel, a zo eur gwir den henvel ouz pep unan ac'hanomp. »

Evit en displega deread eo red diskuez penaoz eo bet savet ar pevar Aviel ; diskuez ive talvoudegez ha gwirionez an Aviel : neuze e kav d'in em bezo diskuezet mad eo Jezuz eur gwir den. Goudeze e vezo easoc'h diskuez eo Jezuz eur gwir Doue ive.

Jezuz en doa kemennet d'e Ebestel prezeg an Aviel d'an holl grouadurien (Sant Mark, chab. xvi., 15). Hanter-kant dervez goude maro Jezuz an Ebestel a brezeg he hano d'ar bobl-se a c'houlennas a bouez-penn maro o madoberour, d'ar Sanhedrin (al lezvarn), en doa barnet ha kondaonet Jezuz da veza staget ouz eur groaz. « Jezuz, emezo, eo ar zant bras, an den just dious an dibab, an hini a ro ar vuez deomp » ; gant glac'har e tamallont d'ar Juzevien beza lazet o Mestr ; toui a reont en deuz Doue

ressussited he Vab ; lavaret a reont eo Jezuz an hini digaset gant Doue, ar prophet bras kemennet gant Moyses ; ar burzudou a reont o-unan, en hano Jezuz eo o greont ; gant nerz o feiz an Ebestel, diagent ken spoutik, a brezeg eo Jezuz a Nazareth ar mean-ben great fae varnhan gant mistri ar Vansonerien, hag ar Zalver roët gant Doue d'an dud. » (En *Aktou*, chab. 111).

Ar prezegennou-ze, setu an Aviel kenta ; ar spered santel hen lakeas da darza euz kalon an Ebestel ; eur brezegen eo a berz Doue hag eun ekleo euz komzou Jezuz... An Ebestel, goulskoude, a gave dezo oa red skriva kelenadurez Jezuz hag istor he vuez, rag ar gristenien genta o doa c'hoant bras da zalc'her evit atao ar sonj euz an aviel-se prezeget dezo a c'hinou gant an Ebestel, hag ar re-ma a c'hoantea ive, en eur gimiada diouz o bugale, ganet ganto d'hor Zalver, ervez komz sant Paol, lezel ganto gwelloc'h ha padusoc'h testeni eget o c'homzou ebken. Ar c'hoant-ze, an ezom-ze a zo bet ar penn-abek euz an Aviel dre skrid.

Pegeit amzer a dremenas azalek maro hor Zalver betek ma oe savet an Aviel kenta ? Nebeut amzer a dra-zur, p'eo gwir an Tadou euz an Iliz a lavar oe skrivet etre 33 ha 50 goude donedigez Jezuz.

An Aviel kenta. — Eun abostol, sant Vaze, eo hen renkas. Hano kenta an abostol oa Levi, ervez m'en desk sant Mark ha sant Lukas (Mark, ch. ii ; Lukas, ch. v). Kredabl he hano a oe troet dezan pa voe galvet Jezuz : hag an hano a Vaze a zinifi « Loët gant Doue ». Er goût a rit, Jezuz a droas evelse e hano da zant Per ha da zaou vab Zebede. Araok beza galvet gant Jezuz, sant Vaze, a ioa karget da zastum an taillou, var ribl lenn Tiberiad ; Jezuz a c'halvas anezan gant eur ger ebken ha sant Vaze a zilezaz peb tra evit mont gant Jezuz. Goude ar Pantekost, e prezegas an Aviel er Palestin evel an Ebestel all. Divar ben ar bloaveziou diveza euz he vuez, n'ouzer ket kals a dra : kredi a reer eo bet merzeriet goude beza prezeget en Ethiopie, en Arabie, hag er Pers.

Sant Vaze a skrivas he Aviel e iez ar Juzevien euz ar Valestine ar iez-se a gomzas hor Zalver he unan : her skriva a reas evit ar Juzevien euz Jerusalem hag euz ar vro-ze. Ar pezh a glaske Sant Vaze araok peb tra oa dis-

plega freas d'ar Juzevien oa Jezuz e gwirionez ar Messias kemennet dre ar Propheted hed a hed an Testamant koz ha setu perag an Aviel kenta e kavomp kalz a gomzou euz ar Propheted ; e kavomp er pen kenta lignez hor Zalver displeget rag gwella gwir ar Messias ervez ar Juzevien oa beza kuz lignez ar roue David ; ar sermoun ar sermoun var ar menez a ziskueze e Jezuz an hini a ro lezennou d'an holl ; ar barabolennou divar ben ar Rouantelez ar Rouantelez a ziskuez eo deuet da brezek d'ar beorien ; hag evelse pen da ben, an Aviel a zispleg d'ar Juzevien e kaver e Jezuz an holl merkou euz ar Messias : en displega a ra en eur skriva buez he Vestr. — Gouzout oa Jezuz ar Messias gwirion a ioa mad ha red zoken evit an oll Juzevien skignet en tu-me en tu-hont hag an Aviel kenta a oe troet neuze e gregach aben nemeur : hag Aviel-se eo a zo deuet beteg enhomp.

Aviel sant Mark. — Mam sant Mark a ioa o choum e Jerusalem, hag en he zi en em zastumas ar gristenien genta. (Aktou, chab. xii, 12). Pa deuas sant Per euz ar prisoun, dijadennet ma oe gant eun Eal, da ti sant Mark eo e ieas ; ha sant Per en doa evit Mark eur garantez a dad, bredabl bras hen eo her badezas. (I lizer sant Per, v. 13). An aviel en doa ive an hano a Iann. (Aktou, xii, xii, xv). Kenderv oa da zant Barnabe ha dre-ze e veachas gant sant Paol epad eur pennad ; goudeze e prezegas gant sant Barnabe e'enez Chypr. En he lizeri sant Paol a lavar e tizroas Mark davethan. Gant sant Per eo e veachas ar muia, evel diskibl ha sekretour, goude ar bloas 42, pa oc'hed da Vestr an Ebestel tec'het euz Jerusalem abalamour da Herod Agrippa a walgasse ar Gristenien. Sant Per a deuas da Roum hag e brezegennou eno a zougas kalz frouez. Ar gristenien nevez a c'hoanteas kaout dre skrid ar pez o doa klevet a c'hinou ha var goulen an Abostol, sant Mark a skrivas he Aviel : sant Per a roas he aotre da labour he sekretour : evelse oe great an Eil Aviel. An Tadou kenta euz an Iliz a zo a-unan evit lavaret e prezegas sant Mark an Aviel en Egypt Izela, e savas Iliz Alexandri ; kenta eskob ar gearse e oe merzeriet eno ervez ma kreder peurliesea.

Pa lennomp an Aviel ervez sant Mark, kenta tra a sko ar spered hag an daoulagad ive, eo eo kals berroc'h an

Aviel ma eget an hini kenta. Petra zo kirriek a gement-se ? sant Mark ne skriv ket evit ar memes lennerien : ar re-ma n'int ket Juzevien ; kent-a-ze an Aviel n'euz menek ebet ganthan euz kement tra a zelle ouz ar bobl, setu a betra e komz dreist-oll. Pa lakeer an diou Aviel kenta skoaz ha skoaz e veler mad en deuz sant Mark anavezet aviel sant Vaze, rag an tram a zo dibabet ha kempennet hevel-mik goulskoude anet eo sant Mark a zo bet kenteliet gant sant Per diouz an doare ma komz euz an Abostol. En Aviel ervez sant Mark ne lennomp ket prezegennou Jezuz evel en Hini ervez sant Vaze ; gwelet a reont eryl Jezuz o veva, o labourat, o tiskuez eur c'halloud a Zoue, hag o c'houzan eur basion garo meur-bet.

Aviel Sant Lukas — Ar gristenien genta ho doa hast bras da zeski peb tra divar ben ho Mestr, ha skriva a reant kement a gleyent digant an Ebestel. An Aviel kenta, skrivet e yez ar Juzevien, a oe troet e meur a yez, astennet tam dre dam : hag ar skridou-ze a zo eun testi euz ioul-vad ar gristenien genta, a zo, siouas ! kollet evidomp. Red oa d'an Iliz, iaouank flam c'hoas, kaout eun istor hirroc'h ha klozoc'h divar ben hor Zalver : an Aviel Sant Lukas he roas d'an Iliz. Hema a ioa ganet euz kerent paian, kristen oa bet great gant an abostol sant Paol ; desket oa, a dra zur, rag an abostol a lavar oa medisin (*Lizer da dud Kolos*, ch. iv), hag ama hag a-hont en Aviel e kavomp komzou a vedisinerez. Gant sant Paol e ieas da veachi ha da brezek an Aviel ha gant an Abostol e choumas betek he var. Petra deuas da veza goudeze ? Diez braz eo el lavaret. Oajet braz oa pa oe merzeriet,

Sant Paol en unan eus he lizeri a ro meuleudi da Aviel sant Lukas madelez ha trugarez Salver ar bed ha da bep pajen euz he Aviel ec'h anavezomp raktal « Mab an den deuet evit savetei ha nan evit koll, evit pardouni kentoc'h eget evit barn an dud » Aviel sant Lukas a oe kredabl e Rouen, araok ar bloaz 64.



Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

« Er penn kenta, Doue a grouas an nenv hag an douar.
» An douar avat a yoa noaz ha distum, hag an devalijen a c'holoe an islouk : ha spered Doue a yoa douget war an doureier.

» Hogen, Doue a lavaras : ra vezo ar sklerijen ! Hag e oe sklerijen.

» Ha Doue a welas ez oa ar sklerijen eun dra vat, hag e tispartias ar sklerijen dioc'h an devalijen.

» Roy a reas an hano « deiz » d'ar sklerijen, hag an devalijen a oe hanvet an « noz »... »

Hag ar Skritur a gendalc'h evel-se gant krouidigez ar bed. N'eus ket aze a gomzou goloet. Levr-all ebet ken nebeut hag a dalvesfe ar boan ober hano anezan pa gomzer eus krouidigez ar bed. Al levriou-all-ze o deus kemeret en henez ha kizellet pe savet konchennou tro-war-dro d'ar pezh a lavar ar Skritur zakr.

Ha c'houi, Aotrou, hag a lavar eo krouet an traou a-holl-viskoaz, roit d'eomp 'ta testeniou anat eus ar pezh a livirit gant kement a hardiziegezh ; klaoustre n'hellot ken en ober.

An deskadurez he deus kavet meur a dra da lavaret war benn krouidigez ar bed, gwir eo ; hogen, n'he deus kavet netra hag a vije eneb lavarou ar Skritur. Ho toareou, Aotrou, n'int nemet digareziou ; klevet a rit hoc'h unan blaz ar gaou ganto.



Eur bourc'hiz en doa eur merour. Ar merour-ma n'oa ket gant ar re warlerc'h o paea e ferm ; e di a yoa urzet mat. Ar vugale, ar mitisien, a yoa boazet da heulia gourc'hemennou ar mestr. D'eun dervez sadorn en em gav ar merour-ma gant e aotrou.

Setu ama ar gaou a zavas ganto :

An aotrou. — Da beleac'h ez it varc'hoaz ?

Ar merour. — D'an oferen.

An aotrou. — Gwelloc'h e ve d'eoc'h labourat.

Ar merour. — Aotrou, d'ar zul ne labouran morse.

An aotrou. — Eun diot oc'h.

Ar merour. — Ken diot evel a gerot : me a gar ar relijion, hag a fell d'in he heulia.

An aotrou. — Ar veleien eo a ra d'eoc'h beza diot evel-se. Lakeat o deus ac'hanoc'h da gredi ez eus tri ferson e Doue.

Ar merour. — Gwir eo, kredi a ran kement-se.

An aotrou. — Ma ve lavaret d'eoc'h ez eus eun Doue, ne lavarant ket e ve diot eun den o kredi kement-se. Mes pa lavaront e zo tri ferson e Doue, penaos o c'hredi ? Ha bet int beteg ar baradoz o welet ?

Ar merour. — Pa deu eun den da glemm gant ar boan benn, e ve lavaret d'ezan e teu ar boan eus ar bruched ; piou a zo bet eno ?

An aotrou. — Eur studi a ve great war gement-se.

Ar merour. — An aotrou Person en deus great studi ive.

An aotrou. — Ar vedisined a oar parea ar c'hlenvejou, ha mat a ra an dud selaou anezo.

Ar merour. — Gwir eo ; mes me a gav mat ive heulia aliou an A. Person. Peoc'h hag urz vat a zo em zi ; va bugale ne reont ket a zisplijadur d'in, c'houi her goar. Aliou an A. Person eo a zo penn-kaoz a gement-se. Ne weler ket ar memes tra e tiez an dud ne heuliont ket ar relijion.

War gement-se an aotrou a droas kein en eur c'hros-molat. Eur c'hrouadur en doa hag oa bet desket d'ezan pep tra nemet ar gwirionezou kristen ; ha brema e lakea an dristidigez e kalon e dad.

(Eus *Feiz ha Breiz* koz, Maë 1869.)

Ar falz-doktor. — An dra-ze a zo bet hreat dre zigouez, pe dre zarvoud...

An Difennour bihan. — Setu aze c'hoaz eur ger, ha netra ken.

Petra eo an darvoud ? pe an digouez, evel a livirit ?

Mat, Aotrou, p'eo gwir hoc'h eus kement a feiz en darvoud, perak lakaat dieas ho penn gant ar pezh ho pezo d'ho lein, d'ho kwiska, d'ho loja ? an darvoud pe an digouez, hep mar ebet, a zigaso d'eoc'h an holl draou-ze d'ar mare m'ho pezo ezom anezo.

Daoust hag an *darvoud* a zo eun den ? — Nan ! — Eur spered eo marteze ? — N'eo ket ive ; anzav a rit zoken eo alies an *darvoud* eun dra zot tre. — Eul loen eo marteze, eur blanten, eur menez, pe eun teuz ? — N'eo ket ive, a livirit... Petra eo an *darvoud*-se 'ta neuze ?

Daoust ha gwelet hoc'h eus bet beteg-en an *netra* oc'h ober eun dra bennak ? — Nan, n'eo gwir ? — Ac'hanta, p'eo gwir n'eo *netra* an *darvoud*, penaos e falvesfê d'eoc'h lavaret en deus great *pep tra* ? Implija rit ar gez-ze, evel pa lavarfen da veska yod. Ya, gwelet a ran e livirit eo bet great ar bed dre *zarvoud*, abalamour ma kavit brema eo re zot lavaret eo... en em c'hreat... e-unan. — Ya, gwir, emamp dizro adarre d'al leac'h-se ?

Daoust ha gwelet hoc'h eus morse eun ti hag a vije savet anezan e-unan ? eur gaolen anezi he-unan ? eur votez anezhi he-unan ? eun horolaj hep micherour ebet ?... Red eo eta beza diskiant evit lavaret eo bet great *pep tra* dre *zarvoud* ; n'eus den hag a ve sot a-walc'h evit kredi hevelep sorc'hennou.

Mar gwelfen an traou oc'h en em ober evel-se evit ar gwella, gwech en eun tu, gwech en eun tu-all, hep penn na spered ; mar gwelfen al loened, ar plant, o tont an eil eus egile hep reiz, hep lezen, eus ar re-all dishenvel diouto, en hevelep doare ma c'helljet lavaret n'int ket eus ar memes gouenn ; mar gwelfen an dizurz dre-oll, evel ma vije lakeat an daoulagad d'eun den a-drenv e gein, d'eun all e bizied e dreid, d'eun all lakeat divreac'h war e benn, d'eun all e ziskouarn war ar peultrin, etc., etc., hag an dra-ze hep ma vije gaeat daou zen er memes doare ; mar gwelfen eur mean taolet d'an neac'h o sevel, o sevel atao betek mont da göll en oabl, pê gwechou-all o vont a-dreuz, didreuz, a-zeou hag a-gleiz ; mar gwelfen an dizurz e *pep leac'h*, neuze marteze e c'hellfen digeri va genou da lavaret ar ger « *darvoud* ». Hogen, el leac'h an dra-ze, ne welan dre-oll nemet lezennou madeleus heuliet stris gant *pep tra*, lezennou red mad d'an oll plega d'ezo, nemet koulskoude an den, e meur a dra hag a zell ouz e spered.

Hag evit gwir, an den, siouaz ! a c'hoarvez gantan re alies ober implij fall eus ar spered hag eus al liberte roet d'ezan gant Doue ; servichout a ra anezo evit ober soto-

niou ha nac'h anaout e grouer, hag an dra-ze, dreist-oll, pa glask lakaat en e leac'h eun hano goulo, evel ma 'zeo an *darvoud*. Ober a ra evel-se evit n'en devezo netra da ober gant Doue, evit n'en devezo ket da blega e c'hlin dirak unan hag a zo uhelloc'h egetan !

Pebeus lorc'h ! ha pebeus soroc'hel !

Paourkez den ! Pegen diot e teuez da veza pa bellaez eus gouc'hemennou da Grouer ! Na sklear eo dre gement-se ez eo eun dever evidout plega d'ezo !

— Lavaret a rez an traou diskiant-se evit ma teui da gredi gant an amzer n'ec'h eus ket a vennoz da lavaret da Zoue. — Paour keaz den !

KLAODA 'R PRAT.

Da genderc'hel.

DIVARBEN ar SKOLIOU

Hirio, evel ma c'houzoc'h, e zeuz c'hoari vraz er Frans divarben ar skoliou. Al lizer skrivet gant an Eskibien evit difen eneou ar vugale en deuz lakeat e kounnar an oll framasouned. Meur a eskop a zo bet galvet dirak al lez-varn ; arc'heskob Reims, ar c'hardinal Luçon, eo an hini a zo bet koundaonet da genta : 500 lur en deuz da baea. Mez, ha goude ma vije koundaonet da gant gueach muioc'h, koundaonet d'ar prizoun, d'ar maro zoken, arc'heskob Reims ne jomfe ket evitse eb lavaret ar virionez a vouez huel. Hag holl eskibien Frans a raio evel dan. Respount a raint evel an ebestel guehall : « Red eo senti ouz Doue kentoc'h eget senti ouz an dud. » Var an douarman emaint evit prezeg an Aviel, skign ar virionez, harpa an Iliz. N'e ket lezennou an dud fall a viro outo da ober al labour zantel a zo bet fiziet enno gant Hor Zalver Jesus-Krist. Evel ma skrive Aotrou 'n Eskop Kemper en e lizer evit ar c'horaiz 1910 : « Ar re a zo bet souezet o velet ac'hanomp o sevel ken huel hor mouez a eneb al lezennou hag an dud a nac'h guirioù an Iliz, ar reze ne c'houzont ket petra eo eun dever a goustianz ha pegen stard eo ar bromessa en deuz great an eskob en deiz m'eo bet sakret. »

Evit ma vezo sklear ha freaz an traou a lakimp aman,

ni a heuillo lizer-veur eskibien Frans (1) hag a stago hirio da respount d'ar goulén ma :

« Da biou ar vugale ? »

Eun den a skiant vad a lavaró eb marc'hata : « N'eo ket diez respount d'ar goulén-ze. Ar vugale a zo d'o zadou ha d'o mammou, d'ar re o deuz o lakeat er bed. Ar vugale a zo da Zone da genta, p'e guir eo Hen ar Mestr ha digantan e teu peb tra, mez goude Doue int d'o zadou ha d'o mammou. E kaloun an tadou hag ar mammou e zeuz karantez evit ar vugale. An tad hag ar vam ne veyont nemet evit o bugale, ne zounjont nemed en o bugale. M'ar teu ar maro da lamet diganto eur c'hrouadur, o c'haloun a zo evel diframet ; koll o bugale a zo evito goasoc'h eget koll o izili ; rei a rafent o buez evit savetei buez o bugale. Nag a bed nozyez ne dremen ket ar vam e kichen kavel e bugel klanv, eb kousket, eb klem, eb damanti d'ar boan, d'ar skuisher !

Klevet ho peuz petra emgavaz eun deiz en eur vag o vont da goll, e kreiz ar mor braz. Ne zoa mui tam boued ; an dud a varve gant an naoun hag ar spount. Var ar vag e zoa ivez eur vam, eur bugel bihan dezi da vaga. Evel ma n'he doa tam da zebri, n'he doa ket mui a leaz evit he bugel. Petra reaz neuze ? Digeri eur voazen euz he breac'h ha lakat he bugel da zuna he goad. Ar vam a varvaz araok ma tesaz sikour, mez ar bugel a oue kavet e buez.

E Floranz, en Itali, ec'h emgavaz eun dra all soneuz da glevet. Eul lioun dianket euz e gaoued en em lakeaz da redete ruion kear. Kerkent an oil da c'haloupat gant ar spount. Eur vaouez, ganti he bugel etre he divreac'h, a gouezaz dre m'edo o tec'hed, hag al lioun a grogaz gant e c'hinou er bugel. Ar vam geaz en em droaz ouz al lioun hag a lezaz eur griaden ken truezuz ma tiskrogaz al lioun euz ar bugel ha m'en lezaz var al leur gear evel p'en devije al loan gouez koumprenet n'eo ket mad lamet eur bugel digant he vam.

Epad an dispac'h braz 1793 e zoa er memez prizoun eun tad hag e vab. Eur veich, dioc'h ar mintin e teuaz ar bourreo da c'halver ar re a die pignat en dervez-se e kar an Ankou ha beza kaset d'ar c'hilloin. Ar mab a oue

(1) Reiz ha Breiz miz Here 1909.

galvet a vouez huel. Mez ar paotr a ioa kousket. Petra reaz an tad ? N'oa ket deuet e dro c'hoaz. Mez goude beza great eur zell, ar zell diveza var e vab, e zeaz gant ar bourreo, e kemeraz plas e vab evit mont d'ar maro.

« Ar vugale zo d'ar vro, a lavar ar socialisted, ar c'houarnamant a c'hell o lamet digant o c'herent, o zével, o skolia evel ma kavo ar guella. » Kement-se n'e ket guir. E pelec'h eman kaloun ar c'houarnamant ? Piou a lakaio da daoler evez ouz ar vugale ? Mevelien ha n'o devezo ket a garantez guirion evito, o lezo da grial, ne raint forz petra emgavo ganto, a vezo guelloc'h ganto mont da gousket o-unan eget chom da veilla gant bugale n'ouzont ket da biou int.

Lamet digant ar gerent o bugale dre nerz evit fizion anezo e tud all, kement-ze zo eun dra kriz, spountuz, eun dra a laka ar bleo da zével var ar pen.

Guechall, araog ma teuaz sklerijen an Aviel da lugerni var ar bed, e zeuz bet guelet traou skrijus. E kear Spart, er Gres, ar baotred, pa deuent er bed, a veze kaset dirak eur c'honseil, hag e veze sellet piz outo. Ma vezent doareet fall, dinerz, ma n'oa ket mad o izili, e vezent kaset var eur menez ha lezet eno da vervel. Ma zoant krenv, stard en o izili e vezent lezet gant o mammou hag e choument beteg seiz vloaz etouez ar merc'hed. Da zeiz vloaz e vezent kemeret adarre hag e veze desket dezo beza soudarded. Er broiou all ivez e veze aliez lezet ar vugale da vervel. Hirio c'hoaz, er broiou paian, er Chin hag e leac'h all eo truezuz stad ar vugale. Kalz anezo a vez guerzet gant o zud, lod all a vez dilezet ha debret avechou gant loened gouez. Daoust ha c'hoant zo da vont var ar c'hiz ha da ober da vugale Frans ar pez a veze great e Spart ?

C'hui hag a lavar eo ar vugale d'ar c'houarnamant, daoust ha bugale o peuz ? Ne garit ket eta ho vugale, ma fell deoc'h en em zizober diouto hag o rei d'ar c'houarnamant ? Mez n'ho peuz ket a vugale marteze. Neuze roit peoc'h, ne c'houzoc'h ket mad petra lavaroc'h.

Mez avechou e vez guelet traou brao. Guelet e vez tud a gar o bugale, o dalc'h en o zi, a ra dezo guella ma c'hellont hag a lavar evelato : « Ar vugale d'ar vro, d'ar c'houarnamant. » Bugale piou ? Bugale ar re all, bugale ar *reaksionerien*, evel m'en lavaront, bugale ar re n'int

ket euz tu ar framasouned. « Ia, emezo, ar c'houarnamant a dlefe kemeret ar vugale-ze, lamet euz o famillou, rak en o famillou e vez desket dezo traou fall, e vez lavaret dezo karet. Doue, heuill e lezen, pedi e hano. Traou koz a zo mall da lezer a gostez. Hiviziken ne zeuz izom nemed da lakat skiant, deskadurez e pen ar vugale. Gant deskadurez e vezint fur, eüruz, e kavint ar baradoz var an douar-man. »

Setu aze petra leverer. Mad, da gement-se, ni a respounto gant an Eskibien : « Ar vugale a zo d'o c'herent : setu eno lezen Doue, lezen ne c'hell ket beza freuzet gant an dud. Deoc'h, tadou ha mammou, eo ho pugale, p'e guir, evel ma komz ar Skritur Sakr, ho koad a red en o goazied ; o izili, o eskern a zo izili, eskern o c'herent. Ar c'houarnamant a c'hell ho sikour da zével ha da skolia ho pugale, mez ne c'hell ket o lamet diganeoc'h ha difen ouzoc'h da zével anezo ervez lezen Doue. »

(Da gendec'her).

I. U.



HISTOR BREIZ

Ar feiz kristen o c'houlaoui en Arvor

Epad meur a gant vloaz ar bed-holl koulz lavaret a zo bet goloet gant tenvalijen ar pec'hed, hag ar sperejou, dianket divar o hent, a yoa dallet gant an droug. An drugarez hag ar garantez a yoa traou dianavezet var an douar ken a blijas gant Hor Zalver benniget dont da zigas ar virionez hag ar sklerijen etouez an dud. Ar bayaned, en em verzet korf hag ene da gement tra a yoa fall hag hudur, na zaoulinent nemet dirak pilkosou koat dibenn ha digoustianz ha ne zentent ouz reiz all ebet nemet o goall-ioulou. An drouized — her guelec'hor beuz — n'oant ket kalz guelloc'h : rak dizamant oant ouz o nesa, ha brud o deus zoken da veza divoadet avechou bugaligou yaouank-flamm evit kinnig d'o briz-doueou o goad fresk ha dinàm...

An diou relijion digernez-ze goulskoude eo a rene var an Arvor betek donedigez Hor Zalver, ha zoken epad tri c'hant vloaz goude : rak Aviel Jezuz-Krist na c'hellas ket en em skigna en eun taol-kont betek ar c'horn-man eus ar bed. Impalaered Rom, kroget eur gounar ifern en o c'horf, a douas mouga ar relijion nevez, hag, evit kas o mennoz da benn, a gondaonas da vervel er skrijusa tourmanchou eun niver dreist-muzul a gristenien. Ha n'eo ket hebken er gear benn ec'h en em blijent o c'hoari vaz ; kas a reant kannaded a bep tu dre ar broiou evit diskuilh diskibien ar C'hrist hag o lakât prim d'ar maro.

Eun dervez — e miz mae eus ar bloaz 288 — e tigouezas e kear an Naoned eur mellad Aotrou digaset eus a berz an impalaer.

« Ha n'euz ket er vro-man, emezan, trubard ebed hag en defe troet kein d'hon doueou koz evit azeuli an Doue nevez a rear ar C'hrist anezan ? »

— Eo, eo avad, a respontas kerkent eur payan, ioul d'ezan douetus-bras da baka eur penn-pour digant an divroad (mar yoa pennou-pour d'ar mare-ze). Ah ! en em gavet brao oc'h avad, aotrou ; er gear-man ez eus daou baotr yaouank, daou drubard, ha ne fell d'ezo mui heuilh relijion an impalaer. Unan anezo, Donasian, a zo deut a-benn da douella e vreur ha d'e jacha gantan d'ar c'hredennou nevez. Breman hon doueou Jupiter hag Apollon a zo nac'het, disprijet ha goapeat gant an daou zispac'her. Eun drubuilh eo guelec' o hardisegez. Mantrus eo, ya mantrus eo, aotrou. Evit gouzout ha guir eo ar pez a lavaran n'ho peus ken nemet gelver d'o kaout an daou zianket hag ober goulennoù outo. »

Ar barner a jom evel sebezet gant ar c'helou iskiz hag a c'heure'hemen kemenn dirazan ar bôtred yaouank.

Donasian ha Rogasian a yoa daou vreur a vouenn uhel eus an Naoned. N'o doa mui na tad na mamm, na den all ebet. Kelennet oant bet var ar relijion gristen gant eun eskob dianvezet-bro bet oc'h ober eun droiad dre an Arvor. Kerkent ha m'o devoa anavezet ar virionez ha digoret o daoulagad da sklerijen ar guir feiz, an daou zen yaouank a en em lakeas a-zevri da brezeg en dro d'ezo kelennadurez ha kenteliou Ar C'hrist. Heb aoun na mez, an daou gristen kalonek a zave en o zav etouez ar

bodadou tud hag a gomze gant nerz ha karantez eus ar guir Doue. Donasianik dreist-holl — ar yaouanka eus an daou vreur — a lakea tan en e brezegennou. « Soudard dispont d'ar C'hris, a lennomp-ni en e vuez, Donasian a gane; gant eur vouez krenv evel soun an drompilh meuleudi ha gloar d'e Vestr; evel eul labourer tear var an dachen e skuilhe haden ar feiz var eneou ar bayaned: »

E brezegennou goulskoude a gouezas var an douar meinnek: Goude poania kement all, he c'hounezas nemet eun den heken, e vreur Rogasian, a deuas, guir eo; da veza ken eintanet hag hen da brezeg ar feiz...

Galvet a oe eta an daou vreur dirak ar barner bras. Guelet a rejont; en eur en em gaout, eur chafod savet var al leur gear, eun aotrou varnan var e azez hag eun niver bras a dud bodet en dro d'ezan.

Donasianik; sounn e benn ha dinec'h e spered evel pa vije o vont d'eur pardon, a bignas da genta var al leuren. Ar barner, gant eur vouez klujarik a gomzas evel-hen:

« Ar brud a zo deuet betek ennoun; Donasian; e peuz refuzet kreñn azeuli (adori) Jupiter hag Apollon, hon doueou bras ha galloudus; tamallet out ouspenni da veza kemeret plijadur droug ehno, o c'hoapat anezo, o losker varno leoudoued; hag oc'h ober d'an dud prezegeñnou diskiant evit klask rei da gredi d'ar bobl e tle beza savetaet dre varo eun tamn kanfart bennak bet staget ouz ar groaz.

Donasian. — Ya, aotrou; ar virionez ho peus lavaret heb e zonzal. Ioul am eus da ziframma ar mui ma c'hellin a dud divar hent ar gaou evit o lakat da zabalina dirak an hini a zo din da veza servichet gant an holl.

Ar barner. — Alo, potrik; peoc'h avad gant da zorc'hennou diskiant, pe bremaik me da lakai d'ar maro.

Donasian. — Diouallit, aotrou, na gouezfe var ho penn hoc'h-unan ar spontailhou a hejit dirak va daoulagad; diouallit da veza krouget gant ar gorden ho peuz c'hoant da starda var va gouzok. Tenvalijen an droug a zo guelloc'h ganeoc'h eget ar sklerijen. Mat 'ne veloc'h ket sklerijen ar virionez bannet gant ar C'hris var an douar; mervel a reoc'h e kreiz ho tenvalijen!»

Daoust ha terchen a grogas er barner pe betra? Ar pez zo sur eo da vihana; ne gavas netra ken da lavaret.

Gant acun na vije gounezet unan bennak eus ar bobl gant komzou diderm ar c'hristen yaouank; e roas urz da daoler anezan er prizon.

Goudeze e c'hallas Rogasian, ar breur all, d'e gaout.

Rogasianik, ar c'hosa eus an daou vreur, n'oa ket badezet c'hoaz: rak an eskob a yoa bet o rei ar vadiziant d'e vreur bihan, en doa ranket kuitat an Naoned araok peurechui kelennadurez egile. Mes eun ioul bras en devoa Rogasian da veza badezet, ha gant-se e feiz ive a yoa start evel ar roc'h.

Ar barner roman, en aviz kaout guelloc'h digemer en dro-man, a ziroufennas e dal ha divar gornig e vuzel a reas eur c'hoarzig flour d'ar potr yaouank.

« Ac'hanta, Rogasian, emezan, te a zo ive 'ta, dioe'h ma klevan, var nez trei kein d'hon doueou-ni, o deus goulskoude roet d'it madou ar vuez hag eur spered kaer. Alo! hag ez afes da ober eur seurt taol-brizerez? Ha ne fell d'it mui anaout nemet eun Doue? Sonj mat 'ta, paour keaz paotr: emañ o vont da lakat evelse da ziroll var da gein kounnar eun niver bras a zoueou. Abred aoualc'h emañ c'hoaz: deus en dro, hag e palez an impalaer e kavi eürusted kement ha ma kari-en nemoranit eus da vuez.»

En em gavet fall oa va den. O velet an toueller evelse o c'hoari al louarn, Rogasian, ken distag e galon diouz madou bresk an douar, a yeas da vad en egar. E respont a oe dichek ha rust:

« N'eus nemet fallagriez tout en ho spered hag en ho komzou, emezan. Ne ouzoec'h ket zoken pe an doueou pe an impalaer da lakat er renk kenta. Guir eo oc'h mat holl da fourra en hevelep sac'h: ho toueou a zo bouzar, rak ne dint nemet tammou houarn-teuz, ha c'houi a zo ker bouzar all da vouez ar virionez. Buez a zo diank d'ezo, ha c'houi ho peuz dienez a skiantchou.»

Ar barner, paket gantan eun dizouezen vrao, a youc'has raktal evel eus bleis skaotet:

« Kasit an amboubal-ze da gaout e vreur, emezan; stlapit anezan er prizon. Varc'hoaz, pa vezo deiz, e vezint dibennet o daou dirak ar bobl: an dra-ze zesko d'ezo ober goap ouz an doueou hag ar brinsed!»

An daou vreurik a dremenas an noz en toull-du, o

lakât da bignat varzu an nenv pedennou leun a dan. Goulen a reant dreist-holl ar c'hras evit Rogasianik da reseo da vihana ar vadiziant a c'hoad, pa n'en doa ket bet an eurvad da velet an dour-meur o ruilh var e dal.

Antronoz vintiu, pa deuas ar goardou d'o c'herc'hat, an daou vreur a en em vriatas gant garantez, ha goudeze e savjont var ar chafod, goloet a jadenno.

« Poent eo d'in, eme ar barner deut da veza bourreo, poent eo beza rust en ho kenver. Ma c'hortozfen hirroc'h, nerz al lezen a ve torret : rak douget eo e ranker kastiza kement hini a ra dismeganz d'an doueou, pe heb gouzout d'ezan pe dre benn fall. »

Dioc'h klevet ar barner, eo evel en despet d'ezan ec'h en em defe c'hoant da lakât an daou gristen da zistrei c'hoaz var o c'hiz. Oh ! mes ar re-man n'int ket eus ar seurt tud-ze a vez paket gant bezadou mel. Al levez e veuzi o ene hag o para var o dremm, e respountont heb krena :

« Ma ne c'houezomp-ni ket ar pezh a reomp, ho kouiziegezh d'eoc'h-c'houi da vihana a zo ive didalvez kaer. Dem-henvel eo ouz an doueou a zervichit : eun tamm metal divalo ha n'eus ennan na bu na ba. Ni a zo prest da c'houzantv kement ha ma plijo gant eur bourreo fuloret : rak ni a c'hoar ervad ne gollomp ket ar vuez o restaol anezi d'an hini en deus he roet d'eomp, hag a c'houezo he renta d'eomp adarre kalz kaeroc'h ! »

Dallet gant ar gounnar, ar barner a ra sin da huala an daou gristen kalonek var eur marc'h-koat, evit brevi d'ezo o c'horf ha bruzuna o izili, pa 'z e guir n'en doa ket gellet lakat o c'halonou da blega. Varlerc'h ar yudazerez gouezze, e ro urz d'o dibenna. Hag ar bobl a oa eno o sellet, a jomas ken dibredet ha tra dirak eur c'hastiz ken heuzus...

Setu aze ar penn kenta eus ar relijion gristen en hor bro-ni. Betek netze (miz mae 288), kaer 'zo furchal, ne gaver très ebet eus an Aviel e gourenez Arvor. Ha souezusa tra ! varlerc'h merzerenti bugale an Naoned, e kouezas adarre ar vro a-bez e founz he zenvalijen a wechall, ne ziouanas enni kristen ebet ken epad tost da gant vloaz.

Avechou marteze eo bet c'hoarvezet ganeoc'h mont dioc'h ar pardaez-noz ebars unan bennak eus hon ilizou

parrez ; eno pep tra a yoa sioul ha tenval, nemet er penn-uhela eur c'hleuzer arc'hantet a lugerne gant sklerijen ar vouchedenig a zeve ennan didrouz ; a hent all netra ken na velac'h en iliz koz, netra nemet tenvalijen a bep tu. — Ar skrid a zigas d'eomp testeni eus maro glorijs an daou verzer yaouank a zo dem-henvel ouz goulaouen ar c'hleuzer-ze : epad meur a gant vloaz n'eus nemetan o rei d'eomp eur banne sklerijen bennag divarbenn relijion ar guir Doue an Arvor ; a hent all, kaer zo tourbapat ha friata, netra ne zizoloer, netra ne veler nemet mantel deo an noz-du...

Gouzout a reomp hebken e oe savet iliz kenta an Naoned gant sant Sklear, eur c'hant vloaz bennak goude merzerenti an daou vreur. Hini Roazon a yoa ive en e zav er pempet kantved, mes avad den na c'hoar difazi na gant piou nag e pe vare e oe savet. Mar deo guir ar pezh a gonter, kenta eskob iliz Guened a oe sant Patern ; an dra-ze a ra lakat ar penn kenta anezi vardro ar bloaz 465. Hervez eur greden hag a zeblant harpet mat, brasa missioner ar vro-man en amzeriou kenta eo sant Martin, a oe eskob e kear Tour epad pemp ploaz var 'n ugent (372-397) : brudet bras eo bet en e amzer ha meur a hini eus hor parrezioù o deus kemeret anezan da batron.

An ilizou-ze siouaz ! a vezo diskaret kalz anezo dizale, an dud en Arvor a vezo distrujet gant pobladoù gouez a velimp er miz a zeu o sailha var hor bro evel barrou kazarc'h hag oc'h hada dre ma 'z aint dismantr, freuz, goad ha tan...

IOEN AN TOUR-GUEN.

Kantik d'ar Plac'h Euruz Jeann d'Arc

Var don Kelven pe Breuriez ar Feiz.

*Beteg ho trôn en envou, o Jeann, henor bro Franz,
E kassomp holl hor peden gant feiz ha gant fizianz ;
Enebourien an Iliz a zav huel ho fenn,
En ho enep deut buhan, deut buhan d'hon difenn.*

O Jeann, en ho yaouankiz, pebez tristidigez
A zantit var hoc'h ene, pa zonzit 'n hor bro gez !
Beuzet eo ho taoulagad ; fraillet eo ho kalon,
O velet hor bro garet dindan treid ar Zaozon.

O Jeann, sec'hit ho taelou, Sellit varzu an Ee ;
 Ac'hano e teti sikour ; dont a rai heb dale.
 Bro Franz a vo dilivret gant eur plac'hik dister....
 C'houi eo. Stagit d'al labour. Arabad koll amzer.
 O Jeann, deut eo evidoc'h an amzer da guitaat
 Ar re a garit kement : breudeur, ha mamm ha tad.
 Daoust d'ho rann galoun, sentit ouz ho « Moueziou » santel ;
 Ar Franz, en he angoni, a c'houlén ho skoazel.
 O Jeann, nag a vuzudou a ra dreizoc'h Doue !
 Ho par, da ren eur brezel, ne oue gulet morse.
 Arme ar Zaozon, bodet en dro da Orlean,
 Ouzoc'h ne c'hell ket herzel ; tec'het a rank buhan.
 O Jeann, goude Orlean, e trec'hit e lec'h all,
 Hag enep deoc'h e klever ar Zaozon o yudal ;
 Mes, en despet d'ar gounar a verv en ho c'halon,
 Charlez seiz a zo sakret ; starteat eo he dron.
 O Jeann, al labour dispar ho peuz graet betek-henn
 A dlefe tenna bennoz, mil bennoz var ho penn.
 Mes siouaz ! petra veler ?... Heb dale oc'h guerzet,
 Taolet 'n eur prizoun heuzuz ha d'ar maro barnet.
 O Jeann, daoust in'ho peuz ato bevet 'vel eur zantez ;
 Kredet zo bet koulikoude kaout abek 'n ho puez.
 Gant eur barnet digaloun touellet gant Satan,
 Oc'h kondaonet da vervel, da vervel kreiz an tan.
 O Jeann, setu an tantad a dle ho merzeria.
 Strakal a ra ar flammou ha prest int d'ho mouga.
 Diou vech c'hoaz hano Jezuz a gouez enz ho kinou...
 Vel eur goulmik, hoc'h ene a nij prim d'an envou.
 O Jeann, euz barr an envou, taolit breman eur zell
 Ouz ar vro ho peuz karet, karet betek mervel.
 Dre ho skouer hag ho peden, roit nerz ha fizianz
 D'an dud leal a labour da zavetei bro Franz.

J. Bourdoulon
Misioner

Tennet divar *Kantikou evit miz Mari*, gouel ar Plac'h
Eurus Jeann d'Ark, ha sant Mikeal, gant eur misioner Breizad.

Ar c'hantikou-ze a vezo kavet da brena e ti Y. Salaün e
Kemper evit eur gwennek ar pez. (Daou wenneg dre ar post. —
Seitek real ar c'hant (trivac'h real ha daou wenneg dre ar post).

KANAOUEN NEVEZ da JANNED ARK

TON : *Sav, Breiz-Izel*

DISKAN :

O Janned Ark, truez ouz ar Frans !
Goulennit d'ho pro feiz hag esperans !

1

Kanomp, Breiziz, kanomp eur ganaouen :
Da Janned Ark, gwerc'hez Loren,
Enor ha gloar, mil ha mil meuleudi !
A bouez hon fenn laromp d'ezi :
O Janned Ark... (Diskan).

2

Plac'hig santel, du-ze e Donremi,
Abredik c'houi garas pedi ;
Hor bugale er skoliou dibater
Na glevont hano o C'hrouer...
O Janned Ark... (Diskan).

3

Ho karantez evit ar Frans, ho pro,
A rea d'eoc'h skuill daelou c'hoero
Oc'h he gwelet breset gant an estren
A venne gounit betek penn.
O Janned Ark... (Diskan).

4

Klevet a rid moueziou sentezed,
Mouez Mikel zo digaset
Da gemenn d'eoc'h ez oc'h bet dibabet
Da vouta 'r meaz ar Zaozoned,
O Janned Ark... (Diskan).

5

Ho soudarded nijet da Orleans
A sko kalet hep koll fizians,
Hag hepdale kear a zo digele'het
Hag an oll Zaozoned trec'het.
O Janned Ark... (Diskan).

6

Da Reims goude, ez it, a-berz Doue,
 Da lakat sakri ar roue ;
 Gant ho panniel, eno en e gichen,
 Janned, na c'houi a zo laouen !
 O Janned Ark... (Diskan).

7

Setu brema ho kefridi echu,
 Ha distrei d'ar gear a reot-hu ?
 C'hoant ho pijs, mes ar roue Charlez
 A zalc'h tost d'e zervicherez.
 O Janned Ark... (Diskan).

8

War an douar alies an anken
 A deu evel eur goumoulen
 Da zistaga tamm ha tamm hon ene
 Dioc'h traou ar bed, evit Doue.
 O Janned Ark... (Diskan).

9

Evel Jezuz, c'houi a zo bet gwerzet
 Hag en eur prizon du taolet ;
 Evel eun oan, evit ho pro garet
 E sakrifis oc'h kinniget...
 O Janned Ark... (Diskan).

10

Ho vertuziou, ho feiz, ho karantez,
 N'int ket bet manket eun dervez ;
 Ho nerz-kalon er boan a yoa padus,
 Hoc'h humilité dudijs.
 O Janned Ark... (Diskan).

11

Ha setu c'houi Plac'h eürus diskleriet
 Gant Hon Tad Santel Pi dekved ;
 Gwisket a c'hloar, kurunet a lili,
 C'houi zo da viken en dudi.
 O Janned Ark... (Diskan).

12

Gwerc'hez Loren, kouls hag en hoc'h amzer,
 Tristidigez zo 'n ho pro ger,
 Da Jezuz-Krist, d'e Vikel, d'e Iliz,
 E reer pell 'zo eur brezel griz.
 O Janned Ark... (Diskan).

13

Siouaz ! kollet e vezimp dizale
 Mar na deu d'eomp skoazel Doue ;
 Evit ar Frans, ho kalon 'lamm atao,
 Pedit, Doue ho selaou !
 O Janned Ark... (Diskan).

KLAODA 'R PRAT.

Yan Zoudard

Doue benniget ! eme Yan Zoudard en eur dol e dam-
 mig sac'h var e gein, setu me brao ! Goude beza labouret
 evit ar Roue epad pevar bloas var 'n ugent, n'em euz bet
 nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara ! Bah ! perag
 klemm hag hirvoudi, deomp ato e gras Doue. Hag en eur
 skei stard e droad kleiz var an douar, evel ma dle eur
 zoudard euz ar c'hlas hen ober, Yan, soun e benn, a ge-
 mer gant tiz an hent bras.

En dervez-se, dres, Jezuz ha sant Per a re eur valea-
 den var an douar, da glask eneoù karantezus, hag e
 c'houlennent an aluzen dre ma zent. Yan Zoudard en em
 gav ganto. Sant Per, gwest da c'hounid gwelloc'h ar galon,
 gant e benn moal hag e varo gwen, a c'houlenn digantan
 an aluzen. — Petra helfen rei d'eoc'h eme Yan ; goude
 beza labouret evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent
 n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara. Ka-
 lon vad gouskoude em euz, ha lodenna a rin ganeoc'h.
 Gant e gountel, Yan a ra teir loden euz e vara, a ro peb
 a dam d'an daou glasker hag a zalc'h an deirved gantan.

Diou leo pelloc'h, Yan en em gav a nevez gant an daou
 baour. — Kaout a ra din em euz c'hoas gwelet ar penn
 disto-ze. Mad ! daoust ha goude beza labouret evit ar



Roue epad pevar bloas var n'ugent, ha n'em euz bet nemet c'hwec'h a liard hag eul lur bara, ha ne jom mui ganen nemet an tammig kreun-man, me lodenno c'hoas ganeoc'h.

Feis ! eme Yan en eur vont gant e hent, n'eo mui bras an tam. Dreomp buan ar pez a jom, pe n'hellin ket soken gouzout pe vlaz zo gantan, ma tigoues c'hoas eur c'hlasker bennag ganen.

An heol a ze da guzat, pa en em gavas Yan Zoudard en eur c'horn tro, fri ha fri gant Jezuz ha Sant Per.

— En han' Doue, an aluzen va den mad !

— Gwerc'hez Vari ! toui a rafen em euz roet deoc'h c'hoas, hag e gwirionez goude beza labourer evit ar Roue...

— Epad pevar bloas var n'ugent... eme sant Per.

— Ah ! louarn kos, eme Yan en eur c'hoarzin, pa ouzoc'h kenkouls ha me va buez, kemerit ! Hag e ro dezan peyar liard.

Petra rin-me gant daou liard, a lavare ar zoudard kos, en eur vont gant e hent du e benn. N'em euz nemet staga d'al labour pe mervel gant an naon.

— Mestr, eme neuze sant Per da Jezuz, e tleffac'h en ho madelez ober eun dra bennag evit ar zoudard-se ; en deuz labourer evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent, ha n'en deuz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara, ha gouskoude en deuz o lodennet-ganeomp. Bras eo bet eun tammig e c'hinou mez kalon vad en deuz.

— Mad, a lavar Salver ar bed, galv anezan ha goulenn digantan e c'hoant.

Goude beza sonjet pell, Yan a lavar : Roit din ar galvoud da lakat da zont, var va ger, er zac'h a ze var va chouk, kement tra a falvezo ganen. — Ar pez a oe roet dezan.

Eun tammig larkoc'h, en eur dremen dre eur vourgaden, dre eun nor anter-zigor, Yan, a vel renket brao var eun dol, bara melen hag alaouret, hag a iistribill euz an treust, eur chapeled anduilennou. An eil hag egile en eur zellet outan a felle dezo lavaret : debr ac'hanomp !



D'ar zac'h eme Yan ! Ha setu ar bara o ruilla evel rojou, an anduilennou o ruza evel aered... eun d'ar zac'h. Mestr ha mevel a red var o lerc'h. Ber e chomont, bara hag anduilh a gers evel luc'hed hag a rikl etre o daouarn evel ziliennou.

Yan ato a zebre evel seis, en deis-se avad e reas ken bras kofad, ma tistagas oll boutounou e chupen. Euz an abardaez e tigouez en eur gear. Evel soudard kos, e sko kretege an Tikear da c'houlen paper lojeiz. — Ma z'hoc'h kristen mad, eme ar mear, ha soudard dispount evel ma z'eo dlet da gement hini a labour evit e Roue, me a lojo ac'hanoc'h en eun ti kaer tost aman. Ar perc'hen n'oa tamm troet gant ar relijion, pec'her aheurtet en deuz bevet, evel eur c'hi ez eo maro. Bep noz e tizro d'e di, ha den ne fell dezan loja ennan. Netra avad ne vanko did rag ar mestr oa pinvidig mor.

— Aotrou mear, Yan Zoudard morse n'en deuz 'krenet, hag eb marc'hata e zan d'an ti-ze.

Ar mear n'en doa ket lavaret geier. En ti-ze Yan a gavas tra evit tra. Ar c'hao oa leun a vin, hag euz ar gwella, ar gegin kargèt a vara hag a gig a bep seurt.

Mad, eme Yan, heman oa eun den a zoaré. Pec'hed avad e ve lezel an traou-man da louedi. An noz, marteze a vezo kaled, evomp ha drebomp. Kemeret a ra eur podad gwin hag eur c'harter leue evit koan.

A veac'h ma z'eo en em laket d'ober e geusturen ma klev eur vouez o c'hrosmolat er siminal: Disken a c'heller?

Disken, ma fell did, eme Yan Zoudard e griben ruz gant ar gwin en doa evet. An hini en deuz labourer evit ar Roue epad pevar bloas varn' ugent, ha n'en deuz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara, n'en deuz aon arog den. A veac'h m'en deuz komzet, ma kouez dirazan gar eun den. Yan a ra eul lamm, hag a stag ar pod euz e c'hinou da gemeret hardizegez.

— Fellout a ra did beza laket en douar? emezan gant eur vouez aounik. — Ar c'har varo a lavaras nan en eur hija he biz meud. — Brein aze neuze, eme Yan.

— Eun pennadig goude ar memez vouez a c'houlen:

— Disken a heller?

— Disken, ma fell did, eme Yan en eur gemeret e bod, an hini en deuz... Ar c'homzou all oe rastellet gant trous ar gwin o tisken en e gornailhen.

Eur c'har all a gwezas e kichen he c'hoar, hag aben neubeud korf bras, divreac'h hag penn eun den. An eil ouz egile en em stagont, ha dirasan Yan a vel eun den daonet korf hag ene.

— Yan zoudard, eme hen, gwelet a ran e z'hoc'h eun den dispount.

— Ia aotrou, bea 'z'oun. N'heller ket hen nac'h; ha goulskoude goude beza labourer evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara.

— Arabad did kemeret enkres gant kenneubeut a dra, eme an den maro. Ma fell did ober ar pez a c'hoantaen, e savetei va ene, hag e vezi euruz. Ober a ri?

— Ia, aotrou, ia avad ha ma rankfen griat hoc'h izili evit mirat outo d'en em zistaga.

— Deuz var va lerc'h neuze.

Yan Zoudard a zavas, orjellat a re avad var e dreid, kement en doa evet a vanniou gwin. Gwella ma c'hell e kemeras eur c'houlouen da sklerijenna an hent; an den maro he lazas. N'en doa ezom ebet a c'houlou, e zaoulagad a lugerne evel daou gef tan. Disken a rejont er c'hao.

— Kemer eur bal, ha toul aze, eme an hini maro.

— Toullit ma ho peuz c'hoant, eme Yan, me em euz labourer evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent ha n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara, ne fell ket d'in labourer evit eur mestr all, hag a roio din c'hoas neubeutoc'h marteze.

An den maro a gemer neuze ar bal, hag a denn euz an douar teir girin hag en eur o ziskues da Yan e lavaras: houman a zo leun a venneien, o ingala a ri etre ar beorien. Houman all a zo karget a arc'hant, hen dispign a ri o lakat pedi evidon. An deirved avad a zo leun a aour, ha did e vezo ma toues ober ar pez em euz lavaret.

Yan Zoudard a reas ar pez oe goulennet digantan ha gant e gerinad aour e teuas da veza an Aotrou Yan Zoudard.

An Iliz hag ar beorien a bedas kement evit an hini maro, ma n'hellas ket Lusifer lakat varnan e grabanou. Karget a zroug, e lakeas en e ben c'hoari eun dro fall da Yan. E floc'hig Satanik, en em gargas da zigas dezan hon den.

Yan a gemere an ear vad en e liors, ar c'horn en e veg, pa velas an diaoul bian o tont davitan:

— Devez mad, aotrou Yan!

— Did kement all, diaoulik, plijadur em eus ouz da velet. Jezuz ! na te zo divalo ! Petra a hellan kinnig did ! Eur c'hornad butun ?

— Ne fuman nemet soufr.

— Eur banne euz va gwinn ?

— Ne evan nemet tan.

— D'ober petra oud deut aman neuze ?

— D'ho kerc'het.

— Re a vadelez ho peuz. N'oun ket bet soudard epad pevar bloaz var n'ugent, evit kreñna dirag eur c'hos diaoul fall evel dout. Mont a ran da renka va zac'h evit an hent. Da c'hortos, sav er vezen-ze, fiez euz ar re vella a zo enni.

Satanig a gare kals ar fiez, drebi a reas leun e c'hinou ha drebet en dije c'hoas, ma ne vije ket en em gavet Yan gant e zac'h hag he ziframmet euz ar vezen en eur lavarret ; er zac'h !

Yan a gemer eur mail koad hag a sko varnan ken ma z'eo eat e eskern e bleud hag e gig e yod. Pa oe lezet da redet, Satanik ne jomas ket da dorta, buan e tiskennas en ifern.

Pebeuz fulor a zeas e Lusifer, pa velas e vabig o tigouezout en eur stad ken truezuz, morse n'helfec'h he lakat en ho spered. — Boued ar grouk ! Kement-se Yan Zoudard a gousto ker d'as lér, mont a ran va unan d'az kerc'het.

Yan he c'hede. Aotrou Lusifer emezan, ne vankan netra da zen, n'em euz aon arog den. Mad eo did gouzout kement-se.

— Ar pezh ez eo mad did te da c'houzout, bern teil ginou bras, troc'her buzug, eo e zez da zisken ganen en Ifern.

— Te ! Kas ganez Yan Zoudard ! Gortos ! Me a lakaio ac'hanout da lounka da deod, ha buan zoken !

— Te, amprevan !

— Ia, me fri kaouen ! ha da lakat a rin em zac'h, te, da gerniel ha da lost.

Er zac'h ! eme Yan. Lusifer kaer en doë kregi aman ha ahont, rei toliou pao a gleis hag a zeo a rankas mont er zac'h.

Yan neuze a gemer eun hors houarn hag en em laka, da skei varnan gwella ma helle.

— Han ! evit bern teil !

— Han ! evit ginou bras !

— Han ! evit troc'her buzug !

— Han ! evit amprevan !

Hag e kendalc'has e litanioù ken e oe deut Lusifer da veza tano evel eun tamm paper.

Feas e oa, hag e tigoras e zac'h. Awoalc'h emezan evit hirio. Ma velan ac'hanout c'hoas avad, tad ar geier ma zoud, ken gwir ha m'em euz labouret evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent ha n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara, me a ziframmo diganez da lost, da gerniel, da skilfou ha soken da groc'hen. Goudeze da biou a ri aon ? Kenavo !

Lusifer ne jomas ket da dorta. E lost etre e zivesker evel eur c'hi fouetet, e tiskennas buan ha buan en Ifern.

An diaoulou a iudas ouz he velet ? Petra d'ober mestr emezo ?

Mont, dillo da glask marichaled ha mansounerien. Red eo tacha, alc'houeza dorjoù ha prenestou an Ifern ; stanka kement toul ha faoud a velot, evit miret euz Yan Zoudard da zont ama.

Pa velas Yan Zoudard ar maro o tont, e kemeras e zac'h hag e ieas var hent ar baradoz. E kichen an nor e kavas sant Per o tivergla e alc'wesioù.

— Hola ! mignon da beleac'h e zit, kement a diz varnoc'h ?

— Sell ! d'ar Baradoz, da belec'h e zafen ken ?

— Eur mennos mad eo. An nor avad n'eo ket digor d'an oll. Gwelomp, petra ho peuz great epad ho puez ?

— Labourat evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent ha n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara. N'eo ket awalc'h, lavarit d'in aotrou ?

— Nan, n'eo ket awalc'h.

— Pennos n'eo ket awalc'h ! Gwelet a vezo, er zac'h !

— Yan, kristen out ! Kemer truez ouz va bleo gwen.

— Er zac'h ! er zac'h !

Ha Sant Per, a rankas mont er zac'h. Yan, va mignon emezan gant eur vouez truezuz, lez ac'hanon. An nor a zo digor, hag ar re ziot soken a hello dont er baradoz, ma ne vezan ket aze.

— Dres, evel doun-me ! a lavaras Yan en eur ken-



delc'her gant e hent. Daoust ha n'em euz ket duont
labouret evit ar Roue epad pevar bloas var n'ugent ha
n'em euz bet nemet c'hwec'h liard hag eul lur bara.

Roit d'ar paour, pedit an anaon,
Hag e c'hellot mervel eb enkreñ nag aon.

J. B. M.



Miz Mari Eskopti Kemper

Gant an aot. PRIGENT, kure e Brieç

(Pemp real e tiez an oll marc'hadourien levriou)

En hon amzer e karer mont da bardona, ha ne zeller
ket ous mont a bell, ne zeller nag ous ar boan nag ous
ar mizou. — Mad ! an aot. Prigent a ginnig deomp ive
mont da bardona gantan. Ne vezo na mizus bras (pemp
real hebken), nag inouüs, na poanius hor beac'h ; n'ez
aimp ket a bell ; hor pelerinach a vezo great en hor bro,
ha seul talvoudusoc'h a ze ne vezo ken ; rag ne anave-
zomp ket avoalc'h hor bro, nag an traou mad ha kaer a
zo enni. Da viz maë e vezo deomp staga gant hor beach ;
mont a raïmp gantan da vit an oll leac'hiou eus hon
Eskopti Kemper brudet gant madelezou ar Verc'hez e
kenver an dud, ha gant devosion an dud e kenver ar
Verc'hez. Da **Rumengol**, doun e Kerne ez aimp da
genta, hag ac'hano d'ar **Folgoat** e Gwele-Leon ; —
Intron-Varia-ar-Porzou er C'hastelnevez ha **Ker-
nitron** e Lanmeur a deuio da c'houde ; hent hir a zo
etrezo, mes red eo saludi da genta ar peder Gwerc'hez
kurunet.

Goudeze e raïmp gantan an dro d'an eskopti en eur
heuill an aot. Dre Gemper e komansimp en eur zaoulina
dirag **Itron-Varia Kerdevot**, ac'hano da **Veg ar
Raz** e Plogô en eur dremen dre chapelioù all ker brudet
hag ar re a hanyomp. — Eus Beg ar Raz an hent houarn
hor c'haso da Vrest, rag ber eo hon amzer, n'hor beus
nemet eur miz. E Brest goude beza pedet **Intron-Varia
Garmez**, e skoimp varzu **Trezian** e Plouarzel, ha
Kerzent e Landunvez ; hag ac'hano da Gastel da velet
Intron-Varia Kreizker en eur dremen dre **Verven**,
Lambader ha **Prat-Coulm**. Evit kloza ar veach ez
aimp da Vontroulez da vit **Intron-Varia ar Vur** goude
beza saludet en eur dremen **Intron-Varia Callot**,
Penzez ha great eun ehan var menez ar **Salett**.

Me zo sûr, ar re o dezo great er bla-man an hent gant
an aot. Prigent, a c'hoantaio hen ober adarre er blaz a
zeu.

F. C.

« BREIZ KARET »

Pez-C'hoari e tri Arvest.

Gant an Aot. Adrien DE CARNÉ

12 gwennek e tiez an oll leorien

« Breiz karet » a zo eur pez-c'hoari nevez savet gant an Aot. Adrien de Carné, evit tenna stulten Paris diouz pennou Breiziz. — Paotred Brélès, kenvroiz an Aot. de Carné, o deus bet, evel just, an tanva kenta; hag, evit doare, kement o deus klevet ha gwelet an displega kenta eus ar pennad-skrid-se, o deus kavet kals saour gantan. Va-unan, kerkent ha digouezet ganen al levrig, n'em eus great nemed eur c'hinaouad anezan. Eas eo da gompren, yac'h ha didroidel ar brezoneg ennan, sklear ar gentel da denna, ken sklear ha dour feunteun Sant-Roch, e Kastel-Paol.

« Yvonik, bet dezan eun heritach bras, pevar mil lur, mar plij, a c'hoanta gounid ganto e ber amzer, eur fortun gaër. Kaout a ra dezan ne c'hell lakat e arc'hant da dalvezout ervad nemet o vont da Baris. — E vennoz diboell a zo diskuillet da eur c'hos lampon deus ar re falla, Yan-ar-Broc'h, Breizad e-unan, mes eur Breizad trubard o chom e Paris. Eno n'hen deus ken micher nemet ar vicher a laër, ha divar goust e genvroiz nevez choarvezet er gear vraz eo e ra e daoliou divalo. — Yvonik touellet gantan da vont d'hen heuill, ne zale ket da veza great dezan evel d'ar re all. Gwin kousket 'zo roet dezan da eva; ha kerkent ha ma'zeo klozet e zaoulagat, Yan-ar-Broc'h a gutuil ar pevar mil lurig hag a dec'h kuit heb lezel e adress. Yvonik, ouспен ma'z-éo laeret a zo c'hoas tamallet e-unan da veza laer ha taolet er prizoun.

» Koeza'ra en dienez ar vrasa ha dare eo soken da goll e benn. Brao eo dezan kaout eur mignon mad e Bro-Breiz, Stephan ar Fur. Heman, en despet d'e oad, a ya d'he gerc'hat d'ar gear. Ha setu ar mab prodig distro. Prometti a ra stard ne raio morse mui, hag ar re all a bromet gantan ne raïnt ket eun hevelep sottoni; rag c'hui Breiz-Izel

Douar a garomp, douar leun a vennoz,
C'hui zo evidomp korn ar Baradoz. » F. C.

LAVARIOU MIZ MAE

E miz mae.
Ar c'hezek a dol o zae.
Da viz Mae.
'Lam ar zegal dreist ar c'hal.

Pa gano an druzumel
M'em bo lez leun ma skudel.

Goude miz ebrél da fin eost
Da dan ebet na da tost.

Brumen vor
Tomdea e gor.

Mogeden divar ar mor,
Eol tom ken a faouto an nor.

E miz mae
Glaou bemdez a zo re
Re neubet bep eil de.



Respont da zivinadennoù miz Meurz

- I. — Saludi e Vestr. — Adori e Vestr. — Pec'hi, etc.
- II. — Ar mor.
- III. — Eun aval, pe n'eus fors pe seurt frouezen rond.
- IV. — 40.000 krampoezen. — Kals ne ouzont ket e ya pevar liard da ober eur gwennek.

O deus kavet peder respont :

4. — Nicolas Le Guen, Athanase Pengam, Angèle Le

Saout, Plouzeniel. — Guillaume Cadiou, X. Sibiril, François Picot, Jean-Yves Le Guen, Plouvorn. — Jean-Marie Normand, Jean-Fr. Bécam, Guiclan. — Marie Salatin, Y. D., Sant-Nouga. — Anne-Marie Habasque, Kernilis. — Joseph Bégoc, kurust e Landunvez. — Marie-Anne Guillou, Cléder. — Fr. Lapous, Sant-Thegonnet. — François Croguennec, Loc-Eguiner. — Françoise Le Guen, Guilers-Brest. — C. Bihan, Landivisiau.

3. — Yves Corre, Paul Gourmelon, Plouvorn. — Jeanne-Louise Choquer, Plouénan. — Nan Lannuzel, Ploumoguier. — Mathurine Apamon, Jeanne Tréguer, Etienne Rest, Yvon Lhostis, Isabelle Milin, Plouvian.



Divinadennoù Miz Ebrel

- I. — Eus a rouanez
Eo koezet da vatez ;
Furch, difurch eman dre an ti
Ha n'he deus na ginou na fri.
- II. — Kaer 'zo teuler ennan
Tam ne gresk ;
Kaer 'zo lammet dioutan
Tam ne zigresk.
- III. — D'an douar heritour,
El lenn leun c'hlandour,
Mignon da bep aotrou
Ha kompagnon d'an ankou.
- IV. — Petra a vez astennet e vuez dèzan
En eur e laza ?

Feiz ha Breiz

Kanpad Misiiek ar Vretouped

An Aviel

Moulla a reomp adarre eul lodennig eus an artickl « An Aviel » bet lakeat e niveren miz Ebrel. Re a fuziou a oa er voulladur evit ma vije bet eas da gompren.

An Aviel kenta. — Eun abostol, sant Vaze, eo hen renkas. Hano kenta an abostol oa Levi, ervez m'en desk sant Mark ha sant Lukas (Mark, chap. 11 ; Lukas, chap. v). Kredabl he hano a oe troet dezhan pa voe galvet gant Jezuz : hag an hano a Vaze a ziniñ « Roët gant Doue ». Er gout a rit, Jezuz a droas evelse o hano da zant Per ha da zaou vab Zebede. Araok beza galvet gant Jezuz, sant Vaze, a ioa karget da zastum an taillou, var ribl lenn Tiberiad ; Jezuz a c'halvas anezhan gant eur ger ebken ha sant Vaze a zilezaz peb tra evit mont gant Jezuz. Gonde ar Pantekost, e prezegas an Aviel er Palestin evel an Ebestel all. Divar benn ar bloaveziou diveza euz he vuez, n'ouzor ket kals a dra : kredi a reer eo bet merzeriet goude beza prezeget en Ethiopi, en Arabi hag en Pers.

Sant Vaze a skrivas he Aviel e'yez ar Juzevien euz ar Palestin, ar yez-se a gomzas ho Zalver he unan : her skriva a reas evit ar Juzevien euz Jerusalem hag euz ar vro-ze. Ar pezh a glasse Sant Vaze araok peb tra oa displega freas d'ar Juzevien oa Jezuz e gwirionez ar Messias kemennet dre ar Propheted (hed-a-hed) an Testamant koz ha setu perag en Aviel kenta e kavomp kalz a gomzou euz ar Propheted ; e kavomp er penn kenta lignez hor Zalver displeget, rag gwella gwir ar Messias ervez ar Juzevien oa beza euz lignez ar roue David ; ar sermoun var ar menez a ziskueze e Jezuz an hini a ro lezennou d'an holl ; ar barabolennoù divar benn ar Rouantelez a ziskuez eo deuet da brezeg d'ar beorien ; hag evelse

penn da benn, an Aviel a zispleg d'ar Iuzevien e kaver e Jezuz an holl merkou euz ar Messias : en displega a ra en eur skriva buez he Vestr. — Gouzout oa Jezuz ar Messias gwirion a ioa mad ha red zoken evit an holl Iuzevien skignet du-man du-hont, hag an Aviel kenta a oe troet neuze e gregach aben nemeur : an Aviel-ze eo a zo deuet beteg ennomp.

Aviel sant Mark. — Mam sant Mark a ioa o chom e Jerusalem, hag en he zi en em zastumas ar gristenien genta. (Aktou, chab. xii, 12). Pa deuas sant Per euz ar prisoun, dijadennet ma oe gant eun Eal, da di sant Mark eo e ieas ; ha sant Per en doa evit Mark eur garantez a dad ; kredabl bras, hen eo her badezas (I lizer sant Per, v. 13). An aviel en doa ive an hano a Iann. (Aktou xii, xii, xv). Kenderv oa da sant Barnabe ha dre-ze e veachas gant sant Paol epad eur pennad ; goudeze e prezegas gant sant Barnabe e enez Chypr. Ea he lizeri sant Paol a lavar e tizroas Mark davitan. Gant sant Per eo e veachas ar muia, evel diskibl ha sekretour, goude ar bloas 42, pa oue red da Vestr an Ebestel tec'het euz Jerusalem abalamour da Herod Agrippa a walgase ar Gristenien. Sant Per a deuas da Rom hag e brezegennou eno a zougas kals frouez. Ar gristenien nevez a c'hoanteas kaout dre skrid ar pezh o doa klevet a c'hinou ; ha var goulenn an Abostol, sant Mark a skrivas an Aviel : sant Per a roas he aotre da labour he sekretour : evelse oe great an Eil Aviel. An tadou kenta euz an Iliz a zo a-unan evit lavaret e prezegas sant Mark an Aviel en Egypt Izela, e savas Iliz Alexandri, e oue kenta eskob ar gear-ze, e oe merzeriet eno ervez ma kreder peurliesea.

Pa lennomp an Aviel ervez sant Mark, kenta tra a sko ar spered hag an daoulagad ive eo, ez eo kalz berroc'h an Aviel-ma eget an hini kenta. Petra zo kirriek a gementse ? sant Mark ne skriv ket evit ar memes lennerien : ar re-ma n'int ket Iuzevien mes Romaned ; kent-a-ze an Aviel n'eus menek ebet gantan eus ar pezh a zelle ous ar bobl Juzeo. — Oberou Hor Zalver, e viraklou, e c'halloud a Zoue var bep tra, setu a betra e komz dreist-oll. Pa lakeer an daou Aviel kenta skoaz ha skoaz e veler mad en deuz sant Mark anavezet aviel sant Vaze, rag an traou a zo dibabet ha kempennet hevel-mik. Goulskoude anat

eo sant Mark a zo bet kenteliet gant sant Per diouz an doare ma komz euz an Abostol. En Aviel ervez sant Mark ne lennomp ket prezegennou Jezuz evel en Hini ervez sant Vaze ; gwelet a reomp ervad Jezuz o veva, o labourat, o tiskuez eur c'halloud a Zoue, hag o c'houzanv eur basion garo meurbet.

Aviel, Sant Lukas. — Ar gristenien genta ho doa hast bras da zeski peb tra diyar ben ho Mestr, ha skriva a reant kement a glevant gant an Ebestel. An Aviel kenta, skrivet e yez ar Iuzevien, a oe troet e meur a yez, astennet tam dre dam er skridou-ze. Ar skridou-ze, testenien euz ioul-vad ar gristenien genta, a zo, siouas ! kollet evidomp. Red oa d'an Iliz, iaouank flam c'hoas, kaout eun istor hirroc'h ha klozoc'h divar benn hor Zalver : an Aviel Sant Lukas he roas d'an Iliz. Hem a ioa ganet euz kerent paian ; kristen oa bet great gant an abostol sant Paol ; desket oa, a dra zur, rag an abostol a lavar oa medesin (*Lizer da dud Kolos*, ch. vi) ; ama hag a-hont en Aviel e kavomp komzou a vedisinez. Gant sant Paol e ieas da veachi ha da brezek an Aviel ha gant an Abostol e choumas betek he varo. Petra deuas da veza goudeze ? Diez braz eo el lavaret. Oajet braz oa pa oe merzeriet. (*II. Lizer da dud Corinth*, ch. viii).

Sant Lukas a lavar ar pezh n'eo ket bet lavaret gant an daou aviel kenta ; an drederen euz kement a zo en e Aviel a deu euz he berz, evel ma zeo pemp eus ar miraklou a gavomp en e levr hag an daouzek parabolen. Ar pezh a glak eo deski gant ar re o deuz darempreded Jezuz. Diskibl Sant Paol, kenseurt Sant Barnabas, dont a ra da Jerusalem evit ober goulennou ouz Sant Per, Sant Jakez (a vije lavaret anezan oa breur d'hor Zalver) ha Sant Yann, an diskibl muia-karet. Anavezet en deuz kerentiach Jezuz hag he vam, ha kerentiach Yann-Vadezour. Lennet en deuz an holl skridou a zo menek anezo er chabistr kenta euz e aviel, hag an daou aviel all. Evit gwelloc'h rei da anaout kerentiach hor Zalver, e komz euz ginnivelez Sant Yann Vadezour, eus e vugaleach hag hini Jezuz ; komz a ra ouspen euz buez Jezuz epad ar pevar pe bemp miz ma redas du-ma du-hont adalek ma kuiteas ar Galile betek ma tizroas da Jerusalem e kreiz meuleudi ar bobl a-bez. Lavaret a ra ouspen ar re all penaoz e sa-

vas hor Zalver euz ar bez leun a vuez, hag penaoz e pignas d'an nenv (er chabistr kenta euz an aktou skrivet ganthan ive). Sant Lukas a glask ive renka an traou ervez ar bloaveziou hag evelse e hellomp gouzout pe vloaz eo ganet Jezuz, — pa oa Herod o c'houarn ar Judee, — pe vloaz e stagas da brezeg, — ar pemzekved bloaz abaoe ma rene Tiber — Sant Lukas, en e Aviel a ziskuez deomp Jezuz, zalver evit an holl, evel m'her prezege Sant Paol, evel m'oa en em ziskuezet e-unan ; anat eo, an avielier a fell d'ezhan rei d'ar bañaned ar brasa fizians da veza salvet dre Jezuz, Sant Lukas a ziskuez deomp madelez ha trugarez Salver ar bed ; ha da bep pajen eus e Aviel ec'h anavezomp raktal « Mab an den deuet evit savetei ha nan evit koll, evit pardoni kentoc'h eget evit barn an dud ». — En Aviel S. Lukas e kavomp ar pevar gantik kaer a zo-bet hag e vezo hed an oll c'hantvetchou kantikon an anaoudegez vad : ar *Gloria in Excelsis* kanet gant an Oehez. ar *Magnificat*, ar *Benedictus*, an *Nunc dimittis*.

An Aviel-man a zo bet skrivet e gregach, ha da gredi eo, e bro er Gres eo bet great vardro ar bloas 60.

Aviel sant Iann. — Ar c'hantved kenta a ioa dare da vervel hag eun niver braz a fals kredennou a oa en em skignet dre ar bed kristen : lod euz an heretiked kenta a lavare n'oa ket Jezuz eun den gwirion, lod all a nac'he e viche eun Doue ; red oa dislavaret ar fals doktored-ze : eun Abostol en em zavas eneb dezo hag a skrivas ar pebare Aviel. An Abostol-ze eo sant Iann an diskibl muia-karet. Mab oa da Zebede ha da Zalome. He dad a oa pesketaer var mor ar Galile ha Yann a reas ar vicher-ze e-unan epad meur a vloaz. E vam a ioa eus ar merc'hed en em westlas da bourchas pep tra da Jezuz. Er penn kenta, sant Iann a oe diskibl da Iann-Vadezour ; gant heman oa pa velas Jezuz evit ar weach kenta. An tri Aviel all a lavar deomp penaoz eo bet galvet ha great Abostol gant hor Zalver. Gant sant Per ha sant Jakes e velas brasa miraklou e vestr, hag e boan skrijus er Jardin Olivet. Evel ma z'oa an diskibl muia-karet, evit ar Goan diveza, oa an tosta da Jezuz. Eun ene en doa birvidik meurbed, ha Jezuz a leshanvas anezo evel he vreur « Boanerges » da lavaret eo « Mad ar Gurun ». Aliez, en

Aviel hag en Aktou, e velomp sant Iann gant sant Per (sant Lukas ch. xxii, Iann, xiii, xviii, xx, xxi, Aktou M, iv, viii). Ha gant sant Paol e teskomp oa sant Iann e kousuil Jerusalem. (Lizer da dud ar Galadi, ii, 9).

Peur e ieas a-grenn Sant Iann kuit euz Jerusalem da brezeg an Aviel d'ar bañaned ? Kelennadurez an holl Dadou a lavar deomp e ieas en Asi-Izela, dreist holl e kear Ephes, e vevas pell amzer eno. Sant Irene, diskibl da zant Polykarp a ioa bet kenteliet e-unan gant Sant Iann, a gomz deomp aliez en e skridou euz labouriou an Abostol er vro-ze. Euseb a Zezare ha kalz re all a lavar penaoz eo bet karluet gant Domitian e Patmos goude beza bet taolet en eus gaoter eol-béro. Mervel a eure var dro ar bloaz kant goude donedigez hor Zalver ; an Impalaer Trajan eo a rene neuze var ar bed romen.

Sant Iann eta a oe pedet da skriva he Aviel gant an Eskibien a ioa e penn an Ilizou en Asi-Izela, ha gant an Abostol sant Andre. Hag, e gwirionez, hini ebet na c'helle dislavaret gwelloc'h ar fals doktoret euz an amzer-ze. Sklerijennet gant ar Spered-Santel, evel an avielierien all, Sant Iann ne joum ket da ziviz gant an heretiked, evel ma ra Sant Paol ; ne glask nemet lavaret kement en deuz klevet ha gweled, nemet rei testeni d'e vestr, nemet kreski ar feiz e Jezuz, den ha Doue assamblez, ha kavout dreizan ar vuez a bado da viken (Iann xx). — Petra eo Mab Doue ? Pere eo al liammou a stag anezan ouz an Doue a c'halv e Dad ? Petra eo deuet d'ober er bed-ma ? Petra eo ar zilvidigez oe deuet da rei d'an den ? — Lavaret kement-se setu ar pebare Aviel a-bez. Taolit evez ! N'eo ket Sant Iann a gomz, mes Jezuz he unan, rag hen a helle he hunan komz deomp euz he natur a Zoue. Ha sant Iann a zispleg deomp penaoz Jezuz a zo ganet gant e Dad a holl viskoaz. Er pebare Aviel Jezuz e unan eo a gomz d'an dud evit lavaret a beleac'h e teu, ha petra en deuz kefridi da ober. An traou great gant Jezuz — nemet daou zra : — kresk ar bara e dezert Bethsaïda hag ar bale var an dour — ervez sant Iann n'emaïnt ket en tri Aviel all : ar re-ma a lavar ar pez a veler e Jezuz, sant Iann a lavar kement ne veler ket : an tri genta a ziskues an den e Jezuz, ar pebare Aviel a ziskues an Doue.

Ar pevare Aviel a zo ket kemeret atao evel eun Aviel gwirion skrivet gant sant Iann. An holl Dadou Santel euz an Iliz, koulz lavaret, a anevez e an Aviel-ze ha netra ne c'hell herzel ouz komzou sant Irene. Ouspenn-ze : ma kemeromp an Aviel en e bez, ma sellomp piz outhan dioc'h ar munut e vezo red deomp anzav eo bet skrivet an Aviel-ma gant eur Iuzeo, ganet er Palestin, hag an deuz gwelet e-unan kement a zispieg, hag a ioa unan euz an Ebestel, ha ne c'helle beza nemet Iann, mab da Zebede. Kaer a vo lavaret e zeuz kem etre an Aviel-ma hag ar re all, an dra-ze ne ra mann ; rag pa skrive sant Iann e Aviel, doare an Iliz Santel n'oa mui he doare pa skrivas an avielerien all o hini. — Sant Iann a skrivas e Aviel e Gregach, lod a lavar e Patmos, lod all e Ephes er bloaveziou diveza euz e vuez.

Setu, lennerien va mignouned, eun diverra euz ar pez a zesk deomp an dud gwizieka divar henn ar pevar Aviel.

Koz meurbed int ha gwirion. An dud gwiziek e kement-ma a zo holl a unan evit lavaret oa savet ar pevar aviel araok ar bloavez kant goude donedigez hor Zalver. An avielerien o deuz gwelet o unan a pez a skrivont deomp, da vihana her c'hlevet o deuz gant ar re o deus gwelet an traou-ze ; hag, e gwirionez, penaoz lavaret e prezegont ar gevier, zoken pa gomzont euz traou burzudus meurbed, euz miraklou Jezus ? An avielerien o deuz dre o buez dibec'h, dre o merzerenti diskuezet sklear hag anat oant tud eun ; ha dre-ze o deuz diskouezet mad e kredent kement a lavaret, hag oa gwir ive kement-se ; rag o c'homzou a ioa harpet var traou a ioa a vel d'an holl ha den ebet ne c'helle ~~en en~~ fazia varno.

Gwir eo eta ar pez a lavar deomp an aviel a bez ; hogen an aviel euz ar penn kenta d'an diveza a ziskuez d'an holl dud eun a spered hag a galon eo Jezus eun den gwirion, eo bet kemeret evit-se gant e genvroiz er galve gant dismegans « mab ar c'halvez Joseph » ; rag-se, Jezus a zo eun den gwirion, daoust ma 'z eo bet ganet dre eur mirakl souezus bras. Hag gant Sant Athanas e c'hellomp lavaret « hor Zalver Jezus Krist, mab da Zoue a zo Doue ha den : Doue eo, rag ganet eo a holl viskoaz gant e dad, den eo ganet euz korf e vam abaoue m'eo bet krouet ar bed, Doue eo ervad ha den parfet gant e gorf hag e ene par d'hon re. »

F.-M. MAZÉAS.

Difennour bihan ar Relijion

(KENDAL'CH)

Ar falz doktor. — Kredi a-walc'h a ran ez eus eun Doue ; hoguen, n'hellan ket lakaat e taolfe evez ouzomp ; rak ma sellfe ouz an dud e rafe vad d'ezo e pep darvoud, ha ne vijent ket reuzeudik evel ma 'z int.

An difennour bihan. — Doue, Aotrou, a daol evez ouz e grouadurien ; pe e plij ze d'eoc'h pe ne ra ket, n'eus forz. Doue a c'houarn atao ar bed, hag a raio, daoust da lavarou diboeel eur rumad tud a zo. Ha neuze, livirit ama d'in, daoust ha chomet hoc'h pell a-walc'h da zellet evit gwelet ervat ? — Ha neuze, perak hoc'h ken berwelet ma varnit holl draou ar vuez evel pa dlefe echui pep tra pa ziskennomp er bez ?

Eun dra vras a gavan gwelet kement a dud o c'houlen ma vezo rentet kont d'ezo eus an holl darvoudou, eus ar reuziou a c'hoavez dre ar bed, eus doareou an Ao. Doue da gas an traou en dro ; c'hoant o deus da c'houzout distak ar perak eus a bep tra, evel pa vije Doue o servicha dindanno ! Ha kement-se, war o meno, a renk beza great dioc'htu, evel pa vije divezat goude ar maro.

Ya, Doue a zell ouzomp. Ha da genta, va den mat, grit eur zell war ar bed-oll. Kement tra a welit a zo bet great netra hep mennoz, her gouzout a reomp dre al lezennou en deuz roet d'ar grouadurien. Hogen, n'eus nemet an den hepken var an douar a gement a c'hellfe lakaat an holl draou da dalvezout. Pe seurt plijadur a gav d'eoc'h en deus eun den o sellet ouz ar stered o lugerni e bolz an nenv ? Pe seurt pliladur en deus eur marc'h o sellet ouz eur vleuen, ouz eur vro goant ? Pep hini eus al loened-se a glask e voued el leac'h ma c'hell e gaout, ha ne daol nep evez ouz an traou kaer a zo endro d'ezan ; ne daol evez ebet ken nebeut ouz ar pez a zo o terri o fenn d'ar re n'int ket henvel outan ; n'eus nemet an den hepken hag a c'hellfe gwelet sklear en traou kaer krouet gant Doue evitan : hen hepken a gav saour ganto, o laka da dalvezout hag a oar lenn war hep hini anezo hano ar Mestr bras o greas.

Pep tra eta, al loened zoken, a zo great evit an den hag an den eo roue ar grouidigez.

Doue ne zell ket ouzomp ? setu aze eur guchen ! Perak eta e teu ar pevar amzer an eil warlerc'h egile gant ar poent da hada pe da eosti ? Perak deiz da labourat hag an noz da ziskouiza ? Perak e kouez dour war ar parkeier ? Perak ez eus tomder gant an heol ? Perak ez eus groez gant an tammou koat a daoler en tan ? Penaos eta o deus al loened zoken kement a zo red d'ezo, nan hebken evit beva, mes ive ar pezh a zere ouz peb hini anezo evit difen o huez ? Ar c'had he deus diwesker evit redek, ar prenv a ya da gouzat en douar, ar c'hi en deuz e zent, ar c'haz e ivinou, al labouz e veg.

Penaos eta eo great ker mat ha ken brao korf an den ma 'z eo eun dra zispar er grouidigez ? Hor c'hiz a zo ennan eun niver bras a lochennouigou munut a gemer an eil leac'h eben, hep ma c'houfemp na pegoulz na penaos ; hor gwad a gerz eus eur penn d'ar penn all ac'hanomp, kaset gant hor c'halon, hep ma santfemp anesan. Penaos eo reizet ker brao an eskern-ze a zo staget ken start an eil ouz egile ? Perak ema hor genou hag han daoulagad e kreiz hon drem, dres evit ma c'hellimp en em zervichout anezo easoc'h a-ze ? Perak e kavomp saour ha blaz vat gant ar boued a zebromp, ha perak e teuont-i da veza troet e kig hag eskern ? Hag e livirit c'hoaz n'en deus Doue preder ebet ganeomp, n'en deus ket roet d'eomp ar pezh a yoa dleet ? Ehanit da lavaret sotoniou evel-se... N'hoc'h euz ket sellet tost a-walc'h.

Truez hoc'h euz ouz bugale eu c'henwerzer (1) a zo eat e stal da stalig. Din in a druez. Entent a rit evelato n'eo mui d'ezo ar madou foranet. Mar teu eta eur penn-tiegezh da zibri an holl vadou a dlie beza lod e vugale, daoust m'eo ze difennet gant gourc'hemennou Doue, war biou e taolot ar zamm ? Piou, war ho meno, eo a zo klakus, pe Doue pe an den ? Daoust ha tamall a reot an Ao. Doue abalamour ne jom mui netra gant ar vugale-ze ? Ac'hanta, setu eno koulskoude ar pezh a reaz Adam ; kollet en deus an donezon da veva eürus hep mervel, ha brema, kaer hod deus, n'hellomp ket kaout eun eürusted wirion er bed-ma.

KLAODA 'R PRAT.

Da genderc'hel.

(1) Commerçant.

DIVARBEN ar SKOLIOU

(Kendalc'h)

Talvoudegez eun ene

En dro ziveza e tiskuezemp eo ar vugale d'o c'herent : o c'herent a gar anezo, a glask o mad, a ra ar pezh a c'hellont evito. Doue, an Hini en deuz great mad peb tra eo en deuz lakeat e kaloun ar gerent ar garantez-se evit ar vugale. Ma ne vijent ket karet ar vugale, petra deufent da veza ? Paourkeaz krouadurigou eb an distera tam nerz, a rank chom el leac'h m'int taolet, buhan e vijent samet gant ar maro kriz. Mez, dre c'hras Doue, en dro dezo e zeuz tud d'ho c'haret, d'o beva, d'o guiska, d'o difen diouz peb droug, da veilla varno, hag e c'hellint evelse poulza, sevel da veza braz, hag aben eun neubeud bloaveziou e vezint guest da c'hounid o-unan o bara.

Kerkent, avad, ha ma teuo oad d'ar c'hrouadur, avechou abretoc'h, avechou divezatoc'h, e veler e spered o tigeri, e teu skiant dezañ, hag e vel skeroc'h-sklera bemedez petra eo an droug, petra eo ar mad, e rank an den tec'het diouz an droug, ober ar mad, karet Doue.

Petra zo er bugel-se'ta ouspenn ar c'horf ? Bez e zeuz eun ene : eun ene great gant Doue, a zo evel eun eulfen euz spered Doue. Hag an ene-ze a zo eur spered, eur spered ne varv ket, great evit anaout, karet Doue, great evit ar Baradoz. An ene-ze abaoe ar vadiziant a zo merket gant gras Doue, hag evit beza mad, an ene a dlefe chom ato e karantez Doue, stag ato ouz Doue. Eur c'hristen mad eo an hini zo e stad a c'hras, an hini a zo Doue o chom en e galon. Hor c'halonou, evel ma komz Sant Paol, a dlefe beza templou ar Spered Santel, a dlefe beza kaer evel an aoteriou eman Doue o chom enno.

Evit hon eneoù Jésus-Krist a zo diskennet euz an Nenv, a zo ganet e kraou Bethleem, en deuz bevet er baourentez, a zo maro var Groaz goude beza skuillet beteg ar berad diveza euz e c'hoad. Evit hon eneoù hen deuz savet he Iliz, fiziet enni ar Zakramanchou, lakeat da zisken var an douar grasou an Nenv.

Ia, setu pegen braz eo ar c'hristen, pegen huel eo savet

gant Doue. Great eo evit ar Baradoz ; ma tremen e vuez o karet, o servicha Doue, e vezo da genta eüruz er bed-man ha da c'houde eüruz da viken er Baradoz.

Rak-se an tadou hag ar mammou o deuz da veilla var o bugale, da zifen an enecou fiziet enno gant Doue, d'o diouall diouz peb droug, do viret na vezint kollet gant skueriou ha kelennadurez an dud fall.

An oll er goar, stank eo an dud fall en hon touez, stank eo ar skridou, ar skueriou fall. Bez' e zeuz tud ha ne fell ket dezo anaout Doue, e garet, e zervicha, bez' e zeuz tud hag a vez guelet o saotri o ene, o stlabeza e fank ar pec'hed saë ven o Badiziant ; fae a reont var Aviel Jesus-Krist, fae a reont var ar Baradoz... Nan, a lavaront en o c'haloun, n'euz Doue ebet. Klaskomp hor plijadur er bed-man, lakomp kurunennou roz var hor pen, drebomp hag evomp, rag piou c'hoar ha ni a vezo c'hoaz e buez vare'hoaz?... Setu kanaouen ar bec'herien e peb amzer hag e peb leac'h.

Bez' e zeuz re all a vije lavaret eman en o c'horf an drouk-spered, ne eanont da ober brezel d'an dud vad, brezel da Zoue ha d'e Iliz.

Doue er meaz euz ar skoliou, euz an hospitaliou, euz a bep leac'h. Setu an urz roet gant framasounded Frans ha ne c'helfe den niveri an torfedou great a nevez so a eneb guirioù Doue,

Mez, daoust ma zeuz kalz tud hirio e trei kein pe oc'h ober brezel da Zoue, ni evelato a vel mad e reont fall, e zint tud diskiant ; barnet e vezint divezatoc'h gant an Hini a c'hoapeont breman ha keuz o devezo d'ar pez o devezo great.

Da c'hedal, ar gerent gristen a dle difen o bugale a eneb an dud fall-ze a glask dre o lezennou miret na vezo mui karet ha meulet Doue var an Douar. Ar gerent kristen a zavo var o zreid hag a lavaro eb aoun d'an dud fall-lakr-se : « Ni fell deomp e ve hor bugale kristenien evel-domp ; n'e ket anevaled bihan eo int, mez kristenien badezet, o deuz eun ene da zavetei. Ni a gav, o karet Doue, joa ha levenez ; ar relijion a ra vad deomp, a ro deomp nerz da labourat, da c'houzanv eb en em glem ar poaniou a guez varnomp ; ma ne gredfemp ket e Doue, ni a vije ken fall pe falloc'h eget ar re all ; ni glaskfe ivez neuze hor

plijadur er bed-man ha n'hon divije ket aoun evit laerez ha goaska han nesa pa glaskfe miret ouzomp da gaout hor plijadur, ni fell deomp e ve hor bugale tud vad evel-domp, tud a zoujans Doue ; ma karont an Aotrou Doue, ma sentont ouz e lezen, e vezint bugale fur, hon devezo plijadur ganto ; anez doujans Doue, e raint mez deomp ; ne fell ket deomp e teufent da veza evel an dud fall-ze a vez great *Apaches* anezo. »

Ia, kerent kristen, setu eno petra leveroc'h, rak gouzout a reoc'h petra eo bugale savet eb doujans Doue. Piou n'eo ket spountet o klevet an torfedou great bemdez e peb leac'h. Ne glever hano nemed euz laeroni, lazerez hag a bep seurt traou fall. Ha piou ra an traou fall-ze ? Tud iaouank flam aliez, bugale zoken avechou.

N'e ket souezuz. Anez doujans Doue, an den a zo diez braz dezan beza fur. Pa deu an ioulou fall da virvi er galoun, perak chom eb koutanti anezo ? N'e ket lezennou, n'e ket aoun da vont dirak ar barnet, da veza faolet er prizoun eo a lakaio an dud da veza fur ha mad. N'e ket diez laerez, laza avechou eb beza guelet.

Ouspen-ze nag a bed tra all zo fall ha ne c'hell den gouzout. Kement a dremen er spered, ar zonzou, ar c'hoantegeziou fall, ne c'hell den o anaout.

Ia, ma ne zeuz Doue ebet, ma ne zeuz ket eur vuez all goude hou-man, diskiant e vije an den a jomfe eb klask e blijadur er bed-man. An dud fur neuze eo ar re o divije ar muia madou ar muia plijaduresiou, ha neuze forz pe-naoz.

Eaz eo kompren petra en em gavje ma ne vije nemed ar c'hredennou fall-ze etouez an dud. Breman e zeuz kalz lampounded o c'haloupat an hentchon, a bep seurt visou fall oc'h o heul, muioc'h a vije c'hoaz ma vije mouget ar relijion en oll galonou.

Hag abalamour da-ze ar gerent kristen a lavaro eb aoun : « Biken ne lezimp deski d'or bugale traou kountrol d'ar relijion. Mam sant Louis, Blanch euz ar C'hastill, a lavare d'he mab : « Guelloc'h e ve ganen da velet maro eget stlabezet gant ar pec'hed marvel. » Ni ivez a zo guelloc'h ganeomp guelet hor bugale o vervel eget guefet anezo o trei kein da Zoue, o koll o ene. »

Da gendalc'her.

I. U.

Kloerdi-bras Lambezelleg

Kenvreuriez ar Brezoneg d'he izili a enor

AOTRONED KER,

N'eo ket heb eun tamm aoun e kasemp d'eoc'h, breman zo daou viz an diverra eus hol labouriou, moulllet er *Feiz ha Breiz*; ne ouiemp ket pe seurt digemer a c'helle da gaout diganeoc'h. Var c'hed edomp eta eus ho parnedigez... Mes m'ho peus barnet ac'hanomp eo ennoc'h hoc'h unan rak n'eus deuet lizer ebet d'eomp, nag evit lavaret oa mat nag evit lavaret oa fall ar pezh hon doa great... Evelse eta, n'ho peus ket tilouret eur ger, ni a zalc'h hor frankiz da gredi hon deus skoet eun ha da vont larkoc'h var an hent nevez.

Renerien K. azB.

Diverra eus labouriou daou viz

(Genver ha C'houevrer)

Arack deraoui gant labour ar bloaz nevez eo red d'in dont var va c'hiz evit lakaat dindan ar memes taol-lagad teir brezegen an aot. Guellec var ar peziou-c'hoari brezonek roët er Kenvreuriez, an hini genta d'an eil a viz kerzu, an eil d'ar c'houec'h hag an drede d'an ugent a viz Genver... O veza m'eo bet great ar prezegennou-ze e galleg e kavan guelloc'h o diverra er yez ze evit roi eur mellezour guirroc'h eus an traou kaer a oa enno.

Le théâtre breton

- I. Les origines du théâtre breton.
- II. Décadence et Renaissance du théâtre breton.
- III. Mise en scène : auteurs, acteurs, costumes, décors (autrefois et aujourd'hui).

I. Les origines du théâtre breton

Très riche, le théâtre breton contient cent vingt-six mystères — alors que le théâtre français n'en compte que cent-dix — se répartissant en quatre cycles : le cycle de l'Ancien Testament contenant : La création du monde, la vie de Jacob et de ses enfants, la vie de Moïse, la vie

de Saül et de David ; le cycle du Nouveau Testament comprenant : la vie de sainte Anne, la vie de saint Jean-Baptiste, la vie de saint Pierre et de saint Paul, la vie de l'Antechrist ; le cycle des saints avec : la vie de sainte Catherine, la vie de sainte Barbe, la vie de sainte Nonne, les vies de saint Antoine, de saint Alexis, de saint Guillaume, de saint Laurent, etc, etc... le cycle romanesque offrant : les Quatre fils Aymon, Charlemagne et les douze pairs, Orson et Valentin, Huon de Bordeaux.

Vingt-six de ces mystères ont été imprimés ; le reste est manuscrit. Le mystère imprimé le plus ancien que nous possédions date de 1539 ; c'est la Passion, suivie de la Résurrection ; puis viennent : la vie de sainte Barbe (1557), la vie de saint Guénolé (1580), la vie des trois Rois Mages (1745), les autres sont d'après 1800. Les manuscrits ne sont pas anciens ; la vie de sainte Nonne ne remonte pas au delà des dernières années du xv^e siècle ; la vie de saint Antoine est du xvii^e siècle. Tous les autres manuscrits sont, sauf erreur, du xviii^e et xix^e siècle... Les manuscrits diffèrent beaucoup par le dehors, et leur aspect intérieur n'offre pas une moindre diversité ; les feuillets, en effet, de quantité très inégales, sont reliés avec du fil fort, quelquefois avec de la ficelle ; les couvertures, là où elles subsistent sont tantôt en parchemin, tantôt en cuir noirci ; il en est qui sont d'une belle ordonnance, écrit de bonne encre, avec des lignes droites et des caractères nettement tracés, affectant même volontiers un certain air gothique cependant que d'autres, en grande majorité, sont tout l'opposé d'une calligraphie savante. Les copistes aussi bien n'étaient-ils que describes occasionnels, laboureurs ou tisserands s'entendant mieux à manier la charrue ou à pousser la navette qu'à conduire une plume, même quand cette plume était bonne — ce qui n'était pas toujours le cas à en juger par cette surcharge naïve que l'on relève à tout moment en marge des manuscrits : « Comme pour voir si ma plume est bonne... » Vieux à peine de cent ou deux cents ans, ils paraissent avoir subi l'affront de cinq siècles, tant ils sont jaunes, enfumés, poudreux, crasseux ; c'est qu'ils ont été rédigés dans la cuisine, sur la table, à peine desservi des reliefs du repas familial, par des mains terreu-

ses et remplies de sueur ; c'est que cette rédaction durait des mois et des mois, c'est qu'enfin, cette rédaction terminée « après beaucoup d'embarras », les manuscrits pérégrinaient de foyer en foyer, souvent fort loin de leur berceau.

Mais ce théâtre dont s'enchantaient nos aïeux et qui constituait à peu près tout leur univers intellectuel était-il d'inspiration originale, sortait-il vraiment du terroir breton ou bien n'était-il qu'une adaptation plus ou moins heureuse au caractère de notre race ? Souvestre et de la Villemarqué le tiennent pour une éclosion naturelle du génie armoricain et l'auteur du « Barzaz-Breiz » apporte trois arguments en faveur de son opinion : les nocés bretonnes, dit-il, ne sont que les débris évidents d'un ancien drame national ; anciens drames aussi les bardits païens destinés à accompagner les danses guerrières et mimiques en l'honneur du soleil qui figurent sur deux médailles de Cénomans ; le grand mystère de Jésus est de 1365. M. A. Le Bras, au contraire, veut qu'il soit d'inspiration étrangère, surtout française et d'abord il réfute ainsi l'opinion de la Villemarqué : Les nocés bretonnes ne présentent pas de trace de drame ; les danses sont un peu de tous les pays et de tous les temps ; et les demandes en mariage faites en forme dialoguée entre le « bazvalan » et le « brentaer ne sont point spéciales à la Bretagne. Les bardits païens suggérés à la Villemarqué par la vue des médailles des Cénomans existent il est vrai, mais depuis leur éclosion magnifique sous la plume de la Villemarqué lui-même... seulement ! Quant au grand mystère de Jésus, il vient en droite ligne d'un mystère français œuvre des frères Gréban, la critique textuelle l'établit d'une façon péremptoire... Donc le théâtre breton n'est pas le fruit spontané de notre vieux sol granitique ; les plus anciens monuments qu'ait produit notre art dramatique sont nés d'une imitation française plus ou moins directe. Mais une fois implanté « chez nous » cet art était destiné à y pousser des racines solides et profondes ; de la souche française n'allait pas tarder à croître, à se ramifier, une épaisse frondaison locale, surtout dans les pays de Vannes et de Tréguier...

II. Décadence et Renaissance du théâtre breton

La destinée du théâtre breton au cours des âges nous est surtout connue par les persécutions qu'il eût à souffrir et de la part de l'autorité civile et de la part de l'autorité religieuse. Dès avant 1565, le Parlement de Rennes avait fait « défenses de jouer aucuns mistères, farces ou moralités » ; de 1566 à 1600, les prohibitions se succèdent presque sans désemparer ; — 1570, 1577, 1598. — Durant tout le XVII^e siècle, en revanche, profonde accalmie... Mais les foudres du Parlement ne sont qu'endormies : dès l'aube du XVIII^e siècle — l'ère par excellence de la tragédie rustique en Bretagne, elles se réveillent plus impitoyables que jamais, à l'instigation de Olivier Jégou de Kerlivio, évêque de Tréguier de 1694 à 1731 et « janséniste enragé » au dire d'Albert le Grand, puis de Charles-Guy Le Borgne de Kermorvan, deuxième successeur de de Kerlivio. Les raisons de cet ostracisme se ramènent à deux griefs principaux : on reprochait d'abord aux « tragédies » d'être la cause d'une foule de désordres — les acteurs « pour se mettre en état de jouer leurs rôles » abandonnaient « pendant un temps assez considérable leur devoir et les travaux de la maison paternelle » ; on ne se faisait pas faute non plus de « tirer en cachette », des armoires de la maison les belles hardes familiales et de les revêtir, soit pour paraître avec plus d'éclat sur la scène, soit pour se montrer plus avantageusement au spectacle ; enfin, répétitions et représentations étaient l'occasion de liesses bruyantes, d'excès de boisson, d'altercations violentes, parfois de coups échangés. — On leur reprochait ensuite d'être des œuvres impies : d'exhiber des papes, des cardinaux, des évêques, affublés des plus innommables oripeaux ; d'estropier les Ecritures, de profaner la liturgie, d'accommoder les prières à toutes les sauces, etc. Et ce deuxième grief, nos aïeux ne le pouvaient comprendre, eux qui, dans leur foi naïve, croyaient être les précieux auxiliaires du R. P. Maunoir en représentant des vies de saints. Ils se soumirent pourtant et les « tragédies » cessèrent... mais pour un temps seulement !

En 1888, Luzel fit jouer à Morlaix « Sainte Tryphine et

le roi Arthur » après avoir fait beaucoup de réclame dans les journaux de... Paris! Les Parisiens arrivèrent et s'en retournèrent criant à la mystification. Luzel très fort « en matière de Bretagne » manquait totalement de sens pratique: il avait fait jouer sa pièce dans une cave, devant un auditoire surtout composé de ronds-de-cuir, par des acteurs habillés en dragon et en tringlots fin de siècle.

Dix ans plus tard, MM. Cloarec, Le Goffic et Le Bras, organisèrent à Ploujean, la représentation de la « Vie de Saint Guennolé » pièce tout à fait médiocre — fond et forme. — Ce fut quand même un succès relatif, comme un prix d'encouragement accordé par les autorités littéraires présentes à ceux qui tentaient la résurrection du théâtre breton. Au « souper » traditionnel, M. Gaston Paris but à la résurrection du théâtre breton, résurrection possible à la condition de représenter non plus la « religion d'un autre âge » mais la « religion de notre temps » c'est-à-dire la souffrance humaine. Au toast de ce païen les Bretons ont répondu: « Nous sommes chrétiens, notre foi nous fournira l'inspiration! » Et nous avons vu « Maro Sant Trémeur » et « Dragon Sant Paol » illustrer cette réponse. Inutile, me semble-t-il, de vous analyser ici ces deux pièces que vous connaissez tous. M. le rapporteur les a déclarées très belles quoiqu'à des titres divers — que je ne veux point vous énumérer à sa suite pour ne pas risquer de froisser la modestie de leurs auteurs respectifs. — A côté de ces deux tragédies, je cite pour mémoire: « La Passion » et la « Trahison de Judas » de F. Breudeur, sujets empruntés à l'Écriture Sainte; « Jeann d'Ark » de M. Madec, sujet emprunté à notre histoire nationale; « Kériolet », et « Nicolasic » de M. Le Bayon; « La Tour d'Auvergne » et « Pont-Kallek », du barde Taldir; « Fontanella » de « Goyen », sujets tirés de l'histoire de Bretagne; « Ar guir treac'h d'ar gaou » du barde Ab-Alor et « Ar Vezventi » de M. Le Garrec, pièces à thèse... Enfin, notre théâtre a aussi son répertoire comique: « Alan al Louarn », « Ar c'hornandoned », « Jozon el lagouter », « Trubuilhou an aot. Gargam », an « Teir c'had hag ar mevel laër », « Biel al Liardou »... etc.

III. Mise en scène : auteurs, acteurs, costumes, décors (autrefois et aujourd'hui)

Les auteurs de nos vieux mystères se sont contentés de nous léguer leur œuvre, sans se préoccuper de nous fournir le moindre renseignement sur leur personnalité. Quels ils furent et à quelle catégorie sociale ils appartenaient, la plupart ont négligé de nous l'apprendre. La plupart furent ou des prêtres ou des « cloër » ou des maîtres d'école...

Si l'on a peu de renseignements positifs sur les auteurs de mystères, on n'en a guère davantage sur les acteurs. L'arrêt du Parlement de Bretagne, du 24 septembre 1753 nous les représente comme des « jeunes gens de la campagne », « des enfants de famille », des « artisans » et des « laboureurs ». « Nous n'avons pas eu la langue affectée à la meule » disent les acteurs du mystère d'Eulogius. En un mot, c'étaient des gens du peuple, dénués de toute préparation spéciale. Pour les recruter, le promoteur de la future représentation, « ar mestr », chargeait le crieur public d'annoncer l'événement. Les compétiteurs arrivaient si nombreux que « ar mestr » n'avait que l'embarras du choix... La composition de ces troupes improvisées était des plus électives: toutes les corporations villageoises y étaient représentées; tous les âges aussi, depuis la prime adolescence jusqu'à la pleine vieillesse. Les infirmités mêmes ne constituaient pas un vice rédhibitoire. Seules les femmes étaient sévèrement exclues... Dès que la troupe était constituée, l'organisateur s'occupait de faire copier les rôles, soit par les acteurs eux-mêmes, quand ils savaient écrire, soit le plus souvent par « des femmes qui avaient passé par le couvent ». Les rôles copiés, il fallait les apprendre; heureux ceux qui savaient lire! les autres devaient se faire lire et relire et relire encore, jusqu'à ce que ce fût su comme du catéchisme. Anges de patience, les femmes encore se chargeaient de cette ingrate besogne...

C'était enfin aux femmes que revenait le soin de confectionner les costumes. Il va sans dire qu'en cette matière la superstition de la couleur locale leur était inconnue. Chaque acteur utilisait ce qu'il avait et le

faisait accommoder à son goût. Il y avait pourtant de véritables collectionneurs d'anciens costumes, qui tenaient leurs gardes-robes historiques libéralement ouvertes aux acteurs nécessiteux...

Dès que les acteurs étaient familiarisés avec leurs rôles, les répétitions commençaient. Tout le temps que durait cette période d'élaboration, c'est-à-dire la majeure partie de l'hiver, il n'était pas un des membres de la troupe qui ne vécût dans l'agitation et la fièvre... Les principales saisons de l'année dramatique étaient Noël, les Jours gras, Pâques surtout...

L'édification de la scène n'exigeait ni grands efforts ni grande dépense. Son architecture, en effet, semble avoir été de tout temps des plus élémentaires : c'était une estrade en bois, élevée d'un peu plus d'un mètre au-dessus du sol et dont les planches reposaient soit sur des barriques, soit sur des chevalets. Sa longueur était d'environ quinze pas sur huit de profondeur... Tous les corps de métiers tenaient à honneur d'y apporter leur contribution : les menuisiers, les charpentiers fournissaient les bois et prenaient à leur charge le gros œuvre ; les aubergistes cédaient leurs futailles vides ; les paysans faisaient les charrois.

Vient le jour de la représentation. Hommes, femmes, enfants sont accourus de quatre et cinq lieues à la ronde. On commence par entendre dévotement la messe dans l'église de la bourgade, puis, après un déjeuner sommaire, on se rend en bandes à la lice... Comme l'angelus de midi vient de tinter au clocher, voici paraître les acteurs en costume. Personne ne se souciait d'être le « prologueur » à qui incombait la tâche redoutable d'affronter le premier le public, sa fonction se tirait au sort et, dans presque tous les manuscrits, on l'entend se plaindre que le sort soit tombé sur le plus ignorant. Le prologueur disparu dans la coulisse, la tragédie commence. Heureuse la troupe qui possède un bon souffleur ! Non pas que les acteurs ne sachent parfaitement leur « leçon » ; mais la plupart sont novices, gauchies, prompts à s'intimider ; puis il cumule en même temps les fonctions de directeur de la scène et de régisseur ; toute la conduite de la représentation repose en

réalité sur lui. Toutes les fois que dans le manuscrit ses yeux rencontrent le mot « scène » il crie d'une voix impérieuse : Scène tout ! Et l'on assiste alors à ce spectacle aussi étrange qu'inattendu : tous les acteurs demeurés dans la coulisse se précipitent pêle-mêle sur la scène et saisissant par la main ceux qui s'y trouvaient déjà, se mettent à danser au son de la musique une sarabande effrénée, où c'est à qui fera le plus de vacarme sur les planches. Ces folles sarabandes avaient toujours un vif succès auprès du public ; aussi était-ce là un jeu de scène dont le souffleur usait volontiers...

La longanimité du public n'avait d'égale que sa candeur ; et rien ne marque mieux la passion dont il était possédé pour les spectacles que l'incroyable patience dont il faisait preuve aux représentations. On en aura une idée, si l'on songe que ces représentations duraient trois, quatre heures d'affilée, et que, pendant tout ce temps, sous le soleil ou sous l'averse, la foule restait campée sur la place, debout, les regards rivés à la scène, les pieds comme enracinés dans le sol. Hormis aux endroits comiques, un recueillement religieux planait sur l'assemblée. Jamais d'applaudissements, même quand le pathétique était à son comble ; mais une émotion fervente, contenue, des faces baignées de larmes silencieuses, parfois une sourde explosion de sanglots... A la nuit tombante, les spectateurs se dispersaient par bandes dans toutes les directions, devisant le long des routes assombries des merveilles qu'ils emportaient dans l'esprit...

Voilà comment les choses se passaient autrefois... Qu'y aurait-il à faire aujourd'hui ?

Et d'abord, doit-on organiser des troupes à la campagne ? Il semble qu'il faille répondre oui, où cela est possible. On objectera que cela aurait pour effet d'attirer les jeunes gens au bourg. Et cela est vrai, on pourrait en abuser, mais de quoi ne le pourrait-on pas ? D'autre part, tout homme, le paysan comme le citadin, a besoin de distractions, de délassements, de plaisir en un mot ; il importe donc que le plaisir soit honnête ; celui que procureront les représentations théâtrales peut l'être et le sera toujours, quand le prêtre s'en mêlera. Et quand, avec ce

plaisir, le théâtre fournira un enseignement moral, donnera une leçon d'histoire ou réfutera tel sophisme courant, sa raison d'être sera doublée. Enfin, c'est là un moyen excellent de se connaître, de se compter, d'essayer ses forces, en un mot « de se sentir les coudes. »

La grosse difficulté est d'avoir des représentations vraiment intéressantes, les chefs-d'œuvres étant rares et les acteurs médiocres ! Bah ! rappelons-nous que nos ancêtres n'étaient pas exigeants et croyons jusqu'à preuve du contraire, que nos contemporains ne le sont guère plus. Et puis le progrès est toujours possible...

Dans le recrutement de la troupe — paroissial autant que possible, — il ne faut prendre que des jeunes gens sérieux, choisis indistinctement dans toutes les conditions et sans exception de couleurs politiques... Cette méthode a déjà fait ses preuves...

A la suite de M. le rapporteur, je ne veux pas entrer dans les questions « du moment des répétitions », « du local », « du prix des places », etc... toutes ces choses étant à étudier sur place, suivant les données des circonstances...

Je termine donc ce compte-rendu en rappelant et les applaudissements nourris qui ont souligné maints et maints passages de ces trois conférences et les chaleureux remerciements de M. le président à l'adresse du conférencier.

D'ar yaou, trizek a viz genver, an aotr. Bot a réas eur gammet muioc'h var hent histor Breiz...

D'an dalc'hou all, an aot. Rener a gemeras evitan e unan an abadenou penn-da-benn, da genta evit reiz a deveriou, da c'houde evit boulc'ha eur geriadur lakeat gant ar Genvreuriezh var ar sterna. Setu ama penaoz en em gemeromp gant al labour nevez-ze : c'heuilha 'reomp eullevr hanvet : « les mots anglais classés d'après l'usage » evelhen, sellit : l'Homme : An den (homo) masc. ; plur. tud ; tudou : catégorie de gens ; tudigou : petites gens. Ar goaz (vir) masc. ; plur. goazed. Gour : usité seulement désormais dans l'expression négative : « n'em^{eur} gour » ou : n'eur gour... Expressions : Den eo ; il est à la hauteur de la situation ; né vo ket koz-den : il ne fera pas de vieux os ; grit ar

goazig : expression familière dont une mère se sert pour apprendre à marcher à son enfant... etc... Eun dousen c'heriou a vez roed e peb dever... Pep-hini her gra ervez e ran-yez ha kement tra vat a gavomp en deveriou a vez taolet var baper ; ho labour, her gouzout a reomp, n'eo ket hep si ; pell-pell e chomo var ar sterna, ma vez lezet var gein ar Genvreuriezh he-unan... Mes ma teufec'h-c'houi, aotronek ker, da roi dorn d'ezi, ervez ho kouiziezh hag hervez hoc'h amzer, na kalz buhannoc'h, na kalz guelloc'h ez afe an traou en dro. Abenn eun neubeut bloaveziou, e vellfemp eur geriadur nevez-flamm ouz en em ripat ouz ar voullerez...

D'an 10 a viz c'houevrer e tlee digouezout hor gouel vloaziek... Siouaz ! maro an aot. Y. Héliou — Doue d'e bardouno, — hor c'henveur hag hor mignon meurbed keuziet, en eur lakat ar Genvreuriezh e kanv, an deus miret ouzomp d'e lida evel ar bloaveziou tremenet. N'hon deus eta kanet — hirvoudet a ve red d'in lavaret — nemet : « Kimiad ar c'horf hag an ene » eus Barzaz-Breiz, na lavaret nemet eun « de profundis » evit reposvan ene hor mignon e gloar ar Baradoz !...

An diverrer : F. LE GALL.

Ar sekretour : J. DILASSER.

Ar rener : F. GUÉGUEN.



EUN DEVEZ PLIJADUR !

Ma karjent beza eat d'an oferen !

Yan Lapik oa e hano mad, ha dindan an hano-ze oa kahieret en ilis hag en ti-kear. Mes abaoue m'oa eat da Baris ha dimezet d'an dimezel La Fleur ne responte mui nemet ous Jean Le Hardy. — Pa oe komanet da ober al lez d'an dimezellik-ze, houman, eur vourc'hizez koezet eus lost ar c'har, mes eur yalc'hadik brao a arc'hant dezi, a zisklerias grons ne zismesfe morse da eun den hag a zouge eun hano ker glapez-se. — « Ne fell ket din, emezi beza galvet Madame Lapik. » — Yann, dall-put var spe-red kintus e zouzig kouls ha var he helgez forc'heg hag

he fri kam ne sonjas nemet ober diouti. « Goude tout, emezan, Lapik n'eo ket eun hano ker brao-ze ; an hano-ze n'eo mad nemet evit eun troc'her buzug... Eul lap ! an dra-ze a sinifi eur c'hardi... Sell ta ! emezan, eur c'hardi !

Setu eun hano a zoare evidon. Hi a gredo ar pezh a garin konta dezi. » Hag hen ha lavaret d'he zimezellik e sinifie e hano brezoneg « Le Hardy, an den dispount. Lapik, emezan, ha Le Hardy a zo kavatal. » — Ne zellas ket ous rei eun dornadig mouniz d'ar « juge de paix » evit chenj hano. Divar neuse, ne oue mui hanvet nemet Jean Le Hardy.

Jean Le Hardy n'oa ket eur gwal gristen anezan. E vam, kristenez eus ar re vella, he doa c'hoanteat soken ober eur beleg anezan ; mes, d'ar skolaj pa oue kaset ne reas netra nemet uza ar bankou ha difonsa eun nebeut bragezeier. Achu e studi, ne oue ket karet mad evit ar c'hloerdi-bras ; an dra-ze a blegas dezan eun tammig e douchen, mes kaout a reas e zigarez o lavaret n'oa an traou-ze nemet trucherez tout. « Hini ebet, emezan, eus va c'hamaradet n'eo goest da gempen eur bajen skritur eveldou-me. » Ha gwir oa.

Dorned mad oa ar potr evit skriva. Zoken, eun noter eus ar c'hanton er c'hemeras evit skrivanier bihan. Neuse e savas ar c'herc'h d'e c'houzoug adarre. Breman, n'oa mui nemet Paris, ar gear-benn hag a vije din da zigemer eur pabor eveltan.

Mont a reas da Paris. Eno en devoe meur a veach naoun du araog ma c'hellas tizout eur plas da c'hounid e dammig kreun, ha var-var e oue meur a veach da zistrei d'e vro, panefe aoun rag goaperez e genvroiz. Kement-se, divar ar mare, dre uza fors bouteier o vont eus an eil tu d'egile da skei var an doriou, e kavas skrituriou da ober, hag o veza ma oa dorned mad e c'hellas en em zila evel skrivanier e buro ministr al Labourou. Sayet oa breman e graf gantan. Songit-ta ! mil lur ar bloas evit mont da gemeret eun azezen epad eiz heur bemdez e buro ar ministr ! Ah ! n'eo ket an oll a vije bet goest da dizout ken uhel ! Me gred eo varlerc'h Yann eo bet kontet an histor fentus-man : Eun devez e gamaladet a c'houlenn digantan petra en devoa da ober e buro ar ministr. — « Me, eme Yann, me zo o sikour ar re all. — Hag ar re all, petra reont ? — Ar re all ! ne reont netra ! »

Neuse eo e kemeras eun hanter-tiegez. Siouas ! Bete neuse en doa bevet paour mes didrabas. Divar devez e eured n'en devoe peoc'h ebet mui. Kerkent hag asezet en ti e veze ar c'hri varnan. Kaer en devoa beza sioul, plega e benn, hi ne baouezze ket outan, atao e veze ar freill en he dorn hag ar rebechou c'hoero var e muzellou evit lopa varnan. M'en dije bet da vihana eur c'hrouadurig, en dije bet gallet staga e galon dious an tu-ze ; n'en devoe ket an eur-vad-ze ; eus a beleac'h ? gant eur bervet evel hounezh !

— Bete neuse ez ea d'an oferen. Alas ! Buhan e oue distroet penn e gazek dezan en dro pa gomzas eus mont d'an ilis. « Klevit an amboubal-man, emezi ! d'an oferen ! C'hoant e peus-ta da lakat ac'hanoun var an douar noas. Ar gouarnamant ne zalc'h ket o fiasou da zarempredieren an ilizou ! » Ha flao ! ha flao !

Deiz ar zul Fask e savas muioc'h a c'hoant gantan da ober evel ar gristenien all. Hi, dre m'he devoa eun habit nevez a c'hoantea kaout an tu d'en diskues hag ee'h asantas gantan eur peunadig. Ar c'hoant-se ne badas ket pell ganti ; eur froudenn all oa deuet en he fenn. « D'an oferen, emezi, nan ! Disul ez aimp da goat Fontainebleau da gemeret ear vad ar mœziou. Fontainebleau a zo darempredet gant an dud a zoare ; di e c'hellomp mont. » Yann a rankas soubla e benn adarre evel ma oa boas, ha great e oue ar pourchasou da vont da Fontainebleau.

Tostât a rea an heur da ziloc'h, hag an itroun n'oa ket fichet kaer avoalc'h c'hoas. Yann a groge ar grenien ennan, mes ne grede lavaret grik gant aoun da dizout eur freillad. Mes, gant aoun ive da veza tamallet e lavarar, abars ar fin, ken goustadik ha klouarik ha tra :

— N'hen deus ket a amzer da goll ma fell deomp erruont evit heur an train. — Lakeat e peus da dok ?

— O lasa va c'horf-kenn emañ. Ha neuse an horolaj a zo araok. Yann en devoa roet eun taol biz d'an nadozen evit gounid pemp minut, ha goulskoude :

— Me gred kentoc'h e vije varlerc'h.

— N'eo ket gwir, emezi rok, araog eman ; me oar petra lavaran, mechans ! Evit pemp munut treveil am eus c'hoas, n'ec'h eus ket a leac'h da veza enkrezet. Mac'h en em viske an oll verc'het ker buhan ha me !

— Sûr avoalc'h e vankfomp an train, eme Yann en eur azeza hag o kregi en eur journal da lenn.

A benn eur c'hart-heur :

— Prest out, pelloc'h ?

— Ia, ia, setu achu. Ne peus tamm habaskded ! Oh ! ar woazet ! pebeuz pennou barboellik ! n'o deus taken da ober vardro an ti hag e vezont en o disul eun heur araog ma vez deuet ar mare.

— N'eus ket da veza nec'het ! mankont a reimp an train.

— Ia, pe e chomimp da rida gant ar riuou ous er gedal epad diw heur evel ma c'hoarvezas pa oamp bet e Trouvil.

— Gedal sur hor boa great dre 'n abek ma oa partiet an express, hag hor boa ranket deport eun train all...

— Ia, an train omnibus... sonj avoalc'h em eus, ha dre va faot me oa, marvad ?

— Ia, da...

— Ar gemenez e doa digaset va c'hazeken re zivezad ; petra 'm bije great ?

— N'out ket prest, ne dalv ket ar boan...

— Les da chaok, sell-ta ! Lakat a res va nervennoù da virvi. Kers alese da glask eur wetur... En doare-ze ec'h en em gavimp e kouls vad hag e vezo peoc'h ganez. Me c'hedo ac'hanout d'an traon.

Yann a zentas, ha dizale eur wetur grân a c'hede an itrounik e tal an nor. Madamik n'oa ket diskennet c'hoas. Edo Yann o pignat a benn er an deleziou pa zigoezas hi gantan o tiskenn ken dillo hag all. Guigour a oa enni muioc'h-mui :

— Ha beza keit all emezi o klask eur wetur !

— Perag ne ziskennes ket ?

— Me ioa var evez ac'hanout, dre ar prenestr.

— Alo ! ne gollomp ket amzer o tekoni. Buhan, kaser, da c'har Lyon !

Setu Madamik azezet breman ; ne oue ket pell diflach ; ne bade ket var he zorchen ; riboul-diriboul atao oa e yresa ; hag epad an amzer-ze he zeod a ie kouls all en dro evit grosmolat : al loën ne vale ket... Klaoustre ez'affemp buhanoc'h var hon troad, erruet e vijemp dija... eur c'hagn mad d'ar givizerez eo e peus klasket... Bremaik e c'hellimp adarre glaouri varlerc'h ar marc'h-dû. Set' aman eur guden ! Ha dre va faot-me e vezo adarre, kre-

dabl ! E leac'h kemeret ar c'henta gwetur e pije kavet var da hent ! sklear eo, al loën-ze n'eo ket goest da redet... marc'h ar babu n'eo ken.

Epad ar soroc'h-ze hon aotrou ne lavare ger, nemet eur hein ! hein ! benag a randonelle dre e fronellou.

— Anzav e kement-se out bet dievez ! eme an itron dezan en e fas. Lavar ia 'ta !

— Gouzout a ran mad-tre eo sonet nav heur hanter hag e' ia an train en hent da nav heur pemp var 'n ugent.

— Ia, var baper. An train ne loc'h morse d'an heur, te oar.

— Ar veachourien eo ne loc'hont ket atao d'an heur hag an train a ia.

An itronig a sav he diouскоaz. Lavigat a ra adarre var e skabel evel pa vije var glaou heo.

N'oa ket dindan zivin. Pa errujont, an train a oa loc'hed abaoue dek minut. Red oue d'an daou geaz chom epad eun heur hanter da c'headal eun all. Amzer adarre da huanadi, da gunudi, da vresa o imor dindan o zreid. An itroun a zistaole dizamant divar he c'halon.

— Ma n'eo ket tri mil diskiant mankout an train evelse ! Evit dek minut ! Ma karjes beza...

— Beza petra ? Ma pije kabalet eun nebeut muioc'h...

— Ne ouien ket an heur ; an holoraj a vez atao var araog. Ne c'heller morse gouzout heur vad ebet ganti. Me fizie var va montr.

— A jom varlec'h, douetus, eme Yann goapaüs.

— Ia, doc'htu, eme an itroun o ruzia gant he dipit, dre ne ouie mui var biou teuler ar beac'h ; mad, te er c'haso d'ar rhabiller. Goude tout, e tliez gouzout ervad ne erruchemp ket d'an heur, ne poa ken da ober, e leac'h lenn ar gazeten. Talvezout a rea ar boan beza bet ken hejet hor c'horf er wetur, hag evit petra ? Klanv oun !...

Hir e oue kavet an amzer, keit hag eur zizun, da nebeuta. Erruet an train, e pignchont ennan. An amzer a ioa brao, ar veach a oue kavet ber ; an denvalijen a zamme o speret, an enkreze a waske o c'haloun, eun nebeud amzer diaraok, a roaz plas d'ar joa, d'ar frealzidigez a skede breman var o dremm. Daou zen evurus, là !

— Deomp raktal da goat Fontainebleau, eme an Itron.

— Oh klev 'ta ! Kreiz-deiz eo... Ne ve ket fall deomp,

marteze, kemeret hor pred abarz mont dar c'hoat...
M'em beuz eun naoun da zebri bili !

— Ha me sec'het da zaouri ezen ar glazvez, da gemeret ear vad ar meaziou.

— Gant eun banne dour sitrons e kreiz.

— Dal ! setu aman va den adarre ; hag e talvez ar boan dont var ar meaz evit tremen an amzer en eur c'hafe !

— Eur c'hafe n'eo ket eur prizoun. Ear vad a gaver ennan ive...

— Setu eun doare da garet ar meaziou ; ne m'aout mui e Breiz-Izel, eno e ioa ear awoalc'h, n'oa ket ezom da vont a bell evit zantout.

— Bah ! lezomp Breiz-Izel a gostez, eme Yan, fall galounet.

— Oh ! ne ket red did sonjal e chachan ac'hanout evel eur c'hi o tenna hir e deod...

— Dre ma en deus sec'het.

— Mad ! truez em euz ouzit : deomp da leina.

— Naoun a zav ganez ivez ?

— Din-me ? oh ! nan, evit ober plijadur did hebken.

— Mad-tre !

Nebeut goude, an daou bried a ioa ouz taol. An itroun he deuz goulennet eur fritaden besket, a zale kalz re da zont, d'he zonzj, ha ne baquez da gunudi. An aotrou a c'houlenn e vanne citron, ha pedi a ra e itroun da ranna ganthan, mes ne raje ket, a briz ebet.

— Neuze ne gemeres seurt ?

— Pa ne zervicher ket ac'hanoun. Setu aman eun hôtel, a ne daolin birviken va zreid ennan.

— Allo ! goustadik ! red eo kaout amzer da boazad ar pesk...

— Ia, d'e besketa, marteze ! an dra-man 'zo ober goap euz an dud !

— Bea lavaret digas radis (rabez) oa did... da c'hedal...

— Da gaout poan stomok betek varc'hoaz !

— Saucisson, neuse...

— Great gant petra, ha penac'h ? Goest d'am ampoezoni ! Yann a vel n'en deuz ken d'ober nemet tevel, pa ne c'hell terri egar e vadamik. Eun tachadik goude, e vel anezi o o chench liou.

— Petra 'zo, emezan, n'out ket iac'h ? pe betra ?

— Netra ! n'euz netra !

Ar pesk, poazed mad, liou alaouret dezan, a zo digaset ; an itroun ne danvaz ket, nag an aotrou kenneubeut, rag pa ne deuz ket hi gourdrouzet ar mevel, eo sklear n'ema ket mad ar stâl. Trei a diztrei a ra, nervuz, klask enn he godellou, sellet dindan ar c'hadoriou ; he dremm a deu da veza glaz, gwer, gwen, indigo, melen, violet, ruz, liou gwareg ar glao.

— Petra 'glazkes ?

— An alc'hoez... emezi, gant eur vouez raouillet.

— Az peuz kollet ?

— A bropoz !... n'eo ket te eo peus prennet an nor ?

— Satorgoaë ! Nan da ! N'emaout ket en entremar marvad ! Pa 'z out diskennet var va lerc'h me.

— Ia, sonj mad em beuz breman, emezi, pa ne c'hell tamall den all. Va Doue ! he lezet am beuz e toull ar potail.

— A gav did ?

— Pa lavaran, n'oun ket diodez... kerzomp buhan, ac'han !

— Hag ar pred ? Ar friko ?

— Ema breman ar mare da breja, hag al laëroun oc'h ober rins en hor gambr !

— Ne ouzout man.

— Gwir pater. Perak, ive, oun bet ken bransugellet ? Da faot eo.

— Ma fell did, lavaromp iao.

— Me gred e lavaran ar virionez, ne fazian tam. Ah ! ne dizi ket c'hoaz ac'hanon-me da vont da bourmen var ac meaz. En hent, ha buhan !

— Train zo, da viana ?

Ar mevel a zo galvet, hag a lavar e c'hellont erruout evit an express, o vale gant tis. Yann a baeas al lein chomet a dreuz, hag a roas c'hoaz gwerz ar butun d'ar mevel a c'hellas lipat e vourrou gant ar pred dioueret gant an daou zarzod. An itroun a ioa pell araok, ha ne jome ket da yara enn hent ; an aotrou, hanter dihalanet, en em gav ive.

Sevel a reont en train, ar c'hoezen pisennet var o zâl d'eo o daou.

Epad ar veach, ar flipajou teod a goez stank var an aotrou. Digoezet e Paris, e kemeront eur wetur o c'hasas betek o zi. Doc'htu an itroun a red d'an delesiou, hag a bign enno dillo. Dirak he c'hampr, e sell, e sell, ha ne vel alc'hoez ebet en nor. Neuze, strafuillet all, e tisken da vit ar porcher evit goulen diganthen a n'hen devoa gwellet den tresset fall o tremen dre eno. O klevet ar porcher o lavaret n'hen devoa gwelet na klevet a vije bet den var dro ar c'hampreier, e koezaz semplet, var eur gador.

Deuet enni e-unan, he lavaraz d'he fried mont da glask eur marechal 'vit sevel ar potail, pe digeri an nor, gant eun alc'hoez passe-partout benak. Ar zul oa, da zul e ves serret ar seurt staliou e Paris. Yan, goude troia kement ru a ioa adost, ne gavas nemed eun den a volonteiz vad. — Epad an amzer-ze, an introun ne rea nemed hirvoudi : « Va Doue ! emezhi kement all al laëroun a zo o redet, en deiz hirio, e Paris ! bemdez ne glever ken : « laerounsi ac'haleu, muntrez ac'haleze. Hirio eo hon tro-ni ! emaomp rivinet ! »

Pa deuz ar mekanisien, ne oue tam avansetoc'h, rag an itroun he devoa lakeat eur potail gant tourneri secret. Nec'het maro oant o daou. Abars ar fin, e tiwanas e spered an itron eur sonj all :

— Breman he c'houzon e pelec'h eman an alc'hoez.

— E pelec'h ? a c'houlenn Yann, evel eun diskiantet.

— Em manegou, em euz lezet, dre ankounac'ha en hôtél, e Fontainebleau.

— Set' aman ! set aman eur guden, eur gempen, hirio avad ! bah !...

— Kerz buhan d'ho c'hilask !

Ar c'heaz Yann, a zo kempennet e gorf dezhan, rag dija en deuz beac'h o chom en e za, evel eur zac'h goullou : pemp heur eo ha n'en deuz debret tam. Poania a ra da gemeret an train evit Fontainebleau, hag e chom da glask, betek dek heur noz, an alc'hoez dianket, a c'hoaz heb er c'haout.

Epad ar mare-ze, an itroun a savas naoun-ganti, hag a iez da di eur pasterier, da zibri kuignou ; pa savas evit paea he reas koeza he manegou euz he godel, ha gantho, an alc'hoez !!!

An aotrou a ioa tenval e benn, brevet e gorf outan, evel

pa en dije bet kant repas bazadou. Pa deuas en ti, pebeus kem a velas var dremm an itron. Lavaret e oue dezan koania mad ; netra ne vanke var an daol ; ha dreist-oll an digemer a ioa gwelloc'h c'hoaz.

— « Kemer ta, va mignoun, a lavare an itroun d'he fried breman, gant teneredigez, kemer ha debr.

— E pelec'h, edo 'ta, an alc'hoez ?

— « Em manegou, evel m'em boa en lavaret did.

— « Dell ! setu aze !

— Ar manegou em oa gorennet mad, te vel ; me 'zo eur vaouez a urz, hag e velez ne ankounac'han morse netra.

— Allo ! eun tam biftek c'hoaz ; choaz, meritet e peuz, va mignoun.



FURNEZ BREIZ



Kaout c'hoant a zo galloud.

Kassit an êro da benn.

Red eo gouzanv da gaout skiant,
Labourat tenn da gaout arc'hant.

Red eo d'an den n'en deuz netra
Labourat tenn ha nan gouela.

An den iaouank en diegi
A zastum poan vit e gozni.

Ar guella bara da zibri
A vez gounezet o c'houezi.

Deuz da glevet an alc'houedez
' Kana he zon da c'houlou-dez.

Evit paka louarn pe gad
Ez eo red sevel mintin mad.

Labourit pa gousk an dibreder,
Ho pezo ed leun ar zolier.

'N hini n'euz ket c'hoant kaout naoun
Ne jom ket re bell var e skaoun.

O c'hortoz ar ieod da ziwan,
E varv ar zaout gant an naoun.

Seul gentoc'h
Seul velloc'h.

Ar c'henta
Ar guella.
Na zale ta
D'ober tra.

Da louarn kousked
N'euz tam boued.

Neb na laka poan hag aket
N'en devezo madou na boed.

Red eo terri ar graoen
Evit kaout ar voeden.



LAVARIOU MIZ EVEN

Eur park a zo gwall-fall
Ma, da viz even, ne dalv.

Avel a greizde
Glao eb dale.

Pa vez ar bleun er gwiniz
E vihana al leaz livriz.

Da c'houel Barnabaz
Gant eur fourniad poaz
Hag eun all en arc'h
Ho pevezo awalc'h.

Blavez hogen, blavez ed,
Blavez irin ne ve ket.

Blavez c'huiled, blavez ed,
Blavez gwenan ne ve ket.

N'e ket ganet gant he vam
'N hini glev ar goukou nao devez gouel Ian.

Da c'houel Ian
Ia-l-ar goukou d'al lan.

Da c'houel Per
Ia-l-ar goukou d'ar ger.



Respont da zivnadennou miz Ebrel

- I. — Ar valaen.
- II. — Ar mor.
- III. — Al lin. — Ar mevier a respont darn all.
- IV. — Ar goulou.

O deus kavet teir da nebeuta :

4. — Jean Keruel, Sibiril. — Marie-Anne Guillou,
Cléder. — Angèle Saout, Plouzéniel. — Jeanne Gloaguen,
Marie Philippe, Jeanne Noac'h, Plogonnec.

3. — Jean-Yves Le Guen, Paul-Marie Gourmelon, François-Marie Picot, Yves Corre, Kurust, Plouvorn. — Michel Autret, St-Thonan. — Jean-Louis Guenneuguès, Plouguin. — Yves Juzau, kurust, Plougoulm. — Françoise Le Guen, Guilers-Brest. — Anne-Marie Habasque, Kernilis. — Marie Le Roy, Guissény.



Divinadennoù Miz Maë

- I. — Petra 'vez lakeat var an daol,
a vez troc'het
a ves servichet
ha morse na ves debret ? (Plouvorn).
- II. — D'an anv, d'ar goanv
Pe seurt mantel ve an tomma ?
- III. — Houarn var zouar,
Koat var houarn,
Pillerou var goat,
Eun ti var billerou,
Eur c'hoat var an ti
Ha denved ennan o peuri. (Plouguin).
- IV. — Pe seurt traou a zo anezo
Ar muia var an douar. (Plouguin).

N.B. Or respontchou er bujen 1911.

Nous apprenons avec plaisir qu'un de nos rédacteurs travaille à mettre en breton l'*Imitation de Jésus-Christ*. Il dispose de beaucoup de temps, mais il espère que dans deux ans il pourra offrir à nos lecteurs bretons cet ouvrage. Il s'efforcera de le soigner, afin que la lecture en soit attrayante et que les âmes en tirent profit.

Feiz ha Breiz

Kanpad Misiiek ar Vretouged

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

(KENDALC'H)

Ar falz doktor a lavar « Ia, hen anzav a ran, Jezuz a zo eun den henvel ouz ar re all ; ar luzevien hen lavare, ha Pons-Pilat evelto ; evelato ne gredin ket eo eun Doue gwirion, rag an dra-ze a ya eneb va skiant-vad. »

Lennerien, va mignoned, daoust hag eur gwall guden eo hounnez da zirouestla ? Evidoun-me, ne gavan ket. Na c'hui, na me, a dra zûr, ne ententomp ket penaoz eo bet great ar burzud, ar mirakl-ze ken souezus ; e vije koulmet evit atao e Jezuz e natur-den gant e natur-Doue ; ar wirionez-ze a zo, ervez komz ar c'hatekis, eur mister evidomp ; da lavaret eo, unan euz ar gwirioneziou-ze kuzet e Doue, ha ne c'hellont ket beza anavezet evel m'emañt enno o unan nemet dizoloët e vichent bet gant Doue, ha n'hellint ket beza komprenet penn-da-benn nemet e gloar skedus ar baradoz. Ama n'eo ket an dra-ze hon deuz da zisplega ; ama eo red dirouestla ar guden a gav d'ar fals doktor beza luiet kenan.

Ar pevar Aviel a zo skridou gwirion ha talvoudus bras ; hag eno e kavomp freas ha splañn ar wirionez-ma : « Jezuz a zo eun den gwirion » ; kaout a reomp ouspen ken anat all ar wirionez-ma : « Jezuz a zo eun Doue, Mab da Zoue, ha Doue he unan, rag hen hag hen ebken eo ar Messias kemennet gant ar brofeted ha gortozet epad pevar mil bloas, hag ouspen, gant an holl dud ; — Jezuz a zo en em roët evel Doue d'ar luzevien — ha dre e viraklou en deuz diskuezet difazi oa eur gwir Doue. »

Ha p'am bezo displeget an dra-ze tam dre dam, daoust ha ne gav ket dehoc'h e vezo dibunet kaër ar guden ganen ?

I. Jezuz a zo Doue, rag hen eo ar Messias

Hor Zalver Jezuz-Krist a lavare d'ar Iuzevien « evesait pis ouz ar Skritur-Zakr : hi a zoug testeni em c'henverme; n'eo ket me ho tamall dirak va Zad; Moyzez eo a damall ac'hanoc'h, rag ma kredfec'h da Voyzez, e kredfec'h d'in-me ive, ha skrivet en deuz divar va fen. » (Iann, v, 39-45-46). Sant Per, hag en doa gwelet, var Menez Thabor, he Vestr kelc'het, kouls lavaret, gant gloar ar baradoz, a skrivas d'he dro : « Eun testeni diazezet mad hon deuz ouspen hennez, hag an dra-ze eo komzou ar Brofeted. » (Eil lizer Sant Per, I, 19).

Araok diskuez dehoc'h eo Jezuz ar Messias e kav d'in eo mad, ha red zoken, lavaret eur ger euz ar brofeted; rag, me sonj, dre-ze e klevoc'h gwelloc'h-gwella o c'homzou divar benn an Hini a c'hortoze ar bed holl.

AR BROFETED

Petra eo eur Profet? — Ervez her gwelomp hed-ha-hed ar Skritur-Zakr, eur profet a zo « eun den sklerijennet gant Doue en eur c'hiz dreist-natur; Doue a ro dezhan da anaout e volontezez hag ar gefridi da gemen ar volontezeze d'an dud. » — Daou dra a gavomp eta e neb profet; eur *sklerijen* dreist-natur a berz Doue, — e gallek hen hanver Révélation; — hag eur *gefridi* euz an dibab. Pa blijas gant Doue ober euz Jeremi he gannad, he profet, e lavaras dezhan « setu, me em euz lakeat va c'homzou en da c'hinou »; daoust ha n'eo ket anat eo sklerijennet Jeremi en eun doare dreist-natur. « Mont a ri e kement leac'h da gasin... da lakat a ran mestr var an holl boblou. » (Jeremi, I, 9-7-10). Setu ar gefridi.

Doue a sklerijenne eta e brofeted ha divar benn petra? « Ar sklerijen-ze, eme sant Thomas, en em astenne ken var an traou a zelle ouz Doue, ken var ar re a zelle ouz an den; evelato dreist peb tra ar sklerijen-ze a zizoloe d'ar profet an amzer da zont ha ne c'helle ket beza anavezet a c'hiz all. » *Kent-a-ze*, beza profet a ioa eun donezoun dreist-natur, a bers Doue he-unan. Iha setu perag, e neb giz ebet, ne c'heller lakat eur profet sko: zha-skoaz gant eun « *divinour* » rag heman ne oar an amzer da zont nemet dre eur sklerijen a bers an drouk-spered, pe c'hoas dre un taol chaus-vad; — eur profet

n'eo ket ken nebeut an den gwiziek a c'hell anaout traou da zont dre he c'halloud hag e zeskadurez e-unan. — E Paris e zeuz eun ti kaer meurbed hanvet an « Observa- » toire. » Eno e zeuz tud karget da lenn gant evez e levri kaer an oabl steredennet; desket o deuz mad pere eo al lezennou a ren ar stered, al loar, an heol hag an douar ha neuze e lavaront « d'an deiz ma 'n deiz, d'an heur ma 'n heur, an heol, al loar hag an douar a vezo var ar memes linen (ar pez a c'halvont « *conjonction* ») hag an dra-ze a livirint, lakeomp, evit mil bloaz ac'han, ar re a vevo neuze a c'hello lavaret « an dra-ma a zo bet kemennet deomp brema zo mil bloaz. « Daoust hag an dud gwiziek-ze a zo profeted? Nan, evit o labour n'o deuz ket bet ezom eur sklerijen dreist-natur. — Hag an divinourien sklerijennet gant an drouk-spered n'int ket profeted ken nebeut all. Perak? Abalamour n'int ket bet dibabet gant Doue. « N'em euz ket kaset anezo, emezan. » (Jeremi, XIV, 14); ne gomzont ket en hano Doue. « N'em euz ket komzet dezo. » (Jeremi, XIV, 19).

Kement a lavaront a zo gevier. « Touella ha fazia a reont ac'hanoc'h » (Jeremi, XXIII, 16); n'o deuz ken sklerijen nemet euz o fers o-unan. « Lavaret a reont kement a lennont en o c'haloun ha nan ar pez a goes euz muzellou an Aotrou Doue » (Jeremi, XXIII, 16). « Lavar d'ar re a gomz ervez o c'halon o unan : selaouit ger an Aotrou Doue : malloz d'ar profeted diskiant a heuil o spered o unan ha n'o deuz ket bet a welidigez a bers Doue.... » (Ezekiel, XIII, 2-3).

Daoust ha Doue a c'hell dizelei da eun den an amzer da zont, ober euz eun den he profet? — Ha perak ne c'helfe ket hen ober? Doue a voar peb tra rag gwelet a ra assamblez ar pez a zo bet, a zo, hag a vezo; evitan n'euz nag amzer dreinenet, nag amzer da zont, eun dra ebken a zo evit Doue : ar gwel euz peb tra; e Doue n'euz amzer ebet, e Doue n'euz nemet an eternite. Kent-a-ze; Doue a anaves mad kement a c'hoarvezo — ervez hon doare d'omp-ni da entent an traou ha da gomz anezo — abalamour Doue a zo ar penn-abeg a bep tra hag a wel peb tra. Anezan e-unan, Doue a c'hell dizelei an dra-ma pe an dra ze euz an traou da zont, da unan pe unan euz he grouadurien gwest d'hen entent dre m'an deus ar c'hrouq-

dur-ze eur spered ; ar grouadurien-ze eo an Elez hag an dud. An den — (hag euz heman ebken eo red koms ama) — anezan he unan ne c'hell ket anaout an amzer da zont evit kement a zell ouz labour Doue dre ar bed evit silvidigez an dud, na ken nebeut evit ar pezh a zell ouz an oberiou a deu a bers liberte an den ; rag an traou-ze a c'hell beza eun deiz pe jom heb beza, rag an den en deuz al liberte da ober pe da jom heb ober. An den e peb unan euz an traou a zesk a gav gwirionez hag he spered n'en em stag nemet ouz ar wirionez. Hogen, eun dra n'eo gwir nemet ma 'z euz anezan ; an traou da zont n'euz ket anezo c'hoas, rag-se n'int ket gwir c'hoas ha dre-ze hor spered deomp-ni ne c'hell ket o anaout. Evelse e tivis sant Thomas. Mes, daoust ma ne c'hellomp ket ac'hannomp hon-unan anaout an amzer da zont, Doue a c'hell rei d'hor spered brasoc'h ha galloudusoc'h sklerijen ; petra a virfe outan d'hen ober ? Ha ma c'hell Doue dizelei da eun den an amzer da zont hag e volonteze, Doue a c'hell ive lakat an den-ze da lavaret d'an dud all kement a zo bet desket dezan en eur c'hiz dreist-natur. Nac'h ar wirionez-ze a zo nac'h Doue he unan.

Penaoz e sklerijenne Doue e brofeted ? — Doue a zizoloas e volonteze d'ar brofeted e meur a c'hiz : hen ober a reas dreist-oll e teir fesoun : dre ar gomz, dre ar welidigez, dre an hunvre.

Dre ar gomz : hag evelse e Levr Jeremi e lenner er pen kenta « Komzou Jeremi... Ger an Aotrou a oe diskleriet dezan. » (Jeremi, I, 1-2) ; evelse evit Ose ha Joel. Petra oa ar gomz-ze ? Kredabl bras, ha peurliesia, eur vouez a gleve an den ennan e unan. Awechou goulskoude an den a gleve ar c'homzou gant e ziskouarn (I. Rouaned, III, 4), pa c'halvas Doue Samuel yaouank e ti ar belek bras. Eur veach ma oa desket gant Doue, ar profet a roe da anaout d'ar bobl dre zarmoniou pe dre skrid kement en doa Doue lavaret.

Dre welidigez : e Levr ar profet Isai e lennomp « Gwelidigez Isai, mañ da Amos (Isai, I, 1). E Levr Ezekiel e lennomp kals gwelidigeziou a velas ar profet. Dre-ze Doue a lakea dirak daoulagad ar profet, pe daoulagad ar c'horf, pe daoulagad an ene, da lavaret eo ar spered, kement en doa c'hoant da rei da anaout d'e

gannad : mes epad ar welidigeziou-ze ar profet a veze dihun.

Awechou all nebeutoc'h tro goulskoude, Doue a slerijenne ar profet dre hunvre epad ar c'houk. — Lavaromp ouspen, bep tro ma tizoloe Doue an amzer da zont d'ar brofeted, ar re-ma a vele an traou en em gavet ha nan ebken da zont ; hag abalamour da-ze, pa lennomp o skridou e leac'h gwelet. « An aotrou a deuio gant binviou he vuhanegez » e velomp en Isai, XIII, 5. « An aotrou a deu » ; e leac'h lavaret ar poaniou a c'houzanvo Oan Doue, ar Messias, Isai a lavar ar poaniou a c'houzanvas (hed ha hed ar chabistr III). — Arabad e viche kredi evelato e roe Doue da anaout peb tra euz an amzer da zont ; an dra-ze n'eo ket red evit beza eur gwir brofet. — Doue a gemere evit kannad an hini a blije dezhan, ken ar mesaer o vesaat he zenved, ken ar c'houer oc'h arat, pe o trouc'ha eur wezen olivez, ken eur belek, ken eur roue ; ken eun den santel, ken eur pec'her bras. (*Vigouroux*, Manuel Biblique). Eur veach dibabet he zen ganthan, Doue a zizoloe eur wirionez, pe eun darvoud euz an amzer da zont ; Doue eo ar Mestr, he unan ec'h anaves peb tra ha dre-ze e hell dizelei an traou da zont kement ha pegeit e plij ganthan.

Petra 'doa ar profeted da ober ? — Adalek ar pen-kenta e kavomp ar seurt tud-ze ar brofeted er bobl a Israël, euz Abraham betek sant Iann Vadezour. Goude Samuel eo e kavomp an niver brasa euz ar profeted, e velomp ive ar gwella, pe seurt gefridi o doa da gas da benn er bobl a Israël. Evit an neb a evesa mad ouz histor pobl Doue eo sklear ha difazi eo abalamour ma 'z oa Israël pobl Doue eo e kavomp en e douez ar brofeted... Doue, ervez m'her merk deomp Levr an Deuteronom (XVIII), en doa difennet grons d'an Israelited mont da c'houlenn kuzul gant an divinourien hag an diouganerien ; lavaret en doa Doue d'e bobl e sevenfe ar c'hoant o doa da anaout an amzer da zont hag e volonteze ; e kasse dezo gwir brofeted diouz m'en doa goulennet ar bobl e-unan e traon menez ar Sinai ha red e viche d'ar bobl selaou ar brofeted ha senti outo rag koms a reant en han Doue eleac'h ar fals profeted a dlle beza lakeat d'ar maro eb truez ebet dezo. Rag-se, ar gefridi roët d'ar brofeted oa miret na viche

ankounac'heat pe dorret al Lezen, oa enebi ouz an idolatri ; digas da zonzj d'ar veleien ha d'ar rouaned euz deveriou stris o stad ; oa kemen d'an holl bolontez Doue hag he c'hourdrouzou ; ha dre-ze lakat ar bobl e Israël muioc'h-mui var c'hed euz ar Messias. — Ar gefridi-zé, ar brofeted hen c'hasas da benn gant eunder ; dre ma ne glaskent nemet gloar Doue hag eürusted ar bobl e komzent d'an holl gwitibunan, bras ha bihan, pobl a rouaned. Bemdez, kouls lavaret, oe red dezo enebi ouz mennoziou o c'henvroiz hag o nerz kalon a oe dispar evit koms en hano Doue, evit labourat evit Doue ha dreizhan. Ar brofeted a ioa kuzulerien leun a furnez evit nep piou benag a deue davito gant fizians ; n'eo ket souez eta o diche bet kals galloud var ar bobl a lavare oant « Tud Doue. » (IV Rouaned, xvii, 13).

(Da genderc'hel).

Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Daoust ha fall a ra eun tad o testum madou d'e vugale da lezel ganto goude varo ? Nan, n'eo gwir ? pell ac'hano mat eo a ra ! Hogen, mar teu ar vugale-ze da ober implij fall ganto pa vezo maro, da ober torfejou, d'en em zrailha abalamour d'ezo, daoust ha lakaat a reot ar beac'h war gein an tad ? Daoust ha tamall a reot anezan da veza lezet gant e vugale ar madou a zo bet penn-abeg eus an tabud a zo savet etrezo ? — Nan. Evel-se Doue a roas d'eomp an douar da veza hon lod. Ha lakaat a reot war e hano an torfejou, al laeronsiou, ar muntrou ha kement tra zisleal a c'hoarvez gant an dud abalamour d'ar madou-ze ? Tamm ebet, a dra-zur ! p'eo gwir eo sklear e urziou, p'eo gwir en deus embannet e lezen evit miretouz an dud ober droug ; ker striz eo e c'hourc'hemennou ma c'hourdrouz ifernia an nep piou bennak n'o miro ket. Penaos eta e c'hellit-hu lavaret eo Doue eur berwelet ? Penaos eta e kredit-hu lavaret ne gemer preder ebet eus grouadurien, p'eo gwir ec'h anzavit c'houi oc'h unan n'ho pije great netra gwelloc'h... Perak gwall-goms eneb

gouarnamant an Ao. Doue abalamour da vankou an dud a eil e kenver egile, p'eo gwir en deus great d'ezo ar goure'hemen striz d'en em garet ha d'en em harpa ? An dud-se a ra eun dismegans vras da Zoue e-unan. Perak klemm eus Doue, c'hoaz eur wech ? Daoust ha d'ezan eo rebechi n'eo ket miret e c'hourc'hemennou ? Livirit ama d'in, ha n'eo ket lealloc'h tamall an dud drouk ha dizent ?

Ha goude zoken ma tigouesfe d'eomp kaout diouer a hep tra war an douar-ma, daoust ha ne jom ket ganeomp an dever da garet ha da drugarekaat an Ao. Doue rak ma 'z eus e penn poaniou ar vuez gouzanvet hep klem eun digoll divent a bado atao, eun eürusted wiriou ha na vezo morse tennet digant an den ; en nenvou e vezo eürus o karet hag o veuli Doue.

O c'houi hag a yoa bremaik o lavaret ne daol Doue evez ebet ouz an dud, livirit d'in eta ha gallet ho pije kaout kaeroc'h da gontanti an den er bed-ma eget ar gwel eus an heritaj dispar a vezo e lod er baradoz mar bez mab mat war an douar ; ha kavet ho pije dreist-oll da rei d'ezan kaeroc'h eget ar gwir da garet Doue, an Tad mat-se hon deus en nenvou ?



En henchou-houarn e weler hag e klever kalz marvailhou. En deiz-all ez oa eun nebeut beajourien en eur wagon, kaoz krenv ganto. Pa na vez netra da ober e ra vad trabellat da dremen an amzer.

E-touez ar veajourien-ma ez oa unan, bet gwechall war dachen ar brezel, el leac'h en doa lezet eur c'har. Goude-ze oa deuet d'e garter, ar groaz a enor war e vruched, ez oa dimezet, hag e veve evel eun den a zoare, mes ive evel eun den hep relijion. Evel ne labouré nemeur, e komze kalz pa gave tro, hag e blijadur oa ober goap eus al lezen gristen hag eus ar re hen heuilh. Rak hen a rea fouge da veza eun den seven hep mounounerez ebet.

Ama 'ta oa en em lakeat, evit dizenoui e genbeajourien, da zistaga peziou kaer eneb al lezen gristen ha gwirionezou ar feiz, hag e komze a-dreuz hag a-hed evel ma ra peurvuia an doktored-se a goms eus ar pez ne anavezont ket.

E-touez kalz a zotoniou-all distaget a-eneb ar Skritur Zakr, a-eneb lezennou ha lidou an Iliz, setu hen o kaout houma :

« Lennet em eus, emezan, er Skritur Zakr, pa falvezaz da Zoue rei eur pried d'hon tad kenta Adam, e tigasas ar c'houstket d'ezan, hag epad e gousk e tennas unan euz e gostou, ha gant ar gosten-ze e savas ar vaouez genta. Hogen, Adam a dlie neuze mankout eur gosten d'ezan, ne dlie kaout mui nemet teir warnugent, ha koulskoude an dud wizek, ar re o deus studiet hag a oar penaos eo great korf an den, a lavar holl hon deus ni peder gosten warnugent. Mat, me garre kaout unan bennak da ziskouez d'in penaos e c'hellomp, ni holl bugale Adam, ni holl diskennet anezan, kaout peder gosten warnugent pa n'en doa hon tad nemet teir warnugent.

War gement-se ar veajourien a yoa o selaou an doktor a zirollas holl da c'hoarzin. nemet unan. Hema a zistroas oc'h an doktor hag a lavaras d'ezan :

- « Dioc'h ma livirit, c'houi a zo bet soudard ? »
- « Ya, Aotrou. »
- « Evit doare hoc'h eus kollet eur c'har ? »
- « Ya, chomet eo bet war an dachen a vrezel, ha setu perak e welit ar groaz kaer-ma war va bruched. »
- « Goude m'oc'h distroet eus ar brezel eo hoc'h bet dimezet ? »
- « Ya, Aotrou. »
- « Ha roet en deus Doue bugale d'eoc'h ? »
- « Ya, bugale am eus, hag esper am eus e teuo eun deiz unan bennak anezo da zifen e vro evel m'en deus great o zad. »
- « Ha divac'hagn eo ar vugale-ze ? Ha bez' o deus-i diou c'har pep hini anezo ? »
- « Ya, Aotrou, ken divac'hagn ha pep den. »
- « C'houi koulskoude, dioc'h ma welan, n'hoc'h eus nemet eur c'har ? »
- « Nan sur, mes petra fell d'eoc'h da lavaret war gement-se ? »

Me garfe e c'hellfac'h lavaret d'in penaos e c'hell ho pugale kaout diou c'har pep hini anezo, p'eo gwir c'houi, o zad, n'oc'h eus nemet unan ; ha mar en deus gallet Doue rei d'eoc'h-hu bugale hag o deus pep a ziou c'har, petra

bennak n'en deus o zad nemet unan, livirit d'in ha diea-soc'h ez oa d'ezan rei peder gosten varnugent da bep hini ac'hanomp-ni ha pa n'en divije hon tad kenta nemet teir warnugent ? »

Ama ar veajourien o doa c'hoarzet o klevet peziou kaër an doktor a droas o c'hoarz a-eneb an doktor e-unan ; hag hema neuze a zerras e veg hag a oe mut epad ar penn diveza eus ar veaj. — E gwirionez, eur gentel gwall c'hoero en devoa bet.

G. M.

(Feiz ha Breiz, 1869).

Eun taol eus ar Brovidanz

Renner eun ti el leac'h ma saver bugale dilezet ha minoredigou o teski micher, a yoa eat eur vintinvez da glask bara d'e vugale.

En dervez-se, kaër en doa bale, ne gave netra ; den na roe d'ezan, ha lod a wall-gomze outan. « Ar c'homzou trenk-se, eme ar renner, a ra vad d'in-me ; talvezout a raint d'in, n'em eus nemet o gouzanv evit Doue ; d'ar vugale avat ne dalvezint nemeur. »

Deuet oa eta er c'houllo, ha tenval e benn. Mont a ra da glemm oc'h sant Joseph ; boaz oa d'en em erbedi outan pa veze berr ar stal gantan, evel oc'h an hini a dle miret na vanko bara d'he vugale. A-veac'h en doa great e glempe e beden da zant Joseph ma teuas eun itron da c'houlenn koms outan. « Me, emezi, a yoa epad ar gommun (1) e Breiz, e kichenig ar mor. Mont a ris eun dervez da heul eur prosesion a read eno war an aod evit pedi Doue da lakaaat ehana ar bar amzer a yoa dirollet war ar Franz. Kana read Litanioù ar Werc'hez, ha warlerc'h pep koublad an holl voueziou a gane truezus : *Parce Domine, parce populo tuo.*

« Eun dra gaër oa gwelet ar prosesion-ze dirak ar mor bras, dirak an houliou mor-ze a yoa eur gwir skeuden eus ar pezh a dremene en hor bro. An holl a zante o c'halon tomet, ha me muioc'h eget ar re-all, rak me am oa lezet e Paris tud hag a garien, ha gouzout a rean edo va zi e riskl da vea diskaret gant ar bouliji. Penaos savetei anezo ? a lavaren ; petra da ober evit ma roio Doue anezo d'in ? »

(1) *Dispach Paris e 1871.*

» Hag e teuas d'in ar zonzj-ma : Va Doue, ma chom ganen ar pezh am eus lezet war va lerc'h e Pariz me lavar d'eoc'h e roin muia ma c'hellin da unan eus an tiez-se e reer enno ar muia vad evit ar relijion hag evit sevel ar Franz eus ar stad ankenius m'eo kouezet enni.

» Kavet am eus kement am boa dilezet ; evel dre vuzud, n'eus great droug ebet d'ezo. Deuet oun ama e!a da zeveni va fromesa ; rak kredi a ran ne reer e nep leac'h muioc'h a vad d'ar relijion ha d'ar Franz ha ma rit ama o tigemeret ar vugale dilezet hag ar vinored paour-ze a zesker micher d'ezo goude rei d'ezo eur geleennadurez gristen. »

Setu an itron o rei pemp kant lur d'ar rener. Me ho lez da zonzjal pegen laouen ez oa hema ; bez'en doa peadra da gaout bara en deiz-se, ha zoken da baea ar bara debret e-pad ar miz a-raok ha n'oa ket paeet c'hoaz.

Setu eun taol eus ar Providanz !

Livirit c'hoaz goude-ze, mar kirit, n'en deus Doue soursi ebet ac'hanomp...



Providanz Doue

Eun deiz Doue a gemennas da zant Mikeal arc'heal mont da gutuilh ene eun intanvez a yoà dare evit an nenvou.

An arc'heal a ziskennas a denn-askel war an douar, ha pa oe digouezet e kramb an intanvez, e welas daou grouadurig e-harz he zreid. Sonjal a reas e chonje ar vugaligou-ze emzivadad hag er vrasa dienez, ma kemerje ene ar vamm, hag e tiizroas d'an nenv goulo e zaouarn.

— « Perak, a lavaras Doue, n'ez peus ket digaset d'in ene an intanvez ? »

— « Aotrou, gwelet am eus he devoa ar vaouez-se daou grouadur, hag em eus lavaret ouzin va-unan : Piou a gemero soursi anezo pa vezo eat kuit ? Gant truez outo em eus lezet an ene da veva c'hoaz korf an intanvez. »

Ha Doue a lavaras d'an arc'heal : « Disken e goueled ar mor : eno e kavi eur vilien, hag he digasi ama. »

An arc'heal a zigasas ar vilien.

Ha Doue a lavaras d'ezan :

« Brema, torr ar mean ! »

An arc'heal a dorras ar mean hag a jomas sebezet : e kreiz ar vilien, eviti da veza difaout hag en he fez, daou brenv a finve, leun a vuez.

— « Piou a vag ar re-ze ? » a c'houlennas Doue.

An arc'heal a hejas e ziskoaz hag a jomas sioul.

— « Na gemer ket nec'h gant an emzivadad, a lavaras Doue ; an dra ze a zell ouzin : te, gra ar pezh am eus gourc'hemennet. »

(Feiz ha Breiz, 1904).

Kentel roet gant eun den divadez ha dizesk da eun den badezet ha gwiziek

Eur Gall, eun den gwiziek hervez ar bed, unan eus an dud-se, a zo kalz anezo, hag a oar eun nebeut a hep tra nemet eus ar relijion, — n'anavezont ket anezi ha ne brijont ket he studia, — a yoa eat da veaji e gouelec'hioù an Afrik. C'hoant en doa da welet ar c'harterioù gouez-se evit gellout goude-ze ober an doktor, ha rei da welet d'e gensorted e skiant hag e wiziegez, o koms eus eur vro kalz gwelloc'h eget na deo gouest da ober ar re a zo o chom enni. Kemeret en doa evit e ren, evit diskouez an henchou d'ezan, eun arab, eun den divadez. Hogen, an dud divadez-se o deus relijion, a anaves eun Doue, ha petra benag ma 'z eo faos o relijion, ez int koulskoude fidel d'ezi.

Hon doktor a wele bemdez e arab, da vareou a veze, o vont d'an daoulin hag ho pedi Doue en e c'hiz. Sevel a rea e ziskoaz, hag e rea eur zell faeus oc'h ar paour keaz arab-se a wele evel-se oc'h ober e voumounerez.

Eur pardaevez ma en doa an arab great e beden evel en derveziou-all, hon doktor a gemer e vouez rok hag a c'houlenn outan :

— « Piou a bedit-hu evelse ? »

An arab a jom da zellet oc'h an doktor da welet hag oc'h ober goap edo ; mes hor c'hristen difeiz a c'houlenn eun eil gwech : Piou a bedit-hu ?

— « Piou nemet Doue ? »

— « Penaos e c'houzoc'h-hu ez eus eun Doue ? »

— « Penaoz ? eme an arab, ha ne lavaran-me ket d'eoc'h bemdez petra vez tremenet dre an hent ma 'z eomp, pe dud pe chatal ? »

— Eo, gwelet a ran e c'houzout lakaat kem etre roudou eun den dioc'h re eur c'hanval. »

— « Mat, pa welan an heol hag ar stered, e c'houzon ervat ive ne deo ket eno roudou an den. »

An doktor a grizas e fri ; n'ouzon ket avat hag hen a dennas frouez eus ar gentel.

(Feiz ha Breiz, 1872).

Ar falz-doktor. — Koulskoude, penaos a reot evit rei d'in da glevet perak e welomp ken alies a zen fall eürus, endra ma 'z eus kement a dud vat reuzeudik ?

An Difennour Bihan. — Tud fall eürus ! a livirit ? Ha penaos e c'houzoc'h-hu ez int eürus ? Hag eürus int-i e gwirionez ?

Ar pez a ziskouez d'eomp n'int ket eürus eo ma welomp anezo o vont eus eur blijadur d'eben evit lakaat avel en o fenn, evit ar fouge hag ive, re alies, sionaz ! evit en em vesvi er plijaduriou difennet... Lenn a reont ar falla skridou, klask a reont an trouz o kredi e teuint dre eno d'ankounac'haat o deveriou a gristenien, da lakaat da devel broudou o c'houstianz... Heugi a reont pa daolont eur zell ouz o buez dremenet, hag ec'h en em gavont skouiz bras dindan beac'h grevus o dizursiou. N'int ket eta ken eürus ha ma kredit...

Daoust ha leac'h a zo da veza ken souezet-se ma 'z eus meur a hini hag a zo an traou ganto evit ar gwella ? Nan, a dra-zur. Kalz tud a nac'h ouz Doue ar pez a dieont d'Ezan, a nac'h beza leal gantan, hag a zo evelato karan-tezus a-wechou e kenver o nesa.

Ac'hanta, Doue a bae anezo war an douar o veza n'en devezo ket a dro d'o faea en nenvou.

Hervez a leverer, eur rum all a dud eürus a zo : ar re-ze eo an dud difeiz a zo deuet a-benn da vouga mouez o c'houstianz. Ne welont mui zoken an droug a reont, ha koulskoude, rebech ebet a-berz ar barner kuzet en o ene ! Bezomp leun a druez ouz ar re-ze. Deuet int da veza henvel ouz al loen o veza ne vevont mui nemet eus buez an douar. Setu perak, pa zigouezo d'ezo mervel evel m'o

deus bevet, da lavaret eo hep beza bet e poan eus Doue, ô neuze ive ne vezint ket souezet ma teu d'o zaoler pell dioutan.

Ha leac'h a zo da veza ken souezet ma teu ken alies a dra da ober dieas da zervicherien on Ao. Doue ? Ar c'hristen a zo soudard, soudard hor Zalver Jezuz-Krist. Ema war an douar evit stourm, evit enebi, ha nan... evit klask ar blijadur. Buez ar c'hristen a zo eur brezel hep ehan. Ha neuze, kredit ac'hanon, an trubuilhou a deu eus an diouer a draou ar vuez, evel ma 'z eo ar maro o samma hon tud, ar baourentez, an darvoudou a bep-seurt, n'int ket da gredi e freuzont kalon ar c'hristen, evel ma freuzont hini an dud fall. Nan, rak Doue a jom atao gantan, ha n'eus ket par d'ar beden evit rei nerz-kalon.

Ma vez freuzet kalon ar pec'her pa gouez warnan eur barr anken, gant ar c'hristen e chom bepred ar fizianz, an esperanz ; gouzont a ra ez eus du-ze, d'an neac'h, uhelloc'h eget traou ar bed-ma, eul leac'h a eürusded, a beoc'h, a ziskouiz ; gouzont a ra e vezo dic'haouet mat evit atao eus ar barradou dister a dremen warnan hag eo red mat gouzanv, pe e plijo gantan pe ne rai ket.

Ar re a damall Doue da veza disleal na jomont ket pell a-walc'h da zellet evit gwelet ar wirionez.

Arabat eo deoc'h-hu ive 'ta lavaret : « Petra 'm beus-me great da Zoue mar sko warnon ken dizamant ? » Gellout a rafe rebech d'eoc'h hoc'h eus pec'het gwall alies beteg-hen ; lavaret a c'hellfe d'eoc'h ema o klask netaat ac'hanoc'h dre ar boan, e ra d'eoc'h ober ho purkator war an douar evit m'ho pezo neubetoc'h da ober er bed-all. Gwelloc'h eo, ha ne gav ket d'eoc'h ?

Hag ouspenn-ze, nag a boaniou a jachomp ni hon-unan war hor c'hein, abalamour ma fell d'eomp re alies ober dioc'h hor penn !

Kredit ac'hanon, gwelloc'h eo d'eomp kaout da c'houzanv er bed-ma ; kement-se a zo eun arouez difazi hon devezo eun digoll seul vrasoc'h en egile.

Bezomp atao leun a fizianz e Providanz Doue.

Taoler hag ar paour keaz

Er bevarzegved kanved, e kear Kologn, bro an Almagn, ez oa o chom eur prezeger brudet bras. Yann Taoler a

reat anezan. Eun deiz m'edo o pedi a greiz e galon en eun iliz, e c'houlenne digant Doue sklerijen da anaout ar gwella doare d'hen servicha. E beden a oe raktal se-laouet ; ar sklerijen en devoa c'hoant da gaout a deuas d'ezan dre eur paour a gavas e toull dor an iliz. — Ar paour-ze a veze bemdez digaset di, ha lakeat en e goazez war an deleziou. Eun druez oa e welet : n'ez oa nemet truilhou war e dro ; e zrem a yoa hanter debret gant ar c'hriqn-beo ; n'en doa nemet eur vreae'h (ha darn a lavar ive n'en doa nemet eur c'har) ; a hend-all ez oa lakeat en eur stad truezus meurbed gant gouliou donjerus en e holl izili. Taoler a gemer truez ouz an den keaz ; kas a ra e zourn d'e c'hodel da glask d'ezan eur gweneg bennak, o lavaret : « Deiz mat ! va mignon. »

« Bennoz Doue d'eoc'h, a respont ar paour ; morse n'em heus bet deziou fall e va buez ! »

Neuze Taoler a gav d'ezan n'eo ket bet klevet mat gant ar paour, hag e lavar adarre : « Deiz mat, va mignon ; eun deiz mat a reketan d'eoc'h ; ya, c'hoant am befe da welet ac'hanoc'h eürus, gant kement vad a c'hellfe beza dioc'h ho tiviz. »

— « Entetet mat em eus ac'hanoc'h, Aotrou, eme ar paour ; hag ez oun leun a anaoudegez vat en ho kenver ; mes, abaoue pell zo, eo kavet ganen ar pezh a c'houlennit evidon. »

« Evit hema, a zonje Taoler, e rank beza sempleat e spered. Pe marteze a-walc'h ne glev ket sklear. »

(Da genderc'hel).

DIVARBEN ar SKOLIQU

(Kendalc'h)

Petra eo eur skol vad, petra eo eur skol fall

Ar gerent, a lavaremp en dro ziveza, a dle taoler evez mad var ene o bugale. Karget int gant Doue euz an eneou-ze ; hada a dleont enno greun mad ha tenna anezo al louzeier fall. An eneou-ze, pa vezont c'hoaz iaouank, goak, a c'heller ober ganto ar pezh a garer.

Guelit eur vezennik iaouank : lakit harp dezi, dalc'hit fresk an douar en dro dezi, diouallit anezi diouz an anevaled, hag he savo eün varzu an nenv hag e teuio da veza eur vezen gaër. Mez, ma ne veillit ket, ma ne ziuallit ket anezhi, ma lezit ar chatal da beuri he deillou, ar vezennik a joumo dister, marteze zoken he teuio da vervel. Ar vugale a zo henvel ouz ar vezennik-se ; ar vugale ivez a c'heller da zével mad ha da zével fall.

Guelit c'hoaz eun tam koar teuzet : eaz eo deoc'h ober gantan skeuden eur zant, mez ken eaz all eo ober skeuden eun diaoul. Euz eneou ar vugale ivez ar gerent hag ar vistri-skol a c'hell ober ar pezh a garont.

Petra eo ta bugale savet mad ? bugale roet dezo aliou ha skuieriou mad, troet da ober ar mad, great sent anezo. Petra eo bugale savet fall ? bugale roet dezo aliou ha skuieriou fall, troet var an droug, great diaoulou anezo.

Eaz eo gullet dre-ze petra eo skoliou mad, petra eo skoliou fall. Ar skoliou mad eo ar re a vez poaniet enno da zével ar vuga'e e doujans Doue, da rei dezo kenteliou, aliou fur ha santel, da zistrei anezo diouz an droug, diouz ar pec'hed. Ar skoliou fall eo ar re ne vez ket komzet enno euz Doue, Hor Mestr, Hor C'hrouer ; pe ma komzer euz Doue, eo evit ober goap anezan ; er skoliou fall e vez great goap euz ar relijion, euz an dud a Iliz, euz an traou santel ; er skoliou fall e vez lezet ar vugale da zével evel ma keront, ne vez ket klasket disc'hrisienna euz o c'haloun ar gwall ioulou, ne vez ket desket dezo kaout kaz ouz ar droug, diwall diouz ar pec'hed.

Dioc'h ar frouez eo barn ar vezen. Ma ro frouez mad, ar vezen a zo eur vezen vad. Ma ro frouez fall, ar vezen a zo eur vezen fall.

Setu-aman bugale, paotred iaouank 12, 15, 18 vloaz. Bez e zint fur ; morse ne glevoc'h eur gomz fall o kuez euz o ginou ; ober a reont o deveriou a gristen eb aoun ; eb mez ebed ; pa c'hourc'hemen dezo o c'herent eun dra benag, e sentont eb lavaret ger. Ne vezint ket gullet o c'haloupat an hostalirioù, o klask plijaduresioù en tuman hag en tu-hont. Ar re-ze a zo bugale savet mad. Er skol e zeuz bet roet dezo ar memez aliou fur hag en famillou. Ar mestr-skol m'int bet gantan a ioa eun den a skuer vad, eun den a zoujans Doue ; poania a rea guella

ma c'helle gantan ha buhan e veze lakeat en o fenn deskadurez. Urz vad a ioa er skol ; ar mestr a zigore he zaoulagad hag a veze bepred o veilla var ar vugale. Ma kleve eur ger a-dreuz, e c'hourdrouze stard hag ar vugale a deue d'en em zizober euz o flegou fall, da greski e furnez dre ma kreskent e nerz hag en oad...

Taolit evez, bugale, a lavare aliez ar mestr-skol, hirio e veloc'h en dro deoc'h kalz traou fall, beillit, tec'hit diouz an dud n'int ket fur, diouz an dud a deu komzou louz euz o ginou ; bezit krenv da stourm ouz an droug epad ho puez, na dit ket da gaout aoun rac'h an dud fall ; red eo deoc'h ober plijadur d'ho tad ha d'ho mam a vezo laouen o c'haloun ma velont o bugale o veva fur ; lakit doun en ho spered ar pevare gourc'hemmen a Zoue... Bezit ivez leun a drugarez evit ho nesa ; gouzout a rit, er bed-man e zeuz kalz tud maleüruz, o deuz da lenva aliez ; pa vezer er boan, nag e ra vad klevet mouez eur mignoun a deu d'hon frealzi, santout he zourn a deu da starda hon hini ; ia, c'hui a vezo tud karantezuz ; c'hui a raio vad d'ho nesa bep guech ma kavoc'h tro... Ne zao ganeomp euz ar bed-man nemed hon oberou mad... Setu aze petra lavare aliez ar mestr-skol hag he vouez a ioa neuze nerzuz, rak ar geriou a deue euz a greiz he galoun. Hag ar vugale a zilaoue gant doujans, hag an aliou mad-se a ziskenne dounoc'h douna bemdez en o spered.

Ha pa gomze euz hor bro, euz ar Frans, ar mestr-skol adarre traou kaer da lavaret : « Ar Frans, emezan, eo hor bro ; hag he c'haret a dleomp euz a greiz hor c'haloun ; ar Frans he deuz great traou braz, brudet eo dre ar bed oll ; c'hui a labouro da greski c'hoaz he brud vad ; pa zeoc'h da zoudarded pe da vartoloded, c'hui a raio ho tever ato hag e peb leac'h ; ha m'ar bez red mont d'ar brezel, c'hui a ielo eb aoun hag a vezo laouen o skuill ho koad evit ho pro. Ar brezel a zo eun dra griz, guir eo ; a drugare Doue ne deu ket mui ken aliez ha kentoc'h, ha guell a ze ma c'hell ar boblou en em glevet, beva e peoc'h hiviziken. Mez ma c'hoarvez gant broiou all dont da glask lamet diganeomp hor guirou, hon douarou, hon tiegesiou, neuze e rankomp diskuez hon dent hag en em zifen stard.

Ia avechou e vez red ober brezel : c'hui a zifenko ho

pro m'ar bez red, ha ma kuezit var an dachen vrezel, hoc'h hano a vezo meulet gant an oll Fransisien. Hag abalamour m'ho pezo, c'hui ha re all, roet ho puez evit ho pro, ar Frans a joumo en he zav, hag ho kerent er gear, ho tadou, ho mammou, ho preudeur, ho c'hoarezed bihan n'en em gavo droug ebet ganto, ne deuo ket an enebourien d'o spounta, da lamet diganto o madou, o ziegez...

Setu aze petra eo eur mestr-skol mad.

Mez setu aman eun all dishenvel dioutan. He-man n'eo ket koz c'hoaz, nevez deuet eo er meaz euz ar skol-veur, ne zeuz nemed eun tamik baro var he vuzellou ; n'euz forz, kaout a ra dezan e c'hoar peb tra, ne zeuz en dro dezan nemed tud diskiant hag e ra fae var an oll.

Morse ne veloc'h anezan vardro iliz ebet ; « hiviziken, emezan, ne zeuz mui izom a relijion ; an dud desket a c'hoar ervad ne zeuz Doue ebet, ar bed ha kement a zo ennan, ar geot, ar guez, an anevaled, an dud, o deuz en em c'hreat o-unan ; an nerz a ioa en douar guechall, pa zoa tomoc'h eget breman, he deuz lakeat da genta da zevel geot, guez a bep seurt ; ar re-man en em gaerea bemdez hag a zo deuet d'en em zistaga dioc'h an douar ha da vale, da veza anevaled ; da genta oant anevaled divalo, beac'h dezo oc'h en em dreina, mez deuet eo o nerz da greski, o izili da asten, hag int deuet da veza pesket, laboused, anevaled a bevar droad, marmousien. Ar marmousien gant an amzer a deuz kollet o lost, o zreid araok a zo deuet da veza daouarn, ha setu great an den. An den n'eo ket dishenvel dioc'h an anevaled all : n'eo nemed eur marmouz kaeroc'h eget marmousien all...

An den, eme c'hoaz ar mestr-skol, n'hen deuz ene ebet. Goude ar maro, ne zeuz mui netra. Ne zeuz na baradoz, nag ifern. Ar veleien eo o deuz kavet ar sorc'hennou-ze evit spounta an dud, ober aoun dezo, ha beza evelse ar vistri. Mez c'hui, bugale, c'hui a zo o veva en ugentved kantved, c'hui ne reoc'h van ebet evit klevet ar veleien ; ne vezoc'h ket ken diskiant hag ho tadou ha dreist oll ken diskiant hag ho mammou. Deskadurez, bugale, setu petra dleoc'h da renka en ho penn. Gant deskadurez, c'hui a vezo enoret divezatoc'h, c'hui a bigno er c'hargou huela..... Er bed-man eo e tle an den kaout ar baradoz.

Poent eo e teuffe bugale ar vicherourien da veza ar vistri er vro. Pell awalc'h int bet goasket. Peb hini d'he dro.

Poent eo tenna digant an dud pinvidik ar pezh o deuz a re ha ranna kement-se etre ar re baour, evit ma vezo eüruz peb den, ma c'hellou peb den eva guin ha debri kik rost d'he bred...

Pa gomze euz ar vro, euz ar Frans, he lavare traou brao ivez : « Da betra, emezan, e zeuz soudarded ha martoloded ? Daoust hag hiviziken ar boblou a zo diskiant awoalc'h evit mont d'en em laza etrezo ? Guechall an dud a gare en em laza, mez breman ne zeuz mui den ebet o c'houlou brezel. Ar Frans a diefe da genta araok an oll boblou all kas d'ar gear an oll zoudarded hag an oll vartoloded. Pebez kentel gaer a roffe evelse d'ar broiou all ! Ar broiou all o devije mez da c'houde o talc'her soudarded ha martoloded er c'hasarniou. » « Ia, a lavaraz eun deiz eur paotr d'ar mestr-skol, ma ne ra ket ar broiou all evel ar Frans, e vezimp debret gantho ; va zad a lavaraz d'in an deiz all o deuz c'hoant ar Prussianed da gemeret eur bastel all euz douar Frans. »

— « Sar da veg, a lavaraz ar mestr-skol, droug ennan, da dad a zo eun den diskiant, me c'hoar ervad e raio ar broiou all evel ar Frans ; er broiou all e zeuz socialisted evel er Frans, hag ar socialisted ne fell ket dezo ober brezel. Deomp-ni, Fransisien, eo rei skuer d'ar re all, kalz a zo en hor bro ha ne fell ket dezo mui mont da zoudarded, ha mad a reont. Micher eur zoudard a zo eur vicher mezuz. »

Setu ase peseurt kenteliou a roe ar mestr-skol, komz a a rea euz deskadurez, mez ar vugale ne zeskent netra gantan. Goude 3, 4 bloaz er skol e vezent ken azen hag er bloaz kenta : ne c'houient na skriva, na lenn, na kounta.

Ar pezh a zeskent, avad, eo traou fall. Araok ha goude ar skol e c'hellent ober ar pezh a garent ; ar mestr ne veze morse var o zro. Hag ar c'herent o doa bemdez muioc'h a boan o lakat anezo da labourat ha da zenti pa deuent d'ar gear ; diez e veze o lakat da lavaret o fater ha da zul en iliz ne c'houient ket pedi an Aotrou Doue. Petra

deuz ar vugale-ze da veza ? Siouaz ! O c'herent o devezo da lenva ganto.

Ar skoliou a zo enno hevelep mistri a zo skoliou fall hag ar gerent ne c'hellont ket lezel enno o bugale.

I. Uguen.

HISTOR BREIZ

Bro Arvor o tismantri

Ne badas ket pell eürusted an Arvoriz dindan galloud ar Romaned. Rouantelez Rom he-unan, guechall mestrez ar bed, a gerze a gammejou hir etrezek ar bern. Impalaered ar vro, traou dibenn ha digalon an darnvuia anezo, a dremene o amzer vella o frita plijadur pe o lac'ha tud ; hag ar bobl, dinerzet ha divouedet gant al leziregez, ne c'houloune ken nemet daou zra : *panem et circences*, karga e doull hag c'hati.

Guechall ez oa awalc'h da rouantelez Rom heja he c'hfeze evit lakat an holl boblou all da grena adreñv kein o menezioù ; vardro ar bloaz daou c'hant hanter e teuent da hardisât : a bep tu o gueler oc'h astenn o fri dreist harzou o bro hag o sellet gant avi ouz peuri druz douarou Rom. Holl lennerien ar gelaouen-man a c'hoar ervat ez oa deut ive, goude eur gwall grogad, gourenez Arvor, koulz ha Bro C'hall a-bez da veza douar leve ar Romaned.

Mat ! e kostez ar zao-heol da Vro-C'hall, en tu-all da ster ar Rhin (el leac'h m'ema breman ar Prus), ez oa pobladoù tud gouez, stank evel treaz ar mor, hag a verve gant an ioul da lammat dreist ar ster bras. Kaoùt a rea d'ezo n'oa mui ker start ha kentoc'h ar c'hleuz koz en e zav. Eun dervez ma seblante kostezia (er bloaz 234), ar gouezidi a reas ennan eun aridennad ribinou, hag a zailhas var hor bro evel eur vanden zenved var eur parkad melchen. Diarbennet e oent gant soudarded Rom, ha red mat e oe d'ezo distrei adarre d'o lokou, goude beza lezet seiz kant eus o re da drempa douarou Bro-C'hall.

Dopt a rejont c'hoaz pemp pe c'houec'h guech all dre o riboulou, mes bep tro e vezent gwall dizet hag e rankent dispenn o roudou. Er bloavez 278, goude beza laeret ha dismantret ouspenn tri-ugent kear e Bro-C'hall, e kouezas varno holl zoularded Rom evel an tan, hag a flastras d'ezo daou ugent mil den.

Goude beza paket eur seurt ougnad e chomjont reiz eun tachadig, epad eun hanter-kant vloaz.

Pa lavaran e chomjont reiz, eo red en em entent. Ya, ar re a yoa kustum da dreuzi ar Rhin. O breudeur avad, uhelloc'h etrezek an hanter-noz ha tostoc'h d'ar mor (ar Zaazon), a bignas trumm var o listri skanv, a en em lakeas da redek ar mor ken a zaone, hag a ziskennas bep an amzer var hon ao ljou, en eur hada dre ma 'z eant ar spont, ar freuz, al laeronsi hag al lac'herez.

E Rom e c'hore c'hoaz goulskoude eun eulfen vuez, oh ! simplik, simplik tout. Ar boblou a c'hoarvez ganto evel an dud : ebars ene ar re doc'horra e chom speget betek an halanad diveza, an ioul hag an esperanz da veva c'hoaz eur pennadig. Ar Romaned eta, evit diouall da veza flastret gant ar boblou gouez a venne diroll varno a bep tu, a en em lakeas a-zevri da grenvat o c'heariou brasa eus Bro-C'hall hag Arvor. En dro da Wened, d'an Naoned, da Aleth ha da Roazon, e oe savet peziadou mogeriou ledan ; meur a hini all a oe difennet dre gestell krenv, evel Jezokribat (Brest), ar Yeodet, Sulim, Lokmariaker ha Kastell-Paol. E pep hini eus ar c'heariou-ze e oe lakeat eun toulladig soudarded evit herzel ouz an enebour, pe evit youc'hal varzu Rom ma savje re a veac'h. E gourenez Arvor ez oa skignet unnek pe zaouzek mil den var droad hag eur milher all var varc'h.

Dre ma 'z oa dare kreski evelse an niver eus difennourien ar rouantelez, houman a deue da veza diesoc'h-diesa da c'houarn. Chenchamanchou bras a yoa red da ober, hag ar chenchamanchou na deont morse heb mizou.

An impalaer Dioklesian, o santout n'oa mui gwest da zirouestla kudennou ar rouantelez a-bez na da zifen ar broiou a yoa dindanni, a c'halvas tri genseurt all d'e skoazella hag a rannas e c'halloud etre peder loden. Ha n'eo ket tanoat a reas ar c'hargou : pell ac'hano ! Her guelet a raimp bremaik.

Ma vije bet gellet c'hoaz, — en eur jacha digant ar paour-keaz labourer e c'hounidegez, e c'houezen ha betek e c'hoad — ma vije bet gellet c'hoaz herzel dre 'n hent-se ouz ar bobladou gouez. Mes nan ! guelet e vezint o tiroll evel tarziou kurun var gourenez Arvor, heb ma c'hellfe mui netra o diarbenn, hag o wasta hor bro reuzeudik dre an houarn hag an tan.

II. — *An tailhou direol var gein ar bobl*

Evit koumpren guelloc'hik petra rea d'an tailhou beza ker pounner, greomp eur zellig dre laer var reiz ar c'houarnamant d'ar mare-ze.

E penn ar vro, o feneanti en e lez, edo an impalaer, hag en dro d'ezan, oc'h ober an neuz d'e zervicha, eun niver divuzul a zreberien arc'hant. E pep leac'h hag evit pep tra ez oa tud, ha tud a lignez uhel m'hen tou d'eoc'h.

Bez' ez oa mevelien a gantchou evit kempen ar gramb, evit diouall an dilhajou, evit chom er bureo, evit kas ha kerc'het liziri, evit kelen ar vugale, heb konta ez oa c'hoaz e kichen pep hini eus ar rummajou-ze eur rummad all karget da evesat ouz o labour, evel ar c'hamprer bras, ar penn-arme, rener ar marchosi ha mestr ar gegin.

N'oa ket an impalaer evit finval heb kaout eur vandenad friou bras da vont d'e heul : ar zelaouerien, pa rente ar justiz ; ar guzulierien, pa rea lezennou ; eur rejimantad notered ; p'en deveze eur skrabaden bennak da ober var baper ; ar ziellerien pa veze meneg da rei eun tamm sinatur. En e gichen edo c'hoaz mestr ar postou ha mestr ar polised, ministr an arc'hant ha rener ar vereuri. Pep ministr, pep rener, pep mestr en devoa c'hoaz eur bern mevelien d'e zikour var dro e vureo.

Setu aze e pe stad ec'h en em gave penn ar c'houarnamant d'ar mare ma komzomp anezan. Hag abaoe ma voe rannet ar rouantelez e peder loden, ez oa ive peder lez eus ar seurt-se. Kontit 'ta neuze mar gellit pet goaderez a zune bemdez gwenneien ha goad ar paour-keaz pobl !

Ha c'hoaz ne velomp aze nemet penn uhella ar c'houarnamant. Petra da lavaret 'ta neuze ma 'c'h en em lakefomp ive da niveri mevelien an holl gouarnourien eus ar broiou all a yoa dinlan beli Rom (eur seitek pe drivac'h anezo). Dont a rafemp da skuiza pe gentoc'h da zével droug ennomp.

An dudou-ze holl n'o doa karg ebet da baea ; nan, netra da ober nemet krabanata, hag ato krabanata. Eveldo an dud a arme a yoa ive diskarg a bep guir, kerkoulz ha kement den pinvidik ha galloudus a yoa skignet dre ar vro.

Var biou eta e koueze ar c'hargou ? Var biou ? Selaouit.

Er pevare kantved ez oa e rouantelez Rom tri rumm dud : ar *bobl dister*, an dudigou munut, ne baeent netra var an digarez kaer m'o devoa netra ; an *dud a c'houarnamant* (mevelien bras, arme, senatourien, ne baeent ken neubeut netra var zigarez m'o deveze pep tra digant ar c'houarnamant ; an *dudou entre*, egiz ar berc'hennerien vihan, a ranke paea evit an holl.

Varar berc'hennerien hebken eta, da lavaret eo var ar re o doa eun tamm douar-leve bennak, e koueze tout an tailhou. Ha n'oa ket eur vil vad ha ne vije ket sammet. « Ar parkeier, eme Laktans, a veze muzulet betek an disterra poulouden ; an treujennou ha betek ar griziu gwez a veze niveret piz ; al loened a bep ment a veze douget var ar roll ; pep penn den a veze merket. Evit miret na vije kuzet netra, ar mab, galvet da rei testeni a enep e dad, a veze diframmet digantan e izili ken en de vije kavet eun dra bennak da damall d'ezan ; ar guella servicherien a veze bour'evet ken a c'hellent kaout eun abeg bennak da lakât kondaoni o mistri ; ar priejou a veze great d'ezo en em spia. Ar re n'o doa na kar na par, a veze gwanet ken a en em verzent o-unan, ha goude beza merzeriet, e vezent douget var ar roll evit madou ha n'o devoa bet morse.

» Diou ha teir guech ar bloaz e veze kaset pôtrede ar gwir da zestum an tailhou, ha peb tro ar c'hargou a greske : n'eo ket ma vije chomet eun dra bennak azilerc'h ar re genta, mes an eil rummad a ranke kaout muioc'h eget ar c'henta, pe e c'hiz all e vezent tamallet da veza bet lezirek en o dever.

» Goulskoude ar chatal a yea var rouesât, an dud a varve stank ; paea a ranked neuzè divar ar re varo : en hevelep doare ma ne c'hellet mui na beva na mervel heb paea ar guir. »

Gouasa 'zo, d'ar berc'hennerien o-unan oa roet c'hoaz ar garg pouner ha chastrefis da lakât sevel an tailhou, gant

an obligation da denna eus o godel o-unan ar pezh a vanke, pa ne felle ket d'an holl paea rik-ha-rak.

Ar stad a berc'henner, klasket ha digemeret guechall gant honor ha joa, a yoa deuet da veza breman eun ifern. Neuze e oe guelet evit ar vech kenta eun dra souezus meurbet : an douar dilezet gant e berc'henn hag an ioul d'en em zizober eus a bep tra kuit da gaout netra da baea. Kaer en devoa an impalaer kinnig an douarou evit netra, guech d'ar Romaned, guech da gouezidi, ne gave den d'o c'hemeret.

Setu aze peseurt frouez kaer a gutuilhas ar rouantelez varlounk, an dreberer arc'hant : ar vizer hag ar vervent dre ar broiou. Arvor dreist-holl a oe gwall-c'houliet gant ar vleizez ; rak aman, o veza m'oa paour an douar ha tano ar peuri, oa dare d'ez i sanko dounnoc'h he skilfou kamm evit gellout sunat he goalc'h.

III. — An diveza ronkounel !..

Petra 'reas, a zonj d'eoc'h, ar vamm gram-poez gant ar madou a ziframmas ken dizamant diouz kerc'henn he bugale hanter vac'hagnet ? Diouall ar vro ouz an enebour ? Ya, rimadel.

Kerkent hag ar bloaz 350, e oe guelet adarre ar bo-bladou gouez oc'h en em stleja evel barrou kazarc'h var douar Bro-C'hall, o laerez hag o freuza kement kear a gavent, hag o tistrei adarre d'o zoullou-kuz, leun o c'hof a voued ha reut o vier a zanvez. Ha n'eo ket mui dre bemp pe c'houec'h mil eo e teuont, mes beteg tregont, hanter-kant ha kant mil den gouez var an Itali, en o fenn eur c'habiten brudet dre e grizder, Radagez, a lac'h hag a zev pep tra dre ma 'z a. An impalaer, o veza galvet da zont da zifenn Rom kement soudard a yoa e Bro-C'hall, var ar vro-man e tirollas tost kement all a c'houezidi. Ar skoulad a badas dek vloaz leun heb ehana. Pebez bou'ver dre ar vro varlerc'h eun hevelep goalen ! Selaouit klemmou eun den eus an amzer-ze, Prosper an Akiten : « Ha goude m'en dije, emezan, an mor bras torret e fardellou, ha beuzet holl douarou Bro-C'hall eus an eil korn d'egile, ne vije ket bet muioc'h a drubuilh. Laeret eo bet hon loened, hor frouez hag hor greun, diskaret hor guez hag hon ed, dismantret hon tiegeziou gant an

dour pe an tan. Ha c'hoaz ma ne ve ken. Mes ive an dud en o ziez hag en o farkeier a zo bet frigaset, krouget pe toullgofet ! »

Setu aze peseurt goalen reuzeudik a skoas epad dek vloaz (eus 406 betek 416) hor broig Arvor koulz ha pep korn all eus Bro-C'hall.

Hag aberz gouarnamant Rom tamm skoazel ebet na deue. Ar c'hontrol eo : darn eus gouarnourien ar rouantelezh n'o devoa ket an disterra morc'hed evit en em stroba ouz ar gouezidi, nag evit hisa ar bleizi daoudroadek-se a enep tud ar vro pa c'hoarveze ganto dougen klemmou Eur c'habiten roman, e hano Aesius, o sonjal dre 'n hent-se kaout gras-vat an Alaned, eur boblad eus ar re grisa, a zichouas anezo var hor bro Arvor, en eur rei d'ezo aotre da astenna o c'hraban var an hanter eus danvez ha leveou ar vro-ze ; ar gouezidi, a c'hellit kredi, na oe ket izom da bourchu varno.

Evelato eur vouenn dud a reas c'hoaz brasoc'h gwas-tadur eged an Alaned : ar re-man da vihana, a veza ma 'z oa o meunoz dont da ober o demeurenz en hor gourenez, a gavas mat, er guel a ze, espern eun darn bennak a jome c'hoaz enni.

Ar rumm dud all-ze, mil guech krisoc'h eget an Alaned eo ar Zaozon, respet deoc'h ! Ar re-man a yoa o neiziou en tu bennak vardro ster an Elb en Allmagn. Ha bep an amzer e teuent var o listri skanv, great gant krec'hin chatal da ober o reuz var zouarou an Arvor. Laerez a reant heb damant kement vad a gavent da blijout d'ezo, ha lac'ha reant zoken heb truez ebet kement hini a reavan da zalc'her penn d'ezo. Mantrus eo klevet tud an amzer-ze o kounta pebez diaoulou-ifern oa ar Zaozon p'en emlakeant da c'hoari vaz. An tammou kanailhez difeson-ze eo a gasas hor paour-keaz bro betek dor an islouk.

Ha c'hoaz ! ma n'o dije great nemet laerez ha lac'ha ! An tan a lakeant ouspenn e kement ti hag e kement kear ne c'hellent ket da zistruja a hent-all.

Hag hirio, bep tro ma touller doun an douar e kement kear goz a zo en hor gourenez, ez or sur da gaout enno berniou teo a ludu pe a c'hlaou. An dra-ze eo relegou an Arvor guechall-goz, dismantrou ar vro-man bet pul-luc'het gant an estren...

AN TOUR-GUEN.

SON JANEDIK AR VOUZEREZ

Var eun t6n Spagnol

An diskan a zo mad hag eaz he gana gant diou vouez

Moderato

E ki-chen va fre-nest zeuz eul la bou - sik o ka -
na beb nos-vez o ka - na flou - rik.

DISKAN

Ya kan 'ta la - bou-sik kan ken a gle - vo kan d'ar
plac'h Ja - ne-dik ma teu - io en dro.

1
E kichen va frenest
'Zeuz eul labousik
O kana bep nosvez
O kana flourik.

2
Janedik zo mouzet
En deiz all, p'edo
Kaset an embannou
Ha prest ar friko.

3
Eat eo da Vro Gerne
Da vro ar pillou
Ha lezet he Yannik
Da skuilla daélou !

4
Kerneviz, gwall botred
Kemerit dillo
Ar valaén gant Janed
Ma teuio en dro .

5
Archerien hag urcher
Ha c'hui aoutrou Mear
Kasit dezi paper
Ma teuio d'ar gear .

6
Koajou ha menezioù
Parkeier balan
Soublit oll ho pennou
Ma teuio buan !

7
Ha c'hui, merc'hedigou,
Bodet d'am c'hlevet,
Na rit ket 'seurt troiou
D'ho kamaradet !

DISKAN

Ya, kân 'ta, lakousik
Kân ken a glevo
Kân d'ar plac'h Janedik
Ma teuio en dro !


R. TRÉOURÉ.

*L'abbé Bong,
vic. à St. Gild.*

BEZIT FUR (sôn)

(Da gana araok ha goude eur pezh-c'hoari).
(Var an ton gallek : *C'était Anne de Bretagne.*)

Moderato



In-trou-ne zed di-n'e-zel let ha c'hui ao-trou - ien trou-c'ho-rien bu-



zug ha pren-ved ha mi-che-rou - rien ke-ment den zo ho-det a-man grit e-vel tin-



tin Ma rian - na Bezit fur hag o pe-zo pli-ja - dur.

I

Intronezed, dimezelled
ha c'hui aôtrouien,
Trouc'herien buzug ha prenved.
ha micherourien,
Kement den zo bodet ama,
Grit evel Tintin Marianna :

DISKAN :

Bezit fur
Hag o pezo plijadur !

II

Ar vnez zo leun a zaelou
trubuilh hag anken
Red eo plijadur avechou
da galon an den
Heb eun tamik pehr hag olen
E vez kavet fall ar zouben :

III

Ni zo ' vont eta eur pennad
d'ober komedi
da lakat dindan bolagad
ha dindan ho fri
traou da laouennat ar galon
Ha da virat ouz an drebôn :

IV

Penn da ben d'ar c'hoariadek
eur vech an amzer
' vo kanet « e brezounek »
Soniou c'hwek ha berr
Digorit evit ho selaou
Ho tiskouarn... hag ho kinou.

IV

Ma c'hearvez da Yan pe Fransa
fuilla he guden
Na rit ket a c'hoap anezha,
koll a raf' he benn.
Alo, iaô brema d'al labour
Awoalac'h 'meuz grêt a wigour.

GOUDE C'HOARI

Ema klozet an abaden,
echu tout ar stâl ;
Grêt-o peuz meur a c'harzaden
laouer-êt ho tâl : [man
Mar d-c'h kourtant kerzit bre-
Da velet Tintin Marianna.

DISKAN :

Kenavo
Kenavo ar genta tro.

P. TRÉOURÉ.

Eureujet 'vit an Nenvou

Var an douar an disterra
Ez eus bleuniou euz ar c'haerra ;
E peb leac'h ar roz a ziwan
Ha santelez ive a gavan.

Mari-Ann a ioa he zud o chom var ar meaz. Labourat
a rea evit beva, ha beva evit pedi.

Oll joa Mari-Ann oa ar zul ; ar pezh a garie dreist an
traou all oa oferen-bred ar barrez.

Mes, dezi da veza evurus, Mari-Ann a oa ankeniet :
Yan, mab he magerez ne dea ket vardro an i'is.

Eun devez, — an dra-man a ioa e kenta sklerijen heol
maë, — Yann a c'houlennas Mari-Ann da bried en eur
ginnig dezi eur boked.

Mari Ann a gemeras ar bleuniou.

En eur o lakat e kichen eur skeuden d'ar Verc'hez he
lavaras da Yann : « Red eo en em garet e Doue : n'ez eus
nemet an dra-ze a vir. »

Ar paour-keaz Yann ne ententas seurt gant an diviz-se.

Abaoue, teir gweach heol Maë en doa sklerijennet an
oratorik great gant Mari-Ann d'ar Verc'hez ; ha Yann ne
zigase mui a vleuniou.

Goulskoude Mari-Ann a lavare bep noz en he fedennou :
« Va Doue ! Va Doue ? Grit ma c'hounezin d'eo'h ene
Yann ! »

* *

Oh ! an dervez a drubuill hag a anken ! Beza emamp
e Gravelott. An dud gloazet ha gouliet a leun an hospita-
liou ; ne veler e peb leac'h nemet tud leun c'hoad ha tud
varo...

Mes piou zigaser var ar c'hraz eus tachen an em-
gan ? Sûr, n'eo ket eur soudard eo. Doare eur sœur
yaouank he deus. Leun-c'hoad eo, liou ar maro 'zo var-
nezi ; he dremm zo ken gwen hag he c'horneten.

Hounnez a zo eur verc'h da Sant-Visant a Baol. Daoust
ha kavet he deus ar maro a greiz m'edo o sikour he esa ?
— Nann, n'eo ket maro ar verc'h santel. A nebeudou e
teu dezi eunn tammik nerz.

Kabalat a rer breman en dro d'ar sœur yaouank. Ar vedesinet a dosta evit louzaoui anezi. Ar soudardet n'int ket astennet var o gwele a dosta evit gwelet; en em heurta 'rer evit beza tostoc'h.

« O va Doue!... Mari-Ann! Mari-Ann! » a lavar eur zoudard yaouank.

D'an hano-ze ar c'hoar yaouank a sav he daoulagat; he muzellou a zigor evit lavaret eur ger:

— « Yann! emezi.

— « C'hui aman, Mari-Ann!

— « N'oun, mui Mari-Ann, emezi gant eur vuez ken » izel hag eur mouch-avel. Hanvet oun breman: c'hoar » Jeann. »

C'hoar Jeann!... an daou c'her-ze a zo eur sklerijen evit Yann.

Mari-Ann a garie Yann dreist oll garantez an douarman, hag evitan oa en em ginniget e sakrifis da Zoue.

* * *

C'hoar Jeann a zo maro. Yann a zo distro d'ar gear. Bep sul e za d'an oferen hag atao ec'h en em laka el leac'h ma taouline Mari-Ann kentoc'h.

Ha pa zistro heol Maë, Kroaz ar vered a vez goloet bemdez gant ar bleuniou ar c'haerra.

Red eo en em garet e Doue. N'ez eus nemet an dra-ze a vir.

A. J.

FURNEZ BREIZ

Lagad ar mestr a lard ar marc'h
Hag a laka ed 'barz an arc'h.

Kaz maneget ne dal netra da logota.

Laerez he amzer hag he voed,
Brasa pec'hed a zo er bed.

Dibaod ar c'halvez
A labour eb danvez.

C'hui a gafche mad pesked dizrein.

Falla ibil a zo er c'har a wigour da genta.

Klanv eb glac'har
Kam ki pa gar.

Unan eus skrivagnerien Feiz ha Breiz⁽¹⁾ a zo staget da lakat e brezoneg Imitation Jezus-Krist. — Lakat a reomp aman ar gentel genta evit diskues petra vezo al levr haër-ze pa vezo troet e brezonek yac'h.

Traduction de l'Imitation de J.-C.

LEVR KENTA

KENTEL I

Red eo bale varlerc'h Jezus-Krist hag ober fae var blijadure-siou didalvez ar bed-man.

1. An hini a deu d'am heuil ne vale ket en denvalijen, a lavar Hor Zalver. Setu komzou Jezus-Krist, dre eno omp galvet gantan da vale var he roudou, ma fell deomp beza sklerijennet e guirionez ha dilivret euz peb tenvalijen a guez var ar galoun.

Lakomp eta hor spered, araok peb tra all, da zonjal var buez Jezus-Krist.

2. Kelennadurez Jezus-Krist a zo dreist oll kelennadurez ar zent, hag an hini a vije gantan spered Jezus-Krist a gafche eno eur boued dispar kuzet.

Mez kalz tud, goude klevet aliez an Aviel, a jom evelato klouar o c'haloun; n'eman ket ganto spered Jezus-Krist.

C'hoant ho peuz da gompren, ha da gaout blaz mad gant komzou Jezus-Krist? Grit guella c'helloc'h evit beva evel Jezus-Krist.

3. Petra c'hounezoc'h o klask mont doun e mister an Dreinded ma ne zoc'h ket izel a galoun ha ma tisplijit abalamour da ze d'an Dreinded Sakr?

N'e ket renka komzou kaer eo a ra an den just ha santel; eur vuez dinam, avad, hon gra mignouned da Zoue.

Guelloc'h eo ganen santout em c'haloun glac'har d'am pec'hejou eget beza goest da zisplega petra eo ar ger glac'har.

Ha goude ma c'huesfec'h ar Skritur Sakr penn da benn ha kement o deuz lavaret an dud desket, petra dalvez an dra'ze deoc'h eb ar c'hras hag ar garantez?

(1) M. l'abbé Pluquet, Supérieur de l'École St Vincent, à Quimper.

Avel, maged ha netra ken eo oll draou, ma ne garer ket Doue, ma ne zervicher ket Doue ebken.

Ar furnez dreist peb furnez eo pignat varzu an Nenv oc'h ober fae var ar bed.

4. Rag-se 'ta : red eo beza diskiant evit dastum madou a vezo lamet diganeomp, ha lakat hor fizianz enno.

Diskiant an hini a red varlerc'h an enoriou, a glask sevel an huella ma c'hell.

Diskiant an hini a zent ouz he ioulou fall, an hini a glask plijadureziou a raio dezan beza kastizet.

Diskiant an hini a c'houlèn beva pell amzer eb lakat tam aked da veva mad.

Diskiant an hini a zonj er vuez-man eb ken, tam ebet er vuez da zont.

Diskiant an hini a stag he galoun ouz ar pezh a dremen ker buhan, e leac'h kaout mall da zigouezout en eüruzded n'euz fin ebet dezi.

5. Ra vezo aliez en hor spered ar virionez-man : « Al lagad ne skuiz o velet, nag ar skouarn o klevet. »

Poagnit da vistaga ho kaloun diouz an traou a velit ha d'en em drei ouz an traou ne veler ket.

Rak ar re a ro d'o c'horf kement a c'hoanta a gaillar o ene hag a goll gras Doue.

Eur zel varnomp hon-unan

N'hon deuz var an douar-man nemed eun dra da ober : savetei hon ene ; ha den ebet ne c'hell beza salvet nemed dre Jesus-Krist ha gant Jesus-Krist. Kredi en he Aviel, senti ouz he c'hourc'hemennou, beva eur vuez santel eveltan, setu petra hon deuz da ober, ha netra ken. An oll draou all n'int nemed follentez, avel, maged : pinvidigez, plijaduresiou, enoriou, petra dal an oll draou ze pa vez taolet ar c'horf er bez, ha pa za an ene d'ar vuez eternal ? Sonjit mad en dra-ze hirio, breman dioc'htu : varc'hoaz, marteze, e vezo re zivezad. Labourit epad m'eo deiz ; dastumit, ha buhan, eun tenzor ne c'helloc'h ket da goll ; eman an noz o tont, hag en noz ne c'heller ober netra. N'e ket gant c'hoantegesiou didalvez eo e vezoc'h saveteet ; oberou eo a fell da Zoue kaout. Grit ta evel Jesus-Krist, m'ar ho peuz c'hoant beva da viken eüruz gant Jesus-Krist.

I. U.

Souhais du Paysan Breton

Ma c'hoan em c'horf me garfe ve noz,
Ar zul varc'hoaz, ha gouel antronoz.

Meurlarje ! meurlarje !
Me garfe ' vije bemde,
An cost teir guech ar bloaz,
Gouel Mikeal beb nao bloaz.

Respont da zivinadennou miz Maë

- I. — Eur jeu gartou.
- II. — Mantel ar siminal.
- III. — Eun den gantan eur bontou koat gant tachou, — e zivesker a ra ar pillerou, etc.
- IV. — Plasou. — Eur plas da bep tra, hag e chom plas c'hoas.

O deus havet da nebeuta teir :

3. — T. ar Bris, Plouguin. — F.-M. Picot, Plouvorn. — Miche Autret, S. Thonan. — Marie Le Roy, Guissény.

Divinadennou Miz Even

- I. — Gant pe seurt daoulagat e ves an den gwella maget ?
- II. — Petra eo an netta tra e ti eur gouillouren ?
- III. — Ar vasin n'eo ket seac'h avoalc'h, leiz eo eun draik ; mes lakit enni eur c'hreunen boultron, ha kercent an dour a zivero anezi a gleiz hag a zeou. Pe seurt basin eo hounrez ?
- IV. — E pet feson dishenvel e c'hello c'huec'h den en em renka ous taol ? Evit ma c'heil-c'h kaout esoc'h ar respont : Daou zen ne c'hellont en em lakat nemet e diou zoare : eur vech a zeou hag eur vech all a gleiz an eil d'egile. — Tri a c'hello en em renka e c'huec'h doare : Peb hini en em lakaio d'e dro e kreiz hag an daou en em renko eur vech a gleiz hag eur vech a zeou, setu c'huec'h doare dishenvel : $2 \times 3 = 6$. Ha pa vezint pevar ? — pemp ? — c'huec'h ?

JEANN D'ARC

TRI ARVEST E SEIZ TAOLEN

Great e galleg gant Georges GOURDON

Ha lakeat e brezoneg gant eur Breizad

ARVEST KENTA

Taolen genta. — Jeanne d'Arc o vont en hent, miz Genver 1429. He zad, he mamm, he breudeur 'zo c'hoas en dro dezi.

Eil taolen. — Jeann dirag ar Roue e Chinon, 6 a viz Meurs 1429, aleiz a varc'heien 'zo er zal vras eus palez ar Roue ha kals goulou 'zo var elum.

EIL ARVEST

Trede taolen. — Jeann d'Arc, gwerc'hez an delivrans, dirag Orleans, 7 a viz Maë 1429, en diaveaz eus Kastel an Touriou.

Pedervet taolen. — Jeann d'Arc e Reims, 17 a viz Gouere 1429. Ar Roue 'zo sakret.

TREDE ARVEST

Pempet taolen. — Jeann gwerzet, miz Gouere 1430, demdost da Gompiegn, e kamp Yan a Luxembourg.

C'huec'hvet taolen. — Jeann e prizoun Rouen ; barnet eo d'ar maro.

Seizvet taolen. — Jeann 'zo merzeriet e Rouen var blasen ar Marc'had-Koz, 30 a viz Maë 1431.

Ar pez-c'hoari dispar-man a vo kavet da brena e Brest,

IMPRIMERIE DU « COURRIER »

BREST — 4, Rue du Château, 4 — BREST

Evit pevar real (1 fr.) ar mizou kas ouspenn

Feiz ha Breiz

Kannad Misiel ar Vretoued

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

AR BROFETED

(KENDALCH)

Pere eo ar brofeted ? — Diouz kement em euz lavaret betek hen, ar profet a zo kannad Doue er bobl dibabet gant Doue. Moyzez a zo bet ar profet gwirion kenta, daoust m'oa plijet gant Doue dizelei meur a veach an amzer da zont d'ar Batriarched. E amzer ar varnerien ar brofeted a zo roues meurbed : hanvomp goulskoude « Delora » (Barnerien v), « ar profet » kasset d'ar bobl a Israel epad ar brezel gant ar Madianed, hag « an den Doue » a deu da gemen d'ar belek bras Heli ar reuz a gwezo var e vugale (I. Rouaned II, 27). — Gant « Samuel » e kavomp pen kenta al lignez gaer a brofeted a bado betek ma vo ar bobl distroët euz an harlu. — En Testamant kos e kavomp skridou c'huezek anez-o ; re all a zo hag o deuz ive komzet en hano Doue, mes a c'hinou hebken, pe m'ho deuz skrivet o c'homzou, da vihana ar skridou a zo bet kollet evit mad. E mesk ar re-ma e c'hellomp lakat « Nathan », kasset da c'hourdrous ar roue « David », profet e unan ; « Gad, Balaam », ha dreist-o « Eli » hag he ziskibl « Elise » o deuz bet kement o daou da c'houzanv a berz ar rouaned ha beleien ar fals doue Baal.

Ar c'huezek profet all a vez peurliesha great daou rumad anezo : pevar a vez galvet ar « brofeted bras » ar re-ze eo « Isai, Jeremi, Ezekiel ha Daniel. » An daouzek all a vez great « profeted bihan » anezo abalamour o skridou a zo beroc'h eget re ar pevar all. Kement a lavaront goulskoude a dalv kement hag ar re all. Ar brofeted-ma a zo diouz renk : « Osee, Joel, Amos, Abdias, Jonas, Mi-

keas, Nahum, Habakuk, Sophoni, Agje, Zakari ha Malachi. » En ho zouez e c'heller lakat ive « Baruk » a ioa sekretour ar profet Jeremi hag abalamour da-ze e skrid a zo stag ouz hini he Vestr.

Renk ar brofeted ervez reiz an amzeriou. — N'eo ket eas tam ebet lakat ar brofeted, dreist holl ar re a vez great profeted bihan anezho, diouz renk ervez ar c'hantvejou o deuz bevet enno. Goulskoude arabad e viche kavout nec'hamant evit an dra-ze ; rag gouzout mad a reomp e pe vare o deuz bevet ar re anezo o deuz diskleriet an traou brasa, kement a zell ouz hor Zalver benniget ha kent-a-ze ne heller ket nac'h an doare dreist natur m'int bet diskleriet gant ar brofeted a berz Doue.

Ervez reiz ar c'hantvloazfou e c'hellomp ober pevar rumad euz ar brofeted :

I. « Euz 750 da 700 » (araok donedigez hor Zalver) araok ma saillas Sennakerib roue an Assyri var rouantelez Juda, araok maro ar roue santel Ezekias, « Amos » hag « Ose » a gomz e rouantelez Izraël, etre 750 ha 722 ; « Isai » ha « Mikeas », e rouantelez Juda, etre 740 ha 700.

II. « Adalek 640 da 600 », pa rene Manasse hag araok ma oe diskaret Niniv kear ben an Assyri, Doue a zigassas « Nahum, Sofoni, Jeremi hag Habakuk. »

III. Epad an harlu evit ar Juzevien euz « 592 da 538 », e kavomp Ezekiel (592-570).

IV. Euz « 520 da 435 » e klevomp « Agje ha Zakari » (520) ha « Malaki » vardro 435. « Abdias » a gomzas evel « Joël ha Jonas » en naved kantved araok donedigez hor Zalver ha « Daniel » vardro 604 da 534. Ar renk hag ar vloaveziou-ze a zo roet tost-da-vad, kent-ze n'int ket roet difazi.

Setu ama brema, m'ar kirit, ar broiou, ar poblou, an traou a gomzas ar brofeted anezo. « Abdias » a gomzas eneb bro an « Idume » ; « Joel », divar benn rouantelez Juda ; « Jonas », a eneb Niniv ; « Amos » eneb Izraël ; « Ose », divar benn Izraël ; « Mikeas » eneb Juda hag Izraël ; « Isai, » divar benn an holl boblou anavezet gant ar Juzevien ; « Nahum », eneb Niniv ; Sophoni, eneb Juda hag ar boblou demdost ; « Habakuk », eneb paotred ar C'haldee ; « Jeremi », divar benn Juda hag a eneb ar poblou dosta, an Ejipt hag Babilon ; « Baruk » a ro

kuzulioù mad d'ar re a ioa sklav e Babilon ; « Ezekiel » a gomzas eneb Juda hag ar poblou tosta ha divar benn ar vro savet a nevez ; « Daniel » a gomzas euz ar rouanteleziou bras a deuas an eil varlerc'h eben. « Agje » a ro promesaou da Juda ; « Zakari » a ganas ar c'hloar da zont evit Jerusalem ; « Malaki » a ganas madelez Doue e kenver he bobl.

Skridou ar brofeted hag hi a zo gwirion ? — Ar fals doktoret, ken niverus hirio, a lavar goude Renan, trubard Landreger a nac'has he feiz kristen, a lavar divar benn ar skridou-ze. « Hen anzaou a reomp e zeuz bet en Izraël gwech all tud galloudus o doa eur spered lem ha dispar, ar brofeted. Red eo ober diou loden euz o skridou hag euz o c'homzou : el loden genta e lakeomp o c'homzou gwirion ; en eil loden, ar c'homzou bet skrivet divar lerc'h gant re all a lakeas ar c'homzou var gount ar brofeted ; re sklear int, re zifazi, ha kals re dreist galloud spered an den ha dre-ze int bet skrivet goude ma c'hoarvezas an traou kemennet enno. »

D'ar fals doktoret-ze e livirin a nevez e c'hell Doue dizelei an amzer da zont da eun den, evel am beuz hen displeget diaraok. Brema eo red dislavaret ar zore'hen all a roont deomp marc'had mad.

Da genta, ar brofeted n'oant ket « gaouiaded » : rag santelez o buez, santelez o c'helennadurez a ia eneb ar gevier ; tud oant leun a humilite ; hag ouspen perak o dije klasket lakat ar re all da fazia ? Her gouzout mat a reant o c'homzou a viche kiriek dezo da veza gwalgas-set ; m'o diche klasket o mad o unan daoust hag ar brofeted o diche gourdrouzet ken kalet ar pennou-bras euz ar bobl, ar veleien, ar brofeted o unan evit beza re stag o c'halon ouz madou ar bed ? Penaoz o diche-hi kredet en em zével eneb ar bobl a bez ha beza dre-ze yar var alies da goll o buez ? Penaoz o diche ar brofeted klasket bepred mad o bro, ma vichent bet, ervez Renan hag e genseurted, nemet gaouiaded, ma n'o diche ket bet o c'hefridi a berz Doue ?

D'an eil, ar brofeted n'oant ket « tud diboëll, » bepred oant « tud dihun » hag a skiant vad : anefe-ze penaoz o diche gallet ober o labour keit amzer a skriva traou ken talvoudus ?

D'an trede, ar brofeted a c'huie ervad « oant karget da ober eul labour a berz Doue » : o c'homzou a zo sklear awalc'h : « Ma ne zelaouit ket ac'hanoun, m'hen tou dehoc'h dreizon va unan, a lavar an Aotrou, an ti-kaer ma a deuio da veza eul leac'h goues. (Jeremi xxii, 5). « Setu perag selaouit mad komz an Aotrou, c'hui holl pobl Juda, c'hui holl a zo e bro an Egipt. « Hen touet em euz var va hano a zo bras meurbed, va hano na vezo mui lavaret gant Juzeo ebet var douar an Egipt. » (Jeremi xliv, 26). « Ar brofeted ne lavaront ket atao peb tra ervez o sonj o unan. Evelse Nathan a gav dezan eo red da Zavid sevel an Templ ha Doue a gaso anezhan da gemen da Zavid eo Salomon her savo an Templ-ze. » Ar profeted a c'hoar ervad eo ar Spered Santel a ro sklerijen dezo.

« Skuilh a rin va spered (a lavar an aotrou Doue) var bep krouadur, ho pugale a vezo profeted ; an dud koz en ho touez a vo desket dre uvreou hag ho tud iaouank a velo gwelidigeziou. » (Joel, II, 28) « Evidoun-me a zo bet karget euz nerz, euz furnez hag euz vertuz spered Doue evit kemen da Jacob e dorfet hag da Israël e bec'hed. » (Mikeas, III, 8). N'eo ket profet neb a gar, red eo beza bet galvet gant Doue a deu da c'hourc'hemen d'he gannad pep tra da ober : « Ha spered Doue a ziskennas enhoun, va lakeas em zav, a gomzas ouzin hag a lavaras d'in : « Kerz d'ar gear hag en em zalc'h e kreis an ti ; rag, mab an den, pourchasset o deuz evidout liammou, chadennet e vezi gant-o ha n'helli ket en em denna anezo. » (Ezekiel III, 24-25). — Ar brofeted a ginnig alies eur merk, eur sin evit kred eo digasset gant Doue.

Evelse Isai a lavar d'ar roue Akas e roio dezan an testeni a garo ha Doue a ro ar sin goulennet. Ma ne blij ket dehoc'h anzaou ar burzud, c'hui a lavaro eo ar profet eun trubard, en deuz tennet eun taol physik d'ar roue ; ha n'eo ket gwir ; — ma kredit er burzud, er mirakl, penaoz e fell dehoc'h en diche ar profet goulennet ar mirakl-ze, ma ne gomze ket a berz Doue ? — Red eo eta hen anzaou, ar brofeted n'oant ket gaouiaded ha gwir o doa da lavaret oa kem ha kem bras etre-z-o hag ar als profeted.

D'ar pevare, ar bobl a gemere ar profeted evit gwir

gannaded Doue : evit an holl oant tud fur, tud santel, tud Doue a zizoloë dezo an amzer da zont. Hel livirit d'in, ma ne deuent ket a berz Doue penaoz o deuz-hi gallet en em zewel zoken dreist ar veleien ? Penaoz o deuz-hi ar Juzevien digemeret o skridou ha great kement a stad anezo ?

Gwelomp brema hag ar brofeted o deuz e gwirionez dizoloët an amzer da zont. Renan a lavar n'eo ket gwir ; eur protestant gwiziek euz bro ar Holland a lavar d'he dro : ma teu kemmenadurez ar brofeted a berz Doue, eo red e viche sevenët an holl gomzou lavaret gant ar brofeted : Hogen, kals anezo n'int ket sevenet, kent-ze n'int ket komzou gwirion.

Taolomp evez, lennerien, va mignoured, ous an doare a gemer an aotrounez-ze da zisplega an traou : araok klask entent ha displega lavariou ar brofeted, e krenont an niver euz al lavariou-ze ; hag evit al lavariou a zalc'hont evit gwirion, ar fals doktoret a sonj int deuet da wir dre eun taol chans vad pe dre an taol a skoaz ar c'homzou-ze var spered ar bobl.

Kement-se a zo diskues difazi deomp o deuz ar fals doktoret daou zoare da zisplega an traou : ha p'eo gwir int bet kizidik evit lod euz komzou ar brofeted, perak ne vichent ket evit an holl komzou ? Ma n'eo ket deuet da wir komzou ar brofeted, penaoz o deuz-hi o c'henvroiz bet kement a fizians enho ? Ha neuze awechou ar brofeted a gomze euz reuziou a gouezo pe ne gouezo ket var ar bobl diouz ma reio ar bobl, evelse e Jeremi (XVIII, 7-12) Doue a lavar e skoio ar bobl ma ne ra ket pinijen ; ma sav keuz gant ar bobl da veza dizented ouz Doue, Doue d'he dro en dezo keuz da veza skoet he bobl ; — evelse ive en Ezekiel (XXXIII, 14-15) Doue a lavar e vezo madelezus evit ar pec'her m'en deuz keuz d'he bec'hejou. Ma n'o ket deut da wir komzou Doue, piou a zo kirriek a gement-se, nemet an den ha ne ra ket kement a zo goulennet diganthan ?

Ia, ar brofeted o deuz e gwirionez komzet euz an amzer da zont ha dizoloët an traou da erruout. Setu ama penaoz e tispleg an traou eun den gwiziek meurbed var ar Skritur Zakr, an aotrou Vigouroux, euz Paris.

1° Mikeas (IV, 8-10) a lavar, 150 vloaz araok m'eo en

em gavet, e vezo trec'het Juda gant Babilon ; ha pa gomze ar profet euz an dra-ze, n'oa menek ebet euz eur brezel etre an diou rouantelez-ze, ha zoken rouantelez Babilon n'oa ket c'hoas eur gwir rouantelez. Penaoz eta Mikeas en diche gelllet anaout an traou-ze anezhan he-unan ?

2° Adalek ar penn kenta an holl brofeted a lavar e vezo diskaret kear ha templ Jerusalem, e vezo harluet ar bobl ha kaset evel sklavourien da Vabilon ; hag ar reuziou-ze a zo diskleriet gant komzou difazi ha distag-mad. Gwasa enebourien bugale Jacob d'ar mare-ze eo paotred Assur hag ar brofeted a lavar n'eo ket dreizo e vezo sevenet gourdrouzou an Aotrou Doue ; rouantelez Juda a vezo tennet a boan ; n'eo ket an Egipsianed a zizamo pobl Doue, mes Doue he unan ; paotred ar C'halde a vezo ar benvek a gemero Doue da gastiza he bobl dianaoudek, hag an holl brofeted a gomz euz Babilon a lavar holl ar memes tra. Daoust hag ar c'heleier-ze n'int ket, hag a gals, dreist galloud ha sklerijen spered an den ? ha goulskoude an traou-ze a zo en em gavet ervez m'oant bet kemennet.

3° Kouantelez Nabukodonosor a ioa en he holl nerz, pa deuas Jeremi da ziskleria e viche diskaret ar rouantelez-ze ha komzou ar profet a zo freas ha freas e tiskuillont an traou. Babilon, a lavar ar profet, a vo kemeret dre nerz gant ar Medianed hag ar re a zo a unan gant-o ; en em gavout a rint e kear Babylon dre ganol ar ster dizec'het, e kreis an noz, epad ma vezo tud kear o ruilla er vesventi hag en ebatou divalo ; neuze ar luzevien o dezo a neves o frankis. — Penaoz 'ta eur Juzeo o chom e Jerusalem en deuz gelllet lavaret an traou-ze, o displegahed a hed, ha kals diaraok, ma n'eo ket bet sklerijennet gant Doue en eun doare souezus ?

4° Ar brofeted o deuz komzet divar benn an holl poblou demdost da bobl Doue, ha kement o deuz lavaret a zo deuet da wir. Lavaret o doa e viche distrujet Niniv, Babilon, Tyr, Memfis, Amon, Moab, ar Philistined, tud an Idume ; ar c'heariou-ze, ar poblou-ze a zo bet skubet evit mad ; n'euz hini ha ne viche c'hoarvezet ganthan kement o doa lavaret profeted ar bobl a Israël. Hen anza-vomp eta ; dorn Doue a zo en dra-ma.

5° Zakari (ix-1-8) » en deuz diskleriet difazi brezellioù ha gounidou Alexandr, roue ar Masedoan ; Hadrach, Damas, Hemath, a lavar Zakari, a vezo gounezet dre vrezel ; Tyr a velo he galloud taolet er mor ha kear a vezo pulluc'het ; Gaza a gollo he roue ; Azot a vo darempredet gant koz tudigou ; hag e kreis kement a freuz, Jerusalem a jomo seder. Pa deuas Alexandr da vrezellekat er vro-ze, holl gomzou den-Doue a deuas da wir. » (Manuel Biblique).

Ha nag a bed tra a c'helfer da lavaret c'hoas, nag a bed testeni a c'helfer bernia evelse ? Awoalc'h eo, me sonj, evit ma kredfoc'h e gwirionez hag e talvoudegez skridou ar brofeted divar ben ar Messias, rag n'euz netra kouls lavaret en Aviel ha ne ve ket bet lavaret pell diaraok gant ar brofeted, ama hag a-hont, en Testamant Koz.

Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Taoler hag ar paour keaz

Er bevarzegved kanved, e kear Kologn, bro an Almagn, ez oa o chom eur prezegeur brudet bras. Yann Taoler a reat anezan. Eun deiz m'edo o pedi a greiz e galon en eun iliz, e c'houlenne digant Doue sklerijen da anaout ar gwella doare d'hen servicha. E beden a oe raktal selaouet ; ar sklerijen en devoa c'hoant da gaout a deuas d'ezan dre eur paour a gavas e toull dor an iliz. — Ar paour-ze a veze bemdez digaset di, ha lakeat en e goazez war an deleziou. Eun druez oa e welet : n'ez oa nemet truilhou war e dro ; e zrem a yoa hanter debret gant ar c'hrin-beo ; n'en doa nemet eur vreac'h (ha darn a lavar ive n'en doo nemet eur c'har) ; a hend-all ez oa lakeat en eur stad truezus meurbed gant gouliou donjerus en e holl izili. Taoler a gemer truez ouz an den keaz ; kas a ra e zourn d'he c'hodel da glask d'ezan eur gwenneg bennak, o lavaret : « Deiz mat ! va mignoun. »

« Bennoz Doue d'eoc'h, a respont ar paour ; morse n'em heuz bet deziou fall e va buez ! »

Neuze Taoler a gav d'ezan n'eo ket bet klevet mat gant

ar paour, hag e lavar adarre : « Deiz mat, va mignon ; eun deiz mat a reketan d'eoc'h ; ya, c'hoant am befe da welet ac'hanoc'h eürus, gant kement vad a c'hellfe beza dioc'h ho tiviz. »

— « Entetet mat am eus ac'hanoc'h, Aotrou, eme ar paour ; hag ez oun leun a anaoudegez vad en ho kenver ; mes abaoe pel zo, eo kavet ganen ar pezh a c'houlennit evidon. »

« Evit hema, a zonje Taoler, e rank beza simpleat e spered. Pe marteze a-walc'h ne glev ket sklear. »

Ha setu hen da goms outan kalz krenvoc'h, o lavaret abouez e benn : « Marvat n'hoc'h eus ket klevet ; c'hoant bras am eus da welet ac'hanoc'h eürus ! »

— « En han' Doue, Aotrou, n'it ket da facha ; lavaret em eus d'eoc'h e klevan mat sur ho komzou. Eur wech c'hoaz e tisklerian d'eoc'h ez oun eürus meurbed, ha n'em eus kavet morse deiz fall ebet e va buez. »

Taoler a zo troet muioc'h-mui da gredi ez eo eat e skiant vat digant ar paour keaz. Evelato, doare e gomzou a laka Taoler da zellet tost. Mont a ra neuze tostoc'hig d'ar paour, hag oc'h azeza en e gichen, e c'houlenn digantan eun tammig sklerijen war ar c'homzou en deus lavaret.

— « Mat ! eme ar paour ; va c'homzou n'int ket gwall zies da glevet. Ez vihanik em eus desket ez eo Doue leun a furnez, a lealded hag a vadelez. Ez vihanik ive eo bet stag ouzin ar c'hlenved en deus lakeat va c'horf er stad heuzus a welit brema ; atao em eus bevet paour ha dibourve. Sonjal a rean ennon va-unan : ne c'hoarvez netra nemet dre ma fell da Zoue, pe dre ma lez ober. Doue a oar gwelloc'h evidon petra zere ouzin, rak karantez eun tad en deus em c'henver. Dre-ze oun sur e tigouez ar poaniou-ze ganen evit va brasa mad. En doare-ze em eus kemeret ar pleg da eüna bepred va bolontez hervez bolontez an Ao. Doue, va Mestr ken mat.

Pa zigas d'in ar c'hlenved gant e boaniou, e ran d'ezo eun digemer laouen ; pa deu d'in eun tamm yec'hed bennak e vez digemeret gant plijadur. — Ma ne deu d'in a-wechou tamm ebet da zibri, ez oun kountant da yun, evit paea ar boan dleet d'am fec'hejou ha da bec'hejou ar re-all. Pa n'em eus ket peadra d'en em wiska, e teu

sonj d'in eus va Zalver ken nebeut a dra endro d'ezan e kraou Bethleem ha war e groaz ; kaout a ra d'in ez oun c'hoaz pinvidikoc'h eget ne oa. M'am beus kalz poan da ziwaska war an douar, me oar mat ne vezin nemet eürusoc'h a-ze er baradoz.

N'em eus ken da lavaret d'eoc'h nemet ez oun eürus bepred ; ma vez daelou a dristidiguez en eul lagad, en egile e vez daelou a levenez.

Kement a fell da Zoue me a fell d'in ive ; ne glaskan nemet ober e volontez santel. Aotrou, gwelet a rit eta n'em eus morse nemet deziou mat, hag em eus a-benn brema zoken kement a c'hellan da c'hoantaat. »

Taoler a yoa chomet sioul, hag an dour a zirede eus e zaoulagad. Biskoaz en e vuez n'en doa klevet eur brezen ken kaer ha ken goest da ober vad.

Lezel a ra gant ar paour e vantel, hag ive da heul ar pezh arc'hant a jome gantan c'hoaz ; pokat a ra zoken d'an den keaz, daoust d'ar gouliou heuzus a welet war e zrem. Hag ez a en dro d'an iliz da drugarekaat an Ao. Doue en doa desket d'ezan ar gwella doare d'e zervicha ervat.

A-c'houdevez e poanias, gwella ma c'hellas, da gemer skouer war ar paour-ze ker santel ; ha pa gonte e histor, ez oa boaz da lavaret : « gwir eürusted a c'heller da gaout e pep stad, ya, e stad ar paour koulz hag e hini an dud pinvidik, e stad ar re glanv kouls hag e hini an dud yac'h. Er galon, ha nan e leac'h-all, eo ema an eürusted. An den zo eürus dioc'h ma ve troet, ha tamm ebet dioc'h ma vez en eur stad pe en unan-all. — Karomp Doue ; poaniomp da ober e volontez, hag e vezimp eürus bepred hag e pep leac'h.

(AN TAD BOURDOULOUS,
Skoueriou kristen.)

EILVED LODEN

Ar Relijion

Ar falz-doktor. — Koulskoude, m'her goulenn, da ober petra eur relijion ?

An difennour bihan. — Iskiz eo, velkent, ar pezh a livirit. Daoust ha na livirit ket : deiz mat ! Bep mintin, ha : noz vat ! bemnoz, d'ho tad, d'ho mamm, da dud ho ti ?... Ha perak n'her grafec'h ket ive da Zoue, hon tad d'eomp holl ?

Daoust ha ne gomzit ket outo gant karantez ha gant fizians ? Ac'hanta, perak ne rafec'h ket evel-se ive gant Doue ? Pa emaoe'h en ezom, pa hoc'h eus diouer eus eun dra bennak, daoust ha n'it ket da c'houlen skoazel diganto ? Perak ne rit ket evel-se gant Doue ?

Pa n'ouzoc'h ket e pe du trei, pe hent kemeret, pa 'z oc'h nec'het, ez it da c'houlen kuzul gant ar re a zo gouest da rei d'eoc'h sklerijen. Ha petra vir ouzoc'h da ober ar memes tra gant an Ao. Doue ? *Quis ut Deus ?* Piou a zo henvel outan ? Piou a zo galloudus ha madele-zus evel dan ?

Daoust ha ne drugarekait ket ar re o deus great d'eoc'h eur vad bennak ? Na vankit morse d'hen ober, suroun, rak aon ho pefe da dremen evit eun digalon. Ha perak ec'h ankounac'hait lavaret bennoz da Zoue, en deus skuillet hag a skuilh warnoc'h hepred eur mor a c'hra-sou ?

Daoust ha n'it ket eur wech an amzer da welet ho kerent, ho mignoned, ho madoberourien, a-wechou zoken da zeiziou, da vareou a zo, evel d'ar bloaz nevez, da zeiz e gouel, pa zigouez ganto eun darvoud bennak, eürus pe gwaleürus ? Perak ne rafec'h ket evel-se ive gant Doue ?

Ha neuze, daoust ha chom a rit er gear pa vezoc'h pedet d'eul lein, d'eun eured ? — Doue ho kalv d'e daol zan-tel, hag e livirit : « Ne dalv ket ar boan en em zieza. »

Ar relijion eo an darempred a dle beza dalc'h-mat etre Doue ha ni, al liam a stag ac'hannomp outan.

Hogen, mar deo red evit dimezi beza daou, ha kaout c'hoant o daou da zimezi an eil d'egile ; evit beza unanet gant Doue e ranker ive beza daou, Doue hag an den ; red eo c'hoaz, koulz hag evit dimezi, e rofent o daou o asant. Mar fell d'an den hepken, ha mar fell d'ezan kaout darempred en doare ma plij gantan, mar ne blij ket an

doare-ze da Zoue, n'eus netra c'hreat, rak n'eo ket d'an den eo gourc'hemenn da Zoue !

Ma teu Doue da rei da anaout an doare ma fell d'ezan beza darempredet gant an den, n'eus netra c'hreat ma teu an den da nac'h ar relijion-ze ; Doue ne raio morse da nikun en em staga outan dre nerz, rak fellout a ra d'ezan, muioc'h eget hini-all ebet, lezel e frankiz gant pep unan.

An den koulskoude n'hell beza e darempred gant an Ao. Doue nemet en doare ma plij da Zoue ; relijion an Ao. Doue eta eo an hini a ranker da gemeret. Hounnez eo ive an hini wirion, hep hini all ebet, ha nan ar relijionou savet gant an den, ha nan ken nebeut al liammouze a zo eur penn anezo o staga an den, liammou ha n'e stagont tamm ebet ouz Doue, rak n'ema ket ar penn-all gantan.

Da ober petra eur relijion ? Al loened, gwir eo, n'o deus ken nebeut hini ebet ; n'o deus ket a spered ; krouet int hepken evit an douar. Krouet dious skeuden an Ao. Doue, an den, hen, a c'hell sevel beteg e grouer, dre nerz e skiant vat. Digouezet eno avat eo red mat d'ezan chom a-zav o veza n'hell ket mont larkoc'h ; Doue eo a goms outan neuze, evit lavaret penaos e fell d'ezan beza enoret gant an den.

Diskar ar relijion a zo eta diskar an emgleo a dle beza etre daou dra, daou spered, a zo, unan anezo, Doue, krouer ha Tad, hag egile krouadur ha mab.

Darempredou etre eun tad hag eur mab, setu aze ar relijion. Lavaret ne dalo da netra a zo lavaret ne dle morse ar mab koms ouz e dad, na beza anaoudek en e genver ; a zo lavaret ne dle ar mab na karet e dad na senti outan.

Lavaret ne dalv ar relijion da netra a zo lavaret ne dle morse ar mab lavaret « deiz mat », « noz vat » d'e dad ; a zo lavaret e c'hell ar mab beza ken nebeut nec'het gant e dad evel pa n'en defe hini ebet ; a zo, en divez, lavaret e c'hell eur mab ober fae war e dad.

An dra-ze a zo heuzus, kontrol beo d'ar pezh en deus lakeat Doue e kalon pep den. Ha koulskoude, lavarit ama d'in, hag eno eo ar pezh a c'hedit eus ho pugale ? Nan, adra-zur. Mat a rit, rak ho kwir eo hag o dever d'ezo.

Ac'hanta, Doue en deus an hevelep gwiriou, ha ni an hevelep deveriou.

Ar relijion a zo eta eun dra red.

Da betra eo mat ar relijion ? Livirit kentoc'h : Da betra n'eo ket mat ? Unan eus ar sperejou bras-se hanvet filozofed a lavare eo hi c'houez vat an deskadurez ; gwelloc'h c'hoaz en divije great o lavaret ez eo c'houez vat ar vuez penn da benn, c'houez vat ar bed. « Hep ar relijion, eme eun den-all, n'eus nemet eun eürusded : an hini da veza bet ganet morse. »

Mar hoc'h eus c'hoant da c'honzout gwelloc'h c'hoaz da betra eo mat ar relijion, goulennit-hen digant ar beorien a zo maget ganti, digant an dud reuzeudik a gav frealz o selaou he c'helennadurez, digant an emzivadeg a gav enni eur vanim eus an dibab.

Da betra e talv ar relijion ? Goulennit-hen digant an den yaouank hannerzet ganti eneb ioulou direiz ar c'horf, digant ar plac'h yaouank kristen, glan evel eur werchez, digant al labourerien o deus desket ganti plega d'ar vistri, digant ar vistri o deus klevet he c'henteliou a lavar beza leal ha madelezes e kenver ar zervicherien, digant tud ar c'heariou a zesk ganti beva e pep honestiz, digant tud ar meaziou a zesk ganti karet ar vuez didrouz ha kuzet. Goulennit-hen digant ar vugale, ar gozidi, ar re a zo war o zremenvan : nikun a gement a zalc'h tost d'ezi na lavaro n'en deus ket e lod en he madoberou.

(Da gendalc'her).

DIVARBEN ar SKOLIQU

(Kendalc'h)

Al levriou fall

Feiz ha Breiz miz even a ziskueze penaoz e c'hell eur mestr-skol, dre e gomzou, ober droug da spered ar vugale.

Eun doare all a zo da ober droug : lakat etre daouarn ar vugale levriou a zo enno traou a eneb ar relijion. Hag evel ma lavare ar re goz, *verba volant, scripta manent* : ar c'homzou a ia gant an avel, mez ar skridou a jom. Mar-

teze ar vugale, epad emaint er skol ne gomprenont ket mad ar pezh, a lavar ar mestr, ar pezh a zo merket el levriou. Mez pa vezint deuet da veza braz, pa vezo digoret o spered, ma tigoront al levriou fall o doa er skol, e komprenint an traou skrivet enno, e tiskuezint kement-ze d'ar re all, hag e raint d'ezo droug braz.

A nevez zo, al leoriou fall a zo taolet a verniou e peb korn euz ar Frans : ampoezounet eo ganto ar vro. An eskibien o deuz savet o mouez da goundaoni eul loden anezo, ar re noazusa, hag oc'h ober evelse n'o deuz great nemed o dever. Ar c'hazetennoù fall o deuz skoet var an eskibien o tamall anezo da veza great eur vrezel disleal da skoliou ar c'houarnamant. Nan, n'e ket kement-se a c'hoantea an eskibien : ne glaskent nemed eun dra : difen eneoù ar vugale ; an eneoù-ze a zo fiziet enno, hag o veza m'int c'hoaz dinerz, eo dleet beilla muioc'h varno. An eskibien pa zaint dirak Doue evit beza barnet, a vezo goulennet diganto penaoz o devezo kelennet ar gristenien, penaoz o devezo diwallet an denved fiziet enno.

Rust eo, e guirionez, komzou an eskibien : « *Difen a reomp dalc'her al levriou-ze er skoliou, difen a reomp ouz an dud fidel d'o dalc'her en o ziez, d'o lenn, d'o lezel etre daouarn ar vugale.* »

Ar gristenien gatolik n'o deuz ket izom, evit senti ouz an eskibien, da c'houzout perak o deuz douget ar goundaonasion-ze. Fizianz o deuz en eskibien : gouzout a reont n'o deuz klasket nemed mad an eneon hag eo red selaou o mouez.

Evelato, evit lakat enebourien an eskibien da zarra o ginou, eo mad diskuez eul lodennik euz an traou fall a zo el levriou koundaonet.

Tammall a c'heller dezo nac'h pe goapaat guirionesiou ar feiz, lavaret a bep seurt geier divarben an Iliz, ar pezh eo bet, ar pezh he deuz great abaoe m'eo bet savet gant Jesus-Krist.

Setu aman Istor ar Frans gant CALVET : er bajen genta e zeuz eun imaj a ziskuez Stephan Dolet lakeat d'ar maro gant menec'h hag e traon an imaj ar c'homzou-ma lavaret gant Dolet : « Goude ar maro ne vezi mui netra. »

Daoust ha ne zeuz ket a c'hoant dre-ze klask deski d'ar vugale n'o deuz netra da c'hedal goude ar maro ? —

Hag ouспен-ze n'e ket gant menec'h eo bet devet Dolet, mez var urz lez-varn Paris, hag en eur vervel e lavaraz ar c'homzou-man : « Va Doue, am euz ken aliez offanset, ho pet truez ouzin ; Guerc'hez Vari, sant Stefan, pedit evidon. »

BAYET a skriv kement-ma : « Ne c'hell den lavaret, eb aon da fazia pe e zeuz eur vuez all pe ne zeuz ket, pe e zeuz eun Doue pe ne zeuz ket... Ar relijion a gomz deomp euz traou ne c'heller ket da anaout... An den a c'hell kemeret ar relijion a gar, pe, ma kav guelloc'h, chom eb relijion... »

Mez hor Zalver en deuz lavaret d'e ebestel : « It, prezegit an Aviel dre bevar c'horn ar bed. » Maro eo evit an dud oll, an dud oll a zo galvet da gemeret perz er grasou en deuz gounezet deomp hag a zo roet deomp gant an Iliz fiziet e sant Per ha gouarnet hirio gant ar Pab Pie X. » D'an Iliz-se eo galvet an dud oll da zont. Hounnez eo ar guir Iliz ha ne zeuz nemed eur guir Iliz.

An Iliz, el levriou koundaonet n'eo nemed eun dra savet gant an dud, nan gant Doue. Doktored al levriou fall n'int ket evit koumpren petra eo ar feiz, ar garantez hag an oll traou kaer a zo e kaloun eur c'hristen. Evito, an dud a Iliz ne glaskont nemed eun dra : « Asten o galvoud var an dud a zo sempl awoalc'h evit selaou anezho, senti onto. » An eskibien, a lavar Galvet, a rea evel an *druided*, beleien ar C'hallaoued araok m'oant kristen : klask sevel dreist ar re all, klask beza ar vistri. »

Ar roue Kloviz en em c'hreaz kristen hag a oue badezet e Reims gant sant Remi. Perag ? Goulennit digant GAUTIER DESCHAMPS. « Kloviz, emezo, evit kaout sikour digant an eskibien, a zimezaz da eur brinsez kristen, Klotild. C'hoant en doa da veza mestr e Bro-C'hall a-bez, hag evit-se e c'houlennaz beza badezet e Reims. »

Pa deuaz or bro da veza kristen, an Iliz e peb leac'h a reaz vad d'an dud, a zigoraz skoliou, hospitaliou, ar venec'h a zeskaz labourat an douar, an houarn, ar c'hoat hag an traou all. E peb manac'hti e kavet ive skoliou ; ar venec'h a gare studia hag anez ar venec'h an oll draou kaer skrivet guechall gant ar brasa sperejou a vije eat da goll.

Ma rea an Iliz vad d'ar spered, d'ar c'horf, e rea dreist-

oll vad d'ar galoun. Deski a rea d'an dud beza mad e kenver o nessa, beza trugarezuz, beza santel, senti ouz gourc'hemenn Doue, hag e oue gwelet o tigeri var douar Frans bleun kaer ar vertusioù kristen. Guechall an dud a oa evel bleizi e kenver an eil egile ; an hanter anezò a ioa sklavourien hag a veze guerezet pa felle d'ar mestr. An Iliz a nebeudou a deuio a benn euz arc'histioù-ze ken kriz. Lavaret a raio d'an dud e zint oll bugale da Zoue, breudeur da Jesus-Krist hag e tleont en em garet evel breudeur. Dre zakramant ar Briedelez ar vaouez a vezo hiviziken ken braz he guir ha guir ar goaz, ar vam a vezo enoret er famil gristen.

Ne gavoc'h ket eur ger divarben an traou-ze el levriou koundaonet. Lavaret a rint deoc'h, avad, e zoa en amzer-ze traou kriz meurbed : « kervez, naounegez, brezel eb ean. An noblanz a ioa o-koumandi hag a voaske kenan an dud var ar meaz, a flastre an ed er parkeier, a laere digant al labourerien kement o doa. En amzer-ze e teue aliez an ed da yankout. Ar re grenv a groge neuze er re zinerz hag o drebe... Lod a ginnige eun aval da eur bugel hag en c'hase ganto en eul leac'h distro evit en drebi... Al labourer divar ar meaz a zrebe ar yeot er parkeier... Ne zoa ket a skoliou... Hag er skoliou a ioa petra veze gwelet ? mistri o skei gant ar vialen, bugale o lenva... Petra ioa var meaz ? Labourerien o lenva en eur zellet ouz maner an aotrou.... »

Setu aze penaoz e skriver istor hor bro. Kement-se a zo mezuz, diskiant. Araok skriva divarbenn an traou tremenet eo red sellet piz, studia pell amzer, lenn an oll skridou a jom euz an amzer goz, poueza mad peb tra, kaout aoun ato da fazia, rak diez braz kaout ar virionez penn da benn var an traou tremenet pell zo.

Meur a dra griz a zo bet guechall, sklear eo, bez e zeuz bet da lenva, bez e zeuz bet naounegez avechou, klenvejou braz a skube kalz tud ; bez e zeuz brezelioù ; bez e zeuz gwelet tud, var zigarez m'oant krenv, a voaske ar re all.

Hag hirio, daoust ha madelezuz eo an oll dud ? Ne zeuz den ebet mui oc'h ober poan d'ar re all ? Ne zeuz ket mui a vrezelioù ? A glenvejou ? An dud oll zo eüruz ? Siouaz !

(Da gendalc'her)

EUR VAMM GRISTEN

Gwreg eun den e servich ar gouarnamant a oa bet flatret gant eur gazeten dizoue abalamour ma lakea he bugale er skôl gristen. Hag hi ha mont da gaout rener ar gazeten, ha lavaret dezan :

— Aotrou, emezi, c'hui zo kalz re afferus ; n'oc'h eus netra da velet var an doare ma savin va bugale ; an dra-ze 'zo affer a goustians din-me ha d'am fried. Savit ho pugale oc'h-unan, ma n'ho peus, en doare ma keroc'h.

— Mes, intron, a lavaras ar c'hazetenner nec'het awalc'h....

— N'eus « mes, intron » ebet aman. C'hui hon lezo didrabas, me ha va famil, pe me velo ! Klevet oc'h eus !

— A velo petra ?

— A velo hag a zanto va disheolier var ho fas, e kreiz ar ru, dirag an holl er vech kenta ma teuoc'h da fistoulat divar hor penn.

— Intron, me en em zifenna a daoliou bâz.

— Grit, aotrou ; mes 'n heb aoun, an holl a vo a dû ganen-me. Ar c'hoarz a vo eus va zû. Breman n'oc'h nemet eur flâtrer ; neuse e vezoc'h eur skoer ha var eur vaouez honest... An holl a reio an hû varnoc'h.

— Intron, me skoio kalet.

— Oh ! aotrou, n'ho kredan ket ; gant va disheolier, me ne zonjan e doare ebet faouta ho penn ouzoc'h ; na c'hui ken nebeut ne zonjit ket terri va hini ouzin. Mes, a pa skofac'h krenv, ne ran fors. Laouen e vezin o kaout eur persdû benag var va empenn, mar gellan gant-se savetei ene va bugale. Kenavo, aotrou.

Hag an intron er meaz.

Ar c'hazetenner, evit doare hen deus pleustret var he gourdrouzou, rag abaoue eo-chomet habask.

Mammou kristen, pleustrit, c'hui ivez, var ar gentel. Ma vije ar gristenien ken hardis hag ar ganaillez, e vije buhan chenchet bâz en daboulin.

DINER AR RELIJION

Eun hostaliri vras eus kear M..., deiz marc'had.

Kals tud a zo ous taol, hag an teodou lardet mad breman a ya en dro founnus. Eus a betra e ve komzet hirio ma ne vet ar relijion hag ar veleien da lakat var ar stern. Var an dra-ze an holl, soken an dud diwicheka a zo helavar ; peb hini a gav fret d'e goublad.

Eul levitennek, fô en e benn, eun tamm mad a veillen en dro d'e c'hinou hag a vardos ouz e helgez a dregerne e vouez dre ar zâl vras a bez. — Eur beleg yaouank, doare dezan da veza lent a oa dem-dost dezan, ne lavare grik ebet. E lentegez a hardisea muioc'h-mui hon aotrou :

— *Ar relijion, emezan, n'eo nemet eun affer arc'hant. Gant ar veleienou e ranker ato paëa....*

— Ah ! a respontas neuse ar beleg yaouank, savet ruzder var e dâl. Pegement 'ta, aotrou, oc'h eus paet pa 'z oc'h bet o koves evit ober ho Pask ?

— Me ne vezan ket o voumounat er gonesion, aotrou.

— Breman ne vezit mui. Mad, gwaz a ze evidoc'h. Marteze ho pried a ves hag ive ho pugale, ne ouzon ket, rag n'em eus ket an honor d'oc'h anaout. Pegement o deus paet, mar plij ? — C'hui oc'h-unan oc'h eus great ho Pask kenta ; dimezet oc'h bet en iliz ; pegement oc'h eus paet neuse evit ober ho Pask, evit mont da goves ? — Pegement ho peus bet da rei d'ar beleg p'o peus direnket anezan evit dont vardro ho mamm, ho tad, ho pried pe unan benag eus ho pugale klanv var o gouele ? Hag evit an holl bizitou great gantan epad o c'hleuvad ? Hag evit ar c'hatekiz hen deus great d'ho pugale ? Hag evit an oferen a lavar evidoc'h bep sul ? Hag evit an holl bedennou hon deus bemdez da lavaret evit e barrisioniz ? Pegement oc'h eus bet da rei vit an holl draou-ze ha kals traou all c'hoas ? »

Paotr e leviten a jome mud breman. Ar beleg yaouank a grene e vouez eun tammik pa edo o komans ; hardiseat eo ; ar re all en dro dezan hardiseet o unan ivez a vroud anezan c'hoas : « Dale'hit mad, aotrou, eman deoc'h ! » Hag hen a kendalc'her.

« N'ho peus paet netra ! anzavit ganen n'eo ket ker. Klaskit 'ta eur medisin, eun alvokad, eun avoue, eun

noter pe an nep a geroc'h ha galvit anezo da vont d'ho ti evit eur gefridi benag, lakit anezho da furchal o levriou evit oc'h offeriou ; direnkit anezo evel m'ho peus direnket ar beleg hag e veloc'h petra gousto d'ho kodel.

— *O ! eme paotr al leviten, ar veleien a zo pinvidik awalc'h. Beza o deus an anterramanchou, an eureujou, ar c'hestou a reont....*

— Hag e kav deoc'h neuse e ya an holl arc'hantehou-ze e godel ar beleg ? — Fazia a rit, aotrou. Al loden vrasa a zo d'an iliz, ha just eo ; an iliz e deus da baëa an dud 'zo en dro dezi : sakrist, kloc'her, kanerien, kuruset ; an dilajou da oferenna, ar banielou, an drapoioù ne badont ket ato, ha ker int da breña ; al lienaj dreist-holl a vez kement en implij ma 'z eo red kaout var o zro eur vaouez evit o goalc'hi, o ampeza, o c'hempen, red eo ho faëa ; — bep bloas eun dournadig arc'hant a vezo da rei d'ar c'halvez, d'an toër, d'ar marichal ha me oar pet artisan all ; — ar goulou, an eol, an ezans, ar bara-kân, ar gwin-oferen a goust arc'hant...

Ha c'hoas ne gomzan ket eus ar c'hontributionou, eus an assurans ; bep bloas an disterra iliz eus an disterra parrez a goust etre seiz hag eiz kant lur, heb ma c'helfe ober a vihanoc'h ; dre vil luriou eo e kompter an dispignou en ilizou bras. Souezet oc'h eta ez affe al loden vrasa eus priz an anterramanchou ha servichou gant an iliz ? eul loden all a yelo gant ar zakrist, ar ganerien, ar gurusted ; ar rest a vezo d'ar veleien. Mes pegement, a gav deoc'h, a deu dezo eus an tu-se ? E parrezioù 'zo, kouls lavaret netra ; er parrezioù bras, seul ma vez muioc'h, seul muioc'h a lodennoù a vezo ive da ober. — Evit ar pez a zell eus ar c'hestou, lavaret e vez, ha gouzout a rit evit petra e vezont great. Gwenneg ebet anezo na deu d'ar veleien, nemet lavaret e vije eo great evito. Hogen ne vez great nemet unan ar bloas evito, hag an arc'hant-ze a vez lakeat etre daouarn an aotrou 'n Eskop evit ma vezo rannet etre ar veleien an ezommeka.

Araog lezen an disparti, ar bersonet o devoa 900 lur digant ar gouarnamant hag ar gureed 450 lur. Kement-se ne oa nemet an interest bihan eus ar madou laeret di-var goust an ilizou e mare ar Revolution vras. An 900 lur hag ar 450 lur-ze ne reant eta nemet paëa eul loden eus

an die kemeret gantan. Ar gannadet o deus o lamet a enep pep gwir. Hi, goulskoude, n'eo ket 900 lur a douchent ; mes 9.000 lur ; ha dre ne gave ket dezo o devoa tra awalc'h, breman o deus kemeret evit pep unan anezo 15.000 lur. Ar gannadet ne c'houlennont ket arc'hant diganeoc'h, gwir eo ; kemeret a reont o-unan heb goulenn ; aësoc'h eo.

Breman eta e paët 15,000 ar bloas ho kannad ; hag o person a baët gant... netra. — Gant petra eta e fell deoc'h e vevfe p'e gwir n'hen deus mui na paëamant, na lojamant, na netra... ?

— *Me, ne ran fors, a lavaras neuze ar bourc'his digernez ; ra 'z euio ar re o deus ezomm beleien d'o faëa !*

— Mad awalc'h ! a respontas ar beleg. Mes neuse ra 'z euio ive ar re o deus ezomm eus ar varnerien, eus an archerien d'o faëa ; ra 'z euio ar re o deus ezomm eus ar skoliou dizoue hag eus ar vistri difeiz d'o faëa ; ra 'z euio ar re o deus ezomm eus an theatrou d'o faëa. Me a dremenfe brao-bras heb barnerien nag archerien ; n'em eus ket a vugale da gas d'ar skôl ; ne zan morse d'an theatr ; perag e rankin-me paea evit an oll draou-ze ? — Er gouzout a rit ervad, an dud-se, an tiez-se a zo paët gant arc'hant an holl.

Red eo kaozeal gant ar reson, aotrou. E peb societe reizet mad e ranker atao paea an eil evit egile. Me, ne glemman ket evit paea va c'hontributionou. Red eo kaout hentehou tiez-kear, barnerien, archerien, skoliou, theatrou soken ma fell deoc'h, din ha da gals re all chom heb morse lakat va zreid ennô. Mes red ve deoc'h-c'hui ivez paëa ar veleien. Ma n'ho peus ket ezomm anezo, c'hui, kals all o deus, hag a baë o c'hontributionou evel doc'h hag o deus ar memez gwiriou ganeoc'h. Ha c'hui oc'h-unan ? n'ho peus ket ezomm anezo breman, marteze divezetoc'h ho pezo ; ma n'eo ket c'hui eo, unan benag, da vihana, eus o kerent nesa o goulenn, ha gant hast marteze. Eur vech c'hoas ma n'eo ket c'hui nag o kerent ; kant ha kent all eus ha kenvroiz ne fell ket dezo tremen hebdo.

Mad, a lavaras an aotrou, ni baeo hor person ; mes ra 'z euio ar re all da baëa o hini.

— A vije mad mar gelfe an holl barrezioù lavaret ar

memez tra. Mes beza 'zo parreziou bihan, paour, hag a zo dic'halloud evit beva o beleg en despet d'o holl bolontez vad. — Ha goulskoude ar re-ze o deus gwir evel ar re all da heuil o relijion. Daoust ha n'omp mui breudeur ? Dâ eo eta e teuffe ar parreziou brasoc'h ha pinvidikoc'h da rei an dorn d'ar re all paouroc'h. — Uhelloc'h eget ar barrez eman an eskopti, eman ar Frans, eman an Iliz a bez. Katoliket ma 'z omp ne reomp nemet ar memez famill ; pa roit eta d'o person, d'an iliz eo e roit, rag ho person ne ra nemet dere'hel plas an Aotrou 'n Eskop.

Rag-se e peb eskopti, an holl aluzennou roet evit ar veleien, a vez lakeat etre daouarn an eskop, hag an eskop o rann etre ar veleien dious an ezomm hen deus peb unan. Kement-se 'zo red evit miret honor ar beleg hag e liberte er barrez. N'eo ket mat e ve nag ar beleg, nag an eskop, nag an iliz o veva dindan roll eun all ; n'eo ket mat e ve ar beleg den heman, pe hennont a baë anezan ; ar beleg a dle beza den an holl er barrez. An iliz a c'houlenn beva libr.

— *Mes perag an Eskob ne baë ket e veleien ?*

— Ha gant petra, mar plij ? Abaoue an disparti, an eskibien a zo ker paour, ha paouroc'h soken eget ar paourra eus ar veleien 'zo dindanno, rag brasoc'h samm a goez varno ha n'o deus, evit herzel outo, nemet bolontez rad ar gristenien. Beza o deus, ouspenn o renk da zerc'hel, o vikeled vraz, o skrivanierien, an holl veleien karget da ren an eskopti, o c'hloerdiou bras ha bihan da veva. — Evit herzel ous an dispignou-ze n'o deus mui nemet aluzen ar bobl, pe, mar kirit, ar gest great e peb parrez evit diner ar relijion.

— *Ar vondianet ne jomint ket heb beleien ! ar re-ze a c'hello paëa evit ar re all.*

— Ar vondianet a raio o dever, fizianz am eus. Mes daoust ha mondianet zo e peb parrez ? Daoust ha just eo ne ve nemeto o tougen ar zamm ? Ar relijion, hen lavaret am eus dija, a zo evit an oll, kouls evit ar paour hag ar pinvidik, muioc'h soken, a c'hoantaffen lavaret, evit ar paour eget evit ar pinvidik, rag brasoc'h ezomm hen deus da veza nerzet ha frealzet. Red eo e c'helfe al labourer douar, ar micherour hag an artizan goulenn sikour ar relijion heb m'en dije da lavaret mersi d'ar mon-

dian evit beza dalc'het ar beleg er barrez. Ar beleg ne vezo den an holl, nemet ma teu an holl var e zikour evit beva.

— *Perag ar veleien ne labouront-hi ket evel ar re all, hag o dije evelse peadra da veva dious o labour ?*

— C'hui, aotrou, a lavare neuse ne ra netra ar beleg ! Neuse 'ta e lavarit eo jomet var ar studi epad pemp bloas var 'n ugent evit ober netra ! — Ne ra man n'e ket 'ta pa vez oc'h ober katekiz d'ar vugale ; pa dremen diou, teir ha peder heur, hag ouspenn aliës er gador-goves ; pa vez en e gambr o prepar e brezegennou ; pa ya en hent da velet e dud klanv ; pa ya da gerc'het ar c'horfou maro ha palavar varnezo ar pedennou diveza ; pa vez o lavaret e bedennou hir evit e barrizionis ; pa vez o lavaret an oferën. An dra-ze evidoc'h-c'hui a zo ober netra. Me garfe o kwelet en e blas.

C'hui garfe marteze ez affent da vedisinet, da pharmasianet, da alvokadet, da vistri-skôl ! Va Doue ! Ma vije bet savet ar c'hoant-ze ganto o dije, hi ivez, gelllet kemeret unan pe unan eus ar micheriu-ze. Ken goest oant hag o c'hamaradet-skôl. Mes n'eo ket bet falvezet ganto hag eat int da veleien evit savetei an eneou, para, kennerzi ha dienkrezi anezo en eur denna anezo divar an hent fall hag o lakat var an hent mad, kelen ar bobl, komz dez an eus e zeveriou hag eus an digoll a gavo er bed all goude e vuez a boan er bed-man.

Ma karfent labourat, a livirit !... var betra c'hoas mar plij ? C'hui garfe e krogfent e pao an alar, pe e troad ar bâl pe ar falc'h, pe er morzol evit skei var an tomm ; marteze e ve gwell ganeoc'h e teuffent da zerc'hel kammers er bourkou evit ober konkurans d'ar re a zo eno o c'hounid o bara en doare-ze ? neuze avad ne zalefe ket an tabud da sevel var ar beleg trabaser a c'hoantafe lemel e damm bara dious ginou ar paour-keaz marc'hadour. C'hui, aotrou hag ho konsorted, a ve da genta o c'houlenn ma chomfe ar beleg en e renk.

Ha ma ve micherour : pa vo ezomm anezan evit unan klanv, mar bije red mont da redek var e lerc'h d'ar park, d'ar prat, d'ar c'hofel, ha gedal m'hen dezo chenjet dilad evit mont ganeoc'h, c'hui vije buhan lakeat nec'het. Ha neuze, pe seurt respet a ve evitan ma rankfe, evit

gounid e vuez, redek ar foariou, ar mare'hajou ? — Nan, sellit ! Ma ne gomprenit ket ne c'hell ket ar beleg ober ar micheriu-ze heb mankout d'an hini a zo fiziet ennan gant an Aot. Doué, ne gomprenit netra hag eo didalvez din komz ouzoc'h. »

Ar beleg yaouank a oa breman en e say, sounn e benn ; e zaoulagad a verve hag an aotrou ne grede mui sellet outan en e fas. Pleget oa e benn gantan en e assiett, rag ne gave mui netra da lavaret. An holl dud a oa o selaou a dave ive. Gwelet a reat ervad oant holl a unan gant ar beleg. Hen-man a gendalc'has neuse evel pa vije bet er gador-zarmoun o komz ouz eur bobl tud.

« Ha breman, emezan, grit o tibab. Pe c'houi a fell deoc'h kaout relijion pe ne fell ket. Mar fell deoc'h relijion eo red deoc'h kaout beleien. N'eus ket a relijion heb belek. — Mar fell deoc'h beleien, e rankit o sikour da veva, rag tud int hag o deus ezomm o bevans evel ar re all ; tud int hag a rankit da respeti, rag-se, red vo dezo derc'hel o renk evel ar re all.

P'e gwir, n'o deus mui o faë, eus a betra e vevint nemet eus o micher. Micher ar beleg eo ober traou ar relijion. Red eo eta e vevfent eus ar relijion. « An neb a labour ouz an aoter a dle beva diouz an aoter. » Komzou hor Zalver Jezuz-Krist int.

Pa deu unan benag da labourat evidoc'h e c'houzoc'h eo eun dever evidoc'h paëa anezan. Hag e fell deoc'h e raffe ar beleg e gefridi en ho kenver evit netra ! E raffe katekiz, e velfe ho tud klanv, e tispignfe e nerz, e amzer, e vuez en ho servich, ha c'hui a zinac'hfe outan e vara pemdeziek ! Petra rit eus ar justis ? N'eus ket hano a aluzen ganen breman ! Eun dever a *Justis* eo evidoc'h rei diner ar relijion.

Oh ! den ne vezo revinet evit ar pezh a dle da rei evit an dra-ze. Ne c'houlennomp ket diganeoc'h eur fortun ; mes goulenn a reomp beva en hor renk. *C'hueac'h gwenneg dre benn, eur vech ar bloaz !* Piou n'hen deus ket ar c'hueac'h gwenneg-se ? — Ma n'ho peus ket anezo, ne vezint ket goulennet diganeoc'h. Mes piou, eur veach c'hoaz n'hen deuz ket anezo ? Kavet e ves arc'hant da vont d'ar c'hafe, da fumi ar zigaretten, da brena fanfar-luchou ; deiz foar ha deiz pardon eun den yaouank n'eo

ket c'huec'h gwenneg eo a c'houlennno en e c'hodel evit e zispignou toull, mes eiz real, ugent real, dek lur hag alies ouspenn. Evit dispignou evelse n'eus paour ebet breman. Den ne em c'hra paour nemet pa vez hano da baëa evit ar relijion hag ar feiz.

C'hui, aotrou, n'o peus ket a relijion, a livirit. Marteze eo gwir. Mes ho pried hag ho pugale ? Mes c'hui oc'h-unan pa vezoc'h goasket gant an anken pe gant ar c'hlenved, a gavo gras marteze kavout eur beleg evit beza var o tremenvan ha bennigen ho korf paour goude ho maro, evel m'eo bet great evit ho tud koz. »

Var ar c'homzou-ze, an aotrou mezek ha lostek a zec'has e vourrou gant e serviett hag en em dennas kuit. Ar re all, lorc'h enno breman a deuas da lakat o dorn e dorn ar beleg kalonek.

F. Cardinal.

HISTOR BREIZ

Gouenn ar Vreiziz

Hirio va fennad *Histor Breiz* a vezo berr, berr, berrik-sot. Ha perak 'ta, ribl kazarde vingt-deux ? Perak ? Abalamour breman eman mare ar falc'hat, hag abenn m'am bevez boueteat ar ehatl ha guellet va falc'h abenn antronoz, e vez eun tremen-mall mont da ober eur gourvezig. Ha c'houi ken neubet marvad, n'emoc'h ket nemeur e chal gant kement-se a baperiou pa deu ar zut : ar re yaouank ac'hanoc'h a zo gwelloc'h ganto mont e bresken d'ar pardoniu, hag ar re-all a gav gras ober eur moredad kousket er gear etre an offisou evit diskuiza an izili diouz labour tenn ar zizun.

Daou c'her hebken eta.

En dro-man emañ koulz lavaret rampet a-dreuz an aode, eun troad ganen e pep park. Betek-hen n'am eus great nemet kaozeal divar-benn an Arvoriz, divar-benn ar vouenn-dud a yoa o chom er vro-man araok ar Vreiziz. Er vech diveza m'ho peus lakeat ho fri em c'hevren, ho peus bet ar rann-galon da velet ar paour-keaz tud-se o losker o alanad diveza. Breman, mar kirit, kanit d'ezo al *Libera*.

Hlviziken me a gomzo divar-benn eur rumm tud all, kerent a-bell d'an Arvoriz, ha deuet ebars ar c'horn-douar-man var o lere'h ; eur rumm dud kalonek ha santel, mar deus bet unan ; hag en deus great epad eun niver brao a gantvejou estlamm an holl boblou all, hag a zo atao skouer ar boblou yac'h ha krenv en hon amzer a hudurnez hag a zempladurez ; eur vouenn-dud eo hag a dleomp-ni karet dreist-holl, kenvroiz ker, eus a greiz hor c'halon, rak goad ar bobl-ze eo a zo o ruilh nerzuz en hor goazied.

Divinet ho peus pell zo e fell d'in komz eus ar *bobl breizad*.

Breiziz a zo an orin anezo eus an enezen a hanver breman Bro-Zaoz, ha n'int deuet aman nemet a neubeudou, dre ma 'z int bet harluet eus o bro gant eur bobl estren krenvoc'h evito.

Mes en dro genta e tisplegin an dra-ze tout evel ma 'z eo dleet. Kenavo eta eur vech all.

AN TOUR-GUEN.

EIL DEVEZ A VIZ EOST

Induljansou ar « Porsionkul »

An douar m'eman varnan Iliz Intron-Varia an-OElez, en Itali, a zo bet, abaoe an amzer gosa, tra an aot. Doue. Er bloas 351 e oe savet eno eun ti-bidi gant pardonerien deuet euz an douar Zantel gant relegou euz bez ar Verc'hez Vari. — 160 vloaz goude, vardro ar bloaz 516, Sant Beneat a brenas ar chapelik gant al lodennik zouar stag outi. Ac'hano, douetus, eo deuet dezi an hano a zoug : *Porsionkul*, da lavaret eo *al lodennig-vihan*. An ti-bidi a deuas da veza eun iliz vras, darempredet ma 'z oa gant eun niver bras a dud ha zoken gant an OElez a ziskenne enni eus an nenv evit meuli o rouanez, hag ac'hano e oue roet d'an iliz hano Intron-Varia-an-OElez.

Gant an amzer, an iliz a jenchas perc'henn meur a veach, a nebeut-a-nebeut e oue dilezet. D'an trizekved kantved, pa deuz Fransez Asiz er bed, e venne koeza en

he foull. Ar pez a jome anezi a dalveze da c'houderen d'ar vesaerien a zivardro ha d'o loened.

Mez, lavaret e vije eman lagad an aot. Doue ato o para var al lec'hiou ma 'z eo bet henoret enno. Fransez en devoue a bers Doue kemennadurez da adsevel ar chapel goz. Senti a reas hag iliz Intron-Varia-an-OElez kempennet gantan a oue kavel eun urz nevez a venec'h hanvet « Fransiskanet » pe « bugale sant Fransez. » Eno eo e klevas mouez an aot. Doue her galve da veva er baourentez ; eno eo e resevas e genta diskibien ; eno ivez santez Klara a reas an dilez eus he holl madou evit en em rei holl da Zoue ha sevel evit ar merc'hed eun urz dem-henvel ous an hini savet gant Fransez evit ar voazed.

E miz here 1221, Fransez oa, en eur c'houderen tost d'ar chapel ; o pidi evit konversion ar bec'herien baour. Epad m'edo holl beuzet e Doue, e klevas eur vouez o lavaret dezan : « Fransez, d'ar chapel ! d'ar chapel ! » Kerkent e savas hag ez eas var eun da Intron-Varia-an-OElez. — Morse ne oue souezetoc'h eget p'en em gavas. Var an aoter, a uz d'an tabernakl, e kreiz eur sklerijen n'eo ket eus ar bed-man, edo mab Doue holl-skedus eus gloar ha dudiu ar baradoz ; var e zremm, rozen flamm ar yaouankiz ha doare pozet eun den en oad. E zaoulagad a bare var Fransez gant eun dousder zispar ha var e vuzellou e velet an drugarez. A zeou dezan edo ar Verc'hez Glorius Vari hag eun niver bras a OElez tu ha tu.

Ar zant leun a joa en em daolas d'an douar. « Fransez, a lavaras dezan mab Doue, anaout a ran ar preder a gmerit, c'houi hag ho preudeur gant an eneou. C'hoant am eus d'ho tigoll. Goulennit diganen ar pez a c'hoantafoc'h evito. Selaou a rin ho koulenn, rag roet em eus ac'hano d'ar bed evit beza sklerijen ha skoazel an Iliz. » Nerzet gant eun hevelep madelez, ar manac'h santel a gredas ober ar beden-man : « O Doue, teir gweach sant » tel, p'eo gwir eo falvezet ganeoc'h sellet gant trugarez » ous an distera euz ho servicherien, daoust d'ezan da » veza brasa pec'her a zo, e kredan goulenn diganeoc'h » gant an holl respet ma 'z oun goest da gaout, m'o d'ezo » an induljans plenier eus ar poaniou dleet d'o fec'hejou, » kement hini a deuio da vizita ar chapel-man gant ma

» vezo bet o koves e bec'hejou gant eur gwir geuz d'ezo
 » ha gant m'en devezo bet an absolven anezo. » nag en
 eur drei varzu ar Verc'hez : « Pedit a ran ar Verc'hez
 » Vari ho mamm, alvokadez an holl dud, da veza a du ga-
 » nen ha da gomz evidon. »

Ar Verc'hez neuze en em droas varzu he mab, ha Jezuz
 ne c'hell dinac'h netra d'e vamm a asantas ganti. « Fran-
 » sez, emezan, eun dra vras a c'houlennit diganen. —
 » Rei a ran deoc'h goulskoude ho koulenn gant eur gon-
 » dision hebken : ma vo kavet mad hag aotreet gant ar
 » Pab a zalc'h va flas var an douar, a zo gantan ha gan-
 » tan hebken ar galloud da liamma ha da ziliamma. » Ha
 kerent Jezuz, e vamm hag an OElez a zistroas d'an nenv.

Antronoz vintin, Fransez en em lakeas en hent evit
 mont da Berouz da vit ar Pab Honorius III, a oa eno
 er mare-ze. Ar Pab, goude beza great sklerijenn var eun
 dra ken burzudus, a lavaras dezan a benn teir gweach :
 « Ra vezo great hervez m'ho peus goulennet en hano
 » Doue. »

Mez, ar pardon bras-se er Porsionkul, ne oue ket
 deiziet c'hoas. Doue e-unan e dlie peur-ober e labour.

Daou vloas goude, da viz Genver 1223, Fransez, evit
 tec'het dious hirou an drouk-spered, a c'hoantea rei dezan
 da gredi ne dlie ket reñ eur vuez ken pinijennus, en doa
 diwisket e zañ hag en em daolet e kreiz eur vodenn drez
 ha spern evit mouga an dentasion. Oc'h en em ruill
 e kreiz an drein, e gorf ne zaleas ket da veza leun c'hoad.
 Mes, kerent ive peb tra a jenchas doare en dro dezan :
 ar spern ruziet gant e c'hoad en em c'holoas a vleun rus
 ha gwenn ; OElez an nenv a daolas var e ziouskoaz eur
 vantel gwennoc'h eget an erc'h ha steuet gant ar gwiader
 a oar gwiska al lili hag ar roz, hag a lavaras dezan
 kerzet buhan d'an iliz, edo Jezuz eno ous e c'hortos. —
 Kemeret a ra Fransez neuze peder var nugent eus ar
 roz burzudus, daouzek rus ha daouzek venn evit o
 c'hinnig d'e Vestr Jezuz ha d'e Vestrez karet, ar Verc'hez
 Vari.

Jezuz, ar Verc'hez hag an OElez a oa adarre ous her
 gedal evel er veach kenta. — Fransez, goude beza
 dileunet e galon dre gomzou a garantez hag a humilite a
 gredas goulenn ma vije deiziet ar pardon. Ha Jezuz a

respontas : « Me fell d'in e ve great da genver an devez
 » ma 'm eus torret liammou Per, prins an Ebestel, beteg
 » an abardaez eus an deiz varlerc'h. N'az pezh aoun rag
 » netra. Kers da vit ar Pab evit mac'h embanno an deiz
 » bras-ze. »

Ar Pab Honorius, o welet ar roz burzudus, a zigemeras
 e c'houlenn hag a reas embann induljans vras ar
 Porsionkul, gant ar seiz eskop tosta da Asiz, evit padout
 da virviken.

Unvaniez Merc'hed Frans

Evel ma verk an daolen a zo aman varlerc'h, ar mer-
 c'hed bodet en Unvaniez merc'hed Frans eus kostez
 Landerne a zo 1932 anezo. Dastumet o deuz etrezo 1178
 lur ha daou wenneg.

An arc'hant-ze a vez rannet etre parrezioù an Unvaniez
 evit an oberou mad. Dre-ze prizioù katekiz a zo bet roet e
 Lannurvan, Treflevenez, Dirinon, Lanarvily, Tremaouez-
 zan, Sant-Thonan, Plougastel, ar Forest, Logonna ha
 Plouedern. — Landerne ha Sizun o deuz bet eur zomm
 evit ar c'hazetennou mad hag ar skolioù kristenn.

E Landivizio an arc'hant bet digant an Unvaniez a zo
 bet implijet evit prena levriou mad ; al levriou-ze 'zo evit
 beza prestet d'an dud. E Plouziry hag er Merzer an
 arc'hant en dezo eun implij all : lakeat e vezo da zikour
 eur famil da rei d'he merc'h eun deskadurez kristen.
 Lavaret a reomp *Zikour*, rag an Unvaniez ne ro ket a
 aluzen ; ne ra nemet rei skoazel d'ar re a boagn o-unan
 evit miret ar feiz en o zouez.

An diou barrez-man a ra c'hoas eun dra all hag a blijo
 a dra sûr, da holl mammou ar zoudardet yaouank. En
 em glevet a reont gant ar veleien karget da gemeret
 soursi eus ar soudardet eat pell eus ar vro, evit ma vezo
 kaset dezo kazetennou brezonek a ro dezo kelou eus ar
 gear hag a zo evito, evel ma lavare sekretourez Plouziry
 evel eun tamm bara poazet er gear. Pebez dudi evit an
 den yaouank harluet, du-ze pell e Toul, Verdun, Bar-

le-Duc, Mézières, etc., klevet bep sizun e yez e vro, an traou a ra vad d'e spered ha d'he galon.

E pep leac'h eta, daoust d'an doare dishenvel da implija an nebeudig arc'hant roet da bep parrez, ar memez labour a zo great. Gant ar memez kalon vad hag eun hevelep ioul ivez e labour Unvaniez merc'hed Frans evit miret en e sav ha yac'h bepred, e Breiz-Izel,

Ar Relijion hag ar Feiz.

1909

Parreziou	Merc'hed	Arch'ant
Landerne	478	355 ¹ 35
Sizun	238	102 50
Plouziry	162	61 25
Sant-Thonan	158	47 85
Plougastel	139	122 »
Plouédern	110	30 50
Lannurvan	98	83 85
Landivicho	95	110 85
Lanarvily	86	40 »
Ar Forest	68	17 25
Ar Merzer	60	52 25
Tréflévénez	57	34 65
Dirinon	40	33 75
Penc'hran	39	15 30
Plougerne	31	10 »
Plouzeniel	31	9 50
Trémaouézan	22	6 25
Logonna	13	23 »
An Hospital	7	22 »
Kersaint-Lesneven	»	» »
	1.932	1.178 ¹ 10

GWIR VRETOUNED

Kanaouen evit ar Gouelioù brezonek

Diskân : var don Sezis Gwengamp pe Sao Breiz-Izel

Kân : var eun ton nevez

Diskân

Marziale

Gwir vre - tou - ned, tud a ga - lon, var
 zao Da ga-na gloar da Vreiz hor bro,
 Ha da ziou - all ten - zor he bu - ga - le
 Ar yez ar peoc'h, al li ber - te; Var zao var zao!
 ha he-tek mer - vel stour-momp a u - nan e-vit Breiz I - zel

Kân

O va Breiz gant da dour-iou bru-det, Da vor glaz
 ha da ve-nez - iou, Da vruk ruz ha da lann a-
 laou-ret, Te zo koant dreist an oll bro - iou!

DISKAN

Gwir Vretouned, tud a galon, var-zao
 Da gana gloar da Vreiz hor bro,
 Ha da ziouall tenzor he bugale :
 Ar yez, ar peoc'h, al liberte ;
 Var-zao, var-zao! ha betek mervel }
 Stourmomp a-unan evit Breiz-Izel! } bis.

I

O va Breiz, gant da douriou brudet,
 Da vor glaz ha da veneziou,
 Da vruk ruz ha da lann alaouret,
 Te zo koânt dreist an oll broiou !

II

Ne zeuz ket, 'vel etouez hor c'herrek
 A dud vad, seder ha nerzus ;
 Ne zeuz ket, 'vel en hor brezounek
 Soniou drant, gwerziou dudius.

III

Ah, siouaz ! ouz ar Frans digristen
 Breiz-Izel a zo chadennet,
 Ha, d'he heul, e venn koll da viken
 He brud vad he nerz, he gened,

IV

Bretoned, savomp hor c'halonou
 Ha touomp e talc'himp atao
 Da vale var roudou hon tadou
 Keit a ma zaï ar bed en dro !

P. TRÉOURÉ.

GOUEL AR BLEUN-BRUK

Konkouriou ar c'hân

E miz gwengolo a zeu e vo adarre eur c'honkour kanaouennou brezounek e Sant-Nouga evit Gouel ar Bleun-Bruk.

Evit barn ar c'hân e vo savet eul Lez-Varn musisianed guiziek a ne velint ket ar ganerien na ne anavezint ket anezho.

Ar c'honkour, digoret evit Bro-Leon ebken, a vezo diou loden enghan.

1° Al loden genta a vo eur c'hourinadek « etre strol-

lado a-bez », strolladou kanerien pe ganerezed. — Peb strollad kanerien a ranko beza eanhan 10 mouez bugel, ha pemp mouez goaz.

Ar strolladou kanerezed o devezo eur c'honkour etrezho ebken, hag a ranko beza ive 15 mouez e peb hini anezho.

Ar pezh a ranko peb strollad kanerien pe ganerezed da gana, eo kanaouen ar « Gwir Vretoned » moulet aman varlerc'h.

2° An eil loden a vo eur c'honkour « etre kanerien pe ganerezet peb hini en he bart he-unan. » Ar re-man a gano ar ganaouen a girint. Ma vefe kanaouennou koz pe nevez a ne vefent ket nemeur anavezet, ar re ho distagfe o devefe eun tam krog var ar re all.

Evit kloza ar gouel, dal ma vo reet ar prizioù kanaouen ar Gwir Vretoned a vo kanet gant an oll.

FURNEZ BREIZ

Hanter douget eur bec'h great mad.

N'euz labour n'heller da verrât
 En eur gemer dre ar penn-mad.

Etre re ha re nebeud eman ar muzul just.

Kentoc'h e skuiz ar freill eget al leur.

An hini ne zec'h ket he bal
 'Tle bep mare sec'ha he dal.

Gant ar boan hag an amzer
 A-benn a bep tra e teuer.

Nep a gign he vaout er bloa-ma
 A vo kuit da vloa d'hen touza.

En noz e vez paket ar ziliou :
 Dale a ra vad avechou.

Guell eo ijin eget nerz.

Evit plijout d'an oll
Eo red beza fur ha foll.

Ki skotet hen deuz aoun rak dour klouar.

Eun dra n'eo bet gwelet hiskoaz
Eo eun neiz logod e skouarn eur c'haz.

Diesa dra da gas d'ar foar
Eo eur pen-moc'h eb roc'hal,
Eur c'hi eb trotal,
Diou vaouez eb kaozeal.

Respont da zivnadennou miz Even

I. — Gant daoulagad ar zouben.

II. — Eur vi abars m'eo torret.

III. — Al lagad.

IV. — E 720 feson dishenvel.

Ex. — Daou zen ne c'hellont en em lakat nemet e diou doare dishenvel ; tri e 6. Pa vezo pevar, peb hini eus ar pevar-ze en em lakaio d'e dro ekreis an daol hag an tri all a c'hello en em renka e 6 doare dishenvel en dro dezan setu : $4 \times 6 = 24$. Pa vezo pemp, e c'hellint en em lakat e $24 \times 5 = 120$. Pa vezo c'huec'h e $120 \times 6 = 720$.



Feiz ha Breiz

Kannad Misiiek ar Vretoued

Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Da betra eo mat ar Religion

« Eun dervez, eme Bauzée, ez is da di Diderot, da ziviz gantan diwarben ar grammadeg edo o sevel. Eat oan, hep lavaret netra da zen, beteg e gambr. Ar filozof brudet a yoa o teski ar c'hatekiz d'e verc'h. O kas ac'hanon goude-ze, Diderot a c'hoarze, abalamour m'oa bet lakeat nec'het gant al labour a rea. « Asa, emezan, pe seurt deskadurez talvoudusoc'h am bije gelllet rei d'am merc'h evit ober anezi ar pez e tle beza eun dervez, da lavaret eo eur verc'h doujus, eur wreg hag eur vamm evel ma karer o gwelet ? Red mat eo d'eomp en anzav, n'eus netra par d'ar relijion evit an dra-ze : he lezennou eo ar re wella, ouspenn m'int diazezet mat. »

Diderot n'oa ket eun den a relijion, pell ac'hano ; e desteni na dalv nemet muioc'h a-ze.

Da betra e talv ar relijion ?... Ha gwelloc'h eo an dud ganti ?...

A ! Aotrou ! me gave d'in dioc'h ho kwelet gwisket ken gran, gant eun tok kern-uhel war ho penn, hag eul liviten lost-pik war ho kein, me gave d'in ho poa hentet ar skolachou bras, el leac'h oa bet desket d'eoc'h istor impalaëred Rom, istor ar Gres ha kalz a draou-all...

Me, Aotrou, n'oun bet tamm ebet er skolachou-meur, hag e c'houzon evelato e pe stad truezus edo an darn vrasa eus an dud pa deuas hor Zalver Jezuz-Krist war an douar.

Lennit ar pennad skrid-ma, hag e leverot d'in goude-ze ha talvezout a ra ar relijion d'eun dra bennaek :

Eun taol lagad war an amzer goz.

Koms a reer kalz hirio eneb an Iliz katolik.

Prezegerien diboell a lavar d'al labourerien e c'heller tremen hep relijion : « Ar relijion, emezo, eun dra uzet. Hiviziken an dud a spered, an dud a zeskadurez a leunio o c'halonou gant ar wiziegezh ! Ar relijion a yoa mat gwechall marteze, brema avat eo echu ganti he amzer. »

Evel-se 'ta, war o meno, ar relijion ne dalo netra !

N'eo ket dies d'in diskouez pegement e fazi an doktor red nevez-ma. Hag evit kement-se, taolomp eur zell war doare ar bed a-raok donedigezh hor Zalver, ar sklerijen skedus-se a baras er sav-heol.

Ar bed-oll a yoa beuzet en dizurziou ar gwasa.

An dud a ankounac'hae pe na ouient mui o doa eun ene, hag a en em roe d'an holl dechou fall, evel al loened lousa. Tamm karantez ebet etrezo : pep hini a jache d'eu, gwaz-a-ze d'ar re na c'hellent ket tizout ar c'hargou. Ar warisi, ar gasoni, ar c'hrizder, a rene e kalonou ar pep brasa eus an dud.

Ya, ar c'hrizder a rene war ar bed evel eur rouanez vras. Lavaret e vije oa serret ar c'halonou ouz pep tene-ridigezh. En tiegeziou zoken n'en em glevet ket. Pa gaved dies gwelet unan bennak, netra easoc'h eget rei d'ezan taol ar maro hag e gas evel-se da welet e dud koz, evel a lavarent.

Er C'hres, kouls hag e Rom, pa na blije ket ar vugali-gou d'o zud, ar mammou o-unan a zanke ar gountel enno, pe o zaole d'an traon a c'horre eur grec'hen sounn. Kartajinezed a deue anezo o-unan da deurel o bugale en tantadou tan enaouet dirak skeuden an doue Molok.

Ha ma kaver kement a grizder en tadou hag er mammou, piou a lavaro d'eomp penaos e rea ar priedou, ar vistri ?

Ama e welomp mogeria eur wreg war an disterra digarez.

Pelloc'h, setu sklavourien taolet noaz en eul lenn leun a lamprezenned, sort loened vil ha digernez, henvel ouz aered-viber. Tro-war-dro, ar pennou bras a gemer o flijadur o sellet ouz an dud keiz-ma, a skrij, a yud, a glemm, a c'houlenn truez oc'h tud kaletoc'h o c'halonou en o c'hreiz eget ar vein a vreser war an henchou.

Sevel a read doueou ha doueezed en enor d'an holl

ioulou fall. Hag e teue ar bobl divezet da zaoulina dirak ar skeudennou heuzus-se.

Setu perak n'oa reiz ebet ken evit an dud-ma. Diskennet oant e renk al loened mut. An traou ar gouesta da lakaat ac'hanomp da ruzia gant ar vez a veze ledet a-wel d'an holl. Ne veze ket zoken taolet evez oc'h ar skouer fall a c'helled rei evel-se d'ar yaouankiz. Ha perak e viche great ? Daoust hag ar yaouankiz na dle ket kemeret he flijadur ?

Hag ama, lezit ac'hanon da lavaret d'eoc'h, evel dre laer, e tizroomp, siouaz ! adarre d'an daoulamp war-zu an amzeriou-ze. Rener eur gazeten anavezet mat tre en hon bro Breiz a skrive n'eus ket pell d'eun Aotrou a anavezan mat, hag en doa pedet anezan da lakaat « marvailhou » neatoc'h, pe glanoc'h, en e gazetenn, gant aon da goll ar yaouankiz : « N'eus netra da guzat ouz ar vugale !... »

Diwallomp !

Mat, en amzer-ze ar sperejou a yoa ken gouliet eus eur penn d'ar penn-all d'ar bed, ma 'z ea klemmou an dud reuzeudik, ar sklavourien, ar re baour, evel eur gorventen a-dreuz d'an ear.

*
**

Ar bed kez ! daoust ha chom a raio da virviken er stad-se ken izel ha ken mezus ? Daoust hag an nerz, ar galloud, a vezo bepred treac'h d'ar gwir ? Hag hen e vezo atao an noz hep mintin ebet morse ?... ar c'hlaç'har hep frealzidigezh ?...

Salokraz ! setu ar bed koz o skrijal... Eun dra bennak a nevez a zo c'hoarvezet.

Klevet ez eus en nenvou moueziou eun arme a elez o kana : « Gloar da Zoue e-barz an uhel, ha war an douar peoc'h d'an dud a volentez vat ! » Eur bugelig a zo nevez c'hanet e kraou Bethleem o tigas leun e zaouarn a levenez hag a beoc'h.

Her gwelet a reer ; e vousec'hoarz, henvel ouz eur bann-heol, a zo peadra da zizec'ha an daelou ha da doma an eneou...

Kreski a ra, a-nebeudou, evel ar vugale-all ; hag ez a

da brezek e Aviel, e gelou mat, d'an dud dizesk, a deu a vandennadou war e lerc'h evit klevet e gomzou sousezus... « Eürus ar re a ouel ! Eürus ar re o deus poan da ziwaska !... » Biskoaz kement-all n'oa bet klevet betek neuze.

Ouspenn-ze, hada a ra ar burzudou kaëra dre gement leac'h ma tremen : ar re glanv a gav ar yec'hed, bruzuna a ra chadennoù ar sklavourien ; deski a ra d'ar pinvidik karet ar paour ; digeri a ra eun hent e c'hello an höll hiviziken tremen dreizan ; ar vuez gristen.

Hag an hini a droas tu d'ar bed dre e varo hag e zazor-c'hidigez (1)..., an hini a reas d'ar sklérijen para splan warlerc'h an denvalijen, hennez eo an Doue a stouomp dirazan : Jezuz-Krist, ar Pastor mat...

Chom hep e anaout da vestr a ve dizanaoudegez ha follentez, rak m'eo ar C'hist hor madoberour, hag abalamour e teufe gwalinier spontus da gas ar vro a-bez da netra.

N'eus netra poaniusoc'h da welet eget eur vro dizoue ha direlijion !...

Ac'hanta, Aotrou doktor, petra livirit eus an dra-ze ? Piou en deus chenchet doare d'ar bed ? Piou en deus torret ha bruzunet chadennoù ar sklavourien ? Piou en deus digaset d'eomp ar gwir frankiz, frankiz bugale Doue ? Daoust ha n'eo ket Jezuz-Krist, hanvet gant rezon Salver ar bed ?... Enor eta, gloar ha meuleudi da Jezuz, madoberour bras an dud a renk izel ! Hag arabat eo d'eoc'h ken lavaret ne dalv ar relijion da netra, rak ma teufe da veza mouget en hor bro (Doue ra viro !) e tistrofemp d'ar gouzeri, ha neuze, Aotrou, ne ve ket brao beva... Ne garfac'h ket a-dra-zur mont da jom d'eur vro c'houez, el leac'h n'o deus an dud doujans ebet an eil evit egile, el leac'h ma skrab hag e krog pep hini e tra e nesa pa n'en deus aon ebet da veza tapet gant unan-all krenvoc'h egetan...



(1) Résurrection, e galleg.

Red eo ober Beleien

Parisioniz M..., eus departamant S. I., en Normandi, o doa eun iliz eus ar re goanta, eun tour dantelezet varni, eus ar re gaera ; mes da betra e talvezo dezo ? n'o doa belek ebet. Maro o ferson koz, n'oa kavet beleg all ebet evit dere'hel e blas.

Heb beleg, n'oa mui a oferen, n'oa mui a vadiziantou, n'oa mui a eurejou ; n'oa mui a bask kenta, n'oa mui pask ebet soken ; n'oa mui na katekiz, na prezegen, na netra ; eur bourk maro ! A veac'h ma veze kavet, o klask a bell, eur beleg evit rei sakramant an nouen d'an dud klanv ha lavaret ar pedennoù diveza var ar c'horfou maro.

Hag e skoent, ar barisioniz keaz var dorjou an eskopti. Hag an aot. 'n Eskop, p'o gwele o tont, a venne lenva gant an anken :

— « Gortozit, va zud keiz, emezan ; kerkent ha m'am » bezo eur beleg da gas deoc'h, her c'hasin. »

— « Aotr. 'n Eskop, mont a reomp da bayanet. »

Eun huanaden ankeniet a responte d'ezo ; ha kannadet parrez M. doaniet o c'halon, a ranke en em denna.



En hor bro Breiz, ne c'hoarves ket c'hoas an dra-ze. Ha goulskoude, taolomp evez ! Var zigarez m'eo breman paour stad ar veleien ; var zigarez ma 'z eo breman dispennet, dikriet, tamallet e kant feson dizoare, meur a hini a gil ; hag an tadou, ar re vella soken, e leac'h trei o bugale varzu ar stad-se, uhelloc'h breman hag henurosoc'h dre ma 'z eo red kaout tud a galon evit mont ennan, a zistro anezo divar an hent merket dezo gant Doue. Siouas !



Dre c'hras Doue n'emañt ket holl er santimanchoù-ze ; klevit kentoc'h :

« En deiz all, eur person braz eus ar vro-ze (an Normandi) a gomzemp anezi, a oa en hent-houarn gant eur mignon dezan. Hag he tivizent etrezo var an amzer doanias a zo

varnomp. Mes dezo da veza enkrezet o velet ar pezh a c'hoarves gant an ilizou, ar skoliou..., e lavarent o esperans da velet an traou o vont gwelloc'h gant ma vo poaniet.

» Me, a lavaras an aot. person d'he vignon a zo o tont eus kloerdi bihan S. Eno oa hirio ar vodadek vras gant an holl skolaerien bet er c'hloerdi-ze oc'h ober o studi. Niverus oamp : beleien, alvokadet, medisinet, labourenrien douar, soudardet, ofiserien... ouspenn kant micher a oa eno toueziet. Eat eus ar skol, peb hini en deus heuliet e chans ; mes kredi a ran oamp holl chomet kristenien vat. Beza ez oa bleviou gwenn, darn all n'o doa c'hoas nemet eun tamik marblun ous o helgez ; mes koz ha yaouank e oamp holl eno evel breudeur hag oll ive laouen oc'h en em velet.

Doaniet oamp ivez kement-se o velet hirio ken nebeut a vugale er skol, ha ken nebeut a zanvez beleien en o zouez. — Lavaret em eus eur ger var an dra-ze er reunion vras hor beus bet goude ar pred. — Pedet hag aspedet em eus ar veleien da glask en o farrezioù ha dreist-holl er famillou niverus bugale troet var ar relijion, digor o spered, divac'hagn a gorf, reizet en o buez ha d'o digas d'ar skol. N'eus fors a pa vijent paour, gant ma vezo o c'herent tud a relijion grenv ha direbech en o buez. — Soken, eme an aot. person en eur musc'hoarz, em eus en em veulet va-unan. — Va Doue, emezan, nag an den paour a zo troet da gaout mad ar pezh a ra e unan !

— Kontit din-me ive-ta, aot. person, ar pezh a ra morched d'o koustians.

— Ia-da ! evit ma reoc'h goap ac'hanon d'ho tro.

— Ma kave deoc'h e c'helle ar pezh a gontac'h ober vad d'ho kenvreudeur eus ar c'hloerdi, perag ne raffe ket din-me ?

— Mat ! hag e rin. Ma sav c'hoant kousket ganeoc'h, goas-a-ze evidoc'h. Setu aman va histor ; n'eus enni netra da estlammi tud :

Er c'hatekiz, ha bep sul d'an oferen bred, unan eus ar gurusdet a venne ato tenna va daoulagad. Jakik oa e hano. Eur paotrik dihun, speredek ha devot ivez e kaven anezan ; diluyetoc'h oa eget ar re all ha respetusoc'h ivez. Heb diskues dezan netra, setu me ha goulenn digantan

petra c'hoantea beza divezatoc'h. — Me vo person, emezan heb marc'hata. Ar respont-ze ken didroidel a blijas din. Mes d'an oad-ze ar vugale 'zo ken edro ! Va sonj em boa great da glevet muioc'h var e zoareou ha re e dud.

Tad ar paotr a oa kalvez. N'hen anavezen nemet nebeut : n'em boa morse komzet outan ; a veac'h soken m'am boa gwelet anezan dre dremen e kichen e di. — N'eus ket keit-se c'hoas, a ouzoc'h ervad, ma 'z òun person e parrez N. — O veza eat, eun devez, da velet unan klanv er c'harter, e kavjon an tu da vont e santier va c'halvez. Va den a ziskuezas dioc'htu, e rea plijadur gantan va gwelet. Eun digemer a reas din gwelloc'h eget n'omp boas da gaout digant an artizanet. An artizan, hirio, ne gar ket gwelet ar zoudanen var e dro ; hag ar beleg deus e gostez a zo, re marteze, en disfizians anezo. N'eo ket ma tamalfen va c'henvreudeur. Kement ha kement a c'heier a zo bet skignet divar hor penn !...

Goude beza divizet, eur pennadik gant va den divar benn ar yec'het hag an amzer, setu me ha skei var eun var an tach, ha goulenn digantan :

— Eur mab ho peus aze hag a blij din. — Ma c'hoantaffe Jakik mont da vele, miret a raffac'h outan ?

— Me, aotrou person, miret outan ! Morse ! Perag her grafen ?

Hag e vouez ne grene tamm o lavaret se.

— Ar c'homzou-ze a ra honor deoc'h, va mignon. Mes arabat fazia. Stad ar veleien hirio a zo amjestr. Goalgaset omp ha goalgasetoc'h e vezimp c'hoas. Laeret eo diganeomp hor paë daoust d'ar gwir hor boa varnan ; varc'hoas marteze e vezimp lakeat er meaz eus hor presbitaliou ha ne vijen tamm souezet ha pa ve serret hon ilizou. An dud zo ous hor gouarn ne c'houlenfent ket vell eget en ober ; ne jomont adrenv nemet dre m'o deus aoun rag ar bobl. — Va c'hredit mad, ne lavaran ket an dra-ze evit ober va c'hlemm. Al lealdet hebken eo a ra din lakat an traou var eun dirag ho taoulagat.

— Oh ! aotrou person, emezan dioc'htu, petra livirit aze. Ar veleien hag ar relijion o deus gwelet goasoc'h traou eget se abaoue m'eo savet an iliz. C'hui oar gwelloc'h an dra-ze egedon-me, p'e gwir o peus o studiet

epad ho puez. C'hui vezo ar vistri abars fin an abaden. Bezit dinec'h ; goude ar bâr-arne, e teuo adarre an amzer gaër. Ma 'z eo galvet va mab da vont da velek, me 'reio va galloud evit ma c'hello heuill galv an Aot. Doue. Pa deuas er bed, em boa lavaret d'am fried, Doue her fardono : « Eur mab eo, gwell-a-ze ; ma fell da Zoue her c'hemeret eun deiz evit e servij, e roimp anezan heb marc'hata. Eur joa vras e vefte evidomp hag eun henor evit hor famil. »

Ous e glevet, c'hoant a zave ganen da c'houzout muioc'h. Komzou ken didroidell ha ken kristen a yea eun beteg va c'halon.

— Mes, eus a beleac'h, eme ve, e teu deoc'h ar zanti-manhou-ze e kenver ar veleien. Dibaot eo deomp o c'haout en artizanet ar gear-man. Abaoue ma 'z oun person aman, n'em eus c'hoas morse klevet komzou ken a zoare.

— Ah ! ne ouzoc'h ket, aot person, ni hor beus bet eur beleg eus hor famil e mare an dispac'h vras. An dra-ze hen deus hor miret dious kals traou ; ha va c'hreden eo eman c'hoas hor yontr eus bâr an nenv ous hon diouall. Eur beleg eo ar gwella bennoz evit holl dud e lignez ; hag ar bennoz-se a c'hell en em astenn var meur a rumm. Ni a zo eun testeni sklear eus an dra-ze. N'oun ket atao bet eurus, kollet am eus va fried goude dek vloaz beva assamblez. Lezel a rea ganen pevar grouadur da sevel. Mes pa zigoueze eur reuz benag en ti, hor boa, e skol hor yontr, desket sellet ous ar grusifi koz a zo aze var ar siminal ; eun taol lagat varna hag ez eamp d'an daoulin hag e savemp adarre frealzet ha kennerzet.

Lavaret a c'hellan soken : e kreiz an dichans, em eus bet atao leac'h da drugarekat an aot. Doue. Va yec'hed en deus miret din, ha morse n'em eus kilet dirag al labour ; ha dre c'hras Doue, morse ken nebeut labour n'eus manket din.

Va zeir merc'h ha va mab a ra henor din. Petra c'houlenfen a vell ?

Chomet e oan sebezet. Feiz beo an artizan dister-ze a oa eat beteg goeled va c'halon. Dirazon e velen unan eus an dud eun ha didroidell-ze meulet kement gwechall gant hor Zalver. Joa, esperans ha nerz a oa diouanet em

c'halon gant komzou ar c'halvez paour. Pa 'z eus c'hoas kement a feiz birvidik er bobl, n'eus leac'h ebet da goll kouraj.

Hag abaoue an dervez-se, a lavaras ar person mat gant eur muzc'hoarz, ez oun en em lakeet adarre var va micher goz, an hini a rean e bloaveziou kenta va belegiach e kloerdi S..., da zeski *rosa, la rose*. Jakik a zo aketus da zont bemdez da gemeret kenteliou latin hag er bloaz a zeu ez eio d'ar c'hloerdi.

F. G.

EUR SKOLAJ NEVEZ E KASTEL-PAOL

Unan serret. — Kerkent eun all a zo digoret, e kichen

Eun dra ret eo kaout beleien. — Kent-a-ze eo ken ret all kaout tiez evit o sevel.

Skolaj kastel a zo brudet a bell-zo, abaoue ouspenn kant vloaz, evit an niver bras a veleien hen deus roet d'an eskopti. En deiz hirio, vardro 300 anezo a zo oc'h ober labour Doue en eskopti, darn er parrezioù, darn er skolioù. En 50 all benak a zo, pe er misionou, pe en urziou menec'h. — Medisinet, alvokadet, noteret tud a bluen a bep seurt, labourerien douar gouiziek o deus kavet en ti-ze ar gelennadurez o deus great anezo ar pez ma 'z int : tud a relijion grenv, an niver brasa anezo, lia tud barrek var o micher. Holl o deus dalc'het anaoudegez vad d'o mistri koz ; holl e lavaront hag e kanont : beza fier, da veza great o c'hrèsk e skeud tour Kreisker (1).

Mat ! an ti skol-ze a venn mont d'an traon, abalamour ne fell mui d'ar gouarnamant lezel ar veleien d'ober skol

(1) « Chacun de nous restera fier
D'avoir grandi près du Kreisker. »

(Cantate de M. Le Roux, ancien principal, à N.-D. du Kreisker).

Eun testeni splann hor beus bet eus an dra-ze en deveziou-man. Galvet int bet, ar skolaerien goz eus skolaj Leon, d'en em voda en eun emglev galvet : « Kompagnunez skolaerien goz Kastel, » (association des anciens élèves du collège de Léon). Mall eo bet gant an darn vuia anezo respont oa joa ganto rei o hano evit beza eus hor kompagnunez, hag ar re ne c'hellont ket dont d'ar vodadeg vras a vezo great d'ar 5 a viz Gwengolo diarbennet ma 'z int gant o afferioù, a ziskouez beza keuziet bras.

ennan, pe da vihana, dre ma tivis e kemero lañket plas ar veleien kerkent a ma teuo da vankout ar re zo ennan breman o rejanti.

Digemer divizou en doare-ze a ve goullondera an ti en eun nebeut bloaveziou. Mes petra d'ober ? Ar gouarnamant, evit doare, eo perc'hen an ti zo breman, laeret m'eo bet gantan var eskopti Leon e mare ar Revolusion vras (1).

Dious an tu-ze n'eus netra da c'hedal.

Petra da ober eta ? Heb he skolaj, Kastel ne ve mui Kastel. Beteg-hen, *kas ar vugale da Gastel, oa lakat anezo var ar studi da vont da velek. Meur a hini eus ar veleien, a zo bet hag a zo c'hoas breman o labourat evit eneou o c'henvroiz eus eskopti Kemper, ne vijent bet morse beleien panefe ar skolaj-ze. — Meur a hini eus ar vugale, galvet goulskoude gant an Aot. Doue da labourat evit e servich, ne gavint ket pe ne sonjint ket soken klask eun ti all evit ober o studi. Ha setu bugale diaelet hag o vale er vuez er meaz eus an hent merket dezo gant Doue ; ha setu ive dienez beleien evit an iliz. — N'eus ket da lavaret, ret eo e kendalc'fe eur skol e Kastel. Bro-Leon, Doue ra vezo meulet e deus c'hoas an honor bras da rei ar muia beleien d'an Ilis. Arabet e teuffe an eienen-ze da zizec'ha.

Serret eun ti, red eo e ve digoret eun all, ha dioc'h-tu. Tud kalonek ha gouiziek o deus lakeat an dra-ze doun en o fenn. Kouent an Urzulinezet a jome goullou abaoe tri bloar, abaoe m'oa bet ar sœurzet talet var ar ru e miz kerzu 1907. O chom goullou, nag an tiez nag ar jardin ne vijent eat var vell ; gwelloc'h oa perc'henni anezo hag o lakat en implij. Sœurzet ar gouent o deus ervad komprenet an dra-ze ha komprenet ive pegen red oa eur c'hloerdi e Kastel ; ha setu perag o deus roet aotre d'an aot. Guebriand eus ar Gernevez da brena o zi ha da ober anezan an implij a vije gwella evit mad ar vro.

Er gouent eta eo e vezo digoret ar c'hloerdi nevez evit ar vugale a c'hoantaffe ober o studi, d'ar c'henta a viz genver 1911. An tiez 'zo bras, ar porziou frank ha ledan, ear vad a gavint ennan ha kement 'zo ret evit yec'hed ar

(1) Ar skolaj vremen a zo bet savet gant an Aot. 'n Eskop Delamarche, diveza eskop Leon, er bloas 1788.

vugale 'zo pourchaset. N'eus fors pegen niverus e vent, ar vugale a gavo lojeiz en tiez nevez.

Eun dornadig mad a arc'hant a zo bet red da glask evit lakat peb tra en urz vardro ar gouent. Mil bennoz Doue d'ar re o deus bet ar vadelez da zigeri o yalc'h hag o c'halon evit-se. Gwelet a raint divezatoc'h n'o deus ket great eun implij fall eus o arc'hant. Breman eo dezo ive lakat ar vugale da zont niverus varzu Kastel.

F. C.

PIOU ZO GALVET DA VONT DA VELEK ?

Iliz Jezuz he deun ezomm beleien nevez, rak ar re a zo, falc'h an ankou a deu d'o diskar abred, an eil goude egile, divar o zachen.

I. — *Piou a dle kemeret preder da rei danvez beleien d'an iliz ?*

— Beleien ar parrezioù hag ar gerent kristen.

II. — *An tadou hag ar mammou, daoust hag i a c'hell trei o bugale var ar velegiach ?*

— Ia ! heb mar ebet, rag an testeni brasa a garantez a c'hellont da rei d'an aotrou Doue, eo kinnig unan pe unan eus o bugale hag a vezo dezan korf hag ene.

III. — *Piou a dleer lakât e penn an hent da vont da veleg ?*

— Ar vugale yac'ha a gorf, lemma a spered ha gwella a galon a gaver, hag a ziskouez o unan kaout c'hoant da gerzet varnan.

IV. — *Daout ha ne dleer ket sellet, abarz ober an dibab, ous ar renk hag ous an danvez ?*

— Nan, an iliz ne zell ket ous ar pezh a zo en dianvez d'an den, ha pa gav bugale baour hag a zo dious he doare, ne oufet ket ober kaeroc'h aluzen eget rei an dourn dezi da lakat anezo da ober o studi.

V. — *Etre ar re o devez great o studi, piou a c'hell mont da veleg ?*

— Kement hini a zo kavet mad gant an aotrou 'n eskop ha galvet gantan d'an urziou sakr.

VI. — *Piou a vez galvet gant an aotrou 'n Eskop d'an Urziou Sakr ?*

— Ar gloareget gouziek ha vertuzus hag a venn labourat e doug o buez, evit gloar Doue ha silvidigez an eneou.

VII. — *Ha n'eo ket talvoudek kenan pedi evit ar re a zo var an hent da vont da veleien ?*

— Eo, rag ar veleien zantel ha gouziek hebken eo a ra silvidigez ar broiou.

J.-M. P.

Tennet eus *Buez ar Zent*, nevez.

DIVARBEN ar SKOLIOU

(Kendalc'h)

Petra a zo el levriou koundaonet gant an eskibien

Lavaret a reamp e zeuz traou diskiant el levriou koundaonet gant an eskibien. — « Araok Revolution 1889, a lavar hon doktored, peb tra a ioa fall en hor bro ; abaoue 1789 peb tra a ia mad ha dreist oll en amzer a vremen, abaoue m'eo deuet an trede Republik.

» Guechall an dud o doa poan, a ioa eb deskadurez ; an dud a ioa tenval o fenn ; lenva a reant o sellet ouz maneriou an noblanz. »

An dud o doa poan, kredi a ran kement-se, rak ne vez netra eb poan. Hirio ivez an hini en deuz c'hoant gouid eur guennek benag a rank poania. An oll n'o deuz ket, bep pred, kig rost da zrebi na guin da eva. E meur a di c'hoaz ar bara ne zeo ket euz ar re venna hag an avalou douar a vez aliesoc'h var an daoul eget ar c'hig iar ; stankoc'h eo an dud o deuz dour d'o frejou eget ar re o deuz guin.

Mez gortozomp aman. An hini a gav mad he dam bara, ha goude ma ve du, an hini a vez ato digor he galoun, an hini a gousk mad hed an noz eb aoun, eb enkreuz, daoust ha n'eo ket eürusoc'h eget an aotrou a zo en eur maner kaer, dirak boued a briz braz, mez n'hen deuz tam naoun ebet, a zo inouet en deiz, inouet en noz ; n'hen deuz ket a labour d'ober hag e kav hirr an amzer.

Klevet ho peuz komz euz ar roue-ze a gasas eun deiz

he zervicherien da glask roched eun den eüruz. Ar zervicherien a redaz a bep tu eb kaout ar roched goulennet. Ne zavchont var o hent nemed eun den eüruz, unan ebken : hag hen-man n'en doa roched ebet.

Guelet ho peuz bugale an dud divar ar meaz ; peurliesia eo ruz o fenn ; avechou e vez louz o fri hag o daouarn, guir eo, hag alia ran o mammou da voale'hi mad anezo bemdez. Mez ma n'eo ket ato ken neat o bisaj ha ma vije red, guelit pegen teo o divreac'h, o divesker, pegen digor o feultrin, guelit pegen laouen int. Ar re-ze a zo bugale eüruz.

Setu aman, er c'hontrol, re all, bugale eun aotrou pinvidik, savet en eun ti brao e kear ; o daouarn, o bisaj a vez goale'het meur a veac'h bemdez ; dillad mad o deuz, boued mad o deuz ive ; mez, evelato, n'ouzoun ket perak, ato e vez eun dra benag oc'h ober diez dezo ; ne dremen miz ebet eb na deuffe ar medisin d'o guelet, hag ar mevellen a vez bemdez o vont da di an apotiker da brena louzeier evito.

Lavarit d'in e pe leac'h eman ar brasa eürused.

Red eo kaout bara da zrebi, sklear eo, red eo kaout dillad d'en em viska, eun ti evit loja. Hag a drugare Doue breman e zeo guelloc'h var gement-se an traou eget kentoc'h. An dud divar ar meaz a zo breman peurliesia lojet mad, ne vez mui guelet er memez ti an dud en eur penn hag an anevaled en eur penn all. An tiez a zo toet gant sklent, a zo koant, huel, a deu enno frank an ear hag an eol.

Gant an amzer an traou-ze a ia var vellaat. Guechall ne zoa ket a hentehou braz, a hentehou houarn, a vago dre dan, ne zoa na telegraf nag aeroplan. Mez aben kant vloaz aman e vezo c'hoaz meur a dra nevez.

Mad, daoust hag aben kant vloaz aman e vezo gallet lavaret ne zeuz hirio netra talvoudek en hor bro ? Nan, ar re gomzo evelse a vezo tud diskiant.

Er memez tra ive, ar re a lavar ne zoa netra vad er Frans araok ar Revolution, a zo tud diskiant. Araok ar Revolution ar Frans a ioa en he zav, ar Frans a ioa eur rouantelez vraz, ar gaera, ar vrudeta euz an Europ hag euz ar bed.

Ah ! na deomp ket da zrouz-prezeg hon tadou koz. Hon

tadou koz a zo bet tud krenv, kalonek. Greomp eur zell var istor ho bro abaoe ma zeuz skridou da ziskuez deomp petra zo tremenet var an douar hanvet hirio ar Frans.

Hanter-kant vloaz araok ginivelez Hor Zalver e velomp hor bro hanvet neuze Bro-C'hall o talc'her penn epad dek vloaz da Jul Cesar, unan euz ar guella brezellerien a zo bet var an douar. Jul Cesar a ioa o koumandi armeou Roum, enno soudarded koz boazet da ober brezel ha da gaout an treac'h. Ma vije bet ar C'hallaoned unanet muioc'h etrezo, e vije bet kaset d'ar gear armeou Cesar.

Pa deuz vardro ar bloaz 400 goude Jesus-Krist ar Francisien euz an tu all da ster ar Rhin, ar Roumaned a rankaz mont var o c'hiz, ar Francisien gant ar roue Clovis a deuz da veza ar vistri hag hor bro a zo hanvet abaoe ar Frans. Hon tadou koz eo ar c'hallaoued hag ar Francisien.

Araok Klovis e zoa kristenien en hor bro, mez gant Klovis a oue badezet e Reims gant sant Remi, ar Frans a deuz da veza kristen a bez, koulz lavaret.

Ha piou lavaro an traou kaer great gant ar Frans kristen, gant Charles Martel, Charlemagn, sant Lois, Jeann d'Arc hag ar re all ? Ar Frans he deuz flastret an Arabed e Poitiers ha miret evelse an Europ diouz relijion Mahomed, ar falz profed. Ar Frans a zo bet oc'h ober brezel en Douar Zantel d'an Turked, o tifen bez Jesus-Krist ouz enebourien kriz, hag e veze gaelet kristenien Frans, an dud chentil hag an dud dister, o tilezel o bro, o c'herent, kement o doa evit lakat ar groaz var o feultrin ha mont varzu Jerusalem da ziframma bez Jesus-Krist euz daouarn ar baianed. An dud a zo laouen o rei o goad evit o Doue a zo, a gav d'in, tud a galoun, hag eüruz ar vro a zo enni kalz tud evelse, rak ar vro-ze a zo krenv ha iac'h.

Tud Frans, guechall, a ioa tenval o fenn, a lenve aliez, a lavar hon doktored nevez. Kement-se a zo gaou adarre. Neuze, guir eo, ne veze ket gellet prena ed euz an Amerik evel breman. Mez ar Frans guechall a ioa enni tud a c'houie c'hoarzin ive, tud laouen, a gane, a c'hoarie, a rea goap euz an aotrouien ; hag er c'heariou ha var ar meaz e veze festou aliez : Fest an oc'h, morlarjéz (pe an

ened) a ioa ar c'hiz anezo pell araok ar Revolution. Ar roue Herri IV a reaz kalz evit sikour an dud divar ar meaz hag a lavare e c'hoantea gaelet e peb ti var ar meaz ar iar er pod bep sul.

Lenomp ar skridou koz hag e velomp enno e veze debret ouspen geot (marteze e vreze drebet salladen evel hirio), e veze drebet kig moc'h kig maout, kig leue pa vézet klanv, kig goazi da Nedelek, viou, pesked. Ne veze ket drebet kement a gig hag hirio, mez n'oa ket falloe'h an dud, er c'hountrol eo, kalz oant krenvoc'h ; ma rankfe hirio ar zoudarded bale evel ma reaz guechall soudarded Frans, ne c'helfent ket harpa.

Hon tadou boz a gare marvaillad, lem oa o spered ; kement a zeskadurez a zo bet en hor bro araok ar Revolution eget a zo hirio. An traou kaera skrivet e gallek a zo bet skrivet etre ar bloaz 1600 ha 1700, en amzer ar roue Louis XIV. En dro genta e komzimp euz an dra-man.

I. Uguen
Superior Skolach Sant Visant a Beas
e Kemper.

Kloerdi-bras Lambezelleg

Diverra eus labouriou miz maë ha miz even

D'an dri a viz maë e tigoras labouriou kenvreuriez ar brezouneg evit ar pennad diveza eus bloavez skol 1909-1910. Er vodadeg kenta, an aot. Brinquin a reas eur brezege var « Gourinou Breiz-Izel. »

Ar gourinou a zo koz e Breiz-Izel : kaout a reer mennek anezo e paperiou eus ar bloavez 1642. Ar giz eus ar gourinadek a ia evelato nebeut-a-nebeut en traon ; her c'haout a reer c'hoaz goulskoude e meur a leac'h, dreist oll e Skaër, Bannalec, Rosporden, ar Faouët ha Guiskriff. An aot. Brinquin a gomz eus gourinou Skaër en deus gaelet e-unan er bloavez diveza.

Vardro div heur goude kreiz-de, ar « bombard » hag ar « biniou » a zisken divar o barriken, hag en hent varzug ar blasen, c'heilhet gant eur strollad mat a dud... Daou wennek a goust mont da velet ar c'hoari... E kreiz al « lice » eman ar mear en dro d'ezan e guzulieren... En

eur c'horn eus ar park e veler, o peuri, an daou vaout a vezo roet e priz d'ar gwella paotred.

Koumans a ra an abaden. Da genta eman tro paotredigou yaouank eus a 13 da 18 vloaz. Goude e tigouez tro ar voazed... An hini a c'houniz a ra tro al « lice », savet gantañ e zorn. « Chom 'n ho sav ! » a vez peurlieissa lavaret d'ezan araok ma vez peurachu an dro, da lavaret eo : « kavet oc'h eus ho par » ; « sta, vir » a lavare gwechall eur barz latin, o komz eus hevelep tra.

Ar bobl a gemer kalz perz er gourinadeg ; goazed ha merc'hed a ij o diwreac'h, a zav hag a stou o fenn. Klevet 'vezent o lavaret : « Dao ! Dalc'h mat ! mat eo ! » Pep hini a glaoustr eus e du... Setu unan eus ar gourinerien d'an douar ; distrei a ra da c'houlenn eus ar zellerien a stoket eo bet e gein d'an douar. Ma leverer nan, an abaden a goumans adarre. Dao ! leurennet unan eus ar baotred ! Ar maout a jom e parrez Skaër. Mes eur maout all a jom c'hoaz, ha Guiskriff a fell d'ezi e gaout. Setu daou baotr start var an dachen, Penduff, eus Skaër, ha Kristian, eus Guiskriff... Dao ! Kristian d'an traon ! mes e gein hag e skoaziou n'int ket bet stoket oc'h an douar. Setu anezo adarre en o zav... Tenn eo ar c'hrogad... Erfin Penduff a dap eun taol bistroad hag a gouez d'an traon, e fri o wada. Da C'huiskriff ez a an eil maout.

Avechou ar stourmad ne vez ket ken kalet : an daou c'houriner, en em glevet araok evit ranna ar gouign, ne bad ket pell an taol etrezo.

Ar gourinou a grenva ar c'horf, ha guelloc'h c'hoaz, a denn an dud eus an hostaliriou, a jach ar yaouankiz eus ar goupagnuneziou fall, eus an « assembleou » direol. Er gourinadeg an oll a gav plijadur hag ac'hano e tistroer yac'h a gorf hag a ene. Allaz ! mont a raint ive en traon a neubeudou evel an oll gizioù mat all eus a Vreiz (1) ?

Prezegen an Aot. Brinquin a reas plijadur d'eomp oll.

D'an daouzek, an Aot. Rener a goumans reiza an deveuriou hag an Aot. Bot a gendalc'h gant Istor Breiz. (Dimezi Charles VIII hag an Dukez Anna).

(1) Ne fell ket din tamall ar gourinadegou ; o zu mat o deus ; hag an aotrou en deus great ar brezegen zo hano anez i aman, en diskuez errad. — Mes, gwelloc'h eget ar gourinadegou korf ous korf, krog-ha-krog hor beus hirio evit rei d'hon tud yaouank korfou soupl, goenv ha nerzus. Goulennit-digant ar sosietou a « gymnastique ».

(Note de la Rédaction).

D'an naontek, an Aot. Brenéol a ra eur brezegen gaer var ar « Besketez grilhed-mor » (langoustes). Setu hi aman penn-da-benn.

« Ar Besketez (1) grilhed »

Eun droiad d'ar Vered-Nevez

Ne zeus gour ac'hanoc'h ha n'en deus ket gullet, eur vech ma ne ve ken, astennet var an dól, eul loan rus hag iskis, mes dezan da veza iskis, e kaver ennan, kuzet dindan an askorn, eur boued eus ar gwella. Eus ar grilh e fell din komz.

Abaoue eun neubent bloaveziou, eus Breiz-Ízel dreist oll, niver ar bagou armet evit ar besketez grilhed a ya bep bloaz var gresk. Azalek an Eaed beteg Goueliou kal ar goanv, eus Portsmouth e Bro-Zaoz betek aochou devet ar Marok, ne zeus karreg ebet a na zisken varni paner ar pesketour grilhed.

Evit rei d'eoc'h an tanva eus ar vicher-ze, m'ho ped da zont ganin d'ober eur beach d'ar Vered-Nevez.

Eul lunvez a viz Guengolo, goude pardoun sant Rumond, epad ma oue an Angelus, e lakejomp da vouel, e Goyen. Eun ezenn fresk hag a re diwan « mousc'hoarz diniver ar mor », — evel ma lavar eur barz koz — a gasas ac'hanomp goustadik er mez eus ar porz. Neuze, an oll lien dispaket, ar wern a skrijas hag a blegas dindan nerz an avel. Hor bag, eur sloop doun ha pounner, hirroc'h eget ar bagou sardin, a faoute an dour gant e staon evel eun alar ar goaremou. D'hon dorn diou ar C'hap a zihune ha, dre ma pigne an heol, e gein rous, a strew dre varnan tier guenn, a zave eus e linser a vrumen. E berr amzer e oamp digouezet da Veg ar Raz hag eur guchen avel a zougas ac'hanomp beteg an enez Sun. Goulskoude ar c'habiten, e lagad var ar c'hompas, a gendalc'he var ar c'hornok. An heol a zavas d'ar c'hreisteiz, a ziskennas, a gouezas er mor, ar vag a ye atô var 'rôk.

An touriou fan en em lake da furchal an dremwel gant o lagad guenn, rus pe c'hlas, pa zeuas ar mare da zisken er c'hal evit sikour ar mouss da ôza koan. Eur jidouarnad

(1) Pesketourien Kerne a lavar : pesketez ha n'eo ket pesketez.

keuneut éntanet, varni eur pot-houarn bihannoc'h karget a zour, ha ne oa mui nemet gortoz, e kreiz ar moged, ma vije poaz ar zouben avalou douar. Epad kement-se, e oue tennet ar siellou divar ar c'hachet « *exportation* ». Evelse e vez hanvet ar butun, ar guin ardent, an the, ar c'hafe hag an traou all guerzet gant ar gouarnamant d'ar vartoloded a ya d'ober ar beskerez vras. Mes o veza ma ne baëer ket an droajou varno, ar ziel ne c'hell beza savet nemet m'êz eus ar porz.

Ar skudilli leun a souben, e savis adarre var ar pount. Noz e oa, eun nosvez hanv, steredennet hag hep loar. An avel a oa kouezet ha var ar mor, soupl evel eur zae seiz, eur moroc'h a jenche toull-pennik 'n eur roc'hal ; e ziousaskel a stlape en ear garlantezou perlez glas hag a goueze en dour gant trouz ar grizilh o foueta guer eun ti. A vare da vare, eus an douar, a ne veled man aneze, luc'haden eun tour tan a dorche an oabl hag eus an denvalijen, kant ha kant bag a save, pell du-hont, o lezel var o lerc'h eun arouden dantelezet.

Digouezet e oamp var ar Vered-Nevez. An hano skrijusse a zo bet roet d'ar c'harter-man e koun ar bagou kenta a zeuas ennan. Kalz anezo a ne oant ket krenv awalc'h evit herzel ous an tôliou mor, na zistrojont biskoas d'ar gear. Aman eman o bered.

Goulskoude deut oa ar mare da vont da gousket. Eur c'halopinad odivi arôk ar pedennou hag an hanter euz an ekipaj a ziskennas d'ar vours. An hanter all a jome var ar pount : rak n'heller ket sonjal mouilha pe heori var eur mor ken trubard. Tremenet hanter-nouz, ar re o deus kousket a gemero d'o zro ar vól hag ar skoud. Epad m'emaint var vor ar vartoloded n'o deus evelse nemet teir pe beder heur da ziskuiza.

Evelto me ive 'n em dolas, dilhad hag all, en eur seurt archet renket var gosteziou ar vag. Eur c'hoc'hed plouz hag eur pallen : setu guele ar martolod. Arôk mont e bro an huvreou, ne oan bet evit mirout da zonjal ped darvoud a c'hellfe digouezout ganeomp : ar gorventen, an tiz-dour, ar vrumen hag al listri-tan a droc'h evel eur vleven bagou bihan ar besketourien. Mes ar mor a luskelle hor c'havel hag a boke d'ezan evel eur vamm dener.

Da c'houlou deiz e oamp var zao. Hent hon doa great

epad an noz, rak digouezet e oamp e kreiz ar strollad bagou all hon doa guelet neier. Epad ma tiskoache an heol eus adrenv an enez Sun, ar vartoloded 'n em lake d'al labour.

Da genta ar panirou a oue renket var ar pount. N'it ket da gredi oant panirou da gas amann d'ar marc'had pe boutegou da zestum avalou douar. Nann, mes eur gloued haleg pe ôzil stumet 'vel eur varriken. En tal, eleac'h kaout koat, ez eus eur roued gant eun toull ennan. Dre an toull-ze e yelo ar pesked da zibri boued er baner, hag eur vech ebars e vo red d'ezo chom enni.

P'eo laket ar voueden — (peurvuia eur wrac'h pe eur c'hourn faoutet dre an hanter) — ar baner a zo diskennet e goueled ar mor var bouez bili amarret enni. Vardro daou-ugent gourhed korden eo red teuler er mêz arôk na douch ar paner. Eun tam-spoen hag eur pavillon a bevar droatad bennag a ziskuez e peleac'h eo bet laket.

Arôk teuler ar panirou, ar c'habiten a zisken eun tamm ploumb e strad ar mor, evit gouzout ha mat eo ar plas. An tamm ploumb-se a zo kleuz ha leun a zoa : ar merkou lezet gant ar rec'hier varno a ziskuez ha grouan, pe gourailh pe gerreg a zo dindan ar vag. Peurvuia ar grilhed a jom en dro d'ar bezin, skluchet e toullou ar reier bras. — Bep kant metr e vije taolet eur baner. Etre an hini kenta hag an tregontved ha diveza paner tost d'eul leo.

Digouezet d'ar penn-ze e oa poent distrei da zevel ar panirou kenta. Ar beachou a gemere amzer hag an heol, pignet huel, en doa d'ar mare-ze nettêt ar mor eus brumen ar mintin. Eun dudi e oa her guelet goloet gant ar bagou o vont hag o tont, ha gant al laboused-mor : ar morvran, ar guillou, ar melfaout, ar goelan a darnije 'n eur iudal var ar renkadennou boeou a zanse pa zeue an trilamm.

Epad ma tistroemp, ar verdeidi a leze linennou da vont gant an dour hag a zigase var ar pount guech eur c'hloyan, guech eul leoneg pe eun ton. A vare da vare, ar mouss a zave gant te pe gafe ha gant eul lomm mat a win-ardant ; hag etre staga ar skoud ha boeta al linennou peb hini a eve eur banne hag a zebre eun tamm bara. Rak n'eus heur ebet evit merenni epad ma v'er var an dachen pesketa.

Ober ar zao, setu aze an tenna labour. Ar vag vras en em lak penn d'an avel. Ar c'hanot a ve tolet er mor ha daou zen a zisken ennan. Daou pe dri d'ol rouenv boufiva ha setu ar c'hanot var ar spoen. Neuze a jachadennou ingal hag hep frapa an disterra var ar gorden, eur martolod a zav ar baner neubeut ha neubeut. Ar c'hanab pe al lined rouzet eur c'houe a roc'h var ar bordaj, a zev ar bizied ; an dour zall a red ous dorn an den evel dious eun duellen. Eur c'hourc'hed c'hoas hag ema ar baner a rez an dour. Ar mortolod all a zikour e gensort daoubleget, poan d'ezan kaout e alan, ha ganto o daou e teu dindan an heol skedus ar baner garlantezet a vezin, a yeot mor, fichet gant bleuniou beo ar c'hourailh-roz. Ar baner a zo digoret. Ar c'hranket a ra eun trouz divergont ; ar grilhed rouz hag al legistri glas ha mouk a sko gant o lost var o c'hof evel ma sko ar c'houerez gant ar c'holvez var al lien trempet ; sevel a reont o c'hrabanou, digeri a reont o wintaniou, meska a reont o birou varzu eur mell silien skoulmet evel eun aer en dro da gelc'h ar baner, hag a zanj, reudet he chodou, d'ar blaneden c'haro a bouez varni.

Guechall evit derc'hell beo ar pesked e vije red lakât anezo en eur c'hachet toull, staget e lost ar vag var bouez eur gorden. Ar grilhed 'n em zrailhe en eul leac'h ken stris ha tiz ar vag a oa troc'het 'n eur stleuja eun dra a zalc'he kement a zour. Breman ar pesket a ve miret etre strad ar vag ha pount ar c'hal. Eno e teu an dour dre doullou lezet etre plench ar c'hein. Dre eur punz a zav beteg ar pount uhela e vez tolet ar pesket en o « vivianer. »

Mes n'hellit ket miret kement ho peus paket. Al legistri hag ar grilhed a dle kaout an hed gourc'hemennet gant al lezen. A hent all eo red banna anezo er mor. Al lezen a zifen ive derc'hell ar mammou a zoug greun. Mes n'oun dare ma sent kals ar pesketourien eus kement-se. Evit guir, meur a hini a lavar ma ya var vihannât niver ar grilhed var hon aochou, ne zeus ken abek nemet ma tis-trujer ar mammou greunek.

Klozet ar c'hranked en o frizoun, ar zilien a oe troc'het he fenn d'ezi evit ober souben da goan. An dilere'h lodennet evit boueta ar panirou a finve c'hoas var ar pount eur c'hart heur varlerc'h.

Ha dao, d'ar panirou all, hag an hevelep levenez pa zigoueze unan karget a feson. Mes ne larin ket d'eoc'h ar fopad malloziou a goueze var ar paour kêz paner a zeue goullou d'ar c'hanot.

Echu ar zao, ar vag a ye eun tammik larkoc'h. Ar c'habiten a dôle ar sound, ha kavet eur plas, adarre ar memes abaden. Epad ar pemp devez e chomjont du-ze, ar vartolodet a labouras azalek ar c'houlou deiz beteg an noz tenval.

Goulskoude, dre ma verrae ar zizun, al loar a greske muoc'h-mui, hag ive an tiz gant an dour. Ar c'hann a dlie digouezout abenn pemp devez hag ar reverzi vras eun devez hanter varlerc'h. D'ar guener vintin, er c'henta sao, meur a baner a zeuas kignet var ar pount : ruilhet oant bet var ar c'herreg gant kas an dour. Ar boeou, buntet gant al lano, a blege betek beza hanter c'holoet gant ar mor. Dies e oa guelet anezo dindan an tarziou. Unan zoken, drailhet ganti he c'horden, na oue ket kavet hag ar paner oue kollet. Pelloc'h oa poent dont d'ar ger ; ne dalve ket d'comp chom hirroc'h.

Var gement-se, pep tra destumet mat, ar stur a droas staon ar vag varzu an douar. Pa zavas an devez varlerc'h e oamp etre Sizun ha Beg ar Raz, dirak trez an Anaoun ha skeuden an Introun-Varia : ra zikouro bepred ar vo-raerien. En eur heur, an avel gouzil a zigasas ac'hannomp arôg ar glao, dre aochou al Loc'h, Primelin, Sant-Tujan, Penn-an-Enez, an Arvily, Santez-Evet, beteg porz Goyen.

Ne oamp ket c'hoas digouezet mat pa deuas ar matouter er vours da lakât ar ziel var ar butun hag ar pez a jome eus an odiyi. Var e lerc'h e teuas ar marc'hadour grilhed. Dizoloet oue ar punz dirazan, hag hen a zellas eus ar grilhed a zeue gant o daoulagad rus douget var o zreidigou da velet an heol hag an oabl glas.

Herves mare ar bloaz, ar grilhed a ve guerzed etre ugent hag hanter kant lur an dousen. Mes daou legestr ne dalvont nemet eur grilh.

Abars kas anezo da di ar marc'hadour ne oa ken gortoz e vije kouezet ar mor evit gellout diskenn da dapa ar pesket betek strad ar vag skoet var ar zec'h e kichen ar c'he.

Eur vech guerzet, ar paour k ez loened a vezo kaset dioustu da Baris, pe marteze da c'hortoz ar goanv e vezint prizouniet en eur « vivianer » bennak. Pa vo kavet priz mat outo ez afont a voutegadou var d oliou kohi Paris 'vit beza kondaonet da veza skotet ez veo. Mes gant ar maro e teu d'ezo an henor ha ma n'ije ket ar barz goelet morse eul legestr ruziet en dour bero ne vije ket bet hanvet al loan paour : kardinal ar moriou.

Setu aze eun diverra eus buez ar pesketour grilhed. Betek breman, ar vicher n'eo ket  t fall. Goulskoude n'eo ket hep poan e c'hounid ar pesketour bara e vugale. Ne hell labourat nemet 'pad an hanv, da lavaret eo epad c'huec'h pe seiz marvor. Goude tenna amzer ar beachou hag hep konta an deveziou ma renker chom en aot gant ar gwall amzer, ne gavot ket kant devez labour frank. Mes var zouar ne jomont ket dibreder : dresa panirou, renka kerdin, griat lien, chench gwern pe roueniv a gemer o oll amzer pa ne labouront ket an tammik douar stok euz o zi, elec'h ma hadont eur zac'had avalou douar hag eur pochad heiz. Rak divar bara heiz hag avalou douar poazet en dour e vev ar ouenn dud-se, ar guella martoloded a zo er bed. »

Da vodadeg ar c'huec'h var-ugent a viz ma , an A. Gu guen, rener, a lenn d'eomp daou lizer digaset d'ezan gant an A. Vall e, rener *Kroaz ar Vretoned* hag an A. Gouriou, skola r « diere » e Kraon — hag eur pennad eus leorik an A. Leclerc, divarben  ar brezouneg er skoliou braz.

D'an daou a viz even, gant s on ar « Mevel bras » kanet gant an A. N ild , an A. J. Pape a ra d'eomp eur brezegen talvoudus divarbenn ar « Biblioth ques paroissiales ».

Deomp assamblez gant an A. Pape da Blougoulm da velet leor-di (biblioth que) an A. Goret. An A. Tanguy, persoun ar barrez, a ra d'eomp eun digemer kalonek hag a anzao en doa c'hoanteat da genta miret ous e gure da zevel eul leor-di... Eun dra eo goulskoude : ma ne roomp ket d'an dud ar vagadurez a zo red d'o spered, re all a deuio hag a roio d'ezo levriou fall. Ar spered, evel ar c'horf, en deus ezom e vagadurez... Red eo lak t spered ha kaloun an dud divar ar meaz da zevel uhelloc'h eget an douar... Ar skridou eo e guirionez bara an ene. —

Abaoue pevar bloaz an A. Goret a c'hell guelet brema ar vad en deus great. — E kichen al leor-di en deus savet ive eur c'helc'h studi.

Ha penaos kaout levriou awalc'h da zevel eul leor-di ? Gant ar gounidegez eus guerzidigez ar « C'hourrier » an A. Goret a zastumas hanter kant lur. An A. de Mun a roas d'ezan ive eur guchen arc'hant ha gant an dra-ze e teuas a benn eus e dol. — Pa vez moulllet levriou nevez e skriv da c'houlen anezo guelloc'h marc'had evit e leor-di hag alies e vez roet d'ezan e c'houlen. Evit al levriou gallek ez eo c'hoaz kalz easoc'h : n'eus nemet kas da Bariz (rue La Planche. — Oeuvres des Campagnes) eur pez a zek lur hag e tigaser d'eoc'h levriou evit kant lur.

Goude beza klevet ar c'henteliou-ze gant an A. Goret er prospital, deomp brema gantan d'al leor-di. En eur vont e lavar d'eomp e vez al leor-di digor bep sul araok ar gousperou ; an oll a c'hell goulen levriou hag o delc'her epad eur miz. Pep hini a ba  eur gwenneg ar miz.

Pe seurt levriou lakaat el leor-di ? Guelomp hini Plougoulm. Da genta, levriou a zevosion evel Introun-Varia Lourd an A. Madec, Aviel an A. Ca r, etc. Leor ebet par da Gannad ar Galoun-Zakr da ober plijadur. Ar woazed a gemer dreist oll « Emgann Kergidu, Alanik al Louarn, Job al Lounker, Feiz ha Breiz », etc...

Red eo eta, a lavar d'eomp an A. Pape en eur achui, rei d'ar barrisioniz boued ar spered, hag eun dra vat evit m'her gelfomp ober divezatoc'h, eo deski ar brezouneg er c'hloerdi.

Prezegen an A. Pape 'zo bet silaouet gant kalz a evez.

D'an nao an A. Bot a gendalc'h gant « Istor Breiz ».

D'ar c'huezek, goude m'oa kanet gant an A. Brenn el gwerz ka r « ar roue Gradlon », an A. Billant a zav da gomz divarbenn « Ar sivi. » — Dre chans e brezegen ne oa ket re hirr, rak, ken t mm ha ma oa an amzer, hon doa mall da vont da glask an ezen vat dindan gwez braz ar c'hastel.

Evel mac'h anavezomp oll ar sivi, n'hen doa ket nemeur a dra da lavaret divar o fenn. — Komz a ra da genta eus al labourerez-sivi. Goude eun neubeut gerio  var an doare hag ar mare d'o flanta, d'o c'houennat ha var ar boan a vez kemeret evit o c'haout abred, e komz eus o

guerzidigez. Vardro hanter-vaë e koumans ar Blougas-telliz kas o zivi da Vro-Zaoz. Al listri, karget en Treiz, a ia pemp guez ar zizun da Vro-Zaoz. Ar goestadou, diskarget e Plymouth, a vez gwerzet eno pe kaset dre an hent-houarn d'unan bennag eus keariou braz Bro-Zaoz, evel Loundrez, Liverpool, Manchester, Birmingham... ha re all.

Diou goumpagnunez 'zo e Plougastel evit guerza ar sivi : ar « Syndicat » savet pevar pe hemp bloaz 'zo etre eur strollad tieien, hag an « Union », emgleo great etre teir goumpagnunez goz eneb ar « Syndicat ».

Deuet gouel Yann, sivi ar Zaozon a zo deuet ive da ruzia ha diyar neuze Plougastelliz hag ive eun neubent Loperhediz a werz o sivi e keriadennoù hor Bro, evel Brest, Landerne, Lesneven, Kemper, an Naoned, Raozon... Lod a ia zoken betek Pariz.

An A. Billant a achu en eur veuli Plougastel a zo, « gant he c'helc'h-mor madelezuz, he zorgennou goloet a reier hag a vilinou-avel, he stankennou leun a barkadou sivi hag a eost alaouret, he liorzou karget a frouez a bep liou hag a bep gouenn, hep komz eus he ilizou hag he c'halvar kizellet ken kaër, unan eus koanta ha pinvidika karteriou hor Bro garet Breiz-Izel. » An oll a gav mat awalc'h ar pezh en deus lavaret, nemet an A. Bot, a gendalc'h da zifen e tare ker buhan ar sivi e Loperhet eget e Plougastel.

D'an unan var'n ugent, an A. Bot a gendalc'h gant « Istor Breiz ». Komzet en deuz er miziou-man, d'an 12 a viz maë, d'an 9 ha d'an 21 a viz even, gant muioc'h a galoun hag en eur brezounege flouroc'h eget biskoaz eus an dukez Anna hag eus an Emgleo a stagas hor Breiz ous Bro-C'hall.

Lavaret am oa roi, hag e guirionez karet am-bije roi d'eoc'h eun tanva eus ar prezegennou bouedek-se, mes o veza m'eo krog Ioen an Tour-Gwenn gant Istor Breiz, ne gav ket d'in e ve red o diverra aman ha laka diou vech ar memes tra var « Feiz ha Breiz ».

D'ar bevarzek a viz gouere, Kenvreuriezh ar Brezounege a en em vodas evit ar vech diveza er bloavezh skol 1909-1910. Evel ma ne zeus ket bet a amzer da zeski pezh c'hoari ebet, ez eus kanet meur a zôn. — Sôn ar givize-

rien (Les Tanneurs), e galleg, kanet gant an aot. P. Grall an deus dreist oll great kalz plijadur. — An A. Brenéol an deus lennet « Istor ar C'hoffed » tennet gantan eus eur skrid « provençal » hanvet « Li fabre » ; he c'haout a reol en dro pe dro moulet e Feiz ha Breiz.

Mes ar pezh a zo bet remerket dreist oll er vodadeg diveza eo prezegen an A. Rener, hanvet gantan dre izelder a galoun « Tenvallijen ». « D'ar 15 a viz gouere 1909, an noz, emezan, a ledas e vantel zu var ar Genvreuriezh. Abaoue 'z eus bloaz. Trugarekañ Doue, heol ha loar ; trugarekañ Doue, stered an Nenv » rak an noz a ia kuit hag ar sklerijenn a lintro adarre he bannou var ar Genvreuriezh... Mes an A. Rener, ma kar an izelder evitan e-unan, ne laka ket ar re all er memes sac'h gantan. An noz a gouezas var ar Genvreuriezh a zo bet, emezan, sklerijennet gant seiz stereden lugernus, skedussoc'h an eil eget eben. (Ar stered-se eo ar re a reas prezegennou epad ar bloaz). Da bep hini anezo e lavar eur ger a drugarez. Ar seizved dreist oll a zo bet remerket, dre ma oa eur « stereden lostek » ; edoug ar bloaz e kendalc'has d'hor sklerijenna.

Oll e strakjomp krenv ha pell hon daouarn d'an A. Guéguen, ken evit e veuli 'vit e brezegen renket ken kaër ha kizellet ken flour ma chome diavezidi ar Genvreuriezh digor frank o ginou ous e zelaou, ken evit e drugarekaat eus an aked hag ar vouiziegezh dispar a lakeas edoug ar bloaz evit deski d'eomp yez kaër-hor C'hentadou hag hor zikour evelse da droada guelloc'h ar benveg a lakaio ac'hanomp da dizout eassoc'h an eneoù a vezo divezatoc'h fiziet ennomp digant an Aotrou Doue.

Araok en em guitât e oue great ar votadeg evit dibab rener ha kuzulierien ar Genvreuriezh evit ar bloavezh a zeu.

Setu aman ar vleinerien nevez :

Président : JEAN BRENEOL. — Vice-Président : F.-M. LE BOT. — Rapporteur : F.-M. BILLANT. — Secrétaire : JEAN KERMANAC'H. — Trésorier : FRANÇOIS MIDY. — Bibliothécaire : LOUIS LAREUR.

Ar Sekretour :

J. DILASSER.

Ar Rener koz :

F. GUÉGUEN.

An Divener :

F.-M. BILLANT.

Ar Rener nevez :

J. BRÉNEOL.

GOUEL AR BLEUN-BRUG 1910

Moulla reomp aman varlerc'h, an diou ganaouen o devezo ar strolladou-kanerien da zeski abenn *Gouel ar Bleun-Brug* a zep.

Daoust d'ar pez a zo bet lavaret er miz tremenet, var goulenn darn eus hor mignoned, e roomp frankiz da bep rener da zevel e strollad gant bugale, gant goazed, pe gant bugale ha goazed en eun douez, ha da lakât ennan an niver a ganerien a garo.

Ar re a gano evito o unan, a c'hello dibaba ar ganaouen a girint gant ma vezo evelato e brezonek, na petra 'ta.

DORS, MAM-GOZ ARVOR !

(Dors, grand'maman Bretagne !)

Chanson nouvelle par Théodore BOTREL

Sur l'air du « Kousk, Breiz-Izel »

Imposée aux Chorales qui prendront part au Concours de « Gouel ar Bleun-Brug »

L'ajonc de nos foyers fume en la paix du soir

Comme l'encens d'un immense encensoir ;

Dors !

J'entends au loin sonner le dernier Angelus :

Notre Bretagne a donc un jour de plus !

CHŒUR

Dors, dors, douce Mam-Goz Arvor (1) ;

Dors, bonne Vieille,

Puisque ton Peuple veille,

Dors :

Gardiens de ton sommeil

Nous préparons doucement ton Réveil !

La nuit sur tes yeux las étend son voile bleu :

Dors confiante en la main de ton Dieu ;

Dors !

(1) Dors, Grand Maman Bretagne.

Baignant tes pieds poudreux dans l'Océan noiré

\Dors, accoudée aux flancs du Mené-Bré (1) ;

Dors, dors !...

Quelques jaloux en vain annonceront ta mort :

Ton cœur toujours bat plus jeune et plus fort ;

Dors !

Tes fiers enfants toujours chantent leurs chants joyeux

Dans le Parler qui leur vient des Aïeux !

Dors, dors !...

Toujours l'abeille d'or boit l'or de tes landiers

Comme tes fils l'or pur de tes pommiers ;

Dors !

Sur l'Océan toujours tes hardis matelots

S'en vont braver les grands vents et les flots !

Dors, dors !...

Que pourrait le Méchant à l'Envieux uni

Contre ton Ame et nos fronts de granit ?

Dors !

Nous lutterons ainsi que Toi-même as lutté

Pour ta Richesse et pour ta Liberté !

Dors, dors, douce Mam-Goz Arvor !

Dors, bonne Vieille

Puisque ton Peuple veille

Dors !

Quand luira le soleil

Le Monde entier saluera ton Réveil !



(1) Mont culminant des Côtes-du-Nord.



GWIR VRETONED

Kanaouen evit ar Gouelioù brezonek

Diskân : var dôn Sezis Gwengamp pe Sao Breiz-Izel

Kân : var eun tón nevez

Diskân

Marziale

Gwir vre - to - ned, tud a ga - lon, var
 zao Da ga - na - gloar da Vreiz hor bro,
 Ha da ziou - all ten - zor he bu - ga - le
 Ar yez, ar peoc'h, al li - ber - te; Var zao var zao!
 ha be - tek mer - vel stour - momp a u - nan e - vit Breiz I - zel

Kân

O va Breiz gant da dour-iou bru-det, Da vor glaz
 ha da ve - nez - iou, Da vruk ruz ha da lann a -
 laou - ret, Te zo koant dreist an holl bro - iou!

DISKAN

Gwir Vretoned, tud a galon, var-zao
 Da gana gloar da Vreiz hor bro,
 Ha da ziouall tenzor he bugale :
 Ar yez, ar peoc'h, al liberte ;
 Var-zao, var-zao ! ha betek mervel } bis.
 Stourmomp a-unan evit Breiz-Izel !

I

O va Breiz, gant da douriou brudet,
 Da vor glaz ha da veneziou,
 Da vruk ruz ha da lann alaouret,
 Te zo koant dreist an holl broiou !

II

Ne zeuz ket, 'vel etouez hor c'herrek
 A dud vad, seder ha nerzus ;
 Ne zeuz ket, 'vel en hor brezonek
 Soniou drant, gwerziou dudius.

III

Ah, siouaz ! ouz ar Frans digristen
 Breiz-Izel a zo chadennet,
 Ha, d'he heul, e venn koll da viken
 He brud vad, he nerz, he gened.

IV

Bretoned, savomp hor c'halonou
 Ha touomp e talc'himp atô
 Da vale var roudou hon tadou
 Keit ha ma zai ar bed en dro !

P. TRÉOURÉ.

FURNEZ BREIZ

En douar fall e m'an fall an ed.
Douar askol, douar ed ;
Douar raden ne d'eo ket.

Douar treaz, douar ed ;
Douar brulu ne d'eo ket.

Douar meinok,
Douar greunok.

Divar an treuz-ieod e vez ed,
Divar an onkl ne vez ket.

Pa vez ker ar bleud,
E vez kezek treud.

Bezin louet ha teil brein
Ra d'ar c'houer sevel he gein ;
Bezin brein ha teil louet
Lak ar c'houer da glask he voued.

Na espern ket teil, mes espern had ;
M'ar e peuz hadet eun dournad
E c'helli trouc'ha eur falsad.

Teil denved hag hada dioc'h tu
A lak' an eiz da veza dru.

Teil a grogadou,
Segal a bochadou.

Ar falla gounid zo e Breiz
Eo guiniz varlerc'h eiz.

Goude guiniz gounid eiz :
Guella gounid zo e Breiz.



Divinadennou Miz Eost

ha n'eo ket divinadennou int, mes eun dra benag all gwelloc'h. — Lenner, va mignon, evesañt mad ar pez zo aman varlerc'h.

An divinadennou o deus great tro vad, abaoe daou vloas hanter, etouez ar yaouankiz a lenn Feiz ha Breiz. C'hoantât a ran digoll anezo eus ar boan o deus kemeret ; (me gredfe kentoc'h eo plijadur o deus bet, n'eus fors). Eun dalvoudegez a hanter-kant skoed. (150 fr.) a vezo roet evel priziou, da zeiz gouël ar Bleun-Brug e Sant-Nouga. An holl hanoiou a zo ganen. Kement hini a zo bet teir gwech e hano, en dezo eur pris. Mes evit gwelloc'h anaout da biou ar priziou kenta, e lakan hirio eur problem diesoc'hik eget kustum, hag eul lizer da ober evit kas an dors d'ar gear da vevel bras ar Vereuri.

Ar respontchou a ranko beza deuet din araok ar bemzek a viz Gwengolo.

PROBLEM

Eun aotrou, eur plas mad dezan a lakas, d'an 29 a viz gwengolo 1890, 1.000 lur var interest 5 % e ti eun noter. Epad dek vloas goudeze, d'ar memez mare, e teue da zigas e 1.000 lur heb morse goulen arc'hant an interest ; rag-se an interest a jome da zougen interest e-unan.

Feiz ha Breiz

Kappad Misiak ar Vretouped

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

(KENDALC'H)

Eun dizakr, Proudhon e hano, a skrive : « Mar geller diskuez d'in en Testamant kos eul linen hebken hag a zell ouz an hini neves, neuze eo'h anzavin beza tre-c'het ». — An den dizoue-ze n'en doa morse, me sonj, lennet nag an Testamant koz nag an hini neves ; anefe-ze en diche gwelet difazi pegen gwir eo komzou sant Aogustin. « An daou Destamant, eme an doktor bras, a ro testi an eil euz egile ; an hini koz a gemenn an hini neves hag ema a ziskues eo gwir komzou an hini kos ; o daou e lavaront dalc'h mat an eil d'egile, evel an daou Serafin, a gomz Izaï anezo : Santel, Santel, Santel eo an Aotrou, Doue an Armeou ».

Goude beza lavaret deoc'h, lennerien, va mignoured, petra eo ar brofeted eo mall ganen displega eo Jezuz ar Messias diouganet ganto. Ha sonjit ervad, m'ho ped, an holl gomzou a gemerin euz skridou ar brofeted a zo tennet euz an Testamant kos a zo c'hoas gant ar luzevien hirio : an holl skridou euz an Testamant-ze a zo bet savet kalz araok donedigez Jezuz ; hag enno e kavomp buez ar bobl a Israël epad ouspenn pevarzek kant vloaz.

Digorit an Testamant kos : bep pazenn a lennit a gomz euz an Hini a c'hortoze ar bed holl ; eno e kavomp Jezuz dindan pep lizeren kouls lavaret ; hag ar luzevien, dre m'o deuz nac'het Jezuz, o deuz kollet an alc'hovez aour a zigore dezo tenzor ar Skritur Zakr ; dalc'het o deuz an Testamant kos, el lenn a reont, n'her c'houmprenont ket : eul levr eo evito klozet mad : rag ne gavont ket ennan an Hini a ro ar vuez, ar wirionez !

Pa zellomp pis ouz Jezuz ervez ma tispleg deomp an

D'an 29 a viz Gwengolo 1899 e roe e 1,000 diveza. Prêst goudeze e koezas klanv, e kollas e blas hag er bloas varlerc'h, adarre d'ar c'houel-Mikeal e leac'h *lakat*, e rankas *tenna* 1,000 lur ; hag evelse e rankas kenderc'hel da ober epad dek vloas. En devez memez ma tenne an dekvet mil lur e varve d'an 29 a viz gwengolo 1909.

Pegement a jome gant e heritourien eus an arc'hant plaset e ti an noter ?

— Evesait mat ! an arc'hant a zouge interest (a 5 dre 100) divar interest abaoe an devez kenta ; hag an arc'hant a jome goude m'en devoa komanset da denna ar mil lur kenta a gendalc'he da zougen interest ma d.

Eur pennadig-skrid da ober var an histor 'zo aman varlerc'h

DEIZ KOAN AR BEUR-ZORN

Job, perc'hen ar Vereuri-Vras a zo lorc'h enna da veza bet da genta o peur zorna.

— Ma vije great diouzin-me, emezan, ne vije den divezat gant e labour.

— Penaos-ta ? eme Jakez, ar mervel bras ; eur c'henta hag eun diveza a rank beza atao.

— Beza da ziveza n'eo ket beza re zivezat eo, eme Job. Ha den ne vije re zivezat *ma ne c'hedfe ket varc'hoas da ober ar pez a c'helle da ober hirio.*

— Mat-tre, eme Jakez, roit din ar voutail gwin-ardant aze, mac'h achuin anezi hirio.

Nota. — Grit din eur pennad-skrid, hir pe ver, mes eur pennad-skrid diazezet mad evit diskues :

1^o Pegen fur oa Job o lavaret : « Na c'hedit ket vare'hoas evit ober ar pez a c'hellit da ober hirio. »

2^o Ha pegen diskiant oa Jakez oc'h en em rei d'ar vesventi.

Digas ar pennadou skrid d'an aot. Cardinal e Kastel.

Aviel e vuez, eo red deomp anzañ, kousto pe gousto, eo deuet da wire Jezuz holl gomzou ar Brofeted. An testamant kos a zispleg deomp ker freas buez Jezuz ma vicher douget da grede eo bet skrivet goude donedigez Jezuz.

Jezuz eta eo ar Messias gwirion. — Mikeas (V. 2) en doa lavaret « Ha te, Bethleem, Ephrata, n'out ket an distera euz keariou bro Juda, rag ac'hanout e teuio ar Mestr a vleino va fobl Israël. » Ha Jezuz a c'hanas e Bethleem (Maze, II, 6; Iann, VII, 42.)

An Aotrou a lavaras da Abraham. « An holl boblou a vezo benniget en unan euz da ouenn. » (Krouid. XXI.) — Eur profet, Balaam, mab da Vear, a lavar « Eur stereden a deuo euz Jacob, hag eur c'halloud a zavo euz Israël » (Niv. XXIV, 15). Kentadou ar Messias a vezo eta Abraham, Izaac ha Jacob; hag an Aviel a ro deomp penn da benn lignez hor Zalver a zo mab d'ar batriarched-ze. (Maze, I. 2-6. — Lukas III, 31-34)

Jakob araok mervel a lavar. « Ar c'halloud ne deuo ket kuit digant Juda ken na vo deuet an Hini a dlie beza digaset. An holl boblou a c'hortozo anezan. » (Krouid, XLIX, 8-12). — Ar Messias a zo eta euz Juda hag an Aviel hel lavar freas. Maze, I, 3, 16. — Lukas, I, I, 24; — Lizer d'an Hebreed VII, 14).

Ar profet Nathan (II Rouaned, VII, 8-16) a lavar e c'hano ar Messias euz lignez ar roue David; ha dre ma tremene e bro ar Jude hag ar Galile an holl a gane meuleudi da Jezuz mab David (Maze, I, 1, IX, 27, XV, 22; Lukas XVIII, 38-39).

Izaï, ar profet bras, a gemenn e c'hano ar Messias euz eur Werc'hez; ha Jezuz a zo mab d'ar Werc'hez Vari (Maze, I, 18-25; Lukas, I, 27-34).

Ar Messias, a lavar Daniel (chab. II) a deuo var an douar pa vezo bet diskaret teir rouantelez; eur rouantelez aour, unan arc'hant, hag unan arem; eur rouantelez houarn a reno neuze var ar bed: ha pa c'hanas Jezuz ar Romaned o doa peur-astennet o dorn pouner evel houarn ha dir var ar bed holl (Lukas II, 1-4). Ar memes profet (IX, 21-27) a lavar e c'hano ar Messias pa vezo tremenet dek sizun ha tri-ugent a vloaveziou; hag gant Jezuz ar sizunveziou-ze a zo peurachuët bloaz evit bloaz (Maze, XXIV, 15. — Mark, XIII, 14).

Ar profet Agje (II, 1-10) a gemenn e ielo ar Messias en templ savet gant Zorobabel; hag e amzer Jezuz an templ neves a ioa c'hoas en e zav. (Maze, XXIV, 1-2. Mark, XIII, 1)

Levr an Niverou (XXIV, 17) a lavaras e parfe eur stereden lugernus da zonedigez ar Messias. Hag an Aviel sant Vaze a zispleg deomp beach ar Rouaned deuet euz ar Zao-Heol da Vethleem da adori ar Mabik Jezuz (Maze, II, 2, 7-10). Ar rouaned a ginnigfe dezan traou kaer, hag an Aviel a zesq deomp o deus roët e prof aour, louzou a c'huez mat hag ezans.

Daou profet o doa kemennet en diche Jezuz unan da zigas kelou anezan (Izaï X, 4, 3-4; Malachi IV, 3) ha tri avielier, sant Lukas (I, 5-25; 57-80); sant Vaze (XIV, 1-10), sant Mark (I, 4) a lavar deomp eo deuet sant Iann Vadezour diaraok ar Messias da zigaz kelou euz e zone-digez vad.

Oze a gemenn (XI, 1) e vezo red d'ar Messias beva enn harlu enn Ejipt. Ann Avielier sant Vaze (II, 15) a verk penaoz eo deuet ar c'homzou-ze da wir.

Ar Messias, eme Izaï (XI, 1) a stago da brezek war harzou Nephtali ha Zabulon, hag evelse ec'h en em gavas ervez sant Vaze (IV, 13-15).

Ar Messias, eme ar memes profet (XXXV, 4-10) a dlie para an dud dall, an dud mac'hagniet, an dud lor, an dud mud ha bouzar, an holl glenvejou ken euz ar c'horf, ken euz an ene. Lennit Aviel sant Iann (XI, 18), hini sant Vaze (XI, 5); lavaret a reot difazi en doa Kaïfas gwir da anzañ dirak al lezvarn e rea Jezuz kement a vuzudou niverus ha souezus ma oa dare ar bobl da drei a bez gant Jezuz. « An den-ze, emezan, a ra kals miraklou; m'er lezomp c'hoas an holl a gredo dezan. »

Zakari (IX, 9) a wel Jezuz o vont da Jerusalem var eun azenn evit beza digemeret evel eur roue. Da genver ar zul bleuniou setu petra c'hoarvezas. (Maze XXI, 4-5). Ar basion dreist-holl a zo bet displeget kals diaraok gant ar brofeted; n'euz netra er basion glac'haruz-ze ha ne viche ket bet kemennet freas meurbet. David eo a lavar (Psalm XL) e vezo ar Messias gwerzed gant an hini a ioa o preja gantan; Zakari (XI, 12-13) a ro ar priz ma vo gwerzet: tregont peñ arc'hant a vezo taolet d'ar poder;

David (Psalm LXVIII, 21 ; XXXIV, 11) a gomz euz ar fals testou ; Jeremi (XI, 19 e levr an Hirvoudou III, 30) a lavar an taoliou, ar reuziou a gwezo var Oan Doue ; Ezaï a gemenn (LIII, 12) e vezo lakeat Jezuz e mesk an dorfetourien ; David (Psalm XXI ha LXVIII a lavar e vezo toulllet e dreid hag e zaouarn, e vezo niveret e eskern, e vezo rannet e zillad ha tennet plouz berr var e zaë, e vezo roët dezan vestl da zibri ha gwinaigr da eva, e vezo goapeat gant an holl hag e varvo goude poaniou skrijus. Daoust hag ezom am beuz da lakat dirazoc'h ar Basion ervez an Avielerien ? Komzet a zo bet ha n'eo ket hep gwir, euz Aviel Izaï ; kement a zo bet skrivet divar benn ar Messias a zo deuet da wir hag an Aviel hen diskuez deomp e gwirionez « an den a c'hlaç'har » kement meur a gant vloaz diaraok gant ar Profet Izaï. Resurreksion Jezuz, e rouantelez var ar bed holl, a zo bet diouganet ive gant David (Psalm XV ha IX), gant Zakari (IX, 10).

Hor Zalver Jezuz-Krist e-unan a zo bet eur profet : komzet en deuz meur a wech d'e Ebestel euz an amzer da zont ; dizoloet en deuz dezo ar peb vrasa euz kement a c'hoarvezfe gantan. 1° E basion (Maze XVI, 21 ; XVII, 12, XX, 18, 48, XXVI ; — Mark VIII, X, XIV). Lukas IX XXII ; Iann VI, XIII). 2° E varo var ar groaz. 3° E Resurreksion. 4° E Ascension (Iann VI, 63. VII. 34). 5° Donedigez ar Spered-Santel (Lukas XXIV, 49 ; Iann XIV, 16-26). 6° Kement a zelle ouz buez an Iliz (Maze XVI, 18). 7° Jerusalem dismantred a bez (Maze XXIV, 4-14 ; Mark X 14 ; 5-10, Lucas XXI 8-12-20). 8° An templ diskaret (Maze, XXIV, 2 ; Mark, X 11-2 ; Lukas XXI, 6. An holl lavariou-ze a zo deuet da wir.

Respount a hellomp eta da Broudhon : an Testamant neves a zo enn holl d'an holl henvel ouz an Testamant kos ; ema n'eo zoken nemet eun Aviel skrivet a ziaraok a zispleg deomp difazi holl misteriou ar Messias, ha peb tra euz e vuez.

Jezuz hag hen hebken eo ar Messias. — Eur Messias a zo bet kemennet ha gortozet eo bet gant ar bed holl ken gant ar baianed ha gant ar Iuzevien : Skridou sakr ar baianed a ro deomp eun testeni nerzus meurbed e kement-ma. Mar deo het kemennet ha gor-

tozed, — ha red eo deomp er c'hredi, — eun dra ive a zo anat, ar Messias a dlle beza deuet var an douar. Red oa dezan genel en Israël, pobl rannet e meur a boblad ha pep unan er pobladoù-ze a c'helle pignat hed a hed e lignez betek Abraham ; hag ar Messias, m'oarvad, a zo bet red dezan testenia oa euz lignez Abraham. Pa deuas var an douar ar Messias, ar bobl a Israël a ioa renet evit ar relijion hag ar c'houarnamant ervez al lezennou kos ; hogen, anet eo n'ema mui an traou evelse a bell-zo ; rouantelez ar Iuzevien a zo bet diskaret evit mad, ha penaoz he zevel a neves p'eo gwir ar juzevien a zo ama a-hont dre ar bed holl ? D'ar mare ma veve ar Messias an Templ a ioa en e zav, ervez al lezenn e veze digaset d'an templ ar provou ; lignez Aaron a ioa c'hoas lignez ar veleien, ha servichourien an Templ, bugale Levi a ioa c'hoas eur boblad disparti dious ar re all.

Kement-ze holl a baouezas evit atao dizale goude maro Jezuz. Ar Iuzevien a oe roët dezo an urz stris da dec'het diouz Jerusalem ; ar gear-ma a oe dismantret dre urz an impalaer Adrian : ne joumas enni mean var mean hag eur gear neves a oe savet en he leac'h, Allia Capitolina. Unan euz doktoret an Iliz, sant Jerom, en deuz skrivet glac'har ar Iuzevien harluet. « Eur veach bep bloaz, da genver an deiz ma voa distrujet an templ ha kear, e veler ar bobl e kaonv o tont an dristidigez o para var o zal ; ar re gos, goloet a ludu, hag o dillad rannet, a deu da ouela var atrejou an Templ. Ha c'hoas, ma fell ganto chom eun tam a zav, eur soudard didrues a c'houlenn pae hag a ra dezo paëa o daelou. » Abaoue m'eo bet diskaret lignez beleien Israël, abaoue m'eo harluet evit atao ar bobl, ar Messias ne c'hell mui dont, en hevelep doare m'oa bet diskleriet gant ar brofeted. Neuze eo red deomp lavaret unan a zaou : pe ar brofeted ne c'huiet ket petra lavarent hag ar bobl petra c'hortoze ; pe ar Messias a zo deuet var an douar, hag an dra-ma hebken a zo gwir. Hogen piou a c'hello lavaret e tong gant gwirionez an hano a Vessias ? Da biou e tereo gwelloc'h an hano-ze ?

Jezuz a Nazareth hebken a zoug an holl merkou euz ar Messias kemennet gant ar brofeted ; Jezuz hebken eo ar C'hrist, Oan Doue, hen hebken a c'helle beza ar Messias.

Petra deuas sant Iann-Vadezour da ober var douar ar Judee ? Kemenn ha netra ken, oa peurachu amzer ar promesaou. Ne lavar ket hen henvel ouz ar re all « Dont a rei », lavaret a ra « Deuet eo » ; setu Oan Doue, setu an hini a zilamm pec'hejou ar bed ! Iann-Vadezour an diveza euz ar brofeted eo a lavar da genta eo deuet ar Messias ha da genta e kred dezan.

Jezuz eta eo ar Messias gwirion ; hogen ar Messias a zo Doue ha dre-ze Jezuz a zo Doue. — Setu kement a jom da zisplega.

Petra lavar komzou ar brofeted divarbenn ar Messias ? — Lavaret a reont en deuz eur brasder, eur c'halloud ha ne zere ket da eun den n'euz fors pegen galloudus e c'hell beza. Da behini euz rouaned ar bed-ma eo bet roët kement a vertuziou, kement a zeskadurez hag a furnez ? Pehini euz bugale an dud en deuz prezeget hevelep kelenadurez, en deuz great kement a viraklou ? E pelec'h ema an den brudet en deuz astennet keit ha keit amzer e c'halloud var ar bed holl ? Var c'hed piou eo bet ar bed holl ? — Ha setu goulskoude traou hag a zo bet lavaret euz ar Messias. — M'ar d'e ar Messias nemet eun den henvel ouz an dud all, penaoz e c'helfe an holl boblou digouezout dezan evit lod ervez ar Roue David (Psalm II, 8) ; penaoz e c'helfe trec'hi ar maro (Izaï XXV, 8) ; sevel eul lignez neves a veleien (Malachi, I, 11) ; dont da zougen ar boan dleet da bec'hejou an holl dud (Izaï, L III, 6) ? Daoust hag eun den eo an Hini a c'halv Izaï « Roue ar peoc'h, sklerijenn ar bed holl, Salver ha prener an dud ?

Ouspenn-ze ar Brofeted a lavar a grenn eo Doue ar Messias. David hel lavar « Jehovah en deuz lavaret d'inn « c'hui eo va Mab, hirio am beuz ganet ac'hanoc'h » (Psalm II). Mab Jehovah (Doue) a zo bet gwelet var an « douar, bevët en deuz etouez an dud » a gan Baruk (111-38). Izaï pa gemenn d'ar roue Akaz e c'hano ar Messias en eun doare burzudus euz eur werc'hez dinam, a c'halv ar c'hrouadur-ze « Emmanuel » (da lavaret eo Doue ganeomp), ar c'huzulier bras, an Doue galloudus, tad an eternite (Izaï IX, 6). Mikeas (V, 2-5) a zesk d'ar bobl a Israël eo « ar Messias, ganet e Bethleem ervez reiz an amzeriou, ganet a holl viskoaz gant he Dad e kreiz an eternite ». Erfin, eun hano a zo, hano santel meurbed,

eun hano ha ne c'hell den hen dougen eb beza eul laër hag eun trubard, an hano-ze Izaï ha Jeremi hen roas d'ar Salver a c'hortoze ar bed : hen gervel a reont : *Jehovah, Doue !*

Ia, Jezuz a zo Doue, komzou ar Brofeted hen diskuez sklear deomp ; ha me sonj, eun den a spered eeün, goude beza sellet pis ouz ar Skritur Zakr a lavaro ive evel sant Per « c'hui, Jezuz, eo ar C'hrist, mab Doue leun a vuez ! »

F.-M. MAZÉAS.

(Da genderc'hel).

Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Da betra eo mat ar Relijion

Ar falz-doktor. — N'eo ket ar relijion, tra ! an archerien eo a vir an urz vat er vro.

An Difennour bihan. — Fazi, Aotrou ! Nag a laeron-siou, nag a dorfejou, nag a draou fall great dre-oll hep ma teufe morse an archerien da c'houzout gant piou int bet great ! Nan, Aotrou, ar pez a vir an den en e reiz eo lezen Doue, kredit ac'hanon. Hag el leac'h klask rei da gredi n'ez eus Doue ebet ha ne dalv ar relijion da netra e rafec'h kalz gwelloc'h lakaat ho poan da startaat ar feiz e kalonou ho kenvroiz, evit ma chomo evel-se ar peoc'h hag an urz vat etouez an dud.

Ar falz-doktor. — Evidon-me ne don ket nec'het gant relijion ebet. An dra-ze ne zell ket ouzin.

An Difennour bihan. — Perak ne livirit ket ive : « Me ra foutre eus al lezennou douget er vro ? Me ra foutre eus an dud e karg ? Me fell d'in ober d'am giz ! »

Gouzout a rit eo red mat da bep unan senti oc'h lezennou e vro, ha dioc'h ezom ne vijed ket pell evit hen rei d'eoc'h da glevet. Penaos eta e falvesfe d'eoc'h n'ho pije ket da viret gourc'hemennou a c'houlenn da genta ho toujans hag ho karantez ? Tra Doue oc'h, e vab, ha kement hoc'h eus a deu d'eoc'h eus e berz ; ne c'hellit ket beza gantan evel eun dizleour.

* *

Ouspenn a zo ; lezit ac'hanon da lavaret eo diskiant ho komzou. Pascal eo en deus lavaret : « Diskiant an nep piou bennak a zonje evel-hen : N'ouzon ket piou en deus roet d'in ar vuez, hogen, ha forz a zo ? Ha bez' ez eus eun Doue ? eun ene ? gwirionezou da gredi ? gourc'hemennou da heuilh ? Evidon-me ne ran forz ebet. Mervel a rin ; hogen, n'on ket nec'het ken nebeut gant ar pezh a c'hell beza en tu-all d'ar bez. » Mar komsfe eun den en doare-ze, kaer em eus klask, ne gavan ket an hano a zerefe ouz ar c'hrouadur diboëll-ze ; hag hervez va doare da welet, me lavar eo eun enor bras evit ar relijion e ve red he dispri-jout a-benn dont da veza ken diot hag henez. »

* *

C'houi, kredabl, n'it ket beteg eno. C'houi a zo dizeblant dre gustum, dre wazamant ; n'hoc'h eus ket a relijion hirio abalamour n'ho p'oa ket a relijion na deac'h nag en deziou diaraok. Ha perak n'ho p'oa ket a relijion ? Setu aze ar pezh n'hoc'h eus morse klasket gouzout.

Mezus eo d'eun den honest chom evel-se da voredi, mezusoc'h eo c'hoaz avat d'eun den a galon. Ha klevet hoc'h eus-hu morse eur mab kalonek o fougeal, oc'h embann ez oa dizeblant e kenver e dad, e vamm ? Heuzusoc'h eun tamm brao e-leal, eo beza dizeblant e kenver an Doue en deus roet d'eomp ne lavaran ket eur vad hennak, mes an holl vadou, ar vuez ha kement hon deus. Evit beza eun den evel-se eo red beza lakeat dindan an treid ar skiant vat hag ar zantimanchoù eun a zo e kalon pep den, ha beza deuet da veza evel loened.

* *

Evit kloza ar pennad tabud-ma e livirin gant eur skri-vanier a-bouez eus ar seitegved kanvet :

« Lezomp o diskianterez, o c'homzou dizoue, gant ar re a zo savet fall a-walc'h evit o dislounka, hag heuliomp a-zevri ar gwir relijion mac'h anavezomp anezi, pe poaniomp d'he c'blask mar n'hon deus ket c'hoaz an eurvat d'he anaout. A hendall n'eus nemet displealded ha fol-lentez. »

Ar falz-doktor. — An holl relijionou a zo mat. Hini ebet na lavar ober an droug. Mat eo da bep unan chom er relijion m'eo ganet enni.

An Difennour bihan. — An holl relijionou a zo mat, ya d'an dud hep kreden ha d'an dud diskiant. Evit tud hag a glask ar wirionez, evit tud skiantek, lavaret eo mat an holl relijionou a zo gwall-goms ha koms a-dreuz. Ha lavaret a rafec'h eo *ya* ha *nan* eun hevelep tra ? Mat, eus eun tu e leverer : « N'eus nemet eun Doue hepken, ha ne c'hell ket beza meur a hini. » En tu-all e klevet : « Kement a zo a zoueou evel a loen war an douar, a wezen er c'hoajou hag a stereden en oabl. »

Ar Judeo a zav ive e vouez evit lavaret d'e dro : « Emaon o c'headal ar Zalver a zo bet prometet d'eomp. » Ar c'hristen, hen, a brezeg ar Zalver-ze, Jesus-Krist, maro war ar groaz evit silvidigez ar bed-oll. Ar mahometan a youc'h a-bouez penn : « Doue a zo Doue, hogen Mahomet eo e vrasa profet. » Diskibl Calvin a gred ar pezh a zo nac'het gant eur protestant a Vro-Zaoz ; hag al lutherian, pe diskibl da Luther, ne fell ket d'ezan kredi ar pezh a gred ar « moseovite » ; ar c'hristen katolik a zalc'h tost d'an Iliz hag a bella dioc'h kement a zo eneb d'ezi.

Doue, ar wirionez memes, a ehanfe da veza Doue ma lesfe kemeska ar sklerijen-gant an devalijen, ar wirionez gant ar gaou.

Lavaret a rit n'ez eus relijion ebet hag a c'hourc'hemenfe ober an droug. Mat, sellit, e lezennou ar relijionou e kavomp kement a gemm evel a zo en o c'hredennou.

Lod a lavar : « Ar pec'hed eo ar brasa droug ; diouallit da goueza ennan. » Lod-all e flear kredi start ha pec'hi kement ha ma c'heller : *peccate fortiter*. (Kredennou diskibien Luther).

Ar c'hristen a lavar : Karit Doue dreist pep tra hag ho nesa evel doc'h hoc'h-unan. Ar Yuzeo, en eneb, a c'houlen lagad evit lagad, dant evit dant. Ama eo eun torfed laërez ; e leac'h-all, eun dra da veza meulet. En eur relijion eo difennet grons en em rei d'ar pec'hed eneb ar c'hoec'hved hag an naved gourc'hemen a Zoue, ar pec'hed vil, e leac'h-all e reer eun doue anezan.

Eus eun tu e c'hourc'hemenner kaout doujans evit an

dud dinerz, evit ar yaouankiz hag ar re goz ; eus eun tu all e c'hourc'hemenner lakaat d'ar maro an dud mac'ha-gnet hag ar vugale fallik, pe da viret an dud dioc'h reuziou ar gosni o rei d'ezo houarn pe gontam (poezoun).

Doue, ar zantelez dispar, ne vije mui Doue ma lesfe evel-se kemmeska ar gaou gant ar wirionez, ma vije kel laouen oc'h ar siou fall evel ma 'z eo oc'h ar plegou mat, oc'h an drugarez evel oc'h ar gasoni hag ar venjans, oc'h an aluzen evel oc'h al laeroni, oc'h an hudurnez evel oc'h ar gwerc'hded, oc'h ar grisder evel oc'h ar garantez.

Selaouit ar pezh a lavar war gement-se an dizoue Rousseau, ha neuze, ho tourn war ho kalon, mar klevit eur vouez bennak o tregerni enni, mar kredit hen ober, livirit d'in eo mat an holl relijionou.

« Pe ez eus eur wirionez, pe n'ez eus ket, petra ra ze d'it ? p'eo gwir n'eo ket great evidout. Eun dever eo d'it senti hep digarez oc'h an holl sklankerien a deuio da hopal d'it e teuont a-berz Doue. Karet a dleez ar gaou a ziskleriont d'it, n'eus fors peger bras e ve ; ha n'eus fors pe relijion a brezegint d'it e tleez he heulia a-greiz kalon. Ha ganet oud-te en eur vro zivadez ? Pleg da c'hlin dirak doueou da vro, kinnig ezans da Jupiter, da Varz, da Briap ha da Venuz. En Ejipt ec'h enori evel doueou ar c'hazarded sakr hag an ejen Apiz ; e bro ar Fenisianed e kinnigi da vugaligou e sakrifis d'an doue Molok ; er Mexik e kemerer da armou evit tapa an dud az pezo da ginnig d'ar falz-doue heuzus a enorer er vro-ze ; e leac'h all ez i d'an daoulin hag e stoui izel dirak trojen eur wezen, dirak mein, plant, relegou loened, loustoniou chomet e dilerc'h ar maro. Daoust ha ganet oud e Konstantinopl ? Neuze e lavari : « Doue a zo Doue, ha Mahomet eo e brofed brasa. » Pa vezi e Rom e ri fae war ar Mahomet-se, hag e lavari zoken eo eun toueller. » (Yann Jakez Rousseau).

KLAODA 'R PRAT.



DIVARBEN ar SKOLIQU

Geier a leveront ar re a lavar n'oa ket a dud desket araog ar Revolution, var ar mæziou koulz hag er c'heariou.

(Kendalc'h)

Na deomp ket da zrouk-prezeg hon tadou koz, da lavaret oant tud diskiant, ne c'houient ober netra. Ar Frans, evel ma lavaremp, a zo brudet pell zo dre bevar c'horn ar bed. He iez, ar gallek a zo skignet e pebleac'h abalamour d'an traou kaer a zo bet skrivet en hor bro. Ha n'e ket deac'h eo bet skrivet an traou-ze, mez abaoe 200, 300 vloaz hag ouспен, skrivanierien Frans a zo anavezet ha meulet en oll broiou. Guersiou troet brao, kanaouennou euz an dibab, skridou divarben an traou kaer great gant Charlemagn, sant Lois hag ar re all, pesiou c'hoari, lod da lakat an dud da lenva, ken truezuz int, lod all d'o laka da c'hoarzin, fablennou ha n'ouzoun ket petra all, setu petra gaver e iez ar Frans abaoe tost da vil bloaz. Hag abaoe ar pemzekved kantved, abaoe m'eo bet kavet an dro da voulla al levriou, ne c'helfe den niveri an oll levriou skrivet e gallek ; hag el levriou-ze e kaver traou souezuz, traou kaeroc'h eget ar pezh a vez skrivet hirio gant an dud desketa euz hon amzer.

Evelato epad ar zeitekved kantved, e amzer ar roue Louis XIV, eo bet ar skrivanierien brudeta er Frans : skrivet o deuz traou ken kaer hag ar re gaera euz n'ez forz peb bro all.

Kement hini a zo bet er skol a anavez La Fontaine hag ar fablennou en deuz great. Evit ar fablennou ne zeuz e neb leac'h hini ebet da dalvezout La Fontaine. Nag a vuez er fablennou-ze ! Nag a spered en doa La Fontaine ! Lennet ho peuz meur a hini euz he fablennou : ar vran hag al louarn, ar bleiz hag ar c'hi, ar gueneli hag al laboused bihan, ar bleiz hag an danvad, ar miliner, he vab hag an azen, al louarn hag ar bouc'h, an anevaled klav gant ar vosen, etc., etc. Na pegen brao int troet !

Na pegen brao eo renket ar gerioù ! Setu ase unan hag a anavezé mad an dud ! Anevalet a laka da gaozeal, guir eo, mez dre c'hinou an anevaled e ro d'an dud kentelioù fur hag e tesk dezó taoler evez, rak var an douar é zeuz kalz o klask ato troumpla ho nessa.

Corneille, Racine, Molière o deuz great pesiou-c'hoari : an daou genta a ziskuez deomp peurliesá traou skrijuz, traou truezuz a ra deomp beza spountet, a ra deomp lenva ; Molière a laka ac'hanomp da c'hoarzin oc'h ober goap euz plegou fall an dud. Eun dudi eo lenn ar skridou, eun dudi guelet c'hoari ar pesiou-ze var an theatr.

Eur skrivanier all dispar, daoust ma zeo maro iaouank, da 39 vloaz, eo Pascal : he skridou a zo en eur gallek iac'h, freaz, nerzuz hag an traou a zo enno a laka Pascal e renk ar sperejou huella a zo bet var an douar.

Bossuet, eskop Meaux ; Fenelon, arc'heskop Cambrai ; Bourdaloue, jesuist ; Massillon, eskob Clermont ; Fléchier, eskob Nimes, o deuz lezet ganeomp skridou, prezegennoù kaer kenan. Evelato ar guella oa Bossuet : n'en deuz ket marteze he bar var an douar da brezeg, Chateaubriand a ioa eun deiz o lenn ar brezegen gaer a reaz Bossuet goude maro Conde : « Kement oan skoet, a lavar Chateaubriand, ma teuaz an dañlou em daoulagad ha ma kuezaz al levr euz va daouarn. » Bossuet a c'houie a zindan evor kement tra a zo er Skritur Sakr, kement o deuz lavaret an Tadou Santel euz an Iliz. Souezet omp o velet penaoz en deuz gellét eun den ober kement a labour vad : eur mestr oa da brezeg, eur mestr oa ivez da skriva.

Evit diskuez petra dal ar skrivanierien euz ar zeitekvek kantved, ne zeuz nemed guelet petra vez great er skolioù. Roet e vez d'ar vugale, d'an dud iaouank ar skridou-ze da zeski. Lavaret e vez dezo : « Setu ase traou a zo mad evit kaeraat, pinvidikaat ho spered ; lakit an traou-ze en ho penn ; lennit anezo eb skuiza ; enno e kavoc'h gallek iac'h, kentelioù euz ar re vella. Rak, ouspen ma c'houient skriva, oa c'hoaz eun o spered, iac'h o c'haloun, ha nebeud anezo o deuz kaillaret o fluen o skriva traou udur. Ia sperejou braz a zo bet en hor bro araok ar Revolution. Hag ar re-ze a ra enor d'ar Frans. Na deomp ket eta d'ober fae varno.

Etouez an dud var ar meaz e zoa nebeutoc'h a zeska-

durez eget breman, rak nebeutoc'h a ioa a skolioù. Evelato ar veleien, ar venec'h a rene kals skolioù ha skolachou. Setu aman ar reolennoù merket d'ar veleien gant eskob Kemper er bloaz 1710. « C'hoant hon deuz da velet adarre sevel ar skolioù bihan er c'hearioù hag er parresioù euz hon eskobti, dreist-oll evit ar re baour. Evit se e kemennomp karga da ober skol ar veleien iaouank ; ma n'o devije ket c'hoant da ober skol, ne c'helfent ket kaout eur garg huelloc'h. Er skolioù-ze e vezo great katekismoù eur veach bemdez, e vezo desket lenn, skriva, respount d'an oferen. E leac'h ma vezo gellét kaout mistri ha mestrezed skol, e pedomp an dudchentiloù hag an dud fidel d'o zikour guella ma c'hellint. »

Ar skolioù-ze a zo bet sarret epad ar Revolution. Ha goude ar Revolution e zeuz tremenet eur pennad mad a amzer araok ma zeuz bet a nevez digoret skolioù er parresioù bihan.

Hon tadou koz var ar meaz a c'houie, kalz aneso, lenn ha skriva. Ar peb brasa a c'houie sina ho hano, lenn el leorioù brezounek ; lenn an Aviel, leor an oferen. Bez e zoant tud a zoujans Doue, tud fur, tud leal, tud a urz vad, e leac'h breman, siouaz ! etouez an dud a zo bet avechou er skol, petra veler re aliez ? Pennou skanv, tud leun a lorc'h, a gav dezo ne zeuz nemeto o c'houzout eun dra benag, a ra fae var gement hini n'eo ket henvel outo. Sellit piz ouz o buez. Penaoz e yevont ? Re aliez eb feiz na reiz. Guelloc'h e vije evito kaout nebeutoc'h a zeska-durez ha muioù a furnez.

J. U.

HISTOR BREIZ

Stad ar Vretoned er pevare kantved

Ar vro-man — hel lavaret am eus c'hoaz — n'eo ket bet a holl-viskoaz he hano Breiz-Izel. Breman zo pemzek kant vloaz na veze great nemet an Arvor anezi

Ar Vretoned a oa neuze o chom uhelloc'h varzu an hanter-noz, en eun enezen vras hag a c'halvomp hirio Bro-Zaoz.

Di eo e rankimp mont en dro-man d'o c'hask evit ober anaoudegez ganto ha beza test eus ar brezellou garo a deuas a-benn d'o distruja pe d'o banna kuit eus o bro.

Abaoue hanter ar pevare kanved tri skourrad tud gouez a yoa dalc'hat oc'h heskina *Enez Vreiz*; ar c'henta, ar *Skosed*, a yoa skignet en eun enezennig all e kichen (enezen Iverzon), hag ive e gorre Enez Vreiz; skoaz ha skoaz gant an eil rummad gouezidi, ar *Pikted*; erfin an trede, a anavezomp eur pennadig 'zo, mignoned koz int d'eomp : sonj ho peus eus an amprevaned divalo a deuas da zismantri an Arvor, ar *Zaozon* milliget.

Ar re-ze tout eo a ziskenne eur vech an amzer da ober skrab e bro ar *Vreiziz*.

Er penn kenta ar *Vretoned* a zalc'has braoik aoualc'h penn d'o enebourien; mes goasa 'zo, neubeut ec'h en em glevent ken etrezo. Ingalet oant ouspenn etre mil rummad, hag hini eus ar rummadou-ze ne c'houlenne plega d'eun all.

En eun tiegez pa fell gant pep hini eus ar vugale kas an traou en dro hervez e faltazi hag ober e renkou e giz ma tro en e benn, na vez ket pell ar stal evit mont da stalig hag ar stalig da netra.

É Breiz pep rumm a c'hoantea ober e vestr, ha padal e vijent deuet holl da veza sklavourien, panefe ma plijas gant ar Romaned — eur bobl estren — dont da gas al laer er meaz eus o zi; hag ar gouezidi a rankas, da vihana evit eur vech, mont da c'houleta adrenv kein ar mogerioù ledan a oe savet a dreuz an *Enez* da gaeat outo.

Mes kerkent ha troet o zeulioù gant ar Romaned, setu adarre va laboused donv oc'h astenn o geuch dreist ar gaeel ha dao a vanden var douarou Breiz. Ar *Vretoned* keiz na c'houient mui ouz peseurt sant en em erbedi, pa deurvezas gant Doue kemenn d'ezo eun difennour ha n'edont ket, a dra zur, kalz var c'hed anezan. Mar plij, eun eskob an hini oa.

Ar feiz kristen a yoa bet hadet dre *Enez Vreiz* vardro ar bloavez 200, ha divar neuze an haden na reas nemet kreski hag en em leda heb kalz a ziez. Mes zoken er guella parkeier e tiouan an draog e mesk an hed yac'h, ha var an neata leurioù e vez red avechou dispartia al lostennachou diouz ar greun mat. Setu ar pezh a c'hoarvezas er vro-man.

Dre c'hoaskou ar feiz yac'h e oa gullet o tifoucha o friou, evel aered viber etouez ar peuri glas, eun touladig falz kredennou hag o devoa ioul var o meno da flemma yut pe zoken da vouga ar re vat. Gwall c'hoari a ranke ehestel ar virionez evit stanka o genou da haderien ar gaou. Ar re-man a c'houie trei flour o c'hrampoezen. Beleien Breiz, savet beac'h varno, a strinkas eur c'halvaden glemmus etrezek Hon Tad Santel ar Pab. Ha setu tad ar gristenien digas d'ezo daou eskob a Vro-C'hall, gouizieq ha santel : sant Jermen ha sant Bleiz.

Unan anezo dreist-holl, sant Jermen, a zizoloas ker brao ardou an heretiked, ma krogas mez enno, ha ma rankjont mont da guzat, o lost en o garbeden.

A greiz pep kreiz e sailhas ar *Zaozon* var douarou ar *Vretoned*. Kerkent ar re-man, na petra ta, a zavas eun arme evit o c'has kuit. Sant Jermen, bet kapiten guechall, n'en doa ket c'hoaz ankounac'heat e vicher goz. Setu hen ha klask an tu da rei ar viktor d'ar *Vretoned* heb skuilh berad goad ebet. En em lakât a reas er penn araok eus o arme, en eur rei d'ar zoudarded urz da youc'hal evel dan, kerkent ha ma vije gullet an enebourien o tostât. Ar *Zaozon* hag o c'hamaladed, o veza en em ziskouezet var eun dorgenn, ar zant a grias a bouez penn : « *Alleluia ! alleluia !!* » Rak an dra-man a yoa en amzer Fask. Kerkent ar *Vretoned* a zirollas da grial evel dan : « *Alleluia ! alleluia !!* » Hekleo ar menez a gasas ar griaden penn-da-benn d'an draonien gant eun trouz estlammus, hag an enebourien spountet a gemeras holl an teac'h en eur lezel o armou var o lerc'h (430).

Pemzek vloaz goude viktor an *alleluia*, e teuas tro ar *Pikted* hag ar *Skosed*. Ar re-man, gant aoun da jom berr gant ar *Zaozon* var boent ar grisder, a en em daolas, evel tud pennfollet, da ziskar ha da zistruja kement vil vad a gavchont var o hent. Neuze ar *Vreiziz* kroget enno an dizesper, a droas eur vech c'hoaz etrezek Rom, hag er bloaz 446 e touchont dirak ar gouarnour Aesius ar glemmaden glac'harus-man : « Ar gouezidi hor poulz varzu ar mor hag ar mor varzu ar gouezidi. Ne jom mui ganeomp nemet an dibab etre daou seurt maro : beza lac'het pe lammat er mor. »

Rom, beac'h d'ezi he-unan chom en he zav d'ar c'houlz-

ze, a reas skouarn vouzar. Hag ar Vretoned keiz, dirollet varno ar gernez c'hoaz ouspenn, a en em daolas evel tud egaret var o enebourien, hag o flastras...

Neuze e oe peoc'h eur pennad, oh ! eur pennadig... Rak heb dale ec'h en em skignas dre ar vro ar c'helou doanuis edo adarre ar Skosed hag o mignoned divergont oc'h en em bourchas da zailha ar c'henta 'r guella var o amezeien. Eus eun tu all, eur c'hlenved spegus a zirollas var ar vro, hag a reas kement a reuz ma ne oe kavet mu' auale'h a dud veo evit sebelia ar re varo.

Neuze ar pennou bras er vro, kroget ar spont en ho c'hroc'hen, a en em vodas holl asamblez, hag a gargas unan eus o zouez, e hano Vortigern, da gregi er stur. Goudeze e oe diviz bras evit gouzout penaos kaout penn an dro da zieubi ar vro dioc'h an daonejou a deue ken aliez all d'he gwasta.

Mes an diviz en devoe eur fin fall devet. Kement all a rouaned, a bennou-bro hag a vrezellourien, stag eur c'hleze gant pep hini anezo ouz e gostez, n'eo ket var dremm o c'hlezeou, n'eo ket var nerz o diouvreach, n'eo ket var unvaniez o c'halonou eo e konjont evit rei frankiz d'o mam-bro ; var an estren an hini eo. Ma n'eo ket mantrus ! Eul louarn bennak en doa roet d'ezo da gredi oa eun dra eus ar re finna, evit kaout an treac'h, lakat o enebourien d'en em zrailha etrezo. Ha setu ma oe galvet ar Zaozon en Enez, ha kinniget d'ezo aour hag arc'hant, forz pegement, mar karjent divouenna da vad ar Piktet hag ar Skosed.

Ma rankit lakat divroidi da ziuall ho peadra a enep al laer, abred, abred emoc'h e riskl da velet an diouallerien o tont d'ober o mistri en ho ti.

Setu siousaz ! petra c'hoarvezas gant ar Vretoned. Er vech kenta e velimp e pe zoare e teuas kement-se da vir.

AN TOUR-GUEN.



Eul lizer d'ar Verc'hez

Eus an histor-man, c'hui gredo ar pez a geroc'h. N'em eus great nemet her c'hlevet ha ker brao em eus her c'havet ma fell ganen her c'honta deoc'h.

Yannik hen devoa lakeat en e benn skriva eul lizer d'ar Verc'hez ; n'oa ket bet ar c'henta o kaout eur sonj evel ennez ; n'en devoa ket hen lennet nag er skridou koz nag er skridou nevez rag ne ouie ket lenn, mes klevet en devoa her c'honta, hag evel ma c'hoarves gant an holl, eun taol a skoas an histor-ze en e galon.

Yannik en devoa c'huec'h vioaz ; eur pennad bleo melen, avoalc'h evit tei o fennou da ziou intron vras ; daoulagat glaz a c'hoarze c'hoas avechou dezo da veza dija skuillet kement a zaelou ; — eun habit e truillou mad d'ar pillaouaer, eur boutou lér diseul, eur votez bet da eur paotrik hag eun all da eur verc'h, o diou toull tu ha tu. Er boutou-ze ar paotrik en devoa riou ha naoun, rag edot ekreiz ar goanv ha n'en devoa ket debret eur c'hrizien abaoue tremen peder heur var 'n ugent.

Ne ouie petra da ober pa deuas en e spered skriva eul lizer d'ar Verc'hez.

Mes penaos ober ? Yannik ne ouie ket muic'h skriva eget na ouie lenn. Setu ma teuas da zonz dezan ez oa demdost eur skrivancier hag a rea al labour-ze evit an dud dizesk. Ar skrivancier oa eur zoudard koz ginet, oh, ia ! ginet, mes kalon vad. N'oa ket devot ; ah ! nom de nom, nan ! Daoust da ze n'oa ket eur goall gristen. Ker-kent sonjet, setu great.

Dre ar gwer tenval, duet ma 'z oant gant ar maged butun, Yannik a velas anezan o fumi e gorniad da c'hedal ar pratikou.

Hag hen en ti :

— Deiz mad deoc'h, emezan ! Evit eul lizer oun deuet.

— Dek gwennek eo, eme ar Bonniec koz. (Bonniec oa e hano d'ar skrivancier).

Yannik ne dennas ket e voned, rag n'en devoa hini ebet ; mes lavaret a reas ken seven ha tra :

— Neuze, iskuzit ganen.

Hag e tigoras an nor evit mont kuit. Mes ar Bonniec en doa kavet doare vad dezan hag a c'houlennas digantan :

— Te 'zo mab d'eur zoudard, marmouz ?

— N'oun ket, a respontas Yannik. N'em eus nemed va mamm ; va zad zo maro.

— Ha da dad n'eo ket bet soudard ?

— N'ouzon ket.

— Mad ! Ha ne peus ket dek gwennek ?

— Oh ! n'em eus gwennek ebet an holl.

— Ha da vamm n'e deus ket muioc'h ; an dra-zê zo anet dious da zoare. Eul lizer da c'houlenn peadra da ober eur banne souben eo, n'eo ket 'ta, va bihanig ?

— Ia, just, eme ar paotr, lentik.

— Tosta aman ; evit dek linen hag eun hanter feillen baper ne vezin ket paouroc'h.

Yannik a zentas. Ar zoudard koz a glaskaz e baper, a zoubas e bluen el liou hag en em lakeas e stum da skriva :

— D'an aotrou...? pe hano en deus an aotrou, va mignoun ?

— Pe seurt aotrou ? eme Yannik.

— Mes an aotrou ma c'hoantes skriva evit kaout eun dra benag digantan.

Yannik a gomprenas hag a ruzias.

— N'eo ket eun aotrou eo.

— Ah, bah ! eun intron neuze ?

— Ia... nan... da lavaret eo...

— Nom de nom ! a lavaras ar Bonniec. Ne ouzot ket soken da biou e peus c'hoant skriva.

— Oh, eo ! a lavaras ar c'hrouadur.

— Lavar 'ta neuze hag hast affo.

Yannik oa breman ruz-glaou. N'eo ket souez ; n'eo ket eas en em erbedi ous an estren evit liziri en doare-zê. Mes setu hen ha dastum e dammik kalon ha lavaret :

— D'ar Verc'hez Vari eo e c'hoantan kas eul lizer.

Ar Bonniec koz ne c'hoarzas ket ; mes lezel a reas e bluen ha tenna a reas e gorn eus e c'hinou :

— Marmouz ! emezan, gant eun ear rust, n'emaout ket o klask ober goap eus eur zoudard koz, me zonz. Re vihan out evit ma skofen ganez. Alo ! tro da zeulioù ha kers er meaz da velet ha me zo var ar ru !

Yannik a zentas dioc'htu hag a droas e zeulioù ; seulioù e dreid a lavaran, rag e voutou n'o doa seul ebet.

O velet anezan ken dousik, ar Bonniec a zellas er vechman pisol'h c'hoas outan.

— Nom de nom de nom ! emezan en eur c'hrosmolat etre e zent. Nag a vizer er c'hos Paris-man ! Pe hano, az peus, va bihanig ?

— Yan.

— Yan petra ?

— Yan hebken.

Ar zoudard koz keaz a zantas e zaoulagad o c'hlepia ; hag e savas e ziouskoaz.

— Ha petra az poa c'hoant da lavaret d'ar Verc'hez ?

— C'hoant em boa da lavaret dezi eo kousket va mamm abaoe deac'h peder heur, ha pedi anezi d'hen dihuna, ma ve he madelez. Me, ne c'hellan ket.

Kalon ar Bonniec a yeas bihan ; aoun en devoa da gompren, ha koulskoude e c'houlennas :

— Ha perak e komzes a souben bremaik ?

— Perak ? eme ar c'hrouadur ; ah fei ! ezom 'zo, sûr. Araog kousket, va mamm e doa roet din an tamm bara diveza.

— Hag hi, petra e doa debret ?

— Abaoe daou zvez he lavare n'e doa ket a naoun.

— Ha penaos e peus great pa peus esseat dihun anezi ?

— Oh ! evel atao ; briatet em eus anezi.

— Hag he tenne e halan ?

Eur muze'hoarz a zavas var muzelloù ar paotr ; hag ar muze'hoarz-se a rea anezan evel eun c'elig da velet.

— Ne ouzon ket, emezan. Daoust ha ne denner ket an kalan atao ?

Ar paour-keaz Bonniec koz a droas e benn, rag an dour a zifruke, en despet dezan, eus e zaoulagat. Ne respontas ket da c'houlenn ar bugel, mes e vouez a grene eun tammik o lavaret :

— Pa 'peus briatet anezi, daoust ha da vamm n'oa ket dishenvel dious ar gwechou all ?

— Eo, eme ar paotrik. Yen-sklas oa he jod ; n'eo ket soues, yen evel m'eo duman.

— Hag e krene, n'eo ket 'ta ?

— Oh ! nan ! ne grene ket, mes kaër oa, kaër ! He

daouarn a oa kroaziet ha gwenn, gwenn-kann. He fenn oa evel koezet adren ar pluok ; he daoulagat a oa gorzigor hag a seblante sellet ous an nenv.

Tra avoalc'h en doa klevet ar Bonniec koz, hag e sonje :

— Me 'm eus bet avi ous an dud pinvidik, me hag a c'hell dibri kement a c'hoantan, eva ar pez a blij d'in. Ha setu aze unan maro gant an naoun ! gant an naoun !

Hag e c'halvas ar c'hrouadurig paour, e lakeas anezan da azeza var e varlenn hag e lavaras dezan goustadik :

— Paour-keas bihanig ! da lizer a zo skrivet, ha kaset, ha digouezet. Ro din an dorn da vont da di da vamm.

— Ia, gant plijadur ; mes perag e ouelit ? a c'houlennas Yannik souezet.

— Me, ne ouelan ket, a respontas ar zoudard koz en eur vriata ar c'hrouadur hag en eur c'hlepa e zivoc'h gant e zaelon ; an dud vrâs ne ouelont ket. Te eo a ya da ouela, paour-keaz mignon ! Dalc'h sonj e karan ac'hanout evel pa vijen bet da dad.

Hag outan e-unan e lavare :

— Eun dra diskiant eo... Ha koulsgoude... Sell, va mab, me 'm eus bet eur vamm ive. Pell zo n'em eus mui anezi ; mes setu ma kav din her gwelet hag he c'hlevet o lavaret din : « Bonniec bez eun den honest hag eur c'hristen mad. » Evit den honest oun bet ; mes eur c'hristen mad ! Siouas ! n'oun ket bet atao.

Hag e savas, ar c'hrouadur gantan etre e zivreac'h.

— Sellit, va mamm ! emezan ; Sellit ! ha bezit laouen. Va c'hamaradet a reio goap ac'hanon ; me, ne ran fors ! D'al leac'h ma 'z out eat, me fell din mont ive hag e tigasid did an œlig-man ; ne yelo mui eus va zi ; rag e lizer daoust ha ma n'eo ket bet skrivet en deus great an taol-man. Roet en deus da heman eun tad, ha din-me eur galon evit e garet evel eur mab.

Aze eman tout an histor. Ne fell ket din ker c'hinnig deoc'h evel eur pezh râl. — Ar vaouez keaz marvet gant an dienez ne oue ket resusitet. Piou oa ? — N'ouzon ket. — Petra oa bet he huez hag he merzerenti ? — Ne ouzon ket muioc'h. Sûr avoalc'h, an aot. Doue en deuz digollet mad anezi en e varados, rag Doue ne les den da veza treac'h dezan e madelez.

Evit Yannik hag e dad mager e c'houzon gwelloc'h. — Beza 'zo breman e Paris eun den, yaouank c'hoas hag a zo ive skrivanier. Mes ne man ket en eur buro tenval evel hini ar Bonniec koz e baeron. Eur skrivanier eo, brudet dre holl, hag an traou a skriv a ves lennet gant ar spe-rejou kaerra.

Gwechall e veze great Yannik anezan.

Hirio an holl a lavar « Aotrou » dezan keit hag ar vreac'h.

Ar Bonniec koz a gendalc'h da goza ha da fumi e gorniad. Eürusoc'h eo breman eget n'eo bet morse. Atao eo eun den honest, mes deuet eo ouspen da veza eur c'hristen mad. Lorc'h 'zo ennan gant e baotr bihan evel ma kendalc'h da lavaret. Hen e-unan eo en deus kontet an histor-man hag e lavare en eur achui :

« N'ouzon ket piou eo ar faktour a gas ar seurt lizirize ; mes atao e tigouezont en o adres. »

— Tennet eus al levr gallek : *Autour du bon Curé* ha lakeat e brezonek gant F. K.

FURNEZ BREIZ

Didalvez eo ha koll amzer
Deski ar mad eb en ober.

Ober vad pa c'helli,
Droug a ri pa gari.

Kalonek a drec'h peb tra.

Eb stourm ne vezer ket treac'h.

Red eo neun pe veuzi.

N'euz den ebet var an douar
Na gav en eun tu benag he bar.

N'e ket ar c'hezec braz a gas ar c'herc'h d'ar marc'had

An hini a vale eün a gav atao ledan ar streat.

Ne ket eur guenneli a ra an hanv
Nag eur bar-avel ar goanv.

Al lestr ne zent ket ouz ar stur
Ouz ar garrek a zento sur.

Guelloc'h eo beza ar bleiz eget beza debret gantan.

Danvad kaillaret, peurvuia,
Ouz ar re all a glask em frota.

Daou louarn kam a zo treac'h d'unan eün.

*An neb a jom er ger diouz an noz
A vez divlam antronoz.*

Gouel ar Bleun-Brug

Ar gouel a zo bet kaeroc'h er blâ-man eget er bloaveziou all, rag an amzer a zo bet a du ganeomp. N'oa ket a heol mes n'etis ket bet a c'hlaou ken nebeut. Doue ra vezo meulet !

En dro da Gergrist, patronaj savet gant an aot. Perrot evit Sant-Nougaiz, an drapoïou a bep liou, rus, glaz, gwenn a hij laouën en avel. An theatr a zo great er meaz ha klozet, tu ha tu, gant plench ha linzeriou gwenn. Var ar linzeriou-ze, abaoue ar mintin, merc'hed yaouank ar barrez, seder o fenn, skanv o zroad a deu, a ya, kochadou spillou ganto o staga bleun-bruk ha glasvez. Bremañk e redint d'ar bourk da gerc'hat leaz, krampoez, bara, amann, kouignou, bier, limonad ha tra ha bep tra da zervicha d'an dud. Tud a galoun 'zo vardro Sant-Nouga. Henor dezo ha d'o beleien !

Kerkent hag 8 heur pe 8 1/2, ar goeturiou a bep seurt, ar c'hezec-houarn hag ar c'hirri dre dan a gomans fro-

mal var an hent. N'eus distag ebet ; ha beteg eun heur pe ziw heur goude kreiz-deiz e kendalc'ho an dont mont.

Da 9 heur hanter, eun tri pe pevar c'hant den a zo dija en em gavet, kals deuet eus a bell, eus Goeled-Leon kouls hag eus Leon-Uhel, eus Plouguin ha Lanrivoare kouls hag eus Guiklan ha Sant-Thegonek. Prest eo an traou evit konferans an aot. Madec, kure e Relek-Kerhuon.

N'o deus ket kollet o foan ar re 'zo deuet da genta, rag an aot. Madec a zo eur prezeger dispar. Didalvez eo din ober e veuleudi ; anavezet eo dre holl evit e brezegen-nou var an « emgleviou an tadou a familh. » Evit paotred yaouank ar Bleun-Brug, an-aot. Madec en deus adarre aozet eur pred dispar... evit maga o sperejou. Ar spered, kouls hag ar c'horf en deus ezom eus e vagadurez. Aman an daol a zo servichet mad ha founnus. E brezonek yac'h e komzo (rag ar gouel a zo eur gouel brezoneg) dezan da veza kals boasoc'h eus ar gallek.

Ne c'hellan rei nemet eun tanva eus e brezegen.

« Ar patronachou a zo hirio eun dra, kouls lavaret red e peb leac'h. » Ma vefe roet din da zibab, evit eur barrez n'e deus na skol nag ilis, etre eur skol gristen hag eun iliz, a lavar an aot. Touchet, eskop Orleans, e raffen da genta eur skol ; rag da betra eun iliz, ma chom goulo. Er skol eo e ves desket hent an iliz. »

Ar patronach a gendalc'h ar skol ; hebdan, ar c'henteliou bet er c'hatekiz a vezo buhan ankounac'heat. Pa vezer deuet eus ar skol, eo e kemerer ar plegou mad pe fall. Neuze eta eo red deomp pleustri evit diouall ar yaouankiz ha trei anezo var ar mad. Mes penaos en ober heb eur patronach ? Ar yaouankiz a inou buhan gant ar c'hestionou uhel, n'eus ket da c'hoarzin ganto ; ma ne ves desket an traou-ze dezo nemet dre zarmoniou en iliz, e selaouint gant eur skouarn, ha gant eben...

Er patronach n'en em inouer ket. Eno ar galennadurez hag ar c'hoariou a zo unanet ker brao ma tesker en eur c'hoari ha ma c'hoarier en eur zeski : eno an holl a zo kelennerien ha kelennet.

— Eno e vez kavet ar c'hoariou a ra vad d'ar c'horf en eur rei dudi d'ar spered : boulou, killou, peziou galoch, dominoïou ha traou all.

— Eno e vez desket kana traou mad, soniou drant ha laouen, ha n'ouzon ket perag ne ve ket desket soken kân an ilis, ar *Gloria*, ar *Gredo*, hag an traou a vez da gana hep sul.

— Eno e ves desket c'hoari gant ar muzikou (les fanfares).

— Eno e ves soupleet ha nerzet an izili (sociétés de gymnastique).

— Eno e ves desket tenna eün ha dress gant ar fuzulioù (Sociétés de tir).

— Eno e ves desket ar vicher a zoudard. Divezatoc'h pa 'z aïnt d'an arme, an dud yaouank-ze ne vezint ket laoniet evit heuil o c'hamaradet kosoc'h. N'o d'ezo poan ebet.

Ar spered hag ar galon a gavo ive eno o magadurez.

— Eno e kavint levriou mad.

— Eno e klevint hag e teskint ober o-unan prezegenou evit krenfât o feiz, evit hen miret, hen difenn a enep ar fals doktoret ; eno ec'h en em breparint da herzel ouz ar stourmajou a zo ous o gedal ; eno e vezo lardet o zeod da gas an dors d'ar gear d'an trabaserien a glaskfe o heskinat.

— Eno e teskint difenn o gwiriou, difenn o liberte hag o frankiz en eur respeti hini ar re all ; eno e teuint da veza sitoyaned hag a ouezo divezatoc'h petra da ober deiz ar votadegou evit miret gwiriou o c'houstians, gwiriou o feiz ha mad ar vro.

— Eno e vezo desket dezo en em unani etrezo evit sevel emglevioù da vellât o stad hag herzel ous ar c'hollou ; eno e vezo desket dezo petra eo ar *Mutualité* ; peger talvoudus eo ar *Mutuelle-Bétail*, ar *Mutuelle-Incendie* ; petra eo ar c'hefiou assurans.

D'an dud da veza alies dall ha bouzar, n'int ket bet dall awalc'h evit chom heb anzav pegen talvoudus eo eur patronach en eur barrez. Rag-ze an niver anezo a ya var stankât. Breman ez eus eun nebeut bloaveziou n'oa a batronajou nemet er c'heariou ; emaint deuet ive var ar mæziou. Var 25 a oa breman ez eus daou vloas, ez eus hirio an hanter muoc'h. Netra nemet er c'haster-man, ec'h anavezan pemp pe c'huoc'h nevez savet : Sant-Nouga, Plouescat, Mespaul, Plouvorn, Plabennek... me oar-me ! »

Pemp kart heur e padas ar brezegen, ha den ne sonjas tec'het ; re a blijadur a oue ous e c'hlevet. Dale' hmad ar strakadek daouarn a ziskueze d'ar prezeger pegement e oue an holl a-unan gantan.

Da eunneg heur nemet kart e komansa ar c'honkour evit ar ganerien. Paotred Guitevede, Trezelide, Plouvorn, Plouescat, Kastel-Paol, ha pemp pe c'huoc'h strolad all a ziskuezas splann n'eo ket red mont da Paris d'ar C'honservatoire evit deski leun ar brenn gwiniz-du. Me gav din ar maout a zo eat da Vitevede, da Trezelide ha da Gastel. N'oun ket souezet, mistri evel ma zo er barrezioù var ar muzik ha var an c'hân.

NOTA. — *Eus ar pezh a dremenas goude kreiz-deiz, ne c'hellan ket komz hirio rag mall eo din kas d'ar voull al loden am eus skrivet buhana ma c'hallen.*

F. C.



KONKOUR DIVINADENNOU

Problem miz Eost

I. — Ar respont d'ar problem n'oa ket eus ar re æssa. Kalkulioù ha kalkulioù aleiz a oa red ; hag arabat oa fazia varno ; anez-se ar zomm diveza a jennehe buhan var vrasât pe var vihanat aleiz.

— Unan, Emmanuel Bothorel hen deus klasket ha kavet ar respont mad : 7910 fr. 17 e diou feson : dre al « logarithmes » ha dre ar pezh a c'halver « progression géométrique. » Hag a zo mad ; hag a ziskuez eo gouiziekl var an arithmétique.

— Daou all, Jean-Marie Normand hag Yves Corre dre ar progression géométrique hebken. Hag a zo mad ive.

— Unan all, Mari-Ann Habasque deus klasket dre an hent darempredeta hag a zo en em gavet ken disklabez hag ar re all : 7910 lur hag eur gwenneg benag. — An hent he deus heuillet a rankomp da heuil ivez ; rag ne c'hellomp ket displega aman petra eo al « logarithmes », na petra eo ar « progression géométrique » :

1890 1.000 fr.	à 5 % epad eur bloaz	$= \frac{1.000 \times 5}{100} = 50$
1891 2.000 + 50	id.	$= \frac{2.050 \times 5}{100} + 50 = 152.50$
1892 3.000 + 152.50	id.	$= \frac{3.152.50 \times 5}{100} + 152.50 = 310.125$
1893 4.000 + 310.125	id.	$= \frac{4.310.125 \times 5}{100} + 310.125 = 525.63$

Hag evelse, bloaz ha bloaz en eur askoeza 1000 lur hag interest ar bloaz araog.

D'an 29 a viz Gwengolo 1900, hen deuz er bank : 13206 fr. 77.

En devez-ze, e tenn 1000, setu ne jom mui nemet 12206 fr. 71.

1900-1901 12.206.77	à 5 %	$= \frac{12.206.77 \times 5}{100} = 610.338$
1901-1902 11.206.77 + 610.338	id.	$= \frac{11.817.108 \times 5}{100} = 590.855$

Hag evelse, a vloaz da vloaz en eur denna 1000 lur hag en eur askoeza an interest var ar pezh a jom.

D'an 29 a viz Gwengolo 1909, goude an deket mil lur tennet, ne jom mui nemet 7910 fr. 17.

P'e gwir, he varv en devez-se, eme Mari-Ann Habasque ar mil lur diveza a jomo ive gant an heritourien. Hag a zo gwir. Mes, mar kirit, Mari-Ann an arc'hant-ze a vezo lakeat evit herzel ous mizou an anterramant hag ar servichou, hag ar pedennou. N'eo ket re, emichans, evit an heritourien.

O deus kavet mat ar problem :

1. — Emmanuel Bothorel, Loc-Melard.
2. — Jean-Mari Normand, Guiclan.
3. — Yvon Corre, Kurust-Plouvorn.
4. — Mari-Anna Habasque, Kernilis.

Alain Jézéquel, Plouvorn en deus digaset eur respont mat 1910, 17, mes heb kalkul. etet ; n'oa ket tra avoalc'h an dra-ze.

O deus kemeret an doare vad da vont da benn mes a zo bet faziet var ar c'halkulioù : meur a hini all ; mes, gwelloc'h eo ganem chom heb lakat o hanvioù. O bolontez vad a gonto dezo evit ar pris.

KONKOUR AR PENNAD-SKRID BREZONEK

Poaniet 'zo bet ivez kenan gant ar pennad-skrud brezonek, ha deuet eo braoik avoalc'h gant unan benak. — E kement-ze eo red anzav n'eo ket boas ar vugale da skriva en o yez. N'eus ortograf ebet, kouls lavaret, er skridou digaset. Muioc'h mui e velan e ve tremen-mall deomp kaout, er Finister, eun ortograf, ar memez hini evit an holl. Ha peur e c'hoarvezo kement-ze ?

Lakat a ran aman ar skrid gwella am eus kavet. An hini en deus fardet anezan ne fell ket dezan beza hanvet na kemeret pers er c'honkour. Ar c'henta, goude eo :

1. — Yvon Corre.
2. — Mari-Anne Habasque.
3. — Jean-Mari Normand.
4. — Anne-Louise Pouliquen, Plouzeniel.
5. — Nicolas ar Gwen, Touldrezen, Plouzeniel. Emmanuel Bothorel en deuz great e hini e galleg. Meuli a ran anezan evit deski gallek ; mes red eo ive anaout yes hor bro, ha kredi a ran stard, evit eur Breizad galvet da jom en e vro, eo c'hoas ar brezonek an talvoudeka.

DEIZ KOAN AR BEUR-ZORN

Na c'hedit ket varc'hoas da ober ar pezh a c'hellit da ober hirio

Job, perc'hen ar Vereuri-Vras a zo lorc'h ennan da veza bet da genta o peur-zorna.

— Ma vije great diouzin-me, emezan, ne vije den divezat gant e labour.

— Penaos-ta ? eme Jakes ar mevel bras ; eur c'henta hag eun diveza a rank beza atao.

— Beza da ziveza n'eo ket beza re zivezad eo, eme Job. Ha den ne vije re zivezat *ma ne c'hedfe ket varc'hoas da ober ar pezh a c'helle da ober hirio.*

— Mad-tre, eme Jakez, roit d'in ar voutaill gwinaerdant 'zo aze, mac'h achuin anezi hirio.

— Goapât a res, Jakez, eme Job ; mes ar rezon vad ne man ket ganez. Va buez 'zo hir dija, hag en e hed penn da benn, em eus heuillet ar gentel-ze ; atao oun en em gavet mad da veza hen lakeat da dalvoud. Eun alvokad brudet eo hen devoa roet d'in. Klevit an histor ma kirit ; evit netra eman.

Yaouank flamm oan c'hoas ha divalis-kaër pa oue red din var maro va zad kemeret ar stur e penn an tiegezman. — Eun devez m'oan eat da varc'had Montroulez e savas c'hoant ganen mont da glevet eun ali benag gant eun alvokad brudet oa deuet da dremen eun nebeud miziou er gear-ze. Tud aleiz oa en e gabinet o c'hedal o zro da veza digemeret gantan. Me gemeras va renk evel ar re all, ha va zro en em gavas abenn eun tri c'hart-heur benag.

An digemer a oue laouen.

— Azezit, den yaouank, emezan. Petra c'hellan da ober evidoc'h ?

— Va Doue, aotrou, m'em eus klevet an holl oc'h ober ho meuleudi evit an aliou mad a roit dezo ; hag o veza deuet d'ar marc'had em eus kavet tro vrag da zont da c'houlen eur guzul benag diganeoc'h.

— Ha var betra, va mignon ? eur prosez benag oc'h eus ?

— N'em eus ket ; ne garan ket ar prosezou.

— Var betra-ta ? Eur partach benag 'zo da ober en ho famill ?

— Oh ! n'ez euz ket. Duman eo boutin an oll draou.

— Eur pezh douar oc'h eus da brena pe da verza ?

— Ken nebeut. N'oun ket pinvidik avoalc'h evit prena leve, na paour avoalc'h evit rankout gwerza ar pezik am eus.

— Mat ! petra 'fell deoc'h neuse ?

— E rofac'h din eun ali mad benag da reizha ervad va buez ha va ziegez. Me zo iaouank, e penn eun tiegez bras ; aleiz a dud en dro din, leac'h din alies da veza nec'het hag e karfen, eus o pers, eur ger benag d'am sklerijenna.

En em lakat a reas da c'hoarzin, hag e-gwirionez, meur a veach abaoue, em eus sonjet hen doa leac'h d'hen ober. Mes, var e du oa, anet.

— Kavet am eus oc'h affer, emezan. Pe hano oc'h eus ?

— Job.

— Pe oad ?

— Trivac'h vloaz.

— Pe seurt micher ?

— Merour.

Hag hen a skriva diou linen var eun tamm paper, plega anezan hag hen rei din.

P'en em gavchon er gear, e mare peder heur goude kreiz-deiz, unan euz ar mevellien a deuas d'am c'haout, da lavaret din :

— Mestr, ar foen zo great ; seac'h eo ha mad da vernia. Digaset e vo d'ar gear, hirio ?

— Varc'hoas e vo abred avoalc'h, a lavaras ar mevel bras.

An amzer a c'hell chench araog varc'hoas, a respontas ar mevel en doa komzet da genta.

Dichek ar mevel bras a droas varzu egile :

— Bes dinec'h, trabaser, an avel 'zo e rout vad.

Me a oa nec'het avoalc'h. Va c'henta mevel a oa droug ennan, anet, ha muioc'h a vije c'hoas ma rankche plega d'ar pezh en doa aliet ar mevel all. Ha me, a sonjal neuse er paper em boa bet digant an alvokad.

— Sell-ta, emeve, marteze e kavin er paper-man peadra evit diluia ar guden. Ne oa ket hir ar pennad da lenn ; ne oa varnan nemet ar c'hrenn-lavar : *Na c'hedit morse varc'hoas evit ober ar pezh a c'hellit da ober hirio.*

— Ah ! emeve, an dra-ze 'zo varnan. Beac'h dioc'htu d'al labour, ar foen d'ar gear.

Ar mevel bras a c'hrosmole ; me a lavaras dezan digant piou em boa bet ar guzul-ze evit hen habaskât. Mes, ne respontas ger ; sevel e ziouskoaz hebken.

Mad em oa great. En noz varlerc'h e teuas eur bårdour spoutus ; ar ster a zio'hlanas hag ar foennou chomet astennet pe soken berniet er prajou a yeas gant an dour, pe a oue ouspen hanter-gollet. E douchen oa pleget d'ar mevel bras.

Abaoue em eus bet leac'h da velet ouspen kant gwech pegen fur oa ali an alvokad ; ha reizet em eus ato va buez divarnan, ha n'eo ket hebken va buez merour, mes ive va buez kristen.

Ha te, Jakez a raffe mad hen ober ivez.

(*Eil loden*). — Edoz o lavaret bremaik : na c'hedomp ket varc'hoas evit peur-derri he fenn ous ar voutaillad odevi.

Gouzout a res dija pegen noazus eo bet an evach evidot. Lakeat out bet gant an tech-se var an douar noas. Ma karjes oas bet eun ozac'h eus ar re genta er barrez ; gwelloc'h komanant a poa eget n'am eus-me : Muioc'h a arc'hant etre da zaouarn eget n'am boa-me p'edon o komans va stal ; da hini goz, eur vaouez a zoare, Doue her pardono, a deue davidot yec'hedus, leun a nerz, leun a gourach, leun a c'hoant beva, hag ous he zerr eur yalc'hadik vad a arc'hant. Hag e peus divoadet da barkeier, distrujet da goajou, dizec'het da brajou, kollet da gomanant evit kaout peadra da eva. Foar zo bet ranket ober varnout kement a zle e poa kemeret e kement hostaliri zo e pevar c'horn ar vro.

— Hag e peus lezet da bried da zizec'ha var e zreid gant an dienez hag an anken, beteg n'oa mui, en da di, eul linser evit hen liena pa deuas ar maro d'hen dilivra. — Hag e peuz lezet da vugale da redet an hentchou, ha da astenn o dorn d'an dud vad evit terri o naoun...

Sell ! Jakez, poan a ra ganen lavaret did gwirionezou ken pounner en deiz hirio. Mes pell 'zo oa an dra-ze o samma va c'halon ; ha tro a peus roet d'in d'hen dizamma ; rag me oar n'eo ket c'hoas maro avoalc'h da galon en da greiz. Rag-se, did-te ivez e lavarin : *na c'hed ket varc'hoas da ober ar pez a c'helles hirio*. Red eo did trei kein a greun d'an odevi. *A greun*, a lavaran. Arabat ez affe mui eur banne eus ar poezon-ze ous da staon. Ha n'eo ket varc'hoas eo komans ; hirio eo, a vremen eo.

Jakez oa pleget e benn gantan. Ne c'hede ket eun distro ken dizamant. Job en doa sanket ar gountel eun en e c'houli ; ha poan en devoa stard. Ne sonjas ket rebarbi goulskoude. Re vir oa, siouas ! Kement a rebeche Job dezan. — Sevel a reas erfin e zaoulagat ; leun zaelou oant.

Mestr, emezan, ar virionez a zo ganeoc'h, dezi da veza bet kalet da glevet. N'oun bet nemet eun digalon. Divar hirio, dirag Doue ha dirazoc'h hen lavaran, birviken banne gwin-ardant na evin.

Derc'hel a raio Jakez d'he bromesa ? Ia ma 'z eo eun den.

EUR C'HASTELLAD.



ROLL AR PRIZIOU

Evit an divinadennou hag ar problemou :

- 1 Yvon-Marie Corre, Kurust, Plouvorn.
Emmanuel Bothorel, Loc-Melard.
Jeann Prigent, Carantec.
- 2 Jean-Marie Normand, Guiclan.
Yvon Lhostis, Plouvian.
Etienne Rest, Plouvian.
Anne-Marie Habasque, Kernilis.
- 3 Isabelle Milin, Plouvian.
François Croguennec, Loc-Éguiner.
- 4 Alain Jézéquel, Plouvorn.
Jean-Louis Cadiou, Sibiril.
Marie-Anne Pinvidic, Guicar.
François-Marie Picot, Plouvorn.
Jean-François Bécam, Guiclan.
Jean-Yvon ar Gwen, Plouvorn.
Jean-Pierre Dantec, Sant-Nouga.
Yvon Dantec, Sant-Nouga.
Anne-Louise Pouliquen, Plouzeniel.
- 5 Jean-Louis Gwenneugès, Plouguin.
Yvon an Deunff, Treffiagat.
- 6 Isidore Bouroullec, Lan-Urvan.
Francine Mao, Sant-Divy.
François-Louis Caroff, Sant-Thegonnec.
Nicolas Gourvennec, Kersaint-Plabennec.
Catherine Billant, Sant-Divy.
Marie-Anne Guillou, Cleder.
Michel Autret, Sant-Thonan.
Louis Messenger, Henvic.
Marie Le Roy, Guisseny.
Jean-Marie Cam, Kersaint-Plabennec.
Hervé Herry, Henvic.



Divinadennou miz Gwengolo

- I. — Va mamm e deus eul linzer vras,
N'eo ket goest d'he flega ;
Va zad eun toullad pezion aour,
N'eo ket goest d'o c'houmpta ;
Va breur en deuz eun dra
N'eo ket goest da zellet outan.

Petra o deus ?

Digaset gant F. Léaustic.

- II. — Tregont tosen var eur dosen
Ha c'hoas n'eo ket eun dosen vras.

- III. — Petra ya var e giz
Da gerc'hat e gevridi ?

- IV. — Petra ya atao
Var e benn d'ar foar ?

- V. — Unan o toulla,
Unan o ficha
Ha daou o c'hoesa ;
Daou all o sellet
Ha daou o klevet
Pevar en o sav
Hebdo ne rafe netra.

Feiz ha Breiz

Kanpad Misiak ar Vretouped

EUS A BERS AR PAB

Eur gourc'hemen bras divar benn ar Pask kenta

An holl a anaves dija pe a zo varnez anaout ar gourc'hemen deuet eus a bers Hon Tad Santel ar Pab divar benn ar Pask kenta : *Hiviziken, ar vugale, herkent a deuet en oad a reson, — vardro eta, seiz pe eiz vloaz, pe soken kentoc'h, — gant m'o dezo desket ha ma vezint-goest da gompren an nebeut gwirionezou a rank peb kristen da anaout evit beza salvet, ha gant ma vezint ivez goest da lakat kemm etre bara ar gomunion ha bara an douar, o deus an dever da gomunia. — Ar gerent, ar c'honfesour, ar vistri-skôl hag ar bersonet o deus an dever da gelen ha da brepar anezo evit-se.*

Lakat a reomp ama an *diverra* eus ar gentel digaset gant Kongregasion ar Zakramanchou var an dra ze, hag *hed-a-hed* ar gourc'hemenou a zo oc'h heuill ar gentel. Kentel ha gourc'hamennou a deu eus a bers ar Pab, rag Hen e-unan eo hen deus roet an urz d'o embann. Gourc'hemen a ra d'an holl eskibien o rei da anaout, nan hebken d'ar bersonet ha d'ar veleien, mes ive d'ar bohl fidel, ha bep bloas, e fell dezan e vent lennet dezo, e yez ar vro, da vare Pask.

Kement ha kement a zo lavaret dija a gleiz hag a zeou divar benn an dra-ze ma kavomp mad hen lakat aman, araog soken m'eo bet embannet al lezen gant an aot. 'n Eskop. Fiziens hor beus en doare-ze da zigeri sperejou an dud da zigemer gwelloc'h ar reolennou a vezo douget gant an aot. 'n Eskop. Ne zalcint ket da zont ; mes red eo da eskibien ar vro en em glevet evit kaout an tu gwella da gas da benn mennoziou ha gourc'hemenou Hon Tad Santel ar Pab.

— Diverra eus ar gentel var oad ar Park kenta.

Digas a ra da zonzj, da genta euz ar garantez dispar hen deus diskuezet Hor Zalver Jezuz-Krist evit ar vugale. En amzer genta, an Iliz, evit laouenât kalon ar Mestr, a lakea ar vugaligou vihan, var o badiziânt, da gomunia dindan spezhou ar gwin, Beteg an trizekved kantved ar c'hiz-se a badas en ilis ar C'huz-Heol hag a gendalc'h c'hoas hirio en hini ar Zav-Heol. Hed o bugaleach, an iliz a gendalc'he neuze da ginnig dezo ar gomunion, gwech goude ar beleg, gwech goude ar bobl. E meur e leac'h e veze rannet etre ar vugale ar pez a jomé, eus ar bara konsakret.

Divezatoc'h, Iliz ar C'huz-Heol a gemeras ar c'hiz da c'hedal evit komunia ar vugale m'o dije eun nebeut o reson ha m'o dije eun anaoudegez benag eus ar Zakramant bras. Daou Gonsil, hini Latran (1215) hag hini Trant a zisklerias oa mad an doare-ze da ober hag a c'hourc'hemennas hen heuill. Kement-ze ne damallent ket evel fall ar pez a oa bet great beteg neuze.

Mes, peur o deus ar vugale an oad a reson ? Gant an amzer, kals faziou ha kals giziou noazus a zo en em zilet etouez ar bobl fidel. Da genta, ez oar komanset da lavaret ez eus eun oad evit mont da goves hag eun oad all evit mont da gomunia, ez eo red evit komunia kaout gwelloc'h anaoudegez eus ar relijion hag eur breparasion gwelloc'h. Ha, setu ma 'z or deuet da viret ous ar vugale da ober o Fask kenta araok o dek vloaz, o daouzek vloaz e lec'hiou all, hag o fevarzek vloaz en eun tu benag. Kement-ze a zo faziou. Var digarez henori gwelloc'h ar Zakramant, e pellaer dioutan ar re zo gwella deuet d'Hor Zalver. An dra-ze a zo ober displijadur d'ar Mestr hag ober gaou ous ar vugale.

Eur c'hiz all da veza tamallet eo : chom heb kas da goves ar vugale ne dlient ket komunia, pe chom heb rei dezo an absolven. An dra-ze oa dere'hel anezo e liammou ar pec'het, liammou ar pec'het marvel avechou.

Ar pez goasoc'h c'hoas eo ma teuet, e lec'hiou 'zo, da lezel ar vugale en danger a varo heb ar gomunion zantel e viatik ma n'o doa ket c'hoas great o fask kenta ; ha ma tigoueze d'ezo mervel e veze great evito anterramant ar vugale ; ha setu hi dirannet eus o Doue ha dirannet eus eul loden eus pedennou an Iliz.

Gaou bras eta a reont ous ar vugale ar re a c'houlén e ve dispar peb tro evit ar Pask kenta. An dud-ze a heuill, heb er gouzout marteze, fals kreden ar Jansenistet a ra eus ar gomunion eur rekompan, ha nan, ar pez ma 'z eo goulskoude, eul louzou a enep hor sempladurez.

Na pegen dishenvel eo kelennadurez gwirion an Iliz romen : d'ar 25 a viz maë 1905 ar Pab Pi X a zigore frankoc'h-franka an nor d'an holl, koz ha yaouank, evit komunia bemdez ma ve kement-se en o galloud. Daou ziviz hebken a rea : beza e stad a c'hras ha kaout eur mennoz mat.

Ha perag goulén vertuziou ha deskadurez vras digant ar vugale ? O c'halon dinam hag o ene glân a zigollo ervad ar pez a vanko eus tu an deskadurez. Hag ezom o deus eus an Doue o c'hennerzo, rag evel ar re vras, o deus hirio d'en em ziuall eus an danjerou skignet stank en dro dezo.

Konsil Latran ne laka kemm ebet etre oad ar govesion hag hini ar gomunion. Pa ves reson avoalc'h evit ober eur pec'hed hag evit kaout dre-ze an obligation da vont da goves, ez eus ive reson avoalc'h evit mont da gomunia kerkent ha ma c'hell ar c'hrouadur lakat kemm etre bara ar gomunion ha bara an douar.

An doktoret o deus bet da explika al lezen douget gant Kongil Latran o deus holl diskleriet e tlie ar vugale beza kavet mat da gomunia e mare seiz vloas. Evelse o deus komzet sant Thomas, sant Antonin, ar c'honsil a Drant. Evelse e deus diskleriet an ilis pa rea embann Katekiz ar C'honsil a Drant.

Setu an diverra eus ar gentel var oad ar Pask kenta ; setu aman hed-a-hed ar Gourc'hemen divar benn ar Pask kenta.

Rag-se, kongregasion ar Sakramanchou bodet evit eun asamble jeneral d'ar 15 a viz gouere 1910 e deus embanet evel eur gourc'hemen da heuil ar pez 'zo aman varlerc'h :

I. — An oad a rezon kouls evit ar Pask kenta hag ar govesion genta eo an hini ma komans ar c'hrouadur en em gompren var an traou, da lavaret eo, var dro seiz vloaz, muioc'h pe nebeutoc'h, — nebeutoc'h ive.

— Divar ar mare-ze eo deuet evitan an dever stris da goves ha da gomunia.

II. — Evit ar govesion genta hag ar Pask kenta, n'eo ket red kaout eun anaoudegez leun ha parfet eus an holl gwirionezou kristen. Goude great e Bask kenta, ar c'hrouadur a ranko kenderc'hel da zeski, nebeut a nebeut, ervez he c'halloud, ar c'hatekiz penn da henn.

III. — An anaoudegez eus ar relijion a ranko ar c'hrouadur da gaout evit beza preparet a zoare da ober e Bask kenta eo ma komprenfe, ervez he c'halloud, ar mysteriou eus ar feiz a rank peb kristen da anaout evit beza salvet (1), ha ma c'hello lakat kemm etre bara ar c'horf ha bara an ene ha tostet evelse ous ar gomunion gant an devoision a c'heller da c'hedal digant eur c'hrouadur.

IV. — An obligasion evit ar c'hrouadur da goves ha da gomunia a goues ken stris var ar re o deus da gemeret soursi anezan, da lavaret eo var e gerent, e govesour, e vistri-skol ha person e barrez. D'an tad pe d'ar re a zalc'h e blas, ha d'ar c'hovesour, ervez ma lavar ar c'hatekiz romen, eo lakat ar c'hrouadur e stad da ober e Bask kenta.

V. — Eur vech pe meur a vech ar bloaz, ar bersoned a gemero soursi da embann eur gommunion jeneral evit ar vugale ha da voda neuze, nan hebken ar re a dle ober o fask kenta, mes ive, gant m'o dezo asant o c'herent, ar re all o deus komuniet dija. Mat e ve daou pe tri devez retret evit o frepari gwelloc'h.

VII. — Kement hini o deus karg eus ar vugale a dle kemeret preder d'o lakat, eur vech great o fask kenta, da dostat ous an daol zantel alies, bemdez soken ma ve en o galloud. Jezuz hag hor mamm zantel an iliz her

(1) Ar peb a rank peb kristen da anaout evit beza salvet eo :

1° Ez euz eun Doue e tri ferson Tad, Mab ha Spered Santel ;

2° Ez eo Doue ar Mab, an eil personach eus an Dreindet Sakr en em c'hreat den evidomp, hag ez eo maro var ar groaz evit hor savetei ;

3° Hor beuz eun ene a ne varvo ket ;

4° Ez eus eur barados evit rekompansi an dud just, hag eun ifern evit kastiza epad an holl eternite ar bec'herien a varvo e stad a bec'hed varvel.

c'hoanta. Var evez etleont beza evit ma raint ar c'homunion-ze gant an devoision a zere ous o oad. Evesat a dleont ivez hag evesat mad, rag eun dever stris eo, evit ma teuint d'ar c'hatekiz great en iliz ; ma ne c'hellont ket dont da gatekiz an iliz, e tleont lakat rei dezo kelenadurez var ar relijion en eun doare all benag.

VII. — Ar c'hiz da jom heb digas ar vugale da goves pe da jom heb rei dezo an absolven goude m'o deus o rezon a zo da veza tamallet evel fall. An eskibien a dle terri ar c'hiz-se dre eun hent pe hent ha pa rankfent rei da glevet gourdrouzou an iliz.

VIII. — Eur c'hiz fall c'hoas eo chom heb rei ar gomunion e viatik ha sakramant an nouen d'ar vugale deuet en oad a rezon, hag ober ganto anterramant ar vugaligou. D'an eskibien adarre eo skei dizamant var ar goal boazamanchou-ze.

Al lezennou-ze douget gant Kongregasion ar Zakramanchou, ar Pab Pi X, d'ar 7 a viz Eost 1910 hen deus o c'havet mat holl, ha goure hemennet o embann. Gourc'hennet hen deus ouspenn d'an holl eskibien o rei da anaout, nan hebken d'ar bersonet ha d'ar veleien, mes c'hoas d'an holl dud fidel. Bep bloaz, da amzer Fask, e fell dezan e vent lennet dirag an holl, e yez ar vro ha bep pemp bloaz, an eskop, pa yelo da Rom da renta kompt eus afferiou e eskopti, a ranko ivez renta kompt eus an doare ma 'z eo lakeat al lezennou-man da dalvezout.

Ha kement-man a zo da veza heuillet en despet da gement a zo bet diagent great dishenvel.

Roet e Rom e palez Kongregasion ar Zakramanchou d'an 8 a viz eost 1910.

Th. GIUSTINI, sekretour,

D. Cardinal FERRATA, prefet.

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

(KENDALC'H)

Komzet am beuz deoc'h, lennerien va mignoured, euz lavariou ar Brofeted divar benn Jesus. Eun doare all c'hoas a gemeras a Aotrou Doue evit rei da anaout petra

viche ar Messias. An doktor bras sant Iann Krisostom hel lavar « daou zoare a zo, emezan, da gemenn an amzer da zont : hen ober a c'heller dre gomzou, ha dre oberou pe skeudennou hag an Testamant koz a zo leun euz an oberou hag euz ar skeudennou-ze. » Eur ger eta divar benn an dra-ze, araok diskuez eo Jezuz eun Doue gwirion dre ma en em roas evel Doue.

Setu, da genta, « ar roue leun a justis » *Melkisedech* : ema a ioa roue ha beleg-bras : an Tadou Santel euz an Iliz holl gwitibunan a lavar eo eur skeuden euz ar Messias roue ha beleg-bras ; ar bara hag ar gwin a ginnig da Zoue e sakrifis a zo eur skeuden euz sakrifis Santel an oferen ; ha din eo bet Melkisedek da rei e hano da veleien hor Zalver Jezuz-Krist, int a zo bet lavaret dezo « c'hui a zo beleien da viken ervez urz Melkisedek. »

En eur skriva d'an Hebreed an Abostol sant Paol a lavar « Isaac a zo bet roët deomp evit skeuden » (lizer d'an Hebreed, XI, 19). Lod euz an Tadou o deuz, en Isaac tennet a boan, gwelet eur c'helou euz Resurreksion hor Zalver ; holl evelato o deuz lavaret oa Isaac skeuden Jezuz Salver ha prener ar bed pa zougennas e unan var e ziouskoaz koat e zakrifis.

Ha *Joseph* gwerzet gant e vreudeur daoust ha n'eo ket hor Zalver gwerzet gant Judas, dilezet gant e Ebæstel, lakeat d'ar maro gant ar bobl a Israël ?

E levr ar varnerien e velomp ive, ervez skridou sant Ephrem hag an Tadou all, penaoz ar *Varnerien* o deuz douget a ziaraok doare ar Messias. Ar varnerien o doa tennet ar bobl a boan, ar Messias a reas kement all. « An Tadou o deuz gwelet e *Debora* ar synagog a stourmas da genta eneb rouantelez an drouk-spered ; ar gounid goulskoude a dlïe beza da *Jahel*, eur vaouez a ziaveaz-bro a ioa bet digemeret etouez hugale Israël ha savet eno evel ma sav ar skour gouez emboudet var an olivez mat. An Iliz savet gant an Ebæstel etouez ar baianed a dlïe kavout ar gounid diveza var an drouk spered, rag he c'hleze dezi eo kroaz he Mestr Jezuz-Krist. »

Daoust ha ne gavomp ket skeudennou all-sklear hag anat euz Jezuz en den *Santel Job*, er roue *David*, e *Jeremi* hag e *Jonas* ? — An den *Santel Job*, daoust dezan da veza divlam kaer a zo lakeat en eur stad reuzeudik

meurbed ; Jezuz a ioa ar zantelez memes ha goulskoude, sammet gant pec'hejou an holl dud eo bet ive lakeat en eur stad truezus : deuet eo da veza, ervez komz Izai, « vir dolorum », an den a c'hlac'har hag a boan.

Ar roue *David* o tec'het dirag e Vab dianaoudek *Absolom* a zigas da zonj deomp euz Jezuz woalgaset gant ar bobl kounnaret ha gwir en doa da lavaret evel *David* : « Kasouni o deuz bet ouzin heb abeg. »

Ar profet *Jeremi* a gar ar bobl ; c'hoant bras en deuz da zavetei anezan, hag eo red dezan tec'het rag ar mein a zo stlaped outan ; daoust ha n'eo ket buez Jezuz ? — Setu ive ar profet *Jonas* : dre eur burzud souezus bras e tremen tri dervez e kof eur pikol-pesk hen dislounkas goudeze ; Jezuz ive goude beza choumet e sioulder ar bez a zavaz leun a vuez d'an trede dervez.

An holl Tadou Santel euz an Iliz o deuz great ar brasa stad euz ar skeudennou-ze a gavent ama a-hont en Testamant koz. Komz a c'helfent c'hoas euz *Abel*, euz *Noe*, *Abraham* tad an dud a gred e Doue, euz *Jacob*, *Moyzes*, euz *Salomon* en e furnez ; an dud-ze a zo bet skeudennou da Jezuz.

En Testamant koz e kavomp ive *traou* hag a rea d'ar bobl sonjal en Hini a dlïe dont.

Ar *wezen* a vuez e baradoz an douar a roe eur frouezenn a zigase nerz d'an den hag en diarbenne eneb ar maro ; Jezuz staget ouz koat ar Groaz a zo frouezen gwirion a ro vuez a bado da viken.

An *Oan-Bash* a ra deomp sonjal en oan-ze a ziskueze sant Iann Vadezour d'ar bobl a Izraël en eur lavaret : « Setu Oan Doue, setu an hini a distruj pec'hejou ar bed ». Ennez oa Jezuz.

Ar *mann*, ar bevans burzudus roët gant Doue d'ar bobl enn dezert a lavare e rofe ar Messias d'e bobl eur bevanz kals gwelloc'h, kalz nerzusoc'h : e gorf hag e c'hoad. En Aviel Jezuz e unan hen displegas d'an Iuzevien.

Eur skeudenn all a zo anavezet gant an holl : ar *sarpant arem* a reas *Moyzes* evit paraa ar re a ioa bet flemmet gant an aëred viber ; Jezuz ar Groaz en deuz drei-zi louzaoued ha pareet ar gouliou great gant bilim ar sarpan milliget, Satan, a oe muntrer adalek penn kenta ar bed.

Meur a veach beteg enn am beuz lavaret oa Jezuz « an Hini a c'hortoze ar bed holl anezan. » Ar patriarch Jakob, var e dremenvan eo a c'halv evelse ar Messias. « Ar c'halloud, emezan, a joumo gant Juda, bete ma teuo an Hini a dlie beza digaset, hag ar bed holl a vezo var c'hed anezan » (Krouid., XLIX, 10). Eur ger, mar plij deoc'h, evit diskuez penaoz eo gwir ar c'homzou-ze. N'etra ne c'hell, a dra zûr, rei galloudusoc'h testeni da wirionez ar Skritur Zakr, eget ar vouez-ze a zavas euz pevar c'horn ar bed, e peb amzer, e peb yez hag a lavar ar fizianz start en doa ar bed holl da veza asprenet gant ar Messias kemennet gant profeted Israël hed-a-hed ar c'hantvloaziou. An dud difeiz a c'hell klask moug a monez ar re o deuz komzet en Israël; hag e teufent a benn zoken da zistruja testeni Moyzez hag e skridou, da zistruja Psalmou ar roue David ha leoriou an holl brofeted ha kement a verk feiz ar bobl a Israël; n'euz forz, eun dra a joumfe hag a viche krenfoc'h eget fallagriez an dud dizoue; an dra-ze, eo mouez an holl dud a c'halv eur Zalver, euz ar Zao Heol d'ar C'huz-Heol, euz ar c'hreisdeiz d'an Hanter-Noz. E peb yez an holl poblou o deuz komzet evel ma komzas Moyzez; komzou an divinerezed brudet bras euz Kum hag euz Delph a zo o unan gant re ar brofeted. N'ouzoun dare ped levr a viche red evit dastum an holl lavariou divar benn ar boblou a c'hortozas eur Zalver, Eun diverra a vezo awalc'h evit testenia va c'homzou.

An dud gwiziek var ar « philosophi » pe skiant ar furnez, o deuz gallet anaout penn da benn relijion ar *Bersaned* a weach all goz, ar relijion savet gant Zoroastr evito. Er relijion-ze, re anat eo, e zeuz kalz sorc'hennou, kalz kouchou ha n'o deuz na penn na lost; goulskoude enni e kaver splann meurbed ar greden e c'hano en eun doare burzudus ar Zalver a bromete Zoroastr d'e genvroiz ha lavaret a rea gant komzou bras e c'hanfe ar Zalver euz eur werc'hez dinam.

Ar *rouaned* a deuas daved Jezuz e Bethleem a ioa euz ar broiou-ze; kaldeaned oant ha n'o doa ket ankounac'heat komz mab Beor « eur stereden a zavo lugernus a greiz Iakob »

Demdost da vro ar *Bersaned* setu an *Indez* gant he

relijion goz meurbed; tud ar vro-ze paianed euz relijion Brahma ha Bouddha o deuz levriou sakr a zispleg distro Wichnou var an douar bep mil bloaz; diouz ma lavar al levriou-ze, an dud holl a zo henvel euz eur mab dalc'het pell amzer pell diouz an tenera euz an tadou. Eun deiz eur Zalver a deu da rei dezo al lezen a vuez, ha tud fur, doktored an *Indez* a bleg o glin dirazan, eul laouenidigez dispar en o c'halon: levnez ar bugel dianket a gav adarre e dad.

An *Indez* a zo tost-tost d'ar *Chin*; relijion ar Chinoaed a zo bet savet gant Konfusius; lavaret e viche komzou Konfusius ha re e ziskibien eun ekleo euz re Izaï ar profet bras pa lavar ema ar c'homzou a gan an Iliz katolik da zeiz gouel ar Rouaned « Surge, illuminare Jerusalem... sav brema, Jerusalem, bes leun a sklerder, tro da zaoulagad e tu ar Zao-Heol ha sell ouz da vugale en em zastum euz pevar c'horn ar bed! »

« An enezi a bell-vro a c'hortoz ac'hanoc'h » o doa lavaret ar brofeted, hag en Amerik e kavomp eun ekleo euz ar c'homzou-ze; e bro ar Mexik a zo bet dizoloet eun daolen marellet kaer meurbed a zesk deomp kreden ar Vexicaned e pec'het an den kenta; o leoriou sakr a lavar dalc'h-mat e tlie ar bed holl beza asprenet gant eur Zalver.

Euz an Amerik deuomp d'an Europ: kavout a reomp ar memes fizians e poblou ar Skandinavi, hirio ar Sued, an Norvej hag an Danmark.

Ar *Gresianed* o deuz ive bet ar fizianz o doa poblou ar Zao-Heol; kredi a c'heller o deuz ar sperejou kaera euz ar Grès desket gant ar boblou divar dro ar pez a lavaront divar benn an hini a c'hortozent, a c'halvent evit dont da gomeza peb-tra.

Enn *Itali* e kavomp skridou Tasit, Sueton; bet hon deuz komzou Siseron, an den distagellet gwella en amzer-ze; bet hon deuz dreist peb tra koublajou ar barz brudet bras er skoliou, Virjil a gan en eur yez dudius donedigez ar c'hrouadur a deuio da gloza amzer ar brezel-liou, da zigeri var an douar eun amzer a beoc'h hag a sederidigez. « Deuet eo, emezan, an termen diveza evit komzou an diouganerien. »

Abaoue pell amzer n'oa bet nemet brezelioù var an

douar ; ar Romanet, varlerc'h Alexandr, roue bras ar Masedoan, o doa astennet o breac'h kalet ha pounner evel dir var ar bed holl : ha neuze oa sioul bras an traou. Hag e kreiz ar sioulder-ze eo e teuas var an douar an Hini a c'hortoze ar bed holl abaoe keit amzer : renket oa an traou evit hen digemeret ervez m'oa doa kanet ar brofeted, ha d'an deiz merket a holl viskoaz gant Doue Jezuz, hor Zalver benniget a ziskenne euz an Nenv var an douar : dezan peb meuleudi ! F.-M. MAZÉAS.

Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Da betra eo mat ar Relijion

Senti evel eun dall da gement penn-faoutet a deuo da lavaret d'eoc'h e teu a-berz Doue, karet ar gaou a brezegint, heulia a-greiz kalon ar relijion a zavint, daoust d'ezi da veza marteze diskiant, lous, kris, eneb natur an den ! Hag an dra-ze, emezan, a vije eun dever !... Eun den a skiant uhel evelato, war va meno, n'hell ket koms en doare-ze !...

Al lavar-ze a deu eus ar brotestanted hag a zo kalz skignet, siouaz ! zoken e Breiz-Izel, e-touez an dud dizesk. Mat, n'eus forz, dalc'hit sonj, aotrou, lavaret eo mat an holl relijionou a zo lavaret eur zotoni ker bras ha touriou Kastell-Paol.

Gwelomp c'hoaz, koulskoude ! Petra fell d'eoc'h da lavaret, aotrou ? Eo gwirion an holl relijionou ? Ne ve ket dieas neuze chench relijion. Pep hini a glaskfe an hini easa, an hini a gavche enni ar muia plijadur. Ha pa vije skuiz gant unan, netra easoc'h, evel ma chencher roched e c'helljed ive chench relijion ; ha riskl ebet c'hoaz gant an dra-ze, p'eo gwir, hervez ma livirit, ema ganto holl ar wirionez !

Evel-se, da lavaret eo o koms evel a rit, eo e teuer da veza tud direlijion, hag hep dale ne heulier mui hini ebet. An holl a oar eus a betra eo gouest an hini na gred ket ez euz eun Doue just a roio da bep hini hervez e oberou !

Kaer hoc'h eus, aotrou, redek varlerc'h kement a c'hell plijout d'ho ioulou, kaer hoc'h eus teuler en avel an diskan dizoue : « An holl relijionou a zo mat ! » ar boblou a bep leac'h hag a bep amzer a zav en hoc'h eneb evit ho tamall, da lavaret d'eoc'h : « Gaou eo an dra-ze ! »

Ho kalon he-unan, daoust d'he flegou fall, ha ne zav-hi ket en hoc'h eneb evit rebechi d'eoc'h ez eo evit na heuilhot hini ebet e livirit eo mat an holl relijionou ?

Lavaret hoc'h eus ive e tleer chom er relijion e c'haner enni. Mar n'eo ket eat c'hoaz al lavar-ze da netra gant ar pez am eus diskleriet uhelloc'h, horjella a ra, da vihana ; hag evit miret outan da goueza, daoust ha lavaret a reot ive e tle chom paour an hini a zo ganet paour ? e tle an den chom azen abalamour ma teu er bed hep deskadurez ?

Unan bennak a lavaras d'eur protestant brudet nevez en em c'hreat katolik e tle pep hini chom e relijion e dadou. Respont a eure gant kalz a spered : « Evidon-me a zo gwelloc'h ganen mervel e relijion va zadou koz. »

Epad an dispac'h vras, er bloaz 1793, e varvas e Londrez eur c'hristen katolik eus an dibab. Unan bennak eus ar re a yoa endro d'ezan a ziskouezas kaout dieas rak ma rankje ar c'hlanvour disken e douar protestant. « Mat, emezan, toulla dounoc'h, ha va c'horf neuze a jomo e-touez katoliked eveldon. »

Fur eo klask mervel er wirionez mar hon deus an dichans da veza bet ganet e tenvalijen ar gaou.

Ar falz-doktor. — Ar relijion a zo mat d'ar merc'hed. *An difennour bihan.* — Ha perak ne vefe ket kerkoulz all d'ar gwazed ?

Pe ez eo ar relijion savet war ar wirionez, pe ez eo savet war ar gaou, unan a zaou. Mar deo savet war ar wirionez, eo eta an hini vat, ha dre-ze e talo kement d'ar gwazed ha d'ar merc'hed. Mar ema o prezeg ar gaou, n'eo tamm ebet gwelloc'h d'ar merc'hed evit n'eo d'ar gwazed : ar gaou n'eo mat da zen.

Ar relijion a zo mat d'ar merc'hed, a livirit. Ar gwazed koulskoude o deus gourc'hemennou da viret hag youlou fall da zoubla kerkoulz ha m'o deus ar merc'hed, ha n'hellont ket hen ober anez kaout relijion.

Ar gwazed kerkoulz hag ar merc'hed o deus eun Doue da adori ha da zervicha, eun ene da zavetei, plegou fall da reiza, vertuziou da heulia, eur baradoz da c'hounit, eun ifern d'en em ziuoall dioutan, eur varnedigez da zouja, eur maro da c'hedal.

Hor Zalver Jezuz-Krist a zo maro war ar groaz evit an eil rum koulz hag evit egile, hag e c'hourc'hemennou a zo roet d'an holl.

Kerkoulz eo eta ar relijion d'ar gwazed ha d'ar merc'hed ; mar d'eus eur c'hemm bennak e lavaran eo c'hoaz muioc'h dleet d'ar gwazed eget d'ar merc'hed. Muioc'h eget ar merc'hed emaint war hent touellerezou hag ar risklou a bep seurt ; easoc'h eo d'ezo ober an droug, ha muioc'h a skoueriou fall a gavont endro d'ezo, dreist-oll evit ar pez a zell ouz an traou a zo eneb an onestiz, an eva re hag an diegi da ober o deveriou a gristen.

Ar relijion a zo mat d'an oll-mat eo dreist-oll d'ar re a lavar n'eo ket great evito. Seulvui a ezom a zo anezi, seul neubeutoc'h e c'hoantaer he c'haout (1).

* *

Ar relijion gatolik ne deo ket brec'hagn evel ar falz » relijionou. Ar falz relijionou a deu eus a zrougiez an » dud, ha ne oufent dougen nemet droug ; mes ar relijion gatolik a zeu digant Doue, ha kement a ra Doue » a zoug frouez a vuez, eus ar vuez a bado atao. » (Pi Nao).

* *

Eur zoudard kristen

Nag ez eo kaër gwelet ar re a rank divroa, mont pell pell diouz o zud, nag ez eo kaër gwelet anezo o terc'hel mad d'al lezen gristen. Pebez vad a reont d'ezo o-unan ha d'ar re-all ! Etre kear Alre hag Anna-Wened, oa eun den torret gant al labour, hag a veze klanv alies, hep den ebèt da zerc'hel bara d'ezan, nemet eur mab.

» Petra deuin-me da veza, eme Mark Thomas, ma » rank Visant mont da zoudard ? » Mont a rankas, hag e dad, eur c'hristen diouz ar penn, a zoublas da volon-

(1) Ar pennad-ma a zo bet skrivet en e hed gant an Eskob dall, de Ségur.

tez Doue. Pa guitaas an den yaouank, e lavaras e dad d'ezan kaout sonj ez oa bet gwestlet d'ar Werc'hez, hag en divije digemer diganti en nenv, mar tigouese gantan mervel en arme.

Visant a guitaas, a rankas mont d'ar C'hrimee. Nag a wech e rankas eno stourm evit chom kristen. E meur a c'hiz e oe klasket hen lakaat da veza fall. Pa veze riskl da goueza er pec'hed e lavare : « Eun den gwestlet d'ar Werc'hez mont da ober kement-all ! » Gwap a reat anezan, mes hen a leze ar waperez-se da vont gant an avel.

Unan, o veza klasket endra c'helle e denna d'an dizurz hep gellout dont a-benn anezan, a glaskas hen lakaat d'en em ganna outan — « Ne dan ket, eme ar zoudard fur, n'hon deus ket a urz, na te na me, d'en em ganna ; mar bez great an taol esa evit kemeret dre nerz Sebastopol, e vezo gwelet hag aon hon deus-ni rag tan ar brezel. »

E lavar a deuas da wir. Antronoz e oe ar gwal stourmad evit kemeret Sebastopol.

An hini a yoa, an deiz araok, o klask en em ganna, a oe tizet gant eun tenn, a gouezas d'an douar, hag a yoa o vont da veza flastret dindan treid ar c'hezeg. Hor Breton kristen a zammas anezan war e skoaz, ha kas anezan en eul leac'h sur. Pa welas goude-ze gant piou oa bet save-teet ec'h en em gavas souezet maro.

— « Penaos, emezan, ez peus gallet en em denna, me war da skoaz, eus tre daouarn ar Rusianed ? »

— « Pedet am eus an Intron-Varia, eme ar zoudard mat ha kalonek, hag he deus digaset he elez d'am zikour. Red mat oa d'in savetei da vuez d'it, rak deac'h ez poa c'hoant d'am laza. »

— « Gwir eo, eme egile, gwelet ac'hanout eun den mat a ra poañ d'in, hag anez da vadelez oan maro brema. Mes, hiviziken, me vezo eun den-all, hag a fell d'in, evel-dout, en em vestla d'ar Werc'hez. » (Ar c'henta miz Mari).

* *

Ac'hanta, aotrou Doktor, petra livirit eus an dra-ze ? Ha n'eo ket mat d'ar gwazed kaout ive eun tamm relijion, peo gwir e tesk d'ezo beza ker madelezes an eil e kenver egile ?...

Ar falz-doktor. — Beva c'heller koulskoude hep relijion.

An Difennour Bihan. — O ya, evel ma ra ar chatal ! N'o deus ket a relijion, aotrou ; beva reont evelato. Mes eus pe seurt buez ! Avi hoc'h eus outo, Aotrou ?

Beva ra ive an hini a ren buez fall, an hini a ra faë war e dud, war e dad, e vamm, an hini a sko gant e wreg. Beva reer kouskoude daoust ma laerer an nesa, etc.

Ya, beva c'heller hep relijion, mes beva fall, ren a reer neuze eur vuez hag a zo eneb natur an den. Ya, Aotrou, an den en deus ezom da zewel e spered warzu Doue ; ezom en deus da garet e Dad.

* * *

Ez an brema da gonta d'eoc'h eun tammig tabud am euz klevet n'eus ket pell etre daou vicherour o tistrei dioc'h o labour. Unan anezo, eur c'hristen mat evit doare, a lavare d'egile :

— Ac'hanta, lavaret a ri-te c'hoaz e c'heller beza den onest, den mat koulz ha pep hini, hep relijion ?

— Ya, hen lavaret a ran, ha c'houi, koulz ha me, a anavez meur a hini ha na heuilhont relijion ebet, hag a zo koulskoude tud eus ar re wella, prest da ober vad d'an holl, ha ne gredan ket e ve kavet abeg ebet en o buez.

— Abeg ebet ? penaos, tud badezet ha na heuilhont ket o relijion, ha ne deo ket eno, hep mont larkoc'h, eun abeg bras ? Tud onest eus ar re wella, a leverez, prest da ober vad d'an holl ? Ya, pa gavont da c'hounit oc'h hen ober, pa na vank netra d'ezo o-unan, pa c'hellont rei o gwalc'h d'ho holl youlou, p'emaint o neun e kreiz ar madou, an ebatou, hag holl eazamanchou ar vuez. Pa deu avat da veza red d'ezo dioueret eun dra bennak, pa deu, hep mui ken, aon d'ezo n'en em gavfent en dienez eus eun dra bennak, ha ne ve red d'ezo bihannaat ar zom-ze a blijadur a fell d'ezo kaout war an douar, neuze e weler ha tud onest int ; neuze o gweler o samma, hep more'bed ebet, danvez ar paour, an intanvez, ar minor, hag o vont gant madou o amezeien da veva en o slijadur er broiou estren, el leac'h n'hell ket justis o bro lakaat an dourn warnezo.

— Han ! c'houi a fell d'eoc'h koms eus an tri pe bevar

rotet a zo hano anezo eun nebeut zo, hag o deus great evel ma livirit ?

— Ac'hanta ! ha n'ez eus ket eno eur gentel hag a zesk sklear d'an holl ar pezh a lavaran ?

— Ya, mes ar gentel-ze a zo kement evidoc'h evel ma 'z eo evidomp-ni, rak ar re-ze, da vihana lod anezo, a yea wardro an ilizou, d'an oferen da zul, mar em eus klevet mat, da gaout ar gador govez da vare Pask.

— Da lavaret eo, ar re-ze a heuilhe eus ar relijion ar pezh a blijte ganto, ar pezh a droe en o frouden, pe kentoc'h, ar pezh a ouient a yoa red d'ezo da ober evit tremen dioc'h an dud vat, ar gristenien a lakea o fizians enno hag a leze o holl danvez etre o daouarn. Mes ar pezh a ra kalon ha nerz ar relijion a vanke d'ezo : n'o gwelet morse o tostaat oc'h an daol zantel. Lavaret a c'hellan zoken mar tostaat oc'h ar gador govez, n'her greant ket a-zevri ; mar her grajant, ne vije ket bet a dorfejou evel-se da rebech d'ezo.

— War evel-se, ar re a ya da govez a-zevri ne gouezont ket e torfejou ?

— Koueza c'hellont ; dibaot e ve avat o gwelet o koueza en eun torfed hag a c'houlent eur pell amzer evit e brepari, evel ar re ma komzomp anezo ama.

Ar re a gouez en torfejou-ze, o deus lezet ar govesion a-gostez araok ober o zaol, ha peurvuia pell araok. Ar re-ma n'int ket ar re genta da ober taoliou evel-se, ha, siouaz ! ne vezint ket ar re diveza, kredabl ; ha lakaat a rafen klaoustre nikun eus al laeron vras-se n'en doa great e Bask, evel ma tle pep gwir gristen hen ober, er bloavez ma rea eun taol evel-se.

— Klevet em eus koulskoude ez oa lod eus an dud-se savet eus a dud a relijion, kristenien vat, hag a dle beza roet d'o bugale eun deskadurez gristen. Pe seurt vad eta he deus great ar relijion d'ezo ?

— Pe seurt vad ? Ar relijion ne lamm ket e frankiz digant an den, ha n'ez a da zen dre forz.

Ar pezh a leverez aze avat a ziskouez ez eo kablusoc'h hag e kouez alics e brasoc'h torfejou ar re a dro kein d'ar relijion goude beza resevet eur gelennadurez gristen, eget ar re a zo het savet gant tud dizoue, hep koulz lavaret anaoudegez ebet eus ar relijion. Ar penn abeg a gement

se eo ar re zo bet skoliet war ar relijion hag a dro kein d'ezhi goude, o deus breset grasou Doue dindan o zreid.

Ha neuze, pa o deus lezet Doue a-gostez, e chom koulskoude e goueled o ene ar more'hed, eur prenv hag a deu d'o c'hrignat, hag o klask mouga ar prenv-ze e tiskennont dona ma c'hellont e bouilhaen ar pec'hed. Setu perak eo etouez an hevelep tud e kaver brasa enebourien ar feiz hag ar relijion. Karout a rafent distruja an höll gwirioneziou a zo chomet c'hoaz ar skleur anezo en o ene, karout a rafent distruja an Iliz, ar Pab, ar relijion, Doue e-unan, hag evel ne c'hellont ket hen ober, e kounnaront, ec'h egaront, o deus kasoni oc'h kement a zigas da zonz d'ezo a wirioneziou ar feiz, hag ez int prest, pa gavont o zro, da ober ar brasa torfejou. Evel n'o deuz ket a esperans evit ar bed-all, e klaskont o baradoz war an douar, hag e fell d'ezo kaout, e giz pe giz, kement a c'hell ober eürusted an den war an douar.

— O baradoz na dle ket beza re zudius koulskoude, mar deo gwir, evel ma livirit, eo krignet o ene gant ar more'hed ?

— Sonjal a c'heller da vihana ne dint ket divorc'het a-walc'h. Kredabl eo e teu a-wechou en o spered klemmou ar vinored, an intanvezed, an dud keiz o deus taolet er baourentez, en dienez, oc'h aloubi o madou, ar gwall bedennou a dleont da laoskel war o lerc'h; kredabl eo zoken justis ar bed, m'eo red d'ezo en em guzat outi, a ra eun tamm nec'h bennak d'ezo; kredabl eo gwir evito ar pezh a lavar ar Skritur : N'eus ket a beoc'h evit an dud difeiz.

War gement-ma an daou vicherour en em zispartias evit mont pep hini d'e di, o lavaret e komschent c'hoaz divezatoc'h eus a gement-se.

Ar falz-doktor. — N'em beus ket a amzer da rei d'ar relijion.

An difennour bihan. — Mat, aotrou, gwaso eo ze evit doc'h ! Eur sklavour oc'h eta ?

Asa ! n'ho'h eus ket a amzer a livirit ? Daoust hag hen e ve gwir ar... gaou-ze ?... N'oc'h eus ket a amzer da zevel eur wech an amzer ho spered hag ho kalon war-zu Doue evit e adori ha goulenn digantan e c'hrasou ? An

dra-ze a c'heller da ober zoken o labourat ! N'hellit ket kaout da zul eun hanter heur etre pemp heur ha kreiz-de da vont da glevet an oferen ?... N'hellit ket kaout eun heur ar bloaz da vont d'ober ho Pask ?... Neuze eo red mat lavaret ez oc'h gwall-reuzeudik !

Ha koulskoude, anzavit ama ganem, nag a amzer a gollit gant diotachou, o lenn kazetennou, o varvailhat gant ho mignoned, o vutuni, o kouskat, o tebri, oc'h eva, o kemeret ho plijadur, ha me oar, me ?...

Ha neuze, sellit, amzer ho pezo da vervel !...

* *

N'em beus ket a amzer !

N'ouzon ket ha c'houi a zo evel don, me ne gavan nemet tud ha n'o deus ket a amzer.

Brema n'eus ket pell etre ar c'heariou, ar c'hirri tan ho kas hep dale eus an eil kear d'eben ; petra eta zo c'hoarvezet ? Daoust hag hen eul loen bras en deus lonket an amzer ?

Goulennit digant eur mevel, digant eur vatez perak n'o deus ket great al labour merket d'ezo ; lavaret a raint n'o deus ket bet a amzer ; eur skolaer ha ne vez ket er skol, goulennit digantan perak : n'en deus ket a amzer, a lavaro hen sur a-walc'h. Eur micherour hag a jom hep labourat da lun a ve gouest memes da lavaret d'eoc'h : N'em beus ket a amzer !

Paour keaz amzer ! n'oun ket souezet e ve diskouezet d'eomp ker seac'h, ken treut, ker skouiz, kalz traou a vez tamallet d'ezan.

D'ezan e vez tamallet ar pezh ne vez ket bet great, d'ezan ive e vez tamallet ar pezh ne vez ket bet great mat.

N'eo ket dieas lavaret : N'em beus ket bet a amzer ! Koulz eo d'in lavaret e-giz ar re-all ! Ma ne blij ket an dra-ma d'eoc'h, me a lavaro, e feiz, n'em beus ket bet a amzer da ober gwelloc'h.

Ar pezh a zo gwaso, da Zoue zoken e vez lavaret : N'em beus ket amzer !

N'eus ket peil e lavaren da eur mignon, den onest, mes kristen dizaour, heulia gwelloc'h e relijion. — « N'em

beus ket a amzer. » Kement-se a lakas droug da vont ennon, hag e liviris d'ezan e begement.

Penaos, va mignon, nec'h eus ket a amzer ? N'eus ket e pep hini eus da vlaveziou tri c'hant dervez ha pemp ha tri-ugent ouspenn, memes c'hoec'h ha tri-ugent, mar d'eo ar bloavez bizeost ? An deiz a zo berroc'h d'it eget d'ar re-all ? Ha chomet out da gousket ar pemp bloaz ha jaou-ugent a zo en ez puez ?

Evit heulia hon relijion, n'hon deus nemet servicha Doue ha gounit ar baradoz ; mar n'eo ket roet d'comp an amzer evit se, lavar d'in 'ta petra dalv d'comp-ni.

Ouspenn, e liviris d'ezan :

An hini en deus c'hoant da heulia e, relijion, n'eo ket amzer a vank d'ezan. N'eo ket red kaout muioc'h a amzer da ober droug Beza kristen a zo beza den onest, beza habask ha kaout karantez e kenver an holl An hini a lavar n'en deus ket a amzer da ober an dra-ze, ne oar ket petra lavar. Va mignon a falvezas d'ezan lavaret eur ger bennak, mes o veza ma 'z ea braoik ar gaoz ganen, n'hen lesjon da lavaret netra.

A ya ! emoun-me, c'houi a fell d'coec'h lavaret e ranker kaout amzer evit ober meur a dra gourc'hemennet gant ar relijion, evit lavaret ar pedennou, kaout an oferen, komunia da Bask, etc... Ha gouest e vec'h da lavaret n'hoc'h eus ket a amzer da ober an traon-ze ?

Pep den en deus amzer da ober e relijion, da zavetei e ene. Lavaret d'an dud : « N'em beus ket a amzer ! » a zo cun digarez divalo. Lavaret kement-se da Zoue a zo diskiant. Ar gomz-se ne c'hell den he lavaret er hed-ma ; an dud salvet a c'hell he lavaret, hag ive siouaz !... an dud daonet, rak m'emaint en eternite, hag evito n'ez eus mui a amzer !



HISTOR BREIZ

Etre Saozon ha Bretoned...

E tro hanter ar pempet kantved, ar Vretoned, mil c'hoari d'ezo diouall o douarou a enep o amezeien dosta (ar Piktet hag ar Skosed), a zibabas da lakât en o fenn eur roue bras, c'hano Vortigern. Hag eun devez — deiz milliget mar deus unan — holl bennou bras ar vro, bodet asamblez en-dro d'o roue nevez, o c'haera guiskaman-chou brezel en-dro d'o c'horf, o c'hlezeier dir a istribilh ouz o c'hostez, ar pennou bras-se, a lavaran, a zigoras dor o speret da eur frouden iskiz ha trubuilhus dreist an holl froudennou : var digarez dont a-benn eus o enebou-rien kasaüs, ec'h asantjont (an innoanted ma 'z oant) gelver d'o skoazella divroidi kant guech gwasoc'h eget ar re o doa affer ganto diagent : ar Zaozon (resped d'oc'h) a reat anezo.

Er bloavez 450 goude donedigez Hor-Zalver, eo e teuas en Enez Vreiz, var o bagou hir ha skanv, ar c'henta stroilhad Saozon, var goilen ar roue Vortigern. En o lenn ez oa daou vreur : Hengist hag Horsa.

Er mareou kenta, ar Zaozon a zevenas braoik aoualc'h ar gefridi o doa kemeret var o c'hein ; rei a rejont heb marc'hata ar pep guella eus o izign hag eus o nerz evit difenn ar Vreiziz a-enep o gwaskerien. An drabaserien-man o veza deuet adarre da ober eun taol skrab en tuman d'o harzou, Bretoned ha Saozon, krog dorn-ha-dorn, a zailhaz prim var o chouk, hag a zic'houistas ganto eun ougnad eus ar re goasa e kichen kear *Standford*.

Goude eur seurt mestr-taol, ar vrezellourien saoz, heb izomm na digarez ebed, a reas eur zutaden d'o breudeur chomet er gear, ha kerkent eur grangilhad all a zivroidi a ziredas adarre en Enez Vreiz, evel eun ed-guenan laer var eur parkad guiniz-du. Ar roue Vortigern, an den diaviz ma 'z oa, na reas ket an disterra van o velet eur seurt gaoliaterez. Gwaz a ze d'ezan ! dizale e ranko buhan chench 'baz d'an daboulin. Rak ar Zaozon a gen-dalc'has atao da zisken er vro a zornadou. Ha setu eun

deiz, goude beza en em niveret, ec'h en em gavjont tud aoualc'h evit ober al lezen d'o mistri. Var zigarez kaout, var o meno, drusoc'h tinel hag hirroc'h pae, setu d'en em lakât holl e « grève » ha dembrest d'en em drei a du gant ar Skosed.

Ar Vretoned keiz a gouezas o meudig en o dorn. Hogen re zivezad oa : o-unan o doa chachet ar beac'h var o c'hein.

A drugare Doue ne jomchont ket re hir an holl da hirvoudi. Kompren a rejont raktal pebez darvoud a yoa dirollet varno ; hag el leac'h chom da blada dindannan, e savjout krenn ha dres var o zreid ; o fennou breizad a zavas sounn en ear ; goad koz ar Gelled a vervas tear en o goazied, evel guechall en dervezioù gloriüs ma roent lamm da zoudarded Rom. Toui a rejont holl eur vech c'hoaz bunta kuit an estren, pe vervel betek an diveza var an dachen a vrezel.

« N'eus ket gwasoc'h enebourien eget mignoned koz dizunanet, » eme ar c'hrenn-lavar. Ar gwall vuez a reñas etre ar Zaozon hag ar Vretoned goude o disparti a ziskouee sklear eo guir-bater an distour koz.

Er stokad kenta, a en em gavas er bloavez 455, e kear Ailesford, Horsa unan eus mistri ar Zaozon, a oe lac'het hag eur c'halz eus e arme flastret.

En eil stokad, daou vloaz varlerc'h, ar Vretoned a rannas tec'hat kuit d'an daou lamm ruz, epad ma skampe ar Zaozon var o lerc'h gant melladoù bouc'hilli teo ha peziadoù klezeier hir, a yoa aoualc'h tapa eun taol diganto evit faouti eun den dre e hanter. Soudarded Breiz — ar re anezo o doa gallet chacha ganto o c'havelou — a gemeras neuze da benn-arme eur brezellour eus gouenn ar Romaned, brudet bras dre e izign, e lealded hag e nerz-kalon, hag a read *Ambroaz* anezan. Hen-man, kuit da veza gwall dizet gant hon enebourien, a yeas e-unan d'o diambroug betek o zi, d'an ampoent ma n'edont ket var c'hed anezan, hag a zistagas ganto unan eus ar fleskadou yac'h-ze ha ne ankounac'haer ket abenn antronoz.

« Ki skaotet, a leverer, en deus aoun rak an dour yen. » Ar pez zo sur eo da vihana, ar Zaozon a jomas sioul da zidana en o lokou epad eiz vloaz goude eun hevelep freskad.

Mes re a eürusted a zempla nerz an den. Kement all a c'hoarvez gant ar hoblou. Ar Vretoned var an digarez brao m'o devoa bet ar gounid er vech diveza, a dremenas goudeze ar c'haera eus o amzer oc'h ober cholori hag oc'h en em hegal. Ar Zaozon er c'hontrol a stagas a-zevri d'en em grenvât da c'hortoz ar mare ma c'helljent kas an dorz d'ar gear.

An dervez-ze, a yoa kement a ioul da velet anezan o tont, a c'houlaouas abars ar fin. Ar zoudarded koz, peur-bare o gouliou abaoe an diveza emgann, hag adarre ken dibistik ha biskoaz, ha skoazellet ouspenn-ze gant eun niver dreist-kount a vreudeur yaouank diouanet e keit-se er vamm-bro, o devoa eur vall direiz da ober ar c'henta 'r guella eur c'hrogad all.

Setu eta, er bloavez 455, Saozon ha Bretoned penn-oc'h-penn, fri-oc'h-fri ; ha dao d'ar pigoz, ha dao d'al lorgn ha dao d'an drailh !

Den ne c'hoar mat aoualc'h pegement a c'hoad a ruilhas var douar Breiz, en amzeriou trubuilhus se, na pegement a eskern a jomas da venna dindan bannou an heol. Evelato, hervez ma kount sant Jildas en e skridou, ar blaneden a oe garo hag ar vuez tem evit hon tadou.

Goude beza dic'houistet eur flipad lemm gant e genvroiz, a rene kalz anezo eur vuez direol eur pennadig a yoa, ar zant a gendalc'h evel-hen :

» Dorn dizakr ar Zaozon, emezan, a skign eus an eil mor d'egile eun tan-gwall skrijus. Goude beza kroget var ribl aochou ar zao-heol ha pulluc'het ar c'heariou hag ar parkeier tosta, e veler ar flammou oc'h en em astenn a rizennadoù hag oc'h em leda en eur strakal dre an enezen a-bez. Galloud ebed d'o mouga, ken a deu o zeodou ruz ha kamm da lipat ar gwagennou kenta eus mor bras ar c'huz-eol. Ar c'heariou zo diskaret tu ha tu ; ar hobl a-bez, eskibien, beleien, tud ha chatal, diabenet gant eur c'helc'h dir ha tan, a en em zante taget asamblez, hag asamblez darc'hoet ouz torgen a drojou. Hag euzusa tra ! kaer a yoa sellet, na veled a bep tu var ar plasennou nemet touriou freuzet bern var vern, pennadoù-moger troc'holiet, aoteriou santel bruzunet, korfou maro dispennet ha golet a wiskadou goad perzdu hanter galedet.

« Evit ar Vretoned keiz espernet gant an darvoud-ze, darn anezo, du gant an naoun, a yea d'en em sirinka var dremm klezïer o' enebourien, en esper da vihana kaout pelloc'h eun termen d'o foaniou. Darn all a dreuze ar mor, en eur lakât bolz an nenv da dregerni gant o c'hlemmadennou doanius ; ha dindan o goueliou ledan c'houezet gant an avel uhel, e kerzent en avantur Doue ; ha n'eo ket mui soniou drant ar roenverien eo a ganent, mes kanaouennou santel ha glac'harus, evel bouman ten- » net eus al Leoriou Sakr : « Aotrou Holl-C'halloudek, » ho torn en deus skoet ac'hanomp evel denved a gaser » d'ar gigerez, hag ingalet ac'hanomp e mesk ar boblou. » Darn all erfin a yea da glask repu ebars an toullou-kuz, pe e gwaskou ar reier gouez, pe c'hoaz e dounder ar c'hoajou tenval ; hag eno bepred var aoun, bepred e riskl eus o buez, e pèdent Doue da viret na vijent diframmet divar bro o ginivilez... »

Goulskoude varlerc'h kement all a lac'herez hag a freuz, e oe peoc'h eun tachadig. Oh ! ne badas kêt pell an anzaou. Er bloavezh 477 e tiskennas adarre en Enezen eun arme nevez a Zaozon. En he fenn edo Ella hag e dri mab. D'ar mare-ze, ne jome ken gant ar Vreiziz nemet eur c'horniadig douar hag e vijent ennan didrabas : *Koat Andred* a veze great anezan. E kreiz ar c'hoat-se, hag a hag a c'helle kaout marteze vardro hanter-kant leo hirder ha nao pe zek a ledander, ez oa pintet eur mellad kastell-krenv bet savet guechall gant ar Romaned.

Ac'hano ar Vreiziz a zailhe bet an amzer var ar Zaozon strevet dre an aod hag ar c'hompezennou, hag a zalc'he anezho braoik aoualc'h en doujanz. Ar Zaozon a c'halvas neuze euz ar Jermanii soudarded nevez ha didan, a reas diou arme eus o zud, hag a stlapas unan anezo ebars ar c'hoat hag eben var ar c'hastell. Didalvez kaer oe d'ezo torta : ar gastelliz a enebas yac'h pell hag hir, ken a vankas d'ezo boued. Eur vech avad kroget enno an naonegez, e oent gullet holl o koueza a stougalanjen divar o mogerien hag o vervel evel keilhaen. An dagerien a faoutas neuze an noriou, a zismantras kement vad a gavjont e kear, ha goudeze e lakejont enni an tan. An darvoud-man a c'hoarvezas vardro ar bloaz 490.

Eun hevelep mestr-taol a c'houezas eul lore'h direiz e

kalonou ar Zaozon. Goude beza lakeat ar gurunen a roue var benn Ella, setu adarre ar gouezidi d'ober eun dro vale dre an Enezen, en eur freuza ; en eur vac'hagna, en eur lac'ha kemnt a strobe d'ezo an hent. Tud ar meaziou, strafilhet holl, a rea gaol en o raok, hag eur maread anezo a lamme en o bagou evit mont da glask savete en tu-all d'ar mor.

Eun devez evelato ar skraperien a gavas gwaz. Ar Vreiziz, divadaouet varlerc'h ar c'henta reuz, a zavas var o ellou hag a en em unanas etrezo startoc'h eget biskoaz. Gant nerz an dizesper ec'h en em daoljont holl a-gevred var ar Zaozon, destumet var gorre eur memez tostit-tost da eur gear hanvet *Kervaz*. Eno en deiz-ze e oe frigaz, m'hen tou d'eoc'h. Ne c'hellas ket eur zaou, ne c'hellas ket unan hebken chacha e gravellou gantan eus al leac'h-se. Holl e oent flastret gant hor re-ni didruet ha dizamant. « Guelloc'h beza kiger eget leue », eme ar c'hrenn-lavar...

Mes siouaz ! ar Zaozon a c'hoarveze ganto evel an aered viber : seulvui ma vezent drailhet, seulvi e stankænt ; pep hini eus an tammou diskolpet diouz ar c'horf a jome beo, hag a zave d'ezan adarre penn ha lost, da gregi ha flemma. — Epad ouspenn hanter-kant vloaz goude emgann *Kervaz*, ar vreiziz a stourmas c'hoaz ouz an estren. Hogen ar re-man a varvilime atao gwasoc'h-gwaz ar vro, heb ma c'houfed dare eus a be gorn e tiouanent : lavaret a vije bodennadou merrien en eur grugel. Da genta (e troidellou ar bloavezh 500) e tifourchas *Serdik* gant milherou a zoudarded. Var e lerc'h e tigouezas an Angled hag ar Juted, daou rummad tud all savet divar gouenn an amprevaned ha kerent tost d'ar zaouzon.

Eur vech c'hoaz — ar vech diveza ! — Breiz a-bez hag uhanet a zonas sôn ar argad. Hon tadou a lakeas en o fenn eun den dispar e pep giz ha dreist-holl meurbed kalonek er vrezel ; e hano oa *Arzur*, Arzur ar roue bras. Eus an eil korn d'egile d'an enezen, eur youc'haden estlammus ha garo, strinket eus a beultrin meur a gant mil a Vretoned, a lakeas da dregerni, betek an oabl glas, ekleo ar menezioù hag ar reier : ar frankiz pe ar maro !

Ar Frankiz a oe mouget hag ar maro eo a deuas daved an darnvuia.

An toulladig a jomas beo a en em dennas, darn e Keumri, eur riblennadig douar e tu ar c'huz-heol d'an enezen, sanket e fri gantan evel eur c'henn er mor ; ha darn all erfin a daolas eur zell leun a velkoni — var bro o ginivelez, a lammas prim en o bagou, hag a en em lezas da vont gant ar mor el leac'h ma karje Providanz Doue o c'has...

Ar rummad diveza-man — an niverusa a galz — a o bleinet gant dorn Doue varzu ar c'hreizdeiz, hag a zouaras var aodjou benniget an Arvor.

AN TOUR-GUEN.



Unvaniez merc'hed kristen Frans

Eus karter Kastel-Paol

Merc'hed kristen Frans a zo eur Vreuriezh merc'hed a bep renk, adaleg an hini huella beteg an hini izella, hag a ro an dorn an eil d'eben evit ober vad en dro dezo. Ober katekiz d'ar vugale, rei nerz ha kalon d'ar re en em ro d'al labour dic'hras-se en eur vont d'o gwelet, en eur rei prizioù d'ar vugale a gelenont, en eur ziskues dezo peger bras istim a rear eus o labour ; — kas ar vugale d'ar skolioù kristen, o zikour da baea mar bes red ; — skigna al levrioù hag ar c'hazetennou mat ; — lakat unvaniez er familloù digar ; en eur ger, ober vad dre o skuerioù, dre o alioù, dre o arc'hant, dre o gouizigez, dre bep hent, e kement a ma man en o galloud, setu mennoz an unvaniez-se. — Da heuill ar vad-ze a c'hoantaont hag a glaskont, e teu eun all hag a zo ken talvoudus : Dre beza unanet evit ober ar vad, dre rei an dorn an eil d'eben evit an dra-ze, ar merc'hed-ze a deu d'en em anaout gwelloc'h ha d'en em garet. Ar fizians a deu da heuill. Ar c'hleuz savet etre an daou rum dud a renk uhel hag a renk izelloc'h a deu buhan da blena ; brasoc'h stad a zeskont da ober an eil eus eben, ha setu an intron vras hag ar baizantez o vale dorn ous dorn, hag ar fizianz diouanet er c'halonou. Ar vad-se n'eo ket ar bihana.

An unvaniezh-ze a zo savet e peb korn eus ar Frans. En eskopti Kemper ec'h anavezan teir anezo, e Landerne, e Kastel hag e Kemper. Marteze ez eus meur a hini all, mes n'o anavezan ket. Eus hini Landerne renet ker reiz ha ken brao gant an intron de Boisanger eus Lanurvan hor beus komzet er *Feiz ha Breiz* a nevez 'so : e miz Gouere diveza.

Eur ger hizio divar benn hini Kastel.

D'ar zul, 25 a viz gwengolo Unvaniez merc'hed kristen kastel a zo en em vodet en eur zal vras eus skol Santez Anna. Var 500 o deus roet o hano evit beza eus an Unvaniez, an anter da nebeuta o doa respontet d'ar galv great dezo. Kalz eo, rag dibaot e ve ar mammou libr eus o amzer. Goude urz lakeat en afferioù an emglev, goude kompt rentet eus an implij great eus an arc'hant, hag eus ar vad great pe c'hoanteat ober peb hini en e garter, an intron De Guébriand a bedas an aot. H. Du Rusquec eus ar Merzer da lavaret dezo eur ger benag eus an hini a zo bet, dre he buez santel, e nerz-kalon hag he merzerenti eur skuer dispar evit holl merc'hed Frans ; hanvet em eus ar plac'h eürus Jeann d'Arc.

N'eo ket eur ger benag a lavaras an aot. du Rusquec. Prezeger dispar evel ma 'z eo, epad eun heur horolach e tisplegas burzudou he buez, glandet he c'halon miret ganti dinam-kaër e kreiz ar zoudardet, he c'harantez birvidik evit he c'henvroiz harpet var he c'harantez evit Doue, he nerz-kalon e kreiz ar vrezel, he c'homzou eun, didroidell dirag he barnerien, he merzerenti gloriüs e Rouen, an honor deuet d'ar Frans eus he fers.... Ah ! nan, den na oue inouet.

Evit moulla gwelloc'h ar brezegén er sperejou, an aot. Barvet, kure e sant-Melani-Montroulez hen devoa bet ar vadelez da zont da ober ar pezh a c'halver e galleg *des projections lumineuses*. Epad ma prezege an aot. Du Rusquec, e lakea da bara dirag an daoulagat taolennou skedus a ziskueze al lec'hioù hag an imach eus an traou kaër a gomzet anezo.

Evit achui, an aot. du Rusquec, dre gomzou birvidik a bedas an holl merc'hed eus an Unvaniez da gemeret skuer var plac'hig humbl Domremy, ha da labourat eus o holl galloud evit kristena muioc'h-mui en dro dezo kement hini o deus da velet varno.

Eun devez kaër ha ne vezo ket buhan dizonjet eo bet hennez evit an Unvaniez.

F. C.



AR SKOLIOU DIZOUE

a gendalc'h da zougen frouez ; an torfejou bugale a ya var grest an niver hag ar grizder anezo.

» Var araog ! Var araog atao gant ar skolioù dizoue !
» a youc'h potred ar gouarnamant. Kasomp d'an traon
» an holl skolioù kristen gant o sorc'hennou koz : Doue,
» Jezuz-Krist, an iliz, an oferen. Er c'hatekiz ne 'z eus
» nemet ranellerez : ar respet evit an tad hag ar vamm,
» ar sentidigez outo, ar respet evit buez an nesa, madou
» an nesa, brud vad an nesa, ranellerez tout ! mad en
» deiz hirio da veza sanaillet en eur c'hrignol goz benag
» el leac'h ma ne vezo great hano anezo mui, etouez ar
« fraillou, ar c'har-neza an eler koat, hag an holl draou
« n'int mui en implij en hon amzer.

» N'eus Doue ebet, rag-se ne 'z eus autorite ebet ; den
» n'hen deus gwir da gomandi da zen. Ne 'z eus nemet
» ar gouarnamant hag a rankfet senti outan dre ma man
» an nerz gantan, dre m'en deus ar polis hag an arche-
» rien. Mes an tad hag ar vamm n'o deus gwir ebet da
» gomandi, nag ar vugale dever ebet da zenti outo. Peb
» hini en deus e ioulou hag a c'hell ober diouto heb m'en
» defe den rebech ebet da ober. »

« Na Doue, na mestr ! — Peb hini en e roll. »

Setu ar relijion nevez. Abaoue eun nebeut bloaveziou, hounnez a zo desket e kals skolioù dizoue deuet da veza eleiz anezo, skolioù enep Doue. Ar vugale, souezet eun nebeut da genta eus ar c'hentelioù a glevant, kentellioù ken dishenvel dious ar re o doa bet en o famill, a zo komanset breman da ober diouto. E penn ar dorfetourien eman breman ar yaouankis eus a 15 da vont da 20 vloaz.

Er bloaz tremenet, 1909, netra nemet e Paris ez eus bet 54700 laeronsi. Lennit mat ! 54700, da lavaret eo 150 bemdez an eil devez dre egile ; brao ! Evel a velit. Prefet ar polis a anzav eo bet great an darn-vuia eus ar mestao-liou-ze gant paotret yaouank pe mar kirit, gant bugale eus a bemzek da driwac'h vloaz. Spountet gant an di-roll-ze, prefet ar polis, an aot. Lépine a zont kemeret lousou krenv evit diarbenn ar yaouankizou. Mes, petra reio ? nec'het avoalc'h e tle beza, me sonj. Keit ha ma vezo aotre da zeski d'ar vugale ne 'z eus na Doue, na mestr n'ez aint ha ne c'hellint mont nemet var voasat ; hardizegez a deuo dezo an eil o velet egile ; hag ar pezh ne velont ket, a glevont pe a lennont var ar c'hazetennou.

Evit maiz gwengolo diveza, setu aman c'hoas petra en eus pennaouet var ar c'hazetennou divar benn torfejou great gant ar vugale :

1° E Bourg, eur c'hrouadur nao bloaz en em groug gant las e gornigel.

2° E Mont-de-Marsan, eur paotr-saut, daouzek vloaz a zo kavet krouget ous eur vezen gistin.

3° E Reims, eur c'hrouadur pevarzek vloaz a ya ivez d'en em grouga. En e c'hodel e kaver eur skrid varnan merket : « mont a ran d'en em zistruja, rag an disesper 'zo varnon. » *En disesper !* eur c'hrouadur pevarzek vloaz ! Kompren a rit-c'hui an dra-ze ? e c'helfe eus c'hrouadurig eus an oad-ze beza devet avoalc'h e ene, dizec'het avoalc'h e galon, skarzec'het avoalc'h a bep feiz hag a bep esperans evit koeza en disesper. Red eo hen deffe bet eur gelennadurez fall dreist peb falloni evit ma vije bet devet ennan bleun e yaouankiz evel ma vez dizec'het bleun tener an nevez-amzer gant an avel skarnil. Mantus eo !

Ar re-man, da vibana, n'en em gemerent nemet outo o-unan ; Setu aman re all hag a ra goasoc'h :

1° E Brignoles, eur paotr 15 vloaz a las a daolioù boutou hag a daolioù dorn eur c'hrouadur all 12 vloaz evit laerez ar gwenneien a oa gantan (dek real). Ar muntrer ne anaveze e doare ebet an hini a frigase evelse a daolioù boutou ; kavet en devoa anezan var e hent. Goude beza e lazec'het, e taolas e gorf en eul lenn. Mamm ar muntrer a deuas da veza foll gant ar vez hag an disesper.

2° E kichen Pontarlier, eur goal-baotr all a c'hoanta ampoezoni e vestr en eur deuler dour vitriol en e gafe. O veza manket e daol, e laka an tan en ti hag er granchou.

3° E kichen Belfort, eun darbarer bihan, 15 vloaz, a las a daoliou boutail eun darbarer all yaouankoc'h evit laerez digantan ar 25 lur en doa bet evit e haë. Evit rei da gredi eo heman en em zistrujet, ar muntrer a laka d'ezan eur gorden en dro d'e c'houzouk.

4° Ha petra livirit eus an daou ailloun Tissier ha Desmaretz o deus lazet, en deiziou-man; en eun doare euzus, eun tad a famill Jean Andre, touch'er arc'hant en eur bank (garçon de recettes).

5° Ha petra livirit eus an daou vesaër bihan a lazaz, varlene a daoliou bouc'hal eur famill a bez : — tad, mamm, bugale ho servicherien all an ti. Diremors kaër ec'h anzavent o zorfet hag a lavaret beza great an dra-zê evit kaout arc'hant da vont d'an Afrik da c'hoari tiegezik.

6° Ha petra livirit eus Graby ar zoudard muntrer a laze, en train, a daoliou boutou eun itroun goz. Great e dorfet e taolas ar c'horf var an hent-houarn an esper e vije flastret gwelloc'h c'hoas dindan rojou an train. Kondaonet d'ar maro, Graby a zo bet grasiel gant prezidant ar Republik.

Ho pet ha pet all ha ne anavezan ket.

Ar pezh 'zo souerusoc'h c'hoas eo gwelet pegen diremors pegen dizeblant pegen divergont soken, lod anezo, e vezont dirag al lezvarn; anat eo ne velont e doare ebet pegen euzus eo ar pezh o deuz great; an holl eo ma ne deuont ket d'en em fougeal eus o mez-taoliou. Etrezo er greont, bezit sur, ha seul doun eo cat unan benag anezo er fank, seul euzus eo bet e dorfet, seul vuioe'h a stad a vezo great anezan gant e gamaradet prizoun.

Unan eus barnerien bras lezvarn Paris a lavare divar benn an torfet great gant Tissier ha Desmaretz, an daou ailloun 17 vloaz :

« Ia, emezan, bet oun eus an dud hag o deus kredet » gwechall e vije sarret eur prizoun pa vije digoret eur » skol. Siouas ! na pebez fazi oa va hini ! Abaoue eun » nebeut bloaveziou ez eus bet digoret skoliou eleiz- » eleiz ; ha n'eus ket sarret eur prizoun. Pell ac'hano ! Ar

» c'hontrol-beo a zo c'hoarvezet ; n'eus mui a brizoniou » avoalc'h evit digemer ar vugale torfetourien. »

An hini ma komze outan, a respontas :

» — Marteze, aotrou barner, eo fall ar gellennadurez a » vez roet e skoliou-ze. Daoust ha desket e vez d'ar vu- » gale enno, karet . . . virionez, karet an traou kaër hag » an traou mad ?

» — Siouas ! ne ves ket ; hag eno just eman an dalc'h » bras. Keit ha ma kendalc'hor gant ar skoliou dizoue, » keit ha ma kendalc'hor da vouga e kalon ar c'hroua- » dur doujans Doue, doujans ar relijion hag hini ar » famill, ne vezo great nemet digeri hent d'an torfejou » euzusa evel ar re a velomp breman bemdez. Doaniet » oun kement a ma c'hellan beza eus ar pezh a c'hoarves ; » ha bezit sur, kals eus ar varnerien va c'henvreudeur » a gred evel don ; mes hini anezo n'eo hardis avoalc'h » da ziskleria e zantimant, ha da grial « harz ar bleiz. » » Aoun o deuz da veza torret eus o c'harg ha lamet o be- » vans diganto. Me, hen lavar uhel hag hen lavaro ken » alies gwech ha ma kavin tro : « ar skoliou dizoue eo » ar penn-abeg bras eus ar pezh a c'hoarves. »

Eur medisin eus Paris brudet dre holl, abaoue ous- penn urgent vloaz oc'h ober e labour medisin er famillou bras fouz hag er famillou a izelloc'h renk a ra an dis- kleria-man :

« 1° Var 342 famill reuzeudik dre ne 'zeus emgleo ebet » en ti, ez eus 320 ha n'o deus anaoudegez ebet eus ar » religion, ne vezont morse na vardro oferen na vardro » beleg ;

» 2° Var 447 den yaouank hag a ra dishenor ha dizes- » per o famillou, n'ez eus nemet 12 a yaffe eun dro benag » vardro ar beleg ;

» 3° Var 25 krouadur dinatur ha digalon e kenver o » zud, ez eus 24 ha n'o deus relijion ebet. »

Eun dra eo sklerroc'h eget an deiz : digristena ar c'hrouadur a zo digabestra an oll ioulou fall a zo en e galon, a zo ober anezan eul loen gouez ne c'hello den hen donvat.

N'eo ket heb abeg hen deus an aot. 'n Eskob Kemennet lavaret bemdez ar beden :

Eus ar skoliou dizoue hag ar vistri difeiz

Hon dilivrit, Aotrou !

F. C.

FURNEZ BREIZ

E leac'h e m'an an dour ar sioula,
E m'an an dounna.

Bezo an avel e leac'h ma karo,
Pa ra glao e c'hleb ato.

Pa vez tom ar iod
E skot.

Ne zeuz pesk ebet eb he zrein.

Re gravat a boaz
Re brezek a noaz.

Gwassoc'h eun taol teod eget eun taol kleze.

Nep zo lemm beg he deod a rank beza kalet kostez he benn.

Araok komz grit nao zro
Gant ho teod en ho'keno.

Gant ar muzul a rofed d'ar re all e vezo roet d'eoc'h.

Barnit ar re all evel ma fell d'eoc'h beza barnet.

Euz ar frouez eo red tanvat
'Raok lavaret hag ez eo mad.

Gortozit an noz evit lavaret eo bet kaer an deiz.

D'an abardae' lavarfet
Hag hen a zo bet kaer an de,
Evel d'ar maro a welfet
Hag hi 'zo bet mad ar vue.

Guelloc'h eo eur ger tavet
Eget daou lavaret.

'Kerze
Na deu nemed goude.

Ar iar a goll he vi
O kana re goude dofi.

Dibaod siminal a voged
Anez ne ve tan en oaled.



Respont da zivinadennoù miz Gwengolo

- I. — An oabl, — ar stered, an heol,
- II. — Eur vouarenn. — An turiadennoù gozet var eun dosen.
- III. — Ar zaill o tisken er punz.
- VI. — An tachou er boutou.
- V. — Eur pennoc'h.

O deus kavet ar respontchou kement hini o deus klasket :

Adèle Mao, Sant-Divy. — Marie Cueff, Sant-Nouga. — Jean-Pierre Dantec hag e vreudeur, skolaj Lesneven. — Jean-Marie Normand, Guiclan. — M. P., Guicar. — Emm. Bothorel, Loc-Mélar. — A. M. Le Roy, Guissény. — Anne-Louise Pouliquen, Plouzeniel. — Nicolas Le Guen, Plouzeniel. — Marcelline Pouliquen, Sant-Thégonnec. — J.-F. Bécam, Guiclan. — François Le Fourn, Guilers-Brest. — Jean-Louis Guenneuguès, Plouguin. — J.-L. Cadiou, Sibiril. — Joseph Cardinal, Sant-Nouga. — Marie Cardinal, Sant-Nouga. — Alain Jézéquel, Plouvorn. — Yves Corre, Plouvorn. — Michel Autret, Sant-Thonan. — Emile Bellec, Kastel-Paol. — Anne-Marie Habasque, Kernilis. — F.-M. Picot, Plouvorn. — Louis Messenger, Henvic. — Hervé Herry, Henvic. — Philomène Sévère, Plougoulm. — Louis Kériel, Sant-Thégonnec. — Philomène Eozénoù, Plabennek.

NOTA. — N'eus bet nemet 16 o kerc'het o friziou deiz goñl ar Bleun-Brug. Setu ma 'z eo jomet ganen ar 17 pris all. Pa gavint an dro o-unan da zont d'o c'herc'het, e vezo joa ganen o lakat etre daouarn ar re o deus o gounezet.



Divinadennoù miz Here

I. — Ni a oa diou c'hoarig o chom er memez ti,
Kloz mad an nor varnomp, e vevemp dizoursi ;
Kerkent ha ruz hor penn hag hor c'hroc'henn reudet
D'hor c'hask ar vugale, gant prez 'zo diredet ;
Ha daoust pegen garo oa hon ti mogeriet
Ez omp bet diframmet, ha pezet ha debret.

(A. J. PLOUVORN).

II. — Me 'm eus eur marc'h em zi.
Ha da veur a zen a ra avi ;
Ha goulskoude ne ra mann
Nemet var e gein pa vezan.

III. — Eun dra a ra an drô d'an ti
Hag a lavar staga ar c'hillog ha distaga ar c'hi.

P. E. PLABENNEK.

IV. — Eur gambr e deus pevar gorn,
E peb korn ez eus eur c'haz,
Var lost peb kaz ez eus eur c'haz,
Dirag peb kaz ez eus eur c'haz all,
Ped kaz a zo er gamb ?

J. M. N. GUICLAN.

Feiz ha Breiz

Kappad Misiek ar Vretouped

HOR ZALVER JEZUZ-KRIST

(KENDALC'H)

Iuzevien Jerusalem, a lavar d'eomp an Aviel, a gasas eun deiz beleien da gaout Iann Vadezour ha da c'houlen out-an : « Piu out-te ? Petra lavares divar da benn da unan ? » Ha sant Iann Vadezour a respountas gant loaldet n'oa ket ar Messias. Greomp ar memez goulen ouz Jezuz ; ar respount a glevimp ive, hag eur respount difazi. « Me a zo Mab da Zoue, ha Doue va unan ! » O klevet Jezuz ar Iuzevien a lavare : « Biskoaz den n'en deuz komzet evel an den-mia » — Ha n'oa ket souez, rag den ebet nemet Jezuz, ne gredas ha ne c'hellas en em ober hag en em rei evel Mab da Zoue.

Petra lavar Jezuz divar e benn e unan ? Pe seurt talvoudegez o deuz e gomzou ? Setu hag a zo ret displega.

I. — **Komzou Jezuz.** — 1° Hor Zalver a lavar eo hen ar Messias. — D'ar plac'h a Samari a lavar dezan : « Her gout a ran, ar Messias a deuo hag hen a gemenno deomp peb tra, » Jezus a respount a grenn « Me eo hennez, me, a gomz ouzit. » (Iann IV, 26). Hag evelse c'hoas en Aviel : Maze, (XI, 4-6), Lukas, (IV, 18-21).

Jezuz a les an dud da rei dezan an hanviou kaër a zerea d'ar Messias. « Daou zen dall a yeas varlerc'h Jezuz hag a lavare a bouez-penn : « O pet truez ouzomp, Mab da Zavid. » (Maze, IX, 27). Bartimeus an dall a ioa var hent Jeriko o c'houlen an aluzen ; pa dremenas Jezuz, e lavaras dezan daoust da c'hourdrouzou ar bobl tud a ioa eno : « Jezuz, Mab da Zavid, o pet truez ouzin ! » (Mark X, 47-48).

Pa yeas da Jerusalem da genver ar Zul Bleuniou ar bobl a gaue « Bennoz d'ar Roue a deu en hano Doue ;

peoc'h ha gloar dezan e hueded an Nenvou ! » (Lukas, XIX, 38). — Nathanael a lavar da Jesus : « Mestr, c'hui a zo Mab da Zoue, c'hui eo Roue Israël. » (Iann, I, 49.) — Jezuz a lavar eo brasoc'h, galloudusoc'h eget Abraham, Moyzez, Salomon ha Jonas (Iann, VIII, 53; 56). — Maze, XIX, 8, 9 ; — XII, 41, 42 ; — Lukas XI, 31, 32) ; — Da hep mare, Jezuz a lavar d'an holl eo digaset gant an Tad. (Iann, V, 36, 37, 43 ; VI, 39, 40, 58 ; VIII, 16, 18, etc.)

2^o Jezuz a c'halv Doue e Dad. — D'ar vare'hadourien e lavar « Sammit ho marc'hadourez ac'han ha na rit ket eun ti a gemwerz euz ti va Zad. » (Iann II, 16). « Deuet oun, eme Jezuz, en hano Va Zad, ha ne fell ket ganeoc'h va digemeret. » (Iann V, 43). Gwelit ive.

3^o Iann VI, 32, 40, 66 ; VIII, 27, etc.) Jezuz a aotre ma vo roet dezan an hano a *Vestr* hag a *Aotrou*.

« Va gervel, a rit Mestr hag Aotrou, ha mad a rit, rag an dra-ze oun e gwirionez ! » (Iann, XIII, 13, 14). — Jezuz a lavar eo mestr var deiz ar sabbath, deiz an Aotrou Doue : « Mab an den, emezan, a zo mestr zoken var ar zabath. » (Maze, XII, 8). (Mark, II, 28 ; Lucas VI, 5). — Evit diskuéz anat d'an holl en deuz ar c'halloud da bardouni ar pec'hejou, Jezuz a ra eur mirakl : parea a ra eun den seizet a zo digaset davetan dre doën an ti. (Lucas, V, 17-24). Ar Iuzevien a lavare etrezo. « Piou a c'hell pardouni ar pec'hejou nemet Doue e unan ? » Ha Jezuz a respount dre ar mirakl en doa hen ive ar c'halloud-ze ha dre-ze e lavare en doa Mab an Den gwir da lavaret oa Doue. D'Ar Vadalen Jezuz a lavar. « Da bec'hejou a zo pardounet d'id ! » Ar re a ioa eno a zonje enno o unan « Piou 'ta eo ema, a bardoun zoken ar pec'hejou ? » Jezuz a gomz a nevez d'ar Vadalen « Da feiz en deuz d'az saveteet, kers e peoc'h. » Lucas VII 48-50).

3^o Pa deu paotret ar gwir da c'houlen digant an abostol sant Per : « Daoust hag ho Mestr ne baë ket ar gwir evit an templ ? » Sant Per a respount : « Eo ! » Jezuz a c'houlennas neuze digant Per : « Petra sonj dil, Simon ? Rouaned an douar-ma a reseo an taillou digant piou ? Digant o sujidi, o bugale ? pe digant an estrenn ? » — An abostol a respount : « Digant an estrenn ». — « Neuze, eme Jezuz, ar vugale a zo frank a dailhou. » — Ha Jezuz

a baë ar gwir evit miret na viche roet gwall exempl d'an dud-ze. Daoust ha n'eo ket anat e c'hoantea Hor Zalver lavaret n'en doa ezom ebet da baëa ar gwir evit an templ p'eo gwir an templ a ioa ti e Dad dezan hag hen Mab an Tad a ioa frank a dailhou ?

Meur a dro ive Jezuz a lezas ar bobl da rei dezan an hano a Vab da Zoue : ma ne viche ket gwir an dra-ze, biken Jezuz n'en diche gelllet lezer hen ober. (Maze, XIV, 3^a ; — XVI, 16 ; Mark, VIII, 29 ; Lukas, IX, 20 ; Iann, I, 49 ; VI, 70 ; XI, 27.)

4^o A wel d'an holl Jezuz a lavaro eo e gwirionez Mab da Zoue. — Jezuz en doa pareet an den ganet-dall hag ema ioa bet digaset dirag lezvarn ar Iuzevien : taolet e oue er meaz ganto. Jezuz a ieas neuze betek an hini pare hag a lavaras dezan : « Ha kredi a res-te da Vab Doue ? » — Piou eo, Aotrou, ma kredin dezan ? — Her gwelet e peuz, eme Jezuz, hag hen eo a gomz ouzit ! » (Iann IX, 35-37). — Nebeut deiziou goudeze, evit eur gouel, Jezuz a ioa en Templ hag ar Iuzevien bodet en dro dezan a c'houlennas : « Ma 'z out Mab da Zoue, el lavar deomp difazi ! » — « Komz a ran ouzoc'h, a respount Jezuz, ha ne gredit ket ac'hanoun. An oberou a ran en hano va Zad a ro testeni ac'hanoun. » (Iann, X, 24, 30, 36). — Beteg hen Jezuz n'en deuz komzet nemet da dud heb galloud ; setu brema ar mare da gomz dirak al lezvarn ; ama eo red komz didroïdell. Epad an noz Jezuz a zo digaset dirak ar « Sanhedrin », lez-varn ar Iuzevien. Ar belek bras a zo en e sav. « Perak, emezan da Jezuz, ne respontes netra eneb ar pez a zo tamallet did ? » Da betra respount ? Jezuz ne lavar grik.

« En hano Doue leun a vuez e c'hourc'hemennan did lavaret d'omp ha te eo ar C'hrist Mab da Zoue ! En taolma Jezuz ne c'hell ket tevel hag gant nerz e respount da Gaïphas : « El lavaret e peuz ! » (Maze XXVI, 63-64 ; Mark XIV, 61-62). D'ar Varnerien antronoz vintin Jezuz a lavar adarre. »

« Mad a rit lavaret ; ia, me zo Mab da Zoue ! » (Lukas XXII, 70). — Gwir eo Jezuz ne respontas netra da Satan a dente anezan var ar menez hag a lavare d'ezan « Ma 'z out Mab da Zoue... » (Maze IV, 3, 6, Lukas IV, 3, 9) ; netra ken nebeut all d'ar Iuzevien a c'hoarze goap

dezan var menez Kalvar hag a iouc'he « Ma zeo Mab da Zoue, ra ziskenno euz ar Groaz hag e kredimp dezan ! » Mes Jezuz n'en devoa ket da respount d'ezo, n'en doa ket da zenti ouz hevelep gourc'hemennou.

Setu eta komzou Jezuz tennet euz ar pevar Aviel : eun taol lagad var ar chiffrou en diskuez anat bras. It goudeze da gredi e sorc'hennou an dud dibater n'o deuz nemet malloziou evit hor Zalver ha var zigarez ober prezegennou da embann ar peoc'h en hor bro Breiz Izel a deu da vlasfemi ar Jezuz-ze a zo beteg hen bet roue e Breiz ! Eas eo d'an Aotronez-ze lavaret komzou flour evit deseo an dud ; diesoc'h e ve dezo m'oarvad displega, freas kement a lavaront. Eur Breizad, siouas ! eun trubard, Renan euz Landreger en deuz klasket diskar hor Zalver Jezuz-Krist.

Klevit petra lavar. « Var bevar Aviel, emezan, e zeuz tri hag enno Jezuz ne gemer ket an haou a Vab Doue, hag eo pell zoken d'en em rei evel Doue. Sant Iann hebken a ra da Jezuz komz evel ma ra ! » Setu aze komzou freas ; ia, gwir eo, ha lavaret gant unan euz ar pennou bras gwech all er skoliou Paris ; ha goulskoude setu komzou a zo gevier penn da benn. Kredabl bras Renan a ioa gwall bikouzet e zaoulagat en deiz ma skrivas an dra-ze ; marteze ar c'hoant kousket ive a ioa krog ennan pa lenne an Aviel gwirion. Sevel en deuz klasket eun Aviel nevez, an Aviel ervez Renan ha kenseurted ; mes va zonz eo n'ema ket c'hoas treac'h d'egile. Komzou Jezuz a zo re sklear, re zidroidell ; an heretiked, ar Iuzevien kaledet er gouie ervad ha c'hoanteat o deuz teuler tenvallijen pounner var ar sklerder a zalle anezo. Ha setu doare an dud-ze ken gwiziek var o meno. Kollet o deuz o foan, rag ar pevar aviel a zo stag mat an eil ouz egile, mignounet int re vad evit ma savfe freuz etrezo.

Da genderc'hel).

F.-M. MAZÉAS.



DIVARBEN ar SKOLIOU

(Kendalc'h)

Eun dra a gavomp e levriou hon doktored nevez eo kement-ma : « An dud a ia ato var vellad. Guechall e karent en em ganna, oant kriz evel bleizi an eil evit egile. Hirio int madelezuz, ec'h en em garont evel breudeur, ne zonzont nemed ober vad an eil d'egile. »

« Hon tadou koz, a skriv an A. Primaire, a ioa euzuz o stad ; n'oant ket gwall dishenvel diouz an anevaled all a veve en dro dezo. Evit tiez n'o doa nemed toullou great gant mein ; beva a reant evel tud gouez e kreiz ar boan hag ar spount... Henvel ouz an anevaled, ouz ar marmousien braz euz hor c'hoajou, an den a veve e giz an anevaled-se, n'en doa na reolen a vuez na lezen. An hini krenva a rea he vestr d'ar re all ; n'en doa en he galoun na truez na karantez evit he-nessa ; ne zoa ennan nemed krisder... »

Setu ase desket d'ar vugale e tisken an dud euz ar marmousien !

« A nebeudou an anevaled-se, kriz guechall, a deuio da veza dem henvel ouz an dud a zo breman var an douar. Dont a raint da c'houzout ober tan, kaout a raint an tu da labourat an houarn ; neuze e vezo great benviou mad, krenv ; great e vezo tiez, an douar a vezo troet, dont a raio ar c'hiz da ober dillad, ha ne vezo ket mui kement da c'houzant gant an naoun hag ar riou ; hag abalamour ma vezint eurusoc'h, an dud a deuio da veza mad e kenvet an eil egile ; breman e zeuz boued n'euz forz pegement, abalamour ma c'houezer labourat an douar ; n'euz ket mui ezom da laza ar re all evit diframa diganto o feadra. A nebeudou ive e vezo great lezennou ; kement a zifenko al lezennou a vezo fall da ober ; kement a lezint ober a vezo mad : fall ar pez a zo difennet, mad ar pez a c'heller da ober, setu penaoz eo deuet deomp an daou c'her-se ; an droug, ar mad. Gant an amzer, an dud a ielo ato var vellaat. Ne vezint ket dioc'h tu mad tre : kriz e chomint c'hoaz eur pennad mad. Evelse e velomp e

bro Frans laza an heretiked, ar brotestanted, taoler ar brotestanted er meaz euz ar vro. »

« Mes hirio, ervad, gant al lezennou a zo breman, eo eun dudi beva. An oll a zo breman evel breudeur. Pa deu unan benag da gueza, e vez roet an dourn d'ezan da zavel. Pa vez unan benag en dienez, pe deuet da yeza koz, dinerz, e vez sikouret ha ne zeuz mui evel guechall da gaout aoun da veza dilezet. Breman an oll a c'hell kousket dizourzi, guechall e yeze e kreiz an noz laeroun o redet, o spounta ar vro, ha ne veze klevet hano nemed euz lazerez, laeronsi. Hiviziken en hon tiez klozet mad e c'hellomp kousket eb aoun rac'h al laeroun... »

Setu ase traou kaer, ne ket ta. Mez siouaz ! marteze n'int ket gwir penn da benn. E pe amzer e zeuz bet klevet hano euz muioc'h a droiou fall, a laeronsi, a lazerez eget brema ? Bemdez er c'hazetennou ne lenner nemed traou evelse. Ha n'e ket en tiez paour, doriou fall varnezo, e za al laeroun hag ar vuntrerien, mez en tiez pinvidik, klozet mad goulskoude. Breman e zeuz fuzuillou, revolveriou, kombou dynamit, hag an dud fall a zo eaz d'ezo ober an droug. E peb departamant e vez peder guech ar bloaz barnediguez (cour d'assises) evit an torfedou ha n'e ket labour a yank d'ar varnerien. Eun dra hag a ra poan meurhed eo guelet an niver braz a dorfedou great gant tud iaouank, bugale c'hoaz koulz lavaret, rak eur c'halz euz an dorfetourien a vez barnet n'int ket c'hoaz ugent vloaz. Hag ar vuntrerien-se a zo aliez desket mad.

Petra ziskuez kement-se ? An dra-ze a ziskuez n'eo ket awoalc'h ober lezennou evit lakat an dud da veza mad. N'e ket awoalc'h lavaret d'an dud : « Ma ne rit ket ar pez a zo goure hemennet deoc'h, e vezoc'h taolet er prizoun ; ma lazoc'h, e vezoc'h kaset d'ar c'hillotin. » An dud o deuz c'hoant ober taoliou fall a lavaro n'o deuz ket aoun rak ar prizoun na zoken rak ar c'hillotin. Ne reont forz gant netra ; gant ma c'hellint c'hoari er bed-man, kountanti o oll ioulou, eo mad, hag e laerint hag e lazint, m'ar d'eo red ; marteze e vezint paket ; gwaz a ze. Petra reoc'h gant tud evelse ? Henvel int oc'h bleizi. Klaskit rei da gompren d'ar bleizi ne dleont ket debri an denved : koll a reoc'h ho poan. Ar bleiz, pa vel an danvad dirazan, a

lam varnan : ne c'hell ket miret. Evelse ivez an dud fall a ra an drouk pa gavont tro.

Ia, red eo d'an den kaout karantez en he galoun. Anez ar garantez, an den a zo henvel ouz an anevaled. Gant ar garantez, avad, e sav dreist an oll draou krouet, beteg Doue. Ar garantez a ra d'an den karet Doue dreist peb tra hag he nessa evel dan e-unan abalamour da Zoue.

Eun daouzek vloaz benag a zo, e oue guillotinet e Brest eun torfedour iaouank en doa lazet he c'hoar. Araok mervel, en devoue an eur vad d'en em drei ouz Doue, ha setu aman petra lavare : « Ne c'houien ket petra oa ar vuez, ne gomprenen netra, hag ec'h en em gemeren ouz an dud a ioa o koumandi ar re all hag em boa kas outo. Kaout plijadur, n'euz forz penaoz, setu petra oa va c'hoant. » Mez pa zigoraz e zaoulagad da sklerijen ar feiz, e lavaraz : « Breman e velan mad ne zeuz ken nerz nemed ar relijion. »

Ia, red eo d'an den kaout en he galoun karantez Doue. Hag araok hirio, a drugare Doue, ar garantez a zo deuet da lugerni en hor bro. Abaoue m'eo bet skignet dre ar bed relijion Jesus-Krist, tan ar garantez a zo deuet ivez da domma ar c'halonou hag e velomp ar gristenien o vale var roudou o Mestr, o karet, o servicha o nessa, oc'h ober dezan peb vad. Ar zent, petra o deuz klasket nemed ober vad d'o nessa ? Evit petra e zeuz bet savet gant an Iliz, ar venec'h kement a skoliou, a hospitaliou, nemed evit sikour a re ezommek, sklerijenna an dud eb deskadurez, rei loj d'an dud paour, dan dud klanv ? Ar missionerien a guitea o bro evit mont pell da brezeg an Aviel, ar relijiused a yea guechall d'en em ginnig d'an Turked evit ma vije troket outo an dud a ioa er prizouniou, daoust ha na verve ket en o c'haloun tan ar garantez ? E peleac'h e vezo kavet tud ken karantezuz ha sant Franses Xavier, sant Visant a Baol hag ar zent all a villierou a c'helfet da henvel ? Ia, ar re a zo en o c'haloun karantez Doue a ra traou braz meurhed : ar reze eo a zo dleet dezo meuleudi.

Ha pa ehan ar garantez da domma ar c'halonou, an dud a deu adarre da veza kriz. An A. Primaire a lavar eo het taolet ar brotestanted er meaz euz ar Frans gant Louis XIV. Guir eo. Mes kant vloaz goude, epad ar Revolusion,

nag a dud o deuz ranket mont er meaz euz ar Frans, nag a dud taolet er prizouniou, laeret dezo o madou, nag a dud trouc'het dezo o gouzog var ar c'hilloin ? E Paris e 1871 nag a draou kriz great gant ar revolusionerien hanvet Communards ? Hag a nevez zo, ar relijiused taolet er meaz euz ar skoliou, skoliou savet ganto pe gant ar gatoliked ; ar gloarezed iaouank taolet er meaz euz ar semineriou, an ilizou laeret o madou, daoust ha n'eo ket traou kriz kement-se ? Daoust ha goude kement-se e c'heller lavaret e za an dud var vellaat ? Nan.

An dud a ia var vellaat pa gresk en o c'haloun ar garantez. Mez ma teu da vervel enno ar garantez, e teuont adarre da veza kriz, didruez, bleizi evit o nessa.

I. U.

Ar gwin-ardant milliget

- « Dont a res da gemeret eur banne ?
- » Deomp 'ta !
- » D'az yec'hed, paotr !
- » D'az yec'hed, mignon ! »

N'eo ket hir ar gomz ; divlam-kaër e seblant beza ; ha goulskoude, nag a reuziou, nag a ankeniou, nag a zienez, nag a vizer a deu d'he heuill ! Tro a gaver da eva evit peb tra :

Eva a vez great, p'en em gaver goude an disparti, evit diskoes ar joa d'en em velet ;

Eva a vez great p'en em zispartier evit reketi beach vad ;

Eva a vez great pa ves tomm an amzer evit en em zistana ;

Eva a vez great pa vez yen evit en em domma ;

Eva a vez great araog al labour evit en em grenfât ;

Eva a vez great goude al labour evit nevezi an nerz ;

Eva a vez great er marc'had evit prena ;

Eva a vez great adarre evit gwerza ;

Eva a vez great deiz ar vadiziant ha deiz an eured abalamour ma 'm er joa ;

Eva a vez great deiz an anterramant evit beuzi ar c'hlae'har ;

Eva a vez great ken alies gwech ha m'en em gaver e tro ; hag an dro en em gav bemdez ha meur a vech bemdez evit darn 'zo.

« D'az yec'hed » a vez lavaret ! Gwelloc'h ha gwirroc'h e ve o c'homzou d'an everien ma lavarfont an eil d'egile :
 « Evit ma vezi revinet, — evit ma vezo buhan skarzet da
 » di eus a gement vad 'zo ennan ; — evit ma kolli da
 » yec'hed ha da vrud vad ; — evit mac'h evi peb mez ; —
 » evit ma vezi ankeniet, te, da wreg ha da vugale ;
 » — evit ma vezo mouget ennout peb sonj ha peb c'hoant
 » vat ; evit ma verrañ da vuez ha ma kolli da ene. »

Ar vezventiou a zo deuet, e broiou 'zo, ha Breiz-Izel a zo unan eus ar broiou taget, da veza eur walenn gris, eus ar re grisa. Ret eo kaëat outi, ret hen diarbenn ; an holl dud a skiant, kouls tud ar gouarnamant hag ar gristenien vat a zo a unan evit hen lavaret. Var an dachen-man, e c'hellomp, heb glaz ebet d'hor c'houstians, rei an dorn an eil d'egile. — Breman ez euz nebeutoc'h eget eur miz, d'ar 15 a viz Here diveza, prefet ar Finister, an Aot. Giraud a rea eur vodadek Kemperis e sall ar Gymnas evit klevet eur brezegen a enep ar vezventiou, (une conférence antialcoolique). Araog ar brezegen-ze great gant an Aot. Weber, e lavaras e unan pegeñ doaniet oa o velet an hospitaliou ha tiez ar re zot leunet ha bâr-leunet gant ar vesvierien, ha pegeñ mall oa diarbenn eun hevelep drouk ; pedi hag aspedi a reas an holl da lakat o ijin, peb hini en dro dezan, evit stourm eun tech ken nozus d'ar vro ; ober a reas meuleudiou bras an Aot. de Thézac, eur c'hristen mad goulskoude, evit ar preder a gemer da sevel tiez-repu evit tenna ar vartoloded eus an hospitaliou pa ne c'hellont ket mont er mor.

En devez-se ar prefet en doa komzet mad ha joa eo ganeomp renta testeni dezan.

Mes penaos en em gemeret evit al labour-ze ? — Aman n'en em glever mui kerkouls, n'ouzon ket perag. Darn a laka o holl fizians el lezennoù a zo hano da ober evit reiña ar gwerza hag ar prena eus an alkool ; — darn oll birvidikoc'h n'o deus fizians ebet el lezennoù great ha da ober, ha ne gontont nemet varno o-unan, var o freze-

gennou evit sklerijenna sperejou an dud var mezaoliou ar gwin-ardant. — Me gav din n'eo ket dies o lakat akord. An eil tra hag egile a zo mat hag a c'hell en em harpa brao-braz. Dre brezegennou ha dre skridou e vezo sklerijennet ar sperejou, ha dre al lezennou e vezo diarbennet ar prena eus ar boeson krenv.

An daou dra zo ret : 1° *sklerijenna an dud* ; diskoues n'eus vad ebet da c'hedal eus an oll evachou-ze nag evit rei nerz, nag evit netra vat ; ar c'hontrol-beo eo a reont, hag an dra-ze a boanimp da ziskoues sklear evel an deiz er studiadennoù a vezo great er *Feiz ha Breiz* epad eun nebeut miziou. — 2° *nerza bolontez an dud*, da lavarat eo, ober en eun hevelep doare m'o dezo ar menuoz stard d'en em ziouall eus peb evaj krenv.

Muioc'h ec'h en em droomp varzu ar yaouankiz eget varzu ar re goz ; rag an dud a zo eat doun enno an tech da eva, a zo dies kenan da gonvertisa. N'eo ket na gafent mat avoalc'h ar péz a leveromp, mes n'o deus mui bolontez avoalc'h evit trei kein d'o doue, ar gwin-ardant. Eun dra eo hag a zo anavezet mat gant ar vedesinet hag ar veleien : an ever touet ne oar morse peur eo poent ehana ; ne selaou morse e ræson, e volontez a zo re simpl ; eur vech eat ar banne kenta, ne glasko nemet an tu da gaout eun all. Evit ar re-ze ne 'z eus nemet eul louzou evit diouall dious mezventi : *chom a grenn heb eva^{morse} boeson krenv ebet ; a grenn*, a lavaran ; *morse* a lavaran. Eun den eus ar renk uhella en hor bro, hen doa kemeret an tech-ze en e yaouankiz. Savet mez gantan abars ar fin, e touas ne deuje morse mui da c'hlepia e vuzellou na gant gwin-ardant na gant likeur ebet. Goude tregont vloaz tremenet evelse, heb beza eat morse enep e c'her, koz dija, ec'h anzave e oa c'hoas beo ennan ar c'hoant da eva, hag e lavare : « Ma tigoueste ganen kemeret eur banne hebken, e ven kollet : dizrei a raffen d'an zech koz gwasoc'h eget biskoas. »

Roues eo kaout tud a volontez stard evel an den-ze ; ha roues eo ive kaout mesvierien hag a deuffe da jom heb eva. Ar c'hontrol eo a c'hoarves peurvuia ; eur mezvier bihan ne zale ket da zont da veza eur mezvier touet da c'hortos ma vezo eur mezvier pennoc'h. — Digorit ho taoulagad, merc'hed yaouank ! Ma fell d'eoec'h beza eürus

en ho famil, na gemerit morse, a briz ebet, evel pried, eun den yaouank techet d'ar boeson, ha pa vefte mil lur leve ous e heuill ; — eun den yaouank fur, ha pa n'hen deffe da zont davidoc'h nemet e yec'hed hag e furnez ho rento mil gwech eürusoc'h.

Mar d'eo ken dies-se konvertisa an dud griziennet enno tech ar vezventi, da betra en em drei varzu enno ? — Deomp kentoc'h varzu ar yaouankiz.

AN ALKOOL

An alkool a zo oc'h ober ar gwin-ardant, (*kognac, fine champagne, rhum, gin, dour vulnéraire*) hag al likeuriou, (*raspail, bénédictine, chartreuse, absinthe*, etc.), a veze gwechall tennet eus ar gwin, hag abalamour da ze e veze great *esprit de vin* anezan. Hirio e ves tennet eus kant ha kant tra all. Alkool a vez tennet eus ar greun gwiniz, eiz, segal ha n'eus fors pe seurt greun all ; tennet e ves eus ar patatez, betterabez hag eus holl frouez an douar pe ar gwez a zo sukr enno ; tennet e ves c'hoas eus an treuz-geod hag euz ar c'hoat (*esprit de bois*) ; tennet e ves ivez euz ar pillou, eus al lousdoni a vez dastumet var ruiou ar c'heariou, ha zoken eus ar péz a ves tennet eus ar priveziou. — En Amerik, e Chicago ez eus eun usin hag a ra dastum gant aked holl skubennajou kear, ar chas, ar c'hizier, hag ar razet maro kouls hag an traou all. Eus dek karrad traou evelse e tenn 39 lur lard evit ober savon ha vardro 150 litrad alcool (90 degrés). — Var 100 litrad alcool a ves gwerzet, n'ez eus nemet vardro 4 hag a ve tennet eus gwin, ar 96 all a zo tennet eus traou all.

An alkool a zo eur poezon. Roet pur, dreizan e-unan heb beza mesket gant dour, 160 gramm eus an hini dinoasa (*l'alcool éthylique*) a zo tra avoalc'h evit laza, e peder heur var nugent, eur c'hi a 40 lur bonez. — Nebeutoc'h eget eun hanter litrad a lazo ive eun den ekreiz e oad. — Gant an alkool *amylique*, an hini noazusa, an hini a vez tennet eus an avalou douar hag ar greun, tra avoalc'h eo 300 gramm evit laza eun den en e vir vella.

An alkool ne ves ket, dibaot a vech, evet pur ; — Meskajou a ves great anezan.

An alkool a zo re grenv evit ma c'helfet eva anezan pur ha dreizan e-unan. (1) Lakeat e ves ennan dour livet ha blazet gant eun *essence* bennak.

Brao e vezo mar d'eo an essanz-se dinoaz ; alies e ves poezon ive. An alkool mesket gant hanter-zour pe diou drederen dour, a jomo atao eur poezon, mes ne vezo mui ken noazus. Na daou wennegat, na pevar g'wennegat soken ne zeblantint ket ober kals drouk ma n'o c'hemerer nemet bep ar mare ; mes da ziuall zo araog an tech.

— Kement hini a deu d'en em voaza da gemeret bemdez pe kouls lavaret bemdez, meur a vanne evelse a zo sur avoalc'h da ampoezoni e c'hoad, da revina e yec'hed ha da veza diskaret gant an disterra klenved. An alkool a zo er boeson ne zale morsé da wall-lakat ar stomok (sac'h ar boued) ; hag ar breuven sklear eus an dra-ze- eo ma teu ar stomok re zammet gant boeson, da zistaol ar boued zo ennan. Klemmi a ra en e zoare ar stomok paour, mez an ever n'her selaou ket hag a gendalc'h da rei dezan ar pez a ra-heug dezan. A nebeudou an ever a deu ha ne c'hell mui sellet ous boued, pe ne ra mui nemet pismigat ; evelse e koll e nerz, e yec'hed hag e vuez. Ne gomzan ket aman eus e ene ; an holl a anaves komzou Hor Zalver Jezuz-Krist : « ar vezvieren n'o dezo pers ebet e rouantelez an nenv. »

Ha na d'it ket da gredi e lavarfen amploc'h eget justoc'h divar benn an drouk a ra ar gwin-ardant, Digorit o taoulagad hag e veloc'h emañ izelloc'h eget ar virionez. Noc'h eus nemet sellet en dro deoc'h.

Poan oc'h eus o kredi e ve ar gwin-ardant eur poezon, e teu da laza e zen var an taol ? Digorit eur gazeten, keleier ar vro varni ; ma ne gavit ket bep sizun, alies da

(1) C'hoarvezout a ra, kement-ze e ve kavet unan benag diboell avoalc'h evit hen ober. N'eus ket gwall-bell, unan eus va mignonet beleien a oa bet g'arvet da velet eun den yaouank, 18 vloaz, mevel e li cur marchadour sidr. Lakeat e oa bet gant e vestr, da ober odevi sidr. Hen, ken diskiant ha tra, a siagas e benn ous eur volennad alkool pur. Ne evas ket kals, rag troc'het e oue e halan ; mes tra avoalc'h hen doa great evit ma oue ret lakat anezan e kreiz eur bern teil tomm evit dere-hel tomder ennan. P'en em gavas ar bet-g e oa c'hoas dilavar, n'hen doa anaoudegez ebet. Ne c'hellas ober netra evitan nemet rei dezan an Nouen. — Sevel a c'hellas an den yaouank ; mes ne deuas mui mat avoalc'h. Eun nebeut miziu goude-ze e varve.

vihana e kavoc'h hano eus eur bariaden bennak evel-hen : Eur briz-diod a laka e klaoustre eva eul litrad gwin-ardant en eur ober eur e'hart-heur hag avechou e nebeutoc'h amzer. Petra c'hoarves ? Peurvuia an ever a jom var ar plas lazet mort gant e gofad. Egile a dec'h kuit dibreder marteze, ha me lavar e tije an den-ze beza kaset var eun d'ar prizon ha barnet evel muntret e vreur. — En eul litrad odevi (1000 gramm) n'ez eus morse nebeutoc'h eget 350 gramm alkool, tra avoalc'h evit laza eun den n'eus fors peg en krenv e vije.

Seul uhel eo an degré alcool er boeson, seul noazus eo. Setu eun daolen aman varlerc'h eus an degré alcool a zo er boesoniu krenv :

Cognac, fine champagne eus a 33 da vont da 69 dre 100. 33° à 60° 0/0.

Genièvre	40 0/0
Rhum de Jamaïque.	54 0/0
Kirsch	50 0/0
Gin	52 0/0
Whisky	54 0/0
Bitter	42 0/0
Shiedam	55 à 60 0/0
Liqueurs. — Absinthe	45 à 70 0/0
Chartreuse verte	62 0/0
Raspail	42 0/0
Kummel	42 0/0 etc.

Al likeriuo a zo noazusoc'h eget ar gwin-ardant ; rag ousspenn ann alkool a zo enno ez euz c'hoaz kals traou all, (des essences stupéfiantes, épileptisantes, soporifiques) hag a sko eun var an empenn, ha dre an empenn var an nervenno. Arabet beza souezet ma teu an everien likeriuo da gemeret doare tud sebezet ; an drouksant hag ar pez a c'halver an delirium tremens, alter ar gwin-ardant a zo var o zeulio.

Ma vije kemeret, evit ober al likeriuo, an danvez ar gwella, an essanz eus ar plant a c'hoez hag a vlaz vat, ne vijent ket ken noazus ; mes peurvuia e ves kemeret traou fabriket en ijinou ha darn anezo a zo poezon eus an hini hinimusa. Dour-vitriol a ves great avechou eus ar gwin-ardant. Reson o deus muioc'h eget na zonzont ar re her galv evelse ; rag, e gwirionez, vitriol (pe acide sulfurique)

a ves lakeat ennan alies evit rei dezan blaz ha c'hoez gwelloc'h.

Fall-devet evit ar yec'hed int eta al likeuriou o tont eus ti ar fabrikant. Falloc'h e vezint c'hoas goude ma vezint bet truket gant an hostizien. Ar re-man a oar lakat dour en o boeson ; mes ar re anezo a c'hoantaffe gwerza dour ne zalefent ket da velet potred ar banneou o tec'het dious o zi ; ret eo dezo eta lakat eun dra benag all hag a grogo stard er gornaillen. Doue hebken a oar pe seurt moc'haj a ves gwerzet d'an dud keiz ! Ha souez eo e vefent klanv goude-ze ?

Daoust hag eur vad benag a zigas ar boeson krenv d'an den ?

An debri hag an eva a zo ret d'an den 1° evit *maga* e gorf, evit ober e c'hoad, e gig, e eskern. — Ar bara, ar c'hig, ar viou, al legumach, al leaz a ra al labour-ze. — 2° evit *digas tomder* ennan. — An traou druz, an amann, al lard eus ar c'hig moc'h, ar sukr, al legumachou bleu-dek a ra an eil labour-ze. — 3° Ar c'hafe, an the ha kals evajou all en doare-ze ne vagont ket, mes sikour a reont ar boued all da ziskenn ha miret a reont na ve kollet ker buhan ar vad digaset gant ar vagadurez, setu perag int galvet boued-espenn.

Gwelomp hag eur vad bennak a deu deomp evit unan pe unan eus an traou-ze gant ar boeson krenv. Setu aman eun daolen great gant ar vedisinet gouziera.

Evit 100 gramm	Dour	Alkool	Danvez Magadurez	Danvez tomder	Traou all
Bier.	90 gr.	2 da 9	0.4 da 0.7	etre 4 ha 5	4
Gwin.	70 da 90	6 da 25	0.1	0.4	3
Gwin dous ...	80	10 da 25	0.1	1 da 10	6
Gwin ardant .	25 da 75	15 da 25	0	0	0
Likeuriou. . .	25 da 75	15 da 25	0	?	?

Evel a velit, ar bier, ar gwin, ar gwin dous a zigas c'hoas eun nebeudik bevans ha tomder d'ar c'horf, mes ken nebeut a tra. Mes na gwin-ardant, na likeuriou na zigasont vad ebet ; rag an domder a zigas ar gwin-ardant ne d'eo na doun na padus ; sevel a reont d'ar penn, ruzder a zigasont ennan, mes prest goude an izili a deu da

sklasi, ha gouzout a rit netra rank beza great d'ar re o deus evet re evit derc'hel tomder enno.

Pegen dishevel eo ar boued a gemeromp :

100 GRAMM	DANVEZ	DANVEZ	TRAOU ALL talvoudus D'AR C'HORF
	MAGADUREZ	TOMDER	
Bara gwiniz. . .	9 ^{gr} »	45 ^{gr} »	46 ^{gr} »
Bara segal . . .	9 »	40 »	51 »
Amann	1 50	77 »	21 50
Leaz	5 50	8 50	86 »
Kig-bevin	11 50	4 »	78 50
Pesked	13 50	4 50	82 »
Piz bihan	22 50	59 50	18 »
Haricot	22 50	56 »	21 50
Avalou-douar . .	1 50	33 50	15 »
Fourmaj	33 50	24 »	42 »

Da genderc'hel).

F. C.

HISTOR BREIZ

Ar Vretoned o tont en Arvor Doare ar vro-man d'an ampoent

Divar an dro-man kement hor bezo da gounta divar-benn ar Vretoned, a c'hoarvezo n'eo ket mui du-ze en tu-all d'ar mor en Enez Vreiz, mes ebars ar c'horn-douar emomp-ni breman ennan o chom : rak hon tadou koz guechall, harluet gant ar zaizon eus bro o ginivelez, a deuas eur c'halz anezo, m'ho peus sonj mat, da glask bevanz, peoc'h ha frankiz var douar benniget an Arvor.

Ar rummadou kenta a guiteas-o mam-bro vardro ar bloavez 450. Hag eun toulladig brao a dlient beza zoken d'ar mare-ze o treuzi ar mor. Ar pezh hen diskouez eo e kollas trumm ar vro-man he hano hag he yez : e leac'h

Arvor a reat anezi aziagent, e kemeras hiviziken an hano a *Vreiz-Izel*. Kement-se n'en dije ket gellet en em gaout a dra zur, ma ne vije deuet ar *Vreiziz* enni nemet a-unanou.

Ouspenn an hano, ar yez a jenchas ive ker buhan all. Var bordik daou-c'hant vloaz a yoa na veze komzet en Arvor nemet eur briz-latin divalo, chomet a-zilerc'h ar Romaned. Hogen d'an nao ha d'an deket kantved, meneg ebet ken eus a latin gant tud ar vro-man divar; o muzelou e tirede eur brezoneg flour ha yac'h, henvel-poch ouz an hinj a lakea an oabl glas hag ar mor doun da dregerni, pa bigne ar Vretoned var o listri en eur gana kaon d'o enezen muia-karet.

An divroidigez, a lavaren-me bremaik, a gomansas vardro hanter ar pempet kantved. Mes, evit lakât an traou var an eun, eo red d'eomp gouzout breman pegeit e padas hag e pe zoare ec'h en em ziruilhas.

Arabad eo d'eoc'h sonjal e vefe deuet ar Vretoned holl asamblez da ziroll evel eun tarz kurun var gourenez Arvor. Oh nan! Siuoloc'h eget an dra-ze e tremenas an traou.

Ar *Vreiziz* na guitajont douar-leve o zadou koz nemet dre ma oent hortet, gwasket, peur-skuizet gant ar Zaozon. N'eo ket en eun devez nag en eur bloaz e oe great an diloj; mes a neubeudou ha dre hir amzer, pa 'z e guir e padas tost da zaou-c'hant vloaz.

Hag ouspenn-ze fazia kalz a rafac'h o kredi na veze harluet ar Vretoned kuit eus o bro nemet pa goueze bandennadou Saozon evel goalinier var an enezen, evel goude brezellou bras am eus great hano anezo er miz tremenet. Nag a bet guech all na c'hoarvezas ket, zoken er mareou a beoc'h gant korniadou douar beza breset ha dispennet, keriadennoù pulluc'het ha dismantret, hag o zud lac'het pe vac'hagnet! Neuze eo e veze gullet familhou a-bez o testum an neubeut peadra a jome ganto, o lavaret kenavo da di o c'havel, evit lammañ dre guz hag ar buhanna ma c'hellent var o bagou, hag oc'h en em losker da vont evelse, poulzet gant an avel, etrezek eur vro all bennak el leac'h ma vije didorroc'h, ar vuez ha laouenoc'h sklerijen an heol. En doare-ze e c'heller lavaret, heb aoun da fazia, e padas ar Vretoned da guitât

an enezen keit ha ma kendalc'has ar Zaozon da zont ebars, da lavaret eo eus ar bloaz 450 betek vardro ar bloavez 600...

Eur poent all hag a bedan ac'hanoc'h da daoler outañ evez mat, evit kompren freasoch a ze ar pez a lennoc'h aman er gevren-man en troiou kenta, eo an dra-man: e penn ar stroilhadou Bretoned a zouare koulz lavaret heb ehan var gourenez Arvor, ne veze ket atao prinsed na brezellourien brudet, mes ive aliez-aliez eskibien pe vanaç'hed. Iliz *Vreiz* en doa enebet startoc'h eget n'eus forz pe seurt galloud all ouz an divroidi, ha poaniet en dra c'helle da zalc'her broadelez *Vreiz* ploum en e zav. N'eus neuze netra zouez ma veler gant pep rummad nevez a zigouez en Arvor eur zant bennak ouz o bleina hag o c'hennerzi en o malheur...

Ha breman taolomp d'ar red eun taol lagad divar nij var stad hor bro en amzeriou ma c'h en em skignas dreizi ar Vretoned.

Ar pez a lakea an nec'heta tout ar *Vreiziz* p'en em gave o bagou a vel d'an Arvor, eo na remerkent dirazo, n'eus forz pe du d'ezo trei o daoulagad, nemet eur c'helic'h teq a goajou tenval, ledet dre-holl var an aodjou.

Dre mac'h avasent e kreiz an douarou, e rouesae eun neubeudig ar gwez, mes en o gwaskou ne ziouane ker-koulz all nemet drez gouez ha koz tammou spern fall. Var ar meaziou distu-ze e rene eur zioulder skrijus; trouz ebet ken, nemet, pa deue tenvalijen an abardaez, youc'hadennou gourok al laboused-noz o tifoucha diouz o glud, pe jilpadennou skiltr al lern o pildrotat varlerc'h o freiz.

Roud ebet eus a zen beo e neb leac'h, nemet a bell da bell eur c'hoz lochennig balan, el leac'h ma teue bep ar mare eun dioualler chatal bennak da glask lojeiz. Kement all a zispac'h hag a freuz a yoa bet great er beg douar-ze gant ar gouezidi diranvet! Ha c'hoaz an hiniennou a labaskenne e korn pe gorn eus ar vro deuet da veza hanter-c'houez, na yoa etrezo darempred ebet. Re zinerz ha re a-strafoilh evit astenn an dorn an eil d'egile da vare an danjer, e c'hortozent kentoc'h skoazell digant ar vretoned-se bannet eus o c'hear ha digaset gant Doue betek an Arvoriz, evit beza, evel pa lavarfen, ar goell hag

ar mean-diazez eus ar hobl nevez en doa mennoz da zevel er vro-man...

Hirio ne jom mui tres ebet ken, koulz lavaret, eus ar c'hoajou divent a c'holoe ar vro guechall : ar re vrasa a velomp breman (evel koat ar C'hranou, koat ar Forest hag ar re all) ne d'int nemet bodennou e skoaz re an amzer goz. Selaouit ar pennadig histor-man hebken hag e velfoc'h.

E bloaveziou kenta ar c'houec'hvet kantved, sant Paul Aurelian a deuas eus a Vreiz-Veur da zouara e goueled Leon, e kichen eur geraden hanvet Telmedou (vardro Guitalmoze). Ouz e heul ez oa beleien ha menec'h a-leiz. Hervez m'edo ar c'hiz gant leane l Breiz, pep hini eus ar venec'h-se a yeas da ober e ermitach en eur c'horn sioul ha distro bennak, pell an eil diouz egile, e kreiz ar c'hoajou. Unan anezo, e hano Jaoua, en doa savet e lochen e kichennik eur feunteun hag a yoa eun dudi klevet an dour sklear o redek anezi en eur zourral. « Allo ! eme Jaoua, setu emoun brao aman breman va unanik-penn, da bedi Doue ha da ober pinijen peoc'h ha didrabas. » Siouaz ! fasia 'rea, ar paour-keaz sant. Eun amezeg en devoa ha n'oa ket eus ar re jentilla, m'hen asur d'eoc'h. Eur mellad taro, resped d'eoc'h, an hini oa. Hag an aneval gouez, beteg-hen roue ar vro, a yeas en egar o rankout daou-hanteri gant eur manac'h ! Ar gwel eus al lochen dreist-holl a lakea anezan da vout e breskin. — Eun deiz eta, ma 'z oa eat Jaoua da bedi ha da gana meuleudion an Aotrou Doue gant e genvreudeur, setu ar c'hole, savet friantiz ennan, da zailha var al lochik paour, da zanka e gerniel e kreiz ar skourrou ha da ingala toen ha mogeriu tamm du-man tamm du-hont.


« Koz tra fall, eme ar manac'h pa deuas en dro, ha guelloc'h out breman ? » Hag hen staga adarre var e bouezig da zevel e di. Mes an taro, kounaret gwasoc'h-gwaz, ne zaleas ket d'hen troc'holia evit an eil guech. Pennou breizad o devoa o daou, ar zant hag ar c'hole : hini anezo ne felle d'ezan plega d'egile. Peder guech dioc'htu e c'hoarvezas ar memes abaden. Hag erfin Jaoua, nec'hét-marô, da c'houlén-skoazell digant sant Paul. « Ro d'in da lochen, eme ar zant, ha kemer va hini me. » En devez-ze diouz an noz, pa velas an den-Doue, var benn

e zaoulin dirak e ermitach, an aneval a deuas da c'hourvez mezek charz e dreid, e lost gantan en e c'har-beden ; sant Paol, eme an histor, a reaz varnan eur peziad sin ar groaz ; hag al loan gouez a redas d'an daou lamm da guzat e dounder ar c'hoajou. A c'houdevez, morse den n'her guelas ken. . . »

Goude beza chomet c'hoaz eun tacladig el leac'h-se, galvet abaoue Lann-Baol, ar zant a zeas en hent gant e ziskibien evit guelet doare ar vro. Ar c'henta gavjont var o hent oe eun denig bihan, dioualler-moc'h eus e vicher. Hen-man a vleinas ar genseurter dre venojennou kamm-digamm dre douez ar c'hoajou betek palez ar roue Wizur en Enez Vaz...

Ar pennadig histor-ze, pa ne ve ken, nag a c'hellit da lenn en holl skridou koz, a zo aoualc'h evit kompren petra oa doare Arvor ha stad an Arvoriz pa deuas ar genta Bretoned er vro : an douarou holl goloet a wez, hag an dud, rouez, paour ha dister, diouallerien chatal an darn vuia anezo.

AN TOUR-GUEN.



Kenvreuriezh Missionerlen an Itroun-Varia KONSEVET EB PEC'HEG

Eun dle a anoudegez vat am beuz da baëa d'an Tadou Missionerien a zong, e gallek, an hano a *Oblats de Marie Immaculée*. — Au digemer karantezuz am beuz bet diganto er Beljik, ken e Kastell ar Bestin, ken e kear Liej, a reas d'in prometti dezo rei da anaout o c'hen-vreuriezh da leunerien *Feiz ha Breiz*. Mall oa ganen seveni ar bromesa-ze ; hag araok peb tra e livirin « Bennoz Doue » da Aotr. Rener F. H. B. evit beza digemeret ar pennad skrid-ma.

Pa en em gavis e chapelik koant Kastel ar Bestin (a gomzin anezan divarlerc'h), kenta tra a welis oa eun daolen mareilet kaër gant ar c'homzou-ma, a droan euz al latin « Doue en deuz va digaset evit kemenn an Aviel d'ar beorien. » Ar geriou-ze a zo reolen buez an Tadou euz ar Kenvreuriezh-ze. Ar garantez evit ar beo-

rien, eur c'hoant eb muzul d'ober silvidigez an dud keizze, setu petra reas d'an Aotr. Eugène a Vazenod, maro eskop a Varseill, sevel Kenvreuriez Missionerien an Itroun Varia konsevet eb pec'het.

Eugène a Vazenod a c'hanas e kear Aix, er Provans, d'an deiz kenta a viz Eost 1782. E gerent a ioa euz an noblans ha kristenien euz an dibab. Ar c'hrouadur a dremenas e vloaveziou kenta e kreiz ar reuziou hag an drubuilhou a deu da heul an harlu, rag e dud a dec'has euz ar Frans epad an dispac'h, ar Revolution vras. Red e voe dezo tec'het dirak armeou ar Republik euz Turin da Veniz, euz Veniz da Napl, euz Napl da Balerm, er Sisil. E kear Veniz eo e klevas an den iaouank mouez an Aotr. Doue her galve da veza belek. Eb aoun ebet Eugène a zizoloas d'e gerent kement a dremene en e spered hag en he galon. Unan euz e eontred a glaskas distrei anezan en eur lavaret dezan n'oa mui hini all evit skigna ar rum a dud Mazenod ha gantan neuze e viche diskaret an han; an den iaouank a respountas d'e eontr: « Netra, emezan, na reiñ muioc'h a enor d'hor famil eget achui dre eur belek! » Ha tud Mazenod, er Provans, o deuz achuet gant daou Eskob.

A bep seurt a oe great evit falgaloni an den iaouank; Eujen a drec'has peb tra; fae a reas var ar c'hargou a oe kinniget dezan, ha mont a reas da c'houlenn digor e Kloerdi Sant Sulpis; ar rener oa neuze an Aotr. Emery. Ar belek Santel ha gwiziek-ma ne zaleas ket da garet ar c'hloareg iaouank dreist ar re all, rag ma wele ennan eur spered lem, eur galon eun ha krenv meurbed. Dizale superioed kenta sant Sulpis a oe red dezo dilezel ar c'hloerdi hag Eujen a Vazenod gant daou euz e genvreudeur a oe karget da vleina ar re all.

E Paris oa neuze e penn an Eskopti ar c'hardinal Maury: n'oa ket arc'heskop Paris, dezan oa bet roët goulskoude gant Napoleon ar garg da gas en dro afe-riou an Eskopti. Ar Pab Pi VII ne falvezas ket gantan aotrea kement-se hag ar c'hardinal Maury ne c'houarnas morse ervez ar gwir. Eujen a Vazenod ne blijas ket gan-
tan beza beleget gant ar c'hardinal hag a c'houlennas ouz an Aotr. Demandoix, eskop Amiens rei dezan Urz santel ar velegiach: Eujen a oe beleget d'an 21 a viz

kerzu 1811. Eskop Amiens en doa eur c'hoant vras da zerc'hel ar beleg iaouank en e eskopti hag a c'halvas anezan da veza e vikel bras; an enor-ze n'oa ket da blijout d'an Aotr. a Vazenod: e sonj a ioa great ha mall bras en doa da gas da benn kement en doa sonjet ober.

Distrei a reas eta da gear Aix. An aotrou n Eskob eno a c'houlennas outan petra gariñ kaout digantan: « Netra, Aotrou n Eskob, eme ar beleg iaouank; va list hebken d'en em rei a bez evit ober vad d'an dud iaouank ha d'ar beorien! » Eb marc'hata pelloc'h, e stagas gant al labour.

Epad ar C'horaiz e prezege, en eun Iliz euz kear, d'an artisaned ha prezek a re a dezo en o yez: ar Provansal Gervel a reas davetan, sevel a reas e doujans Doue, tud iaouank euz an dibab; ganto e savas eun Emgleo goazed kemeret er gwella. en huella tiegeziou hag a roe en dro dezo ar skuer euz ar c'haëra vertuziou.

An aotr. a Vazenod a dremene ive ar c'hals euz e amzer er prisioniou gag en hospitaliou; alies e iea enno; disken a re a el lochenou ar fleriusa; eno e choume gant ar brizounerien reuzeudik evit frealzi anezo, ha deski dezo ar relijion. E garantez evit an dud klanv a ioa ker bras all ha darbet e oe dezan beza diskaret en eur entent outo.

Er bloavez 1814, an derzien typhoid a grogas en Aotrichianed, prisounerien a vrezel, a ioa stank meurbet er c'hasarniou a ioa enn Aix. Eb damanti d'ar boan ha d'ar c'hlenved spegus-ze, Eujen a Vazenod a ia noz-deiz da velet an dud keiz-ze; o frealzi a ra, o c'helenn ha rei dezo o Zakramanchou: o skoazella a reas e pep giz. Tizet e oe e unan gant ar c'hlenved-ze; Ker klanv e kouezas raktal ma kavas d'an holl n'oa mui pare ebet evitan. Pa oe klevet ar c'helou-ze e kear, an holl a oe glac'haret bras; ar pedennou a zavas c'huek kenañ beteg an Aotr. Doue a zelaouas ar pedennou-ze hag a roas ar iec'het d'e veleg; an holl a gredas oa bet paret dre virakl.

Eujen a Vazenod a gredas neuze oa red evitan labourat seul-vui da zilvidigez ar beorien an dilezeta. A nevez e stagas a zrevi gant al labour; mes kals re en doa da ober e unan hag e sonjas neuze kemeret gantan kenvreudeur o doa eveldan ar c'hoant-vras da velet Doue karët gant an holl.

N'oa ket kaër, a dra-zur, stad an Iliz katolik e bro-C'hall, d'ar mare-ze ! An dispac'h en doa great dezi gouliou a ioa tanet c'hoas ; an darn vuia euz an dud divar ar meas a ioa dilezet ha dizesk bras. Ar veleien a ioa bet gwasket epad an dispac'h ; hag evit c'hoas n'oa ket bet gellet stanka an toullou o doa great an harlu, ar maro, hag, lavaromp ar ger, an drubarderez. Mui a gouenthou ; e kals pareziou, mui a bersouned, mui a veleien evit renevezi ar feiz hag ar vuez kristen enno ! Ha, siouas ! an amzer da zont a ioa du ha tenval bras : abenn peur e viche savet a nevez ar c'houenthou-ze a ioa bet kaëra kurunen hor Bro ? — O sonjal ervat er reuziou-ze, eo e c'hoantas Eujen a Vazenod sevel e genvreuriez.

(*Da genderc'hel*).

F. M. M.



Ar Brezoneg Trefoet

Kerbagan, an 20 a viz Here 1910.

An traou coz a zo caer. Breiziz, red eo miret
An arrebeuri coz pa n'int ket dismantret,
Dillad an tadic-coz pa n'int ket penseliet
Hag hor brezonec coz pa n'eo ket marellet.

VA MIGNOUN KER,

En amzer guechal e comzet er vro-man brezonec diroufen, eun dudi er c'hlevet ; hag hirio c'hoaz, an neb a gar ar brezonec c'houec a ya da velet Tadic-coz, couezet erc'h an oad var he ben, hag a oar displega ker brao, heb beza bet er seol c'hallec, ar gountadennou a ra levenez he vugaligou dirag an eteo e corn an oalet.

N'em euz tam c'hoant da lavaret droug euz ar galleg a garan, mez n'oun ket evit miret da gaout eur begad casoni euz an dud-se a vennaz mouga hor yez ken caer ha ken coz, en eur varella anez-han gant, briz c'hallec, evit he zaotra evel ma vez saotret eur parcad-ed gant louzeier fall. Mall oa c'houennat ar parc, hag an dachen a zo bet boulc'het gant labourerien vad hanvet ar Goni-dec, Brizeux, Hersart de la Villemarqué, Prosper Proux,

Milin, Luzel, an daou Vorvan ha re all. Hirio ez euz calz a vale var ho roudou, hag er pen kenta e cavan ac'hannout, va mignoun. Digas d'eomp hor geriou coz en dro, ha lez ar chas kintuz da harzal.

Evit discouez da lennerien *Feiz ha Breiz* e pe stad oa couezet ar brezonec, ha pebez ezom en doa da veza tamouezet evit dibaba diounthan an traou louz er sclabeze, e casan d'id eul lizer em euz gellet caout dre vadelez aotrou persoun Henvic. Scrivet e oe, bremaic e vezo cant vloaz, e 1814, e galleg gant an aotrou 'n Escob a oa neuze e Kemper, ha lakeat e brezonec gant n'ouzoun ket piou, mez a dra zur gant unan benag n'em lenno ket, siouaz ! Anez, marteze en dije poaniet da rei d'eomp gwelloc'h brezonec eur vèch all.

Setu aman eun tanva euz he labour a lacaio ac'hannout da lipat da vourrou.

MANDAMANT

An Aotrou 'n Eskop a Gemper

Pehini a ordren penaus ar Catechis bras ho bihan, en usaich an holl Ilizou a Franc, na veza mui desquet en e Escopty

Per-Vincent Dombidau de Crouseilhes, dre c'hraç Doue, ha dre autorite hon Tad Santel ar Pab, Escop a Guemper, d'an dud a Iliz ha d'ar bobl fidel euz hon Escopty : *Salud ha Benediction* en hor Salver Jesus-Christ.

HOR BREUDEUR QUER,

Aznavezot hon eus penaus ar Catechis *pehini* a oa ket proposet d'eomp gant e *Eminanc* ar C'hardinal Legat ha *pehini* hon devoa recevet-gant an oll Esquibien Franc, pell da renta æssoc'h an *instruction*. en devoa *hi rentet diffic'loc'h*. Cals eus ar Bastoret *respeta*pla euz hon Escopty o devoa *adressed* d'eomp *representationou* quer just, ma en em *proposemp* da ober, er Catechis-ze *cenchamanchou* *considerabl*.

Maes goude beza graet var quement-ze *reflexionou* c'hoas *seriusoc'h*, hon devezs sonjet *penaus* ar *voyen-ze* n'en divije ket an *effet a zeziromp* evit *instruction* an dud fidel, *penaus* ar *voyen* ar *surra* da gaout un *issu* mad en *objet-ze* eus hor *sourci pastoral*, oa *receo* ar Catechismou *pere* a oa bet *publiet* gant an Esquibien hor *predecessoret* evit ar c'hantonioù *diffarant* a *bere* ez eo *composet* hirio Escopty Quemper.

An dud divar ar mæz a gavo dre eno ar *facilite* da veza ar c'henta mistri a religion eus ho bugale.

Hor C'hen-Oberourien *respectabl*, euz a *bere* al labour hac ar *sourciou* a zo cals en tu-all d'o galloud, a *recevo* ive ur *soulageamant* bras er loden-ze quen *important* ha ken peñsiuz eus o *minister*.

Evit ar *ræsoniou-ze*, hon devezs *ordrenet* ar peza zo aman varlerc'h.

Articl quenta. — Adalec an devez ma vezo *publiet* ar *Mandamant*-man ens hor perz, ar c'hatechis bras ha bihan, evit *usach* an oll ilizou Franç, na vezo mui desket en hon Escopty.

Articl. II. — Ar c'hatechismou o devoa hor *predecessoret publiet* evit escoptyou Quemper, Leon ha Treguer, a vezo hepquen desquet hivisiquen en hon Escopty, quen er parrezioù, quen er seminerioù, er scolaichou a bep *renq*, e tiez a *bansion*, en hoospitalioù hac en tiez a scol, evit ar *vugale* eus an *eil sex* hac eguile.

Art. III. — An autrou Blot, hon *imprimer* e Quemper, hag an autrou Ledan hon *imprimer* e Montroulez, a *autorisomp* hepquen da *imprima* ha da *zistribui* : an autrou Blot, ar Catechis gallec ha brezounec eus ar c'hanton Quemper, hag ar Catechis gallec eus ar c'hanton Leon ; hac an autrou Ledan, ar Catechis brezounec eus ar c'hantonioù Leon ha Treguer.

Hag ar *Mandamant-mâ* a vezo lennet er pron euz an oferèn bred, ar sul quenta goude ma vezo bet *recevet*.

Roet e Quemper, an unecvet deiz a viz Eaust 1814.

† P. V., Escop a Gemper.

Dre an Autrou 'n Escop,

LE CLANCHE, Chaloni-Secretour.

Hirio, dre drugare Doue, e vije mez o comz evelse. An dud gouez e peb corn euz ar bed ho deuz peb hini he yez, hag ar briz-breounec-se n'eo ket unan. Gwelloc'h eo ganen gwelet ar brezounec o vervel eget clevet he gempen en eun doare ken euzuz.

Red eo, a lavaren, digas ar gerioù coz en dro ; red e ober re nevez, rag traou nevez a zo er bed. An neb a raio al labour ze en devezo calz enebourien, mez ma'z eo deut mad ar gerioù, e chomint. Ar goueriadet a zo tud a spehag a gav hanoioù deread da bep tra. Pa devaz an hent houarn n'int ket bet *well* o vadezi al locomotive *marc'h du* pe *varc'h tan* ; ar bicyclette ho deuz hanvet *marc'h houarn*. An aéroplane marteze a vezo eur *c'har-nijal* evel ma vez lavaret *car nezat*, pe c'hoaz *car askellec* p'e guir en deuz diouaskell evel al laboused.

Graio goab ac'hanomp neb a garo : ne gouskimp ket neubeutoc'h. Marte-e zoken, va mignoun ker, e velimp hon tadou koz o vouse'hoarziu d'eomp en hon uvre ; ha pa vezimp dihun e stagimp adarre calonec d'al labour evit Breiz, evit ar brezounec. Ha gwaz a ze d'an neb en deuz drebon.

GWENNAEL.



SON AR BREZOUNEK

(Var eun tón koz).

Moderato

Pa oan gue-chalen ar-me-ou, Po-tred Pa-riz ouz
 va se-laou, a dao-le var-non gwall zel-lou: Ma
 tal-c'hez da gomz bre-zo-nek tiou hou hou Ni
 ya da c'hri-at did da veg tiou hou hou hou.

1

Pa oan gwechall en armeou
 Potred Pariz ouz va selaou
 A daole warnhon gwall zellou
 — Ma talc'hez da gomz brezouneg, — tiou-hou-hou
 Ni ya da c'hriat d'id da veg! — tiou-hou-hou-hou

2

Var an hent-houarn 'm euz gwelet
 Bourc'hizien na anaïen ket
 Hag a c'hrougne o lavaret :
 — Ma talc'hez da gomz brezouneg,
 Ni ya da c'hriat d'id da veg!

3

P'edon e Brest o vansounat,
 Al lakisien, o c'hrosmolat,
 Ne baouezent ket d'am goapat :
 — Ma talc'hez da gomz brezouneg,
 Ni ya da c'hriat d'id da veg!

4

Ha me respounte diaounek :
 « E pleac'h ema ar c'hevelek
 * A c'hriate d'eur Breizad he veg ?

— Tan K'rru ! etre ma tigoro, — tio-ho-ho
 E brezonek me a gomzo ! — tio-ho-ho-o

5

Hirio, varc'hoaz, evel gwechal
 En despet d'al lakisien fall,
 Keit a ma tanvin ar c'hig sal,
 — Keit a ma zaï ar mor en dro, — tio-ho-ho
 E brezounek me a gomzo ! tio-ho-ho-o

6

An diaoul biskwaz n'en deuz gellet
 Deski yez koz ar Vretouned,
 Kalz re bounner eo he spered !
 Essoc'h a ze 'vo d'eomp herzel — tiou he hel
 Ouz he skilfou hag e garniel ! — tiou-he he hel.

Great gant BLEI-LANVAU, deuz Gwened ;
 Troët e yez Leon gant PAOTR TREOURE.

FURNEZ BREIZ

Kant klevet
 Ne dalont ket
 Eur gwelet.

Tra kuz da dri neb a lavar
 Aben nebeud an oll hen goar.

Ar virionez a zo diez da glevet
 Dreist-oll d'an hini n'e c'har ket.

Diou, teir amzer en deuz an den :
 N'int ket henvel an eil ouz eben.

Goude an enkre
 E teu levenez.

Goude c'hoarzin e teu guela,
 Goude c'hoari, huanada.

Gant an amzer hag an avel
 E za peb anken var o diouaskel.

Koz a iaouank, da bep oad
An Ankou a zeuio d'ho falc'had.

Eun den krenv, eun den krevet ;
Eur baleer braz, eun den brevet ;
Eun neuer-kaer, eun den beuzet ;
Eun tenner-mad, eun den lazet

Gwel ve ganem mervel mil gueich
Eget koll va enor eur veich ;
Rak va enor, pa ve kollet,
Evit he glask n'her c'havin ket.

Ne zeuz droug na zervich da vad.

C'hoant Doue ha c'hoant an den a zo daou.

Eleac'h ma oa an erv er bloaz-man, e vezo an and er bloaz a zeu.

Mad eo beva pell :
Beva mad a zo gwell.



Respont da zivinadennoù miz Here

- I. — Diou *gistinen* geiz
Klozet mat en o neiz
A veve dizoursi
Heb trouz na goarizi.
Mez pebez planeden !
A veac'h m'oa ruz o fenn,
Pevar pe bemp bugel,
Ganto peb a gountel,
O dillad diskempen,
A freuzas al lochen
En despet d'an drein,
Hag o debras d'o lein.

- II. — Me 'm eus eur marc'h deus ar braoa
Mes ne c'hell ket chom en e za ;
Hogen, var e gein pa vezan
Heb dies pemp leo bep heur a ran.
Henor da va *marc'hik houarn*
N'en deus na ginou na skouarn

- III. — Pa deu al *louarn* vandro an ti
Livirit d'in petra rit c'houi :
Losker ar c'hi varlerc'h al laër
Hag hast affo dastum ar yer.

Mes ar c'hi, pa ves distaget
Varlerc'h al lern a gar redet !
Ha da betra staga 'r c'hillok
Mar d'eo klozet en e lok ?
Me gred kentoc'h ar *vuzugen*
A raffe kompt an divinaden.

- IV. — En eur gampr e ioa pevar gaz
Ha peb hini a azezas
Evel atao e lost dindan
Setu oa azezet varnan.
Ouspenn oa dirag peb hini
Kaz ar c'horn all, gwal hir e fri,
Ha kement-se ne ra atao
Nemet hor *pevar gazik* brao ;
Kaer a zo henvel ar c'hizier
Ne vrasa tam bet o niver.

(A. M. H., Kernilis.)

O deus havet peder pe da nebeuta teir respont :

4. — A.-M. Habasque, Kernilis. — M.-Y. Péran, Kernilis. — A. Jézéquel, Plouvorn. — A.-L. Pouliquen, Ploudaniel. — Nicolas Le Guen, Ploudaniel. — Laurent Moysan, Plougar. — Jean-Marie Normand, Guiclan.
3. — Emile Bellec, Kastel-Paol. — Marie Le Roy, Guissény. — Marie-Jeanne Abiven, Guissény. — Isabelle Milin, Plouvian. — Yvon Corre, Plouvorn. — Yvon Rest, Plouvian. — Catherine Billant, Saint-Divy. —

Adèle Mao, Saint-Divy. — Philomène Sévère, Plou-
goulm. — F.-M. Le Roy, skolaj Lesneven. — Marié-Anne
Thomas, Plouvian. — Marie Simon, Plouvian. — Mar-
guerite Le Duff, Plonevez-Lochrist. — Job Cardinal, ha
Marie Cardinal, St-Nouga. — Jeanne-Louise Mercer,
St-Nouga. — Francine Le Roux, Plouvorn. — François
Pellen, Plouguin. — Denis Marc'hadour, Plouvian.

NOTA. — *Meur a hini all o deus kavet eur respont pe
ziou, ne c'hellan ket lakat o hanviou, mes o derc'hel a
ran evel hanniou mignoned d'ar Feiz ha Breiz. Sûr
avoalc'h, divezatoc'h e kavin an dro d'o digoll en eun
doare bennak.*

*Bennoz Doue a lavaran ivez d'ar re a zigas d'in divi-
nadennou, ha plijadur a vezo ganen o lakat ma d'int
deuet mat. Ma ne vezont ket lakeat dioc'tu e kavint o zro
eur mare pe vare gant ma ne vint ket bet laket dija.*

Divinadennou miz Du

I. — Petra eo an dra-ze hag a hirra
Hag er memez amzer a verra ?

II. — Petra a gaver skanv, goude ma vije
pounner ?

(A. J., Plouvorn).

III. — Ruz pa ya,
Glaz pa deu,
Mat e gik,
Gwelloc'h e groc'hen
Mat e benn
Gwelloc'h e empen.

(H. H., Henvic).

IV. — Setu amañ eul lizer am euz bet en diziou
tremenet :

« Aotrou Rener ar Feiz ha Breiz,

» Anaout a rit va merc'h Soazik ; er skol gatêkiz eo bet
» ganeoc'h hag eur priz soken he doa bet, m'am eus sonj.
» Abaoue he deuz kendalc'het da veza eur verc'h fur,

» eur verc'h vat, sentus, seder ha laouen evel an heol ;
» neo ket goest da lavaret goal c'her da zen... Mes eun
» dra 'zo ha ne blij ket avoalc'h d'in. Ne ouzon ket pe
» emañ ar rezon vat ganti pe ganen-me. » Klevit kên-
toç'h :

Abaoue m'eo deuet eus skôl ar seurez, Soazik a zo
plac'h ar gear, e leac'h he mamm, Doue her fardono. —
Abaoue n'em eus peoc'h ebet defot beza nettoç'h ha
kempennoc'h ; n'eus hano ganti nemet eus pura, dilas-
teza ha diboutrenna.

1° Bep mintin e vezan gourdrouzet dre ne fell ket din
goalc'hi va bizach ha va daouarn... Eun traou a lavar din
var an dra-ze ! ha goasa pezh so, he breur Jean-Mar a dro
ganti.

2° Bep pred, pa deuomp eus ar park, e fell dezi e ve
goalc'het piz an daouarn ; dour fresk a ves kavet prest en
eur vasin ha dour all e kichen da jench bep an amzer ;
eur torch fresk a ves atao stag ous ar prez.

3° Peb hini hen-deus e skudell hag e loa ha ne fell ket
dezi e ve chenchet morse. — N'eus peoc'h ebet ganti defot
na lezan anezi da lakat e asiet da bep hini, eur veren
hag eur fourchetez da zebri kig ha farz. Livirit d'in hag
an dra-ze n'eo ket en em zic'hiza ?

4° Bep sadorn goude kreiz-deiz, n'eus fors pegement a
brez-labour, he ranko aspura an arbeuri, ha ma ne
c'hell ket ober en deiz, e raio en noz.

5° Bep sul, goude ar gousperou, pep hini a ranko plega
ha gorren e zillad ; ne fell ket dezi e chomfe netra taol-
distof. D'al lun e tremeno he mintinvez o vrosa, o tiboul-
trenna hag o plega dillajou ha bouteier, o renka anezo
en armeliou pe dindanno ;

6° Ha pa ves hano da vont da c'horro 'ta ! neuze e wal-
c'ho he daouarn gant savon, e kaso ganti dour klour
d'ar c'hraou, ha mar bes an disterra tamm bezel ouz tez
ar zaout, e walc'ho anezo araog komans gorro. Oh ! al
leaz paour-ze nag a breder a ves kemeret gantan ! ha
gant ar podelzou ha gant ar ribot evit o skofa ! Ret eo bet
din lakat ober eun armel evit al leaz gant stalafennou
neud orjal.

Ha kant tra all c'hoas ; ne ouzon mui pet simil he deus
kavet evit derc'hel an traou neat ha kempen.

Hen anzav a rankan avad : tinel vad zo ganti ; klanv bras e rankfed beza evit chom heb debri ar pezh a vez preparet ganti, ha ne goust tamm kerroc'h din. Hon dillad a vez propr atao ha ne ranker ket alies prena re nevez. An ti hea deus atao eun doare laouen ha tra avoalc'h e ves din dont ennan evit lakat eas va spered ha diskuiza va izili.

Setu me eta en entremar, aotrou. Livirit din petra da ober; c'hui vezo selaouet ganti muioc'h egedon-me. »

Petra lavarfac'h c'hui, lennerien *Feiz ha Breiz*? Me c'hedo o respont beteg an 10 a viz genver. Tost da zaou viz o peus evit her farda a zoare.

EUL LEVR NEVEZ

GREAT EVIT BREIZIZ, DEZAN DA VEZA SKRIVET E GALLEG :

LES PETITES INDUSTRIES RURALES & LOCALES

par F. VALLÉE, rue Saint-Benoit (Saint-Brieuc).

(13 Gwenneg gant ar mizou e ti an aozer)

Al levrig-man a zo great evit distrei tud ar mœziou da vont e kear. — Ar meaziou a zo dilezet, rag « ar meaziou, a lavar darn, ne vagont ket o zud. » Ha Yan Gouer a ya e kear da... da... da frita mizer.

Kement-ze a c'hoarvez e Breiz, re alies siouas.

« Ar meaziou ne vagont ket o zud », n'eo ket gwir, a lavar an aot. Vallée ; pell ac'hano soken. Ar gwella beva, evit an den n'en deus nemet poan e zivreach, a zo c'hoas var ar meaziou, ma karfe ar paizant lakat da dalvezout ar pezh a zo etre e zaouarn, ma karfe ar pennoutiegezh derc'hel labour e peb mare eus ar bloaz d'ar vicherourien a implijont ; ma karfent kemeret skuer var ar pezh a ves great er Wurtemberg, er Sued, e Bro-Iverson, ha klask micherious dister evit o zud, hed ar goanv.

Al levrig n'eo ket bras, mes leun-chek eo a genteliou fur, pe ma kavit gwelloc'h, a skuerious eus ar pezh a ve great er broiou all evit en em sevel.

Feiz ha Breiz

Kanpad Misiek ar Vretouped

PETRA EO BET 1910 ?

Lennerien *Feiz ha Breiz* a vez kazetennou etre o daouarn bep sizun pe zoken bemdez. Evelato lod anezo a glemm gant an dienez da « Geleier ar Miz ». Kouls-goude, evit ar pezh a delent ! Evit dic'haoui an dud-se, ez eomp da rei eun taol lagad var ar bloaz so var nez echui. Petra zo c'hoarvezet a vraz epad ar bloaz 1910 ? Petra eo bet ar bloaz-ma ! 1910, bloavezh nijadeg ! — Da genta, me gav eo bet eur bloavezh nijadeg. Oh ! ne lavar ket e ve kresket niver al laboused, ne gredan ket hen deffe an Aotrou Doue krouet re nevez. Ne velan ket e ve deuet re ar broiou all da jom dre ama. Mez, evel a lavare F. H. B. miz gwengolo 1909, an dud zo savet c'hoant ganto da c'hoari heligenta gant ar gwennilied hag an alc'houederien. Epad an anv diveza-ma ne glevet hano bemdez nemed a nijerien, a girri-nij, hag a nijadeg. — Ya, nijadeg, pe c'hoari nijal, evel al laboused bian. Ar re-ma, pa kresk o flunv, a zao var bord o neiz, a zell en dro d'ezan, a anter-zigor o diouaskell, mez ne gredont ket en taol kenta dispega o zreid ; chom a reont c'hoaz, hag e sellont adarre, hag ec'h en em zifretont, hag e nijont d'ar fin, eur pennadig-bian, var bouez traon, evit mont eb dale da dourtal ar c'hleuz pe ar vezenn dosta. Goude diskuiza, e savont hag e nijont adirre, gwelloc'h, hardisoc'h ha pelloc'h. — Evelse a ra an dud er bloaveziou-ma. An den kenta a gredaz mont var nij a yeaz keit hag ac'halenn d'ar c'har-di ; an eil, keit hag ac'halenn da anter ar park ; an trede, keit hag ac'halenn d'an ti all ; ar pevare, keit hag ac'halenn d'ar bourg. Brema, e nijont buan, pell hag huel. En anv-ma, unan a reaz 85 leo e peder heur anter ; unan all 115 leo e c'hwec'h heur, hag eb ehan. Pignat a reont beteg 3,000, 4,000, ha 5,500

troatad. Ne da alc'houeder ebed ken huel-ze. — Gwir eo, a vechou an nijerien a zisken buanoc'h eged laboused sant Per, hag a gouez a stog o c'horf d'an douar. Meur a hini zo en em lac'het er bloaz-ma.

Mez, nag an dud a zo drol ! A veac'h m'int gwest da gerzet var roudou ar gwenniled, e sao c'hoant ganto d'ober evel ar brini. En nevez amzer, pa c'hoanta bran ober he neiz en eur vezenn fao, deg bran all a gemero perz er brankou tosta. El leac'h poania peb hini d'ober e zi, e zeor dre guz da laeret bod d'euz neiz houman, broch d'euz neiz eun all, blevenn d'euz neiz eun trede ; hag e savo trouz, e savo ragach ; hag e vezo taoliou beg ; hag e vezo taoliou askell, hag e vezo taoliou pao ! Me lavar d'eoc'h, ma n'o peuz gwelet an dra-ze, n'o peuz gwelet netra ! Muic'h a dourni eged gant peder maouez vezo o tenna an eil var bleo e benn !

Evelse a ra an dud : ne ket awalc'h d'ezo en em daga var zouar ha var vor ; a veac'h pignet da rouantelez al laboused, e sao kaoz ganto d'en em ganna etre an Euv hag an douar. Ar c'hirri-nij, en amzer a vrezel, a velo e peleac'h ema an « nebourien, hag a lezo « bombou » da goueza varno ; laket e vo enno fuzuliou ha kanoliou, ha p'en em gavint gant re ar gostezenn all, e vezo trouz a zioc'h hor penn, gwasoc'h eged gant ar brini e begou ar gwez. Hon tud koz, pa veze brezel, a gave d'ezo a vechou gwelet « signalou » en oabl. Ha brema 'ta ?

1910, bloavez dour. — Ar bloaveziou diveza zo bet bloaveziou kren-douar. 1910 zo bet eur bloavez dour. Glao epad ar goany ; glao epad an eost ; glao epad an diskar amzer ; glao noz-deiz. An hentchou zo goloet a zour ; an douarou zo var neun ; ar steriou zo re leun. Gant an amzer-ze, n'oa ket possubl na vije gwaleur ebed. Gwasa zo c'hoarvezet eo e Paris, epad miz c'huevrer. Dre greiz Paris e tremen eur ster vraz hanvet ar Seine. Kaet eo gant mogeriou ledan ; dreist-hi ez euz savet kalz pont-jou mean, pe houarn. Peurliesa, e za gant he hent didrouz ha goustadig. Mez evel ar re zo-krenv o goad, eo eun tamig froudennuz a vechou, en eur zellet mad, e veler var he muzellou eur mouze hoarz anter c'hoapaüz hag a zeblant lavaret : « Diouallit... pa girin ! » — Eur vech an amzer, pa vez dievez ar Barisianed, e kresk ennhu an

dour a nebeudou, hag e kendalc'h da greski bemdez ha bep noz. Neuz ne ket brao beza pount, rag a bred e c'heller beza faoutet, freuzet ha beuzet. Digoñezet a rez ar c'hae, an dour a red a gleiz hag a zeou, hag a c'holo kement a gav var e hent. Eur vech an amzer, ar Seine a ya evelse er meaz anezhi he unan. Er bloavez 1394 ne zifuroraz nemed goude teir zizun. Er bloaz-ma, adarre, eo bet anter-« gonfountet » kear ganthi. Epad eiz dervez, an dour ne baouez da greski noz-deiz. Ar ruiou zo beuzet ar c'hirri ne c'hellont ket kerzet. An « tramway » zo stanket an hent outan.

Red eo kaout bagou da vont euz an eil ti d'egile. An dour a ya en tiez, dre an doriou pe ar prenestjer, hag a ziuuan er c'haouiou a dreuz an douar. Ar c'horzennoù houarn, great da zigas dour neat d'an tiez, pe da zistrei an dour louz d'ar ster, pe da gas sklerijenn ar « gaz » dre gear, zo leun a zour, ne c'hellont mui herzel, hag a grenv. Dalc'h-mad e veler soursennou nevez ; soken el leac'h m'eo seac'h divar c'horre ne greder ket bale hardiz, rag a greiz tout, an dour a c'hell kleuza eun toull a zindan an treid. An hentchou-houarn a zo beuzet ; an trainou ne c'hellont ken mont e kear. N'euz nemed dour ; ema Paris o vont da veza « konfountet. » — An dud, a villerou, a rank tec'het euz o ziez, e kreiz an noz a zindan ar glao, anter-zivisk, eb gellout kas ganto o arrebeuri nag a vechou o gwenneien, eb gouzout peleac'h mont, hag aliez eb tam da zrebi. A vechou, an tad-koz, pe ar c'hreg pe unan euz ar vugale, ne c'hellont ket tec'hed abred awalc'h : ema tizet gant an dour ; ober a reont eur pas faoz o treuzi eur pont pe o lamet en eur vag : emaint en dour, ha taol chans a vezo ma ne jomont ket ebarz. — Ar boan a dosta ar c'halonou : red eo en em zikour ! En oll ilizou Paris e rear kestou. An arc'hoskop e unan, dre vag pe var broad, a ya da gas aluzennou ar gristenien d'an dud emzivad. Ar c'houarnamant a zigor doriou ar Semeriu nevez laeret gantan, hag eno e kav lojeiz hiniennou euz ar re n'o deuz na ti nag aoz. Eur youc'hadenn glemmuz a zao dre ar Frans, hag a ya an ekleo anezhi dre bevar c'horn ar bed : « En han' Doue, eun tam bara d'ar Barizianed ! » — Ar gristenien a bed en ilizou, hag a c'houlenn digant Doue kaout truez ouz ar gear vraz.

Selaouet eo o fedenn. An dour a izela, kalz tud a c'hell distrei d'o ziez. Mez e pe stad o c'havont hi ! Ar mogeriou zo kosteziet ; danjeruz eo chom, rag an ti a c'hell koueza.

Ar meubl a zo kollet, rag anter zistag eo an tammou. An dillajou zo gleb-teil, hag a vreino, rag n'euz tamm tan d'o zec'hi. Var al leur-zi, an dour hen deuz lezet eur gwiskad hag a zo eur fler gantan. Peur adarre e vezo yac'h an tiez-se ? nag a dristidigez !

D'an diskar-amzer, epad ar miziou-du, ar glao adarre ne baouez da goueza. Dour ar Seine a sao a nevez ; d'an heur ma skrivan, n'eus droug ebed c'hoaz, mez ar Barizianed n'int ket dienkres. Meur a ster all a ra ar memez ardou gant hini Paris. Ar c'heariz ma tremen dreizo al Loire, zo anter veuzet. Ker gwiaz all zo aon na c'hoarvesfe e Sant-Briek e Guengam, e Montroulez. A bep tu ne glevet nemed ar memez klemmou.

Epad an eost n'euz bet nemed dour. An ed a yoa antervein o c'holo araog ma oant dournet. Ar greun ne ket bet krazet mad. An avalou-douar zo breinet en douar. Ar rezin n'o deuz ket gelllet darevi. Sevel a ra kerouegez var an traou : ar bara a zo hueleat e briz ; ar c'holo hag ar foen zo kresk varno ; ar gwin hag ar chist a ra ar memez c'hoari ; ar patatez a glevan lavaret n'o c'haver ket evit arc'hant, da viana e meur a leac'h. Ker eo peb tra ; petra virfe ? Gant an dra-ze, gounidou kal ar goanv zo chomet d'ober : ne c'heller ket mont en douar, n'euz nemed pri ha dour e peb leac'h ; n'hor ket evit mont er meaz euz an ti eb karga ar boutou ; an hentchou zo blod evel lagennou. Glao edoug ar bloaz. Trist eo an traou. Daoust hag an Aotrou Doue a ve skwiz o velet an dud oc'h ober goap Outan ?

(Kenavo miz genver).

FANCH.



Difennour bihan ar Relijion

(KENDALC'H)

Ar falz-doktor. — Va relijion-me eo ober vad d'ar re-all, ober plijadur d'an holl bepred.

An difennour bihan. — Hag ober d'ezo wela ive a-wechouigou, n'eo ket gwir, aotrou ?

P'eo gwir e rit vad, ha zoken plijadur d'ar re-all, me laka n'hellit ket gouzanv gwelet unan bennak e poan, en dienez ; ho kalon dener ho toug da rei d'ezo frealz hag.... eun dra bennak ouspenn. Kredabl, pa welit eur paour kez o klask e voued ez it raktal d'ho kodel hag e tigorit frank ho yalc'h evit rei d'ezan, o n'eo ket eur gwenneg na daou, mes peadra da ober eur predig a zoare, pe d'en em wiska, pe d'en em c'houdori... ha zoken da gaout eun draig bennak var ar marc'had evit m'en devo eun tamm plijadur. Pa welit unan bennak en anken, kredabl eo e lezit hoc'h eazamant hag ez it kalonek d'en konforti !... He pa welit tiegeziou en dienez, kozidi en ezom, bugale o tua gant an diouer a bep tra, e roit hep marc'hata kement hoc'h eus ! Brao eo an dra-ze, Aotrou ! ha meuleudi am eus da rei d'eoc'h !

Ma rit kement-se, me laka n'hoc'h eus mui eur gwenneg toull war hoc'h hano, nag eur vantel da c'holo ho tiskoaz, nag eun ti d'ho koudori ; rak, da bep kammed a rit e kavit eur bern tud hag a zo eun tamm mat reuzeudi-koc'h egetoc'h...

Daoust hag evel-se eo e rit ?—Daoust hag hen emaac'h hep gwenneg o veza m'ho peus roet hoc'h holl danvez d'ar paour, evit ober vad ha plijadur d'ho nesa ?

Mar deo evel-se, klevit m'emaoc'h mui gwall bell dioc'h al lezen gristen... Roet hoc'h eus kement ho poa d'ar paour, it brema da heul hor Zalver Jezuz-Krist.

Mes, ta ! ta ! ta ! difizianz am eus ; me zo bet tapet aliez, ha brema ne gredan mui ket buan an holl sorc'hennou flour a glevan. Ne rit ket an dra-ze, Aotrou, livirit nan d'in dioc'htu. — Evit ober ar pez a livirit e ranker beza eur zant, evel ez eus bet dalc'h-mat en Iliz katolik ; ar venec'h hag al leanezed, Aotrou, a ra an

dra-ze, ha goude beza rannet o holl feadra gant ar beorien, ez eant o-unan da zervicha anezo.

Marvat ive ez it wardro ar glanvourien taget gant tersiennou spegus, wardro ar re zod, hag e seblhit ar re a varv en ho karter ?

Petra ! n'her grit ket ? — Mes neuze ho relijion vadelezes n'eo netra ket nemet eur gomz... Ma ne rit nemet lavaret !... Ober a zo gwelloc'h !!!...

Ar falz-doktor. — Me a zo libr em zonzou !

An difennou bian. — Ha liproc'h c'hoaz marvat en oc'h oberou ! N'eo ket an dra-ze eo a fell d'eoc'h lavaret, Aotrou ?

Ne gredit nemet ar pezh a blij d'eoc'h ?... An dra-ze a zo evit lavaret e rit evel ma kirit, hag hepken ar pezh a blij d'eoc'h !

Setu aze eur vantel ledan hag a vez goloet kalz a draou ganti : golo a ra an holl falz kredennou ha kement tra direiz a zo ; gant ar vantel-ze, an den libr a c'hell en em vastari e kement loustoni a garo, a c'hello lenn zoken ar falla levriou. Gant eur seurt sorc'hen an den libr a deu da gredi ne vank netra, n'en deus netra da rei na da Zoue, na d'e dad, na d'e varaer (1) ; ker buan e kavo d'ezan ober eun dra gaer o laerez hag o laza ar re-all, e kredo beza madoberour ar Vro o skuilha teil e kalon ar vugale, e kredo rei kalz a sked d'ar wirionez o lavaret berniou gevier...

N'eo ket brao, Aotrou, klask rei da gredi d'an dud ez hoc'h libr en ho sonjou hag ez hoc'h evelato eun den eun, leal ha reiz en ho youlou !...

Alo ! alo ! n'eo ket da d'eoc'h kemeret evel-se eun doare feuket abalamou, ma tispakan ho sonjou kuzet dirak daoulagad an holl.

Setu koulskoude petra gaver er re a lavar evelloc'h ez int libr en o zonzou, a gred, war o meno, ar pezh a geront. Eur c'haz a zo hanvet ganen-me eur c'haz ; kustum oun da henvel an traou dre o hano. Hogen, an hini a lavar e c'hell kredi ar pezh a gar a lavar ive e c'heller ober pep tra hep beza tamallet e nep doare.

Kaer eo an dra-ze, ne gavit ket, Aotrou ? Setu aze

(1) Boulanger, e galleg.

liberteou hag a dalv ar boan koms anezo !... Lavarit c'hoaz hoc'h libr en ho sonjou !

Oc'h ober evel a rit, Aotrou, ec'h en em zavit a-eneb Doue hag a-eneb pep reiz vat. Lusifer, an diaoul, eo ho tad, rak hen eo ar c'henta a lavaras er baradoz : Me a zo libr va spered, me a c'hell ober ar pezh a garan ? *Non serviam !*

Ho mantel, Aotrou, a zo c'houez fall ganti !

Al laeron hag ar vuntrerien dre o micher a lavar ive e kredont hepken ar pezh a blij d'ezo ; goulennit diganto hag e welot.

— Me a gred kentoc'h, Aotrou, ho peus kavet aze evit digarezi ho puez digristen ha direiz eun digarez klevet ganeoc'h kant ha kant gwech e kement « kafe », e kement toull hostaliri fall hoc'h eus darempredet. Ya, evel-se eo, marvat. Ha brema, evel eur perrok, e tibunit ho kuden bep gwech ma klevit c'houenn en ho lerou, hep ma c'houfec'h marteze petra zo a loustoni dindan ar vantel a gemerit.

Kredit ac'hanon, Aotrou, grit ho tlead (1) ; evurusoc'h e viot ha kuit da glask hevellep digareziou.

Sellit, mar d'eo ar feiz, ar gwir feiz, evel eun tenzor, evel eur zac'had peziou aour ; mar d'eo eur falz-relijion evel eur zac'had peziou arc'hant didalvez ; ar zac'h goullo, ar zac'h leun a avel eo sac'h ar re a lavar n'o deus ken feiz, ken kreden ha ken reiz nemet ar re a blij d'ezo !...

(*Da gendalc'her*).

GLAODA 'R PRAT.

DIVARBEN ar SKOLIOU

(*Kendalc'h*)

Red eo deomp ehana eur pennadik gant an traou a zisplegomp aman divarben ar skolioù. Aoun hon deuz da skuiza hon lennerien. Divezatoc'h e krogimp adarre en hor labour, rak c'hoari a vezo c'hoaz en hor bro divarben ar skolioù.

(1) Ho tever, votre devoir, e galleg.

Diskwezet hon deuz sklear awoalc'h e zeuz etre daourn ar vugale er skoliou levriou fall, enno traou a eneb ar virionez, a eneb ar relijion ; hag an eskibien n'o deuz great nemed o dever p'o deuz lavaret d'ar gerent kristen taoler evez, heilla var o bugale, miret na vije roet dezo boued ampoezounet.

Petra ? Daoust ha ne ket eur vez gwelet labourat da zisc'hrisienna ar feiz euz eneb ar vugale ? Abalamour ma z'int c'hoaz aounik ha diskiant e c'heller lavaret dezo ar pez a gerer ha n'eo ket diez laza ar feiz en o eneb, pe da vihana, ober dezo droug braz. Kement-se ne dle ket 'n em gaout : ar gerent, ma reont o dever, a eneb ouz mevelien an droug-spered, a ziwallo o bugale ha ne lezint ket lakat etre odaouarn al levriou koundaonet gant an eskibien.

Mes evit kaout an treac'h, kerent kristen, eo red deoc'h en em unani, rei an dourn an eil d'egile. Eun dra souezuz, e bro Frans, eo gwelet ar framassoued oc'h ober o mistri, o vressa an oll dindan o zreid, o lakat voti al lezennou a garont. Ha goulskoude petra a zo a framassoued e Frans ? Eur guchen vad, mes evelato petra eo an draze e kichen niver ar gatoliked ? Netra koulz lavaret. Hag evelato ar gatoliked a zo gwasket, a zo lamet diganto o gwiriou an eil goude egile. Ha petra int goulskoude nemed tud didrouz, tud a urz vad ? Paea reont an taillou, o bugale a ia da zoudarded ha da vartoloded hag a ra o dever el leac'h ma vezont. Petra vije ar Frans eb ar ar gatoliked ? Piou a rofe soudarded ? Piou baefe an taillou ?

Mat ! p'e gwir ne c'helfe ket ar Frans mont en dro eb ar gatoliked, perak ar re man ne ziskwezont ket o dent ? Perak n'en em glevont ket evit lavaret d'ar re a ra brezel d'ezo : « Awoalc'h paotred ! var zigarez ma zomp tud didrouz, ni a zo goasket, ni a zo great ker gwaz deomp hag a vije great gant an Turked hag ar Chinoaed ; awoalc'h ! Ni hon deuz nerz ivez hag a c'helfe diskwez hon nerz var ho kein ; ni ne reomp droug da zen ; lezit eta ac'hanomp e peoc'h ; ni a labouro, ni a harpo hor bro gwella ma c'hellimp ! ne c'houlennomp nemed beza lezet da adori, da zervicha hon Doue evel ma plij ganeomp, da zavel hor bugale er skoliou kristen, skoliou great

ganeomp, paet ganeomp, ne goustont gwennek d'ar c'houarnamant.

Setu aze petra dleoc'h da c'houlenn, kerent kristen, hag eb ehana ; « goulennit hag e vezo roet deoc'h », a lavar deomp an Aviel. Aman ive e c'heller lavaret an dra-ze. Hag o c'houlenn kement-se ne c'houlennoc'h nemet eun dra ho peuz gwir da gaout. Rak-se eo eun dever evit an tadou a famill en em glevet, en em voda oll evit difen o bugale, difen ar skoliou kristen, hag el leac'h ne vezo ket a skoliou kristen e taolint evez evit na vezo desket netra fall d'o bugale.

Ia ! en emglevet a zo red. Unan ebken ne c'hell netra. seulvui e vez soudarded en eun arme, seulvui e vez krenv an arme-ze. Selaouit eun istor. Eur verc'h, eun devez, a ioa o vont dre eun hent a gasse da eur menez, hag ec'h emgavaz gant eur roc'h distaget dioc'h ar menez hag a stanke an hent a-bez. Ar beachour nec'het oll a glaskaz ruill ar roc'h ; mez kaer hen doa poania, ne c'helle ket dont abenn euz he labour. Hag e chomaz eno teval he benn. Dont a reaz eur beachour all, hag eun all, hag eun all c'hoaz ha pa oent niveruz awoalc'h ec'h en em lakejont gant ar roc'h hag e c'heljont e ruill euz an hent ha kendalc'her o beach.

O ma vije oll dadou a famill hor bro a-unan, ne c'helfe harpa netra outo. Guelit labourerien ar c'hearjou. Penaoz a reont ? En em lakat oll a-unan da c'houlenn ar pez a gav dezo o deuz gwir da gaout, ha ma ne vez ket roet dezo o goulenn, ec'h ehanont da labourat, e reont grev, ha pa ne vez ket direzoun o goulennou, o devez an treac'h. Gwelet ho peuz pegen nec'het eo bet n'euz ket pell ar c'houarnamant gant paotred an hent-houarn. Ma vije bet grev var an oll linennou hent-houarn ne zea mui netra en dro er Frans, hag ar c'houarnamant hag ar c'hompagnunesiou hent-houarn a vije bet red dezo plega. Ne lavaran ket deoc'h ober evel paotred an hent-houarn a drouc'he an neud orjal, a rea droug braz dre valiz. Kement-se n'eo ked mad, ne c'heller ket ober traou evelse.

Dre-ze, avad, e veloc'h petra c'hell an dud pa vezont a-unan. Er Frans, evel m'ho peuz klevet aliez lavaret, ar bobl eo a zo roue. Piou eo ar bobl ? C'hwit, tadou a famill,

Bezit eta, roue, savit ho mouez oll a-unan hag an treac'h a vezo deoc'h abred pe zivezad. Arabat goulenn traou direzoun, mes ebken traou ho peuz gwir da gaout. Mad, gwir ho peuz da ober euz ho pugale kristenien, hag ar re a c'hoanta nac'h ouzoc'h ar gwir-ze ne zint nemed framasoned divergount, tud kriz, bleizi henvel ouz an impalaer Neron hag an impalaered all a lakea gwechall ar gristenien d'ar maro.

Ia, savit ho mouez ; ma na vez ket roet deoc'h ho koulenn dioc'htu, savit hueloc'h ho mouez, eb aoun, eb fall-galouni morse, hag ar framasoned a ielo var o c'hiz hag a lezo ac'hanoc'h u peoc'h.

I. U.



Kenvreuziezh Missionerien an Itron-Varia KONSEVET EB PEC'HED

(Kendalc'h)

An Aotrou a Vazenod a skrive : « Ma c'helfen dastum eun nebeut beleien hag o diche gwir garantez Doue hag an nesa en o c'haloun, hag o diche an ioul krenv da zavetei o ene ha da labourat a zevri da zistrei an eneou da Zoue ; neuze, emezan, e c'helfen louzaoui ar gouliou great d'an Iliz hag ober kalz vad en dro d'in. » Kementse a ioa c'hoantaat eur genvreuziezh labourerien evit skigna an Aviel, ha Doue ne zaleas ket da rei dezan ar mein kenta euz an ti en doa c'hoant da zével. E parrez Arles oa eur c'hure iaouank mignoun bras da Eujen a Vazenod hag a rea kement a c'helle evit mad ar relijion en e barrez. An Aotr. a Vazenod a skriv dezan evit hantera gant e vignoun ar sonjou hen doa. Al lizer a zo kaset eb sinatur. Kure Arles goude beza lennet al lizer a lavar « N'euz nemet an Aotr. a Vazenod a viche gwest da sonjal kement all ! » Hag eul lizer a deu dizale d'ar misioner kalonek hag a lavar dezan e vezo an Aotr. Tempier (Kure Arles) eñrus bras da veza e genta misioner. D'ar 25 a viz genver 1816 an daou vignoun a zo

unanet, hag etrezo ne vo morse torret al liam a garantez a zo koulmet hiviziken etrezo. Heb dale, beleien all, sentus ouz galv an Aotr. Doue a deu evito evit mat.

Eun ti a ioa digor d'o digemeret. An aot. a Vazenod en doa prenet evit-se eul loden euz kouent koz ar C'harmelitezed, e Aix. Al lojeis a ioa dister bras, an ti a ioa en em doare fall ; gwelloc'h oa evelato eget kraou Bethleem hag ar visionerien iaouank a gavas kaer awoalc'h o falez rag dizale e kemerjont evit reolen ar c'homzou. « Kaset oun bet gant Doue da brezek an Aviel d'ar beorien ; *evangelizare pauperibus misit me* ». En ti-ze en em roont d'ar beden ha d'ar binijen ; ha brema p'o deuz komprenet mat pegen bras eo al labour o deuz da ober, e stagont gantan. Doue a ro e vennoziou d'e zervicherien ; ar visionerien o deuz al levenez dispar da welet kals eneou distroët da Zoue dreizo. Hag an Tad a Vazenod a brezeg d'e visionerien dre ar skouer euz e labour ; red eo dezan chom heb prezeg, rag teuler a ra goad leiz e c'hinou : n'euz fors heb damanti da boan ebet e tiskouez d'an holl petra dle beza eun abostol gwirion.

Red oa d'ar visionerien-ze beza eur gwir familh evit gellout chom bepred unanet : goude beza gwelet eun nebeut bloaveziou pebeuz nêrz o doa, e c'houlennjont digant o Zad eur reolen a vuez a liammo anezo gant liam Santel ar Relijion. Euz eur mision d'eben eo e skrivas an Aotr. a Vazenod reolen ar genvreuziezh, ar reolen-ze a vezo heb dale aotreed gant seiz Eskob ha gant ar Pab e-uuan.

Er reolen-ze hag er c'hemennadureziou a deu d'he heul, an Tad a Vazenod a lavar eo savet e genvreuziezh dreist pep tra evit kelen ha distrei da Zoue ar beorien. Dre-ze ar visionerien a labourou a zevri er misionou, er retrejou, er c'hatekismou ha var ar meaziou da genta.

Doue peulies a ne zizolo nemet a nebeudou d'e zervicherien brasder ar gefridi a ro dezo da gas da benn. Kement-se a c'hoarvezas ive gant an aotrou a Vazenod. E sonj kenta oa labourat ebken er Provans hag e relijiuzed o doa kemeret an hano a « *Oblated sant Charles* », pe a visionerien ar Provans. Deuet oa goulskoude ar mare da c'houlenn aotre ar Pab evit ar reolen-buez o doa kemeret. Seiz eskob, an Aotronez de Beausset-Roquefort, arc'hes-

kob Aix ; Charles a Vazenod, eskop Marseil ; Miollis, eskop Dign ; Arbaud, eskob Gap ; de Richery, eskop Frejus ; Chaffoi, eskob Nim ; Colonna a Istria, eskob Nis o doa aotred, ervez an doare, ar Genvreuriezh e doa great kement a vad epad dek vloaz en o eskoptiou. Neuze an aotr. a Vazenod a yeas da Roum er miziou diveza euz ar bloaz 1825 evit goulenn digant ar Pab digemer e genvreuriezh etouez ar familhou relijiuzed aotret gant an Iliz katolik. Da genta sekretour « kongregasionou an eskibien hag ar relijiuzed » a respontas ervez ar c'hiz, goude beza lennet reolen a vuez ar genvreuriezh neves : « Laudandæ » « red eo rei meuleudi d'ar reolen-ze. »

Ha kredabl an traou ne vichent ket eat larkoc'h p'anefe ar Pab Leon XII a zisklerias n'oa ket awoalc'h rei meur « Non laudandæ, sed approbandæ, — n'eo ket awoalc'h meuli, red eo ouspenn aotreat ar genvreuriezh ». Hag ar Pab a reas gourc'hemenn d'ar Kongregasion sellet pisoc'h ouz ar reolen a ioa bet diskouezet dezo. Tri gardinal, ar c'hardinal Paeca, ar c'hardinal Pedicini, hag ar c'hardinal Pallota a oe karget gant ar Pab d'ober an examini euz ar reolen-ze. Hag an dra-ma a ziskuez pegement ar Pab Leon XII a ioa douget evit an aotr. a Vazenod : ar Pab a roas e bluen e unan d'ar belek hag a reas dezan skriva hano an tri gardinal hag e pelec'h oa o ziez e Rom. An tri gardinal gant an aotr. Marchetti, arc'heskob Ansyre, a stagas gant al labour ha nebeut deiziou goudeze an aotr. a Vazenod a skriva d'e vugale : « En em laouennañt ganen hag hanterit ganen va levez : Hon Tad Santel Leon XII, a zo brema var kador Sant Per, a zo plijet dezan rei e aotre d'hor genvreuriezh, ha d'hor reolen a vuez. Penaoz e c'hellimp-ni trugarekaat awoalc'h an aotrou Doue ? »

— An aotreadur-ze a oe roet d'ar 17 a viz c'huevrer 1826 hag da genver an deiz-ze e zeuz eur gouel bras gant an Tadou misionerien. Ouspenn an Tad Santel Leon XII en doa staget ouz ar Genvreuriezh neves kals a vadou spiri-tuel, hag hen e unan eo a roas dezi an hano a zoug abaoe : « Misionerien Obladed ar Werc'hez Vari kon-sevet eb pec'het. » — Lizer ar Pab evit an aotreadur-ze a zo euz an 21 a veurz 1826.

Da genderc'hel.

F. M. M.

Boutou-Nedelek ar Besketourien

Ar « Stereden-Vor » a vranskelle var he eor dre nerz an tarziou e porzik Sant-Eden. Daou zen, daou besketour a ziskennas var an aod, gwisket ganto o « zirach », o dillad Ier melen hag o boutou koat lerennet mat. Mikael oa hag e vab Yannik o doa mennoz da vont var vor da besketa, an deiz-ze derc'hent Nedelek 19...

— Iannik, va mab, ia ! deomp da besketa ; ar pesket, meilled ha lenvedeg a grogo mort enn higenn gant an amzer-ma ; derc'hent Nedelek na viro ket ouzomp d'ober eur besketerez vat ; distro e vezimp m'echans evit oferen ar Pelgent.

— Va zad, eme Yannik, re gris eo an amzer ; gwelit pegen pounner eo an avel ha du-hont sellit pegen tenval eo ar goabren ; ar barr-ze a c'hell ober drouk deomp.

— Petra ? Eur martolod evel-dout-te en deuz aoun ? Bez dinec'h, Yannik, ar « Stereden-Vor » a zo eur martolod mat ; meur a varr-amzer e deuz gwelet ha na ped gweach an tarziou o deuz roet dezi o fok c'huero !

— Gwir ' livirit, va zad ; deomp ; ha ra blijo gant Itroun-Varia a Gerzeant, ar wir stereden vor, rei deomp eur besketerez vat hag eun dizro eurus evit hor c'hallanna !

O tiviz evelse, Mikeal hag e vab a ioa en em gavet demdost d'o bag. En eun lam emaint enni. Yannik gant nerz e seitek vloaz en deuz buhan savet an eor.

— Va zad, emezan, diskrog eo an eor ; emamp dirap !

— Mat ! me zalc'h ar warren hag ar skout ; hiss brema ha chach mort ganes...

— Great eo, eme Yannik...

Hag ar vag a lam var an tarziou dirollet a vez klevet o krozal du-hont var reier Enez-Meur hag ar C'hernik gant eun trouz spoutus. Div heur eo goude kreisdeiz... Doue ho tiouallo, pesketourien baour, ha c'hui, Itroun-Varia a Gerzeant, hentchit anezo !

* * *

An noz a deu buhan e miz kerzu. Enn he loehennik : toet gant soul, Katell e deuz aozet ar pred dister a roio

d'ho c'hoan d'ar pevar grouadur a zo bodet en dro d'an oalet mogedus e tev ennan eun tam bizin seac'h : rag ar c'hoanvez a zo kris d'ar beorien hag an dienez a zo deuet buhan ; keraouez a zo var bep tra. Ha Katell a zonzj er vugale a zo enn he c'hichen hag e tal gwele e vam an diveza a gousk sederik enn e gavel.

— Mam 'me, a c'houl'en Perik, eur paotr a drizek vloaz, liri'o 'ma ar Pelgent. Mont a rin, mam 'me ?

— Va mab paour, ni zo re bell diouz an iliz hag an hentchou a zo ker fall ; kleo an amzer a ra !

— O mam, me n'oun bet tro ebet c'hoas er Pelgent, a lavar Sezaik, great ganthi e Fask kenta : va list da vont gant Yvon hon amezek, me a vo fur !

— Ia, mam, eme Loik, me ielo ive ! Ha Loik en deuz brema seiz vloaz hanter.

Mac'haridik, he fenn soublet ne lavar ger : sonjal a ra, ha meur a dra a ruill dre he spered digor kenan evit he oad : rag ema brema krog enn he seiz vloaz. Hag o tiz-trei euz ar skol gant ar re all e deuz gwelet e tal ar c'hoc'hi staliou gant braoigou a reas avi dezi : hag er skol e deuz klevet an dimezell o lavaret e teue ar Mabik Jezuz da zigas a bep seurt traou mat d'ar vugale fur epad noz Nedelek. Ha Mac'haridik a sonj enn traou-ze holl.

— Mam, emezi, petra zigasso deomp ar Mabik Jezuz evit hor c'halanna ?

— Kleo hon-ma ! Ni a zo re baour, va merc'h keaz !... Ar re all a stagas neuze da ziyiz ive ha da lavaret petra rafe ar muia plijadur dezo !

Hag er meaz an avel a groze gwassoc'h gwas : Katell a skrijas : eur barr a ioa deuet spountus.

— Bugale, emezi, it d'an daoulin ha lavaromp hor Pater evit ho tad hag ho preur, rag enkrezet oun divar o fenn !

Ar Bater a zavas sioul varzu an Aotr. Doue, hag enn e gavel Fransaik bihan a vuse'hoarze ouz an Elez...

Ar vugale brema a zo eat d'o gwele : lavaret zo bet dezo e vichent dihunet evit mont d'ar Pelgent.

* * *

— Amenn 'ta ! Yannik, a lavare Mikeal gant eur vouez strafuillet holl.

Ar vouel bras a gouezas hag ann « trinquet » a oe « filet ». Hag a benn d'an avel, ar « Stereden-Vor » a enebe ouz ar mor kounnaret, ar vlezuez iud e deuz lounket kement a vartoloded hag a re all ha lakeat kemen a gaony enn tiegeziou !...

Poulzet gant an avel ha ruillet gant an tarziou bras, ar « Stereden-Vor » a ioa brema demdost da Roc'h-Haro, hag an noz a ioa deuet.

— Va zad, en doa lavaret Yannik, gwelloc'h ' viche distrei...

Mes ne c'hellint mui brema : eun taol spountus en doa diskaret ar stur : ha dirazo Mikeal hag e vab a vele ar garrek vras sklerijennet gant tour-tan Enez-Vaz.

— Va zad, taolit evez ! a ioue'has Yannik.

Re zivezad oa ! Ar « Stereden-Vor » a skoe ouz ar garrek hag a ioa bruzunet raktal !

An dalm-ze e doa great da Gatell skrija e doa kollet ar « Stereden-Vor » !

* * *

Ar vugale a gousk c'huek : o uvreou a zo kaer diouz ar muse'hoarz a zo var o muzellou : n'ouzont ket, bugale geiz, int minored ! — An avel a groz gant eur vouez skiltrus enn eur sutal e tal an nor diskloz. Katell a gren ; pedi ' ra kalonek. O nag hir eo an noz evithi ! Selaou a ra ha ne glevo ket trouz boutou he fried hag he mab : trouz ar mor, klem hirvoudus an avel a deu hebken beteg enni !

Abred mad, Katell a zo var an aod : bag ebet : « Va Doue, emezi ! Ha kollet e vichent ! O va Doue ! » Ha setu e kichen eur roc'h daou re voutou : O anaout mad a ra, paour keaz Katell ! ha ganto ema an adrenv euz ar « Stereden-Vor » ! Intanvez eo Katell ! ha gant pebeuz rann-galoun e tastum ar relegou-ze evit o digass d'an ti !

Ar vugale ' zo dihun. — « Mam ! emezo en eun taol, petra zo enn hor boutou ; petra zigas deomp ar Mabik Jezuz ?

— Sellit, eme ar vam enn eur vouela dourek, gwelit, emezi !

Ar vugale o deuz komprenet, ha daoulinet e lavaront an De Profundis ! Doue 'ra bardouno d'an Anaoun !

François Roc'h-Haro.

PEHINI EO AR SOTTA ?

(MARVAILH)

Tri genvroad da Fanch ar Peul ginidik eus Kerskouarnet, demdost da barrez Lansebezet, o zri mignou-ned bras (ha perag ne veffent ?) A ioa eat da ober eun dro bourmen var ar ar maeziou.

Antoun, Gregor ha Jacob oa ho hanvioù.

Setu mac'h en em gavas ganto mear koz Lansebezet, o saludas gant eur mousc'hoarz iaouen.

Lorc'h bras a savas ennó ous he velet ken avizet mat en o c'henver, hen, an den brudet dreist peb hini evit e furnez.

Mes prest e savas tabud etrezo evit gouzout pehini anezo hen doa c'hoanteat ar mear saludi.

— Ouzin-me eo en deus sellit, eme Antoun.

— Nan ouzin-me eo e ze, a respountas Gregor.

— Hini ac'hanoc'h eme Jacob; me eo a zo bet anavezet gantan.

Hag o veza ne c'hellent ket en em glevet, e rejont o zoni da vont da c'houlenn digant ar mear e-unan. Gwelloc'h eget den, hen a e'helle difuilla ar gudemr.

Hah o zri hag hi a mont da vit an aotrou mear..

— Pehini ac'hanomp, emezo eo o peus saludet ?

— Ar sotta, sur, eme ar mear.

Lorc'h a zavas adarre er baotred. Peb hini anezo a gredas e oa bet an honor dezan; rag, var o meno, peb unan en em gave sottoc'h eget egile. Eun dra dibaot da velet eo, ha roues an dud a glask beza lakeat diskiant. Mes evit an honor da veza saludet gant an aotrou mear, petra ne raffet ket ?

— Me, avat, eme Antoun, eo ar sotta.

— Salokras, eme Gregor, fasia rit, me eo ze.

— A gav deoc'h eme Jakob; n'em aoc'h ket ganti. Heb mar ebet, me eo ar sotta.

Hag adarre debat etrezo; hag adarre komzou flemmus. O veza ne c'hellent ket en em glevet, e pedjont an aot. Mear da varn etrezo.

— C'hui, emezo, a zo skiantek; lavarit deomp, ac'hanomp hon tri pehini eo ar sotta.

— Ne c'houlennan ket vell, eme ar mear; mes, red eo deoc'h konta oc'h histor peb hini d'e dro.

* *

Antoun a gomansas.

Edon gant va hini-goz, hag e tivizemp divar benn ar boan hor boa o veva. — « Emaoun koz dija, a lavaren dezi, hag abenn nebeut ne c'hellin mui na labourat na gounit va bara. » O velet va maouez ankeniet gant va c'homzou, e lavarjon dezi n'he doa ket a leac'h da veza doaniet, ez ajen da laeres kentoc'h eget hen lezer en dienez.

— Mont da laer, emezi; an dra-ze a zo difennet.

— Difennet gant piou ?

— Sur eo difennet; hag ar re a ves tapet a ves gwall dizet. An archerien a devio hag a lakaio ac'hanout er prizoun.

— Er prizoun ! Ha goude ? Eno em bezo bevaas ha lojeiz evit netra !

— Ia ! mes outspenn ar prizoun zo ; ar re a ya di a ves merket.

— Merket penaos ?

— Merket gant an houarn ruz var o zal; hag an dra-ze a ra poan.

— Poan a ra ! oh ! ne ra ket kals.

— Ne ra ket kals ! eo, poan vras ! an houarn ruz var an tal !

— Ma ! ne gredan ket. Gra eun esa varnon evit ma vo gwelet.

Ne falveze ket ganti hen ober; mes red e oue dezi; me gavas an tu d'ober dezhi senti. — Ia, aotrou mear, evelse e oue great; hag evit ma ouezoc'h mat eo gwir ar pez a lavaran, sellit ous va zal. — Hag Antoun ho fenna e voned ha diskoues eur mellad kleizen hen devoa ekreiz e dal.

— Gwelet a rit breman eo me ar sotta !

— Evit sur, sot avoc'h out bet. Mes, gwelomp ar re all.

* * *

Gregor a gomzas d'e dro :

Er mintinvez-ze ne baden ket gant ar boan dent;

klemm a rean, hirvoudi, dont ha mont heb kaout e neb leac'h didorr d'am foan. Va gwreg, a zo eur vaouez a skiant a lavaras din : kers da vit an tenner dent, hag e tenno an hini a ra poan did.

Ha me da vit ar marichal, a gemeras e durkez, a dennaz va dant fall hag a c'houlennas diganen pevar gwennek evit e boan.

Laouen edon o tont d'ar gear.

— Penaos ec'h en em gaves breman, a c'houlennas diganen va Jannett ?

— Brao-bras, eme ve.

— Ha pegement az peus paët ?

— Pevar gwennek.

— Pevar gwennek, amboubal ! Mes, laëret out bet ; an dra-ze ne dalve ket ouspenn eur gwennek. Gant pevar gwennek ez oa tra avoalc'h evit tenna kement dant az peus en da c'harvagnou ! Pevar gwennek evit eun dant hebken ! Red eo beza diskiant evel ma 'z out evit paëa eur seurt priz ! Kers buhan da di an tenner dent, ha goulenn ma vo rentet did en dro an tri gwennek hen deus laëret.

Ha me, lostek evel al louarn kabestret gant eur yar, ha dizrei da di ar marichal. Konta 'rejon dezan gourdrizou va hini-goz hag her pedjon da rei din en dro an tri gwennek.

— Morse, emezan ; n'em eus goulennet nemet ar pris just.

— Eo, a lavaran did, rei 'rankes anezo. Ne gredin biken distrei heb va zri gwennek ; Jeannett 'zo en hegar hag a lavar gant pevar gwennek e oa tra avoalc'h evit tenna kement dant am eus.

Mes ar marichal a oa ker pis ma ne reas van ous va c'hlevet. Kement-ze ous va gwelet ker glac'haret, e galon a oue tenerreat hag e lavaras din :

— Sell ! evit diskoues did em eus c'hoant da ober pli-jadur ez oun prest da denna did kement dant ar peus evit ma vo kountantet da c'hwreg. Mes, didalvez eo did goulenn da dri gwennek ; n'o roïn ket.

Eus va holl galon e trugarekjon an tenner dent eus e vadelez hag e tennas din va holl dent an eil goude egile. N'em eus mui hini an disterra ; sellit !

Ha Gregor a ziskouezas e garvagnou goullo.

— Ac'hanta ! aotrou mear, emezan lorc'hus, n'eo ket gwir, oun sot !

— Gwir eo, eme ar mear. Klevomp breman Yakob.

* *

Edon, eme Yakob, gant va anter-tiegez er gambr a sko var al liorz, tostik d'ar c'hraou-saout. Epad ma tivizemp dizourzi, al leue bihan a en em zistagas hag a denas da fringal var an ervennoù karotez nevez hadet. Ha me lavaret da Gatou :

— Kea da staga al leue.

— Oh, ne zin ket, emezi ; kea da unan.

— Did-te eo senti ; kerz da staga al leue !

— D'ar goaz eo soursial dious al loened bras, n'eo ket din-me eo.

Hag e chomjomp pell da zebat ; hini ac'hanomp ne felle gantan plega. Mall oa goulskoude ober eun dra bennak, rak al leue, e keit-ze, a yea hag a deue, a lamme hag a zilamme, a ehane bep ar mare evit fringal gwasoc'h goude-se. Mennout a rea frigasa tout al liorz. Evit kloza an debat, e oue klevet etrezomp e rankje staga al leue an hini a lavarje ar ger kenta.

Hini ac'hanomp ne lavaras mui grik.

Va hini-goz ne zaleas ket da veza nec'hetoc'h eget-hon. Santout a reas ne c'helje mui pell derc'hel he zeod en despet da gement a rea. Evit ne dije ket da staga al leue, ez eas kuit.

Setu me va unan. Al leue a gendalc'he da ober sankou el liorz ha me lavare ouzin : kea atao ; gra a giri ; n'eo ket me eo da stago, rag me ne lavarin netra.

Etretant e teuas va breur-kaër en ti, hag a lavaras d'in :

— Deiz mat, Yakob ! Penaos a res 'ta ?

Me ne respontjen ger ; ha setu hen souezet.

Ober a reas meur a c'houlenn all diganen, mes me jome ker sioul a tra. Va breur-kaër a gomanse kemeret aoun.

— Pebeus gwall-zarvoud, emezan ! Deuet eo da veza bouzar ha marteze mud. Mes, komz 'ta, va mignoun !

N'oa ket dievez avoalc'h evit hen ober, anez-se em bije ranket staga al leue.

— Mes, e pelec'h eman da c'hwreg ? Ne man ket aman ? e pelec'h eman va c'hoar baour ?

Ger ebet atao.

— Klav eo ? Maro eo ?

Grik ebet.

— Ah ! breman e komprenan, a lavaras hen glac'haret ; den fallakr ma'z out ! Te peus lazeta anezi !

Hag e tec'has en eur yudal gant e zizesper.

Ne zaleas ket da zistrei, ha gantan an archerien a ise muia ma c'helle ouzin.

— Krogit ennan, kasit anezan d'ar prisout, krougit anezan ; lazeta en deus e wreg, lazeta en deus va c'hoar baour !

Gant eur ger em bije gallet kas va breur-kaer hag an archerien da zutal brulla da venez Arre, mes gwelet a rean al leue ebars et liorz, hag e sonjen : ma lavares eur ger e ranki staga al leue, rag-se ne leverjon netra.

Kaset e ouen d'ar prizoun, ac'hano d'al lez-varn. Henez a oue eur prosez brudet. Kondaonet e ranken beza p'e gwir ne lavaren grik evit en em zifenn ; ar setans a oue douget : « Muntrer da wreg, te vezo staget a bouez da c'houzoug ouz ar groug ha lezet outi ken na varvi. »

N'oa ket dies din goulskoude rei sklerijen d'ar varnerien ha diskoues ez oan ken divlam hag ar c'hrouadar nevez ganet, mes neuse em bije ranket staga al leue. En eur evesat mat var va zeod e c'helljen jom heb lavaret netra.

Antronoz oa an deiz evidon da veza savet ouz ar groug. Kear Lansebezet a oa bodet en dro d'ar peul. Red oue din treuzi ar foul-ze a lavare varnoun eur bern maffioziou : « Den kriz ! mez ar vro ! muntrer divalo ! boued ar groug ! Mall eo e teuffe da deod er meaz eus da c'hinou, keit hag hini ar c'hi ! »

Hag e pignjon var ar chafod. Ar bourreo a lakeas ar gorden endro d'am gouzoug. Dija e zanten var va c'hroc'h en ar skoum var rinkl a die starda ha kloza va c'hornailien. Ne rean van ebet, rag sonjal a rean atao : « Ma lavares eur ger e ranki staga al leue. »

Edot o vont da chacha var ar gorden, pa oue klevet eur vouez skiltrus o lavaret :

— Ehanit, na dit ket larkoc'h, arabat krouga anezan, me n'oun ket bet lazeta gantan p'e gwir e velit ac'hano beo.

Va hini-goz eo a gomze evelse. Klevet e doa ar peza c'hoarveze hag e oa deuet da velet. Ken strafuilhet oa m'e devoa ankounac'heat al leue.

Me n'em boa ankounac'heat netra. Kerkent ha ma oue diskroget diouzin ez ajon var bord ar chafod da grial d'ezi :

— Kers da staga al leue.

Setu aze va histor, aotrou Mear, c'hui varno er giz ma keroc'h.

— N'eus leac'h ebet da veza nec'het, Jakob, te eo brasa fur-zod am eus gwelet morse.

Tennet divar Almanag « le Pelerin » gant

FANCH AN TI-ALL.

Divinadennou miz Kerzu

I. — Me 'meuz anavezeta eur prophet

Hag a zo bet diou vech ganet ;

Kerkent hag eil-ganet, heb dale,

Etouez an dud e teu da vale ;

Mes ne ouezer ez eo prophet.

Nemet pa vez e vouez klevet

Pe, var e benn, gwelet eur gurunen.

Piou eo hennez, me her goulenn ?

II. — Petra veler o pignet en nenv

Ha n'hen deus na korf nag ene ?

III. — Bras ha doun evel eur bouteg

Ha bouteg goulskoude n'eo ket ;


Plat ha ledan evel eur billig

Varnan ne ves ket great a gram-poezig ;

Treuzet gant eur c'hleze hir ha lemm

Ma n'am c'hredit, diouallit ho-tremm.

NOTA. — Ar respont da zivinadennou miz du ha miz kerzu a vezo kavet e niveren miz genver.



GOUEL NEDELEC

VAR DON : *Christe Redemptor.*

I.

Canomp hirio gant levenez,
Rag evidomp-ni eur Werc'hez,
He deuz laket eur mab er bed
O veza mam ha gwerc'h bepred.

II.

O pebez bugel burzuduz,
Mab d'an Aotrou Oll: C'hallouduz,
A zisken euz ar baradoz
Evit dont d'hor gwelet fe-noz.

III.

Al loar, an heol hag ar stered,
Ar mor, an douar en deuz grêt,
Crouet en deuz tud hag elez,
D'he vam e roaz ar vuez.

— 375 —

IV.

Araoc an amzeriou eo bet,
Pa ne vint ken e vo bepred,
Ha goulscoude war he barlen
Mari, bihanic en dougen.

V.

He balez a zo en envou,
Da lez en deuz eledigou,
Hag e c'hourvez en eur c'havel,
En eur c'hraou digor d'an avel.

VI.

Divent eo he rouantelez,
Dreist niver he binvidigez,
Hag e teu paour war an douar
Da vervel war groaz ar c'halvar.

VII.

Crouaduric c'hoaz ken dister,
Gant Joseph hag ho mam dener,
Jesus gwir den ha gwir Doue,
M' hoc'h anavez evit roue.

VIII.

Me hoc'h ador a greiz calon,
C'houi zo deut er bed evidon ;
Va zelaout, Doue bugel :
Grit m'ho carin beteg mervel.

GWENNAEL.

Ch. Bernard Cozart.



NOEL AR VUGALIGOU

Noz Ne-de-lek o ka-è-ra noz Mab Dou-e d'euz
 ar ba-ra-doz zo dis-ken-net en eur c'hra-ouik
 E furm an dou-sa-bu-ge-lik Hag e c'halv ar
 vu-ga-li-gou Da rei de-zan ho c'ha-lo-nou.

1.

Noz Nedelek, o kaera noz,
 Mab Doue, d'euz ar baradoz,
 Zo diskennet en eur c'hraouik,
 E furm an dousa bugelik. —
 Hag he c'halv ar vugaligou
 Da rei dezan ho c'halonou.

2.

He gavelik a zo kalet,
 Var ar c'holo e ma kousket
 E kreiz etre daou aneval,
 En eul lochik du ha tenval ! —
 Guelloc'h kavel, bugaligou,
 A c'houlén en ho kalonou.

3.

E kichenik he vam Mari,
 Jezus a gren he izili,
 Rag an amzer zo kriz meurbed,
 Ha n'euz ket na tan nag oaled ! —
 Evit toma he vemprouigou,
 He c'houlén tan ho kalonou.

4.

Gant kanaouennou dudius
 En honor d'ar Makik Jezus,
 An Elez o deuz divunet
 E kreiz an noz ar bastored. —
 Evel kan Elez an Enyou
 E kar kan ar vugaligou.

5.

Ar bastored zo diredet
 Da zaludi Salver ar bed :
 Gant eur galon pur ha santel
 Ec'h adoront an Doue-Bugel. —

D'an dud pur 'vel bugaligou
 'Vo rouantelez an Envou.

6.

E bolz an Env, eur stereden
 Lugernus evel aour melen
 A sclerijenn an tri Roue
 Evit mont beteg Mab Doue. —
 Lezen Jezus, bugaligou,
 Eo stereden hon enéou.

7.

D'he zelou-mad, an tri Roue
 A ginnig d'ar Mabik-Doue
 An aour, ar myrrh hag an ezanz,
 Gant ho feden leun a fisianz. —
 Gwir denzor ar vugaligou
 Eo furnez en ho c'halonou.

8.

Mez, dirag kounnar Heródez,
 Gant sant Joseph hag ar Verc'hez
 Ar Mabik Jezus zo tec'het,
 Anez e vije bet lazé ! —
 Diouallit mad, bugaligou
 D'hen laza dre ho pec'hejou.

9.

Kalz a innosanted santel,
 Evit Jezus an Doue-Bugel,
 Digant ho mammou diframet,
 Eb truez a oue bourrevet ! —
 Evit Jezus, bugaligou,
 Nep a varv, a ia d'an Envou.

10.

Evel er c'hraouik, hor Zalver,
 Er Zacramant euz an Aoter
 Zo dous ha leun a vadelez :
 Hag ar pez a c'houlén bemdez
 Eo, ma feui ar vugaligou
 D'hen reseo en ho c'halonou.

11.

Promettit d'ar Mabik Jezus
 Beza bepred fur ha sentus
 Evit prepar mad ho kalon
 D'hen reseo er gommunion. —
 Ha korf Jezus, bugaligou
 Ho kasso beteg an Envou.

Breiz-Izel, Kaerra Bro !

Var eun tòn Auvergnat : *Les Moutons.*
(Marius VERSEPUY).

*Kinniget d'hor breudeur
Bretouned Angers ha Trélazé.*

Lento, legato



O Breiz I - zel, O kaer-ra bro ;

acceler.




O Breiz I - zel, O kaer-ra bro En da he -



nor me ga - no lon le no, lon le noo lon laa

string°



En da he - nor me ga - no

1

O Breiz-Izel, o kaerra bro (*bis*)
En da henor me gano ; — *loulou, lonlounou, lonlaa. (bis)*

2

Me gar da gletizioù alaouret,
Da dourioù dantelezet ;

3

Me gar brug-ruz da veneziou,
Ha reier braz da aotchou ;

4

Me gar ar mor, ar mor dispar
A ra an dro d'az douar ;

5

Nag hen zo koant gant ar bagou
O tispaka ho goelioù !

6

Nag hen zo droug pa deu varnha
Eur barr-avel da c'hueza !

7

N'euz ket pâr dezhan da lakât
Nerz e kalon ar Breizad !

8

Ha pegen kaer hor pardonioù
Karget a dud a vernioù !

9

Pegen skiltruz mouéz ar biniou
O kass en dro an dansou !

10

Pegen lirin mouéz ar barzik
O tistaga eur zonik !

11

Pegen braô e toug hor merc'hed
Kueifou gwenn-kann ha brodet !

12

Kanomp ha meulomp, Bretouned
Breiz-Izel hor bro garet !

P. TRÉOURÉ.



FURNEZ BREIZ

Eul linzer ven ha pemp planken,
Eun dorchenn blouz dindan ho pen,
Pemp troatad douar var c'horre,
Setu madou ar bed er be.

Neb zo laouen gant bara seac'h
A gav da beuri e peb leac'h.

Peh hini d'he dro
Evel an toaz e go.

Gwelloc'h eun tam bembez.
Eget re a veurlarjez.

Biskoaz den gant naoun braz
Tam bara fall ne gavaz.

Sac'h goullou ne c'hell ket chom en he zav.

Roit d'ar zaout boued freaz
Hag e savo dien var al leaz.

Pred foll ha pred mad
A zalc'h eun tiegez en he stad.

Beza zo tri seurt beva : beva, bevaik ha bevettez
vivre, vivoter et misérer.

Souben an tri zraik :
Dour, c'hoalen ha baraik.

Tamou bihan hag aliez
A garg ar c'hof ha pa ve diez.

Ar perz a ra d'an dridi aliez beza treud
Eo abalamour ma zint kalz var nebeud.

Mad eo leaz dous, mad eo leaz trenk,
Mada bep hini chom en he renk.

TAOLEN 1910

Miz Genver

Divar benn ar skolioù (F. C.)	1
Histor Breiz (Ioan an Tour-Gwenn)	4
Stephan Laski (Franceza)	8
E kloerdi bras Lambezellec (F. Le Gall)	16
Kousk, Breiz-Izel, sôn (J. Maréchal).	24
Eun dro chasse (X.)	25
Gwragez keiz ! (P.)	26
Keleier ar miz (Kergadoret)	27
Divinadennoù miz genver (X.)	31

Miz C'huevrer

Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	33
Unan a zaou (L.)	40
Evit Doue pe a enep Doue (F. C.)	45
An dud o vont eus ar mœziou e kear (F. C.)	46
D'al Labourerien (D. N. D.)	52
Histor Breiz (Ioan an Tour-Gwenn)	53
Katou Fri-Kam (F. Kergoat)	57
Divinadennoù miz c'huevrer (X.)	62
Une Histoire de Bretagne (Un Lecteur).	64

Miz Meurs

Sant Yan Diarc'hen (An Aot. 'n Eskob)	65
Hor Zalver Jezuz-Krist (F. Mazéas)	68
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	73
Histor Breiz (Ioan an Tour-Gwenn)	77
Ar ger « beleg » (Ioan an Tour-Gwenn)	82
Emgann Briec (J.-L. Prigent)	85
Gloar da Gastel, sôn (P. Tréouré)	88
Killeg Tour Kreizkear (P. Tréouré)	89
Kren-lavarou hon tud koz (X.)	91
Divinadennoù miz meurs (X.)	92
Le Breton en 40 leçons (X.)	94
Concours 1910 de l'Union Régionaliste Bretonne (X.)	95

Miz Ebrel

Buez ar Zent (F. C.)	97
An Aviel (F.-M. Mazéas)	98
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	102
Divar ben ar skoliou (I. U.)	105
Histor Breiz (Ioen an Tour-Gwenn)	108
Kantik d'ar Plac'h Euruz Jeann-d'Arc (Eur misioner Breizad)	113
Kanaouen nevez da Janned Ark (Klaoda 'r Prat)	115
Yan Zoudard (J. B. M.)	117
Miz Mari Eskopti Kemper (F. C.)	125
Breiz karet (F. C.)	126
Lavariou miz maë (X.)	127
Divinadennoù miz ebrel (X.)	128

Miz Mae

An Aviel (F.-M. Mazéas)	129
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	135
Divar ben ar skoliou (I. U.)	137
Kloerdi bras Lambezelleg (F. Le Gall)	140
Eun devez plijadur (L. S.)	149
Furnez Breiz (X.)	157
Lavariou miz even (X.)	158
Divinadennoù miz maë (X.)	160

Miz Even

Hor Zalver Jezuz-Krist (F.-M. Mazéas)	161
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	166
Divar ben ar skoliou (I. U.)	174
Dismantr Breiz-Izel (I. an Tour-Gwenn)	179
Sôn Janedik ar Vouzeréz (Paotr Tréouré)	185
Bezet fur (Paotr Tréouré)	186
Eureujet 'vit an Nenvoù (A. J.)	187
Furnez Breiz (X.)	188
Imitation Jezuz-Krist e brezonek (F. U.)	189
Divinadennoù miz even (X.)	191

Miz Gouere

Hor Zalver Jezuz-Krist (F.-M. Mazéas)	193
---	-----

Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	199
Divar ben ar skoliou (I. U.)	204
Eur vamm gristenn (F. C.)	208
Diner ar Relijion (F. C.)	209
Histor Breiz (I. an Tour-Gwenn)	215
Induljansou ar Porzionkul (J. P.)	216
Unvaniez merc'hed Frans (X.)	219
Gwir Vretouned, Kanaouen (Paotr Tréouré)	221
Gouel ar Bleun-Bruk (X.)	222
Furnez Breiz (X.)	223
Respont da zivinadennoù miz even (X.)	224

Miz Eost

Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	225
Ret eo ober beleien (F. C.)	229
Eur skolaj nevez e Kastel-Paol (F. C.)	233
Piou zo galvet da vont da veleg (J.-M. P.)	235
Divar ben ar skoliou (I. U.)	236
Kloerdi-bras Lambezelleg (J. Brénéol)	239
Kanaouennoù evit gouel ar { Paotr. Tréouré : } Bleun-Bruk { ha Th. Botrel . }	250
Furnez Breiz (X.)	254
Divinadennoù miz eost (X.)	255

Miz Gwengolo

Hor Zalver Jezuz-Krist (F.-M. Mazéas)	257
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	263
Divar ben ar skoliou (I. U.)	267
Histor Breiz (An Tour-Gwenn)	269
Eul lizer d'ar Verc'hez (F. K.)	273
Furnez Breiz (X.)	277
Gouel ar Bleun-Brug (F. C.)	278
Divinadennoù : problem miz eost.	281
Deiz koan ar Beur-Zorn.	283
Roll ar prizioù.	287
Divinadennoù miz Gwengolo (X.)	288

Miz Here

Eur goure'hemenn bras divar benn ar Pask kenta (X.)	289
---	-----


Hor Zalver Jezuz-Krist (F.-M. Mazéas)	293
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	298
Histor Breiz (An Tour-Gwenn)	307
Unvaniez merc'hed kristen Frans eus Kastel Paol (F. C.)	312
Ar skoliou dizoue (F. C.)	314
Furnez Breiz (X.)	318
Divinadennoù miz Here (X.)	320

Miz Du

Hor Zalver Jezuz-Krist (F.-M. Mazéas)	321
Divar ben ar skoliou (I. U.)	325
Ar gwin-ardant milliget (F. C.)	328
Histor Breiz (An Tour-Gwenn)	335
Kenvreuriez misionerien (F.-M. M.)	339
Ar brezoneg trefouet (Gwenaël)	342
Sôn ar Brezoneg (Paotr Tréouré)	346
Furnez Breiz (X.)	347
Divinadennoù miz Du (X.)	350
Eul levr nevez (X.)	352

Miz Kerzu

Petra eo bet 1910 (Fanch)	353
Difennour bihan ar Relijion (Klaoda 'r Prat)	357
Divar ben ar skoliou (I. U.)	359
Kenvreuriez misionerien an Itron-Varia (F.-M. M.)	362
Boutou Nedelek ar besketourien (F. Roc'h-C'haro)	365
Pehini eo ar sotta ? Marvailh (Fanch an Ti-All)	368
Divinadennoù (X.)	373
Gouel Nedelec, kantic (Gwennaël)	374
Kantik Nedelec ar vugaligou (J.-L. Jézégou)	376
Breiz-Izel, kaerra bro, sôn (Paotr Tréouré)	378
Furnez Breiz (X.)	380
Taolen 1910	381



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011